

Archives et bibliothèque diocésaine de Quimper et Léon

Document numérisé

Source : <http://catholique-quimper.cef.fr/diocese/bibliotheque-et-archives.html>

2011

Feiz ha Breiz

HA KROAZ AR VRETONED

KELAOUENN VIZIEK GANT SKEUDENNOU

Relijion — Istor Breiz — Marvailhou — Gwerziou
ha Soniou — Buhez ar Vro

RÉDACTION

J.-M. PERROT, Plouguerneau (F¹) | Y. LE MOAL, Coadout, p^r Guingamp

ADMINISTRATION
du FEIZ HA BREIZ :
FR. GEORGELIN,
Brest — 4, rue du Château — Brest
c/c 44-40 RENNES

ADMINISTRATION
du *Bleun-Brug* et de l'*Emgleo Sant Ilud*
Yv. DREZEN,
BREST — 4, rue du Château — BREST
c/c 6283 RENNES.

ABONNEMENTS INDIVIDUELS
« FEIZ HA BREIZ » et « KORN-BOUD »
Bretagne 10 f. l'an
France 11 f. l'an
Etranger 12 f. l'an
Abonnements collectifs
Feiz ha Breiz (seul)
(à partir de 5 exempl.) 5 f. l'an

PUBLICITE
*Toutes les insertions sont faites
à l'année*
Une page entière 300 fr.
Une demi-page 175 fr.
Un quart de page 100 fr.

Bloavez laouen d'ar Vretoned
Ha peoc'h d'an holl dud vad er bed!

TAOLENN AR MIZ. — Bloavez mat, J. L'HELGOUALC'H. — Breiz, — Preiz? — Kastell Kervaon, G. P. — Gwirioneziou da rei da glevet, J. U. — Roue al Laz, D. N. D. — Kenstrivadegou Bleun-Brug Gwened. — Hun ar Bartz, ERWAN AR GALL. — Labouriou ar merc'hed wardro an ti, TINTIN ANNA. — E Foar an Nec'h, en deiz all! — Chapel Koad-ar-Roc'h, Y. B. — Breizad yaouank, kev 'ta! — Keleier ar miz. — Divinadennoù.

BLOAVEZ MAT

Bloavez mat d'id, bugel dinamm,
 A vouse'hoarz war divrec'h da vamm:
 Ra skuilho Doue, deiz ha noz,
 War da gavell, gliz e vennozi!

Bloavez mat d'id, skolaer bihan,
 War da leor stouet hep ehan:
 Ra vo Doue da Vestr kenta!
 Desket eo dreist an desketa!

Bloavez mat, paotr ha plac'h yaouank,
 A glask ruilha an diaoul er fank:
 Enep flaer ha stlabez ar gwall
 Ra zeuio Doue d'o tiwall!

Bloavez mat, ezech ha gwraez
 Fichet gant bleun ho tiegez:
 War ho tal, mammou ha tadou,
 Ra fenno Doue e vadou!

Bloavez mat, tud koz, daoubleget
 Gant ar zammou ho peus douget:
 Ra blijo gant Doue beza
 Laouen d'ho teizio diweza!

Bloavez mat d'eoc'h, tud mac'hagnet,
 Er gwele a boan astennet:
 Ra vo, bemdez, a-hed ar bloaz,
 Gant Doue louzaouet ho kloaz!


Bloavez mat, barzed Breiz-Izel,
 A nij soniou diouz o muzell;
 Ra vo, gant Doue, d'ho spered,
 Park ar varzoniez digoret!

Bloavez mat, beleien Arvor,
 Eman hoc'h hano em envor:
 Ra vleunio bepred, en-dro d'eoc'h,
 Ar garantez e skeud ar peoc'h!

Bloavez mat d'eoc'h, kenvroiz ker,
 O chom war ar meaz pe e ker:
 En ho tiez, ra vo Doue
 Kenta Mestr ha kenta Roue!

Bloavez mat d'id, o Breiz, va Bro,
 Ken krenv da feiz ha da zero:
 Ra vo, e dorn da yaouankiz,
 Hejet banniel flamm da frankiz!

J. L'HELGOUALCH, O. M. I.



BREIZ, — PREIZ?

D'eur pôtr yaouank katolik
 hag en deus savet klemmou
 eneb da venoziou ar *Bleun-Brug*

Lennet en deus bet ar pôtr yaouank-man, er
Feiz ha Breiz diweza, ar pennad-skrid: Breiz-
 Preiz? — hag an daou artikl VII ha XVII bet vo-
 tet, abaoe, en eur vodadeg, e Gwened, gant kannad-
 ded holl vureoioù ar *Bleun-Brug*.

Dizrei a raimp, er miz a zeu, war ar vodadeg-ze.
 Ar pôtr yaouank-man a ra rebechou d'eomp eta
 abalamour d'an daou artikl-ze, o vezan ma tôlont
 dismegans war e vignoned ha kenlabourerien, tud,
 emezan hag o deus gwestlet o holl nerz da bour-
 chas frankiz hor Breiz.

Hep dislavaret war ar poent-ze, ni a gav abeg
 enno, koulskoude, da genta, dre ma 'z int « neutr »,
 ger hag a dalv da lavaret e reont o labour hep
 stur, hep goulou, a-ziavêz da bep menoz relijius.

Vit ne drofomp ket diwar hon hent, ha n'em em
 gollfomp ket e kreiz frazennoù ha ne lavarfont
 netra, setu aman, dre c'houlenn ha respont ar pez
 hon deus da zisklêria:

- Pesort relijion a zo e Breiz?
- Ar relijion gatolik.
- Daoust hag ar relijion gatolik ha hi a nac'h
 ouzomp ar gwir da vezan broadelerien?

- Nann, ne ra ket, tamm ebet!
- Daoust ha bez ez eus e Breiz eur gevredigez katolik ha broadel?
- Ya, bez ez eus.
- Hag eur gevredigez vroadel neutr, daoust ha bez ez eus ivez?
- Ya, bez ez eus ivez.
- Perak 'ta eur gevredigez neutr?
- Abalamour ma kred da Vretoned a zo eo ar relijion gatolik tra da ober gaou ouz ar spered broadel hag e vezer seul welloc'h broadeler ma vezer muioc'h distag diouz ar relijion-ze.
- Setu m'o deus savet eur gevredigez diouz o doare.
- Hag ar gatoliked?
- Ar gatoliked hag a gred d'ezo ne ra ar relijion nep gaou ouz o menoz broadel, a gred d'ezo, zoken, n'en deus gwir harp ebet nemeti, o deus savet ivez eur gevredigez diouz o doare.
- Daoust hag eur broadeler kristen, oc'h ouzout e sell ar gevredigez neutr ar relijion evel eur gwall-si, a c'hell rei d'ezi e hano?
- Ar rêzon a lavar nann.
- Da biot 'ta e roio e hano?
- Ar rêzon a lavar d'ezan e tle en em lakat er gevredigez katolik.
- Ya, met daoust hag hen e c'hell eur gevredigez vroadel katolik bezan dishual a-walc'h e kenver an eskibien, ar veleien d'ezi da c'hellout difenn mad Breiz, zoken a-eneb d'o youl?
- Da genta, arabad 'n em rei da gredi e c'hell mad ar vro bezan pourchaset a-ziavéz, n'ag eneb d'ar relijion; red eo eta en em glevet gant an dud a zo e penn an Iliz; — d'an eil, gwall dibôt eo ma en em gavfe tud a Iliz da zerc'hel da enebi, a-ratoz kaer, pa deuiio tud a gredenn da zevel o mouez ha d'en em unani evit diskouez d'ezo, eur wech, diou wech, ter gwech, ha bepred en eun doare dereat, e noazont ouz gwir ar Vro. — D'an trede, ma en em gav tabud diwarbenn tra pe dra hag a aparchant ispisial ouz ar gwir-ze (evel ar yez), arabad d'ar c'hatolik breton na tevel na koa-

c'ha, ken n'en do bet gellet lakât ar wirionez elec'h m'eman.

Hounnez eo hor c'hredenn hag hor reolenn.

Lavaromp eta d'an den yaouank-man, hag a zo eur c'hristen mat, penôs ma ne vije ket bet e Breiz eur gevredigez vroadel katolik, na bet gwir ebet da zevel unan, neuze en dije bet digarez, evit difenn gwiriou e Vro, da rei e hano d'unan neutr; met adalek ma 'z eus unan hag a zo penn-da-benn hervez e zoare hag e gredenn, n'en deus ket a wir da vont gant hini all ebet nemeti.

Houman a zo eus ar seurt gwirioneziou-ze ha n'ez eus enno na gwi, na pleg, na tro, eur wirionez eun ha rik, ken sklêr ha dour stivel.

N'eus digarez ebet da glask ganti, mui eget n'ez eus da glask gant ar wirionez all-man: daou ha daou a ra pevar.

Prederiit war gement-ze eur pennadig, ha c'houi ranko anzav n'hell ket spered mab den, mar deo kompouez, eun ha leal, tec'hel ac'hano.

Ar goukouk hag ar c'heveleg

Ar c'heveleg o tont er vro a c'houlenne ouz ar goukouk a oa o vont kuit:

Petra a zo a-nevez e Breiz?

ar goukouk a lavaras:

Lazerez ha krougerez eleiz;

te ha da ras

a vo krouget ha paket el las!

**Eur bloaz nevez 'zo roet d'eomp gant Doue
da boania evit hor Feiz hag hor Breiz.**

D'al labour eta a-zevri!



Kastell Kervaon

E parrez Kernilis, war eun tammig tosenñ a zo en tu kleiz d'an hent bras nevez, pa ziskenner d'an Diouriz, e kaver c'hoaz eur c'hoz tamm moger bennak kelc'het gand eun doufez ha n'eo ket kalz anat ken, ken goloet eo gand ar strouez. Eno eo edo gwechall kastell Kervaon, eur c'hastell hag e oa aes en em denna ennan da de- c'het a-raok al iaeron hag e weled e douriou eus a bevar c'horn ar vro; unan anezo, breman ez eus kant vloaz, pe wardro, a oa c'hoaz en e zav, met pell a oa ne oa ennan o chom nemet brini ha kaouenned.

Cambry, o tremen dre Lesneven, a lavar e klevas eno, e oa hentchou dindan guz, leun a viltansou hag a denzorïou enno, da vont eus a gastell Lesneven da hini Kêrvaon.

Tiegez Kervaon a oa unan eus brudeta tiegeziou a oa e Leon. Aotronez Kervaon a oa da veza laket en hevelep renk gand Aotronez ar C'hastell, e Landunvez, ar Wern e Koatkennan, e Plougerne, Langeouez, e Treouergat, Pennmarc'h, e Sant-Fregan, ar Manac'h, e Trevigne, e Plouneour-Trez, Tournemin, eus al Leskoat, e Plouguin, Kerlec'h, e Gwiltalmeze.

Pinvidik mor 'oant; Aotrou Kervaon p'en em gave eun eskob nevez e Kastell-Paol a oa unan eus ar pevar gwaz a veze o tougen postou e gador pa 'z aet d'e ziambroug, da Zant Per, d'e zigas d'an iliz-veur.

Kosa Aotrou a gaver o tougen ano an tiegez-se eo Alan Gervaon, eur marc'heg hag a zo bet sebeliet e Lokrist-an-Izelved, el lec'h ma weler e skeudenn, war e vaen-bez, hanter c'holoet gand eur skoued, eul leon warnan; mervel a eure er bloaz 1253.

Beatrix Kervaon, e verc'h, da gredi eo, a zimezas da Fransez, aotrou Leskeleñ, e Plabennec; e Leskeleñ, e weler c'hoaz eur voundenn vras a oa bet savet warni eun tour gant sant Tenenan, da ziuall, ouz ar Zaozon, ar goueriaded a rede ar C'hoad dounna gand o chatal. Beatrix ne zimezas nemet goude beza bet asant he fried evit ma vije roet d'ar vugale an ano a Gervaon.

Alan Gervaon, o mab, a zisklerias, er bloaz 1294, e tlie en em garga da veva daou varc'heg en arme an Duk; heman a dlie beza tad koz da Danguy Gervaon, aotrou Kervaon, Leskeleñ, ar Seiz-Ploue, (e Gwinevez) hag ar March e Trezilide, habiten Lesneven, er bloaz 1379. Dimezi a eure da unan eus a verc'hed an Aotrou Rohan ha bez 'e voe unan eus ar re a zinas Emgleo Gwerann, er bloaz 1381, a roe, da vat, kurumenn Duked Breiz da Yann Vontfort.


O mab Alan, dimezet gant Jann Rosmadec, en devoe eur mab, Tanguy, a zimezas, er bloaz 1419, gant Mac'harid Pennanec'h, mestrez Penmanec'h, e Plouenan. Bez 'e voe unan eus aotronez lez an Duk Yann ha pa voe prizoniet e vestr, dre laer, gant Mac'harid Klisson e voe unan eus ar re genta o kas tregont den, armet gantan, d'e ziliwra. Evid e drugarekaat an Duk a hanvas anezan da gabiten, e Brest, er bloaz 1423 hag er bloaz 1453 e c'hellas kaout aotre, da zougenn e vanniell e penn e wazed pa 'z aje d'ar brezel ha da zével a-nevez e gastell.

E mab hena, Tanguy evelldan, a zimezas da Vac'harid ar C'hastell; stourm a eure kalonek ouz ar C'hallaoued e Sant Albin an Hiliber; siouaz, frankiz Breiz a gouezas eno ouz torgenn d'an 28 a viz gouere 1488; 6.000 breizad a voe lazet o klask miret anezi en he sav; Tanguy Gervaon a voe prizoniet. Eur breur yaouank d'ezan, Yann a deuas da veza eskob e Kastell-Paol hag a varvas er bloaz 1514; e iliz Gwinevez, e weler c'hoaz eur bez, — eur bez-eskob, — gand ar gerïou *Memento finis* hag e leverer eo e vez; koulskoude en e destamant e c'houlenn beza sebeliet, en e iliz-veur, ha rak-se, da gredi eo, eman e relegou, en eun tu pe du, e gwask mogerïou iliz sant Paol.

Eur pempvet Tanguy, mab an hini emaoimp o paouez ober ano anezan aman, (sant Tanguy, anat eo, oa sant karet aotronez Kervaon; rei a rejont da iliz Kernilis e

skeudenn hag hini e c'hoar santez Heodez a virer c'hoaz, er barrez-ze, en deiz a hizio), a zimezas gant Louisa ar Forest, O mab hena Tanguy, dimezet gant Katell Rohan a varvas disher; e holl vadou a yeas neuze gand e c'hoar Franseza; houman e zimezas, er bloaz 1541 da Yann Bluskellec, aotrou Bruilliac, e Plounerin. Evel aotrou Leskelenn, Yann Bluskellec a lezas e ano da goueza evit rei d'e vugale ano o mamm brudetoc'h eged e hini.

Yann Gervaon, mab hena Franseza, — Quermant pe Guermant — evel a skrive Brantom, an istorier gall, a oa anavezet dreist e lez roue Frans, dre ma oa t'er d'en em ganna, evid an distera digarez.



Kastell Kervaon, en amzer goz

Eun dervez, dreist-holl, e klaskas trabas ouz Yann ar Rohan hag o daou e voent gwall c'hlazet; ar Roue Charlez IX a lakas anezo d'en em glevet, en eur embann e-unan, dinak holl dud e lez, e oant o daou, daou zen mat ha kalonek.

Er bloaz 1561 ar penn skanv-ze a gavas tu da implija gwelloc'h e nerz o vont da enezenn Malt da stourm ouz ar Vuzulmaned; en dizro, o veza aet d'en em walc'hi er Sein, ec'h en em veuzas, dre zarvoud, hag an Aotrou de Guise a oa gantan a vennas en em goll e-unan o klask e zavetei.

E vreur Mauris a zimezas gant Glaodina Goulaine hag e lec'h chom e Kervaon e savas eur maner nevez e Seiz Plouc, e Gwinevez; eur pennad hepken eus ar pezh a zavas a zo c'hoaz en e zav, en deiz a hirio; e zaou vab a oa troet d'en em ganna, evel e vreur hena; e miz Ebrel 1584, Louis ha Kristof Kervaon a oa, war loan, harp e kêr Roazon, pa zigouezas ganto, e kreiz etre daou zenchentil

Jakéz Tournemin, markiz Koatmeur, e kichen Landivisiau; mil bell a oa o doa kasoni outan; raktal ar c'hiezeier a en em groazas ha skei a voe graet kalet eus an eil tud hag egile; p'en em gavas an archerien, daou aotrou Kervaon a oa beuzet en o gwad ha markiz Koatmeur a oa astennet en o c'hichen ker glazet ma ilie mervel, eun nebeut deziou goudeze, e prizon Roazon, el lec'h m'oa bet laket, war lavar an daou all a damalle anezan da veza klasket an tu d'e laza.

O c'hoar Glaodina dimezet er bloaz 1577 d'eun denchentil pinvidik bras diwardro Tours, Fransez ar Maille, a lakeas madou fiegez Kervaon da goueza e tiegez Maille. Daou vab o devoe; unan, Charl, a gemeras ano e dad; eun all, Fransez, a gemeras ano e vamm. Heman a voe lazet er bloaz 1600 oc'h en em ganna ouz Gwilhou Simon, aotrou Tromenec, warlerc'h eun tamm trouz a oa savet etrezo, e iliz Landeda, o klask gouzout da biou anezo o daou, e oa dleet kaout ar renk kent a en iliz-se. Maro aotrou yaouank Kervaon a lakeas ar vro a-bez e kaonv rak e vuntrere a oa eur gwall zen, kaseet gand an holl, hag en doa kemeret tro eus a vrezeliou ar Re Unanet evid en em gloza e kastell Kervaon ha mont ac'hano goudeze, pa droe e benn, da laereze ar vro. Eskob Leon a zigoras prosez Gwilhou Simon ha ne ehanas ket outan ken na roas e c'her da zebelia korf an hini en devoa lazet e chapel sant Laurans, harp ouz Tromenec; gwelet a c'heller atao eno bez Fransez Kervaon; war ar c'holoenn e weler e skeudenn gand e zaouarn kroaziet war e vruched, e dok houarn hag e vanegou en e gichen; maen bez aotrou Tromenec hag a oa gwechall e iliz Landeda a zo digaset di breman ivez.


Chapel sant Laurans, — chapel an absolvenn — a zo eur chapel gaer ma vefe renket a-nevez; met evel m'em breman eo eun druez he gwelet; an aoter a zo ouz forgenn; ar bez a zo digor; ar zent a zo redet pep hini en e hent; trist eo gwelet chapelioù evelse hag a zo moulet en o mein-ben istor ar Feiz hag istor ar Vro o koueza en o foull, an eil goude eben.

Charlez Maille a deuas da veza markiz Kervaon er bloaz 1612; eur ofiser kalonek oa; stourm a eure er Rochell ouz ar protestanted; eno e kouezas klanv; mont a reas da ziskuiza da gostezioù Tours met ne bareas ket; mervel a eure d'ar 14 a viz mezeven 1628 ha sebeliet e voe e iliz menec'h sant Fransez e Tours. E verourien, e Breiz-Izel o devoe keuz bras d'ezan ha person Kernilis; war gaierou ar barrez, a reas, e gwerzioù latin, meuleudi an denchentil maro e kreiz e vrud. E wreg Charlotta d'Escoubleau he devoa roet eur mab d'ezan: Donasian; an den chentil-ze pinvidik dreizan e-unan a deuas da veza unan eus pinvidik aotroned a oa e Breiz pa zimezas er bloaz 1644 gant Renea Plouc, markizez an Ti-

meur, e Poullaouen, mestrez ar Breignou, er Vourc'h. Wenn hag eun toullad mat a leveou all. Siouaz, gwad aotrouned Kervaon a verve re vuan ha re dêr e oant da vont d'en em ganna e « duel » daoust ma oa eun dra kondaonet gant lezennou an Iliz ha gant lezennou ar Vro. Er bloaz 1652 e savas tabud etre Donasian ha markiz ar C'hastell, diwar nebeud a dra hag ez ejont d'en em ganna o daou e bourc'h Berrien; daou a oa oc'h heul pep hini anezo hag a c'helle ivez, evel m'edo ar c'hiz, kemeret perz er stourmadeg; an taol ne badas ket pell; aotrou Koad ar Roc'h, e Komanna, a-du gant Aotrou ar C'hastell, a en em gargas da laza, hen, e-unan, tri enebour e vignon.

Intanvez Donasian a eil zimezas gant markiz Montgailiard, eun den hag a oa a-du gant Loeiz XIV a-eneb ar Vretoned, hag a lazas er bloaz 1675 e kastell an Timeur, Sebastian ar Balp, rener ar Gerneviz.

Eus he dimezi kenta he devoa bet meur a vugel; ar c'hosa, Charl-Sebastian a varvas oc'h en em ganna er bloaz 1672; an eil Donasian-Sebastian, a varvas e brezel Senef, er bloaz 1674; o breur yaouank, Herri Maille, markiz Karman, — dre ma oa kamambreou ha ne gavent ket brao a-walc'h ken favaret Kervaon — a oa, war e veno, pinvidika duhentil a oa e eskopti Leon. Dimezi a eure, e Brest, er bloaz 1674 gant Mari-Anna du Puy de Muri-



Kervaon evel m'edo c'hoaz er bloaz 1820

mais, eur vaouez, a spered hag a zaremprede an Itron de Seigne, eur c'hallez, diaes, d'eur breizad he gouzanv pa anavez he liziri hag he devoa he lezhanvet « La Muriette Beauté ».

An Aotrou Herri, goude beza servichet ar vro, evel ofiser, ha savet bugale gaer, a en em dennas e Seiz-Ploue, da veva diouz e zanvez; eno e varvas er bloaz 1728. Forani en devoa graet kement a zanvez, m'en doa ranket gwerza kastell Kervaon er bloaz 1715 da eun den pinvidik bras eus an Auvergn, August Crozat e ano; heman, e c'hellit kredi, ne reas netra evit derc'hel ar c'hastell koz e ratre. Wardro ar bloaz 1760 e voe fennet mein anezan da ober iliz Lannilis; e ziveza mistri, Lauzun, Gontaut-Biron, ha Rohan-Guemene; tudchentil hag a oa holl o chom e Paris, n'oant ket nec'het o klask gouzout petra deuje da veza; wardro ar bloaz 1820 ne jome mui nemed eun tour en e zav, eun douribell gant chiminalou uhel ha fedan warnan; met neuze e voe ezomm mein evid adsevel tour iliz Kernilis diskaret gand ar gurun er bloaz 1810 hag e voe peurziskaret, hep truez, an tour kozze a welet eus a bell hag a gomze kement d'an holl eus an amzer dremenet: tud a zo ha dre o dallentez a ra muioc'h a zroug, war an douar-man eged an dud fallha dre o fallagriez.

Chapel Kervaon a oa savet en enor da zant Yvon. Eun dervez, war a leverer, an tan-gwall a grogas er c'hastell; ar mevellien hag ar plac'hed a rede da denna eus an ti an arrebeuri hag al tienachou talvoudusa; an aotrou, hen, a redas d'ar chapel hag en eur zont er maez gand ar skeudennou santel hag al listri sakr e youc'has: « Doue a-raok Kervaon! » hag e kasas ar pezh a oa gantan etre e zivrec'h, en eul lec'h ma ne oa ennan danjer ebet ken evito, hep teurel pled ouz an tan-gwall a zeve e beadra.

E gomz a voe kavet ker kaer ma kemeras e vugale anezi evid o ger: met pa deuas tiegez breizad Kervaon da veza eun tiegez gall, ar gomz koz a voe renket en eun doare nevez ha lorc'hus, evel m'her gwelet c'hoaz d'an Dispac'h, war unan eus chiminalou kastell ar Seiz-Ploue: *Carman, Dieu seul avant!*

G. P.

Gwirioneziou da rei da glevet

E Frans, er bloaz 1921, e voe 117.000 muic'h o c'henel eget o vervel; met en Allemagn, e voe 661.000. Dre 10.000, e Frans, ez oa 207, o c'henel; ha 177, o vervel; en Allemagn, 253, o c'henel; 143, o vervel.

Gounid, dre 10.000 den, e Frans: 30.
en Allemagn: 110.

Abaoe 1921 ez a falloc'h c'hoaz an traou e Frans. Gant ken nebeut a dud, penaos e vo gellet labourat mat ar vro? Chom a raio douarou da zougenn drez ha spern, mankout a raio soudarded ha martoloded, ar c'hemm-werz-gand ar broiou all a vo dister, ne vezo ket a dud da vont war al listri kemm-werz. Hag hor c'holoniou, penaos e c'hellimp o difenn, o lakat da dalvezout?

Anez Breiz, ar Frans a vije reuzeudik he stad, Breiz a ro d'ezi eleiz a zoudarded, a vartoloded, tud da labourat an douarou, rak eus a Vreiz ez a bep bloaz eun niver bras a dud da labourat parkeier Frans.

A-raog ar Revolution vras, n'oa e bro all ebet eus an Europ kement a dud hag e Frans, hag abalamour da-ze eo e c'hellas armeou ar Revolution ha re Napoleon ar meur delc'her penn d'an Europ a-bez.

Beteg ar Revolution, gouenn ar Fransizien a voe eur vouenn vat, krenv, yac'h a gorf hag a spered, an tiez a veze leun a vugale; doujans Doue a oa er c'halonou, ha gant doujans Doue, eienenn an holl vertuziou.

Met abaoe ar Revolution, ha muic'h mui bemdez, ar Fransizien o deus kollet ar pezh a rea o nerz. E lec'h beza tud a galon, mat da labourat, karantezus e kenver ar re-all, e teuont da zonjal enno o-unan hepken, da glask hepken o flijadur er bed-man, da reiza o buhez en hevelep-doare m'o dezo nebeut a labour hag a dregas, kalz a beoc'h hag a eürusted. Beva evito o-unan, ober kegin vat, ha chom pell war an douar hep poan, heb enkreiz, setu menoz ar Fransizien. balamour da-ze en tiegeziou ez eus nebeut a vugale, rak ar vugale a vez poan ganto ha trubuilh; koustout a reont da vaga, da wiska, da skolia, hag eo deuet ar c'hiz e Frans da gaout en tiegez eur bugel hepken pe zaou, hag alies hini ebet, p'e gwir ez eus tost da zaou vilion a diegeziou heb eur bugel. Setu aze frouez an deskadurez dizoue.

Pa veachit e Breiz, e welit er c'heriou, er bourkou, war an hentchou, eleis a vugale o c'hoari. En Allemagn, en Itali, hevelep tra. It e Frans, er c'hreisteiz, en Normandi, it en darn vrasa eus ar vro, ne welit ket a vugale. Unanik bennak en em gavo ganeoc'h bep an amzer, ha netra ken. Ar vro a zo goullo.

Ma tigorit, avat, ho tioukouarn da zelaou kanaouennou Frans, e klevot traou iskis: traou lous, traou d'ober goap eus kement a veze enoret ha doujet gwechall: « Bevomp hor buhez, klaskomp hor plijadur, ha buan; debromp, evomp, dansomp, rak warc'hoaz marteze e varvimp. » Eur familh? D'ober petra? D'en em zieza? — E pep lec'h, er goveliou bras, er staliou labour, er ruiou, er parkeier ive siouaz! hag awechou en tiez dirag an holl, bras ha bilhan, e vez kanet hevelep traou. Al leoriou, skignet a yilionou dre ar vro, a laka dirag an daoulagad sotoniou henvel, gourc'hemennou ar relijion laik.

Ya, spered ha kalon an dud e Frans a zo klanv, ha gwall-glanv, hag ar c'hlenved-ze a zo dies da barea. Ar c'horf ive a zo klanv. Ar ouenn n'eo mui krenv ha yac'h evel gwechall. An alkool, ar c'hlenved peultrin, ar c'hlenvejou mezus o deus taget gouenn ar Fransizien ha dinerzet anezi.

Ouspenn-ze, ar c'houarnamant, al lezennou, e lec'h rei skoazell d'ar familhou niverus, o deus gret droug bras d'ezo. Lavaret e ve n'eo gret al lezennou nemed evit tud dizemez. P'en deus unan bennak, dre e labour, dastumet eun tamm danvez, savet eur stal, prenet douar, staget parkeier an eil ouz egile endro da eun ti war ar mez, kerkent ha ma varv, e teu al lezenn da freuza ar pezh en doa gret, d'ober tammou eus ar parkeier en doa bet kement a boan o prena hag o staga an eil ouz egile, da lakat alies gwerza e stal, hag er stal-ze al labour a ehan, ha setu koll evid ar vro.

Pa vez votadeg, an den dimezet ha d'ezan kalz bugale n'en deuz nemed eur vouez evel an den dizemez pe an den hep bugale.

Eur pennadig zo, ez eus klasket ober eun dra bennak evid ar familhou niverus, met goustadik ez er, aon zo d'ober re, hag eur rumm dud hepken a vez gret stad outo: ar re a zo e karg dindan ar c'houarnamant; ar re-ze a zo paet mat, ha m'o deus bugale, e vez kresket kalz o fae d'ezo. Abalamour da-ze, eul lodenn vras eus ar Fransizien a glask beza e karg dindan ar c'houarnamant, hag e tilezont an douar, ar c'hemm-werz, evit kaout eun tammig karg, e lec'h m'o dezo nebeut a boan ha pae a-walc'h evit beva dienkrez.

Met, ma n'ez eus nemet tud e karg, euz pelec'h e tenio arc'hant d'o faea? Ar pezh a ra nerz eur vro eo al labour douar, labour an uzinou, ar c'hemm-werz, ha ma vezont dilezet, ar vro buan a vezo paour. N'eo ket bet kavet c'hoaz an tu da gaout bara hep labourat an douar.

Eun dra all c'hoaz, hag a zo falloc'h. Abaoe 40 vloaz, e Frans, ne vez klasket nemed ober brezel d'ar relijion ha d'an Iliz, laza ar feiz e kalonou an dud e pep giz, ha dreist-holl dre ar skoliou dizoue. Hag evelse e tenner digand an dud o brasa tenzor hag an dra dalvoudusa evid

eur vro, rak tud a feiz a zo tud a urz, tud difeiz a zo tud direiz. Dall eo ar c'houarnamant a ra brezel d'ar relijion, rak labourat a ra, war eün, enep mad ar vro.

Dre c'hras Doue, beteg-hen an darn vrasa eus tud Breiz a zo chomet dishenvel diouz tud Frans; meur a hini gwir eo, a zilez ar mêziou evit mont e ker, met alies an dra-ze a c'hoarvez o veza ma n'eus ket a zouar a-walc'h evid an holl. Douar Breiz a zo labourer hag a zoug east mat, hag ouspenn, ar Vretoned, evel ma lavaren, a labour ive kalz douar e Frans, en Dordogn hag e lec'h all. Ma rafe ar re all evel do, ne vije ket ezomm da c'helver tud eus ar broiou all, evel ma vez gret breman, p'e gwir ez eus tri vilion a zivroidi e Frans! tost d'an daouzekvet eus an dud!

Ar Vretoned a zalc'h d'o feiz, d'o c'hredennou, d'o giziou santel. Harpa a reont ouz menozioù fall ar Fransizien, hag evelse e reont kalz vad d'ar Frans. Muioc'h a vad a rafent c'hoaz, m'o defe muioc'h a hardisiegezh, eur wech ét eus o bro, ma kendalc'hfent da veva evel ma reont e Breiz, rak gant Breiz eman ar wirionez. Evit chom en he sav, eur vro a die kaout doujans Doue, karet al labour, kaout tiegeziou leun a vugale. Eur vro hag a zilezfe Doue, eur vro hag a zilezfe al labour, eur vro hag a vije enni muioc'h a dud o vervel eget o c'henel, ar vro-ze, skler eo, a vije war an hent d'en em goll.

J. U.

ROUE AL LAZ

Ne zalc'hin ket pelloc'h da gonta d'eoc'h hon baleaden-nou: ken na zigouezjomp demdost da Dremuzon, e kerzas brao an traou ganeomp. Eno, evit tec'het arôk eur bagad Re C'hlas o tont a-benn d'eomp, e rankjomp en em guz en eur goz forn pe goueza mik etre o daouarn. Arabad d'eomp koll hon holl boan en eur arruout er pal; rak arru e oamp elec'h hon doa d'en em gaout. Eul leoiğ pelloc'h, en eun tammik ostaleri distro, e lavaras an Tokous d'in: « Setu aman an ti! » Eno e chomjomp tri deiz da c'hedal. Noz deiz ne rejomp nemet kousket; skwizmaro e oamp, brevet hon c'horf, tanet hon treid, — va re, da vihana, — ha feaz va izili. An trede deiz, eun tamm arôk hanter-noz, eun aneval a glevjomp o chom a-zav dirak an ti ha kerkent e voe skoet daou dôl war an nor. An ostiz a ziskennas, ha ni a zavas ive. Ar markiz Ar Rouâri eo e oa, e-unan-penn. An Tokous a gasas ar marc'h d'ar marchosi da ziskwiza epad eun eur ha ni a bignas d'an nec'h, en eur zolier serret kloz, fenestr ebet war-

nan nemet eur werenn barz an doenn. An Tokous a oa chomet d'ober ged; an ostiz a zigasas eun tamm boed tomm bennak. Ar markiz en doa digoret eur zac'h lér hag, en eur zibri, e tispake paperou dirazan.

— Petra, emezan, a zonjoc'h-hu eus gouarnamant Pariz?

— Sal, emoun-me, na vefe ket bet lec'h da gomz anezan biskoaz!

— Ma kirit hep dale ne vezo kelou ebet anezan ken!

Hag e tisklérias d'in neuze e oa souden eun arme savet a-ziavéz bro ha renet gant ar Prus, nemet d'he heul e oa ive eleiz a dud, noblans ha bourc'hizien, mignoned d'ar roue, hag a deuje d'ober breze da bôtred an Dispac'h ha da lakat ar roue a-neve war e drôn. Dal ma 'n em gavje ar re-ze e kêr Châlon, raktal an urz a vije roet d'ar Vretoned d'en em zevet holl d'o zro hag ar gouarnamant yudas, tapet etre daou dan, a rankje plegan hag ar pennou anezan a vije didorniet ha laket er prison. Ar markiz a c'houlennas diganeomp ha kaout a reomp mat ar menoz-ze. Me a lavaras ya, nemet e c'houlennis sklêrijenn diwarbenn doare an dud hag an armou aman, er vro.

Ar Rouâri a lakas paperou etre ma daouarn; enno, emezan, e kavjen respont d'am goulennoù; hag e kuitas ac'hanomp wardro teir eur da welet c'hoaz mignoned all hag en doa kentel ivez da rei d'ezo.

Varc'hoaz da noz, pa vezimp diskwisoc'h, e refomp hiroch kôzcadenn e Toull-an-Houc'h... Karout a rajemp breman kaout, hep gedal pelloc'h, korn pe gorn d'ober eun hun, rak an distro a zo bet feazus ivez.

O daoulagad o-daou a oa maro en o fenn hag an Tokous bras a horjelle diouz e goazé ma venne koueza war gein e vignon Pierig azeit war eur skaon ouz e goste.

Kevareg a zavas hag o c'hasas d'an ti kouezet ha boed a gasas gantan ivez da lakat en o c'hichen benn ma tihunjent.

— Klevit mignoned, eme ar C'hloareg d'e dud, pa en em gavjont holl dastumet eur wech c'hoaz e Toull-an-Houc'h, setu aman war e hed disklêriet ar pez n'am boa grêt nemet toulla d'eoc'h dec'h da noz. Markiz ar Rouâri a c'houlenn ac'hanomp da vont gantan, abenn tri pe bevar miz aman, da Bariz, da ziskarr pôted an Dispac'h ha da zigas ar roue war e drôn... Ne vezimp ket hon unan; eun armead a-bez emae o sevel, rak a bep tu a Vreiz en devo soudarded da vont d'e heul. Ouspenn 15.000 e vezimp. Bezan hon devo kement hon do ezomm: fu-zuilhou, bouliji, sabrinier. Eul lestr a die disken war an ôd, demdost da Zant-Brieg, ha digas eno a bep seurt armou hag arc'hant... Petra gavit a ze?

— Penôs? eme Gevareg, a belec'h en deus galloud d'ober kemend all?

— A-beurs breudeur ar roue a zo du-ze, e Koblantz, en harlu. Diskouezet en deus d'in liziri diganto ha roet en deus d'in, evidon, eur paper sinet gant breur ar roue ha peurskrivet gant ar Rouâri hag am hanv, me, da vestr war gement soudard a vo savet er c'horn-man.

— Ni a yelo da zifenn ar roue, eme Riwall; ha ni, petra hon devo 'vit hon digoll?

— Pae mat ho pezo, war a lavar ar markiz.

— N'eo ket arc'hant a fell d'eomp da genta. Daoust ha ne vo ket roet frankiz da Vreiz gant ar roue p'o devo ar Vretoned roet frankiz d'ezan?

— An dra-ze ivez am eus goulennet digant ar Rouâri, eme ar C'hloareg...

An daou Dhepot, Kersôzon, an Tokous, holl e savjont o fennou da chilaou.

— Ac'hanta? emezint.

— Goulennet am eus, n'eo ket hepken promesaou a veg da veg, met skridou hag e vefe merket sklêr warnezo pehini a vo gopr ar Vretoned... Ar Rouâri a zo eveldomp, eun den techet da zellet muioc'h ouz Breiz eget ouz ar roue.

— Ha! ha!... An holl a dridas gant levenez.

— Diskouezet en deus d'in eur paper en deus bet savet, eur brezegenn grêt da gas a bep tu evit gounit soudarded etouez ar Vretoned, hag e lavar evellen:

« Ha c'houi, Bretoned, va mignoned, fellout a ra d'in rei tu d'eoc'h da adgounit ho frankiziou koz hag a oa gwella harp ho relijion, gwella diazez ar peoc'h en ho touez hag ar pezh a dalveze ar muia d'eoc'h da bourchas pinvidigez. » (1)

Ar pemp den a zavas en o zav-sounn hag a loskas eur youc'hadenn skiltr ken ma tregernas ar volz douar a-us d'o fenn.

— Arabad youc'hal! eme ar C'hloareg: n'omp ket trec'h c'hoaz, hag ar bôtred c'hlas a zo wardro. Unan ac'hanoc'h d'ober eur redadenn ermêz ha neuze me a gonto d'eoc'h doare an tól bras emaez o klask skei.

Riwall, ar skanva, a lammas ermêz da genta. Ar re all a azegas hag en lakas pep hini da lavaret e bôz diwarbenn prezegenñ ar Rouâri.

— A dra zur, eme Gevareg, n'hellomp ket chom evellen!

Hogen, ac'han n'eus diflip ebet evidomp nemet dre ar frankiz gounezet da vat, evidomp hag evit hor brô, pe dre gontel ar c'hilhotin. N'omp ket eta evit respont nan d'an Otrou ar Rouâri.

— Ne gredan ket ivez, eme ar C'hloareg, rak den a galon eo, oüspenn m'eo leal e gaoz. Goude m'en doa kui-

taet an ostaleri elec'h m'hon, doa en em welet, e c'houlennis diouz e zoare digant an ostiz. Setu petra a lâvaris heman d'in: « An O. ar Rouâri, emezan, a zo eun den dispar. Roet en deus repu en e barrouz da bevarzek beleg a ya da lavaret an oferenn d'e gastell. Goude m'en deus madou bras hag e c'hellfe brao beva dizoursi, setu ma vez noz deiz o redek bro evit lakat ar bobl d'en em zebel eneb ar gouarnamant milliget a zo deut d'hon c'has-tiza. Eun dek mil bennak a dud en deus savet evelse, drezan e-unan pe dre e vignoned. Me gred e vo hepdale roet an urz da gerzet war Barik, endra ma teuo breudeur ar roue, gant eun arme, da lakat seziz warni diouz an tu all.

— Bez' en deus eta arc'hant bras?

— Kaset e vez d'ezan alies eus Koblantz ha gant an arc'hant-ze en deuz prenet armou e Bro-Zôz, e Jerzey. Ac'hanp e tle digouezout c'hoaz hepdale 1.800 fuzuilh, bouliji hag ivez kanoliou...

— Arabad, gedal pelloc'h, eme Gevareg. Bodomp tud muia m'hellfomp! Setu ni pemp aman; a-benn eiz deiz, ni hon do kavet hep a zek all!

E oa ar C'hloareg o vont da respont, pa voe klevet eun diruilhadeg ouz genou Toull-an-Houc'h, ha kerkent, en em gavent eno pemp pe c'houec'h den, o tilhelkal, berr warnezo, araok m'en doa gelllet Kevareg, na hini ebet eus ar re all, kregi war o armou. Met ar re-man n'eo ket enebourien e oant: Riwall a oa en o zouez:

— Ah! emezan, lez-int breman da redêk! Gwall dano eo o fri... mar hon c'havont aman!

— Pesont neventi 'zo 'ta? eme ar C'hloareg, o tostat ouz an dud-man.

— Aotrou Kersôzon, eme unan anezo; ni renke dont d'ho kaout aman pe bezan lazet! Kont te d'an aotrou petra zo c'hoarvezet, te, Rene ar c'hôr, hag a zo bet ar muian a vec'h warnout!

An hini a c'halved Rene ar C'hôr a oa eno 'n e zav e benn pleget war e jave. Pa voe galvet, e troas e zellou 'vel eun den sabatuet, e ziouvrec'h e-pign ouz e gorf hag e reas eun torch d'e dal e tivere ar gwad dioutin.

— Gloazet oc'h? eme ar C'hloareg. Aman ez eus peadra d'ho louzaoui.

Riwall a glaskas tienou dour, hōlen hag e voe gwalc'het e dal d'ar pôtr.

An holen o kregi en e c'houli, eun tól sabren war lein e benn, a rea d'ezan skrignal e zent.

— A-benn tri deiz e vi pare, eme ar C'hloareg. Eur glo-penn a teus ha n'eo ket tano; Mat eo ze d'it!

— Oh! eme neman, forz pegen kalet eo hini Fanch ar Gall, mar kouez ma dorn warni!

Hag e skrigne e zent adarre.

— Lavar 'ta, eme Gevareg, petra zo c'hoarvezet ganit?

(1) Tannet eus Buhez Markiz ar Rouari, gant Lenôtre, p. 133, notenn 1.

— M'hen tou d'eoc'h, emezan, ne zigasfont ken du-man beleien intru!

— Ah! eme ar C'hloareg, krog ez peus bet diwarbenn eur beleg intru?

— Dec'h da noz, emezan, o doa digaset anezan d'ar bourk. Marteze e oant ugent soudard endro d'ezan, mar-teze e oant hanter-kant! Me eo ar zakrist hag e kavjont Fanchig ar Gall, an ostiz ét a-du ganto, da glask ac'hanon. Heman ha me n'omp ket mignonned, ah! nan, avat! Abaoe m'en deus kustumet rei bodenn d'ar Re C'hlas, va zreid n'int ket bet en e di nag e re 'n em hini. Pa welas anezan war doull an nor, — ne deuas ket pelloc'h, — va gwreg a lavaras d'in: Arru eo Fanchig ar Gall! — Tap d'in 'ta va bouc'hall! 'mon-me. O klevet ar c'homzou-ze, Fanchig a dec'has kuit 'n eur youc'hal... Ha setu ar zoudarded o tont 'vit e zifenn... An dro-man, mar am boa lavaret arók, e tapis peg em bouc'hal... Droug spontus a oa ennon, hag e lammis en o zouez hag e treuzis ar vandenn, o tiskarr tri pe bevar, hag ar person intru war ar marc'had.

Unan bras, eun ofiser, me gred, a zarc'hoas ganin eun tól sabren pa oan o tremen ebiou d'ezan, ma kouezis vel eul leue war greiz an hent bras...

Unan yaouank hag a oa e zell war Rene ar C'hôr, 'vel o c'hortoz pegoulz en divije ar gaoz gantan, a grogas d'e dro.

— Me a oa eno, emezan, pa roas an ofiser glas eun taol sabren d'it hag e rois lamm d'ezan, d'e dro, 'n eur stlepel eur sparf d'ezan etre e ziouhar. Me neuze ive a dapas eur flipad digant eur mab-gagn « sans-culoite » hag en doa laket e fuzuilh d'ober eur freilh. Met, pôtrede, kredit ne chomis ket en e zle! Ar grabanad a zistagis gantan a-lakas anezan d'ober pempeloudenn!... 'Benn neuze, e oa tud war ar bourk, sof-kont, ha darn all a zirede c'hoaz a ziwardro, rak unan bennak a oa pignet en tour da zôn kloc'h an tan...

— Ar Re C'hlas, eme eun trede, eur pôtr teo, eur c'houzoug berr d'ezan 'vel hini eur ribod, a glaskas o zreid, darn anezo; eun dek bennak, bodet endro d'o ofiser, ar re-ze, avat, a zalc'has penn. Fuzuilhou o doa ha tenna a reant ganto... Petra d'ober? Pep hini a skarzaz gwella m'hellas. Ni hon fevar a deue war ar memez hent...

— Me, eo Rene ar C'hôr, a oa divatet ha 'n em gavet, pa zavis, lec'h ma oa an tri-man...

— Setu, eme ar pôtr tev, ar Re C'hlas, o klask tapout ar zakrist, a deuas war hon lerc'h en eur vandenn. An daou-man bet gloazet, a zilerc'he... paket e vijemp bet, panevert, n'ouzon ket eus a belec'h, unan bennak a lóskas eun tenn hag an tenn-ze a wintras eur « sans-culoite »... Ar re-all a chomas a-zav eur pennad ha, kerkent, en em lakjont da glask warlerc'h an tenn-ze, en eul lam-

mat a-gleiz hag a-zehou, er parkou nesa... Ni a skampas e keit-ze. Betegout, avat, na dapjemp hon fall o tizrei war hon c'hiz, e teujomp 'trezek aman da glask repu...

— Ha me, eme Riwall, a gavas anezo en eur ober va zro!

— Mat eo! eme ar C'hloareg; chom ganeomp a c'hellit betek varc'hoaz; varc'hoaz, c'houi a yelo, gant ar re-man, d'ober an dro da bedi an dud da zont e kuz, goude serrnoz, da gaster Kersôzon. Eno, er c'hae, e vezo grêt digemer d'ezo...

Ar C'hloareg a gontas a-neve e dro e Zant-Brieg hag an divizou grêt etrezan hag ar markiz Ar Rouâri. Neuze, e c'houlennas ouz ar re-man.

— Ha kaout a ra d'eoc'h e kavimp tud da zont d'hon heuilh?

— Petra? eme ar zakrist; tud, ya, pez a garfet, rak ôg omp arru gant ar vuhez-man! Red eo kaout eur fin bennak! Ha mar ne zavomp ket ni, gwazed, pesort fin a vo? E vezo troc'het hon gouzoug d'eomp holl evel da yerdour! Eur foeltr vez e vefe! Kasint ganto eta arc'hant, dilhajou, kig-sall, patatez, bara! Ar parkou, da vihana, a chomo aze, ha pa hon do torret o fennou ouz ar Re C'hlas, ni a gavo hon farkou adarre!

— Gwir a lavarez, sakrist, eme Gevareg; eno eo red d'eomp koueza pe vezan dizenoret a-grenn. Awalc'h hon deus gouzanvet breman, evit diskouez n'eo ket ni a zo o klask ar brezel. Me eo bet lazet va mamm d'in!

— Me, eme ar C'hloareg, eo bet laeret d'in va feadra! Hag holl eo bet diframmet diganeomp hor relijion hag hor beleien!

— C'hanta, pôtrede, eme Riwall, argaset o deus ac'hanomp d'ar c'hoajou da veva etouez ar bleizi. Gwaz aze! Hiviziken ni vezo bleizi evito!

Hag an holl en eur vouez, a youc'has:

— Ya! bleizi! bleizi!

Breiziz, lennit :

La Langue Bretonne en 40 leçons, par F. Vallée, 6^e édition, imprimerie Saint-Guillaume, Saint-Brieuc, et chez tous les libraires de la Bretagne. Prix, franco. 3,50

Notennou diwar-benn Istor ha Sevenadur ar Gelted koz (Notes sur l'Histoire et la Civilisation celtique) par Meven Mordiern et Abherve. 7 volumes avec lexiques, notes, cartes, etc. Chez R. Le Roux, St-Hélory, Pordic (Côtes-du-Nord). Prix, franco. 2,45

Marc'hekadenn Atepomaros tennet eus Skella Segobrani, chez R. Le Roux, Pordic. Prix, franco. 1 fr.

GOUELIOU BLEUN-BRUG

Gwened ha Santez-Anna-Wened

(13, 14, 15, 16 a viz Gwengolo)

KENSTRIVADEGOU

I. **KOMZ-PLEN** (Prose). — Goude beza sellet piz endro d'eoc'h hag en em zonjet ervat, lavarit pesort c'henchamanchoù a vefe d'ober evit gwellaat stad pep den, evel labourer, — evel penn-tiegez.

II. — **BARZONIEZ** (gwerz). — Klemmou eul labourer yaouank kuitaet gantan e di hag e vro, e zonj gounit forz ar-c'hant er c'hêriou bras. Poan o veva ha klenved eo en deus paket.

III. — **KENSTRIVADEG AN AO. ROUDOT.** — Ar gerent, e-meur e lec'h, a zo krog da gomz galleg, — ha pesort galleg! — ouz o bugale vihan. — Petra zo kiriek da ze? Penôs terri ar c'hiz fall-ze?

IV. — **KENSTRIVADEG ARZUR DE LA BORDERIE.** Penôs e ententeb-hu eur Vreiz dishual? Penôs lakat da ze-vel e sperejou ar Vretoned an ioul da veva dishual ha da remetrezo o-unan hepken o buhez evit ar pezh a zell ouz ar c'henwerz, — al labour, — ar yez hag ar skolioù?

V. — **DISPLEGADEG.** — Hun ar Barz, a gavoec'h er bajenn warlerc'h.

VI. — **LENNADEG VREZONEG.** — Etre ar vugale o do roet o hanioù da Vreuzier ar Brezoneg en o rann-vro.

Eur genstrivadeg all, dre skrid, **Kenstrivadeg Gweltas**, a vo savet ivez, evel warlene, ha laket aman da gouz gouelioù Pask.

VII. — **PREZEGEREZ** (Éloquence). — Ar garantez e kenv er ti e vezer bet ganet ha savet ennan.

Ce concours inauguré en 1921, avec succès, comporte trois prix: un premier, de 200 fr., donné par **Feiz ha Breiz**, un second, de 150 fr. et un troisième de 100 fr.

Le jury d'éloquence sera présidé, comme toujours, par **M. E. Ernault**, chevalier de la Légion d'honneur, professeur à la Faculté de Poitiers et président de la **Breuzier-Vour ar Brezoneg**.

Le Concours d'éloquence est ouvert à tous les jeunes Bretons de 17 à 25 ans, sans distinction, quel que soit le dialecte dont ils se servent.

Les dix concurrents dont les épreuves écrites obtiennent les meilleures notes peuvent seuls prendre part à l'épreuve orale.

Les dix concurrents admis à participer à l'épreuve orale, devront se présenter devant les membres du Jury, à Sainte-Anne d'Auray, le 16 septembre prochain et recevront à cet effet, une indemnité de déplacement de 20 francs. (1)

(1) Gweleit war **Gorn-Boud** ar miz-man an VIII ha IX^{vet} ha X^{vet} kenstrivadeg.



Hun ar Barz

E kreiz ma hun, eur wech a voe,
Me oa d'an noz, war ar mene,
War Mene-Du, a gave d'in
Hag an noz didrouz ha skintin.

Ha gand ar mene, em c'hichen,
E tremene tud a vanden;
A-rumm da rumm, war ar mene,
Tud an Arvor a dremene.

Gand o falz aour hag o sae wenn,
An Drouized oa barz ar penn;
Ha 'barz ar penn oa Drouized,
ha kevred gante oa Barzed.

Hag an telennou a zone,
Ar Varzed gante a gane:
— « Tan 'barz en oabl! tan ha kirun!
Ema taran war veg ar run! »

Drouized ha Barzed gante,
Tud a vrezel zeue goude;
Tud ter ha krenv, tud a vrezel,
O vont a-raok, war an avel.

Hag an telennou a zone
Ar Varzed gante a gane:
— « Tan, dir ha tan! tan, dir ha gwad!
Paotred Arvor, argad! argad! »

Diarc'hen, eur zae reun gantan,
Eur Beleg oa goude 'r re-man.
'N e gerc'hen, kroaz Salver ar bed;
Ouz hen heul ive oa Barzed.

Hag an telennou a zone
Ar Varzed gante a gane:
— « Stoump hon pennou d'an douar
Dirak Doue bras ar C'halvar! »

Setu, war lerc'h tud a vrezel,
Marc'heien urzet Breiz-Izel,
A-benn da benn, harnezet mat,
Peb a groaz-ruz war o dilhad.

Ha trouz bras gante o tremen,
Ken a dregarne ar zaonenn;
Barzed gante o vont en hent
Ha Beleien 'n o diagent.

Hag an telennou a zone,
Ar Varzed gante a gane:
— « An Aotrou Doue 'c'hourc'hemenn!
Da Vro 'r Zav-Heol d'eomp d'hen difenn! »

Pa oa ar re-man tremenet,
E welis ar Re-Unanet;
Na Barz, na Beleg heul ane,
Met Kergourtez er penn gante.

'Met Kergourtez, eur gwir Vreton!
Hag holl e kanent a galon:
— « Evid ar Vro, evid ar Fe,
A-raok! a-raok! Paotred Kernel! »

Ar Chouanted avat, goude,
A welis o tremen ive,
Ha gante tudchentil ar Vro,
Tud dispouren rak ar maro.

Gwilhou Arvern, gante kevred,
A gane, ziskane bepred:
— « Pe beza lazet, pe lazan,
Lazan avat eo ar gwellan! »

Kriz ha kalet vije neuze,
War Mene-Du neb na ouelje,
O welet eun dall o tremen,
Gantan d'e gas 'met e gi gwenn.

O klevet o kana eun dall
Kanaouennou an amzer fall:
— « Lazet ar C'hont, gwasket an dud,
An dud paour evel loened mut! »

Ha ker klemmus e oa e zon,
ken e hantere ma c'halon...
Pa dremenat, gant kezeg bras
Koz Gallaoued, gwisket e glas.

Pa dremenat koz Gallaoued
Gand o c'hezeg o vont d'ar red,
ken deus diskaret ar paour kez,
E mesk ar vein, e mesk an drez.

Ha ken en deus strinket e wad,
Den d'e zikour 'met e gi mat,
Met e gi mat a hirvoude
Hag ar paour koz a lavare:

— « Aotrou Doue, ma sikouret,
Lazet oun gand ar C'hallaoued! »
Hag ar C'hallaoued a c'hoarze
Hag o vont kuit a lavare:

— « Mat zo grêt d'it-te, truilhennek,
Torr-penn gant da goz Brezoneg! »
Hag i kuit ha d'an daou lamm ru,
ken e strinke 'r vein en daou du.

Ha me o welet eun itron,
O tonet diwar du Nizon;
Hag ar paour koz he deus savet
Hag en he c'har deus hen laket.

Ha d'ar red neuze ha d'ar gêr,
Ha d'ar red trezeg ar maner;
Laket ar paour 'n eur gwele mat,
Gant lien gwenn sec'het e wad.

Hag a-benn eun teir zun goude
Ar paour kêz dall a oa pare,
Hag adarre en deus kanet
Gwerziou an amzer dremenet.

Hag an Itron a zelaoue,
He mab bihan ive a re,
Hag o daou o deus bet desket
Gwerziou an amzer dremenet.

Gwerziou an amzer dremenet,
Kanouennou ar Vretoned...
Hag ar mab, gantan eun delenn,
en deus laosket eur youc'hadenn.

Eur youc'hadenn en deus laosket
Ken en deus distonet ar bed,
Distonet holl, douar ha mor,
Gant kanouennou an Arvor!

Bet droug gand an neb a garo,
Ar Brezoneg n'eo ket maro,
A drugare an Itron ger
Hag an Aotrou a Gervarker.

LABOURIOU AR MERC'HED WARDRO AN TI

Kenteliou Tintin Anna

IX^e PENNAD AL LOENED

Ar vaouez, en he c'hêr, a dle beza henvel ouz ar we-
nanenn: savet abred ha bepred o labourat.

Ma vez net an ti ganti, ar boued pourchaset mat, ar
vugale gwisket dereat ha savet e doujans Doue; ma vez
ententet, gant skiant ha preder, ouz ar re glanv, a dra sur,
n'eus ket da glemm anezi.

Koulskoude, eun tamm labour bennak he deus da ober
ivez, er mêz eus an ti; ar weananenn a labour, epad an
deiz, tro-war-dro d'he c'hestenn; nijal a ra eus an eil
bleunenn d'ebèn, ken he devez dastumet mel awalc'h da
zikas d'ar gêr; kana a ra en eur vont hag en eur zont
aketus atao d'he dever, evel ma rank beza eur vaouez
kempenn.

Evit mad an holl e labour hag an dra-ze a laka laoue-
nedigez en he c'halon; evit mad ar re a zo en he serr e
rank ar vaouez teurel pled war gement a zell outi; er
mêz eus he zi, ez eus krevier; er c'hrevier ez eus kezeg,
saout, moc'h koulined (1) ha yer; gounid a vez diouto-
holl, pa vezer war evez anezo; dâ eo eta poania ganto,
muia ma c'heller ha beza mat outo, p'eo gwir emaint war
an douar-man evit renta servich d'eomp.

Gwechall, al labourer a gomze evel-hen ouz e gazeg
yaouank: « Va bouch bihan, sav en da zav, ma welin
penaos out stummet gant Doue; Sounn out laket gantan
war da zivesker askournek; da gein a zo eün-tenn; da
gorf, ledan ha doun a zo tost d'an douar; me gred e ri
eur gazegig v Rao, rak digor out en a-raok koulz hag en
a-drenv; en dâ lagad ez eus kement a skiant hag en hinñ
eun den; gwir vreizadez out ivez gant da liou rouan;
hon daou e raïmp labour vat a-gevred; evit c'hoaz ez peus
eun tamm aoun razoun; n'anavezet ket da vestr; dont a
ri hag ez pezo fizians ennoun; ne lakin ket a vec'hiou re
vras d'it, rak nerz eul loen n'eo ket divent; n'eo ket gant
houarn ha dir eo ez eo graet e izili; pa vezin feas o vale,
e savin er c'harr; en diskennou e lakin ar votez ouz ar

(1) Koulined: *lapins*.

rod ma vezo nebeutoc'h a vec'h warnout; er saoiou e
valein skoaz-ouz-skoaz ganez, en eur gana pe en eur zu-
tal, ha bez an amzer e c'helli ehana; an tamm bara lakel
em godell gand ar wreg a vezo daou-hanteret, rak gou-
mezet ez pezo da lod! Hizio en hent, warc'hoaz ouz an
alar, ne skuizin ket re ac'hanout; damant em bezo d'it
muioc'h eget d'am c'herc'h, ha ma rankan, Doue ra viro,
da werza d'an estren e teuo an dour em daoulagad pa
dostaio ar mare d'en em guitaat; e kreiz da benn, etre
da zaoulagad, e lakin eur pok ha gant devosion e livirin:
« Sant Alar r'az pennigo! »

Hon tadou koz a garie o anevaled; evel ar Zent, e ve-
zent mat outo; o anaout a raent evit krouadurien da Zoue,
lakel gantan, war an douar, evit hor sikour ha nann evit
bez gwallgaset ganeomp, na rei tro da veur a hini, siouaz,
da lavaret, en aner, hano santel an Aotrou Doue.

Beza yut ouz an anevaled a zo en em lakaat izeloc'h
egeto, ha diskouez kaout nebeutoc'h a skiant egeto. Dre
gaer e teuer a-benn anezo kalz gwelloc'h eget dre heg.

Ne jomin ket pell da gomz diwarbenn ar c'hezeg, rag
an dra-ze a zell muioc'h ouz ar wazed hag eman ar c'hiz
ganto da lavaret:

Lavariou merc'hed,
Gwech e vez gwir, gwech ne vez ket!

Ha koulskoude ma c'hellfe ar merc'hed rei eun ali
bennak diwarbenn an netadurez ne vankfe ket kement a
gezeg hag a ra breman. Hanter-amzer, o c'hlenvejou a
deu dre riou, dre skuizder, dre voued fall, dre loustoni;
en eur ger: dre leziregez pe dre fallagriez o ferc'hen.

Dleet e vije kemeret amzer da brederia outo, derc'hel
net o c'hraou, sec'h ar c'holo dindanno; o zerchi gant
kolo pa vezont bet o labourat; gwalc'hi o divesker; lem-
mel euz o zreid an traou louz a zo en em fourret enno;
evito koulz hag evid an dud, e kenver beza net, eman ar
yec'hed; ha beza net a zo aes e-skoaz ma 'z eo para.

En hanv, an dour re yen a zo noazus d'an anevaled,
dreist-holl pa c'houezont: teurel evez a ranker da denna
dour eus ar puns, teir pe beder eur a-raok ma vez ezomm
anezan hag eun dra vat eo lakat eul loaiad gwinegr ebarz.
An dour feunteun a ro re griz en hanv; arabad lezel ar
c'hezeg da eva anezan.

Ar pezh a zo gwir evid ar c'hezeg a zo gwir evid al
loened all: ar c'hrevier a rank beza net hag ear a vezo
roet d'ezo alies.

Ar vioc'h

Ar zaout hag ar moc'h ar c'houlined (lapined) hag ar
yer, setu aze avat loened hag a zell ouz ar vaouez; d'ezi e
vezo tamallet ma chenchont pe ma klanvont, met gant

ma talc'ho anezo kempenn ha ma vago mat anezo n'he-deus nemet plijadur da gaout war o zro.

Eru vioc'h vat a vezo ledan he diouskoaz, moan he fenn, berr he divesker; he dibab a ranker; rak bioc'h ha bioc'h a zo! an hini ne roio nemet 3 litrad laez bemdez a goustekeit da veva hag an hini a roio 15 pe 20; ar re a zo boaz da brena saout ne faziont ket kalz.

Gouzout dibab ar zaout mat da rei laez, rei boued mat d'ezo, o derc'hel dilastez, setu tri dra red evit kaout eur gwenneg bennak diouto; eun dra all a zo c'hoaz: ma vezont goroc'h gand eur vaouez diskempenn e kollint o laez, rak an drusa hag ar gwella eo a deu da ziveza; ma vez droug, dalc'h mat atao, er vaouez a vez ouz o goro; ma ne glevont ganti nemet soroc'h ha pec'hejou; m'o devez bazadou bemdez diganti, ar zaout ne roint ket o laez ken nebeut, rak kement-se a ra gaou outo: gwelet ez eus bet saout mouzet ouz eur wreg grignous o terc'hel o laez ganto.

Pegen talvoudus eo eta deski abred d'ar vugale beza sioul hag habask; poania da lemmel eus o c'halon ar ple-gou fall a zoug d'ar vuanegez. Pebez tenzor evid eun ozac'h kaout eur vaouez a galon vat, eur vaouez fur ha kempenn.

Eur pennad a-raok ma halo ar vioc'h e vezo roet muic'h a vrenn d'ezi, eun tamm gouelienn bemdez ha goude m'he-devezo bet he leue e vezo kendalc'het eur pennad da ober ar memez tra.

Roet e vez an ali, gand eur maread, da rei eur melen-vi d'al leue, nevez deuet war an douar, ha da lezel gantan ar c'hent-laez; anez, emezo, e varvo, dre ma vo re galet e gorf. Kenavo neuze d'ar farz-uzun ha d'ar c'hrampouez: a laka ar re vras koulz hag ar re vihan da lipat o genou.

Al leue a vezo dalc'het er goudor; en e graou; ma stag ar red-korf gantan e c'heller rei d'ezan viou, teir pe berder gwech bemdez; viou, klosou hag all, frigasat ha kemmesket en eur banne laez.

Ma 'z eus c'hoant da zizoun unan bennak eo gwelloc'h derc'hel ar re a deu war an douar, d'an nevez-amzer; ma 'z eus c'hoant da larda unan bennak, ar gwella amzer eo eus a viz du betek miz mae.

Da ziouall ez eus ouz ar melchen nevez; an holl hergoar: boueta a ranker, met gant skiant: na re, na re nebeut, evit kaout pemzek pe driwec'h litrad laez bemdez.

Gwelloc'h eo goro ar zaout er c'hraou eged er park le-toun; al laez a vezo lakat er sailhou pe gentoc'h er podelzou, ha dizienna ez-klouar; an diziennerez a vezo net, ar podelzou ivez, pe e trenko, al laez hag an dienn; abenn tri dervez, an dienn a vez go da ribotat; ar ribot a vezo-gwalc'het gand dour net, tomm er goanv, yen en hanv, a-raok lakaat an dienn ebarz.

Dek pe zaouzek litrad laez a zo dister evit kaout eur lur amann; amzer a ranker da gemeret da ribotat, n'eus

fors gant pe seurt ribot. Seul-vui ma vez dous ha fresk an dienn, seul-welloc'h e vez an amann; evit kaout amann blazet mat eo red ribotat a-raok ma vez trenk an dienn.

Ma vez lakat dour re domm er ribot, gand an dienn, e vezo skaotet an amann ha difounnet; red eo eta teu-rel evez, eur banne dour klouar a zo mat da lakaat, er goanv, met nann dour bero, evel ma 'm eus gwelet hen ober. An hevelep tommider eo a laka an dienn da drei en amann: 19°; ma vez tommoc'h e chomo tano an amann; ma vez ynoc'h ne devaio ket an dienn. Aman c'hoaz ez eus ezomm kemeret preder ha beza net; n'eo ket an holl o deus amann mat; met gand an daou venveg-ze an holl a c'hell kaout; tamallit d'ar merc'hed ma trenk re vuan al laez, ma vez blaz ar c'hoz gand amann, ma teu dillo da vouta; podelzou hudur kirinennou pe zailhou louz a zo en eur c'horn bennak.

War ar maez, e bro Roazoun, ez eus amann mat tre; dre eno ne vez ket diziennet al laez; al laez mintin hag al laez noz a vez kemmesket klouaraet ha taolet en eur ribot bras, en eun douez: pep bro he deus he giz.

TINTIN ANNA.

E Foar an Nec'h, en deiz all!

Daou lampon, eus a war-laeziou, a oa, e miz Here diveza, e foar an Nec'h e Montroulez; daou baotr oant ha ne falveze ket d'ezo ober eun holl vad, gant o c'horf, ha ne goueze en o godell nemed ar pez a dapent dre laer.

P'en em gavjont e Montroulez e oa berr ar peuri ganto, ha tano o yalc'h, ha setu i ha mont da c'houlenn bara, da derri o naoun, war o meno; kaout a rejont ar pez a c'houlennent rag eun tamm bara a vez roet atao, dreist holl p'her goulenner en han Doue; met n'eo ket da zebri eo e klaskent bara; da ober boulouigou, an hini eo, hag a rodelljont, e bleud eun tamm koad koz, hanter vrein.

Prena rejont goudese, da lakât o boulou bara, eur pakadig sier paper seiz ruz, evel ma vez kavet e tiez an apotikerien a oar lakât paper kaer da c'holei marc'hadourez dister.

Eur wech en em glevet mat, unan eus ar ganfarted a yeas, da ostaleri ar Marc'h Gwenn; Leun oa an ti, ken na c'hellet ket finval ennan, gand an dud oc'h eva hag o fibri; goulenn a eure eur werennad win, met e lec'h hen eva e lezas anezi dirazan, hag hen tenval e benn, gand eun dourn war e voc'h, oc'h ober an neuz da gaout eur boan zent skrijus! Eur glemmadenn bennak a laoske ivez

beb an amzer. An dud a oa eno a gemere truez outan hag a lavare d'ezan kemeret eur banne hini krenv, e lec'h eur banne gwin, pe lakât eun tamm butun en e c'henou; ha n'en divije ket kement a boan marteze; a greiz m'edo evelse, en e wir wella, gand e ardou, ar c'hanfart all a zigouezas; er penn kenta, ne ziskouezent tamm ebet e c'hellent en em anaout; en eun taol, ar c'henta a laoskas eur glemmadenn vras; egile a droas e benn, a zellas ouz e gonsort hag a lavaras d'ezan: « 'M eus aoun, va den mat, ho peus poan zent! » hag hen, etrezek ennan, ken drant ha tra: « Me, emezan, war eun ton lorc'hus, eo an Doktor Heraklius, eus a Bariz; bez ez eus aze ganen, dres, boulouigou hag a zo dispar ouz ar boan zent; gand unan pe ziou, d'an hirra, emaooc'h pare! »

« Feiz!-Mil vad a reoc'h d'in, aotrou eme egile, rak koll a rin va foar, ma n'oun ket evit lakat ar boan-ze da goueza. » Neuze an Doktor Heraklius a dennas eus e c'hodell eur sac'hig ruz hag a dennas eur voulig anezan en eur c'hourc'hennenn d'ar c'hlanvour lakât anezi war e zant klanv ha chaokat warnezi heb aoun. An dud all a oa, war al lec'h, a dostea da welet pe seurt vad a raje al louzou nevez.

Ar c'hanfart goude beza chaoket e voul genta a lezas eur glemmadenn vras: anat oa d'an holl n'oa ket distaget c'hoaz e boan dioutan: neuze an Doktor a gemeras eur voul all; ar c'hlanvour n'oa ket bet netraig houman gantan, en e c'henou, ma savas, en e zav, laouen bras ha pare klok, en eur standa dourn an hini en doa e bareet; an dud o welet pebez louzou burzudus a oa gand an Doktor Heraklius a jomas sebezet ha pep hini a c'hoanteas raktal prena eur pakad anezan da gas gantan d'ar gêr; ugent real e werzet ar sac'hadig hag holl e voent gwerzet e berr amzer; an daou ganfart a en em rinklas neuze, goustadik, eus an ostaleri, an eil, eur pennadig warlerc'h egile; p'en em gavjont o daou e c'hoarzjont, gwalc'h o c'halon, war an dud a oa bet genaouek a-walc'h da brena diganto o marc'hadourez didalvez.

E pelec'h emaint breman o c'hoari o zroiou kamm? Den n'her goar, met unan bennak a dapint c'hoaz, rak aesoc'h eo lakât ar gaou da veza lounket eged ar gwir da veza kredet!



Chapel Koad-ar-Roc'h

Chapel Koad-ar-Roc'h a zo en he sav a-drenv torgenn Penn-ar-Run, e parrez Lannedern. Kouezet edo en he foull war-lerc'h an Dispac'h, ha bet eo adsavet er bloaz 1874. Hizio ez eus anezi eur chapel gaer gand eun tour uhel, ha, bep bloaz, d'al lun-Fask, e vez eno eur pardon eus ar c'henta. En diabarz eun feunteun sant Môdez kleuzet doun er garreg, hag an dour a gaver er vamenn-ze a ra vad d'an neb a ev, bras ha bihan.

En amzer drubuilhus an Dispac'h e oa eun intanvez pinvidik, Janed Tourmel, o chom e Kerguz war-hed eur c'hard-leo eus ar vourc'h. Janed a brenas ar chapel evit kant liur arc'hant pouezet, ar pezh a rae eun dalvoudegez a zek mil lur en arc'hant ar c'hantved-ze.

D'an hevelep mare e teuas eur vandennad soudarded c'hlaz da dreuzi ar barrez. Digemeret mat e voent e ti ar goueriadez, er Gerguz; aozet e voe d'ê da lein teir peheder jidourennad yod kerc'h. Goude ar pred ar c'habiten a oa er porz o sellet oc'h gwazed a oa o karga teil en eur c'harr. Anaout a reas eur beleg en o zouez, hag hen-gwisket evel eun devezour An ofiser glas ha lavarout neuze eun dra bennak evel-hen evid e dud hag ar vestrez-veuri:

« Unan eus ar wazed a zo o karga teil aze er porz a zo eur beleg. Ne glaskomp ket ober droug ouz tud an tîman o deus hon digemeret ken mat. Met rei a ran d'anaout d'an neb a roio hiviziken goudor d'eur beleg bennak dre ar c'harter-man e vezo kastizet garo. »

Diwar ze ar c'habiten a vodas e zoudarded hag heb dale e kuitajont ar barrez.

Pa zeuas adarre ar peoc'h da ren en Arvor, perc'hennez ar chapel a zonjas goulen digand ar barresioniz an arc'hant a oa bet rôet ganti da brena he frenadenn. Tud Lannedern ne c'houljont sevel eur gwenneg en abeg-se. Dont a reas neuze menozioù diskiant e spered Janed: lakat a reas gwazed da deurel er-maez eus ar chapel ar skeudennou hag an traou sakr a oa bet enni. En doare-ze war he meno n'o dije mui gallet ar barresioniz dont da bédi na da bardona e chapel sant Môdez. Karget e voe

skeudenn sant Môdez er c'harr evit he c'has da ober eur peul-kloued war eur park. Met an oabl a sklerijennas gant luc'hed; ar gurun a groze tro-war-dro d'ar Gerguz ha red e voe d'ar wazed distrei e-harz an aoter evit adlakaat en o lec'h dleet ar skeudennou o devoa c'hoantaet teurel e renk traou didalvez.

En deiz a hizio e c'hell c'hoaz ar bardonerien pedi dirak skeudenn goz sant Môdez a zo en tu dehou d'an aoter er chapel sioul kuzet brao e-touez ar gwez kistin, dero ha fao.

Y. B.



Breizad yaouank, klev' ta !

I

Trouz
Ebet
Er bed!
Trouz
Ebet
Ne red!

II

E kreiz
Ar sioulder,
Klev er pellder,
E kreiz
Al lanneier:

III

Eun hiboud
A zav hag a gouez:
' ' Vel ezenn a c'houez,
A hirvoud
E begou ar gwez.

IV

Ne 'z eo mui
Eun hirvoud; met eur bobl a-bez
O sevel, o kuitât ar bez;
Ne 'z eo mui
Hiboud, met eur c'han a vil mouez!

V

Setu ar Gelted koz,
Gwazed vat ha dispont, er gouelec'h, 'n em vodet;
Gwel o daoulagad glas en o fennou kalet;
Setu ar Gelted koz
Da welet douar Breiz, 'kreiz an noz digouezet.

VI

En eun taol, ar Mestr bras,
Gand eur vouez pounner a gomzas evel-hen:
« Breiziz koz! kelou mat! m'ho ped, bezit laouen,
Breiz a-bez 'zo beo bras:
He bugale-vreman hel lavar a bouez-penn! »

VII

Eur youc'hadenn spontus
A voe klevet neuze; hag ar Gelted maro,
E kreiz o levenez, en o yez ken garo,
A youc'he, evurus,
En eur vont d'o beziou, da c'hortoz Sav o Bro!

VIII

Ne glever ken
A bell 'met eur gourdrour, ... didrous
A dec'h, a dec'h... atô, ken dous,
Ne glever ken
Breman 'met 'vel nij eul... labous!

IX

An hirvoud,
Goustad, a zo tec'het
An avel 'zo tavet:
Nag hiboud,
Na grik ken e tu 'bet!

X

Trouz
Ebet
Er bed!
Trouz
Ebet
Ne red!

El ar c'helou mat.

KELEIER AR MIZ

E SKOLAJ LESNEVEN

Diskibien Sant-Weltas, staget gand o labour leun a darn ha leun a nerz-kalon, n'int ket deuet war o c'hiz; ma'zeus unan bennak hag en deus kilet dirag al labour, eur strollad bras a zo chomet start ha youlek da anaout traou kaer o Mamm-Vro. Bep pemzek dez e vezont aketus-da zont da zelaou unan eus ar renerien oc'h ober eur-studiadeg.

An hini genta a voe graet deomp diwarbenn ar yez. E berr gomzou, ar prezeger a ziskouezas n'eo ket ar brezoneg eur vriz-yez, daoust da lavar eun diboell bennak, met eur yez hag he deus he reolennoù hag he lennegezh. Darn eus an dud a lavar eo ar brezoneg eur yez paour-war zigarez ma z'eus gerioù gallek ha n'hellont ket beza-troet e brezoneg. An dud-ze goude beza sellet ouz paour-ventez hor yez, ne rafe ket a zroug d'ezo sellet ivez eun tammik ouz he vinvidigezh. Ma 'z afent da glask trei e gallegerioù evelhen: « Komz e pleg ar skouarn, kerc'ha eul loan, boueta ar chatal, poullada, betek zoken kaoc'h-kezeke... », a dra zur e vent lakaet nec'het bras. Met n'eo ket hepken evit he vinvidigezh eo e rankomp karet hor yez, hi a zo bet komzet gand ar Vretoned koz, ha bez eo bet a-viskoaz eur jadenn etre ar gerent hag o bugale, ar vevelien hag o mistri gant hon tadou koz: *delc'her dezi a rankomp hag hen ober a raimp*.

Met n'eo ket a-walc'h anaout hor yez, red eo d'eomp-ivez anaout he lennegezh. En eun eil studiadeg ar prezeger a ziskouezas d'eomp doare lennegezh-Vreiz. Goude-beza displeget pe seurt kemm a zo etre lennegezh hor bro-hag hini Bro-Geumri ha bro Iwerzon, e reas eun diverra eus an holl oberioù brezonek bet skrivet abaoe ar XVIth kantved. En eur dremen e lavaras eur gerig diwarbenn ar Gonideg « reizour ar brezoneg »; Brizeuk hag a lavare-araok mervel:

« Tal va bez, tud yaouank, c'houi lakai eun dervenn
Hag an eostig klemmus a gano war he fenn:
Brizeuk, barz bleo melen, aman a zo beziet
Hennez a wir galon garie ar Vretoned ».

Yann-Per Kalloc'h hag e leor brudet *Ar en deulin*; An-Ao. Bayon hag e beziou c'hoari ken kaer; Tanguy Malemanche hag e daol micher « Gurvan »; Kermarker ha Barzaz-Breiz. Ha goude beza komzet eus eur strollad barzed all ken anavezet hag ar re man, ar prezeger a reas meuleudi an Ao. Perrot, krouer ar *Bleun-Brug* hag ar emzaou breizek. Hag evid echui e kemennas deomp karet hon lennegezh; daoust ma n'eo ket ken kaer, na ken pin-

vidik hag hini ar C'hallaoued hag ar Romaned, he c'haerder he deus hag eur Breizad ne die ket ober fae warni.

Eun trede studiadeg a voe graet diwarbenn an traou en deus ar feiz lakaet da ziwan war douar Breiz. Hor bro a zo goloet a dourioù kaer meurbet; ar C'hallaoued, an Amerikaned a jom bamet dirak kaerder hon tourioù, hon ilizou hag hor c'halvarioù; ha ni alies a ra fae war an traou-ze. Ar prezeger hag a anavez e vro gwelloc'h eget n'eus forz piou a bouez eun tammig war an holl draou kaer en deus gwelet en e veachou.

N'eus ket en hor bro eur c'horn douar ha na welfer ket ennan eun tour pe eur c'halvar bennak. Pa vez brao an amzer eus tour ar Merzer e weler 38 tour all. An tourioù-ze a zo eus a bep seurt; darn a zo bras, uhel, evel re Gemper, ar Fodlgoat, Goulc'hlan, Kastell. Ar c'haera amezo eo hini Kreisker e Kastell-Paol, uhel, moan, dantelezet, digor d'an avl, brava hini a zo er bed. Ozanam a lavare: « Eun eal hag a c'hoantafe diskenn war an douar, a lakafe e droad war beg tour Kresiker. » An tourioù kosa en hor bro a zo ledan, izel, met start war o diazez ha stopet gwelloc'h ouz o douar. Ouspenn tourioù a zo en hor bro, bez e z'eus ivez kalvarioù, ar pezh ne gaver e lec'h all ebet; setu aman peurliesia stumm ar c'halvarioù-ze: eus a-greiz eun dôlenn-vean e sav eur groaz, a-wechou teir; e traon ar groaz-vez eus bep seurt tud bodet; e Plougastel, Pleyben, Guimillau, Tronoen e c'heller gwelet re gaer. Peurliesia ar c'halvarioù-ze a zispleg Pasion Jesus-Krist, pe eul lodenn bennak all eus buhez Hor Zalver. D'an holl skeudennou-ze ar gizellerien o deus gouezet rei stummou dudius; alies e vezont gwisket evel an dud a veve en amzer-ze. An dud-ze kizellet er mean a ve kemeret evit tud veo. Kizellerez an ilizou a zo ken kaer hag hini ar c'halvarioù. Enno e kaver skeudennou dispar: gwerc'hez, sent, eskibien, betek diaoulou zoken. Darn a zo benet gand eur gwir ijin: e manati Pennpont e kaver eur groaz mantrus dre an anken a lenner war dremm Hor Zalver. Ar groaz-ze zo bet savet gand eur manac'h hag a dremenas e vuhez-a-bez oc'h ober al labour-ze.

N'eo ket red deomp-ni tremen hor buhez o kizella mein na zoken o sellet ouz oberioù kaer hon tadou koz, met da vihana greomp ma ne vo mui gallet lavaret: « Breiz a zo anavezet er bed holl nemet gant Breiziz ».

Evelse a-nebeudou ni a deu da anaout hor bro hag ivez d'her c'haret. Ya, karet a reomp hor Breiz gand karantezh eur bugel evid e vamm. Adalek vremen ni a zo hag a fell deomp brza da Vreiz ha da Vreiz hepken. Ni a vo bepred Bretoned feal, ha pa rankfemp...

War ribl eur feunteun sklear, mervel gand ar sec'hed
Hor Mamm-Vro ganecomp-ni, morse ne vo nac'het.

(Daou ziskib Sant Weltas Fanch ha Jakez).

LANUON — Daou ouel en eun deiz

Abaoe ma oa bet gouel ar *Bleun-Brug* e Gwengamp, pô-tred *Strollad Bro-Dreger ha Kerne* o doa laket en o fenn mont ivez da Lanuon; Lanuon, eur gêr goz evel Gwengamp, brudet en istor Breiz evelti ha diazezet e kreiz eur vro hag a vag, marteze, ar gwella brezoneg a gomzer en eskopti Sant-Brieg ha Landreger.

E Lanuon ha wardro, ne gaved ket gwell eget rei digemer d'ar *Bleun-Brug* ha zikour d'ezan da stigma e stal: an Ao. Bocher, person kêr, Ao. rener Skolaj Sant Jozef, an Ao. Pouhaer, rener patronaj Sant-Yan-Vadezour; an Ao. Cathou, rener c'hoarierien yaouank Skolaj Sant-Jozef; an Ao. Corvez, person Berlewene, a c'helled fiziout warno: a bep tu ne oa nemet skoazell da c'hedal, da rei da gredi n'en doa dija ar *Bleun-Brug* nemet mignoned e Lanuon.

Divizet eta etre an ao. Brochen, rener Strollad B. B. Treger ha Kerne, hag an ao. Bocher, person Lanuon, mont di da c'hoari pezh *Santez Trifina*, an 8 a viz kerdu. Deiz gouel ar Werc'hez a oa merket da vezan eun deiz kêr e Lanuon, dre m'en doa galvet an Ao. person, d'en em voda eno, ar strollad kanerien savet dre holl ilizou ar vro, da gana meuleudi ar Werc'hez dinam herve an doare kana gregorian a zo ken flour ha ken dudius ma c'heller e henvel kan an Elez. Ugent strollad kanerien a oa diredet, daoust d'an amzer fall ha ganto eun triugent beleg. Lodenn genta ar gouel tremenet en iliz a voe eul levenez kaout peurs enni. Diouz klevet ar c'han en eun darn eus hon ilizou, d'ar zul, e vez poan o kredi penôs an hevelep kanerien, gant eun tamm preder, eur bloavezh pe daou a studi, a c'hellfe kana evel ma voe grêt dimeurs, 8, e Lanuon. Ha koulskoude, gwir eo. Bez ez eus parrouziou diwar ar mêz ha, mar emañ breman dreist d'ar re all n'eo ket e vez enno kaeroc'h moueziou eget elec'h all; muioc'h a studi hag a aked ne lavaran ket.

Da greisteiz, an diavêzourien, 'vit an darn-vuian, en em gav dastumet e ti Ar Retred, hag o deus ennañ ar gwella digemer a c'hellfed da gaout. Anaout ha saludi a reomp eno, endro d'an Ao. Bocher, kalz eus hor mignoned: an Ao. Caurel, mestr-skol e Sant-Tegoneg; *Pôtr Juluen*; an ao. Joanno, person Benec'h, hag eman, eur pennad so, holl vec'h ar *Bleun-Brug* war e ziouskoa; diouz hen gwelet, avat, n'eo ket dare c'hoaz da skwiza, ha gwell a ze! En e-gichen, en em gav an Ao. Chaloni Chevrillon, rener misionerien S^t Meen, hag a zo kalz a stad ennañ oc'h anaout labour ar *Bleun-Brug*...

Ar gousperou 'zo kanet, evel an oferenn, gant an holl ganerien ha, diouz ali an dud a vicher, evel an Ao. May, person S^t-Kê, an ao. Gleyo, rener strollad kanerien ilizeur Sant-Brieg, e kord ar moueziou seurt biskoaz, daoust

n'o deus ket gellit ar strolladou kana pôz ebet en eur gevred, araok an eur-man.

Aotrou person Lanuon a c'hell bezan laouen gant an taol ampartiz en deus grêt hag a roio hiviziken kalz a lusk d'ar c'han iliz e bro Lanuon; hogen gant eur c'han-iliz dereat, an ofiso a vez kaeroc'h ha, gant ze, gwelloc'h pleustret; gounid evit ar sperejou hag evit an eneo.

Seblant vat 'vit ar gouel d'abardaez pa oa deut da vat, evel ma oa, gouel ar beure. Goude ar gousperou, ar bobl, diouz an iliz a gemeras hent ar patronaj. Eno, an aotrou Pouhaer ha Thomas, gant eun nebeut mignoned, a renk hag a verk ar c'hadoriou, a werz bilhiji, a ro eun taol lagad diweza d'al leurenn-c'hoari ha d'ar zal. Eun engroez tud a zigouez warno, ma 'z eo mat d'ezo m'eman pep tra en urz. Kouch war gouch, ar zal en em garg evel eun u; a-benn eur c'hart eur, eo red paouez da werza bilhiji, kemeret an holl blasou hag ouspenn. Ar blijadur am eus, da vihana, da welet an Tad Daniel, ar misioner brudet, o kaout enni c'hoaz eur c'hogn d'en em lakat.

« Ho mamm », kân invorus ha tener an O. Bayon, a zigor ar c'hoari.

Diou blac'h yaouank eus Benec'h, gwisket en o c'haera, en em ziskouez d'hon daoulagad hag en em lak, unan anezo, da gana, eben, da zezrevel ar c'han dre he jestrou.

Ar c'halonou a zo teneraet, ken birvidik ar c'homzou, ken flour ar vouez ha ken beo an dôlenn!

Tro Ar *Yeodel* eo, me gred, rak me 'wel anezan o tigouezout gant e dog voulouzennet ha ne ra nemet tenna, 'pad an deiz, sellou Lanuoniz: « Kaerat tog, emezint; ha breman souden e lavarfont: « Ha gwella prezeger breton an hini a zoug anezan! » Diouz ma teu gantan, Ar *Yeodel* a lak an dud da c'hoarzin, da ouela, ha bepred d'en em zonzal; kentelius eo e gomzou; ne zigor ket e c'heno da gonta faribolennou goulo; e brezegenn a denn bepred d'ober anaout ha karout muioc'h Breiz hag ivez ar feiz. E gomz a zo eur c'hleze hag a droc'h, da zispartia ar gwir diouz ar gaou, evel m'eo dleet, hep doujans nag aon ouz nikun. « Breiz a zo diazezet war ar feiz, hag ar *Bleun-Brug*, hag a zo ar gwella mellezour da skedi hano Breiz, a rank ivez bezan diazezet war ar feiz. A-viskoaz, abaoe an Dispac'h, ez eus bet klasket mouga Breiz, konta hepdi; mar beo ar *Bleun-Brug*, ne vezo ket dalc'het d'hen ober; ar feiz a glasker da ziouered ivez, evel tra noazus, tra kazu, tra a zizunvaniez; ar *Bleun-Brug* a zavo anezi er renk kenta. » — Da gomz d'oc'h eus ar *Bleun-Brug*, eme ar prezeger, eun all hag a zo pell e tu all d'in, an hini en deus e grouet, an Ao. Y.-M. Perrot, eo a dleje bezan bet aman. Met n'hell ket tizout dre holl. Gwelet a ra breman frouez e labour hag e boan o kreski a bep tu endro d'ezan; brud vat e hano a gresk gantan. »

Eur stlakadeg daouarn hag a zalc'h da sklokal dindan lambrusk ar zal a ro da anaout eo peurachu gant Ar Yeo-det. Setu *Santez Trifina*. Pôtrede yaouank Skolaj S^t-Jozef a werz he Buhez, a renk da renk, etouez an dud; met aman, n'eo ket evel e Gwengamp, ma ranked, en eur zal frank hag uhel dreist-muzul, kaout eul levr a-benn heuilh ervat ar pez; aman ar vouez a sko frêz ha sklêr betek ar penn pellan hag an holl a heuilh diboan an divizoù penna-da-benn. Eun drugar eo, rak merc'hed yaouank Benac'h, e lec'h dizeski, o deus grêt dioiz mont war wellât bepred. Pennadoù a zo, dreist-holl, beo-buhezek, hag a zalc'h an holl boemet eno da zellet ha da chilaou; gwech e sav krozmol er zal, pa zispak Bazvalan he zrubarderez yud hag he c'hasoni; gwech e strink an daerou, pa deu Yoland da c'harvat war gorf he merc'h dibennet... Biskoaz n'am boe gwelet tud muioc'h eveziek ha muioc'h seder: dudi pa bar ar zellou war al leur-c'hoari, dudi, pa bar war ar zal.

Eun tamm ehan a vez epad an arvestou. Pôtrede yaouank Skolaj S^t-Jozef eo a zo breman da c'hoari o roll: *Yann Pôtr ar gêr, An Tabouliner koz*. Pôtr e vaz-ribot eo ivez pôtr an daboulin. Mar deo farsus ar peziou, doare ar c'hoarier a zo farsusoc'h c'hoaz. Gouzout a ra leuskel e bôziou war eun tòn hag a ro dija tu da c'hoarzin, hag ampledi a ra c'hoaz gant jestrou, en em doare hag a lak barr-leun ar blijadur. C'hoarzin a voe grêt, koulz bihan ha bras, hep paouez, keit ma chomas ar c'hoarier dirak an daoulagad ha, pa dec'has, e voe diskouezet d'ezan, gant an daouarn o stlakal, pegement e plijas e abadennou.

Ha breman, p'eo skarzet ar zal, warlerc'h kan *Bro goz ma Zadou*, euidon-me ar pep gwella eus al labour a chom d'ober: n'eo ket walc'h kaout plijadur, red eo diskouez anaoudegez d'an neb a zanzeas ar blijadur-ze; hag e soublan va fenn, da genta, dirak 'n Ao. chaloni Bocher. Roll an daou ouel hag a glot ken brao an eil gant egile a zo bet savet gantan ha, dre e zorn, evel just, eo tremenet kement mad a zo bet grêt. Trugarez kalonek da aotrou person Lanuon!

Ha breman, d'eoc'h ivez, aotrou rener Skolaj Sant-Jozef, d'eoc'h, aotrou Corvez, Pouhaer, Thomas, Bellec, Cathou; d'eoc'h, paotred yaouank ar skolaj... hag e vo kloz ma zro pam ho hanvet a-nevez merc'hed yaouank Benac'h, gant o rener, an Ao. Joanno, hag o deus, hirio c'hoaz, gounezet bezan kurunet gant ar Bleun-Brug...

Kannad ar Bleun-Brug.

Bretoned Pariz, Bretonezed Breiz

Kert strollad c'hoarierien, savet gant *Bretoned Kelc'h Keltiek Pariz*, a c'hoario eno, gant Goueliou Nedeleg, *Ar C'hornandoned*, hag a gano, e yez ar Vro kanaouennou

kaera ar *Bleun-Brug*. Epad an amzer-ze, e meur a barrez e Breiz-Izel, strolladou merc'hed yaouank, kristen war o meno, a c'hoario « *Rustaude* » ha « *Citadine* » ha me a oar me hag e c'hellit kredi, mar d'eo « *Rustaude* », evid ar merc'hed-ze, ar Vretonez di-warlerc'h, dre ma kendalc'h da vale war hent he bro; « *Citadine* » eo ar Vretonez Beg a-raok, dre ma 'z eo toket ha berr he lostenn ha m'he deus stlapet he c'houef etouez ar pilhou hag he brezoneg etouez an teil.

Pe seurt gwad, — evit hini yac'h, da vihanan n'eo ket, — a red eta dindan hoc'h ivinou, merc'hel keiz, c'houi hag a zo o chom etouez ar Vretoned hag a ya da C'hat-lezed pa 'z eus Bretoned, o chom e Paris, hag a jom Bretoned, daoust peger beuzet int koulskoude, etouez ar C'hallaoued? N'ho peus ket a vez o welet ar skouer vat a roont d'eoc'h ha ne deu ket ar rusder war ho tal hag ho teod da zounna en ho kenou?

Lavaret a reoc'h d'in: « Ni a rank mont e galleg, anez ne deufet ket d'hor selaou ha ne c'hounesfemp gwenneg ebet! » Daoust hag e pelec'h ho peus desket e c'helled destum arc'hant, *hep pec'hed*, en eur nac'h ar Vro hag en eur takat ar re all e tro d'hen ober?

Soudard disano ar Pologn

Ar Pologn a zo ivez o paouez enori, d'he zro, ar zoudard disano, naet er Pologn, bro gristen, ar zoudard disano ne d'helle beza nemed eur zoudard anavezet evit beza kristen ha setu perak d'an 29 a viz Here, e voe digoret; e Leopold dirak an arc'heskob Twardowski, archedou soudarded ha n'oad ket evit gouzout o ano; eur vamm, ha n'he doa ket gellet kaout relegou he mab lazet er brezel, eo a voe karget da ober an dibab hag he dibab a gouezas war ar relegou a oa er c'houec'hvet arched a zigored dirazi; ar c'horf a oa warnan c'hoaz tam-mouigou dilhad a verke e oa potonad hag, en dro, d'e c'houzoug, eur groaz hag eur skapular a verke e oa kristen.

Antronoz ar c'horf a voe kaset da Varsovi hag eno penadureziou ar C'houarnamant, an arme hag an Iliz hag eur mor a dud a reas d'ezan eun digemer eus ar re gaera; goude eun oferenn-bred kanet dirazan, en iliz-veur, gant ar c'hardinal Kakowski, e voe kaset, gant lid bras, adrezuz kêr, ha sebeliet er bez nevez toullet evitan war blasenn ar Sax.

Ma vije bet ar Frans eur vro gristen ha divije gellet ober evel m'he deus graet ar Pologn; met, siouaz,

A-benn neuze hag ac'han di,
En do harzet meur a gi,

sur a-walc'h.

Ar Frans ha gwirioù ar yezou

D'ar 15 a viz Kerzu diveza edod, er Gampr, o poueza war ar milionou a zispigner bep bloaz er Frans gand ar skolioù.

An A. Tremintin a gemeras tro ac'hano evit goulenñ ma vijee desket brezoneg d'ar vugale e skolioù Breiz-Izel.

M. Trémintin vient dire l'émotion profonde qu'a provoquée en Bretagne la circulaire ministérielle qui a interdit l'enseignement de l'idiome breton dans les écoles locales et l'a assimilé à un vulgaire patois. Et c'est tout un plaidoyer historique sur le passé de cette langue encore si vivante dont la Bretagne est si fière.

« Ce qu'il faut, dit M. Trémintin, c'est la coexistence des deux enseignements à l'école dans la Bretagne bretonnante. Cet enseignement bilingue se pratique en Angleterre. Nous ne demandons pas pour la langue bretonne un enseignement intégral, comme pour la langue française, mais nous voulons qu'on lui fasse sa part.

« A défaut de quoi on arrivera à ce paradoxe d'hommes parlant une langue qu'ils n'écrivent pas et écrivant une langue qu'ils ne parlent pas. Loin de songer à détruire les idiomes locaux, il faut au contraire les respecter comme les meilleures assises du patriotisme. » (Applaudissements à droite.)

Red eo d'ar Vretoned goulenñ ar pezh o deus gwir da gaout; an A. Tremintin a zo bet kalz re aonik; an A. Daladier, ministr gall an Deskadurez en deus diarbennet anezan n'eo ket bet pell:

Je suis, emezan, l'adversaire irréductible de l'enseignement des dialectes et des idiomes locaux à l'école primaire. Autant, je le vois possible dans les Facultés, autant j'y suis opposé à l'école primaire. J'ai le souci de sauvegarder l'unité morale de la Patrie. Mais je ne vois cependant pas d'inconvénient à ce que, de temps en temps, un maître se serve du dialecte local pour expliquer plus clairement quelque chose à un élève. (Applaudissements).

Warlerc'h ar Vretoned, an Alzasianed a stourm d'o-zro ouz ar skolioù gall evel m'int renket breman

M. MULLER. — Il est inadmissible que les programmes et la méthode soient absolument les mêmes à Perpignan, à Bordeaux et à Strasbourg. Il ne faut pas, d'autre part, déraciner l'enfant de son milieu: il faut au contraire l'enraciner, lui donner l'amour de son village, de sa petite patrie. (Très bien!) Ce serait la meilleure façon de lutter contre la désertion des campagnes.

L'Etat devrait abandonner aux sphères inférieures certaines initiatives et certaines solutions. Il faudrait aussi maintenir l'enseignement des idiomes locaux.

M. le Ministre — Je suis hostile à toute mesure qui pourrait porter atteinte à l'unité nationale.

M. Muller insiste pour qu'on respecte les traditions linguistiques de l'Alsace et de la Lorraine. — Jamais il ne cédera sur ce point. Des fautes impardonnables ont été commises.

D'alc'homp goenv ha kerzomp dourn ha dourn gant pôted ar Flandrez hag an Alzas, ha labouromp da ad-sevel hor Breiz, hep gedal e teufe ar C'hallaoued da rei an dourn d'eomp, rak n'her grant morse!

Prizioù an tiegezioù niverus. — 25.000 lur

Eskopti Kemper ha Léon. — Per Tourelastel hag e bried, labourerien-douar e Trevelep, e Plobannalec (14 krouadur bet ha 12 bev).


Per Montfort hag e bried, fournisseur e Benodet (14 krouadur bet ha 12 bev).

Eskopti Sant-Brieg ha Lanndreger. — Tasset hag e bried, labourerien-douar, er Vouster (15 krouadur bet ha 14 bev).

Eskopti Gwened. — Yann-Per Jounier, devezourien e Sant-Visant (15 krouadur bev).

Eskopti an Naoned. — Félix Pavageau hag e bried, labourerien-douar, e Perraudière (12 krouadur bev).

Eskopti Roazonn. — Félix Dumaine, labourerien-douar, e Montfort. (16 krouadur bet, 12 bev).



I. — RESPONCHOÙ DIVINADENNOÙ MIZ KERZU

I. — Ma varvan ne zavo ket a varo d'in ken, ha ma vevan va baro a gendalc'ho da greski. II. — Buhez an holl grouadurien. III. — An dien hag an aman. IV. — An trebez. V. — Aotrou Keroulas hag Aotrou Kerguvelen a oa chomet intanv o daou gant peb a verc'h vihan; an eil a zimezas da verc'h egile hag o devoe peb a grouadur.

II. — DIVINADENNOÙ 1926

Digeri a reomp adarre etre hon all lennerien bras ha bihan, koz ha yaouank, eur genstrivadeg divinadennoù nevez a bado c'houec'h miz hag e stagimp outi 30 priz kaer: 20 luriad le-vriou nevez flamm d'ar c'henta; 5 skoejed d'an eil, peb a 10 luriad d'an trede, peyare ha pempet ha peb a 20 realad d'ar 25 all.

Ar re a fell d'ezo gounid prizioù, arabad eo d'ezo chom miz ebet hep respont, ha red eo d'ezo staga, na petra 'ta, adalek ar miz kenta; anez e vezint re zivezat! Ne zellimp nemed ouz skridoù ar re a stago gant al labour e miz Genver.

III. — DIVINADENNOÙ MIZ GENVER

I. — Me 'm eus eur gazegig c'hilaz
A ziverra he lost bep paz.

20 p. ar r. Digaset F. M. Sparfel, Skol I. V. Kreisker, Kastell-Paol.

II. — Petra ra eur yar, en eur c'hoad.
Pa ne bouez nemet war eun troad?
20 p. ar r. Digaset gant J. ar Goff (mab) Pouldergat.

III. — Me 'm eus eur c'hi,
e penn va zi,
ne zant na ne harz
met krava 'ra 'vel eun targaz.
20 p. ar r. Digaset gant Mari Kervella, Plougastell.

IV. — Daoust petra red
Hep korf ebet
Hag a deu gwelloc'h gwellan
Dre ma labourer gantan?
20 p. ar r. Digaset gant J. T. Sant Thegonnec.

V. — E Hozz an Otrou Fri-Kam 'oan bet o laerez avalou; en dizro, Jakez Lampon a c'houlenn lod diganen hag em 'oa roet d'ezan an hanter euz va laeradenn hag eun hanter aval ouspenn heb trouc'ha nikun; Per Filoutik a c'houlenn ivez lod, hag em 'oa roet d'ezan an hanter euz ar pezh a jome ganen hag eun hanter aval ouspenn, hep trouc'ha nikun. Mousik Fall a c'houlenn c'hoaz lod hag em 'oa roet d'ezan an hanter euz ar pezh a jome ganen hag eun hanter aval ouspenn hep trouc'ha nikun hag e chome daou ganen.

Ped am oa laeret ha peb a bed o devoa bet peb hini?
20 p. ar r. Digaset gant Potr L. N. Logonna-Daoulas.

Digas ar responchou hag an divinadennoù nevez a gavfet abenn ar 25 eus ar miz da M. le Directeur du Feiz ha Breiz, à Plouguerneau (Finistère).

PRIZIOU. — Er miz a zeu e roimp aman anioù ar re o deus gounezet prizioù divinadennoù tri miz diveza ar bloaz.
Tenzorier ar **Bleun-Brug**, bet oc'h ober tro parrezioù Leon ha Kerne, a zo dizro da Vrest hag a dizo pelloc'h, en deizioù-man, kas o frizioù da c'honidelen 1925.
Ha breman ra boanio an holl war genstrivadegou 1926.

Graines Potagères, Fourragères et de Fleurs

A. HUON

L. AUDREN, SUCC^R

13, Rue de Siam -- BREST

Adresse Télégr. : AUDREN-GRAINES-BREST Téléphone 3-35

ARTICLES de PÊCHE et CORDAGES

Feiz ha Breiz

HA KROAZ AR VRETONED

KELAOUENN VIZIEK GANT SKEUDENNOU

**Relijion — Istor Breiz — Marvailhou — Gwerzioù
ha Soniou — Buhez ar Vro**

RÉDACTION

J.-M. PERROT, Plouguerneau (F^{me}) | Y. LE MOAL, Coadout, p^r Guingamp

ADMINISTRATION
du **FEIZ HA BREIZ** :
FR. GEORGELIN,
Brest — 4, rue du Château — Brest
c/c 44-40 RENNES

ADMINISTRATION
du **Bleun-Brug** et de l'**Emgleo-Sani-Illud**
Yv. DREZEN,
BREST — 4, rue du Château — BREST
c/c 6238 RENNES

ABONNEMENTS INDIVIDUELS
« FEIZ HA BREIZ » et « KORN-BOUD »
Bretagne 10 f. l'an
France 11 f. l'an
Etranger 12 f. l'an
Abonnements collectifs
Feiz ha Breiz (seul)
(à partir de 5 exempl.). 5 f. l'an

PUBLICITE
*Toutes les insertions sont faites
à l'année*
Une page entière 300 fr.
Une demi-page 175 fr.
Un quart de page 100 fr.

TAOLENN AR MIZ. — Ar Jubile. — Ar wirionez dreist
pep tra, J.-M. PERROT. — Skiant-prena, E. AR MOAL.
— Fransez-Visant a Goataudon, G. P. — Prezegenn
eured, J. U. — Skeudenn garet, P. TR. — Roue al
Laz, D. N. D. — VI^e Kenstrivadeg ar c'hardinal Du-
bourg, ALAN YANN. — Boked ar menez uhel, J. HA F.
— Ar brezoneg er Gambr, E. A. M. — Kêleier ar
miz. — Divinadennoù.

SULIOU HA GOUELIOU MIZ C'HOUEVRER

- 2 a viz C'houevrer. — I. V. ar Chandefour. Gouel devoision.
An ofis p. 636, e levr an A. Uguen.
- 7 a viz C'houevrer. — Sexajezim, p. 248.
- 14 a viz C'houevrer. — Sul an Ened, p. 254.
- 17 a viz C'houevrer. — Merc'her al ludu. Hanter Gouel devoision, p. 259.
- 21 a viz C'houevrer. — Kenta sul ar C'horaiz, p. 267.
D'ar 24, d'ar 26 ha d'ar 27 eman
ar pevare amzer.
- 28 a viz C'houevrer. — Eil sul ar C'horaiz, p. 274.

Ar Jubilé

Bloaz ar pardon

Gwechall goz, bloaz ar Jubile, gand ar Yuzevien, a zigoueze bep hanter kant vloaz; da genver ar bloaz-ze e veze restaolet an dleou, torret ereou ar sklaved hag ar pennoù tiegez bet diberc'hennet a gave, en dro, at leveou o deveze kollet; epad ar bloaz-ze ne veze ket labourer an douar; lezet e veze da ziskuita evit ma vije gouestoc'h a-ze da rei gwelloc'h eostou goudeze.

An Iliz he deus dalc'het da Jubile al lezenn goz, met, e lec'h lakaat anezan da dalvezout evit madou ar bed-man, e laka anezan da dalvezout hepken evit madou ar bed-all.

Bloaz ar Jubile eo bloaz ar pardon, ar bloaz ma vez restaolet ar pezh a dleomp da Zoue goude hor pec'hejou, ar bloaz ma weler ar bec'herien o kaout, a-nevez, ar gwirion hag ar madou ene o devoa kollet.

An darn vrasa eus an emeou a zo e dile Hor Zalver Jezuz-Krist; zoken ar re a zo bet pardonet o fec'hejou d'ezo ha m'emaint ket ken war hent an ifern o deus c'hoaz poaniou da c'houzant evid ar pec'hejou ha ne vefe ket bet graet a binijenn a-walc'h evito; Doue, en e lealded, a fell d'ezan e paefemp hon dile; ar C'hrist-Roue, an hini emeomp en e zle, a fell d'ezan hor sikour, d'o faea, nann oc'h ober eur groaz warnezo, met o lakaat ac'hanomp da rei eun dra bennak en o lec'h.

Eun tenzor divent en deus, etre e zaouarn, graet gant e boaniou e-unan, war ar groaz, re ar Werc'hez ha re ar Zent; en tenzor-ze e kaver peadra a-walc'h da baea dile an holl bec'herien o deus keuz d'o fec'hejou; Hor Zalver a zo brokus; digeri a ra e denzor d'e Iliz hag aotre a ro d'ezhi da lezel ar gristenien da gemeret evito, en tenzor-ze, induljansou brasoc'h an eil eged eben, hag e c'hellont dreizo paeñ o dile da Zoue.

Ar gaera eus an holl induljansou bras eo ar Jubile a veze graet gwechall bep kant vloaz, goudeze bep hanter kant ha breman bep pemp bloaz war nugen hag a vez gallet da c'hounit, dre ar bed-holl, er bloavezh warlerc'h ma vez gallet he gounit e Rom.

Ar c'hras-ze eo a ro Pi XI d'eoc'h da c'hounit er bloaz-man...

D'an 28 a viz c'honevrer 1926 e vodimp gwazed an Unvaniezh katolik e Landenne; o fedi a reomp d'en em gaout eno niverus; piou a oar, bloaz ar Jubile a welo ivez marbeze al lezennou falt a zo ouz hor gwaska, o koueza d'an traon hag o tizrei d'eomp ar gwirion hag ar frankizion hon eus kollet; eun hevelep nevezenti a laoue-

nafe kalz ar C'hrist-Roue, e Iliz, ar Frans hag hor Breiz katolik a-bez.

Petra d'ober

Pardon bras ar Jubile a c'hell beza gounezet adalek vremen beteg en deiz diveza a viz Kerzu 1926. Diou wech e c'heller e c'hounit; eur wech evid an-unan pe evid an Anaon hag eur wech all evid an Anaon hepken.

Evit her gounit eo red da genta *mont da gouez*, gand eur gwir glac'har d'ar pec'hejou; d'an eil *kommunia*, evel m'eo dleet; d'an trede, *mont epad pemp dervez* diouz renk; pe zisparti da bedi e *peder iliz* merket gameomp ha lavaret enno, bep wech, lakeomp 5 Pater ha 5 Ave evid ezommou ar Pab.

Kovesion ha kommunion Pask ne c'hellont ket beza lakat da dalvezout evit gounit ar Jubile; met n'eo ket red, avat, e kommunifed en iliz-parrez.

E lec'h ober 5 gwech tro ar peder iliz pe chapel a vo da vont enno evit gounit an induljansou ne vezo ezomm nemet d'hen ober eur wech, ma her graer e prosesion hag en eur gana ha m'emian e penn an Aotrou Person pe eur beleg bennak all hag en deus bet e aotre.

Eun dra hepken a zo ret evit gounit pardon ar Jubile, beza e stad a c'hras pa rear an diveza tra gourc'hemenet ha setu perag e vije mat lezel da ziveza ar govesion hag ar gomunion.

Kemper, d'ar 15 a viz Genver 1926,

† ADOLPH,

Eskou Kemper ha Leon.

Prizioù ar Bleun-Brug

Lennit mar plij

Prizioù ar B.-B. a zo bet daleet d'o c'has er bloaz-man, muioc'h eget biskoaz, o veza m'en eus ranket hon tenzorer lezel e labour ha soursial epad daou viz eus eul labour all hag a gemeras e zizunvezioù war o hed. — Pedi a reomp d'hon digarezi ar re o deus bet keit-all da c'hortoz.

Er bloaz-man, 1926, hag hiviziken, bep bloaz, rener ar B.-B., tensorer ar B.-B. ha tensorer ar gouel, a chomo eun devez warlerc'h ar gouel da lakat urz e pep tra, da gas ar prijou, HEP DALE PEL-LOC'H. An dra-ze a zo goulennet gant an holl.

Ar wirionez dreist pep tra

NEUTRES. Unan eus va c'henlabourerien goude beza graet tro Vreiz, e miz Here di-veza, en deus skrivet ar c'homzou-man e *Feiz ha Breiz* miz Du, p. 403:

« Labour talvoudus ar *Bleun-Brug*, kevredigez, breizad »
» ha kristen, a zo breman anavezet ha kavet mat gant »
» holl eskibien Breiz a-unan. En eur mare ha ma 'z eus »
» kement a zelloù troet warzu an *Emzao breizek*, o klask »
» gouzout gant pe gelaouenn, gant pe gevredigez eman »
» ar wirionez, setu respont dont a-beurs renerien vrasan »
» ar vro: Gand ar *Bleun-Brug* hag e vignoned! Bretoned, »
» yaouank ha koz, heuilhit-hen! Na droit ket e lec'h all »
» ho sellou. Henc'hou dall a gavfet meur a hini; n'eus ne- »
» met eur gwir hent, an hini a zo pleustret gant pôtred »
» ar *Bleun-Brug*. »

Hor c'henvroad ha mignon mat Abeozen en deus kavet blaz ar c'houero gand ar c'homzou-ze hag hen anv en deus ranket e *Breiz Atao* miz Genver, p. 626. Mat, n'oa ket a beadra da veza feuket gant hevelep komzou; ar *Bleun-Bruger* en deus o skrivet a ra stad koulz hag eun all eus kement hini a labour evit Breiz, met an dra-ze ne vir ket outan da embann e tle ar gatoliked hag o deus c'hoant da adsevel o bro rei o hano hag o skoazell d'ar *Bleun-Brug* kentoc'h eget da Vreurieziou all hag a anv evel ma ra *Breiz Atao* Genver 1926, p. 632: « *Individuellement nous ne sommes pas neutres.* » Daoust ha lavaret an dra-ze n'eo ket evel ma lavarfed: « *Collectivement nous sommes neutres?* » Ma he deus an Iliz eun dra bennak da welet war an dud a-hiniennou, arabad eo lavaret n'he defe netra ebet ken da welet warno pa vezont a-vodadou? Eur vreuriezh, hag a deu da ziskleria eun hevelep tra, a zo anat a zo spjeg enni kalz pe nebeut, klenved al « laïcisme » lezhanvet lorgnez an amzer-man gant Pi XI en e lizer-meur *Quas primas*.

Penaos e c'hellit hu, Bretoned rik evel ma 'z oc'h, lezel da gregi ennoc'h eur c'hlenved donje-

rus hag a c'hellfed da lezhenvel klenved ar C'hal-laoued, ker stank all ha m'eo skignet en o zouez ha ken dillo all ha ma ra d'o bro koueza en he foull?

Ma vezit kiriek, kalz pe nebeut, d'ar c'hlenved-ze d'en em astenn e Breiz, daoust ha c'houi a gredo c'hoaz ho pezo graet vad d'ho Pro?

An den ne c'hell ket beza hedro evel an avel, kristen er gêr ha digristen e kêr; sklêr hag anat eo; arabad eta kaout abeg ma leverer d'ar gristenien dibab evit mont enno breurieziou hag a zo diouz o doare; met mont er *Bleun-Brug* ne vir ouz den da welet ar vad a ra e nesa, na da rei dourn d'ezan zoken pa vez ezomm; karomp **dreist pep tra** ar wirionez rak da heul ar wirionez e teu an urz ha da heul an urz e teu ar peoc'h.

**

MENEG EBET. Pelloc'hik, Abeozen a skriv kement-man:

« *Penaos e kredit-hu lavarout ez eo « ar wirionez » preizek ho tra? Ne deo ket bet a-hed ar wech da vihana, war a gredañ. Abaoe pell a-walc'h e lennan Feiz ha Breiz evit gallout degas d'am spered koun eun amzer ma ne gaved en ho kelaouenn meneg ebet eus an distera mennoz broadel. Hag a-benn neuze e veze kavet heman displeget splann e Breiz dishual, e Brug, e Britania, e Mouez ar Vro ha splannoc'h c'hoaz abaoe e Breiz Atao! »*

Eur fazi kement ha maner Keryann a zo el li-nennou-ze: ar gwirioneziou a zo tra an holl, ar re vreizek koulz hag ar re all; er bloavezh 1907 eo e stagis, da vat, da skriva e Feiz ha Breiz ha setu aman petra lavaren em c'henta skrid, p. 48-49:

Ar pezh a ra droug ha mad d'ar ouenn, droug ha mad d'ar yez, droug ha mad d'ar vro, setu an traoù ha netra ken a vo da gempenn en hon tachenn; c'hoant am eus ec'h anavezfe an holl Vretoned pegen ubet eo o gouenn, pegen kaer eo o yez, pegen dudius eo o bro; youl am eus kement ha ma c'heller kaout da welet va c'henvroiz, o lavaret gant lorc'h ez int Bretoned, eus « Breiz-Izel, ar c'haera bro, koat en he c'hreiz, mor en he zro » hag e ouezont mat ar brezoneg.

Ne glaskin ket, e doare ebet, bresa gwirion ar C'hallaoued; Doue, hag an amzer en deus hon laket da veza amezeien; red eo d'eomp eta en em glevet, n'eus ket da lavaret nann. Ma ne vefe ket breset muioc'h gwirion hor gouenn, hor yez hag hor Bro gand ar C'hallaoued eget ne vez graet re ar C'hallaoued gand ar Vretoned, neuze an diou bobl a en em glevfe evel m'eo d'leet, hag, heb en em randaelat abalamour d'an dishenvedigesion a zo etrezo, e rofent o dourm an eil d'eben, a galon vat, da vont war raok; war wellaat ha war binvidikaat, e pep doare, ar pezh a zo va mennoz, ar pezh a glaskan hag a glaskin bepred hep klask netra ken!

Pelloc'h p. 152-153 e skrivan:

Ar boblou a varv evel an dud. Pobl Breiz n'eo ket maro koutskoude c'hoaz, met war mez mervel emañ; ne 'z eus mui anezi nemed ar skeud eus ar pezh m'eo bet gwechall; ar re a c'helle rei d'ezhi eur vuhez nevez, ar re-ze drès eo o deus roet dourm d'ezhi d'en em lazaz..., e c'hell beva c'hoaz eur c'hant vloaz bennak, rak petra eo kant vloaz e buhez eur bobl? Met war he gwele a varo emañ, hag ewelse emañ 'n traou.

— « Ma n'eo ket mantrus koutskoude a leveroc'h gwelet ar vuhez tamm ha tamm o tec'hiet diouz eur c'horf ken klær ha ken galloudus! »

— Ya! mantrus ha doanüs eo, kement ha ma c'hell beza. Gwellä pezh a zo ne c'heller ket barn an den keit ha ma vez buhez ennan; eur bobl, ivez keit ha ma ne nac'h ket he Doue ha keit ha ma vir he yez a zalc'h en he daouarn an alc'houez a lakao he chadennou da goueza, *abred pe zivezat* hag ar Vretoned, evit c'hoaz n'o deus ket mac'hiet mag ar C'hris, Doue o zadou, mag o yez, ar Brezoneg, setu ma c'heller c'hoaz kaout eun eulfennig fizians en o amzer da zont.

Ar pezh a zo bet dec'h, daoust ma n'ema ket hizio a c'hell beza warc'hoaz. Edec'h fallgaloni, poaniomp eta... roomp da anaout e c'hell an traou beza gwellaet, eo mall ober gand ar C'hallaoued eul tizer-marc'had nevez a vo amavezet dreizan galloud ar Vretoned e Breiz. Youc'homp eus an eil penn d'egile d'ar vro, e fell d'eomp beza laosket da vistri e Breiz, eur wech kaset ganeomp hor Gouel-Mikael da Bariz.

E Feiz ha Breiz miz Eost 1908, p. 240, e leverer:

Pleustri, dreist-holl war ar politik nevez a lakao Pariz da grenna he zouc'henn hag a raio muioc'h a gabestr da Breiz.

En eur pennad war « Les aspirations de la Bre-

tagne contemporaine » (1), sinet gand al lezhano kentä a gemeris evel skrivagner e lakan kement-man:

« La Bretagne contemporaine au fur et à mesure que sa conscience nationale se réveille ne veut rien renier de ce qui a fait sa gloire dans le passé... Ces aspirations ne sont pas seulement des souvenirs d'archivistes: lentement mais sûrement, par la Presse et la Conférence, par le Théâtre et les Cercles d'études, le peuple arrive à les partager et à vouloir les satisfaire, et un jour qui n'est peut-être pas aussi loin qu'on le pense généralement, arrivera où les niveleurs audacieux ou imprudents, victorieux un instant et sur un faible coin seulement du territoire, ne pourront pas résister aux *volontés nationales*: force leur sera d'assister à leur propre défaite ou de chercher un terrain plus favorable à l'expansion de leurs idées destructives.

D'ailleurs le spectacle de ce qui se passe à l'heure actuelle, un peu partout en Europe est bien fait pour encourager les Bretons à entretenir cet espoir et à soutenir leurs justes revendications avec plus d'ardeur que jamais.

... A l'heure même où ces lignes s'écrivent, la Bulgarie proclame son indépendance et les protestations des puissances ne paraissent pas vouloir s'élever bien haut.

La Bretagne a donc, elle aussi, de solides motifs d'espérer en un avenir meilleur, car « l'œuvre libératrice » doit se poursuivre dans chaque Etat et partout où un seul Etat comprend encore plusieurs groupes d'origine diverse, chacun de ces groupes doit être mis en liberté de répandre la puissance particulière de pensée ou d'énergie qu'il représente. *Toute discipline d'uniformité où il pourrait y avoir collaboration de génies indépendants est un dommage.* Il n'est pas conforme à l'intérêt général que dans un Etat, où les races sont diverses, une seule étouffe les autres et gouverne...

« ... Si mauvaise que l'heure soit aux faibles et malgré que l'ambition des uns ait réappris à tout oser, et la lâcheté des autres à tout souffrir, *l'œuvre d'affranchissement en faveur des peuples* continue comme par la force de la vitesse acquise. » (2)

Les choses étant ainsi, peut-on supposer un instant que la race bretonne veuille se laisser absorber par une race voisine dont elle deviendrait l'esclave après en avoir été la servante durant trois siècles, et cela juste au moment où les premiers rayons de l'aurore d'un ordre nouveau

(1) cf. Feiz ha Breiz 1908 p. 300.

(2) Etienne Lamy.

commencent à blanchir les bruyères de nos montagnes et les flèches de nos cathédrales?

Je ne le crois pas : *tra mor, tra breton!*

Arabad da zen nac'h ar re o deus digoret hent d'ezan: n'eo na brao, na fur; ugent vloaz a zo abaoe m'eo bet skrivet ganeomp. — *hep beza e gavet*, — ar ger *Broadelez* war banniel ar *Bleun-Brug* (1); an holl o deus her gwelet ha ma n'eo ket diskleriet ar mennoz broadel fraes a-walc'h er skridou koz emañ o paouez dispaka dirazoc'h hag e kant all hag em bije gellet ober eul levr bras ganto, savet er bloaz 1907 ha 1908, n'ouzoun ket ken penaos eo red en em gemeret evit hen ober?

E pelec'h edo neuze *Breiz-dishual, Brug, Brittia, Mouez ar Vro* ha *Breiz Atao*?

E Menez Arre, m'oarvat, e skouarn ar c'had.

Y.-M. PERROT.

(1) *Doue ha Breiz* eo ar geriou a welet skrivet e lize-rennou meur war dalbenn c'hoariva Kastell Keryann adalek 1905.

Doue ha Breiz bepred! eo ar re a welet o lintra e lize-rennou aour war ar banniel zeiz herminiget a voe douget, e Kastell Keryann, evid ar wech kenta, da Vleun-Brug 1906.

Doue ra viro Breiz eo ar bedenn a weter, alies abaoe 1910 war leviou skrivagnerien *Feiz ha Breiz*.

Etre *Doue ha Breiz* ha *Breiz hepken* ez eus kemm ha kemm bras zoken, met etre *Breiz bepred* ha *Breiz atao*, pe seurt kemm a zo?

Goulennit er miz-man hep dale pelloc'h

Marie, eul levr gwerziou kaer, e galleg, savet gant A. Brizeug; da heul *Marie* eman gwerziou brezonek ar Barz bleo melen; eun hanter kant skeudenn bennak graet gant A. Marzin a zo strewet ivez amañ hag a-hont, dre douez ar gwerziou; kempennet eo al levr a-bez gaud' ar brasa aaked gant J. An Diberder.

Skrivit evit e gaout d'an A. Drezen, 4, rue du Château, Brest, — breman al levr ne goust nemet 12 lur, met adalek ar miz a zeu e vo keract.



Skiant-prena

Setu c'houi aze, va den, hag ho peus c'hoant d'ober eun dra bennak evit ho pro Breiz-Izel. Deut oc'h da gredi eo gwir ar gomz-man; (dre forz he c'hlevet ouz ho tiouss-kouarn, eo deut da gaout hekleo en ho tiabarz): « Mar vijemp bet chomet stag ouz hor Breiz, ne vijemp ket komezet er stad truezus ma 'z omp ennan! » Hag e livirit en ho kreiz: « Red eo adstaga! »

Met oc'h ouzout ervat penos c'houi hoc'h unan ne rajec'h metra, e klaskit gouzout hag-hen e c'hellfec'h boda Bretoned all ganeoc'h, niverus a-walc'h ar gont anezo evit gellout dougen pouez. Hag e rit eur zell war ho tro... Ha seul-vui ma astennit ho sellou endro d'eoc'h, seul-vui en em gavit enkrezet. Gwasa tra a zo, pa vez c'hoant da voda tud d'ober eul labour speredel bennak, eo ma 'z eus eul lodenn vras ha ne reont forz ebet ouz traou speredel hag eul lodenn all a zo rannet e n'ouzoun ped ha ped kreden dishenvel. Ken lies a benn, ken lies all a zanj; penos gellout starda en unan, ha lakat da goata tud hag a zo grêt ken dishenvel o sperejou, tud hag a zo keit etrezo a-wechou!

Klevit eta, eme eur vouez touellus, mar m'oc'h ket evit lakat anezo henvel, lammit, da vihana, ar pezh a laka dizunvaniez etrezo!... N'eo ket diès da gaout, gwirzienn an dizunvaniez: ar relijion an hini eo, o vezan ma en deus hirio, an darn vrasa eus an dud, pep hini e hini.

Setu grêt; divizet mat eo: etrezomp ni, hag a vag holl an hevelep c'hoant da adsevel hor Bro-Vreiz, ne vo ket hano a relijion, abalamour d'eomp d'en em glevet war hor labour breizek. Kavet an diazez. An dud a zired da gaout an dachenn-ze.

N'omp ken hon unan, a drugarez an diviz burzudus hon deus kemeret da stur. Met dioueret ar relijion, pa labourer da adsevel eur vro, a zo start d'ober hemdeiz ha bepred. Izili a zo er vreuriezh; eur rener, eur bureo a zo, tud a vrud hag a boell; daoust da ze, eul lec'h goulo a choum ha, dre ma kresk niver an dud, e seblant dont da vezan brasoc'h c'hoaz. Dre ma teu tud en ti, e chomer nec'hetoc'h-nec'het da zellout ha daoust pe gouiz e teuo

ive an hini a zo ar muia ezomm anezan. Rak lavarit kement hag a garit, eun dro bennak, c'houi hag ho peus serret ho tor outan, eun dro bennak e renkoc'h e c'hervel. « Neus ket a vro hep relijion, hep Doue », a lavare ar yudas Volter. Ha setu, dre forz gedal an hini ne deuo ket, pegwir eo bet serret an nor outan, an dud a deu da gaout hirnez ha da gasaat an ti o doa savet; hag e te- c'hont kuit dioutan, hini ha hini yenet holl.

Setu m'eo red d'eomp anzav, va den, penôs ar stad a zisparti hag a zizunvaniez m'en em gav an dud ennan, hirio an deiz, a zo enebour da beb labour talvoudus. Eur gwall glenved, e gwirionez! — Daoust hag hen eo bet an dud evelse a beb amzer ? a c'houlennit-hu ?

Lennet hon deus an istor penôs, gwechall, e savas eun den hag a lavaras, a brezegas hag a skrivas e flee pep hini bezan e vestr da gredi seurt a garje. Gouzout a reomp c'hoaz penôs, da bell goude, ar gomz-ze o veza bet grêt stad outi, setu ma voe disklêriet gant eur bobl a-bez e oa hi kenta gwirionez an Aviel nevez: frankiz da bep kredenn (liberté de penser).

Evel ma oa red kredi gwechall ne oa nemet eur wirionez, e vije ' red kredi breman e oa gwir pep kredenn: lezenn ar gouarnamant en em garje da lakat etrezo unvaniez ha peoc'h !... An dra-ze a hanver, e galleg, « conquêtes de la Révolution! »

Met eur zonj all a deu 'n hon spered, eur wech digoret ganeomp levr an istor. Daoust hag hen ne glaskont ket pelloc'h eget al « liberté de penser », ar re o deus ijinet ar gaou-ze ? Daoust ha bet o deus o goulenn ha peura- chuet o deus o labour, p'o deus laket an dud da vezan keit ha keit, dre al lezenn, daoust ma n'ez int tamm ebet muioc'h na dre natur na dre stad ? Nann, nann, kement-se n'hell ket bezan penn an hent a glaskont. Al labour ganto n'eo nemet boulc'het: n'eo ket lakat ar gwir hag ar gaou keit ha keit eo o deus c'hoant pôtre al « liberte de penser » pe al « libre-pensée », met *mouga ar gwir*; ar re o deus menozioù treuz a dle dont da vestr war ar re o deus menozioù eun ha reiz.

Sellomp adarre e levr an istor, an hini a zo o 'n em voula dirazomp, hini an amzer vremen, pe en hini a zo bet moulet dija en hor rôk hag e weloc'h an dra-man hag a gas an istor endro evel war e ahel e kerz ar bed: eun enebiez peurbadus, diremed, a zo bet, a zo hag a vo da viken etre ar Gredenn hag an Diskredenn.

Ar Gredenn a zoug eun hano: an Iliz katolik apostolik ha nomen; an Diskredenn, avat, a zo tec'het, evel ar gaou, o chench hano bemdeiz (hanoù ha n'anavezomp ket anezo e brezoneg). « Libre pensée », « Raison », « Science », « Progrès » ha me oar! Lezhano an deiz a hirio eo « Laïcisme ».

Hag an hano-ze a zififi kement-man: ar Gredenn,

pe an Iliz katolik, a rank bezan distrujet, n'eo ket dre an dir hag an tan, n'eo ket dre ar verzerenti, nann, nann. Mouget e vezo, a nebeudou, kement tra a respont e kalon an den pa zav an Iliz he mouez; pa ne responto ken ne- tra er galon-ze, pa vo maro er bed-man hekleo ar bed all, neuze gouarnamant ar Gaou a gemero lec'h gouarnamant ar Gwir ha gantan eur reizadur houarn. Iliz ar Gwir a gouezo en he foull ha hini ar Gaou a friko hag a vruzino ar bed dindani...

Setu ni breman, va den, e penn hon enklask: gwelet hon deus ez eus endro d'eomp kant den, kant kredenn; — gwelet hon deus a belec'h e teu kement-ze ha pelec'h hon deus d'en em gaout gant-ze, mar ne vez ket enebet... me lavar, enebet krenn, chenchet penn d'ar vaz. Hirizi- ken, kement seurt labour a raimp eta a rank mont da harpa hon c'hredenn, hon Iliz. 'N eul lakat Breiz en he renk, lakomp ivez Doue en e hini, o tiazazan hon labour war dachenn ar relijion. Red eo, pe dizanzav hon feiz ! Skoulmomp an diou gaou en unan, heb o meska. Troomp diwar pech an neutralite; greomp nebeut a van ouz dis- mantr ar sperejou: dibabomp etrezo ! Roomp d'ar Vreton- ned zo stag ouz o feiz gwarez eur gevredigez grêt diouto, hag a c'hortozent pell zo, hag a zavo anezo en o renk, evel gwechall, broadelez ha feiz. Deomp, evit se da gaout an Iliz katolik ha goulennomp diganti gwarez ha kelennadurez. Kammed ebet ne fell d'eomp ober hag a noazfe outi, nemet kammejou hag a zougo gloar d'ezi, dre Vreiz, hor Mamm all.

Ha breman, va den, gouzout a rit pesort mad a deuo ac'hano etouez kalz a re all ? E tispennimp hag e vru- zunfimp spontailh al « laïcisme ». Gouzout a rit ar vouez a zo savet dre ar bed hag a zo deut da veza brudet holl etouez tud a bep stad: penôs n'hell beza darempred ebet etre an dud a iliz ha tud ar bed, laiked eveldomp-ni. Etrezint ha ni, a lavarer n'hell ket bezan a emgleo; an eil pe egile a rank bezan mestr; hentit ar beleg hag e vefet goût ouzoc'h, galvet « den, tra ar veleien »; red eo d'eomp, hervez ma leverer, lezel hor frankiz etre o daouarn ! — Kaerat digarez hon deus aman, en eur ober labour vreizek, da ziskouez dirak an holl pegen diboeil eo ar rebech-ze! Aman, ni, laiked, a zo war hon tachenn; aman, an dorn a zo d'eomp, ha mar 'n em gav an dorn gant eur beleg, n'eo ket evel beleg e vo ken, met evel Breton: evel ma skriv d'in eur mignon beleg.

An dachenn-ze, avat ne lavaromp ket, koulskoude, eman a-ziavêz da hini an Iliz; laiked omp, nann avat, laiked digristen; plijout ra d'eomp gouzout ne dec'homp ket diouz sklêrijenn an tour-tan a bar war roc'h Sant Per; trei a reomp hon zellou alies, gant doujans, warzu an hini a dle kaout bepred ar ger diweza, pe gwir eo gan- tan « eman komzou ar vuhez peurbadus ».

Ha koulskoude, hen adlavaret a rankomp c'hoaz, ne douomp ket klask digantan, e pep pleg hag evit pep tra, hon stur hag hon reolenn; ni a gerz hon unan, hag evel ma plij ganeomp, pa gerzomp war dachenn Breiz... Penôs e c'hell ze bezan? a lavar tud hanter-c'houez an amzer-man, hag o deus ankounac'haet lezenn ar vuhez, n'ouzont ken beva. A drugarez Doue, tud all a zo ha ne welont eno mister ebet; mammenn ar peoc'h, an evurusted, ne lavaran ket.

Salo ma teufe da greski niver ar Vretoned-ze, a gred eo Breiz eur vroadelez hag eo dleet d'ezo kemer soursi ouz kement a parchant ouz he vuhez, evel bro, ha nann fiziout ze war Vro-C'hall; — eo dleet d'ezo kemer soursi, da genta, ouz ar relijion, rak ar relijion he deus da welet, a-bell pe a-dost, war gement kammed a raint! Ar relijion eo ar goulou en o dorn da labourat.

Salo ma teufent da greski kement ma 'n em astennfe war Vreiz a-bez kevredigez an emgleo vat etre pep oad ha pep stad, da lavaret eo, Kevredigez ar *Bleun-Brug*, e gwasked an Iliz katolik!



E. AR MOAL.

Offerennou miziek ar Bleun-Brug e kerz 1926

E kêr Gwened, d'an deiz kenta a viz kerzu, — gouel S. Tual; — e voe divizet, war goulenn an O. Regnault, eil-rener B. B. Breiz-Uhel, e vije lavaret, bep miz en hano ar *Bleun-Brug*, eun oferenn, deiz gouel eur Zant breton, evit mad Bro Vreiz.

Setu an deizioù ma vo lavaret an oferennou-ze, pep miz :

Genver : d'an 29, gouel S. Gweltas.	Gouere : d'ar 26, Santez-Anna, patrônez Breiz.
C'houevrer : d'an 12, gouel S. Felix a Rhuys.	Gouere : d'an 28, S. Samson, kenta eskob Dol.
Meurs : d'an 12, gouel S. Paol, kenta eskob Leon.	Eost : d'ar 16, S. Arzel.
Ebret : d'ar 16, gouel S. Patern, kenta eskob Gwened.	Gwengolo : d'an 29, S. Mikêl, Patron ar Gelted.
Mae : d'ar 1 ^{re} , S. Brieg, kenta eskob S ^t -Brieg.	Here : d'ar 5, S. Mauris.
Mae : d'an 19, S. Erwan, patron Breiz.	Du : d'ar 15, S. Malo, kenta eskob S ^t -Malo.
Mezeven : d'ar 17, S. Herve, patron ar Varzed.	Kerzu : d'ar 1 ^{re} , S. Tual, kenta eskob Landreger.
	Kerzu : d'an 12, S. Korantin, kenta eskob Kemper.



Fransez-Visant a Goataudon


Etre Brest ha Gwipavas, en tu kleiz, war eun hent bihan a ya da C'houesnou, e kaver c'hoaz pennadoù eus mogeriou kastell koz Koataudon; ar pezh ja jom anezan, e gwirionez, eo an diou zor borz, an hini vras evid an c'hirri hag an hini vihan evid an dud a zo war o zroad; en tu dehou d'an norioù ez eus eun darzell, stumm eur groaz d'ezi, evit gellont tenna eus an diablaz war ar re a deuje da glask divarc'ha an nor, ha, warnezo, eur c'hloc'hdi, goullo breman, hag e oa eur c'hloc'h ennan gwechall da c'helver an dud pa zave bec'h. Eus ar pezh m'eo bet ar c'has-tell ne jom mui nemet bernioù mein goloet a zrez hag a illio. Koataudon a zo bet laket an tan-gwall ennan gand « ar Re c'hlaç » (1) pa glaskas Leoniz, terri yeo ar Republik, e miz meurs 1793, hag abaoe n'eus ket bet klasket e adsevel.

An Aotronez a Goataudon eo a oa o chom er maner-ze, a-raok an Dispac'h, koulz hag en hini ar Frountven a

(1) Soudarded an Dispac'h.

zo harp ennan; an dudcbentil-ze a ziskenne eus a varoned Pont 'n Abad; paperou o deus da ziskouez emaint e Gwipavas abaoe ar XIV^{vet} kantved.

Kosa hini a anavezomp o tougen an hano eo Olier-Goataudon, bet ganet wardro ar bloaz 1360, ha dimezet da Gatell Tours; adalek an amzer-ze betek Dispac'h 1789 n'eus bet lignez all ebet nemet hini ar Goataudoned, o chom e maner Koataudon. N'eus ket nemeur a dra da lavaret eus aotroned Koataudon, ar XV^{vet}, XVI^{vet} ha XVII^{vet} kantved; p'edo ar Vretoned o stourm ouz ar C'hallaoued, en Naoned hag e Sant Albin an Hiliber, pe ouz an Hugenoded en Normandi hag e kosteziou Tour, e oant re yaouank da zongen ar c'bleze ha da bignat war varc'h; er XVII^{vet} kantved hepken e welomp anezo o servicha ar vro.




Brezel evit distaga an Amerik diouz Bro-Zaoz.

Fransez Koataudon, habiten ar zoudarded karget da ziouall aochou Leon, a zimezas teir gwech hag en devoe 15 krouadur; arr c'hosa anezo, Fransez-Paul, a varvas kabiten, er bloaz 1737, o lezel seiz krouadur war e lerc'h; en o zouez, unan, e lano Fransez Mari, a oa ofiser war vor hag a voe lazet er bloaz 1770. E vab hena, Yann Vadezour a deuas da veza letanant-kolonel. Dimezi a eure da Vari Anna ar Chaussec, mestrez ar Frotven a roas d'ezan dek krouadur. Ar mab hena, Yann Vadezour a voe kuzulier e Parlamant Breiz.

Daou eus e vreudeur a yeas e servich ar vro, war vor; au hini emtaomp o vont da gomz anezan aman, Fransez Visant a voe ganet e maner Koataudon d'an 9 a vezeven 1761; e vamm a oa merc'h da Yann Mari ar Chossec, unan eus ar zoudarded kargit da ziouall ar Roue, ha da Vari-Louisa Kersauzon. War skouer e contr, lazet war e

lestr er bloaz 1770, e c'hoanteas mont da vortolod hag ec'h heulias e Brest skol ar re o doa c'hoant da vont da ofiserien. Endra ma heulie ar skol-ze e kemere plijadur gand e genseurted o c'hoari a bep seurt troiou kamm da vourc'hizien kêr; gwech e kemerent skritell-embann eun diskarer-baro hag e lakent anezi war stal eur gigerez hag hini ar gigerez war stal an diskarer-baro; a-wechou all e c'halvent an dud, dre o amo, e kreiz an noz, ha pa deue unan bennak er prenestr da welet petra a oa ta-nevez e veze eur studier yaouank e beg eur skeul, prest da lakat, war e benn, eur podad liou pe eur bodezad yod; a bep seurt ailhaonerez a raent evelse, dreist holl er ru Siam hag er ru Vras.

Pa zavas brezel etre Bro-Zaoz hag an Amerik, Fransez-Visant a bignas, evel ofiser, war an *Triton*, eul lestr a oa warnan 64 pez-kanol hag a oa blieniet gand ar c'homt a Ligondes; glazet e voe d'an 20 a viz Here 1778, en eur stourmad e kenver beg ar *Finister*. Er bloaz 1781 e kavomp anezan war ar « *Magnanime* », lestr a 74 pez-kanol, blieniet gand an A. Le Bigne de Germiny; an aotrone Gwikerne, Carcaradec, Tromenec hag all a oa gantan eno ivez, evel ofiserien, war al lestr-ze. E stourmad ar « *Fort Royal* », er Martinik edo d'an 29 a viz ebrel 1781; e hini Chesapeak, d'ar 5 a viz gwengolo; e hini Sant Kristof d'ar 26 a viz genver 1782, hag e hini sant Dominik d'an 12 a viz ebrel warlerc'h; kalz eus an ofiserien a oa war al listri-ze a oa eus a Vreiz evel an Aotrone Guichen, Gillart de Surville, Boderu, Tremigou,



Tour ar Chonnetabl e Gwened ha beg Kiberon

de lla Grandière (bet gamet e Montroulez), Trobriand, eus a Blouigneo, ar C'houedic, eus a Bouldergat, — a dapas kement a vrud o stourm war ar *Zurveillancez*; d'ar 7 a viz here 1779 ouz al lestr saoz ar C'hebec, — an Arc'hantel, Kerguelen, Troplong du Romain, Breignou, eus a Vrest, de Ferron du Quengo, de Cice, du Plessis-Parcau, eus a Landerne, Kergariou, Trogoff eus a Lanmeur, Gouzillon Kermenno eus a Drebabu, Tromelin eus a Globars Fouesnant, Keroutas eus a Bloumoger, Breignou eus ar Voure'h-Wenn, Tronjoly eus a Gleder, du Fretay eus a Bloare, de Clavel eus a Ergue-Armel, Kersent, Penandreff eus a Vriec hag all. Da eun ofiser breizad, an A. Kersauzon, eus a Drebabu, eo e lavare Suffren, eun dervez, e moriou an Indez: « N'ouzoun ket penaos c'h en eur gemeres, Kersauzon; da lestr a gerz evel eur c'har bras ha daoust da-ze pa vez meneg da gregi en enebour e vezes da genta, atao, war dachenn an emgann! » En amzer-ze ivez, Loeiz XIV^a a roas da eur breizad, an A. Guichen, ar groaz enorosa a gaved da rei en amzer-ze: kroaz sant Loeiz; an A. Guichen a lavare goudeze: « Ar Roue en devoa c'hoant da rei ar groaz d'e vortoloded hag en deus karget ac'hanoun-me d'he dougen! »

Pa deuas an Dispac'h an A. Koataudon a oa e Brest; met neuze e oa deuet ar c'hiz, eus a Bariz, da youc'hal war an noblans ha da ober gwasa a c'helled d'ezo; daoust da-ze, an A. Koataudon ne guiteas ar vro nemed p'en em gavas e Brest an dispac'her rus Jeanbon-Saint-Andre karget da hada ar freuz e Breiz-Izel. Mont a eure da Vro-Zaoz, gand an eiz eus e vreudeur, Koataudon Kerarrou, endra ma 'z ea eun all eus o breudeur. Koataudon Kerdu, da gaout arme ar brinsed war ar Rhin; o breur, kuzulier Parlamant Breiz a dec'has ivez, ha setu perag an dispac'her Bretard a roas urz da dapa peg en Aotrou hag en Itron Koataudon, tad ha mamm, hag en o bugale vihan; ar plac'h zoken a voe chadennet ha kaset gant he mistri da brizon lous-Keraez: da varo Robespierre e voent lezet da vale evelato hag e teujont da jom da vaner ar Frouven p'eo gwir oa bet devet Koataudon d'ezo gand ar Re C'hilaz.

Er bloaz 1795 e oa eleiz a Vretonad hag a Fransizien, en em dennet e Bro-Zaoz, hag a gave d'ezo e oa deuet an eur da zizrei d'o bro ha da vale war Bariz evit diskar ar c'houarnamant hudur a oa eno neuze oc'h ober e rankou; en em ranna a rejont e diou vandenn, unan bleniet gand an A. d'Hervilly hag eben gant an A. Sombreuil. Er vandenn genta e oa pemp rejimant hag, en o zouez, hini Hector ha ne oa ennan nemed ofiserien war vor; er rejimant-ze eo edo an daou Goataudon. Bro-Zaoz a roas al listri o doa ezomm da dreuzi ar mor ha d'ar 25 a vezeven p'en em gavjont dirak Kiberon e voent laouenaet holl o welet eur banniel gwenn o nijal a-zioc'h chapel sant

Mikêl; nemed e kavent eur stumm sebezus d'ezan ha n'oa ket souez; rag eur roched da Dinteniac, pa ne gavet netra ken, eo a oa bet laketa evelse da ficha, er vann, da rei da anaout e oa trec'het ar Re-C'hilaz, dieubet ar vro, hag e c'helled diskenn d'an douar heb aoun ebet; sur a-walc'h, ma vije bet Puisaye, eun den gouest, an traou a vije bet troet da vat ha ne vije ket ben en em gavet biken an darvoud estlammus a lakas kement a dud e kaony e pevar c'horn Breiz-Izel. En eur ziskenn eus o listri, ar re a oa bet tec'het eus o bro, — beleien, ofiserien ha soudarded, — en aoun da veza lazeta gand an dispac'herien, a goueze d'an daoulin da bokat da zouar Breiz hep gouzont edont o vont da gaout ennan dizale, o bez. Pa reas eskob Dol an A. de Hercé e ziskenn, d'e dro, ha pa voe gwelet ar bleo gwenn o kuruni e benn hag ar groaz aour o lugerni war e vruched, eur bern divent a dud diredet eus a dregont parrez tro-war-dro a gouezas d'an daoulin evit beza benniget gantan.

Siouaz! ar re harluet a voe gwerzet; — d'an 19 a viz gouere, Hoche a c'houlennas ouz Sombreuil ehana da stourm; met, gan aoun da goll e garg hag ar fizians a lake dispac'herien Pariz ennan, ne gredas ket anzav en doa roet e c'her da Sombreuil ne vije graet droug ebet na d'ezan na d'e dud.

Eun nebeut dervezioù goudeze, war urziou Paris, an Aotrou 'n Eskob de Herce, Sombreuil ha daouzek beleg, en o zouez an A. Gilart an Arc'hantel, vikel vras Kemper, a voe fuzuilhet; d'an 28 a viz Gouere, ar Re C'hilaz o doa stourmet e Kiberon ouz ar re harluet a gavas re



Park ar Verzerten e Alre

heugus gwelet ar pezh a raet d'ezo; digaset e voe soudarded all eus a Baris hag a oa gouesoc'h ouz ar Vretoned; staga a rejont d'o laza, e Kiberon, e Alre hag e Gwened; fuzuliet e voët tud c'hlazet, hanter-varo, gourvezet war eur c'holc'hed pe astennet war eur bern teil; fuzuliet e voët tud yaouank flamm ha n'o doa ket a 16 vloaz pa oant tec'het eus ar vro; fuzuliet e voe labourerien-douar ha mevelien ! Gwech e veze fuzuliet betek 40 ha 60, en eun taol, hag ar zoudarded a denne warno, kerkent ha ma welent ar c'horfou o koueza d'an traon, a rede da glask etouez o dilhad ar gwennien ha kement tra a c'helle beza diouz o doare... korfou a jome evelse en noaz... en o zouez unan beo bennak a c'houlenu ma vije peurc'hraet e stal outan, en han-Doue... korfou beuzet er gwad a veze evet gand ar chas !

Fransez Visant Koataudon a oa bet prizoniet; e vreur Fransez Mari, daoust ma oa bet glazet gand daou denn en doa gelllet, en eur neunv, dizrei d'e lestr saoz: Fransez Visant a voe kaset da Wened ha gand eleiz a re all e voe kraouiet e tour ar C'honnetabl; tost e voe da c'hellout en em zila ac'hano; dre eun tammig prenestr e lammas en eur porz hag ez eas d'en em guzat en eun ti; met gwelet e oa bet gand eur varc'hadourez frouez hag a voe fall a-walc'h evit mont d'e ziskulia d'ar zoudarded; ar re-man, skuiz o laza tud, a reas an neuz da glask hag a zizroas d'o c'hazarn hep beza kavet den; met ar pezh fall a vaouez a yeas d'o c'haout hag a lavaras d'ezo e tiskulje anezo d'o jeneral ma n'oa ket mat d'ezo senti outi ha tapa peg en o frizonier; dizrei a rejont d'an ti diskouezet d'ezo hag e kavjont Koataudon kuzet en eun toull tenval; dizrei a eure ganto d'ar prizon.

D'an 28 a viz Eost e voe graet d'ezan mont dirag al lez-varn; eno ne glaskas ket gounit e varnerien; gouzout a rea petra dalvezent; kondaonet e voe d'ar maro gand unnek prizonier all, en o zouez Mikel Flamand eus a Gemper, Rolland Kermoyan, eus a Roazon, Renan Lantivy eus a Bloermel; Fuzuliet e voe ganto, en eur prat harp ouz an hent a ya da Zantez Anna; o relegou a zo breman e chapel ar verzerien e Alre (1).

An darn vrasa eus ar pezh emaoamp o paouez skriva a zo tennet eus eul levrig savet gand hor mignon yaouank Ch. Koataudon a Gerdu, eun ni bihan da Fransez Visant, an ofiser breizad-ze a labouras kement evid ar Frans hag a voe fuzuliet gand he gouarnamant heugus ha sebeliet er pri !

Pa Jenner anoiou ar re a zo kouezet e Alre, e Kiberon hag e Gwened, e ruzier gand ar vez o sonjal eo bet lazet an dud-ze gand Fransizien. Etouez an anoiou-ze ez eus-

(1) Relegou 952 breizad fuzuliet gand soudarded ar jeneral Hoche a zo er chapel-ze; pep breizad a dle mont di pa 'z a da Zantez Anna.


Skeudenn Garet

Kanaouenn a vro Iwerzhen (Irlande), an drede euz ar pevarzek Kanaouenn getiek destumet hag eiltoet gand Bourgault-Ducoudray.

Andante espressivo




Oh ! chom en dro d'in da c'hour-ni - jal, skeu-denn ga - ret, chom a-



tao tost d'am c'ha-lon ha d'am spe - red ; Ma son-jin en dei-ziou kaer-ze,



tre - me - net siou - az ! pa zis - kle - rien d'it eur ga - ran - tez ker braz 'vit an



holl ma - ro, 'vi - don - me te zo beo, hag e... sonj d'in e - maout o vouz-c'hoar-



zin O ! chom en dro d'in da c'hour-ni - jal, skeu-denn ga - ret : an en-



vor a - c'ha-nout am fre - alz be - pred.

Nann, nann, gand e drouz ar bed d'am c'halon n'eo netra,
Tremeniad, e kerzan hep sellet outan;
Dizeblant e lezan da dremen va derveziou,
Hep plijadur nemet gand va hunvreou;

Va hunvreou ker, diouanet en amzer ma oan troet
O ! Jany, d'az karet.

Nann, nann, gand e drouz ar bed d'am c'halon n'eo netra
Rak gand va c'harantez e fell d'in beva.

P. TR.



ROUE AL LAZ

E KAO KASTELL KERSOZON

— Hag e lavarez, paotrig, e teuont pemzek den eus Kernon ?

— Ya, pemzek, ha fuzuilhon gant dek anezo !

— Mat ! Ze ra breman daou c'hant seitek neuze ! eme Gadiou vras en eur ober e gont, e viz yod war e vuzellou.

— Va c'henderv Penglaouig, eme ar paotrig, a zo war va lerc'h hag hennez a deu ivez da zigas d'oc'h kelou.

Penglaouig, — pa oa Penglaouig a oa, — a oa o tigouezout d'e dro, e votou gantan o diou dindan e gazel :

— Ah ! Gwinver, emezan, lezet ez poa ac'hanon war da lerc'h !...

Klaer ez peus da c'houren, da vihana, m'out ket evidon !

Ar Gwinver a reas eur c'hoarzedenn.

Kadiou vras a zelle outo o-daou, unan anezo mistr ha skanv, hir moan evel eur gorzen, egile, eun tagoz a baotr bruchedet ledan, du e benn ha du e zaoulagad.

— Arsa, Penglaou, emezan, n'eo ket da glask gouren out deut aman ? Petra peus da lavaret d'in ?

— E teuo e-berr seiz paotr eus kichen du-man ha peb a fuzuilh ganto.

— Daou-c'hant pevar warnugent ! eme Gadiou. Kreski ra ar vandenn !... Ha c'houi, kanfarded, emezan, a vezo war ar marc'had, rak ezomm hon do, marteze, eus daou baotr gwevn ha dilu eveldoc'h. N'eus ket keit ze c'hoaz, e oa bet eur pardon aman, seurt ne vez ket ankounac'haet !

— An dro-ze, eme Benglaouig, eo eur c'hemener a voe kiriek... Me am eus klevet konta...

— Ha me ivez ! eme ar Gwinver. Met ar c'hemener a zo maro.

Kemenerien all a zo ! eme Gadiou, en eur c'hrozmolat, ha gwasoc'h eget kemenerien !... Deuit war va lerc'h ! emezan.

Hag hen t'rezek ar c'hastell a zave du-ze pelloc'h, drek ar gwez dero, e douriou moan.

Abaoe an abadenn (1) a ree eur « pardon » anezi, Kadiou hag e gamarad Kodas a doa en em dennet pep hini en e ger, e ti kerent d'ezo, o chom eul leo bennak diouz Kersozon, nemet e teue, d'abardaez, hini pe hini anezo d'ober eun dro, a-wechou da dremen an noz, da c'houeza en tan er c'hambchou ha da rei boed d'ar chas a oa chomet o-uman d'ober gward endro d'al lojeiz. Aon ebet da gaout na deuje tud da glask laerez. Ar c'houec'h penn-ki a veze klevet o moueziou pounner o harzal drek ar mogeriou a rê d'ar faliganted mont gant o hent. Seul gouesoc'h e oant deut da vezan ma ne welent ken kristen ebet, nemet Kadiou ha Kolaz diou, ter gwech ar zizun.

An deiz-man, ar chas a oa bet serret betegout na lamm-jent gant an dud a dlee digouezout bremaik, da zerr-noz, met klevet e vezent en eur porz a-drenv o lammet gant kounnar gant ar mogeriou dre ma klevent c'houez tud o vont hag o tont.

Kadiou vras, gant e zaou ganfard, a ziskennas en eur c'hao down hag a zalc'he penn-da-benn an tu dindan eus sal vrasa ar c'hastell. Eur chiminal ledan a oa en eur penn anezan, eun hanter kordenn goad o t'evi ennan, endra ma oa sklêrijennet ar c'haoc'h gant ar flammou uhel ha tommet gant gwrez ar c'hefiou ruz.

Kolaz a oa en e zav, ouz penn eun donell, o karga jistr e sailhou.

— Setu sikour d'it aman ! eme Gadiou. An daou ganfard-man a zougo brao chistr d'an dud dre ma tigouezint. Ha breman soudenn, p'am bo troc'het bara, e kasint panerado da ranna etre an dud.

Tostaat a reas ouz an tan hag e savas goloioù daou bodhouarn bras a oa unan a bep tu d'ar fornigell.

— Poaz ar friko ! emezan. Hini mat ! m'hen tou ! Hag e rufe en eur ober : aha ! ar vogedenn deo o zave diouz ar podhouarniaden silzig, kig leue hag avalou-douar mesket.

— Aho, paotrig, emezan d'ar Gwinver, ma peus grêt hirio yun ar seiz steredenn, aman e torri da naon ! Eur porc'hell druz hag eul leue lart, da zibri etre daou c'hant a dud ! Me gred o dezo peb a damm ! Dal ! d'it an hini kentan !

Ar Gwinver a zigemeraz en e voz eur gostezenn penmoc'h ha patatez a ginnig Kadiou d'ezan en eur grabanad hag a skoas e zent er friko en eur zellet treuz war du ar Penglaou.

Heman a oa pôtr ar bara.

— Eun tamm kig d'in, emezan ha me roio d'it eun tamm bara.

Mat ! Setu int azeet kenver-ouz-kenver war leurenn an ti, ha da ranna an eil gant egile.

(1) Gwelit Kloareg Kersozon - Pipi Gonto mouldur nevez.

— Hastit lounka, emé Golas, rak brema-zoun n'ho po ket amzer ! Peb a lomm ive betegout ne, dagfec'h !

Hag an daou baotr d'ar c'helorn gant peb a skudell.

— Na matat friko ! emezint. Aman eo brao bezan !

— Betek breman n'ez a ket fall ganeomp ! eme Gadiou ! Diouallomp abenn ar fin ;

Ar chas ermêz, a oa krog da virandoni ken ma oa eur spouron o c'hlevet.

— Arabad d'ar Re C'hlas dont aman fenoz ! eme ar Penglaouig !

— Dont a-walc'h, mar tremenfent ebiou, war bouez klevet eur seurt safar ! eme Golas. — Red vo serri anezo ha kas boed d'ezo, ma tavfont.

Dastum a reas eur banerad eskern hag e oa o vont ermêz ganto pa zigoras an nor dirazan hag e teuas pemp den er c'hae. Diouz e vent, e anavezaz Kevareg.

— Arru eo, emezan, paôfred Toull-an-Houc'h !

— Arru int ! eme Gevareg, en eur zizamma diouz eur zac'h pounner.

— Sellit ouz an daou bodhouarn-hont hag ouz an donell-man hag ouz ar regennad torziou bara 'zo aze war ar plankenn !

Ar baotred all, hon mignoned An Tokous, an daou Dhepot ha Rhiwail, a oa o zizamma ivez peb a zamm.

— Te, eme heman da Gadiou, peus pourvezet boed d'an dud a fêson ; ni hon deus danzeet d'ar Re C'hlas poultr ha plom !

— Ar C'hloareg n'eman ket ganeoc'h ? eme Golas.

— Et eo da welet e chas.

— Me a ya ivez ha da gas ganin peadra d'ober d'ezo tevel.

Kevareg, tenval e benn, a oa tostaet ouz ar chiminal hag eno, en o c'hoaze en harz eur podhouarn, e welas an daou grennard.

— Piou zo aze ?

— Me, ar Gwinver ha heman, Penglaouig.

— A belec'h out ?

— Eus Kernon !

— Kernon n'eman ket pell diouz Kerbeniti... Te oar pelec'h eman Kerbeniti ?

— Kerkoulz ec'h ajen di evel d'ar gêr ! Me anavez ac'hanoc'h. C'houi eo Kevareg !

— Mat ! — E zellou a sederaas. — Kerz 'ta... betek di ! Gwel penôs eman kont gant an dimezell Kersôzon ha gant va gwreg ha dizro da rei d'in kelou... Diou eur peus ezomm d'ober da dro !

— Arôk eun eur me vo aman ! eme ar paotrig lemm e zellou.

— Kerz 'ta ! Arôk mont, debr eun tamm !

— Bet lam eus ! emezan. — Dija e oa war an treujou.

— N'ouzon ket pesort a ra d'in kredi, emé Gevareg, n'ez a ket mat ar bed gant hon tud ! Dec'h, e oan bet...

Tevel a reas mik rak ar C'hloareg ha Kolas a oa o tremien toull an nor. Ar C'hloareg a reas eur zell war bep tra ; o kaout ar Penglaouig war e hent, e lavaras d'ezan :

— Ke da doult ar gloued houarn ha gwel ac'hamo ha tud a zo e bali er c'hastell !

Pa voe tec'het ar paotrig, herr warnan, e savas e zell war ar baotred dastumet mut endro d'ezan :

— N'on ket heb enkrez, emezan, tud vat !... Ma karit, ni a lavaro eur bedenn !...

Daoulinet dindan ar volz, o moueziou a respoutas gorrek d'an *Tad pehini zo en nerv*. Goude an *Avê Maria*, e savjont 'n o zav.

— Doue, an Itron-Varia, Santez Anna ha Sant Erwan da vezo ganeomp !

— Evelse bezet grêt !

Tud a dostae a-ziavêz, brud ganto. Penglaouig a gerze en o raok. Dre ma teuent, Kolas o c'honte ; ar C'hloareg a ranne eur ger gant pep hini.

E oant eun gent bennak, fuzuilhou gant darn, bizier gant darn all.

— Tostait, tudou, eme ar C'hloareg ; pep kenta a zibab e lec'h ! Mat e oa lezel distank toull an nor, rak a vagadou eo e tigoueze paotred brema, bouteier koad, gammechou lien ganto, o bleo hir war o c'hein, o daoulagad o lufra dindan erienn o zogou ledan. Gant hiniennou mat anezo e oa fuzuilhou. Kevareg o c'hontas : seiz ha hanter kant. Neuze Riwail hag hen a yeas d'ar zac'hadou plom ha poultr ha, keit ma oa o ranna d'an dud kig, bara ha jistr, an Tokous ha Kevareg a lake da bep tenner e lod plom ha poultr.

Pa voe skarzet an daou bodhouarn ha debret betek an diwezan tamm bara, ar C'hloareg a bignas war eur skaon, ouz goulou ar fornigell.

— Breman mignoned, emezan, digorit ho tiousskouarn frank ha chilaouit ac'hanoun mat. Araok mont ac'han fenoz ha dizrei da gaout ho tud, — ha piou a oar ha dizrei a raimp da gaout hon tud ? — ho po eur gomz da lavaret hag a ranko beza pouezet mat, pouezet ouz pouez ho puhez ha hini ho pugalle, ouz pouez hoc'h evurusted.

N'eus ket eun eur ma 'z omp aman ha setu ni nec'het dija, o sonjal daoust ha n'eman ket an enebour o kantreal war hon tro. Da vihana, bezan zo pevar den ermêz, hag ar chas, en eur ober eur vunutenn, a c'hell beza losket. Bezit eta dinec'h, holl gant ar pez ez an da lavaret d'eoc'h... Setu tri bloaz ma 'z omp o véva dindan ar wasg. Hon gwad a zo deut tano hag ôg hon spered dre forz gouanzv, hag rei digarez ebet, pep seurt anken ha kastiz. Nag hon feadra, mag hor buhez n'omp ket sur diouto. Koulz en noz evel en deiz, e c'hellit, en eur predig amzer, beza

savet diouz ho ti, ho tud beza lazet, gouliet, glac'harret, dismantrret kement ho peus. Piou oar? Marteze, emeur brema e ti hini pe hini ac'hanoc'h, o klask knegi warnoc'h... Mar n'eo ket hirio, e c'hell beza warc'hoaz... Gouzanva hon deus betek breman, gant an spi da welet ar barr amzer fall o tremen. Ne dremen ket ha ne reio ket ken n'hon do en em savet ni ha, gant hon bolontez start evel ar roc'h, gant hon diouvrec'h kalet evel an dir, grêt d'an enebour plêga ! Droug bras a zave en-nomp o welet pegen feulz ha pegen didruez e vezemp gwall-gaset, ni hag hon zud, met rann-galon hon dije pa zomjemp dont d'o c'huitat, ha setu ma plegemp hon choug hag e tavemp... Met deut eo an eur hag e rankomp, evel pa vez disklêriet ar brezel, kimiadi. Gwaz a ze, avat, evit an hini a ra d'eomp dilezel tad, mamm, pried, bugale, ti ha parkou. Hon buhez a zo gwestlet, met e hini a zo ivez!

Ar wazed, tenn o sellou war ar c'homzer, a chillaoue difiny ha dilavar evel skeudennou mein. Ar C'hloareg a zalc'he :

— C'houi a anavez an ti-man bet savet gant va c'hen-dadou; n'en deus ken perc'hen nemet ar chas a glevit aze o harzall... Er c'hoajou ha dindan an douar e rankan beva em bro. Met n'eo ket ac'hanon-me e teuan d'ho pedi da zifenn; c'houi hoc'h unan an hini eo hag ho tud, pa n'oc'h ket bet argaset c'hoaz! Holl war zao eta, ha chaseit ar re a fell d'ezo chaseal ac'hanoc'h!

Tevel ! reas kreenn, rak an holl o doa, en eun taot, troet o zellou warzu an nor. Tri den a oa o tont er c'hao.

— Ah ! eme Gevareg; setu va c'hanfard !

Momet a neas etrezek ar Gwinver, met o welet e oa gantan eun den he n'anaveze ket, e chomas a-zav, dilavar.

(Da heuil).

Goulennit

digand an A. Drezen, 4, rue du Château, Brest

LES EPOUSAILLES DE BREBIOT

Pastorale du XV^e Siècle

par Léon Le Berre

Bois originaux du Capitaine Huerne, de l'Armée du Rhin

Prix : 4 fr. 50.

**

LA CIRCULAIRE DE MONZIE

contre l'enseignement du Breton

Partisans et Détracteurs

1925. — Editée par l'Imprimerie Léon Le Berre, Quimperlé

Prix : 1 fr. 50.

VI^{et} Kenstrivadeg ar C'hardinal DUBOURG

Diwar benn an traou da gredi

KENTA GOULENN

— Miraklou eo zur ! a lavare en dez-all an Aotrou Penn-dispac'h, deuet d'ober eur bale er vro, d'ar Breizad Yvon Teodlampr. Daoust hag e c'hell beza miraklou? Chê ! na c'houi zo sot, sot da staga, c'houi, kristenien, a gred ar marvailhou grac'h-koz kountet d'eoc'h gand ho peleien diwar benn Jezuz.

Ha pa ve gwir an holl draou-ze, muioc'h burzudus an eil eget egile, a lennit en Aviel, petra dalv an dra-ze ?

Edon o vont da rei deoc'h respount Yvon pa êz oun deut da zonjal e respountfec'h kerkoulz pe welloc'h, c'houi hoc'h-unan.

Kemerit eta an hini a garfot etouez miraklou Jesus ha diskouezit d'an divroad dizoue ne hell ket beza gevier an dra-ze;

Ha lakit freaz dezan dirak e zaoulagad da betra e talv eur mirakl evelse.

40 p. da c'hounit.

EIL GOULENN

— Ac'hanta, Bielig, te hellfe lavaret d'in petra eo gouel ar Rouaned ?

— Oh ia ! Aotrou. En devez-se e vez debret ar wastell, eur faen ebars, hag an hini a gav ar faen en e dam, hennez a vez roue.

Ha n'hellfec'h ket lavaret gwelloc'h eget Bielig: 1) Eus petra e tigas da zonj d'eomp gouel ar Rouaned; 2) Ha perak he deus an Iliz lakêt ar gouel-ze e renk ar goueliour brasa.

30 p. da c'hounit.

Diwar benn an traou da ober

TREDE GOULENN

Milio a zo bet gwall vac'haniet er brezel. N'eo ket gouest d'ober kalz a dra; en em droet eo da lenn, hag en em lakêt da studia e gatekiz, ankouanc'haet a bell-ze. Mat a ra hag anzany a rank e kompren anezan gwelloc'h eget gwechall. Goulskoude war a lavar da Velard, e vignonn, ez eus eun dra ebars n'eo ket evit lakêt e spered da gredi

e ve gwir: en defe Jesus gourc'hemenet karout hon nesa evel d'omp hon-unan ha lakat hon enebourien etouez an nesa: Anat eo Hor Zalver n'en deus ket bet affer ouz ar Voched! Anez ne vije ket et betek rei urz d'ezan, Milio, da garout ar Voched evel dan e-unan. Evitan a zonzj beza daonet ma rank karet ar Voched kement hag e vignoun Melard.

Melard, pe gentoc'h c'houi en e lec'h, a ziskouezo da Vilio:
1°) *En deus Jesus roet ar skouer e-unan e pep tra a-raok gourc'hemenet netra d'an dud, ha war gement-man kouls ha war an traou all;*

2°) *Hag ouspenn ez eus meur a bazenn e skeul ar garantez ha penaos renka war ar skeul-ze ar re dleomp da garet.*

30 p. da c'hounit.

PEVARE GOULENN

Fei avat! ma zudou, eme ar pilhaouer, evidon-me ne zellan ket pe da zeiz e vez evit debri ar pez a vez digaset dirazon. Unan boazet evel don-me da ruilh heb ehan dre an hentchou, gwech e Kerne e Leon, ne die ket sellet ker piz-se, ha c'hoaz youc'h a ve warnon ma 'z afen da c'houlenn pred-vijil e tiez-ze, hag ar paourkez pilhaouer a vez grêt goab a-walc'h anezan a hent-all, kredit ac'hanon! Re alies ivez e rankan ober kov-moan, setu ma 'z eo mat debri ar pez a vez.

N'ouzoun ket zoken ha n'oar ket en em lakêt da gredi evel don, zoken er broiou kristena: eo re zirezoun an Iliz gand e finijennou. Sat'aze da zeiz Nedeleg, hag a oa da Wener, oan choumet a-zav en eur vourc'h e kotez gouled-Leon. N'oa nemet kroaziou ha taolennou devot en ti m'edon o kemeret va fred. Sebezet ar paotr o velet an holl o tiskolpa pastellou teo diouz eur mell tamm kig-moc'h da zrailha etouez o farz! Divorc'hed, sklêr eo, me 'reas evel do: n'eo ket d'in-me ober micher an Aotrou Persoun da lavaret d'an dud petra 'zo mat ha petra 'zo fall.

D'ar bloaz-nevez, d'ar gwener ivez evel a ouzoc'h, edon e bro ar Baganiz. Pagan ha payan n'eo ket hevelep tra, evel ma sonj darn. Ma n'her gouezit ket me c'hell her goaranti d'eoc'h. Mat eno ivez e voe digaset d'in eur guchenn treid-moc'h da lipat. Me 'davas adarre: eur wech c'hoaz va micher eo pilhaoui, n'eo ket kelenn an dud. Kouls all an treid-moc'h a yoa saourabl kenan hag e teben leiz va jiletenn. Eur banne sounn war c'horre ha kredit d'in, tamm poan gov ebet n'am eus bet da c'houde. Fei, va zudou, ar c'hig n'eo tam ebet falloc'h da wener eget en deiziou all.

Mat, eur banne all en deus ezomm ar pilhaouer, eur banne sklerijen war al lezennou a zo breman en Iliz diwar benn ar yun hag ar vijil.

*Mar d'oc'h gouest, grit an aluzen-ze d'ezan — ha dis-
kouezit d'ezan ouspenn da betra e talv ar binijenn.*

30 p. da c'hounit.

**Diwarbenn an traou a ro sikour d'eomp
d'en em zantelaat**

PEMPVET GOULENN

Eun devez: pell 'zo abaoe, d'ar mare m'edon o vont ous taol da zebri va merenn, e voen galvet da vont a bell da vadezi eur bugel dare da vervel. Ar medisin, en ti em raok, pa velas ac'hanon, en em lakeas da skandalat tud an ti.

— Asa, bandenn dud-sot a zo ac'hanoc'h! Ar c'hrouadur, ken toc'hor all, hag oc'h et d'ar vourc'h da c'haloupat warlerc'h eur beleg! Perak n'oc'h eus ket badezet anezan, unan pe unan ac'hanoc'h?

— Feiz avat, Aotrou — a lavaras eur vaouez koz a yoa war an oaled o klask digas gor en izili ar bugel — eun dra bennak a zo bet grêt d'ezan ivez.

— Mat neuze, eme ar medisin, perak mont da viret ouz an Aot. Kure aman da zebri e verenn? Gouzout a rit n'heller ket badezi diou wech, setu m'ho peus lakêt anezan d'ober tro-wenn... ha kov moan.

— Gortozit eun tamm, a liviris d'an doktor — ha me da gaout ar c'hrac'h koz. Petra ho peus grêt d'ezan?

— An dra-man, Aotr. Kure: me 'm eus soubet va biz en dour benniget ha grêt Patris d'ezan.

Petra vije en em gavet gand ar bugel-ze, a varvas eur c'hart-eur da c'houde, ma ne vijen ket et wardro?

Petra a dlien d'ober dizale, pe, ma kirit, petra ho pije grêt c'houi em lec'h?

20 p. da c'hounit.

— War a glevan ar bugel a zo ganet eun tachadig brao a zo — a lavaras ar beleg da eun tad, a yoa deuet da c'houlenn ober eur vadiziant.

— Va Doue, Aotrou Persoun, ne dalv ket ar boan d'in nac'h: teir zizun 'zo eman ar c'havell en ti. Nemet em zonzj edo lakêt da baeroun va breur yaouanka, Jakou, a zo mortolod ha n'eo digouezet nemet dec'h er gear.

Ha dibec'h eo an tad-se?

Ha n'oa ket doare ebet evitan da lakêt e vreur da baeroun, hep dale keit da gas e vugel da vadezi.

10 p. da c'hounit.

C'HOUEC'HVET GOULENN

Bastien a gar e vanne hag eun hanter-dousenn gwechou, da nebeuta, en deus ankounac'haet e skiant e ti an hostiz, e

strad meur a verenn. Sakreal a ra hañs an Aotrou Doue ouspenn dek gwech bemdez. Diou wech en deus bet tro da voti; hogen eur wech n'eo ket et vandro, hag ar wech-all en deus lakët er pod hano eur framason, anavezet gand an holl evit beza enebour touët an Iliz. Pemp gwech, hag hen dimezet, eo kouezet er pec'hed vil gand eur geniterv d'ezan. Bep tro ma vez mezo e teu c'hoant d'ezan da c'houzout pehini eo ar c'haleta, pe e benn-baz pe gein e bried. Forsig gwechou en iliz da zul n'en deus grët nemet pedenn Sant Per. Evit gwir n'eo choumet divorfil nemet er zulvezioù m'en deus kavet eur c'houmper da zelaou anezan da gounta krakou, epad an oferenn.

Hag ez a da govez da Bask. Evel kalz re all siouaz! e tibun e govesion.

Paris, fli santiamen. Ho pennoz, ma zad, ablamour 'm eus pec'hed bras dre zont, dre gomz, dre ma fôtr... Nonde tonnerde, double, sakre — me 'zo bet badaouet — me 'm eus grët traou lous — me 'm eus lopet war ma gwreg — me 'm eus kousket epad ar Bater — ha lavaret eur ger bennak en iliz... Dre ma fot dre ma brasa fot. Raksepedan ar Werc'hez Glorius Vari, an Aotrou Sant Yann ha c'hui, ma zad ablamour ma 'm eus pec'hed bras...

Goude beza lavaret penaoz e ranker kovez ar pec'hed, diskouezet petra 'zo diank da govesion Bastien evit beza mat.

30, p. da c'hounit.

**

KANT LEVR nevez flamm a zo kinniget gant *Feiz ha Breiz* d'ar gwella labouriou ha levr an hini a c'hounezo ar priz kenta a dalvezo 30 lur. Ar vugale azalek 11 vloaz betek 16 vloaz a c'hell labourat evid ar genstrivadeg-man.

Lakat skler, e penn pep labour, an adres penn-da-benn, da lavaret eo al lez-ano, an ano, ar geriadenn, ar barrez hag ar bureo post; lakit ouspenn hoc'h oad hag ar skol a heuliit ma heuliit eur skol bennak.

Digasit ho labouriou kerkent ha ma vezint graet; ar re zivezata a dle en em gaout a-benn an deiz kenta a viz mae. Va adres eo: M. l'abbé Le Goff, aumônier de l'école libre de Lesneven.

Alan YANN.



Boked ar menez uhel

— Petra zo a nevez?... Piou zo o vale ken gouestad el leur d'ar mare-man?

Eus uhelder an nenvou, goloet c'hoas gant an denvaljenn, eur steredenn lugernus meurbet a zell etrezeg an douar...

— Da belec'h 'ta, Annaïg, e kerzes da unan ken abred all eus ar heure?...

— O!... gouzout a reoc'h, sur a-walc'h, Steredenn gaer, p'eo gwir oc'h lagad an aotrou Doue!... O vont emañ da gutuilh eur bodig bleuniou koant... Ya, eur boked brao, ken kaer hag ar bodigou bleun brug a ra d'hor bro Vreiz eur zae marellet a bep seurt liou, eun dudi da welet. Va boked a zo da ginnig d'ar Mabig Jezuz du-hont en iliz war an aoter etre divrec'h e Vamm.

— Ken abret-se, Annaïg... Pep tra a zo c'hoaz gant e gousk: ar vestrez en he gwele, ar mevel en e lab, an anevaled en o c'hreier, ar c'hi en e lok, ar c'hilhog e-touez e yer, al labousedigou dindan deliou ar gwez, ar c'hleier en tour, ar bleuniou zoken war o divesker... ha du-hont adrenv kein ar menez uhel an heol a zo c'hoaz e bro an hunvreou. Gwelloc'h e ve dit dizrei da gousket a nevez, Annaïg!...

— Nann... Breman eo e rankan mont du-hont pell da gutuilh eur boked bleuniou lirzin da ginnig d'ar Mabig Jezuz. Hirio eo e vez graet e c'houel en iliz. Ar baotrezed all en eur vont d'ar skol a ginnigo d'ezan pep hini he boked... hag an aotrou person a lavar e vousehoarz ar Mabig Jezuz ouz an hini a gas d'ezan ar boked braoa... Me ne vezan ket er skol ha n'em eus ket, evel ar baotrezed all, jardinou da c'hellout kutuilh enno bleuniou kaer; rak n'e d'oun nemet eur bastorez derved. Met, n'eus forz... Me ginnigo, me ive, eur bokedig bihan d'ar Mabig Jezuz...

Hag e vale, goustadig holl, war begou he zreid, divoutou, en aon da zihuna ar c'hilhog, ar c'hi, ar mevel hag ar vestrez. Rak neuze e vije goulennet outi: « Annaïg, da belec'h emañ o vont ken abred all eus ar heure? »

Tremen a ra dirak klud ar yer; ar c'hilhog a zav eun tammig e benn, a zigor e veg, a hej e eskell... hag a gousk a nevez. — Tremen a ra dirak lok ar c'hi. Heman a zav. Anaout a ra e vestrezig vihan, ha sioulig holl ec'h en em ro adarre d'ar housked. — Ar mevel el lab, ar vestrez en ti a glev, dre o mored, evel kloued al leur o tigeri hag o serra, met kenderc'hel a reont da hunvreal...

Setu Annaïg er maez brema. Kerzet a ra seder war an hent a gas eun d'ar menez uhel.

— Da ober petra, Annaïg, ez ez d'ar menez da gutuilh eur boked? Bleuniou en o c'haera, a bep seurt liou a zo

e liorz da vestrez. Hag a-hed an hent ha dre al letonennou e kavi briaou bleuniou.

— Roz va mestrez a zo koant..., o ya, koant kenan; met n'eo ket d'in-me int. — Bleuniou ar prajou hag ar re a zav war al letonennou hed a hed an hentchou a vez breset ha flastret gant an dremenidi hag an anevaled. Mont a ran war eün da gribell ar menez bras. Eno ez eus bleuniou kaer ive, hag a zo d'an holl; kaer dreist int, rak sevel a reont tost d'ar baradoz!...

Neuze, dillo, war an hent a gas d'ar menez uhel, Annaig a gerz, leun a fizians, he c'halon o tridal.

En dra ma sav etrezeg ar c'hrec'h, bannou kenta an heol o tarza eus an tu-all d'ar menez a sklerijennas he dremm koant, ruiset eun neubeut gant ar pennad bale he doa graet.

— Ken abred-man er menez, Annaig... Da belec'h 'ta, merc'big tener, emaut o vont ken heure? a c'houlenn outi en e yez heol benniget an aotrou Doue.

— Mont a ran war lein ar menez uhel da gutuilh eur boked, eur boked ar c'haera da ginnig d'ar Mabig Jezuz!...

Ezennig fresk an Arvor, o c'houeza en he bleo alaouret, a ra d'ezo sevel eun neubeut war he fenn ha beza en dro d'he zal eur gurunenn bleuniou melen!... Sevel a ra, drant evel eul labous, dre douez ar reier sounn ha garo... Bale a ra diarc'hen war ar wenodenn gleb c'hoaz gant ar gliz... Ouz sklerijenn an deiz, eun eost divent a vleuniou koant a lintr dirak daoulagad ar baotrez. E harz he zreid re wenn; a zehou re ruz; a gleiz re velen; aman re c'hlas; a-hont re alaouret. Warnezo holl ez eus eur bera-dig gliz hag a lugern evel eur maen presius.

— Setu aze danvez bokedou, Annaig, n'eus forz pege-ment. Dastum brema a leiz da ziuverc'h..., a leiz da varlenn!...

— Nann; an derved o deus o flastret; hag ar bastored, savet beteg ama, o deus kemeret ar re skedusa... Kaout a rankan re all kaeroc'h, rouez kenan da gaout ha ne vezont ket gwelet alies..., bleun goest da lakat ar Mabig Jezuz da vouse'hoarzin!

... Hag e sav, e sav c'hoaz uhelloc'h, a-dreuz didreuz ar reier a deu da veza diesoc'h diesa hepred, pe gant ar wenodenn a deu da veza sounnoc'h sounna evel toenn eun ti.

— O! eme Annaig, an hent-man eo hent ar baradoz, sur awalc'h!!!... Eur wech en em gavet aze e lein ar menez n'emeur mui pell dioutan!... Aze eo ema ar bleuniou a glaskan!...

Hag e pign gant ar wenodenn stris a gas eün-tenn da gribell ar menez. Brema n'eus mui a wez, n'eus mui a vleuniou, n'eus mui a vrug, n'eus mui a leton, n'eus mui netra veo. N'eus mui nemet reier noaz ha rinklus. Annaig a rank kerzet brema a ruz war bennou he daoulin. Hag

a neubeudou, a neubeudou, gant poan, war bouez blonsa didreuz he daoulin, he zreid, he daouarn e tap evelato kribell ar menez uhel.

— Met, Annaig kez, e pelec'h dre ama 'ta, ema ar bleuniou koant a glaskes?...

Ne weler ket eur vleunienn; kaer a zo sellet, ne vez gwelet netra veo zoken, netra... netra!...

Paourkez Annaig!...



Ar botrezed vihan a ya d'ar skol a zo holl savet eus o gwele. El liorzou, a-unan gant o mammou, emaint o kutuilh bleun a vriad hag o koulma anezo e bokedou du-dius da lakat dirag ar Mabig Jezuz. Dizale ez aint laouen holl d'an iliz.

— Annaig, daoust ha ne gleves ket anezo o kria! hag o redet gant al levenez?... Ha te, kezez vihan, n'az peus ket zoken eur vleunienn, n'az peus ket an distera hini... Ha kaer az peus sellet, ne weles ket zoken ar skeud eus eun unan...!

Ah! eo! eo! setu a-hont unan, evelkent, dister, oh! dister, ken dister ha tra, war gorre eur roc'h... Met kaer eo da welet, oh! kaer, gant he liou lugernus, lugernus!...

Mont a ra Annaig, gwella ma c'hell, a istribilh douz ar roc'h ha war bouez blonsa eun tammig muioc'h he daouarn hag he zreid e teu a-benn da gutuilh ar vleunienn... Eur vleunienn wenn kann eo, evel ar feiz!...

— Mat eo, Annaig, setu ar vleunienn genta evit da voked... Ha war bouez sevel eun tammig uheloc'h, war bouez skuiza eun tammig muioc'h da dreid ha da zaouarnigou munut e c'helli kutuilh c'hoaz eun all, unan c'hlas, d'ezi liou an oabl, liou an esperans.

Kutuilhet eo ive ar vleunienn c'hlas. Diou vleunienn n'int ket a-walc'h evit ober eur boked. Red eo da neubeuta teir. Hag Annaig a bign eun neubeut c'hoaz. Er wech-ma eo en em gavet tre war gern ar menez. Eno, e kreiz eur vodenn spenn, ar botrez a wel eur vleunienn all, ken kaer pe gaeroc'h hag an diou genta. Ruz eo, evel ar garantez. Klask a ra kemeret ar rozenn. Eun drean spenn a doull he biz hag a ra d'ar gwad redet... Laouen holl en desped d'he foaniou, Annaig a laka he zrede bleunienn gant an diou genta... Pelloc'h, evelato, he deus kavet he boked, hi ive... O! nag hen a zo kaer ha koant... Daoust ha laouen e vezo ar Mabig Jezuz ouz e zigemeret? Daoust ha mousc'hoarzin a ray?...

Seder brema, Annaig a zo o vont da ziskenn, pa glev he gervel dre he hanou.

— « Annaig!... Annaig!... » eme eur vouez dous ha tener, evel mouez eun el diskennet eus an nenvou. — Annaig a zistro. Gwelet a ra en he c'hichen eur paotrig koant, eur paotrig koant gant daoulagad glas!

— Da belec'h 'ta, Annaïg, emañ o vont gant da voked bleuniou... O ! va lez da zellet outan, ken kaer eo !...

— N'eo ket 'ta, emezi, eo koant va boked !... Evit ar Mabig Jezuz eo em eus her c'hutuillet...

— Digas anezan d'in-me, Annaïg !...

— O ! nann, bugelig. N'oun ket evit rei va boked d'it... Petra gasfen me neuze da Jezuz !...

— O ! En hanv Doue, Annaïg, digas-hen d'in... Ha m'her c'haso d'ar Mabig Jezuz !...

Lavaret e vije graët edo o vont da ouela.

— Ne ouel ket, eme Annaïg. Del, setu va boked. Met, avat, kas anezan d'ar Mabig bihan !

Hag eus daoulagad ar paotrig e kouez eun daelenn a levez war bep bleunienn eus ar boked... O kaera gliz !... O kaera perlez !... Brema ne vank mui netra d'ar boked evit beza ar c'haera boked !...

— A greiz kalon, bennoz Doue d'eoc'h, Annaïg !...

Ar bugel koant a gerz kuit...

Seder ha glac'haret war eun dro, Annaïg a ziskenn diwar ar menez uhel...

An holl a zo brema dihun: kilhog ha ki, mevel ha mestrez... Al labourisedigou a gan o c'hanaouennou kaera er gwez... Ar c'hleier a zon skintin du-hont en tour dan-telezet. Hag eus a zioc'h ar menez uhel an heol aour a strink e vannou war Vreiz-Izel...

Annaïg a zo deuet en dro hag aet d'he gwele hep beza gwelet gant den.

— Annaïg, eme ar vestrez, poent eo sevel evit kerzet d'an oferenn. Ar c'hleier a zon. Ar baotrezed a vez eskol a ya laouen d'an iliz, heb a voked ganto...

O ! Ya ! Mall bras he deuz Annaïg d'en em gaout en iliz !... En em gavet en he flas, e chom souezet dirag ar bokedou kaer kinniget d'ar Mabig Jezuz gant he c'hoarezed vihan... Ha he hini he-unan e pelec'h emañ ?...

Ar bokedou a zo holl e harz an aoter. Ne vank nemet hini Annaïg !... Koulskoude Jezuz n'en deus ket c'hoaz mousc'hoarzet !...

— « D'az tro, Annaïg, tosta brema », a lavar d'ez euz vouez flour.

— « Me n'em eus netra », emezi en eur ruzia eun neubet.

— « Tosta ato », a gendalc'h da lavaret d'ez euz karantezus.

Tostaat a ra. Met' ne gred ket sevel he daoulagad.

— « Annaïg, sell ouzin ».

— Setu hen ! setu hen war an aoter, paotrig koant ar menez gant e zaoulagad glas ! En e zourn dehou e talc'h an teir vleunienn gaer; ar genta, gwenn evel al lili, bleunienn ar feiz; an eil, glas evel an oabl, bleunienn an esperans; an drede, ruz evel ar gwad, bleunienn ar garantez.

Feiz krenv, fisians start, karantez birvidik evit Doue hag an nesa, setu boked kaer ar menez uhel, menez ar vuhez kristen, menez an nenvou !...

O Annaïg, laouen ha skedus, out breman-vel eur boked, e liorz ar baradoz, hag ar Mabig Jezuz etre divrec'h e Vamm a zell ouzit en eur vousc'hoarzin hag e vousc'hoarza a ra d'it ankounac'haat da vat holl drubuilhou an douar.

Daou genderv : J. ha F.

Ar brezoneg er Gambr

« Margaritas ante porcos ! » Eur Gambr seurt ma 'z eus brema e Pariz, n'eus netra vad da denna diouti. Frankiz ? An dra-ze a zo eur varc'hadouez ha ne gaver ket enoken ! Ha n'emaint ket o klask ober an « Ecole unique ? » Hag er skol-ze, daoust ha gellet e vo kaout diou yez, daou vestr, diou gredenn ? Eur yez, ar galleg; eur gredenn, hini ar gouarnamant; eur mestr, ar skolaer. An tad ne vo netra; nasket ! ar brezoneg ne vo netra, argaset ! ar relijion ? d'ar blotou, ha da vat, pa ne vo ket ken a skol gristen.

Koulskoude, an Ao. Tremintin en deus c'hoaz savet e vouez er Gambr evit difenn ar brezoneg. Difennet en deus anezan en doare ma kave e oa mat ober evit gounit e brosez, tenna, da vihana, eur vad bennak ac'hano. — « Je ne viens pas ici, emezan, plaider la cause du breton, au nom de je ne sais quel nationalisme ou quel séparatisme... Koulz e oa d'ezan bezan lavaret krenn ar c'hontrol, kement ha lakat ar moc'h-ze da skwinjal. — Régionalisme, provincialisme, nationalisme ? Keit ha keit en em gavont dirak tud hag a zo en o zoni mat mouga kement frankiz a zo !

Mar o deus hor c'hannaded eur gwir c'hoant da zavetei hor yez, ra labourint eviti e Breiz ! Mar o deus arc'hant da ginnig, ra ginnigint arc'hant d'ar c'hevredigeziou, a gavont diouz o doare hag a labour evit ar brezoneg; mar o deus eur gomz da lavaret eviti, ra gomzint e Breiz, dirak ar bobl !

Er Gambr, n'ez eus ket eun er yac'h; ar wirionez n'hell ket beza disklêriet freaz en toull bac'h-ze; netra nemet o welle dirak piou e vez dispaket, mervel a ra anezi hec'h unan, war vuzellou ar prezeger !

E. A. M.

KELEIER AR MIZ

SENS FAMILIAL ET SENS BRETON

Voici les paroles de S. G. Mgr Duparc, en réponse aux souhaits que lui présentait, au nom du clergé, M. le Chanoine J.-M. Queinnec, vice-doyen du chapitre de la Cathédrale de Saint-Corentin:

Je veux insister ici sur deux notes essentielles de notre campagne. Si l'on veut aboutir dans le pays à un résultat profond et durable, il faut à tout prix renforcer dans les âmes le *sens familial* et le *sens breton*.


Le *sens familial*, le sens des droits et des devoirs de la famille. C'est par lui que le divorce peut être combattu, et par lui que l'École unique, qui serait l'École athée, sera écartée. Nous ne sauverons le foyer que si les chefs de famille ont le courage de lutter jusqu'au bout sur ce double terrain. Je regrette que des sections paroissiales des Associations de Chefs de Famille ne se soient pas fondées partout. Ce que j'ai dit de celle de Brest au Pape Pie XI l'a émerveillé.

Le *sens breton*. Il fléchit. C'est un malheur. Le fléchissement ne vient pas de nous dans son principe. L'Etat, l'école, la caserne, les journaux, en sont les premiers responsables. Le clergé, pour sa part, n'a jamais cessé d'être fier de la race, de l'histoire, et des traditions de la Bretagne. Il en aime et il en parle la langue, et c'est en grande partie grâce à lui qu'elle a reconquis sa pureté et enrichi son patrimoine littéraire. *Peut-être pourtant cède-t-il trop facilement au caprice des familles qui renoncent pour leurs enfants à l'usage de la langue bretonne pour l'enseignement du Catéchisme.* C'est un devoir plus pressant que jamais, pour les prêtres, pour les maîtres et les maîtresses d'écoles catholiques, de défendre et de cultiver la langue nationale, de la faire étudier, de la remettre en honneur. L'âme de la race y est intéressée. Les circulaires des Ministres n'ont ici aucun droit d'intervention. Sans se laisser entraîner à l'utopie du séparatisme, le Breton a le devoir d'exiger qu'on respecte ses coutumes et sa langue comme sa foi. Elles font partie de son armature. Elles fortifient son tempérament moral. Elles l'aident à mieux garder son caractère indépendant, tenace, dévoué, et à s'attacher à la terre où il est né et où il aime à prier et à travailler. Rien de tout cela ne nuit au patriotisme français du peuple breton. Il en a donné assez de preuves. C'est pourquoi, en défendant ses droits, il n'éprouve pas le besoin de se séparer de la France, qu'il ne veut pas confondre avec les persécuteurs de sa foi, depuis trop longtemps installés au pouvoir.

Messieurs, si j'ai touché cette question devant vous, c'est que le clergé représente mieux que tout autre groupe social l'esprit breton, et il saura mieux que tout autre dans quelle mesure doivent être unies l'action catholique et l'action bretonne si intimement associées dans nos cœurs.

A. DUPARC.

AN ILIZ E KAONV



An Aotrou Mercier, kardinalel Malin a zo marvet d'an 23 a viz Genver diveza, goude eur c'hlenved hirr ha poanlus: unan eus ar stered a sklerijenne ar muia hent an dud, war an douar-man, a zo marvet gantan.

Epad ar brezel e tifennas ker mat gwiriou e Vro, gwasket gand an Adamaned, ma lakeas e embourien o-unan d'e zouja.

Doze r'e bardono.

STROLLAD

BLEUN-BRUG TREGER-KERNE-GOELO

(Miziou here-du-kerdu 1925).

Gouelioù ha bodadegoù bet:

11 here. — CHAPPELL-NEVE. — Prezegenn grêt diwarbenn *Breurie ar Brezoneg*. — C'hoariet pe *Santez Trifina* (merc'hed Benac'h). — Gwerzet leoriou brezonek.

GOUNID. — (Goude paea an holl dispignou): 37 lur. Leoriou gwerzet: 59 lur. Bugale deut, abaoe e *Breurie ar Brezoneg*, renet gant an O. Deniel, person: 10.

15 du. — SANT-NIKOLAS-AR-PELEM. — Prezegenn grêt diwarbenn ar B.-B. ha *Breurie ar Brezoneg*. — Peziou c'hoariet: *An Trêr ter eur* (merc'hed Sant-Nikolas). *Kanaouennou ar B.-B.* gant kanerien ha kanerezed St-Nikolas, bet loreet e Gwengamp. Gwerzet leoriou brezonek.

GOUNID. — Leoriou gwerzet: 5 skoed. — Strollad kan renet gant an O. Noel, kure.

8 kerdu. — LANUON. — Prezegenn grêt diwarbenn ar *Bleun-Brug*.

C'hoariet *Santez Trifina* (Merc'hed Benac'h), *An Tabouliner koz*, *Yann Pôtr ar gêr* (Pôtréd Skolaj Lanuon). Gwerzet leoriou brezonek.

GOUNID. — Leoriou gwerzet: 162 fr. 15. Goude paea an holl dispignou: 600 lur.

27 kerdu. — PLOUAGOR. — Gouel *Breurie ar Brezoneg*. — Eur gir diwarbenn ar B.-B. ha *Breurie ar Brezoneg*. — Pezig-c'hoari ha kanaouennou gant ar vugale bet loreet e B.-B. Gwengamp hag eo roet d'ezo o frijou.

GOUNID: Eur strollad niverus a vugale *Breurie ar Brezoneg*, renet gant an dimezell Loeiza Rebours, Lok-Maria, Plouagor.

Dre ar Vro :

Bet c'hoariet *Ar Chiminaou* e Gouelin, — bet kanet e Boulvriak, gant *Beilhadeg Nedeleg*, *Kegel ma mamm-goz*, hag *Ho mamm*, er *C'helc'h katolik* renet gant an O. Loyer, kure ha Cadoudal.

— Kazetenn an *Electeur des Côtes-du-Nord* a zo krog da voula hep sun sounioù brezonek, *Evnig Penn-ar-c'hoad*.

Ar prezeger breizad, *Ar Yeodet*, eil-rener B.-B., Treger-Kerne-Goelo, a ra prezegennou brezonek hep sul evit bruda an Unvaniezh katolik ha, war an dro, ar garantez vro.

Evit Bureo Bleun-Brug T.-K.-G.
Ar Renner,
Y. BROCHEN.

AR WAZED E MONTMARTR

D'ar zul, 14 a viz meurzh, e loc'ho eus a Vrest, eun tren gwazed o vont da bardona da Vontmartr; gwelet a raint, oc'h ober o zro, darn eus an ilizou darempredet, ar muia, e Bro-C'hall, evel re Chartr, Lisieux ha Pontmaen.

Ar priz mont-dont gant an holl vizou-hent a zo :

	Brest	Landerne	Montroulez
Eil klas:	370 lur	366	356
Trede klas:	285	282	276

AN UNVANIEZH KATOLIK E LANDERNE

D'an 28 eus ar miz-man ec'h en em vodo gwazed Unvaniezh katolik Eskopti Kemper ha Leon, e Landerne, evit selaou embann o gwirioù ha diskouez e felt d'ezo, a-grenn, e vefent doujet, gand an holl, ha gand ar C'houarnamant da genta.

Ar vodadeg-ze a c'hell ober kalz vad d'ar feiz ha pedi a reomp hol lennerien d'en em gaout holl e Landerne da zul diveza miz c'houevrer!

GWIRIOU AR YEZOÙ

Hervez ar C'hallaoued n'eus nemed o yez hag a dalvezfe ar boan he deski er skolioù; setu da vihana, ar pez o deus embannet renerien vras an Deskadurez e Frans, Monzie ha Daladier; evit diskouez d'an Aotronez berwelet-ze o deus gwir ar yezou all da veza ha da veza desket er skolioù koulz hag o hini e vezo graet eur vodadeg vras, e Paris d'al lun 22 a viz C'houevrer da 2 eur goude kreteiz, er *Musée Social*, 5, *Rue Las-Cases*, renet gand an A. Yann Richepin, eus an Akademi C'hallek; pedi a reomp ar vignoned hon eus e Paris, ha tro-war-dro, da vont niverusa ma c'hellint d'ar vodadeg-ze ha da embann gwir ar brezoneg a eneb ar bed!

BLEUN-BRUG 1926

D'an 13, 14, 15 ha 16 a viz Gwengolo a zeu eman deiziou bras ar *Bleun-Brug* e Gwened hag e Keranna. Breiz a-bez a vo eno; tud yaouank hag a gar ho pro, pe ho peus c'hoant da vihana d'he anaout evit gellout he c'haret goudeze, en em gavit holl eno, nann hepken d'an dervez diveza, met heuliit ar c'hendalc'h penn-da-benn.

Gant 100 lur e reoc'h ho tro; n'eo netra lakaat 100 lur, a gostez, e c'houec'h miz; hag a wenneien a c'hellfec'h da c'hounit, hep poan ebet, koulz lavaret; perag ne jomfec'h ket hep lakaat ar c'hant e butun? Ar butun a zo ker hag a ra d'an holl muioc'h a zroug eged a vad: lakit ar wenneien gwerz-butun ho pezo, a-gostez, hag e c'helloc'h tremen, war he hed, sizun ar *Bleun-Brug* e Bro-Wened.

DIVINADENNOU



I. RESPONCHOÙ DIVINADENNOÙ MIZ GENVER

I. — Eun nadoziad neud. II. — Sevel egile!!! III. — An dreznenn-bod. IV. — Ar spered. V. — 23.

II. — DIVINADENNOU MIZ C'HOUEVRER

I. — Petra 'n deus lagad hep gellout gwelet ha divesker hep gellout redet?

20 p. ar r. Digaset gant F.-M. Sparfel, Kastell-Paol.

II. — Petra n'en deus na penn, na troad hag en e benn meur a lagad?

20 p. ar r. Digaset gant Theresa Mingam, Kerzelan, Gwician.

III. — Petra eo an daou zra yena a zo en ti?

20 p. ar r. Digaset gant eur plac'h yaouank eus ar Vourc'h-Wenn.

IV. — Me 'm eus eur c'hi, e penn va zi, ne zant na ne harz met krava 'ra 'vel eun targaz.

20 p. ar r. Digaset gant M.-J. Gabon, Kerlerven, Plougerne.

V. — Ni a oa diou c'hoarig o chom er memez ti Kloz mad an nor varnomp, e vevemp dizourzi; Kerkent ha ruz hor penn hag hor c'hroc'hen reudet D'hor c'hask ar vugale gant prez. zo diredet; Ha daoust pegen garo oa hon ti mogeriet. Ez omp bet diframmet, ha poazet ha debret.

20 p. ar r. Digaset gant J. Goasduff, Traon ar bourk, Kersent.

Digas ar responchou hag an divinadennoù nevez a gavfet abenn ar 25 a viz C'houevrer da : M. le Directeur du Feiz ha Breiz, à Plouguerneau (Finistère).

SELAOUIT! — Ne jom ket a blas a-walc'h da embann, er miz-man, anioù gounideien divinadennoù tri miz diveza ar bloaz tremen; kavet e vezint aman er miz a zeu.



Feiz ha Breiz

HA KROAZ AR VRETONED

KELAOENN VIZIEK GANT SKEUDENNOU

Relijion — Istor Breiz — Marvailhou — Gwerziou
ha Soniou — Buhez ar Vro

REDACTION

J.-M. PERRÔT, Plouguerneau (F.) | Y. LE MOAL, Coadout, p^r Guingamp

ADMINISTRATION
du FEIZ HA BREIZ :
FR. GEORGELIN,
Brest — 4, rue du Château — Brest
c/c 44-40 RENNES

ADMINISTRATION
du *Bleun-Breiz* et de l'*Emgleo Sant Iliz*
Yv. DREZEN,
BREST — 4, rue du Château — BREST
c/c 6238 RENNES

ABONNEMENTS INDIVIDUELS
« FEIZ HA BREIZ » et « KORN-BOUD »
Bretagne 10 f. l'an
France 11 f. l'an
Etranger 12 f. l'an
Abonnements collectifs
Feiz ha Breiz (seul)
(à partir de 5 exempl.). 5 f. l'an

PUBLICITE
Toutes les insertions sont faites
à l'année
Une page entière 300 fr.
Une demi-page 175 fr.
Un quart de page 100 fr.

TAOLENN AR MIY. — Diwarbenn an Alzas, E. AR MOAL.
— Da gatoliked an Alzas, J. U. — Aour, — paper, —
ludu! E. A. M. — Labouriou ar merc'hed wardro an
ti, TINTIN ANNA. — Roue al Laz, D. N. D. — Kerne,
F. M. — Buhez sant Ronan. — Eur skouer da Vreiz,
JAKEZ. — E Kernevez, C. C. C. — Kenstrivadeg Arzur
de la Borderie, ANNA SEVELLEC. — Pluguen war bez
unan euz he bugale. — Keleier ar miz. — Divinaden-
nou

SULIOU HA GOUELIOU AR MIZ

7 a viz Meurz. — Trede sul ar C'horaz.
An ofis p. 279 e levr an A. Uguen.
4 a viz Meurz. — Pevare sul ar C'horaz, p. 284.
21 a viz Meurz. — Sul ar Basion, p. 290.
25 a viz Meurz. — Gouel Maria-Veurz, Gouel devozion, p. 653.
28 a viz Meurz. — Sul ar Bleuniou, p. 297.

Catholiques de France, ne commettez pas la faute de séparer votre cause de celle des catholiques d'Alsace!

CROIX DE PARIS, 30 a viz genver 1926.

La situation en Alsace

Notre correspondant de Strasbourg nous expose, dans l'article suivant, le « malaise alsacien » dont nous avons maintes fois déjà entretenu nos lecteurs et la question si grave de la « Zukunft ».

Nous nous unissons à notre correspondant et au général de Castelnau dont nous avons, il y a peu de jours, publié la lettre à M. Weydmann, pour insister auprès de nos excellents amis, les catholiques d'Alsace et de Lorraine, pour qu'ils ne commettent pas la faute de séparer leur cause de celle des catholiques de France.

Des deux côtés des Vosges, nous devons marcher de la main dans la main. Leur ambition, leur espoir, leur gloire doivent être de faire, par leur loyal appui, que le catholicisme français tout entier triomphe dans la guerre que lui livre l'anticléricalisme déchainé.

Ce que, depuis plusieurs années déjà, on a coutume de définir le « malaise alsacien », a pris depuis quelques mois, une acuité particulière...

C'est autour de la *Zukunft* que semble graviter aujourd'hui tout le problème alsacien: quoique vieille de huit mois à peine, elle a pris un essor considérable: elle est devenue l'une des feuilles les plus répandues en Alsace et dans la partie de langue allemande du département de la Moselle.

Déjà, on ne parle plus de la *Zukunft*, mais du mouvement de la *Zukunft*, et bientôt sans doute on parlera du parti de la *Zukunft*, car vers la fin de l'année dernière, la *Zukunft* s'est donné un chef, en la personne du Dr Ricklin, ancien député catholique au Reichstag allemand, ancien président de la deuxième Chambre du Landtag (Parlement alsacien).

La *Zukunft* semblait d'abord vouloir plus particulièrement s'adresser aux milieux protestants, mais étant donné le grave mécontentement que la politique du cartel a soulevé parmi les catholiques, ses dirigeants ne tardèrent pas à comprendre qu'ils trouveraient là un terrain particuliè-

rement préparé à une politique anti-française, et dès lors ils ont attiré à eux des collaborateurs catholiques qui abordèrent les problèmes religieux dans un sens des plus favorables aux revendications des catholiques alsaciens, mais nettement hostile à tout rapprochement et toute collaboration entre les catholiques d'Alsace et les catholiques de France.

Un rédacteur de la *Zukunft* n'a pas craint de faire à la Voix d'Alsace, journal hebdomadaire catholique, le reproche de vouloir se raccrocher au « bois pourri » du catholicisme français.

La *Zukunft*, tout en préconisant un programme d'autonomie presque complète, affirme vouloir réaliser ce programme dans le cadre de la France, mais, par ailleurs, la plupart des articles qu'elle publie indiquent des tendances allemandes et un esprit allemand si accentué; tout ce qui est français, que ce soit bien ou mal, y est dénigré avec tant d'acharnement et de partis pris, que l'on se rend clairement compte des visées réelles poursuivies par ce journal: créer, par ses excitations incessantes, un abîme entre l'Alsace et la France, et rouvrir, au lendemain même du pacte de Locarno, la question d'Alsace-Lorraine, donnant ainsi à l'Allemagne tout espoir de reconquérir un jour, même pacifiquement, les provinces que le traité de Versailles a restituées à la France.

Les révélations de M. de Kerilis ont d'ailleurs établi clairement les relations étroites entre certains, au moins, des dirigeants de la *Zukunft*, et les pires ennemis que la France compte en Allemagne, notamment certain Doktor Enst, qui dirige à Berlin une publication autour de laquelle se groupent les 150.000 Allemands expulsés ou qui se sont volontairement expatriés après le retour de l'Alsace à la France.

Les revendications religieuses de l'Alsace ne constituent, il va de soi, qu'une partie des griefs alsaciens contre l'administration française. Il en est d'ordre économique et social, d'ordre commercial et agricole; il existe surtout un très grave, et il faut le dire, très légitime mécontentement parmi les fonctionnaires du cadre local, parmi les retraités et pensionnés; il y a, de plus, les difficultés qui ont résulté de la trop grande hâte que l'on a voulu apporter à l'assimilation au point de vue de la langue, mais la conception de la *Zukunft* est celle d'une Alsace pour toujours et exclusivement allemande, au point de vue langue usuelle, école, église et Université; on voudrait, en somme, la soustraire à toute influence française et en refaire un pays de culture entièrement germanique. C'est au nom d'un prétendu droit des minorités de, disposer d'elles-mêmes — comme si les Alsaciens constituaient, dans la nation française, une minorité nationale analogue aux Polonais, aux Tchèques, aux Slovaques,

dans l'ancienne monarchie austro-hongroise — que les partisans de la *Zukunft* ne cachent pas leur arrière-pensée d'en arriver à un appel à la Société des nations.

La *Zukunft*, a dit très justement M. le chanoine sénateur Delsor, n'est pas une cause, elle est un effet. cependant, on pourra dire bientôt qu'elle est, à son tour, devenue une cause, car si le malaise alsacien a résulté de toutes les maladresses, de toutes les vexations, de toute l'incurie administrative dont les Alsaciens ont eu à se plaindre depuis leur retour à la France, la *Zukunft* est en train de changer ce qui n'était qu'un malaise en un grave, très grave mouvement, dont on ne peut nier le péril national.

On s'étonne sans doute que le gouvernement ne réagisse pas, qu'il ne prenne aucune sanction; au lendemain des révélations de l'*Echo de Paris*, certains s'attendaient à des poursuites judiciaires, à des arrestations même ou tout au moins à la suppression de la *Zukunft*. Mais comment le gouvernement pourrait-il sévir vis-à-vis des menées autonomistes de la *Zukunft* quand il est resté impassible en présence des menées communistes? Les communistes alsaciens ont été les premiers à revendiquer l'appel à la Société des Nations, et d'ailleurs, ne voit-on pas certains politiciens du cartel se rallier plus aisément à l'idée d'une nouvelle séparation de l'Alsace de la France plutôt que d'admettre une Alsace conservant ses libertés et traditions religieuses?

La seule solution à cette crise semble donc être de se hâter d'appliquer en Alsace un large programme de décentralisation; l'erreur initiale est d'avoir, au lendemain de la guerre, voulu faire entrer l'ancien Etat d'Alsace-Lorraine, qui possédait son Parlement et ses lois, son gouvernement, sa capitale, sa langue propre, dans le simple cadre de trois départements français. Il nous paraît hors de discussion qu'il serait vain de chercher une solution au programme alsacien, sans envisager de sérieuses concessions au principe régionaliste; l'Alsace, à ce point de vue, peut être un utile champ d'expérience, dont toutes les régions de France seraient appelées à bénéficier un jour.

OSCAR DE FÉRENZY.

Setu eno eta, katoliked an Alzas hag a vefe war nez en em zispartia diouz katoliked Bro-C'hall hag ar jeneral Castelnau en deus skrivet d'ezo d'o fedi da zerc'hel start, a-unan ganeomp, evit ma, teuio an trec'h gant tu ar relijion. Ma vijen me unan eus ar re a zo bet kaset d'ezo al lizer-ze, setu petra a zonjen.

Katoliked Bro-C'hall o deus lezet breman zo hanter-kant vloaz, diframma diganto ar c'halloud o doa war ar skolieu e oa savet enno, o bugale. Aboe, meur

a lamm o deus paket a-beurs ar re a c'heller da henvél enebourien pep frankiz, ar franmasoued; perak? Evidon-me a gred eo abalamour mo devoa kavet mat, ahendall, lezel gizioù, spered ha yez ar C'hallaoued da gemer, dre holl, lec'h gizioù ha spered ar broigou ma oant ganet enno, m'o devoa lezet da ren warno holl eur seurt spered boutin ha ne zerec mat da hini anezo; lezet o' doa lakat o *holl broiou keit ha keit*, dindan dorn eur gostezenn politik pe eun all, ha setu evelse eo en em zilet êsoc'h ha dounoc'h ar menoz hag a denn da lakat ivez an *holl gredennou keit ha keit*; — ha, gant ze c'hoaz eo en em zilet ivez ar menoz hag a denn da lakat an holl dud *keit ha keit* vit ar pez a zell ar peadra; — ar pez a hanver « laïcisme », « socialisme », a den da heul spered an « internationalisme »; hogen, ar « centralisation », ken striz ha ma 'z eo, n'eo nemet eur seurt « internationalisme » a-ziabarz. An neb a c'houzanv e vefe nac'het e vro outan, ne fell ket d'ezan bezan nemet e gortoz ma vo nac'het ivez outan e feiz hag e beadra.

Hogen, katoliked Bro-C'hall hag a deu da ginnig d'in emgleo vit salvi va relijion a zo ken techet ha biskoaz d'ober nebeut a stad ouz va frankizioù all a zo, evidon-me eul lod eus va feadra hag eun harp eus ar gwellan evit va c'hredennou. Me a zifennu va holl frankizioù war an dro hag e c'hellan eta respont d'oc'h, katoliked Bro-C'hall:

« Ne commettez pas la faute de séparer votre cause de celle des catholiques d'Alsace! » — da lavaret eo, na zifennet ket ho relijion, hep teurel evez ebet ouz ho pro (me lavar ho *mamm-vro*, evel m'eo va hini an Alzas); da lavaret eo c'hoaz, na lakit ket Pariz da c'houarn ha Pariz hepken; ar franmasoued ne reont ket dishenvel; lezit hor « broiou » ivez da harpa ar relijion ha, pa vo komzet a « fédération », ra vo pep bro, gant he yez, an diazez anezi.

Hor zoudarded o doa gounezet ar brezel; ar c'houarnamant a deuz kollet ar peoc'h. Hor zoudarded o doa gounezet an Alzas hag al Lorren; ar c'houarnamant a zo dare da goll anezo.

Petra en devoa d'ober evit lakat Alzasiz da gemer eur peurz en hor buhez ni? Lezel ganto o buhez int, evel m'o doa goulnnet hag evel ma oa bet prometet d'ezo, meur a wech, en deiz ma tizrojont davedomp.

Alzasiz n'o deus ket chenchet nag ober ne fell ket d'ezo; ar gouarnamant eo en deus chenchet doare en o c'henver, ha setu perak e teuont ha ne garont ket ken kemer peurs ebet, koulz lavaret, en hor buhez ni, pa ne garomp kemer peurs ebet en o hini, daoust d'ar promesaou grêt.

Met ar gatoliked ac'hanomp, ha dleet eo d'eomp heuilh skouer ar gouarnamant? Heman ne zalc'h ket d'e c'her; d'eomp da zero'hel evitan, da zével hor mouez evit ma vo grêt e kenver Alzasiz, hervez ma oa lavaret. O mouez n'hell ket bezan mouget; bez ez eus aze digarez da zizrei war hon c'hiz ha da zifreuzan labour fall an Dispac'h 89... Eur yez e vefe d'ar gatoliked hag eun torfed ouspenn lezel gwaska ar re eman en o dorn ar zilvidigez.

Vit lakat an traou en o renk, hon deus gwelloc'h d'ober eget gervel katoliked an Alzas da zont d'hon c'haout, d'eomp-ni eo da vont daveto; elec'h komz eus distruja (assimiler) o yez, komz eus adsevel hon re-ni; pignat hon eus d'ober hag int a rankfe diskenn, evel ma lavare eur skrivagner eus ar *Figaro*; gant ze, d'eomp d'ober ar c'hammejou a zo red ha da ziskoteuz n'eo ket ken doun-ze merk ar c'habestr war hon gouzoug.

N'eus nemet ze d'ober evit tenna, anezo a-dre daouarn an Alamaned hag en em denna ni hon unan a-zindan yeo ar Revolution. O sikour anezo, ec'h en em ziskouromp kemend-all; hag ec'h ober evito, e reomp evidomp.

Eun digarez muioc'h da astenn hon dorn d'ezo eo ma seblant ar gouarnamant rei tu d'ezo da dec'het. Perak? Gouzout a ra ne blego ket d'ezan pobl an Alzas hag e tigasint d'o heul nevezentiou noazus bras d'ar re a c'houarn ac'hanomp evel eur bagad denved mat da werza, da douza, da laza.

Dorn d'an Alzasiz eta, d'ezo da c'hallout dont en ti hep lezel a-ziavêz nag o gizioù, nag o yez, nag o relijion. Ha pa vezint deut en ti, e sikourint ac'hanomp da skarza anezan, da stlepel ermêz, al laeron, an divroidi hag an dispac'herien.

E. A. MOAL.

SIZUN AR BLEUN-BRUG

Paotred yaouank, gand a reoc'h, lakit arc'hant, a-gostez, evit gellout tremen sizun ar Bleun-Brug e Gwened hag e Keranna, e miz Gwengolo a zeu.

Yaouankiz pevar c'horn Breiz a en em gavo eno.

Da gatoliked an Alzas



AN. A. RUCH,

Eskob Strasbourg, difennour frankizioù an Alzas.

Er c'hendalc'h a zo bet en Alzas, e Molsheim, d'ar 4 a viz here, an aotrou 'n eskob Ruch a gomzas evelhen :

« Ha ken diaes-ze eo diarmi ac'hanoc'h ? E kreiz ar c'hantved diveza, e Kambr an Deputeed, unan bennak a c'houlennas ma ne vefe mui koundaonet den ebet d'ar maro. Hag e voe klevet eur vouez o lavaret evelhen : « Pedit ar vuntrerien da jom hep laza !... Hag e voe stanket e c'henou d'an hini a ziskoueze, re a druez ouz ar forbaned. Evelse ive c'houi a respounto : Ra ehano ar framaoned d'ober brezel d'eomp, ha ni a jomo sioul. »

N'e ket c'houi oc'h eus diskleriet ar brezel. N'oc'h eus klasket ober droug da zen. P'eo deut a-nevez ar Frans

en Alzas, c'houi, katoliked, n'oc'h ket chomet da vouzat. Briatet ho peüs anezi gant ar vrasa fizians hag eul levenez dreist-muzul. N'ho peüs ket goulennet eun dra bennek ha ne ve ket dleet d'eoc'h. N'ho peüs darchoet war kazetenn ebet hep beza bet da genta taget ganti. N'ho peüs ket goulennet ober brezel d'ho kenvroiz, protestanted pe dud hep kredenn. N'ho peüs ket c'hoantaet kaout lezennou da denna digand unan eus ho kenvroiz e skoliou, e frankiz, eul lodenn eus e vadou, netra eus ar pezh en deus gwir da gaout.

Ar re o deus diskleriet ar brezel, ne c'heller ket nac'h, eo ar framasoned hag o mignoned, an dud hep relijion. Abaoe an deiz kenta emaint o klas digas en Alzas, enep c'hoant al lodenn vrasa eus an dud, al lezennou laik, a dennfe diganeoc'h ho frankiz hag ar skoliou ho peüs gwir da gaout. Ma lavarfent: « Ankounac'haomp ar brezel ha kement a zo bet etrezomp; displegomp hor c'hredennou hep klask heskina, gwaska ar re o deus kredennou dishenvel; na c'houlennomp ket digand ar Frans diskleria brezel d'eul lodenn eus he bugale; en em unanomp evit servicha ar vro, evit pellat diouti an holl wall-euriou, evit kreski he nerz, he danvez, niver he bugale... Ma lavarfent evelse gant lealded ha ma ve o oberou henvel ouz o c'homzou, neuze e vije gellet en em glevet. Ra dennint o armou eus o daouarn, ha ni ive a denno hor re.

Al lezenn hor gouarn a verk e tle beza gret er skol pedennou, ketekiz, e tle, en eur ger, ar vugale beza savet evel ma c'houlenn o c'herent, e kristenien. Ne c'heller ket eta lakat en hor skoliou mistri, a zo marteze desket mat, met a ra fae war ar feiz katolik pe a ra goap outi. Ra vo gret hervez al lezenn, ra vo roet mistri kristen d'ho pugale, ne c'houlennit ket muioc'h.

Ra ehanou paeroned ar skol laik da glask laza an deskadurez kristen o sevel skoliou neutr. Ra ehanint da glask sarra ar skoliou a blij d'ar gerent kristen, ha neuze n'ho pezo ket ezomm da c'houlenn e chomfent digor.

Tenna an armou eus hon daouarn ? Netra aesoc'h, p'e gwir el lec'hioù a zo savet enno skoliou neutr eneb al lezenn, e c'houlennit hepken e ve, evid ar re her goulenn, eur c'hlas bennak gant deskadurez kristen.

Evelse, e c'houlennit hevellep frankiz, hevellep gwiriou evid an holl, katoliked, protestanted, israelited. Holl e vije gret henvel d'ezo, ha den n'en dije d'en em glemm.

Ha ne c'houlennit ket ez afe ar c'houarnamant war e giz. Klask a rit rei o goulenn d'hoc'h enebourien. C'hoant o doa kaout ar skol neutr, ha roet eo d'ezo ar skol neutr. Ra lakint o bugale er skol neutr, ma plij d'ezo kementze, met ar pezh a zifennit outo, eo klask trabaz ouzoc'h o veza ma n'ho peüs ket ezomm eus ar skol neutr, ma c'hoantait ar skol gristen, eur skol ho peüs gwir da gaout. Ma z'eus Fransizien o klask, dre gasoni ouz ho kre-

dennou, lammet diganeoc'h ar gwir-ze, penaos e c'hellfec'h ober ar peoc'h ganto ?

Ma c'hoantaer diarmi ac'hanoc'h, ra vo gret d'eoc'h evel d'an dud all eus an Alzas. Gouzout a rit. E kear Strasbourg, ne jom mui, paet gant ar c'houarnamant, nemed eur skol hag a vefe desket enni relijion, hag ar skol-ze n'eo na katolik na protestant. Ne vezimp ket glac'haret o welet eürusted ar re all. Meuli a reomp a greiz kalon ar gerent o deus skoliou diouz o c'hredennou; met, p'e gwir ez oc'h Fransizien evel an Israelited, p'e gwir eveldo dre an tailhou e sikourit paea ar skoliou, p'e gwir eveldo e kasit ho pugale d'ober brezel d'ar Syri ha d'ar Marok; p'e gwir n'eo ket dioc'h dalc'her digor eur skol gatolik eget eur skol israelit; p'e gwir ez eus evelse daou rumm dud gret dishenvel d'ezo, penos beza souezet, ma c'houlennit evid ho pugale ar pezh a zo roet d'ar Juzevien ?

Katoliked, goulenn a rit e ve gret d'eoc'h evel da Juzevien Strasbourg, na muioc'h na neheutoc'h: liberte d'an holl dadou a familh, liberte da bep relijion, evelse eo e teuy ar peoc'h er vro hag e c'hello an holl en em garet.

Ar peoc'h-ze, den ebet n'her c'hoanta muioc'h eget na rit. Evit ma teuo ar peoc'h da heul al lealded, evit mad ar vro, eo emaoch war zav, dispont hag eveziek ».

Evelse e komzas an aotrou 'n eskob, ha ne reas nemed e zever, a zo diwall e zenved ouz ar bleiz.

Evelato eo eun druez gwelet eur c'houarnamant, dre gounnar ouz ar relijion, o lakat ar freuz en eur vro nevez distroet d'ar Frans. N'oa d'ober nemet lezel ganto o frankiz, o gizioù, o skoliou kristen, ha tud an Alzas a vije bet eürus, laouen, o dije karet bemdez muioc'h mui ar Frans, hag o dije kresket ive nerz ar Frans dre ma z'int tud mat da labourat, pinvidik, gouest da baea an tailhou.

Ar framasoned, n'e ket mad ar Frans eo a glaskont, met hepken ober droug d'ar relijion. Ha goulskoude e vezont klevet o tamall ar roue Louis XIV da veza gwechall gret brezel d'ar brotestanted, lammet diganto o frankiz. Ar brotestanted a gwiteas ar Frans evit mont da veza en Allemagn, er Holland, el lec'h ma kavent liberte da heul o relijion.

N'eus netra o tisplijout d'an den evel beza heskinet evid e relijion. N'eus netra oc'h ober poan da gerent kristen evel gwelet o bugale e riskl o goil o feiz. Kristenien an Alzas a fell d'ezo e ve o bugale kristenien vat, hag evit-se savet e skoliou kristen. Ha piou, nemed ar framasoned, a c'helfe lavaret e reont fall ?

Ra zalc'hint mat, hag o dezo an trec'h, hag ar framasoned a ranko kila. — Meuleudi d'o eskob a zifenn e zenved gant kement a nerz hag a evez.

Aour, — paper, — ludu !

Setu eno ar skeul emaoomp o tisken, hag ez omp arru ganti er bazenn ziweza. Eur rumm ac'hanomp o deus anavezet an aour; eur rumm all, yaouankoc'h, n'o deus anavezet nemet ar paper; an hini a denio warc'hoaz, daoust ha kaout a reio gwelloc'h eget ludu ? Ya, evelato, rak ar vro, a adsavo, nemet hirio, avat, n'ez a nemet war an tu diskarr !

Mat ! Setu eur skouer hag a c'hellomp da gemer, ni, Bretoned, evit lakat sklêroc'h dirak hon daoulagad hon unan e pe stad ez omp arru gant hor buhez vreton, buhez hon bro.

E pevar c'hant vloaz ez eus tremenet ebioù d'eomp pep seurt amzer; da genta, Breiz a oa krenn dishual; aour ar frankiz a luc'he en he c'herchen ha war he zal; — adalek 1532, eo deut reuz ar paper; ar paper-ze, koulskoude, en doa, da genta, talvoudegez; talvezout a ree d'eomp pep seurt frankiz; — er bloaz 1789, ét ar paper da netra; c'houezet an tan ennan, e noz ar 4 a viz eost 1789, — nemet e voe laket neuze en hon dorn eur paper all ha diskleriet an dra-man, en eur e ginnig d'eomp :

« Hiviziken, c'houi n'oc'h ket ken Bretoned; c'houi 'zo breman sitoianed, ha netra ken, hag an testeni eus al « *liberte* » roet d'eoc'h hag a zo pell trec'h da bep frankiz, koulz ha d'an holl frankiz, setu hen aman, ar paper vot, hag a ra pep hini ac'hanoc'h eur roue hag a lak pep galloud etre ho taouarn. Gant ar paper-ze, c'houi a zibabo, a-vreman, neb a garoc'h da vezan, dindanoc'h, karget da ren ar vro.

An dra-man a zo henvel ouz marvailh ar c'hi a lôskas eur bastell gig da goueza eus e c'heniou evit lammat war ar skeud anezi a wele en dour.

Ar bilhed vot-man a deu da vezan muioc'h-mui eun douellerez, evel ma vefe eur fuzuilh goad etre daouarn eur chaseour. Penôs ze ? Daou-ugent vloaz so ez eus e pep parrez eur skol laik, eur skol digristen hag a lak pep pôtrig, abenn ma vo arru bras, war an hent da voti e doare ma plijo gant ar c'houarnamant; deski a reio d'ezan n'ez eus neb reolenn da zouja war an douar nemet al lezenn grêt er Gambr, e Pariz, ha neb Doue, nemet ar c'houarnamant, an « Etat ». Ar vugale, na pa ve ken, o devo sunet, da vibana, er skol-ze, bunum an neutralite, hag ar re-ze, pa vezint en oad da voti, eul lodenn vras

anezo ne ouezint ket mat dispartia ar gwir diouz ar gaou, an droug diouz ar vad. Met n'eo ket a-walc'h d'ar c'houarnamant kregi war ar vugale da stumma o sperejou; hervez e youl, gant lod anezo c'hoaz e reio, goude, mevelien gantan, o kemer en e garg labouriou brasa ar vro, (e tu-hont d'ar Skol), abalamour da zestum kalz micherourien dindanan, da lavaret eo, derc'hel an dud dre o bara, pegwir, pep hini a rank mont da heuilh e vara.

Abaoue ar brezel, ez eus bet savet evelse 450.000 karg nevez, e tu-hont d'an 800.000 a oa arôk, da lavaret eo, ez eus er Frans, war dregont den, unan hag a zo mevel-gant ar c'houarnamant hag a vot evitan, peurvuian, hag a zoug ar re all d'hen ober.

Seul-vui ma vez grêt bilhiji-bank nevez, ha seul-vui e tisken ar « franc »; — seul-vui ma vez krouet kargou nevez ha seul-vui e tisken ar paper vot; bolontez ar c'houarnamant eo a ren, dreist da hini ar bobl. Ar bobl ? n'ez eus pobl ebet ken nemet tud-e-karg, tud dindan ar c'houarnamant !

Ha dro benôs diluia ar gudenn-ze, unan rouestlet, mar 'z eus bet biskoaz hini ? Ni a lavar, pôtréd ar *Bleun-Brug*, eo red dizrei d'eun dra bennak henvel ouz ar frankiz hon doa arôk 1789; eno eo eman gwella harp ar bilhed vot, rak en deiz ma 'n em gavfe Breiz da gaout d'c'zi he skoliou, he c'hargou, setu dizournet gouarnamant Pariz ha n'hellfe mui ober e vestr bras. Ar beli a chomfe gantan a zellfe ouz an diavêz-vro ha, pa gomzfe e diabarz, eo gant ar broioù adsavet en o renk eo en deve d'ober ha nan gant kostezennou politik hag e talc'h anezo en e zorn pa n'o deus netra da c'hellout stourm outan nemet an tammik bilhed vot.

Vit lakat ar « franc » da laouennaat, eo red, emezint, dizourna ar c'houarnamant, gwerza ar « monopolou »; evit lakat ar gwir frankiz da zont d'en em ziskouez c'hoaz en hon teuz, ar paper-vot da vezan en hon dourn eur benveg galloudus eo red, 'n eur stumm all, dizourna ivez ar c'houarnamant, diframma digantan gwirioù ar broioù; aze ez eus eur gammed d'ober hag a ranko beza grêt — ha ganti e vefent gret o-diou war an dro, — ma ne garomp ket e teufe ar c'habestr a zo ouz hon treid da veza staget d'eomp en hor c'herc'hen ha da veza evidomp las ar groug.

E. A. M.



LABOURIOU AR MERC'HED WARDRO AN TI

Kenteliou Tintin Anna

Ar moc'h

Ar moc'h o deus ar brud da veza lous; e gallez kouls hag e brezoneg e vez lavaret « lous evel eur penn-moc'h! » Al loened paour ma c'hellfent komz a lavarfe: « Ni, lous? An dud a zo lousoc'h egedomp; hol lakaat a reont e lo-chennoù moan, el lec'h ne 'z eus nag ear, na sklerijenn; a vec'h ma c'hellomp en em drei en hor c'hreier; kaout a ra d'ezo eo a-walc'h d'eomp kaout boued hag e lezont ac'hanomp en dour hanvouez betek hanter hor c'hof. Heugl a reomp a-wechou o tostaat ouz hol laouer ha kouskoude n'omp ket traou figus; pep tra a zo mat ennomp! »

Greomp eta d'hor moc'h evel m'eo dieet; lakomp anezo e kreier sklêr ha nann e toullou en douar; lakomp kolo fresk dindanno ha roomp dour d'ezo d'en em walc'hi; greomp kaeroc'h: gwalc'homp anezo, diou wech er zizun gant dour hepken, pe gentoc'h gant dour ha savon rag an dra-man a zo kalz gwelloc'h; er goanv, kemerit dour klouar ha sec'hit anezo atao gand eun torchad koto; gwelet a reoc'h, ho moc'h eur wech boazet o do mall da veza gwalc'het ha n'eo ket souez rak n'eus ket a loened hag a garfe beza kempenn kement hag i. Eun tiek saoz a lavar d'eomp perag e walc'h e voc'h; ranna a eure, eun dervez, eun torrad a c'houec'h e diou lodenn, tri e pep kraou hag epad c'houec'h sizun e roas da bep kraouiad kement ha kement a voued; tri anezo a veze kempennet ha gwalc'het hag an tri all a veze lezet war o zell, evel ma oant e oant; c'houec'h sizun goude an tri dalc'het kempenn a boueze pep hini anezo peder lur war nagent muioc'h eged an tri dalc'het lous; dre-ze e c'hellit gwelet pegement a vad a zigasit en o moc'h tra ken nemet ouz o gwalc'hi hag an dra-ze ne goust ket kalz a dra:

N'eus nemet eur banne dour
Etre net ha loudour.

Gounid a vez diouz ar moc'h, da genta, en eur gaout torradou re vihan hag ouz o gwerza diouz ar c'harr; d'an eil, o sevel ar re vihan d'o gwerza diouz ar gordenn; d'an trade, o larda re vras: an dra-man a bad tri pe bevar miz.

Pa vez sonj da larda eur penn-moc'h ne laosker ket anezan da vont er mêz eus e graou; met mat eo lakât d'ezan eul laouer evid e voued hag eun all hag a vo dour enni atao, rag ar moc'h ma c'hellfent a glemme alies gant ar sec'hed.

Mat eo lakât goell-toaz etouez boued ar moc'h, met pa vezer staget d'hen ober e ranker kendelc'her pe anez e c'henchfent d'ho.

Pep tra a zo mat da rei d'ar moc'h; n'eus ket a loened esoc'h egeto da veva; patatez, ruta, irvin, kaol, brenn, kistin, mez, kivij (1) ha kement tra a jom war lec'h an bleu, heiz, lèz-dous, lez-trenk, frouez brein ha c'hoaz fa, dud; holl int mat d'ezo; lakeomp eun nebeudig c'hoalenn ebarz, klouaraomp o boued er goanv ha bezomp sur hon devezo, hep date, danvez silzig ha gwadegennoù, an-duilh da vogedi er siminal ha kig drus da zebri gant hor farz.

Klenvejou ar moc'h

Pa vezer lezirek da entent ouz ar moc'h, pa vezont hevet fall ha fojet fall e vezont e riskl da baka klenvejou; ar c'hlenvejou-ze ne gavont digor ebet er c'hreier nêt; da genta, ar c'hoenv-gouzoug. Eur penn-moc'h a bak riou, evel eun den; anat e vez peur en devez poan c'houzoug; koenvet e vez dindan e c'hronch; c'hoari en devez o klask kaout e alan; poan en devez o lounka; glaourenn a deu eus e c'henou; a-wechou e teu ar boued er mêz eus e c'henou, dre e fri. Kerkent ha ma santer ar c'hlenved-se warnan eo red e zispartia diouz ar re all, ma 'z eus re all gantan; rei d'ezan dour klouar hepken gand eun dourmad bleud ebarz; lakât en dro d'e c'houzoug eun tamm krôc'hen maout, ar gloan en diabarz hag e zerc'hel en e graou, er goudor, epad eiz dervez. Gwada a c'heller anezan ivez dindan e deod; frota ad lec'h m'eo koenvet gant bleud gwiniz kemmesket gand c'hoalen; frota e gorf gant lichou hag e walc'hi goudeze en dour sklêr.

D'an eil, ar gal. Pa weler ar penn-moc'h o kaout gwall zebron, goriou bihan dindan e gazeliou, e ranker rei nebeud a voued d'ezan ha lakât c'hoalen d'ezan en e c'hoelien.

(1) Ar c'hivij eo frouez ar tao.

Gwella a zo d'ober, dreist-holl, eo ker-c'hat ar veteriner. D'an trede, klenved ar moc'h pe ar *gourc'he* (1). Ar c'hlenved-man a zo stank ha dies da barea; alies e vez gwelloc'h laza al loen pa weler eo paket mat ar c'hlenved gantan, ar penn-moc'h klanv gand ar *gourc'he* a vez izel e benn gantan; e deod hag e c'houzoug a vez leun a c'horiou bihan enno; dleet eo gwada anezan dindan e lost ha gwalc'hi anezan alies en dour skler; evit boued n'eus ken da ober nemet kemmeski brenn d'ezan gant markou-gwin.

Ar c'hig moc'h

A-raok kloza ar pennad-man e rankomp lavaret eur ger diwarbenn implij ar c'hig; dibabet e vo, evit faza ar penn-moc'h, eun amzer vrao hag eun den ijinus rak diouz ma vezo gwadet ha sallet ar c'hig eo ec'h en, em viro mat; amzer sec'h ha fresk eo an amzer wella da laza ar moc'h; lezet e vezint hep tamm, epad an dervez a-raok ma vezint lazet. Kerkent ha ma vez maro ar penn-moc'h, e vez skaotet gant dour hero; evelse e vo aes e zireuna hag ar reun a zo mat da werza; an donnenn a vezo gwelloc'h, met ar c'hig a jomo boukoc'h ha ma 'z eus glebor n'eo ket da lavaret e vefe koulz.

Darn a en em gemer en eun doare all; devi a reont ar bleo gand eun torchad kolo a-raok gwalc'hi gant dour tomm; goude e walc'her adarre ar c'hroc'hen gant dour yen.

Ar gwad a vez digemeret en eur baill pe en eur bodez ha kemmesket gand an dourn, en aoun ne deufe da gaouledi; hel lakât a ranker goude en eul lec'h fresk, pell diouz ar c'helien hag ar c'hizier.

En eul lec'h fresk ivez eo e vezo skourret ar penn-moc'h, hag an tenvala, ar gwella, abalamour da viret ouz ar c'helien da vont wardro ar c'hig. Lmmet e vezo neuze e holl gorailhou, an avu, ar skevent, ar bouzellou hag all. Al lard a vezo laket da deuzi; ar bouzellou a vezo gwalc'het en dour red, en diabarz koulz hag en diavêz ha digaset d'ar ger, en eur boutoug, eun torch net ebarz.

Gand eur gountell zislemm pe unan goad e vezo skarzet ar stripou; ar bouzellou d'ober gwadegenno a vezo tanaoet ar c'hroc'hen warno muia ma vo gallet ha laket en eur bodezad zour yen evit gedal ar pred d'o implija.

Antronoz e vo dispennet ar penn-moc'h gand ar c'higer; ar c'hig a vez trouc'het a dammou bras pe a dammou bihan hervez giz pep hini; a-raok e zispenn e vefe mat e boueza evit gouzout da begement e teu al lur ha pegement a c'hounidegez a zo bet diouz an aneval.

An tammou mell-kein a zo da zebri hep dale re rag ar mel-askourn a zo gouest da lakât an tammou all da vreina.

(1) An dua, a lavar darn all.

Evit salla ar c'hig e vez taolet c'hoalen war an daol ha kemmesket gant pebr ha c'hoalenn-moger (salpêtre). Eur guchenn c'hoalenn a vez laket er c'helorn a-raok lakât tamm kig ebet ebarz; ouz pep tamm kig e fez frotet c'hoalen hag an tammou eur wech sallet a vez renket, er c'helorn, an eil ouz egile, starta ma c'heller; war bep gwiskad kig e laker c'hoalen ha c'hoaz deliou tin, lore, saoch, hag evelse, gwisk-war-wisk, ken a vezo leun ar c'helorn.

Ar penn, ar c'houzoug, an divesker a-raok a vez laket da ziveza, war gorre, hag ivez an tammou a zo kalz askourn enno.

Ar bouzellou teoa a vez laket d'ober anduilh; gwalc'het ha skarzet e vezont; gwalc'het, goude, en dour tomm ha taolet en eur plad, epad teir pe beder eur, etouez c'hoalen ha pebr; ar re vraoa a vez dispartiet evid ober goloennou; ar re all a vez drailhnet gand eur gountell pe eur gwentle; eun tamm frezenn-leue a vez drailhnet ivez asambtez; kalz e vez c'houekoc'h blaz an anduilh.

Holl e ouzoc'h penaos en em gemeret; eur pakad bouzellou drailhnet a gemerit: peadra da ober eun anduilhenn; o astenn a rit, war o hed, war an daol; ouz ar vouzellenn a gemerit da ober ar c'holoenn e stagit eul las pe eun neudenn deo; ar penn all eus an neudenn-ze a vez laket start en dro d'ar bakadenn ha goustad e vez chachet war ar c'holoenn evit he zrei war an tu a-eneb.

Pa vez goloet ar bouzellou drailhnet, penn-da-benn, e vez stardet al las pe an neudenn ha trouc'het: eman graet an anduilhenn genta hag ar re all a vo graet henvel.


Evid o foazat e ranker o lakât da virvi epad diou eur, en dour sall; pebr, ougnoun, tin ha lore a vez laket ivez en dour.

A-benn diou eur e vezont tennet er mêz ha laket da zivera; renket e vezont goude, war eun tamm plankenn, warno eun tamm plankenn all, pouez daou lur warnan, betek ma vezont yen.

Goude e vezont staget a zibouez eul las, er siminal, da vogedi; a-raok o dibri e ranker o gwalc'hi, evel just, hag o c'hraza.

Bouzellou ar moc'h a zo eun tamm re deo da ober goloennou silzig ha gant bouzellou denved eo e vez graet ar re a werzer er c'heriou; an neb en defe c'hoant da ober, er menez tra, n'en deus nemet dispartia, a-raok salla ar c'hig, an tammou a zo da dosta d'ar c'houzoug, n'int na re zrus, na re zec'h: o drailha munut, o salla, lakat eun tamm pebr ouspenn ganto hag o bounta er bouzellou goullou, gand ar biz, pe gand eun ibil koad bennak.

TINTIN ANNA.





ROUE AL LAZ

— A bep seurt kelou, ha hini mat ebet ! eme Gadiou vras, an trede a deue er c'heo.

O welet al liou a wiskas Kersozon hag ar C'hloareg — heman oa diredet ivez da doull an nor, — e stonkas ken ma chomas ar peurrest en e c'horzailhenn.

— Petra 'zo ? eme Gevareg, gant eur vouez dister, en eur grenn. Ar Gwinver eo a respontas :

— Ho kwreg hag an dimezel, emezan, hag eur beleg ganto, am eus gwelet o vont gant ar Re C'hlas !

— Ha ne gomzes ket ?

Kevareg en devoa youc'het an daou c'hir-ze, en eur zerri e zaou zorn ken ma strakas e elvennou. Teurel a reas endro d'ezan eur zell strafuilhet ha glac'haret da glask e armou :

— Pelec'h ez out en em gavet ganto ?

Ankounac'haet en doa an den all-ze gwisket e doare eun ofiser hag a chome dilavar, e zell o poueza war an dud bodet endro d'ezan. An nao c'hant den dastumet er c'hao o oa tostaet, pep hini tosta m'helle, hag ar re ziweza a zave war vegou o zreid evit klevet ha gwelet.

Kevareg a droas warno.

— Tud, emezan, da zont ganin raktal ! An dimezel Kersozon, an ôtrou kure, va fried a zo kouezet etre daouarn ar Re C'hlas. Red eo o diframma diganto !... Ped oc'h prest da zont ganin ?

Ar C'hloareg a oa e kaoz gant Kadiou vras hag ar bugel :

— Klevit, emezan, tudou ; eun hanter-kant soudard benak e oant, da nebeuta, o heda an draouienn, breman 'z eus eun eur, o tont diouz Kerbeniti. Warzu Lanuon e kerzent ha tiz ganto, rak doan o doa da gaout skoilh war o hent. Troc'ha dirazo a rankit ha, gant ze, mont endro raktal ha bale dillo. Neb a yelo, emezan, — hag e lōskas eun difronkadenn. — Doue d'her binnigo ! Ni a chomo d'ho kortoz er c'heo-man, ken na vo deut kelou dig-

neoc'h... Etrezoc'h eta, emezan, 'n em vodit endro d'am breur Kevareg ! Hen a gerzo en ho penn !

'N em drei a reas ouz e vreur-mager ha kregi en e zorn d'her starda... Dindan an togou ledan, an daoulagad a luc'he ; krozmol gant an dud ; trouz ar fuzuilhōu staget ouz an diouскоaz a garge ar c'heo.

— Kemeromp ganeomp da zibri ! eme unan. Den n'her chilaouas. Kevareg a oa dija ernez, an Tokous bras war e lerc'h. Ar Gwinver ha Penglaouig a oa en em zilet da heul ar bōtred ; den-na dôlas evez outo.

Kadiou vras a yeas da zigeri ar gloued houarn hag o gwelas holl o vont endro, seiz ha hanter kant anezo, ken lies a zen evel a fuzuilh a oa ; met ne welas ket Penglaouig ha Gwinver. Ar re-man, gant aon beza harzet da vont pelloc'h, o doa krapet gant eur wezenn dero hag a daole he brankou e tu-all d'ar voger ; diwar eur brank, e oant diskennet war al lein anezi ; lammat ac'hane d'an traou, evito ne oa nemet eur c'hoari... Eur pennadig goude, e oant e lost ar vandenn, gant peb a vaz.

*
**

— Ha c'houi, ôtrou, a lavare, d'an hevelep mare, ar C'hloareg d'an ofiser chomet mut ouz e goste, pesort kelou a zigasit ?

Heman a dennas paperou diouz godell dindan e bor-pant hag o c'hinnigas d'ar C'hloareg.

— Marc'heg Tinteniak (1) oc'h c'houi aotrou ? Ma star-din d'eoc'h ho torn, rak klevet am eus komz ac'hanoc'h ! Arōk mont pelloc'h ganti, red eo d'eoc'h ober eun ehan da dibri eun tamm, rak stumm skuiz a zo warnoc'h !

Ober a reas digas bara, kig, jistr hag eur skaon d'ar marc'heg d'azeza ; heman a ziskolpas eur pezh bara :

— Ya, emezan, eur c'hinaouad pe ziou, kement ha digas ar gomz d'in !

Goude eur c'hinaouad, ec'h evas eur banne.

— A belec'h e teuit-hu, ôtrou ? eme ar C'hloareg.

— Dec'h da greizteiz, emezan, e oan du-ze, e tu-all da Zant-Brieg.

— Eun aneval a oa ganeoc'h ?

— Nann, war droad emañ !

Ar C'hloareg a chomas sebezef ha, gantan, ar goueria-ded a oa en em dastumet endro d'ar marc'heg.

— Grêt ho peus abaoe ouspenn ugent leo evit dont aman ! ! !

— Marteze ! emezan, goude eva eur skudellad jistr. Ah ! setu me breman en em charreou ! Eun eurvez kousked war ze, hag e vezin mat da vont adarre en henchou... Gwelet a ran, emezan, en eur deurel eur zell war e dro, emaoch aman o tanzen darbar d'ar Re C'hlas ?... Siouaz,

(1) Gwelit : Le Marquis de La Rouerie, p. 60.

eur gwall gelou a zo ganin ive! Aotrou, emezan, o tizrei ouz ar C'hloareg, peurs vras a gemeran en ho enkrez. Goût ouzon eman ho c'hoar etre o daouarn. Ne oa nemet ar bugel-man ha me ha ne oamp ket evit enebi outo! Trei a reas da zellet pelec'h e oa ar Gwinver... Gwinver ebet ken!

— Ah! emezan; ar pôtrig a zo tec'het! Parevert-an e oan bet breman, me ivez, etre daouarn ar Re C'hlas... Roit d'ezan ar pez aour-man, pa her gwelloc'h!

Tenna reas eur pez aour eus eur yalc'h lèr klenket en e vruched.

— Dec'h da noz, emezan adarre, e oan gant ar markiz ar Rouâri, ha setu aman petra oun karget da zigemen d'eoc'h eus e berz...

Goude lavaret ar c'homzou-ze, e plegas e benn en e vruched hag e chomas hep mont pelloc'h, evel pa vije bet souden stanket e gorzailhenn.

— An taol a tleemp da skei, emezan goude eur pennad, setu ma 'z eo èt da fall! An arme savet gant ar brinsed hag a oa war bouez arruout dirak kêr Châlons, a zo o paouez mont war a-drenv (1). Gant se, chomit a-zav, ken na roio d'eoc'h ar markiz urz da gerzet a-nevez.

Ar goueriaded a oa eno en em zelle, rak ne intentent netra er pez a lavare ar c'hannad; ar C'hloareg a oa mantret.

— Penôs, emezan, eo c'hoarvezet kement-se? Eun taol trubarderez bennak?

— N'ouzon netra! eme ar marc'heg. Dec'h, er Fosse-Hingant, penou-bras ar Vreurie, — eun darn anezo, da vihana, — a zo diredet da gaout ar Markiz ha setu petra zo bet divizet: chom a-zav ken da welet adarre..... C'houitet an dro-man! Goude ma oa koulz ha sur da zont da vat

An holl a dave, trididigez en o c'halonou, o klevet komzou ar marc'heg hag o welet an anken a bare war e zremm kasti ha drouk-livet.

— Hogen, emezan, n'eo ket digarez kement-man da baouez; da zerc'hel gwevnoc'h ne lavaran ket! — Red eo d'in, emezan, pa 'z oc'h ar wirionez war he led diskleria dirazoc'h ar wirionez war he led diwarbenn an dispac'h euzus-man, ar wirionez hervez ar pezh am eus gwelloc'h klevet. C'houi gompreno neuze perak am eus grêt kemend all a hent da zont aman, perak eo gwell ganin dispign va nerz ha rei va buhez da stourm ha da herzel eget chom da veva sioul etre peder voger va c'hastell.

Eur zell a reas ouz ar C'hloareg hag e stagas ganti evellen.

(Da heuilh).

(1) 20 gwengolo 1792.

KERNE (Cornouaille e galleg)

Diou Vreiz a zo
« Mor etrezo »

Ha diou Gerne ive: Unan du-ze e penn-traon Bro-Zôz, gwechall Breiz-Veur, e tu c'huz-heol; unan aman e Breiz-Izel, er penn pella hag en traon ive, en eur c'horn douar demhenvel ouz an hini kenta, a lamm ar mor gantan er gwalarn (1) hag er c'breiste.

Dalc'homp sonj, pôtrig Kerne, eus a belec'h eo deut hon tadou koz gant o feiz hag o Brezoneg. Deut int deus Kerne Breiz-Veur, deus an tu all d'ar mor. Gwall blanedenn o deus-int bet azaleg ar penn kenta; lamm o deus bet siouas gant ar Zôzon ha lamm yac'h, pa rankjont, unan a zaou, plegi beteg an douar, pe skarza ar vro.

Lod a blegas; ha dindan seutiu ar Zôz, kollet ganto pep frankiz, e kolljont siouas ive tammig ha tammig o feiz hag o brezoneg. Bretoned Kornwall pe Gerne Veur, a zo aet, en devez-hiou [hizio] da Zôz, koulz lar't [lavaret].

Ar re all, skuiz o stourm a droc'has kuit dre vor da glask eur vro welloc'h. Adaleg ar bloavezh 450 beteg ar bloavezh 650, ne voe ehan mat ebet er brezel etre an diou ouenn-dud, hag epad an daou c'hant vloaz-ze, e tec'has ar Vretoned a vadadoù, renet gant menec'h, beleien, tud a vrezet, a-wechou zoken a vandennajou bras da heul o rouaned evel Gradlon meur ha dreist holl Yann Reiz.

Kenta rumm a zouaras en Arvor, er vro a zoug breman an ano a Gerne, 'oa ar roue Gradlon ouz e ren.

Kaout a reas eun tamm douar a oa reuzeudik bras e stad, dismantret evel ma oa bet gant soudarded Rom eus an eil penn d'egile. Ne oa, koulz lavar't [lavaret], den war dro; penn kristen ebet da vihana: an nebeudig a oa c'hoaz dre eno gouez ha payan ne oant ken.

Gradlon hag e dud a boblas ar vro, a zavas keariou, hag a roas d'ezo anioiù brezonek evel an anioiù o doa o bro, o c'heariou, o steriou, o meneier hag o stankennou-du-ze en o mamm-vro garet, Kerne Breiz-Veur, — Ster-Odet ha Kemper; Ster-Elle ha Kemper-Elle, a zo anioiù douget a-raok, en tu all d'ar mor, gant diou ster, diou gear a-ramp warno.

D'ar mare-ze e tiskennas war douar Gradlon eun eskob, ganet e Bro-Iverzon, e ano Ronan. Ne felle ket d'ezan dougenn samm e garg ha tec'het e oa pell eus e vro. Sevel a reas e benity e Koad-Nevez dirag ar mor glaz ha Mene-Hom.

(1) Gwalarn: tu ar c'huz-heol.

Eno e krogas da brezeg an Aviel d'an dud diwar ar mēz tro-war-dro, ar pez a zavas en e eneb kounnar ar bayaned; kounnar eun tamm maouez-dichadennet, dreist holl, Keban he ano. — Tamallet ganti e gaou dirag ar Roue, hien-man a varnas prim e zen.

Gradlon a oa Breton ha Ronan a wad Iwerzoniad — setu awalc'h marteze da gaout douetan. — Gwel't a reas ker prim ive e oa bet re vuān da gredi ha Ronan a vevas adarre didrouz en e lochenn er c'hoad.

En dro d'ezan e teuas emichans eun nebeut tud yaouank da 'n em ref d'ar yun, d'ar binijenn ha d'ar bedenn. Rak eun tammig diwezatoc'h e weler ar Roue o tont da chaseal d'ar c'hoad, hag oc'h en em gaout gant unan anezoz: Korantin.

Ni oar c'hoaz e oa eno unan koz all: Primel, ha pet ha pet ne oa ket marteze, troet evel ma oa hon tadou da vont da 'n em denna o unan-penn evelse gant an Aotrou Doue, pa 'n em zantent skwiz gant ar vuhez.

Kavell Kerne a zo er c'hoad-se, kalonenn ar Vro: Koad-Neve.

N'ouzomp ket re zur, e teuas sant Gwenole d'ober eur weladenn da zant Korantin en e lochenn, hag e leuskas gantan meur a hini euz ar re a oa d'e heul. Gouzout a reomp, avat, e teuas davetan tud Gradlon da lavar't d'ezan mont da gaout ar Roue. Dibabet e voe, war ali Gwenole pe get, dibabet e voe da veza kenta eskob Kerne.

A-raog, ar Vro n'en doa nemet eur penn, en doa da wel't war an douarou ha war gorfou an dud; ar pez ne oa ket a-walc'h, Gradlon her gouie mat; breman e oa kavet eur penn all, eur renour evit an eneo. Ha pa zistroas Korantin deus Tour, graet eskob Kemper evit bro Gerne, ne rae ken netra diouer d'hon tadou evit ar bed-man. Bez' o doa e giz e Kerne Tra-mor, o roue, o eskob, hag eun abad war an holl Gradlon, Korantin, Gwenole, teir sklerijenn, tri vignon.


(Da heuilh).

F. M.

Pep tra a gera

Ar paper hag ar mizou-post a gera kement ma rankomp kreski hor prizioù: adalek miz Ebret e rankimp gwerza hor Feiz ha Breiz 12 gwenneg an niverenn.

Oc'h ober evel ma reomp, ne reomp nemed ar pez a rank ober an holl gazetennou.



Sant Ronan barnet da veza stlapet d'ar chas 2

An Aotrou Ronan benniget
Enez Iwerzon * oa ganet
Bro-Zaoz, en tu all d'ar mor glaz
Demeus a bentieien vraz.

(1) Tennet eus Barzas-Breiz.

(2) Ar skedenn-man a zo tennet diwar eun daolead, geer livet gant an dimezell O. Fauvert, a c'hounnezas ganti kenta priz-Roñ warlene.

Eur wech ma oa en e bedenn
En doa gwelet eur sklerijenn
Hag eun el kaer gwisket e gwenn
A gomzas outan evel-hen:

Ronan, Ronan, kerz alese,
Gourc'hemennet eo gant Doue,
Evit savetei da ene,
Mont da jom e douar Kerne.

Ronan ouz an el a zentas
Ha da jom e Breiz e teuas,
Kent e traon Leon ha goude,
E Koad Nevet e Bro-Gerne.

Daou pe dri bloaz oa pe ouspenn
M'oa eno 'c'h ober pinienn
Pa oa eur pardaez toull e zor
War e zaoulin, dirag ar mor.

Ken e lammas eur bleiz er c'hoad,
A-dreuz en e veg eun danvad,
Ha war e lerc'h eun den, timat,
Hag a ouele, gant kalonad;

Ha Ronan gant truez outan,
A bedas Doue evitan:
— Aotrou Doue, ha me ho ped,
Grit na vo an danvad taget!

Ne oa ket e bedenn laret
Pa oa an danvad digaset,
Hep droug ebet war dreuz an nour,
Dirak Ronan hag an oac'h [ozac'h] paour.

Azalek neuze an den kez
Zeue d'e welet aliez;
Gant plijadur vras e feue
Evit klevet komzou Doue.

Hogen eur wreg a oa gantan
Hag hi gwall-bez, hanvet Keban,
Hag hi a zeuas d'argarzi
Ronan en abeg d'e hini.

Eun deiz oa bet ouz e gaouet
Ha trouz d'ean hi he devoa grêt:
— Châmet hoc'h eus tud ma zi-me,
Ma goaz koulz ha ma bugale.

Ne reont met ho tarempred holl
Ha ma danvez a ya da goll,
Ma na zentit ouzin muioc'h,
Kaer po chilpat, me rei ganeoc'h!

En he fenn e lakas neuze,
Da c'hoana den santel Doue,
Hag hi mont da gaout ar Roue,
Gradlon, en tu all d'ar mene.

— Aotrou Roue, ha me ho ped,
Ma flac'hig me zo bet taget:
Ronan Koad Nevet 'deus her grêt.
O vont da vleiz 'm eus her gwelet.

Evel ma oa bet tamallet
Ronan da Gemper oa kaset
Ha taolet ebarz eur c'heo don
A-berz Aotrou Roue Gradlon.

Met ac'hano pa voe tennet,
Ouz eur wezenn e voe staget,
Ha daou gi gouez ha diboellet
Warnezan timat oa losket.

Hag hen, raktal hag hep kaout aon
A reas eur groaz war e galon;
Ken a dec'has ar chas raktal
Evel dioc'h an tan, oc'h harzal.

Gradlon pa welas kement-se
A lavaras d'an den Doue:
— Na petra vad a rin-me d'eoc'h,
P'ema Doue en tu ganeoc'h?

— Netra vad me na c'houlennan,
Nemet truez d'ar wreg Keban;
He bugelig n'eo ket maro,
Ganti, en arc'h, voe klozet beo.

An arc'h pa oa bet digaset,
Ar bugel enni voe kavet,
Hag hen war e gostez maro;
Ha sant Ronan hel lakeas beo.

An Aotrou Gradlon hag e dud,
Suezet bras gant ar burzud,
'N em strinkas dirak sant Ronan
O c'houlenn trugarez outan.

Hag hen, e mez, d'ar c'hoad en dro,
Da chom di beteg e varo;
Eno oc'h ober pinienn,
Eur mên kalet dindan e benn.

Gantan kroc'hen eun ounner vriz
Eur skoultrig goueet da c'houriz
Ha da eva dour ar poull du
Ha bara poazet el ludu.

Pa zeuas e dremen diveza,
Pa 'z eas kuit eus ar bed-ma
Daou ejen gouez stag diouz ar c'har
Tri eskob d'e gas d'an douar.

Hag i digouezet gand ar ster,
Ha kaout Keban diskabell kaer,
Oc'h ober liziou d'ar gwener
Daoust da wad Jezuz, Hor Zalver.

Hag hi sevel he golvaz preññ
Darc'haoa gant korn eun ejenn
Ken e tilmmas gwall spontet
E gorn gand an taol diframmet.

Ke! mab gaign, ke, d'az toull en-dro,
Ke da vreina gant chas maro!
Ne vi ket kavet breman mui
Oc'h ober goab ac'hanomp-ni.

N'oa ket he genou peur-zarret,
Pa oa gand an douar lonket
Etouez moked ha flammou tan
El lec'h a c'halver *Bez-Keban*.

Mont a eure ato ar c'har,
O kas sant Ronan d'an douar;
Pa jomas sounn an daou ejenn,
Hep kerzet mui, na raok, na drev.

Eno e voe laket ar zant,
Evel ma kreder oa e c'hoant;
E penn an nec'h eus ar c'hoad glaz,
Eun hag eun dirag ar mor braz.

Eur skouer da Vreiz

Pa deuas Kezar da deurel e grabanoù war Bro-C'hall hag ivez war Breiz, ne c'hellas ket dont a-benn eus eur stroljad pesketerien a yoa o chom en eun enezenn e-kreiz ar Mor-Meur. Red e voe d'ezan o lezel sioul, ha tec'het pell diouto; hag en eur vont kuit gand ar gounnar an den galloudus ne gave da lavarout nemet « mala gens », « o tud fall ». Piou eta ' an dud nerzus se ? Breiziz int, sklaer eo; ya, Breiziz eus a Enez Sizun.

Derc'hel penn d'eur mestr brezelour evel m'edo Kezar a yoa diskouez abred an dalc'husted o defe an dud-ze difennet ganti o buhez, o feiz hag o gwiriou. Daoust ha gwir eo ez ' eo bet paotred Enez Sizun hanvet diaoulou ar mor ? N'oun ket evit hel lavaret d'eoc'h. Ar pezh a ouezan eo, abaoe ma 'z eo deuet en o zouez ar feiz kristen, eus a ziaoulou, int deuet da veza aelez. N'em eus ket aon evit lavaret ez int din da veza roet da skouer d'an holl Vretoned. E kalon pep hini anezo e verv teir garantez: da genta karantez Doue, d'an eil karantez o bro, ha d'an tredre karantez an eil evid egile.

Da genta karantez Doue. Na pegen d'udius eo gwelet anezo da zul o kana o fedennou diouz an noz; da bemdez e vez gwelet o tostaat ouz an daol-santel merdeidi koz hir o baro, bleizi mor hag a zo o vont bremaik d'en em ganna ouz an tarziou didruez. Da c'houel an Anaoun eo ken d'udius hag ivez poanius o gwelet holl o vont en eur bedi eus an Iliz d'ar Vered hag eus ar Vered d'an Iliz. Pedit a reont evid ar re a zo bet tennet diganto gand ar mor fallakr hag a zo en em garget da rei d'ezo eur bez.

Ya, war an tammig douar-ze hag a vez ken aliez skubet gand an tarz didruez, eno e vez pedet, eno e karer Doue. Ar besketerien-ze a oar o deus ezomm eus a Zoue; o bagig ' zo ken bihan, ar mor ' zo ken bras. Pa vez o lestrig er porz elec'h ma teu zoken d'hen tregas ar mor o c'hros-molat, da helec'h e fell deoc'h e yafe an holl verdeidize, hag o deus gwelet deac'h ar maro dirazo, hag her gwelo warc'hoaz adarre pe war beg eur roc'h bennak pe e dounder an tarziou ? Mont a reont da Zoue, d'an hini a garont pedit da vare an emgannou skrijus gand an ave-liou foll. Eus o holl c'halon e karont Doue hag o feiz, ha hepred emaint war zao evid o difenn. Er bloavezh 1905 pa deuas Combes da Enez-Sizun, d'ober ar pezh m'en doa graet el leac'h all, da lavaret eo, da lakaat e fri elec'h ma n'en doa ezomm ebet d'hen ober, an enezourien pa weljont o tont warzu o enez, al lestr karget a zoudarded haga a archerien, a yeas da c'houlen ouz o ferson ha laosket e vefe an dorfetourien-ze da lakaat o zreid en enezenn.

An Ao. person a viras outo ober an disterra droug; goulskoude, en desped d'ezan, pa erruas ar strollad Gallaoued e kichen an iliz e koutezas war o fennou, drus evel ar glao, ar vein hag ar bouteier koat; hag anez d'ar person, hini anezo na vije aet ac'hano. Hanter vac'hagnet eo e tistroas d'ar gear soudarded Combes, ha mar d'emaint c'hoaz er bed-man, me zo zur, hini anezo n'en dezo hunvre da zistrei d'an enezenn.

Karantez o douar ginidik a zo ivez doun e kalon an enezourien. Ped gwech ar mor dirollét a gleiz hag a zehou n'eo ket en em strinket war an enezenn. Ped gwech ne 'z eus ket bet lavaret dezo kuitat al lec'hioù-ze, elec'h ma ne vez gwelet nag eur wezenn, hag eun tamm glasvez, elec'h m'eman ar mor ken uhel hag an douar, elec'h, ma vez ar roc'h hirio treac'h d'an dour, ha varc'hoaz an dour treac'h d'ar roc'h. En aner eo bet roet d'ezo: an urziou-ze. E kalonou an dud-ze e verv an youl da veza glepiet gand an tarziou o deus glepiet o zadou ha zoken lonket anezo; hag ez eont war ar mor evel pa vijent o klask an tu d'he lakaat da baea d'ezo an holl boaniou kalet o deus gouzanvet dreizi. Ha koulskoude e neb lec'h all ebet ne vez beuzet kement a dud; holl emaint atao e kaony, rak-se e weloc'h gand ar mieroched koefou du ha dilhajoù du eus ar penn dan traon. Daoust da-ze e karont o enezenn, rak e Breiz-Izel eman, en em staget int outi ker mat ha ker start, ma 'z eus kalz anezo ha n'int bet morse o lakaat o zreid war douar Bro-C'hall.

Enezourien Sizun a gar o Doue, a gar o bro hag en em gar ken etrezo. Ar pesketaer, pa vo e vignon war-nes beza beuzet, n'eus forz peger fall e vo ar mor, ne greno ket evid en em strinka ennan, n'eo ket hepken evit savetei e vignon, met ivez evit savetei n'eus forz piou. Lennit istor ar barrez hag e weloc'h eur skeud eus o nerz-kalon, n'eo ket eul lestr, na daou eo a zo bet tennet ganto eus a douez ar reier, met dre zaouzek eo e c'heller o niveri; n'eo ket na dek nag ugent den eo a zo bet tennet ganto eus an tarziou, met a ganchou eo e vezont niveret.

Ar pesketaer ma teu en distro a vo pinvidik epad eur pennadig amzer, mar da da strad ar mor e vignounead a bedo evitan, a gemero truez ouz e vugale, o bevo hag o savo en e lec'h. E nep lec'h all ebet n'ez eus eun hevelep karantez etouez an dud: ma n'ez eus en eun ti nemed eun tanim bara, hag en ti all e kichen tammig ebet, an tamm bara a vo rannet ha pep hini en dezo e lod.

Bretoned, taolit eur zell war enezourien Sizun, kemerit skouer warno: karit ha Toue, karit ho pro, hag en em garit eveldo; ha neuze pa vezoc'h unanet, c'houi en em zavo, ha Breiz, ho mamm en em zavo ganeoc'h.

JAKEZ, *Diskib St-Weltas eus Skolach Lesneven.*



E Kernevez, e vank diou lur amann d'ar Vestrez

Penaos an dra-ze? goude m'eo bet Laou Landrouk aze o kerc'hat e ziou lur amann, e vank eur voul breman d'ar vamm Soaz. Ar wreg paour, he daou ilin war an daol, he fenn etre he daou-zourn, he daoulagad hanter zezret, a oa oc'h ober kontchou ha diskontchou.

Koulskoude a lavare hi, e oa trizek boul amann aze, goude ma oa ribotet dec'h, ha brema n'eus mui nemet nao.

O tenna nao diouz trizek e chom peder, setu ma vank d'in peder boul, unan da Varc'harit an amezegez, unan eo bet mab ar Mèr o kerc'hat en eur zont diouz ar skol, unan all evit ar vamm Landrouk, an dra-ze ne ra morzenemed teir. E pelec'h e ve tremenet ar bedervet.

Ar penn-tiegezh kaer he deus sevel he zri biz, en eur dremen he Marc'harit da vab ar mèr, eus mab ar mèr d'an intron Landrouk ne gav morse nemet teir.

Mont a ra d'an armel hag eus an eil stal d'eben ne gav ivez nemet nao damm amann renket fresk war deliennou kôl. Nao zo nao. Nao diouz trizek a zo peder, unan da Varc'harit, unan da vab ar mèr... Beteg an eur da vont d'ar marc'had ne ehanas da gonta evel-se ar wreg paour, poan gollet! ar bedervet a vanke atao.

Satordallik! diou lur amann a sonje hi a zo kalz, goude m'eo ken kêr ar beva ha ma werzer ken kêr all an amann, feiz, kollet pe laeret oa hag echu.

Nondendistag! Soaz ne denne morse he spered nag he daoulagad diwar he frenerien, n'eo ket laeret biken gand Marc'harit, eur wreg honest eo. Mab ar mèr, eur potrik laouen ha fur. Ha Laou Landrouk ar penn trist-ze?? Nemet hennez ar galkenn vras se e ve al faer, aliet ha kenteliet fall evel m'eo gand e dud.

C'houezigell ar gounnar! ma lagad a zo warnan, ken gwir ha ma 'z oun Soaz ar Gernevez eus ti an traon, Roz ar vilin; me hen tou ne 'z ay ket an dra-ze var e gonsians d'ar bed all.

Edoug ar zizun, Soaz a gavas an tu war ar pôtr yaouank, pa deuas evel kustum da gerc'hat e amann; lavaret a reas d'ezan dont en ti. E oad o font eus peurechui ar ribotadenn, hag e oa en dro-man daouzek boul amann c'hoaz var an daol etouez an deliou kôl evelkent, o c'hortoz ar brenerien da zont.

Goude m'en doa taolet heman, al Landour bras-man, e bevar ivin dreist an treujou an eil warlerc'h egile, kenta reas e paras e zaoutagad war an amann, en eur lavaret e oa kaer ha livet brao. Tanvañ anezan, eme ar vamm d'ezan a vouez uhel; chomit aze, me zo o vont da heur-chui va fourmachenn em eus gret gant al lez munud, peogwir ne 'm eus ket a voc'h ken da implij anezan; bremaik e roin an tanva d'eoc'h ivez hag e lavaroc'h ho sonj.

Ha Laou e unan penn
Sioul 'vel al logodenn,
'Touez an amann tentus
Oc'h ober lagad rus.

En e zav, kerkent ma sarras an nor, eun tamm amann a ziou lur gantan en e grabanou, dastum a reas anezan gant preder etouez e vouchouer, hag hep gortoz ken, hen sank buan e godell e vragou, hag e teuz da azeza war ar skabell e kichen an oaled.

Ma logodenn diouatlit mad
Ar c'haz en deuz ivez lagad,

ya, lagad ar vestrez her gwelas dre ar prenestr bihan, hag a daolas pled war e droiou louarn grêt ken buan ha gant kement a breder, met hi ne lavaras netra war an taol, eur beg kioc'h me gred a oa dres a-dreuz, en he gouzoug, hag a viras outi da vallozi.

Ah la la Laouik! a lavaras hi gant dousder en eur zigeri an nor eur munutenn bennak goude, ah la la! va fourmachenn a zo en em c'hraet mat, morse ne 'm eus he gwelet ken gwenn. Nann, nann, me gredan ket ho lezel da vont kwit hep rei deoc'h an tanva.

En eur gomz evelse, ar vamm a renke hag a daole keuneut en tan, en eur alia ar c'hanfart da azeza tost d'ar wrez. La! la! diskuizit aze eun neubeut; yen eo an amzer, egis se ho pezo kalz plijadur o tanva va c'houignou, ekeit ma vezo ho treid hag ho stomog o tomma diouz an tan rus.

Heb en em jala, tintin Soaz a ya da gerc'hat diou vevenn, eur pic'herad chistr, eur vichenn vara hag a azez kevred gant an den yaouank. Trouc'ha reont peb a damm bara, fourmach teo varnan, ar bolennou a oa karget a chistr, hag o daou en em lakeont da varvailhat pep hini d'e dro.

Dre greiz m'edo ar gaoz o vont endro eus ar gwella, e teurvez da Laou, lakat e zourn en e c'hodell; floura

reas eun dra bennak tano, egiz ma vije bet eun aer-viber bennak ebarz, padal an amann eo an hini a oa o troial; en eur welet he fôtr ken inouet, tintin Soaz ne vankas ket da c'houlenn gantan ha klanv oa pe droug penn en doa. War ar gerioù-ze e chomas sioul adarre. Klaoustre! en eur welet e vragou o louza gant eun dakenn hag a yea var ledannât, en eur zantout eun dra bennak yen ha druz o rinka hag o redék war e vorzed, e c'hoanteas mont var e giz, ha pellat eun neubeut diouz an tan.

Nann, aotrou, a lavaras ar wreg vat, yen eo, abarz kwitat e ve red deoc'h ober eun tomma mat, evit beza fresk ha yacl. Gant an ali-ze avat, Laou a oa deuet da veza pennok, ha ne grede ken pellât e voutou eus treuz eur vlevenn.

Koulskoude an amann a deuze, a deuze, sùr ma sav, e vo gwelet an druz o tivera outan. Ne grede ken en em jacha kwit, met roet en dije e vuhez evit kloza e laeradenn, kement a vez en doa. Tintin Soaz atao o vouse'hoarzin, ne ehane da zibuna he c'hudenn; e oa c'hoaz gant an arvest kenta, pa deuas fiou Laouik da jench en eun taol; n'eo ket an amann o teuzi eo a ro dezan ar muia nec'h, nann, netra nemed ar gentel e oa o vont da dizout, ar boan-gallon en devoa gant ar pec'hed mezuz e oa o tont diouz ober, hag a rea d'ar c'houezenn redek war e dal.

Sevel a reas, en eur lakat e ziou c'harr e kroazigell, hag e zaou zourn da gloza an takennou a lede a bep tu war e vragou.

Neuze, ar vamm en eur zével eun neubeut he mouez a lavaras d'ezan: « Paourkez pôtr, petra a zo o redek gant da leurenn; da vragou a zo brao gantan, sell ouz ar skabell hag ouz al leur-zi, lavaret ve, vez bet azezet en eur ribot bennak! »

Dres, d'ar mare ze unan a skoaz war an nor. — Deuit, deuit en ti, a voe gourc'hemennet dezan. Kerkent an nor a zigoraz war he aëlou en eur glemm, dont a reas en ti, Reun ar c'here, deuet da zigaz kolier ar c'hi braz Medor. — « Deuit dillo en ti, otrou Reun, da zikour ac'hanouan da gentelia ar galkenn vras man; kemeret en deus m'oarvat e vragou evit eun delienn gôl, an aman a oa deuet da brena en deus lakat e godellou e vragou! red eo beza darzod, lavarit?... Eur mell skolpenn evelse, a zo o vont d'an arme dizale, hag ober kement all! Bez dizoursi an dra-ze gousto ker dit, pôtr. Petra tavaro breman da vamm diouz an amann, diouz da c'hodellou, bez en deuz eur mab fur avat! »

An nor warlerc'h ar c'here, a oa chomet hanter-zigor, Medor a deuz en ti, en eur harzal gant levenez ouz e vestrez; kerkent e lammas war ar paourkez Laou, evit lipat an druz dioutan.

« Sell al loan ze! hag a zo o sikour ac'hanout d'en em

gempenn, ro eur' pok d'ezan ta! Furoc'h eo egedout a lararaz tintin Soaz.

Laou, lennet du-man du-hont gant ar c'hi o klask e lipat, pouzlet er memez amzer gant ar vamm ha gant ar c'here, a heje anezan, war zigarez e netaat, pep hini diouz o zu, evel eur wezenn avalou. Mezok oa ar pôtr, e c'hellit kredi; ne grede ranna grik ebet ken, gwelet a rea diouz ar pezh a lavare ar vamm e oa dizoloet e droiou kamm. Pa gavaz an tu, ne varc'hatas ket evit kemer an nor, heuliet gant harz ar c'hi bras.

Ne glasko ken breman nemed daou zra, ma ne ve ket diskuliet e faroueherez, dre ar vro, ha ma ve pardounet gant e dintin; keuz a deue d'ezan, ha keuz bras. Evit ze, ne glaskas ket an hent bras da vont d'ar gear; mont a reas a-dreuz ar c'hoajou ha dreist ar c'hleuziou evit ne ve ket gwelet gant nikun; n'euz forz gwelet e voe gant meur a amezog; gwelloc'h c'hoaz, e zousik koant Mari a oa o tiouall ar zaout er ster, her gwelaz ivez o tremen; ouz e velet e kredas en doa torret e c'har, kement a boan en doa o vale. Dre ar vro, ne glever ken nemet komz anezan, ha c'hoarzin goap warnan.

Bep tro ma teue goude da gerc'hat an amann, tintin Soaz a rea d'ezan distrei e c'hodellou, abalamour a lavare hi, hennez a gred emañ an amann, er fresk, en e c'hodell, met n'eo ket kêl eo kement-ze? E vamm, ne oa ket ivez gwall laouen eus ar goaperez se; kredi ran anezi, paour-kez mamm!...

Dont a reas e ugent vloaz; dre c'hraz Doue, ma oa galvet da vont da servich ar vro; evelse e oa dizammset euz malloziou e amezieien ha dreist holl euz teodou goapaus ar merc'hed; koulsgoude gwasket e oa atao gant mouez e gonsians.

Met kenta gwech ma teuas e permission, e voe pardounet gant trugarez, gant tintin Soaz, en eur doui, e vije fur hag honest ar rest euz e vuhez.

Soudard eo pôtr Laou d'an deiz hirio
Warc'hoaz kristen ha breizad e vezo.

C. C. C.

Toulon, 15 a viz C'houevrer 1926.

PRIZIOU 1925

Ar prizioù a zo bet kaset; meur a hini a zo bet distroet d'eomp dre ma n'oa ket sklêr a-walc'h adresou ar c'hounideien: pedi a reomp ar re n'o defe ket bet c'hoaz o frizioù da zigas d'eomp o adres eün hag eün.



Kenstrivadeg ar Bleun-Brug 1925

Kenstrivadeg Arzur de la Borderie

DANVEZ AL LABOUR

Grit eun daolenn eus an amzer ma veve Breiz en he Frankiz (460-1491).

- a) *Amzer ar Rouaned (460-938).*
- b) *Amzer an Duked (938-1491).*

I.

KEVRENN GENTA

DOAREOU BREIZ EDOUG AMZER AR ROUANED (460-938)

1° *Breiziz o tiuzeza hor broadelez en Arvorig.*

Kelted Breiz-veur, — ar Vretoned, hon Tadou-Koz — gwelloc'h ganto dilezel o bro c'henidik eget plega d'ar Zaozon, — eur boblad tud gouez eus an Hanter-noz, — a zikennas war zouarou an *Arvorig* wardro dibenn ar V^e kantved. *Arvorig* a oa, d'ar mare, eur rann eus Gallia Din-dan yeo ar Romaned he doa kollet he yez keltiek hag he spered-bro: deuet oa zoken da veza peuz-dibobl. Hon Tadou-Koz eo a roaz d'ezi, o tont a Vreiz-Veur d'he fobla, he hano a Vreiz, a-unan gant eur vuhez, eur yez hag eur vroadelez keltiek nevez, evel m'her gwelimp dizale.

2° *Penos ha gant piou e voe savet hor parrezioù.*

Dre vagadou distag eo e touaras hon Tadou-Koz en *Arvorig*, ha d'o blenia e kavent darn eus ar re o doa kent o bleniet ouz o enebourien: aotronez, tierned, ha peurliesia menec'h pe eskibien. Sevel a rejont, dre ma tigouezent, trevadennou bihan a zo bet penn-wrizienn ar parrezioù anvet « Plou ». — Ar venec'h a zave manation anvet « Lann », a zifraoste ar c'hoajou, hag a nebeudou

an dud en em vode tro-war-dro d'ar manatiou, rak ma kavent enno sklerijenn, skouer-vat, ha peb skoazell, ken evit ar c'horf, ken evid an ene. Diwallomp na deufe biken ar Vretoned da ankounac'haat ar zent koz! Eun dever-striz eo o enori: bet int hag e talc'hont da veza gwella difennourien hor gouenn-dud (race), dre m'o deus, a-hed o buhez, « karet ha skoret Breiz ». — Int eo, dreist-holl, a zikouras ar Vretoned da veza eur bobl gwirion, tud a feiz, labourerien kalonek, leal d'o giziou mat ha kristen. Nag eürus oa neuze an dud, dre ma septent ouz blenierien ken santell! C'houec'h eskopti a voe savet neuze, hag en o fenn e kavomp, hor sent kosa ha brudeta: Sant Malo, Sant Samson, Sant Brieg, Sant Tual, Sant Paol, Sant Korantin. Ra vint meulet da viken, ha d'o heul, Sant Gwenole, an hini a zavas manati brudet Landevenneg, hag an holl zent all « gwir dadou ar vro ».

Houman a yoa evel rannet e rouanteleziou bihan, aotronez gouiziek ha kalonek e penn peb hini: Anvomp ar re vrudeta; hag ez int: an Domnonéa, bro Léon, ar Poher, Bro Gerne, ha bro Wereg. Nag a draou a vefe da gonta divarbenn amzeriou kenta hor Breiz! Met eun daolenn ne c'houlenner ken: kendalc'homp eta!

3° Ar Vretoned a rank stourm.

A-vec'h diazezet en *Arvorig* o devoe hon Tadou da zifenn o bro ouz enebourien, dreist-holl ouz ar Franked, o amezeien diouz tu ar sav-heol. Warok, komt a Wened, a voe er c'houec'hvet kantved, difennour-meur Breiz; a-hed e vuhez e stourmas ouz ar Franked, ha meur a wech zoken e roas lamm d'ezo.

Sant Judicaël, roue an Dommonéa (hanter-norz Breiz) a zalc'has penn ouz e enebourien. Eur brezellour dreist oa, eun den eün, mat e kenver an holl, tad ar re baour. Diazeza mat a reas ar peoc'h, war eun emgleo savet etrezan ha Dagobert, roue ar Franked; goude-ze e tilezas peb tra, evit mont da veva en eur gouent. Pedomp anezan evit Breiz d'ar 16 a viz kerzu; unan eo eus sent paeron hor Bro!

Daoust d'ezo da veza tud kadarn, tud a benn, ar Vretoned a welas ne virfent o frankiz nemet startoc'h e vefe skoulmet etrezo liamm an emgleo. Charlez-Veur, gounezet gantan an trec'h war dyerned Breiz, a gredas, eur pennad, oa perc'henn d'ar vro: perc'henn a ano, ne laran ket! Rak, dizale, Morvan, « Lez-Breiz » a c'halvas davetan holl dyerned Breiz, hag an eil o skoazella egile e teujont a benn da zishuala ar Vro. Nemet, an enebourien a ziredas niverusoc'h. Morvan a voe lazef e kreiz eur stourmad. An trec'h a jomas e tu ar Franked dre m'a n'o devoa ket an dyerned kavet an tu d'en em voda e poent.

Daoust ha n'edo ket hor bro warnes ober he zalarou? Reuzeudik oa, a dra zur he doareou, pa stagas Nominoe gand e « hunvre »: ober eus Breiz eur vro gaer, eur vro binvidik, eur vro gristen.

Eun tyern breizat oa heman, gwrizienet start ha doun ar garantez-vro en e greiz. Nag a ve da zisplega diwarbenn Nominoe, an den kalonek a reas « Unvaniez Breiz ». Ar vro neuze a anavezaz krisder an emgannou, met ive d'ouster an trec'h. Nominoe a roas lamm d'ar Franked, e Ballon, er bloavez 845. Kurunet roue Breiz, e renas gand furnez, kuzuliet eus ar gwella bepred gand Sant Konvoion.

Erispoe a renas warlerc'h e dad. Diwar neuze ar Vretoned a gendalc'has da startaat o frankiziou. Da varo Erispoe e pignas Salaün war an tron: ar galloudeka eus hor rouaned e voe-hen. Na kaër oa neuze doareou Breiz: reizet oa peb tra enni: yez, stad an dud hag an douarou, hervez giz ha spered hon Tadou.

Gwas a ze d'eomp-ni Bretoned, maro Salaün, — Sant Salaün evit laret mat — a ziskaras an unvaniez rik a gaved neuze e gouarnamant Breiz. Ar vro a voe lodennet adarre, etre tri gont: Kerne, Léon ha Poher.

Dre ma 'z oa disunvaniez er vro, an Normaned, — pö-tred ar skrab hag ar skod-tan — a gavas tro gaer d'ober o mistri e Breiz. Argadegou an Normaned a zo bet eur wall-daol evit hor bro p'o deus miret outi da zerc'hel da vont war wellaat, ha dreist-holl p'o deus pellaet diouti he renerien gwirion. Ar re-man a gollas, pell diouz Breiz, ar yez hag ar spered keltiek. Hirio c'hoaz e welomp skler pegeñ noazus eo bet evidomp emgannou an Normaned! Doue ra zikouro tud desket Breiz da zistrei dizale var an hent mat, an hent-se zoken hag a zo diskouezet d'eomp gand tadou ar « Bleun-Brug! »

Spountus oa stad ar vro epad ma rae an Normaned o mistri: met, a drugarez Doue, n'oa ket deuet eviti an eur da zisken er bez. E 936 en em glevas an dud diwar ar mez evit stourm ouz an enebour. An abad Yann Landevenneg a voe rener-bras an emgleo-man. Kas a reas kannaded da vro Gembre da gerc'het ar prins Alan, leshanvet « ar Barvek », evit ma teuje da zigabestra ar vro. Eur brezelour heb e bar oa Alan Varvek. Distrei a reas, laouen, da Vreiz. Goude douara e Dol, e tismantras armead an Normaned, e kemeras an Naoned hag e roas adarre ar peoc'h da Vreiz; lakat a reas anezi da derri he c'haonv a bemp bloaz war 'n ugent ». Diwar drec'h an deiz kenta a viz eost 939, ar Vretoned a zo deuet da veza mistri e Breiz. Stourmet o doa evit-se epad pemp kant vloaz. Hiviziken, red eo d'an holl hen anzav, douar Breiz a zo d'ar Vretoned, int eo ar gwir berc'henn, gwir o deus da veva en doare ma plij ganto, en eur jom leal d'o yez, d'o feiz, d'o giziou. Hag epad c'houec'h kantved den ne gredas sevel e vouez da nac'h o gwiriou sakr ouz ar Vretoned. Ha koulskoude, evel m'hen diskouezimp aman diwarlerc'h, ar Vretoned a ranko stourm c'hoaz, renet gand eur mestr anvet an « dug » ha n'eo ket ar « roue » eo ken, evel diagent.

II

EIL PENNAD

DOAREOU BREIZ EN AMZER AN DUKED

(938-1491)

Goude ar stourmad eneb an Normaned kemm bras a deuas e doareou meur a dra e Breiz: niver-an aotronez galloudus a yeas war gresk, met peurliesia ec'h anzavent edo an duk dreist pep hini anezh. An duk a yoa e c'halloud henvel a-walc'h ouz galloud eur roue. Hini ebet eus hon duked ne falvezas d'ezan daoulina dirak roue Bro-C'hall. Hag e gwirionez ar Vretoned a ziskoueze, int o unan, beza dishenvel tre diouz ar C'hallaoued. Meur a desteni hon eus a gement-man.

I. *Stad an dud.* — 1° An dam-sklaverez. — An dam-sklavet (serfs) n'hellent ket beza gwerzet gant o mistri, an aotronez; int a c'helle beza perc'hen, rei testeni dirag ar barner, feurmi o douarou, ha zoken gervel o mestri d'al lez-varn. Al labourerien hag an noblansou en em gleve mat a-walc'h dre ma oant eus ar memez ouenn, dre ma karent ar memez traou, ha ma rankent difenn ar memez gwiriou, en em glevet a rea eta paour ha pinvidik hag alies zoken e kemerent o flijadur er memez goueliou.

2° Ar vourc'hizien e Breiz a yoa eürusoc'h eget Bourc'hizien Bro-C'hall. — Frankizioù dispar o devoa ha dre ze ne zavas tabut ebet er c'heriou. Mat ez ea an traou er vro.

II. *Kemwerz.* — En amzer an duked, ar c'hemwerz a yoa bras e Breiz, war zouar ha war vor. Merdeidi eus an dibab oa hon tadou, ha lennet em eus zoken eo bet digoret an hent da Gristof Kolomb da vont d'an Amerik gand eur breizad: Yann Coatanlem, eus a Vontroulez. Hor porziou mor n'oa ket brudetoc'h egeto.

III. *Deskadurez.* — N'oa ket souez gwelet tud hor broc'h en em denna ker brao e pep tra hag e pep stad: desket mat e rankent beza, rak darempredet e veze ar skoliou ha niverus oant.

An duked a zikoure eus o gwella an dud desket, ar skolachou hag al leordiou (bibliothèques).

IV. *Levriou hag ijnou-kaer.* — Evel en amzer ar rouaned gwechall, ar venec'h a gavas aes-tre an tu d'ober yad d'ar vro. An duked a roas arc'hant d'ezo, ha gand an arc'hant man ar venec'h o deus savet an ilizou hag ar chapelioù-ze n'o deus ket o far dre ar bed, hag a ra hirio c'hoaz brud vat Breiz e pep lec'h. Manatioù a zavjont ivez. Hag er manatioù, skoliou eus an dibab. Er c'houenchou e veze savet ha skrivet levriou kaer. Diskrivet e veze ivez levriou gwella, talvoudusa, tud desket ar broiou all.

Ar venec'h, dre o skridou, eo o deus digaset beteg-ennomp taolioù-meur hon tadou.

V. *Drammvell (coup-d'œil).* — Azaleg Alan Varvek betek brezel an diou Janed, ar peoc'h a renas dre ar vro. Ar gurunenn a zik ne jomas ket ato gand ar memez rumm. Mont a reas war benn duked Roazon, eur c'hont bennak a Gerne, pe zoken war benn prinsed hag n'oant ket eus hor gouenn: Saozon pe C'hallaoued.

Met goude maro Yann III e tigoras eur brezel hag a badas pell: brezel herez Breiz. Doareou ar vro a zeuas da veza truezus meurbet. A drugarez Doue, Yann V a zigasas gwellaenn e pep tra. Hini ebet etouez hon duked n'eo bet par d'an duk-man. Pinvidik-mor e teuas hor bro da veza. Ar Vretoned a rae neuze kemwerz gand ar bed holl, koulz laret; hol listri a veze kavet e bro Zaos, e broiou ar Sav-heol, hag e broiou an Hanter-noz.

Lien Breiz, dreist holl, en amzer an duk Fransez II a veze goulnnet a bep tu.

Seiz a veze kempennet e Naoned, e Vitre; e Roazon e veze graet pallennoù eus ar re gaera.

Ed ha loened a veze kaset d'ar broiou all.

Hol lezennou n'oa ket reisoc'h egeto. Hag er bloavez 1484, e kaver tiez-moulererez e Breiz. Netra n'hell diskouez skleroc'h doareou ar vro en amzer-man eget komzou brudet unan eus hon danevellourien. « E Breiz, emezan, e kaver listri arc'hant beteg en tiegeziou bihana ».

Met siouaz! Fransez II a voe trec'het gand ar C'hallaoued e Sant Albin an Hiliber er bloaz 1488. Anna, e-verb'h, — yaouankig c'hoaz — a boanias gwella ma c'hellas; kaer he devoe stourm, enebi, plega a rankas... Difenn a reas da vihana gwiriou ar vro, dre eun emgleo brudet. Ar C'hallaoued o deus, anat eo, ankounac'haet divizou an emgleo-man, ha gwaz eo d'hor paour kez bro! Met daoust ha n'ema ket ar Vretoned o vont da zihuna eus ar c'houesk re hir o deus graet? Pedomp, poaniomp ha Doue ra viro Breiz da virviken!

ANNA SEVELLEC.

Douarnenez.



Plugüen war bez unan eus he bugale

(*Pluyeffann*)

Er bloaz koz, epad an Eost, eo maro e Parrez Plugüen, tost da Gemper, Henri Coadou eus ar « Weenn Dero » o leusket war e lerc'h eun intanvez ha dek krouadur; Unan anezo zo beleg. — Eur bobl diniver eus Plugüen ho tro war dro a zeuas d'ober kanv d'an hini a oa bet eur c'hristen kalonek, eun tad tener, eur mear karet ha doujet gant an holl. Setu amañ eur werz savet d'ezan.

I

Kanv ! tud Plugüen ! Kanv ! Tud Plugüen !
 C'houi a zo er parkeier
 C'houi a zo en ho tier
 Selaouit!... Kleout a rit son an tremen
 Kleaut a rit kleier Sant-Keon (1)
 E kreiz an eost e kreiz an hanv
 O daou siouaz o seni kanv
 Da wella den a oa er Vro:
 Henri Coadou « ar Weenn-Dero » (2)
 Lammet eo bet gant ar maro.
 Deus a douez e gerent
 Abred ar mintin mian.
 Mignoned, evitan
 Lavaromp ar bedenn,
 Kanv ! Tud Plugüen ! Kanv ! Tud Plugüen !

II

O Mamm ! O Mamm dener !
 Ho samm a zo pounner !
 Kollet ganoc'h siouas ar penn
 Ar vrec'h hag ar galon
 A gavec'h enno sklerijenn
 Sikour ha karantez gwirion
 Gwel't dirazoc'h hep tad ebet
 Dek krouadur, bugale geiz
 Gwel't eus an ti an eurusted
 O tec'hout evelse eun deiz
 War ho tiouskoaz, ô Intanvez
 Piou lavaro pebez pouez !
 Hirr amzer c'hoaz ho taoulagad
 Dre an ti a glasko dalc'h mat
 Skeudenn ho pried.
 Deus ho spered

(1) Patron Plugüen.

(2) An ti bras ma oa chom ennan an Ao. Coadou — fromajeri brudet — ostaliri ha ti-kemverzi.

E zont ne dee'ho kuit biken...
 E gador vo miret d'ezan
 E tal an dôl, dirag an tan
 Ha pa deuy pred ar bedenn
 Re, an ti a dôlo
 War ar gador goullo
 Eur banne dour benniget
 Abarz mont da gousket.

III

Bihan an Iliz, leun ar vered
 Kemend a dud zo diredet
 Deus kement ti eus Plugüen
 Deus kemend parrez tro war dro
 Da heuilh Henri ar Weenn-Dero
 D'e heuilh tre beteg penn e hent
 Beteg an douar benniget
 Ma tiskuzo ennan bepred.
 Deuet int gant o fedennou mat
 Ha kalz an dour n'o daoulagad
 Tregont beteg e harz ar bez.
 Ha dirazo holl, eo savet.
 Eun den koz a ziwar ar mez
 « Hag eur brezegenn en deus graet ».

IV

Henri baour, ma mignoun
 Selaouit c'hoaz ac'hanoun
 Arok ma vo laket ar maen warnoc'h:
 Kenavo c'hoaz a laran d'eoc'h
 Hag ar barrez a bez
 Aman dre va mouez
 E tal ho pez
 A lavar d'eoc'h kenavo
 Da n'em welet er gwir Vro
 Aze dirag Iliz Sant-Keon,
 Diskuizit breman, ma mignon.
 Na ni a garie en e di
 Kana hon daou, ha pedi
 Da zul d'an oferenn-bred
 Breman 'teun d'ar Vered.
 Da bedi 'n ho kichen
 Pa n'hellomp kana ken.
 Hag en eur dremen
 Dirag an dôlenn-vaen savet
 En envor eus ar zoudarded
 Soudarded Plugüen
 Kouezet du-ze war an dachenn
 O stourm ker prim ouz an estren
 Ne zispartin hoc'h ano morse
 Diouz hini ar Verzerien-se.

Ar mear en deus graet sevel
 Eun dra ker kaer, arôk mervel,
 Evit e genvroiz maro
 O tifenn buhez ar Vro.
 A jomo e envor en hor c'haloun
 Evel o anoiou skrivet doun.
 Henri, dresa den a oa da gaout;
 E penn eun ti liag e penn eur barrez
 Gwella tad, gwella renour a c'heller gwelout
 Kenavo! Kenavo! An dervez
 M'en em gavo, bodet, en nenv da virviken
 Holl dud vat Plugüen P. RRE URET *eus Plugüen*
rhom is called "Boken"

KELEIER AR MIZ

Bodadeg ar yezou e Paris

Ouspenn tregont yez dishenvel a gomzer e Frans, met betek hen, n'eus nemed ar galleg hag a vefe desket er skoliou; difennourien an tregont yez graet ruz warno a zo en em vodet e Paris d'an 22 eus ar miz tremen. An A. Yann Richepin, eus an Akademi C'hallek a oa en o fenn; an A. Markiz de l'Estourbeillon eo a gomzas evid ar brezoneg. A-raok kloza o badadeg o deus graet ar gou-lenn-man ha kaset anezan raktat da Rener bras an Des-kadurez: « *Le Congrès des langues et dialectes locaux émet le vœu et demande que soit faite, à tous les degrés de l'Enseignement public, l'utilisation rationnelle de nos idiomes locaux pour l'enseignement du français* ».

Gedomp breman petra lavaro ar ministr; met arabad eo gortoz kalz a dra digantan; e Paris ne ouezer ket rei; e Paris ne ouezer nemet kemeret.

Bretoned Tours

Bretoned Tours, renet gant hor mignon an A. Perquis, o deus graet er goanv tremen eur gouel kaer en enor da Vreiz ha roet prizioù d'ar vugale a ouie gwella ar brezo-neg.

Priz bras a enor. — Gounezet gant Gwillou Orellou, 11 vloaz evit beza gouezet komz, lenn ha skriva e bre-zoneg. Warlene ar pôtrig-ze ne ouie na lenn, na skriva e vrezoneg: poagnet en deus, *hag e-unan, hep mestr ebet* en deus desket lenn ha skriva.

Kenta priz, Korantin ar Gall, 11 vloaz;
 Eil priz, Anna ar Gall, 9 vloaz.

Istor Breiz. — Priz bras a enor: Gwillou Orellou.
 Kenta priz: Fr. Lennon.
 Eil priz: Simona Gourmelin ha Yann Perquis.
 Trede priz: Fr. Drougard.
 Pevare priz: C. ar Gall.

« FOI ET BRETAGNE »

Ar brezoneg e Breiz-Uhel

Breiz-Uhel he deus ivez eur c'hannad da gas war 'rôk labour ar *Bleun-Brug*. Savet breman 'zo daou vloaz e miz genver 1924, gant an A. Poisson, *Foi et Bretagne* a oa cho-met hep bezan moulet abaoe miz ebrel diwezan, da c'hortoz ma teuje d'e harpan ar *Bleun-Brug* astennet betek Breiz-Uhel, Breiz-Uhel he deus hirio he Bureo ar *Bleun-Brug* ha, war an dro gantan, setu ma 'n em dis-kouez a-nevez *Foi et Bretagne*, kresket ha kennerzet, moulet breman, war 16 pajenn hag eur golo kalet d'ezi evel da *Feiz ha Breiz*.

Ar skrivagnerien genta, en em gavo adarre, ha re neve a deuio war o zikour, na pa ne ve ken nemet bleunbru-gerien Breiz-Uhel.

O rener, an Ao. Havard, person ar zoudarded e St-Malo, a ro, vit an dro genta, eur skouer hag a dalvez beza dis-klêriet.

E bennad kenta e *Foi et Bretagne*, a zo skrivet e bre-zoneg. Ar brezoneg skrivet gant eur Breton eus Sant-Malo? Ya, karantez ar vro c'hinidik en deus grêt ar bur-zud-ze. Kaeroc'h zo; an Ao. Havard en deus kavet war e hent *Breiz-Uheliz* hag o deus heuilhet e skouer. Ar bre-zoneg a zo skrivet breman gant meur a Vreton eus Roazon, kloer, beleien, tud yaouank!...

Bez 'ez eus hag a lavaro: Hag e *servij* da betfa ze d'ezo?!... — Evel pa ne vefe mat ar brezoneg nemet da renti *servij*, da c'houlah e hent pe da werza spilhou war ar meaz! An dud-man, ha setu ar gentel a roont d'eomp, o deus desket ar brezoneg abalamour d'ezan e-unan, aba-lamour m'eo yez o bro ha ma n'houllont ket hiviziken bezan galvet « sot Breton ». Ha tud zo hag a lavaro adarre: Ha da betra dere'hel kement-ze d'o bro Breiz!

Ar re o deus c'hoant da vezan sklêrijennet war gement-ze ha ne garont ket ober evel Pilat, gwechall, hag a dec'he kuit arôk ar respont, n'o deus nemet eun dra d'ober, kemer koumanant da *Foi et Bretagne*.

Niverenn I *FOI & BRETAGNE*: Ce que nous sommes, ce que nous voulons. — *Le Bleun-Brug, Penn-kalet*. — D'hor c'henvroiz a Vreiz-Izel, *G. Havard*. — Pourquoi il faut aimer la Bretagne, *A. de Dieuleveult*. — Aux anciens lecteurs de F. et B., *H. P.* — *Chroneque économique, H. Quilgars*. — *L'art celtique, James Bouillé*.



I. — RESPONCHOU DIVINADENNOU MIZ CHOUEVRER

I. — Eur trebez. II. — Soubenn ar c'hig. — III. Penn daou-
lin-an ozac'h ha fri ar c'hi. IV. — Eur strouezenn. V. — Diou
gistinenn.

II. — O DEUS GOUNEZET PRIZIOU TRI MIZ DIVEZA
AR BLOAZ TREMEN

Theresa an Aot, Plouider.
Mari ar Briz, Gouesnou.
Bugel Breiz, Gwitalmeze.
Yann Cadiou, Kastell-Paol.
Mari ar Gall, Plougastell.
J. Kermarrec, Sant-Divy.
A. L. Sant-Divy.
Divy Mao, Sant-Divy.
Visant Prigent, Kastell-Paol.
Fransiz Salaün, an Trehou.

F. M. Sparfel, Kastell-Paol.
Josephina Tonnard, Sant-The-
gonnec.
Soaz Creignou, Cleder.
Louis Diquelou, Plomeür.
Yann Mer, Guiclan.
Saik Palut, Gwitevede.
Pol Pasquet, Kastell-Paol.
J.-M. Pichon, Gwitevede.

III. — DIVINADENNOU MIZ MEURZ

I. — Pe lec'h vez ar Pab pa vez kuzet an heol?

20 p. ar r. *Digaset gand an I. Terrom, Kastell Aulnoy,
Coulommiers.*

II. — Unan o redet dre an hent

N'en deus na daoulagad na dent.

20 p. ar r. *Digaset gand eur plac'h yaouank kez eus
a Gonk Leon.*

III. — Prest d'in-me da dra douzet,

Da lakât va loen blevek

Ha me raio d'it tri dervez pleget.

20 p. ar r. *Digaset gand V. L. V., Sant-Nic.*

IV. — Lakit eul lizerenn e lec'h pep kroaz ha savit tri ger
hag a lennoc'h koulz eus a gleiz da zehou evêl eus an nech
d'an traon.

† † † Me eo penn Kolas

† † † Etre ho pleo hag ho taoulagad emañoun.

† † † † Eun aneval talvoudek oun

† † † † Gwechall e veze gwelet ar rouanez enni.

† † † Me eo lost ar gizeg.

V. — N'en em eus nemet lagadou

hag e rar' tro ar parkou.

20 p. ar r. *Digaset gand J. Goasduff, Kersaint.*

*Digas ar responchon hag an divinadennoù nevez a gorfet a-
benn ar 25 eus ar miz da : M. le Directeur du « Feiz ha Breiz »,
Plouguerneau (Finistère).*

Feiz ha Breiz

HA KROAZ AR VRETONED

KELAOUENN VIZIEK GANT SKEUDENNOU

Relijion — Istor Breiz — Marvailhou — Gwerziou
ha Soniou — Buhez ar Vro

RÉDACTION

J.-M. PÉRROT, Plouguerneau (F^{re}) | Y. LE MOAL, Coadout, p^r Guingamp

ADMINISTRATION
du FEIZ HA BREIZ :
FR. GEORGELIN,
Brest — 4, rue du Château — Brest
c/c 44-40 RENNES

ADMINISTRATION
du *Bleun-Brug* et de l'*Emgleo Sant Iluz*
Yv. DREZEN,
BREST — 4, rue du Château — BRES
c/c 6238 RENNES

ABONNEMENTS INDIVIDUELS
« FEIZ HA BREIZ » et « KORN-BOUD »
Bretagne 10 f. l'an
France 11 f. l'an
Etranger 12 f. l'an
Abonnements collectifs
Feiz ha Breiz (seul)
(à partir de 5 exempl.) 6 f. l'an

PUBLICITE
Toutes les insertions sont faites
à l'année
Une page entière 300 fr.
Une demi-page 175 fr.
Un quart de page 100 fr.

TAOLENN AR MIZ. — Da zeiz a deul Y.-M. PÉRROT. —
Aour, — paper, — ludu! E. A. M. — Tristidigez ar
C'helt, Y.-P. CALLOC'H. — Eur c'hlenved nevez, AR
BALEER. — Lik, laik, J. U. — Evit ar vugalligou, F.
M. — An Tad Penfeuntieniou, G. P. — An tri breur,
ALBAN AR MILINER. — Da Wener ar Groaz, F. M. —
Roue al Laz, D. N. D. — Krouadur Athên, C. C. C.
— Kerne, F. M. — Labouriou ar merc'hed wardro
an ti, TINTIN ANNA. — Keleier ar miz. — Divina-
dennoù.

SULIOU HA GOUELIOU MIZ EBREL

4 a viz Ebrel. — Sul Fask H. Z. J. K., brasa gouel a
zo edoug ar bloaz kristen.
5 a viz Ebrel. — Lun Fask. — Gouel devoision.
6 a viz Ebrel. — Meurz Fask. — Gouel devoision.
11 a viz Ebrel. — Sul Fask bihan.
18 a viz Ebrel. — Eil sul goude Fask.
25 a viz Ebrel. — Gouel Sant Mark, Avieler. A-raok an ofe-
renn, prosesion evit tenna bennoz Doue
war madou an douar.

Da zeiz a deu !

Klevet em eus kleier Pask, pa deu an nenv da bokat d'an douar, o kana ker sklintin ha kel laouen, a-zioc'h ar mêziou alaouret:

— Meuleudi da Zoue,
a oar trei ker brao hon daerou e levenez,
Hag hon tenvalijenn e sklêrder,
D'ezan ha d'ezan hepken, Alleluia!

Klevet em eus ar vugaligou vihan, gant o mouezion lirzin, henvel ouz re an elez, o lakât an ilizou da dregerni:

— Na pebez dudiou,
A gav an eneou,
Pa vezont e Doue,
ha pa vez o Roue;

An holl eledigou
War o askelligou,
kel laouenn ker rubenn,
A nij flour dreist o fenn.

A nij flour hag a gan,
Evel eun hed gwenan
En eur parkad bleuniou
C'houez vat gant o deliou!

Ya! e gwirionez, pep tra a deu da zével ha da advleunia gand an nevez amzer-man: bleun an douar ha bleun an nenv; bleun ar c'honfou ha bleun an eneou; an traou a vev, holl gwitibunan, a venn sevel ha digeri o deliou da deurel o c'houez vat hag o gened war an hent a die heul an Aotrou Doue!

*Dies venit, dies tua,
In qua reflorent omnia !*

Ar boblou a zo eun tamm buhez bennak enno c'hoaz daoust ha sevel a raint ivez evel an traou all, an eil goude eben, da vale war an hent laouen merket d'ezo gant biz an hini o c'hrouas?

**

Er Bern-Tiez e oa brao beva gwechall; ne veze trouz ebet etre an dud; emgleo vat a oa etre an holl bennoutiege; al labouriou brasa a veze graet e boutin ha goudeze pep hini a en em jache evel ma kare; an holl a c'helle ober o zreuz ha d'ar zul goude ar gousperou e oa eun dudi en em gaout e kreiz ar geriadenn ha gwelet

peger brao e ouie ar yaouankiz en em zidui, war ar plaskêr; dindan daoulagad ar re goz; met an traou gwella zoken ne badont ket atao.

Eun dervez, an Aotrou Fransez, ozac'h Kreiz-Kêr, a glaskaz ober e vestr da holl ezec'h ar Bern-Tiez: « Betekhen, emezan; omp bet aet braoik en-dro, met gouest omp da vont kaiz gwelloc'h c'hoaz ma kirit ober diouzin! »

« Marteze a-walc'h avat, a lavaras Yvon, ozac'h an Tiouz-Traon, eo gwir ar pez a lavar Fransez! » ha Fransez a voe lezet da ober e renkou.

Met ober a reas kement e renkou ma n'oad ket ken evit gwerza eun tamm amann eus an ti, na finval eur garrigellad deil eus ar bern, hep goulenn e asant.

Gouzout a ranke penaos e veze savet, gwisket ha skoliet ar vugale; eun torpenn oa.

Petra en em gavas?

An holl a gemeras kas outan hag a gasas anezan da zutal da Venez Are! N'oa ket re abred.

**

Setu, eun tamm, ar skeudenn eus ar pez a dremen etre Breiz hag ar Frans en deiz a hizio! Re, en holl, he deus grêt houman he renkou e Breiz: deuet oar da skuiza ganti ha ne 'z ear ket a-dre he c'hein d'hen anzav outi; hag a hent all Breiz n'he deus ket a c'hoant da vervel c'hoaz! Youl he deus da welet he bleuniou o tigeri adarre ouz heol klouar an nevez amzer; gouest eo d'en em glevet gant he amezeien, pa vo derveziou bras da ober, met ne fell ket d'ezi beza hualet ken: bras a-walc'h eo da c'houzout petra he deus da ober bemdez!

Klevet a ra an Alzas o youc'hal:

Nous ne demandons pas la séparation de la France, ou la neutralité pour notre pays, qui impliquerait au préalable la séparation de la France, mais notre ancienne autonomie, telle que les Français l'ont trouvée en novembre 1918, mais qu'ils se sont hâtés de saboter de fond en comble.

Je ne me laisserai pas opposer l'argument que la Constitution de la République, une et indivisible, ne permet pas de donner suite à notre revendication.

La France modifiera sa Constitution en conséquence pour nous permettre d'y vivre comme nous l'entendons.

C'est à prendre ou à laisser.

La population d'Alsace-Lorraine n'est pas une chose dont on dispose selon son bon plaisir. Vous n'ignorez pas que les minorités nationales ont des droits, et qu'il existe un tribunal où elles peuvent les faire valoir.

Eh bien, le cas échéant, on y aura recours.

Ce n'est pas la création d'un sous-secrétariat spé-

cial pour l'Alsace-Lorraine à Paris, qui mettra fin au mouvement autonomiste chez nous, comme le propose un sénateur bas-rhinois, qui voit avec effroi le gouffre béant devant lui, mais qu'il a aidé à creuser en cachant trop longtemps à la France l'état d'esprit des Alsaciens-Lorrains, et en lui faisant croire que le retour pur et simple à la France avait comblé leurs désirs, et que c'est par gaité de cœur qu'ils avaient sacrifié leur indépendance.

Nous la redemandons, cette indépendance, à laquelle d'ailleurs la population d'Alsace-Lorraine n'a jamais renoncé. Nous voulons que le siège de notre gouvernement soit Strasbourg, la capitale de notre pays, et que nous nous y gouvernions nous-mêmes, comme nous l'avons fait avant notre retour à la France.

Hag o klevet mouez krenv Alzasiz o tregerni eus an eil penn d'egile d'ar bed, e sav ivez, en he sav, evit beza krenfoc'h a-ze da youc'hal e skouarn ar re a garfe he gwaska edoug ar c'hantevjou da zont, evel m'o deus grêt epad ar seiz ugent vloaz diveza tremenet:

« Ni, ne fell ket d'eomp ken beza gouarnet gant diavezidi; ni c'houlenn beza mistri en hor bro; ni fell d'eomp e vefe hor gouarnamant e Roazoun, kêr-benn hor bro; ni fell d'eomp beza lezet d'en em c'houarn hon-unan evel ma ouïemp hen ober, brao bras, a drugarez Doue, a-raok m'oa unanet hor Breiz gand ar Frans; ni ne fell ket d'eomp mervel; ni fell d'eomp advleunia c'hoaz: Breiz da virviken! Goanv ar boblou, ivez, zo tremenet, Alleluia! »

Y.-M. PERROT.

**Feiz ha Breiz hiviziken
a vo gwerzet 12 gwenneq an niverenn**

Ober a rankomp evel ma ra an holl gazetennou, met m'ho peus c'hoant da c'houzout peger marc'had mat eo c'hoaz Feiz ha Breiz, daoust m'eo keraet eus a zaou wenneg azalek ar miz-man, it, da eur stal bennak, da brena paper gwenn: ni, hag a rank paea ker ar voulerien da zua hor paper, a roio, daoust da-ze, ouz ar memez priz, kement a baper moulet d'eoc'h hag a baper gwenn ho pezo digand ar marc'hadour!

**Aour,
— paper,
— ludu!**

II

Ez eo gouzout, diouz an doare ma en em gemer ar skipailh o deus gallet, dre laer, 'n em gaout e penn ar vro, penôs e fell d'ezo e vefe, en dro-man, ar c'hrog diweza etrezo hag an dud a urz. Frommus eo pa zeller, an neb en deus daoulagad da welet! Diouz tu ar Relijion, diouz tu an Tiegez, diouz tu ar Madou, diouz tu ar Skol, emañt o starda al liammou a dle o lakaat da vestr warnomp, hep distro ebet ken. Setu perak e kaver, e pep lec'h, tud heb enor na koustians hag o deus marc'had grêt ganto da veza o mevelien, o spierien, a-wel d'an holl. Aon ebet ken: an trec'h, war o meno, a zo gant an dizurz: « Bezomp eta, emezo, tud a zizurz ha youc'homp a-bouez penn: Brevet an dizurz! » E skeud an dizurz-ze, emañt e zonzj, darn, en em venji, darn all, laerez, darn all ober ankounac'haat o amzer dremenet... Sellit ervad endro d'eoc'h ha gwelit piou a zav e benn hag a c'hourin, pa glev du-hont, warzu Pariz, strakadennou evel re eun ti o koueza en e houll; aze breman eo anaout piou eo pep hini.

Ar c'hrog diveza eo! Eskibien Frans hag e par o lagad pelloc'h eget hon hini o deus sonet ar c'hloc'h-galv, breman 'z eus bloaz, ha pedet an dud a urz d'en em voda, evel breman 'z eus daouzek vloaz, pa voe galvet an holl da zifenn ar Vro ha da vezan soudard. Soudarded eo a vod ivez an « Union catholique » hag ez-eün d'ezo ez eus eun arme all, gwasoc'h eegt arme ar Boched, o vezan m'eman en hon touez ha m'eman gouarnamant ar Vro a-du ganti.

Tud a zo hag a vousec'hoarz, marteze, pa vez komzet d'ezo eus an enebourien nevez-ze a zo en o c'hichen, e toull o dor, ha ne c'hedont nemet an taol sut hag a roio ar brall d'ezo da vale hervez o c'hoant. Diouz ma lavar eur skrivagner hag en deus studiet piz ar vuhez er c'hèriou bras, — e Pariz, ha wardro, ez eus eur milion a dud, Kabled, Arabed, diavezidi betek eus an Azi, eus ar Chin, tud gouez, hag a zo, evel ma lavaren d'eoc'h, o c'hedal ma sono an eur evito... Neuze hon bro a deufe da veza eun eil Rusi... An torfejou ar spontusa a c'hoarvezfe e pep lec'h war an dro; ar Frans a ziskouezfe d'ar bed eun dôlenn henvel ouz an hini a weler awechou en eun tiegez hag ez eus savet ennan, etre kerent ha bugale, frenz, dismantr, lazadeg!...

Doue ra bellaio ar walenn, n'eo ket gwir? D'eomp ivez d'ober diouz hor gwella evit he fellaat!

Aman, e Breiz, n'heller ket lavaret n'o deus ket an dud savet eun tammig o skouarn, a drugarez d'an aotronez. Eskibien. Kemper, ar Folgoat, Landerne, o deus gwelet, war o zachennou, Bretoned a vil-vern, pôtreu dispouron, hag elec'h ma kerzint, arabad e vo da gefiou ifern seurt ma oa, d'an 28 a viz c'houevrer, e Landerne, dislonket gant flêriusa toullou a zo er vro, 'n em diskouez da glask ober o reuz.

**

Tremenomp war ze holl... Lakomp e vefe bet eun taol strap ha mouget ar Revolution. Ha goude? Ne vo ket a-walc'h, marvat, skarza ar Vro diouz ar binim a zo bet digaset aman, da heul ar « C'hartel » a bevar c'horn ar bed; — ne vo ket a-walc'h lakaat pôtreu ar « C'hartel » en o renk, red e vo 'n em gemer diouz ma n'hellfont ket ken lakaat o zroad er pal da noazout d'eomp. Hogen, sellit hag adsellit, pouezit hag adpouezit! Kement-se na vo ket harzet da c'hoarvezout a-nevez nemet ha chenchet e vefe penn d'ar vaz, adnevezet stad ar Vro, adc'hrêt Reizadur (Constitution) ar Vro. Lennit an tammig galleg a zo aman warlerc'h: « Regardez autour de vous et dites-moi, si dans vos connaissances vous n'apercevez pas plusieurs braves gens qui ont voté pour le Cartel, simplement par imbécillité naturelle, par stupidité politique, par inamabilité fonctionnaires mal payés, jaloux, aveugles; commerçants aigris, absurdes; bourgeois anti-cléricaux, butés. Ils gémissent aujourd'hui à fendre l'âme. Vous les croyez convertis, à tout le moins avertis? Quelle erreur!!.. Demain, ces mêmes braves gens, ces mêmes splendides abrutis voteront à tour de bras pour le Surcartel des Sargauches, qui leur promettrait que leur voisin paierait leurs impôts. Le Français moyen n'a pas de sens politique. Depuis que le suffrage universel sévit chez nous, nos grands intérêts périssent les uns après les autres... »

An tòn a zo garo; ar zôn, avat, a zo kalz a wir enni. E gwirionez, gant ar c'hoariell-ze, ar « Suffrage universel » laket etre o daouarn, evel eur gontell etre daouarn bugale, an dud o deus en em hualet o-unan. Brao brao, flourik flourik, en eur ober stadig d'ezo hag allazig, eur bagad tud a bep doare, — nemet kristenien n'ez int ket! — o deus grêt d'ezo sina o-unan e vije mouget ar relijion er Vro, kemeret diganto o bugale, gwasket kement gwir o doa ha ma vijent, kaeroc'h c'hoaz, laket e noaz da vale. Ha ne gleven ket, n'eus ket c'hoaz pell, eul labourer o lavaret ne oa ket da glemm diwarbenn an tailhou a baer? An den-ze a oa dihun mat, koulskoude, met e spered a oa kousket; strobinnellet e oa.

Ac'hanta, lakit ar votadeg, en deiz warlerc'h ma vo bet an trec'h ganeomp war an Dispac'h, hag e weloc'h adarre voti 'vit ar re a zo sacha hirio bec'h war ar vro, war zigarez m'o do gouezet, dre ar c'hazetennou, rei da gredi eo ar

Jeuzisted hag ar veleien eo a vo bet kiriek d'ar reuz!!!... Ha setu ar c'harr er skoasell a-nevez!... Lakomp e vefe mat ar votadeg; mar chom ar Vro war he diazez koz, a-benn pevar bloaz, ar wellaenn a vo fin d'ezhi hag an traou a gouezo adarre en o c'hoch. An dra-ze a zo ken sklear ma n'ez eus ket er Frans eur gostezenn politik, mar 'z eus tamm poell ebet ganti, ha n'her gwelfe ket, ha gant pep hini anezo e teu nevezentiou da wellaat Reizadur ar Vro. Klevit an Ao. Louis Marin, prezidant ar « Fédération républicaine ». Etouéz ar gwellaennou prometet gantan, eman kement-man: « Un Statut serait donné aux citoyens, justiciables, contribuables, clients des Services de l'Etat, pour leur permettre de défendre leurs droits ». Kement-se a zo henvel-beo' ouz ar promesaou merket war bapereu ar gannaded, deiziou arak ar votadeg. — Evel Breizad eo e fell d'in kaout frankiz beva, hag am bo neuze, war ar marc'had, hag evit gwir, frankiz ar « Sitàian ». Ne fizian tamm e tra all ebet, rak ar pezh a vo roet d'in hirio a c'hello bezan tennet diganiu warc'hoaz, pa digouezo d'an Ao. Marin beza skubet gant eur c'haouad avel-gorbenn bennak. Diazez Reizadur ar Vro eo a zo red nevez? Ar relijion, zoken n'hellfe, nemet dre vuzud, goude beza adsavet ar vro gant eun taol skoaz nerzus, he derc'hell divrall, hep na ve gwel et ar Reizadur anezi. Bez ez eus reizadurioù hag a zo evel eur volod ouz an troad ha re all hag a zo evel diouaskell ouz an diouскоaz. An hini hon deus hirio a dro da veza eur volod... War ze, n'eus ken nemet eur vouez etouez an dud poellek; aihoned ar « C'hartel », hag an dud herwel, ar re-ze hepken a gav ez a mat pep tra.

Pa anzaver e vefe red, evit miret ouz ar stal da vont da stadig, gwerza ar « monopolou », e fell sonjal ez eus « monopolou », e tu-hont d'ar butun, d'an alumetez, d'ar poultr hag ar « monopolou » all-ze eo diwar goust hon frankiz spered eo e vezont maget. Pa vo ar skol etre daouarn ar gouarnamant, evel ma tigouezo, marteze, hep-dale, ne welimp ken sklerijenn ebet nemet dre ar goude, evel en e zorn. Hon buhez penn-da-benn a zuno evelse, berad ha berad, ken ma teufe evel da wir, en e genvet, ar gomz a lavare S. Pol diwarbenn an Aotrou. Doue: « Ennan hon eus ar vuhez, al lusk, ar bezan! » — Eur seurt idolatri nevez eo kement-man, ha dija eo krog mat ar wrizienn anezi en hon touez.

Hag e vo enebet ouz an droug-ze dre votadeier, a gav d'eoc'h? Dre geleñnadurez, dre brezegennou, a gav d'eoc'h? Ouspenn a zo ezom: adlakat ar bed en e ziazezh gwirion; distanka war ar frankizioù ha trei ar frankizioù-ze e lezennou. Ar frankiz n'eo ket ar c'halloud eo d'ober evel ma karer, met ar c'halloud da heuilh pep hini, hervez e vroadelez, e stad, al lezenn merket d'ezan. Bez ez eus lezennou natur vit an Tiegez, — vit ar Briedelez, —

vit ar berc'heniez, — vit ar vroadelezh; — ac'hanta, ar frankiz eo' kaout gallout da heuilh al lezennou-ze. Hogen, hervez spered diaoulek an Dispac'h, ar frankiz, (pe al « Liberté », evel ma lavaront), eo war an dismantrou anezo eo e tle sevel; an den ne vezo « libr' » nemet pa vo torret evitan an holl lezennou-ze!! — Monet a reomp varzu eno! Met evel eun den ha, pa vez en em gavet war ribl an islonk, a dec'h gant ar spont war e giz ken n'en devez kuitaet penn-da-benn an hent a gas d'an islonk-ze, evelse, distroomp ivez, hep chom da varc'hata, betek elec'h ma oamp pa hon doa kuitaet an hent mat...

Dre studi, dre gomz, dre ober, pourchasomp ar gwirioneziou dianket, d'o lakaat en diazez hon ti nevez. Pell awalc'h hon deus klasket, en aner, sevel war an treaz.

E. A. M.

Tristidigez ar C'helt

Yaouankoun, n'em cus ket c'hoaz gwelet ugent hanv
An heol, tro war tro d'in, a skuilh e vannou-tan,
Ar bleun, war an avel, a zigas d'in o c'houez
Ha daoust da ze an doan eo am gwask hep paouez.
Perak 'ta? Doue 'r goar. Pa grouas ar Breton
Hen eo lakas an doan da jom en e galon.

Digouezetoun en oad ma vourrer (1) o vevan
O redek ar parkou, o c'hoari, o kanan.

En oad ha ne zonjer, nag e bez, nag e men,
Nag e ster ar vuhez ker founnus o tremen...
E kreiz va flijadur, koulskoude, doaniet on:
Doue lakas an doan e kalon ar Breton.

An dud, tro-war-dro d'in, a c'hoarz d'an nevez-hanv:
An eostig war ar barr a lar e zon vravan,
Holl an evned a strew o foziou skittr en êr;
Met me pa gemeran va zelennig zister
Ne ran met hirvoudi, ne ouezan met eun ton:
Doue ' lakas an doan e kalon ar breton.

Yaouankiz ha frankiz, heol an nenv, bleun ar prad
Am eus hag a dlefe, hep mar, va Jaouennât
Petra zo red muioc'h 'vit ma vezin eurus?
Ar bed-man, daoust da-ze, n'her c'havan ket bourrus.
Eun dra bennak atao zo diank d'am c'halon
Doue ' lakas an doan e kalon ar breton.

O va Doue ar pez a vank d'am c'hoantou-den
C'houi eo! Rak er bed-man ne reomp nemet tremen
Rak n'eo ket evitan 'ma graet hor chalonou...
Met pa welimp o tont karrig gwenn an Ankou
Vit hon dougen du-hont, ganeoc'h barz en nenv don
Neuze 'vo levenez e kalon ar breton? Y.-P. CALLOC'H.

(1) Boarra : se plaisir. Bourrus : agréable.

Ar c'hlenved nevez : Bosenn ar Rusi

Forz pelec'h e valeit, ne glevit dre holl nemet an hevelep mouez o sevel, dreist-holl war ar meaz: « Oh! nag eo deut an dud da vezan digar! Arabad da zaou zen en em glevet mat ken, nemet hag evit ober droug e vefe! — Du-man, eme unan, ez eus pevar di er gêriadenn hag an dud enno n'en em welont ket ken! — Du-man, eme eun all, ez eus eur gêriadenn vras; bemdeiz e vez tabut ha trouz etre amezeien, ha pa ne vez ket a drouz, e vez maro pep tra! »

An dud a zo speg enno holl, tamm pe damm, ar c'hlenved nevez, bosenn ar Rusi a lak terzienn, dreist-holl e gwad an dud dister, hag a ra d'ezo lavaret, evel eun den tec'het e spered digantan, pa vez en e varrad follentez: « Me a zo kement ha forz piouz! Me zo, kemend hag eun all, mat da vezan depute, m'êr, kuzulier!... Me a dleje ive bezan perc'hen, kaout lod eus traou heman pe traou hen-hont! Hennez en deus re evit eun den e-unan! »

Kaera tra zo eo penôs sell ar skriger-dent-man, ne zavo kammed betek an dud digoustians ha pinvidik-mor eman ar vro dindan galloud o arc'hant; war e amezeg nesa lan hini eman e zell, ha n'ez a ket pelloc'h; war e amezeg hag en deus dek bioc'h hag hen n'en deus nemet unan; — war e amezeg hag en deus parkou muioc'h egetan; — war e amezeg hag en deuz eun ti kempen hag hen n'en deus nemet eur fothkenn.

N'eus ket pell, e kleven eur skriger-dent evelse o lavaret: « Hen-ha-hen en deus prenet teir vèreri! Dleout a raje bezan difennet prena muioc'h eget unan! »

Lavarit d'eun den evelse penôs hep dale, marteze, en em gavo koulz hag e ranko ar perc'henn diou vèreri hag ar perc'henn ter ha peder adgwerza evit paea an tailhou pounner a gouezo war-ar vro, ha penôs e vo gwelet neuze ar mèreriou, dre bemp ha dre dek, o tremen etre daouarn tud ha n'o deus nag hon gwad en hor gwazied, — diavezidi — nag hor c'hredennou en o c'hreiz — tud difeiz; hag ar skriger-dent-man a c'hoarzo hag a lavaro, alies a vouez huel: « Forz gant piou, betek ne jomint ket gant hennez! » — « Hennez » a zo penn-tiegezh eveltan, labourer eveltan, ganet en hevelep parrez gantan; grêt en deus, marteze, e baskou skoaz ouz skoaz gantan; bet int, marteze, o-daou mignoned, kevelerien; marteze, zoken, int kerent... Mat! ar skriger-dent n'ez eus den hag en dije mui a zroug outan eget ouz « hennez! »

Setu eno ar c'hlenved nevez, bosenn ar Rusi, digaset d'ar Frans, ya, pa zo bet digoret dor d'ez gant ar c'houarnamant milliget a zo o ren ar vro... d'an islonk!

Ni, hag hon deus bet gallet evêsaat, betek hen, ouz ar c'hlenved spegus, arabad d'eomp rei tu d'ezan da staga warnomp. Bale dinec'h, dispont, didrous, sonn ar penn,

eün ar zellou, tec'hel rak ar c'honchou kasaüs a vez kaset da vale gant tud gwarizius, abalamour « lakat jeu », evel ma lavaront, ha trêmen hep kaout droug ouz den. En doare-zé, d'an hini en do droug ouzomp, warnezan, e-unan e koueza e zroug, abred pe ziveza. Ar *balear*.

Lik, laik

Setu aze eur gêr hag a vez alies klevet hano anezan en hor bro, ha dreist-holl abaoe eun nebeut bloaveziou. « Ni a zo laiked! Enor d'al laiked! »

Ar ger a zo koz goulskoude, anavezet abaoe meur a gantved, abaoe m'eo deuet en hor bro ar relijion gristen. Daou rumm dud a oa hag a zo ato en Iliz; eus eun tu, ar veleien, al leaned; eus eun tu all, pobl Doue, al laiked, ar re a zo o veva er bed, n'int ket en em voestlet da Zoue dre eul le bennak. Hag an daou rumm dud-ze en em gleva mat etrezo, n'oant ket enebourien an eil d'egile. Ar veleien, al leaned a rae o labour en ilizou, er c'houentchou; al laiked a c'houlenne diganto ar gelennadurez kristen, ar zakramanchou, kement a zêlle ouz mad an ene.

« Me zo souezet, a lavare er gador-brezeg eur beleg, o klevet ken alies hano eus laik. Met, va zad ha va mamm a oa laiked; va breudeur, va nized a zo ive. C'hwil am zelaou a zo ive, ha n'oc'h ket evit-se va enebourien. Ha me n'oun ket kennebeut enebour al laiked. Eul laik a c'hell hag a dle beza eur c'hristen mat. Gourc'hemennou Doue a zo da veza heuliet gand an holl, ganeomp-ni, hon eus ar garg da brezeg d'oc'h, ha ganeoc'h ive, pobl kristen. Al laiked eo ar bobl kristen, hag a dle breman, evel gwechall, en em glevet gand ar veleien, gand o fastored ».

Setu aze ar wirionez. Met n'e ket evelse e sonj al laiked framason. Evito al laik a zo enebour Doue, enebour ar relijion, enebour ar beleg. Al laik a c'hiz nevez eo an hini en em c'houarn e-unan heb ober van gant gourc'hemennou Doue ha kelennadurez an Iliz. Hag ar pez a hanver e galleg *laïcisme* a zo eur relijion nevez savet gand ar framasoned ha skignet ganto er Frans a-bez dre o skoliou dizoue, dre o lezennou dizakr. Artikloù ar Gredo nevez o deus renket eo ar re man: « N'eus Doue ebet; ar relijion n'eo bet graet nemet evit sponta ha touella an dud; an deskadurez a zo da lakat e lec'h ar relijion; n'eus ken buhez nemet ar vuhez-man; an den a dle eta klask chom war an douar ar pella ma c'hello, ha kaout ar maia ma c'hello a blijadur ».

Ar c'houarnamant a zo laik. Petra verk ar c'homzou-ze? Siouaz! Abaoe tost da hanter-kant vloaz, en hor bro ar c'houarnamant, e lec'h lezel pep frankiz gand ar relijion, ar pez a vije talvoudus bras evid ar vro, a ra brezel d'ar relijion e pep giz, brezel d'ar relijion gatolik, rak ar Bro-

testanted hag ar Juzevien ne vezont ket heskinet; ar Vahometaned a vez graet stad outo, p'e gwir ez eus bet savet evito e Paris, gand arc'hant ar vro, eun iliz. Kounnar ar c'houarnamant a zo troet ouz ar relijion gatolik, ha pell zo e vije bet lazet, ma vefe e galloud an den diskar ar pez a zo savet hag harpet gant Doue.

En hano ar relijion laik eo bet aozet an holl lezennou graet en hon amzer. Peseurt droug a rae ar groaz er skoliou, en hospitaliou? Droug ebet; vad eo a rae. Met al laiked framason a zispilje d'ezo gwelet ar groaz dirak daoulagad ar vugale hag ar re glanv, hag o deus roet urz d'he zoler er maez. Peseurt droug a rae an aomonierien, ar veleien a veze gwechall gand ar vartoloded war al listri a vrezel? Vad a raent, o prezeg an Aviel hag o rei ar zakramanchou d'ar re o c'hoantae. Met al laiked, gand o c'houarnar ouz Doue, o deus difennet lezel beleien gand hor martoloded. Bez ez oa leaned, relijiuzed oc'h ober skol d'ar vugale, hag a rae skol vat, hag ouzpenn rei deskadurez war draou an douar, a zeske c'hoaz karet Doue ha senti ouz e lezen... « It er maez eus ar skoliou hag er maez eus ar Frans », o deus lavaret d'ezo al laiked. Ni hiviziken, ha ni hepken, eo a skolio bugale Frans hag a lakaio en o fenn ar pez o deus ezomm da anaout ».

Ha petra vo desket gand an doktored laik? Pep seurt traou, nemet ar pez talvoudusa. Evel ma lavare an aotrou Teitgen e bodadeg vras Landerne, gouzout skriva, lenn, konta, gouzout istor ar vro ha kalz a draou all c'hoaz a zo talvoudus d'eomp, micherourien ha labourerien. Met ar pez a ra e gwirionez talvoudegez an den, ha n'eo ket gouzout perak eman war an douar-man, perak e ile poania, labourat ha dreist-holl karet? Hogen, an holl draou-ze ne vezont desket nemet el levrig hantvet katekiz, ha setu perak e fell d'in kaout pep frankiz da lakat va bugale er skol a gavan mat evito. O gwiska hag o beva a ran evel ma fell d'in. Evel ma fell d'in ive, e vagin o ene.

Ar pez a c'hoanta al laiked framason eo gwaska an holl dindan o zreid, lakat an holl da blega d'ezo ha skigna e pep lec'h ar Gredo nevez, e lakat dre nerz e penn ar vugale, en desped d'o c'herent. Ar gerent, ma z'int kristen, a zo kemeret evit tud sot gand al laiked, tud n'int na din na gouest da zevl bugale. Er skol laik ar vugale a vezo dizodet, ha graet e vo anezo tud evel ma ranker kaout en deiz a hirio, da lavaret eo tud a c'hell beva hep Doue, hep relijion, n'o deus ezomm nemet eus deskadurez ar bed.

Ya, setu petra eo ar ger laik, laik evid ar framasoned eus bro Frans. Ha tud ar broiou all, ar re o deus eur spered eün ha lealded en o c'halon, a zo souezet o welet pegen diskiant eo an dud a zo e penn hor bro.

Eun Amerikan eus ar Stadou-Unanet ne gompren ket perak e klask gouarnamant Frans difenn ouz Leanezed d'en em voda evit pedi, difenn ouz bugale an Alzas deski

ar c'hatekiz er skol. Ar c'houarnamant a zo e labour reizha mat an traou, lakat urz, peoc'h er vro. Enebourien an urz, ar peoc'h eo youlou fall an den. Ar relijion, o teski d'an den beza trec'h d'e youlou ha d'e dechou fall, a ro harp d'ar c'houarnamant. An Amerikaned eus ar Stadou-Unanet a zo a du gand ar relijion, ne lakont ket a dailhou war an ilizou, ar skolioù, patronachou, rak gwelet a reont pegen talvoudus int evid ar vro, o lakat furnez e penn an dud.

Divezatoc'h fizians hon eus, gouarnamant Frans a raio dishenvel diouz hirio, pa ne vo mui framasoned o ren ar vro. Rak n'eus netra vat da c'hedal a-berz ar framasoned, dallet ma z'int gand o c'houarnar ouz Doue.

(Da gendalc'her).

J. U.

Evit ar vugaligou : katekiz bihan dizoue

Bet embannet e Kelaouenn Menec'h sant Benead « Bulletin liturgique paroissial ».

Goulenn. — Plou en deus ho krouet hag ho laket er bed?

Respount. — Tad ha mamm.

G. — D'ober petra?

R. — Evit anaout, karet, servicha ar Republik ha kaout dre-ze, takadou brao, kargou uhel, metalennoù ha rubanoù, bureoiou-butun, billheji « evit netra » war an henchou-houarn.

G. — Petra eo ar Republik?

R. — Eun intron vat a zo anezi, war he fenn eur boned-gwaz, mestrez vras war gement peuri druz, war gement dachenn vras, war gement takad aes, war gement koustianz, ha war gement frankiz.

G. — Pet Republik a zo?

R. — N'eus ha n'hell beza nemet unan, holl en eun tamm: Republik Pôted ar c'hartell.

G. — Pelec'h eman ar Republik?

R. — E pep lec'h ez ' euz ledet anezi.

G. — Pet person ez ' eus er Republik-se?

R. — Tri ferson: Blum: ar c'hosa, Herriot: ar yaouanka, ha Painlevé: spered-bras.

G. — Ha bez' ez ' euz unan trec'h d'ar re all?

R. — Nann keit ha keit int o zri.

G. — Pehini anezo a vez ar peurliesha e mesk an dud hag o klask penn outo?

R. — An eil ferson: Herriot e ano.

G. — Ha petra en deus kemeret d'ober ar vicher-se?

R. — Kalz a gof hag eun tamm mat a arc'hiant.

G. — Perak e vez Herriot an aliesha anezo etouez an dud?

R. — Evit kaout an tu d'eomp d'en em zizoher eus ar veleien hag ar re wenn, hon enebourien vras, digas peoc'h ha surentez d'hor sperejou ha dreist holl dastum d'eomp brud vat ha kemend-so, er broioù all. F. M.

An Tad Penfeunteniou

Jeneral Urz sant Fransez (1532-1595)

Eun hanter leo diouz Kastell-Paol, war hent Landivisiau, e kaver, en tu kleiz, eur maner koz, gant toennou uhel ha chiminalou bras: hennez eo maner Kermorus a oa perc'hennet gwechall gant aotroned Penfeunteniou Sibiril.

Aotroned Penfeunteniou Sibiril, eur maner ha ne jom netra 'bed ken anezan, koulz lavaret, a oa maro holl en amzer an Dukez Anna hag o danvez, dre zimezi, a oa aet gant an A. Leskelen. Ne jome ken da zougen an ano a Benfeunteniou nemed Aotroned Kermorus.

Kosa hini euz ar re-man a gaver meneg anezan er paperou koz eo Yann Benfeunteniou a zimezas er bloaz 1430 da Gatell Heussaff, hag o devoe eur mab, Guiomar, dimezet er vloaz 1461 da Olyva Kersauzon; o mab bihan Yann Benfeunteniou a zimezas er bloaz 1519 da Anna Goatkiz, eus a Gerneguès, e kichen Montroulez, nizez Philip Coatkiz, arc'heskob Tours ha kardinal Avignon ha Yann Goatkiz, eskob e Roazon ha goudeze e Landreger.

Bugale a zavias diwar an dimezi-ze; en o zouez, Yann, ar mab hena, ha Kristof unan eus ar yaouankoc'h a dle beza bet ganet, nann er bloaz 1512 evel ma lavar ar re o deus skrivet e vuhez, p'eo gwir e dud n'oant ket dimezet neuze c'hoaz, met er bloaz 1532; ganet e oa bet, nann e Penfeunteniou Sibiril, n'edo mui gand ar Benfeunteniaoued, daou c'hant vloaz a oa, met e Kermorus, e Minity Leon, demdost da dour dantelezet Kreisker, a ra d'an den hunvreal er baradoz. Yaouank oa c'hoaz pa c'hoanteas mont da veleg. Ober a eure e studi, e manati menec'h sant Fransez Kuburien e kichen Montroulez ha goudeze e Paris; eur wech doktor e tizroas adarre da Guburien; ar manati-man oa kaera hini o doa Tadou sant Fransez e Breiz; ar chapel a oa stag outan a weler c'hoaz en he sav; savet eo bet er bloaz 1519 gant Yann, beskont Leon ha Rohan; e skudenn, a weler c'hoaz war ar gwer a liou a zo a dre kein an aoter vras hag e skoued a zo livet war unan eus an treuzier. Skoued Kristof Penfeunteniou (10 barrenn, gwenn ha ruz, hep eil, *un burellé d'argent et de gueules, evel ma leverer e galleg*) a weler ivez en eur c'horn eus ar prenestr bras; Hen e-unan, da gredi eo eo reas o lakat eno, pa deuas da veza Rener manati Montroulez, pe pa voe hanvet da Rener bras holl vanatioù urz sant Fransez, e Breiz, er bloaz 1562.

An Tad Penfeunteniou a oa eur prezeger bras, ha prezeger a eure e ilizou brudet a Paris. Galvet e voe da vont da Rom da ober skol e manati an Ara-Coeli. P'en em vodas

holl venec'h sant Fransez e Valladolid, er Spagn, er bloaz 1565, e roas tro d'e vreudeur da welet peger fur, peger gouiziek ha pegen helavar oa en e gomzou. Er bloaz 1571 e voe hanvet da jeneral urz sant Fransez. Ober a eure ker mat ar peñz a oa en e garg, ma voe meulet ha karet gant Sixt V, Urban VII, Gregor XIV, Innosant IX ha Klement VIII, ar pemp Pab a wetas, e daouzek vloaz, oc'h azeza, an eil goude egile, war gador sant Per. Eur rener oa, eus an dibab, ha mat oa da vont da welet manatiou e urz evit gwelet ha miret oa enno reolenn sant Fransez ha lemmel ar plegou fall a deuer da gemeret gant an amzer, pa ne daoler ket a evez.

Pa roas an dilez eus e garg a jeneral, Gregor XIII her greas eskob hag a gasas anezan, gant al lez-ano a arc'heskob Kesaré, da c'houarn eskopti Sens, e lec'h ar c'hardinal Pelleve, a veze peurliesha o chom e Rom. Kalz vad a reas en eskopti-ze. Er bloaz 1586, e reas tro ar Flandrez o prezeg a eneb ar brotestanted hag e viras, dre brezegennou ouz eleiz a gatoliked da dec'het diwar hent ar gwir Iliz. Tud gwarisius a gemeras kas outan, o welet ar vad a rea, a damallas anezan da brezeg eur gelennadurez dishenvel diouz hini Rom hag a ziskulias anezan d'ar Pab; pa glevas an Tad Penfeunteñiou ar c'helou ez eas da Rom, er bloaz 1587; Sixt V eo a oa Pab neuze; an Tad Penfeunteñiou a yeas d'e gaout hag a ziskouezas d'anezan, gant habaskder, e oa tamallet e gaou gant e enebourien. Ar Pabed, daoust ma ne gavjont ket a dro, da ziskouez e kavent mat e gelennadurez, evel m'en doa c'hoant e rajent, a roas d'ezan testeniu sklêr hag anat eus o anaoudegez vad evid ar vad en doa graet d'an Iliz. Mervel a eure d'an oad a 63 vloaz, d'ar 26 a viz mae 1595, e manati sant Per *in Montorio*, el lec'h ma voe beziet etre an aoter vras hag ar sakreteri.

Daoust ma yeas abred eus a Vreiz, an Tad Penfeunteñiou a zo bet dizroet d'e vro meur a wech hag a labouras kalz da bellât diouz hon tud koz fals-kredennou ar brotestanted. Albert ar Braz a lavar e tiouallas dreist-holl eskopti Leon, diouz ar fals kredennou-ze o sevel en holl barreziou koulz lavaret *Breuriez ar Zakramant* en doa bet gwir da zevel e Breiz hag e Frans ha da staga outi induljansou kaer dre eul lizer skrivet d'ezan er bloaz 1577 gant ar Pab Gregor XIII.

Atao evit stourm ouz ar brotestanted e savas eul levr: *La Défense de la Foy de nos ancêtres, auquel on déclare les strastagèmes et ruses des hérétiques de nostre temps*; hervez tud gouiziek, evel ar c'hardinal Hovius, n'eus ket bet gwelloc'h eged al levr-se da viret ouz ar gaou d'enn em skigna. Kinnig a eure al levr-ze, moulet e Paris, e ti C'hloda Fremy, er bloaz 1572, d'ar c'hardinal Pelleve, arc'heskob Sens ha d'e vreur hena Yann Benfeunteñiou, aotrou Kermorus. Diskouez a ra ennan fazi bras ar bro-

testanted, a ya, pa vezont nec'het, war eur poent pe boent eus ar relijion, da gaout, nann Doktored an Iliz, met ar rouaned, pe ar brinsed, pe aotred all, ha n'o deus ket a studi a-walc'h evit beza barrek da rei sklerijenn war hevelep traou; diskouez a ra ennan an dismegans a daol an heretiked war feiz o zadou diazezet goulskoude war asant ha skiant-prena ar c'hantvejou hag an doare gouez o deus kemeret da lakat an dud, dre an dir ha dre an tan da heulia o c'helennadurez; setu aman eun nebeut linenou savet gantan, da ziskouez d'eoc'h e zoare-kriva: « *On me pardonnera si je bretonnize en mon françois, comme on excuse le grand historien latin Tite-Live, pour avoir patavinisé. Beaucoup de fidèles n'entendent pas le latin et les hérétiques n'écrivent qu'en françois pour le simple peuple. Mais on me dira icy qu'on se moquera de moy, veu qu'estant Breton bretonnant, qui ne peut qu'en forçant sa nature parler bon françois, je réponds que je n'escris point pour les doctes, ni pour apprendre à aucun parler françois, mais comme barbare aux barbares, dont j'avertis les mignons à leurs grandes chatouilleuses oreilles, qu'ils n'aient à prendre l'ennuy de lire mes livres, notre éloquence rustique est trop rude pour si délicates oreilles. Je n'escris que pour mes simples frères chrestiens, sans aucun fard ni éloquence.* »

Al levr-se a reas kalz a drouz; troet e voe e latin, e italianeg, e flamaneg hag e alamaneg koulz hag an hini a reas goudeze evit harpa hag astenn ar c'henta: « *Second livre de la défense de la foy que nos ancêtres ont eue de la présence réelle du Corps de Nostre-Seigneur Jesus-Christ au Très Saint Sacrement de l'autel.* Eun ugent levr bennak all a reas c'hoaz hag en o zouez eo red henvel e: « *Chrestienne Confutation du point d'honneur sur lequel la noblesse fonde ses monomachies et querelles* », a ginnagas, er bloaz 1568 da eun dijentil breizad, Per Boisseon, aotrou Kerouze, e Sibiril, gouarnner Montroulez, e bloaveziou diveza ar XVI^e kantv. d. — El levr-ze an Tad Penfeunteñiou a ziskouez pegen diskiant eo an emganou-se, a zave alies diwar netra, hag a rea d'an dud en em laza ha koueza, e stad a bec'hed marvel, dirag Lezvarn an Aotrou Doue.

Relegou Kristof Penfeunteñiou a zo bet tennet euz o bez er bloaz 1634 ha digaset da Vreiz ha laket e chapel maner Kervorvan, e parrez Trebabu, el lec'h m'emaint atao. Eun ni d'ezan, Tanguy Penfeunteñiou, aotrou Kervorvan, eo a reas o digas di; lakât a eure sevel eno eur bez evitan ha warnan en deus laket moula ar skrid savet gant an Tad Fransez Gonzag, jeneral urz Tadou sant Fransez evid ar bez a oa bet graet d'ezan e Rom; er skrid bez-ze, an Tad Fransez Gonzag a lavar e oa: « *Karet ha meulet gant an dud vat ha doujet gant an nevezetierien; an natur a reas anezan eur breizad, ar zantelez, eur beleg eus*

a Urz sant Fransez, ar ouiziegez eun arc'heskob eus a Gesare, hag an Ankou unan hag a zo o chom er bez-man. Kenavo, tremeniad. Ma 'z eo aet ar feunteun da hesk ha ma n'eo ket torret da zec'hed c'hoaz kea d'ar goueriou ma 'z eo e levriou hag e redo drezo an doue sklêr da virviken! »

G. P.

AN TRI BREUR

Bez e oa tri breur ha ne jome ganto goude maro o zud nemed eur c'hi, eur c'haz hag eur c'hilhog.

Gwelloc'h e oa bet traou an tiegez gwechall. Truez Doue! ar c'hlenved, ar maro ne roont ket a dro d'an dud d'en em zevel. Diskaret e oa bet hini an tri breur gant klenved ha maro o zad hag o mamm. Goude paea an die, ne jome mui ganto nemed an tri loen em eus komzet anezo.

Ne gavjont ket a fred na d'ar c'hi, na d'ar c'haz; en amzer-ze ne 'veze ket gwerzet na chas na kizier; miret a rejont ivez ar c'hilhog, e lec'h e werza, hag en hent-se o devoa pep hini e loen pa rannjont etrezo o zammig danvez.

Hag i tenna d'ar blouzenn verr hag ar c'hi kouezet gant Miliou, ar c'haz gant Meven hag ar c'hilhog gant Telau.

Hag int ha staga da vale bro evit gounid o buhez; mont a rejont da Vro-C'hall en eur rei o ger an eil d'egile da zistrei d'ar gêr goude bloaz hag eun dervez.

**

D'an dilost-hanv e tigouez Miliou en eur maner bras ha pinvidik hag hen goulenn, evitan hag e gi, lojeiz evid an noz.

Pa zisternjot an daol, goude koan, e savas gand ar mevelien trouz diwar al labour a jome da ober epad an noz.

Miliou, a nebeudigou, a deu da c'houzout e veze red da bevar mevel, bemnoz adalek koan betek lein antronoz, mont da c'houarn ar peder dor a skoe war borz bras ar maner evit diouall an holl diouz al laeron, al lazerien hag an dud fall all a c'helle beza o redet bro.

Hini eus ar mevelien n'en doa mall, en noz-ze, da vont da ziuall doriou ar porz; skuiz e oa unan, hanter-glanv e oa an eil; an trede a oa klanv bras. Eun digarez vat a gave pep unan evit tenna adre.

Red e voe gervel an aotrou evit trouc'ha an tabud, hag hen ha lavaret:

— Ret e vo d'eoc'h mont diouz tro evel a-raok, klanv pe ziglanv; ne c'heller ket fenez muioc'h eged en noz-veziou all lezel ar porz hep beza gouarnet na diouallet an noriou warnezan. Bez e vez, e pep koulz en noz, koz tud o troidellat dre aze hag a zo leun o fenn a fallentez. Ar pevar mevel a oa o zro mont da ziuall doriou ar porz a enebas ouz an aotrou:

— Me ne fell ket d'in mont da zestum va maro, aze, er porz daonet-se, evel Maze, warlene.

— Me n'oun ket evit herzel ouz ar yenien; ne chomin ket aman er goanv.

— Me, n'oun ket evit koll kousket, hag ez an da derri va gopr ma vez red d'in diouer anezan.

— Me, a lavar ar pebare, ma ne vez ket kresket va gopr d'in eus an hanter a zo o vont d'eur maner all bihanoc'h hag e vo nebeutoc'h a ardou ennan.

Nec'h et voe an Aotrou o klevet digareziou ha troiou e vevlien:

— Ha goulskoude, emezan, ne c'heller ket lezel doriou ar porz hep den d'o diouall ha d'o gouarn a-hed an noz.

Miliou a zelle, a zelaoue, a zonje, hag hen ha lavaret: — Me gav d'in e c'hellfen ho tiboania holl, war eun dro, fenez hag en nozveziou goude.

— Penaos? eme an holl o trei warzu ennan. Eur vad vras a rafes d'an holl.

— Ar c'honsort a zo aman ganen a ray al labour unan hed-a-hed an noz ha c'hoaz war an deiz hep biskoaz beza skuiz hag hep klemm gwech ebet gant ma vo roet e brejou d'ezan pa vo ar c'houlz.

— Gwir, eme an aotrou, o tigeri frank e zaoulagad.

— Gwir eo, Aotrou, eme Viliou; den ebet ne lakaio gantan e droad er porz.

— Gwir eo? eme an Aotrou sebezetoc'h eget biskoaz.

— Ma kirit e weloc'h penaos e oar ober e labour.

— Ne gredin ket a-raok beza gwelet.

— Grit d'ho-mevelienn, dont hep eil, da skei, a-ziavez, war zoriou ho porz ha c'houi a welo peger mat e vo diouallet ho maner deoc'h gant va c'honsort.

Ha grêt e voe evelse. Gwech e vounter war eun nor, gwech war eun all. Gwech e trouzer ouz unan ha gwech e tivizer ouz eun all ha kerkent eman lampet ar c'hi da harzal ha da redet eus eun nor d'eun all.

An aotrou a jomas sebezet holl o welet an nevezenti. An holl er maner a c'hellas, en noz-ze, mont da gousket gant ki Viliou er porz.

Antronoz, a hed an deiz, e laosker c'hoaz ar porz e-unan gant ki Viliou ha den ebet ne zeuz ebarz hep ma vefe bet harzet warnezan.

Hag an Aotrou estonet muioc'h mui ha lavaret da Viliou:

— Pegement e werzfet-c'houi ho konsort d'in evit diouall doriou va forz?

Ha Miliou hag ober marc'had gand an Aotrou, skei teir pe beder gwech war e zourn, eva daou pe dri chopinad chistr ha gwerza e gi eur mil skoued bennak.

Hag hen goudeze chom er maner da sikour e gi da anaout an holl, ken e oa mall d'ezan distrei d'e hent.

**

Meven, o vont gant e hent a zigouez eun deiz en eur vilin zour vras a vale flour da aotroued ker.

Hag hen kaout mevelien ar vilin, an aotrou, an intron hag o bugale gant skubelennou o flastra logod ha razed en dra c'hellent.

— Pesort c'hoari a rit c'houi aze, eme Veven, estonet bras ouz o gwelet.

— N'eo ket c'hoari eo a reomp aman.

— Petra 'n diaoul a rit-hu neuze?

— Paka al logod d'o laza; n'eo ket dies d'eoc'h her gwelet.

Ha goude m'en devoe Meven goulennet, selaouet ha gouezet e veze bemdez, laket an holl evelse gant skubelennou da logota, hag hen ha lavaret:

— Me c'hellfe dilogota ho milin gant nebeutoc'h a labour

— Penaos? eme an Aotrou.

— Beza ez eus ganen, em faner, eur c'honsort hag a deuo a-benn anezo, e berr amzer hag e-unan kaer.

— Ma c'hellfe an dra-ze beza gwir!

— Labourat a ray war o zro, noz ha deiz, ha gwell c'hoaz en noz eged en deiz. Gwelit.

Ha Meven savet golo e baner hag ar c'haz raktal o redet du-man, du-hont ha lazet mik, war an dachenn, eun dousenad logod bennak.

Hag an aotrou hag holl dud e di a jome sebezet o welet an nevezenti.

— O! kaena konsort ho peus c'houi! E pelec'h oc'h bet o klask eul loenig ker skanv ma 'z in me ivez da glask eun all henvel outan da zilogota va mitin? Den ne c'hello lavaret pegement a goll am eus gant ar c'hoz logod daonet-ze, pegement a zier a doullont; a winiz a zraillhont hag a loustoni a daolont etouez ar bleud. Ar bara dre aman a vez hanter kaoc'h-logod hag hanter vleur ha du evel bara heiz ar broiou all. Nag a amzer a vez laket aman bemdez da redet warlerc'h al loened viltansus-se hep morse dont a-benn anezo.

Deuet eo bet d'in meur a wech ar zonz da lakat an tan er vilin evit o devi, ha mat em dije graet hen ober setu pell a zo; gounezet em dije bet graet c'hoaz!

Ezomm bras em eus da gaout eul loen evel hoc'h hini da zilogota va milin. Gwerzit hen d'in. Pegement a c'houlennit evitan?

Ha Meven graet marc'had gantan, skoet teir pe beder gwech war dourn ar miliner, evet daou pe dri chopinad chistr ha gwerzet e gaz eur mil skoued bennak ha chomet goudeze da zikour boaza e gaz diouz an holl er vilin beteg m'oa deuet ar c'houlz d'ezan da zistrei da gaout e vreurdeur.

**

Dont a ra Telau gand e gilhog, e dilost an hanv, en eur maner brao ha kaer evit gouenn lojeiz evitan hag e gilhog, eun nozvez. Ha goude koan e sav komz gant ar mevelien eus ar c'henta labour a vefe da ober antronez. Ha Telau estonet ouz o c'hlevet.

Bez e oa hano ganto a sterna eur c'har evit mont da glask an deiz.

Ha Telau, selaou, gouenn ha dont da anaout e kredet a-viskoaz, er maner, e oa red, evit kaout an deiz mont d'her c'hilask gand eur c'har sternet.

Tre ma selaoue Telau ar c'helou e sonje hag e lavare.

— Traou heb ezomm a rit c'houi, va zud vat!

— Penaos traou heb ezomm? C'houi a gemer eta an deiz evid eun dra metra?

— O nann! eun dra gaer eo an deiz, met gellout a rear digas an deiz hep kemeret kement a boan hag a rit c'houi.

— Penaos eta? eme ar mevelien, dispourbellet o daou-lagad.

Ha Telau lavaret e oa gantan eur c'honsort hag a c'helle, hep fichal eus al lec'h ma veze, digas an deiz, oc'h hu-chal warnian hepken.

— Na pebez tra gaer, ma vefe gwir, eme ar mevelien souezetoc'h eged biskoaz!

— Gwir grons, eo, eme Delau, ha ma kar hoc'h aotrou en em glevet ganen adalek hizio ne vo ket red da hini ac'hanoc'h dont er menez eus e wele warc'hoaz vintin evit digas an deiz.

Kas a rear ar c'helou d'an aotrou ha dont a ra a-herr da gaout Telau hag, evel ar mevelien, estoni a ra o klevet eur seurt tra.

Ha pa wel ar c'hilhog o tont er menez eus paner Telau eo souezetoc'h c'hoaz.

— Penaos e c'hell eul loen ken dister ober eul labour ker bras?

— Anezan e-unan? eme an aotrou. Na kaera tra mar d'eo gwir.

— Grit d'ho mevelien chom en o gweleou ha c'houi a glevo va c'honsort, etre peder ha pemp eur o kana d'an deiz da zont.

— Eun dra da welet eo, eme an Aotrou ha gwelet e vo. Ne vo ket atao bras an droug ha goude ma 'z afed eur wech da glask an deiz, diou pe deir eur divezatoc'h, ma ne den ket a-benn ho konsort eus e labour.

Lezel a rear « mab ar yar » er gegin ha mont a ra an holl da gousket o spered nec'het bras.

Kousket an Aotrou hag e vevelien, met dihun e oant peñ a-raok ar c'houlz ha pa glevjont kilhog Telau o kana evid ar wech kenta e teujont tre er mez eus o gweleou evit gwelet ha graet en doa an deiz dioutan.

An trouz hag ar goulou a laka muioc'h-mui Olier da gana ha digas a ra an deiz d'e goulz.

Lavaret a ra an Aotrou da Delau.

— E pelec'h oc'h c'houi bet o klask eur c'honsort hag en deus kement all a c'halloud? Red eo d'in kaout unan all henvel outan en eun tu bennak. Den ebet ne c'hell kompren pegement a boan em bevez me va gant mevelien: hag ar safar a vez ganto diwarbenn al labour a vez aman da vont da glask an deiz.

Va mevelien ne jomont ket ganen; ne gavan ket re da c'hopratt ha tabut a zav dalc'h mat gand ar re a gavan evit gouzout piou a 'z ay ha piou ne 'z ay ket.

Ezomm bras em befe da gaout eur c'honsort henvel ouz hoc'h hini.

Ha Telau hag ober marc'had gand an Aotrou, skoet war e zourn teir pe beder gwech, evet daou pe dri chopinad chistr ha gwerzet e gilhog eur mil skoed bennak ha chomet goudeze tri pe bevar miz evit boaza e gilhog diouz ar maner hag hen distrei da gaout e vreudeur.

Dizrei a rejont er memez deiz ha gant plijadur e leverjont o c'heleier an eil d'egile ha beva reant ervat gand o mil skoejou.

Lavaret a ra Miliau.

Bevomp dinec'h; ha pa vo debret hor mil skoejou, ni a 'z ay c'hoaz da glask re all da Vro-C'hall. Me a gaso, me, eur giez d'am c'hi!

— Me a gaso, me, eur gazez d'am c'haz.

— Ha me eur yar d'am c'hillog.

— Ni a droko lod eus hor spered ouz lod eus o ar-c'hant ha ni a vevo bepred ervat diwar ar C'hallaoued berr a spered.

N'eus ket eun dister dra ha ne ve ket getlet tenna talvoudegez anezan gant preder hag ifin.

ALBAN AR MILINER.
Dihunamb.

Goulennit, ouz an A. Drezen, 4, ru ar C'hastell, Brest,

AR JUBILE

eul levrig bihan, savet gand an A. Corre, person Henvic, hag e kaver ennan kement a zo ezomm da c'houzout evit tenna talvoudegez, evel m'eo dleet, eus ar bloaz santel a zo o ren.

4 gwenneg n'eo ken !

Da Wener ar Groaz

Gwechall-goz, war ar mêz, e Kerne, da Wener ar Groaz, d'an tól a ziv eur e ehane al labour hag e teue an dud d'ar ger da zelaou eur pennadig grasou — eun tammig displegadenn eus Poaniou Hor Zalver. — N'eus tamm 'zo ebet e 'z ae an dud mintin mat d'ober o devosion da chapelioù an Otrou Krist, da bedi anean hag ive e vamm: tri chapeled, teir dro d'an Iliz ha d'ar c'halvar. — E Korre, koueet ar chapel koulz lar't, eo ar giz er mêz. Ra bado e lec'h all.

War gern Mene Kalvar

I

Tachet ouz koad ar Groaz, dibrad diouz an douar,
Savet etre daou laer, war beg Mene Kalvar,
Jezuz-Krist, mab an den, evit prena ar bed
A varve en doare n'eo maro den ebet.
O c'houren didrue an eil ouz egile
O c'hrogad diveza, ar maro, ar vuhe
O doa grêt anezan azalek kern e benn
Betek blenchou e dreid eur gouli... netra ken.

II

Tost d'ezan ar Werc'hez Vari, en he zao c'hoaz
Dindan pounnera samm 'zo bet gwelet biskoaz,
A zante eur glac'har o treuzi he c'halon,
Evel leon eur gontel, hag o tiskan don don
War ar groaz hep distag, he daoulagad paret,
Ar Vamm baour a ouele d'he mab muia karet.

III

Oh! c'houi holl a dremen, ma karit tól eur zell
Ouz Mari o lenva, ouz Jezuz o vervel,
M'ho ped, livirit d'in, gwelet zo bet morse
Eur verzerenti par da hini an daou-ze?
Daou ene ken dinamm gant dourn Doue skoët
Da walc'hi an douar eus stlabez ar pec'hed?

IV

Ya! skrivet oa e tlié, da zével ar boblou
Eun Doue roi e wad, ar Werc'hez he daelou.
Hag evelse erfin, ar bed brein, ar bed koz
Peñ zo lazeet e tenvalijenn an noz,
A wele o tarza evitan adarre
Dre gemend a boaniou, sklerijenn ar pare.

F. M.



ROUE AL LAZ ⁽¹⁾

— « Eur vuhez ar seurt ma vevomp hirio a zo savet diwar eun hadenn ha biskoaz n'hon doa tanvaet frouez diwarni. Hounnez a zo eun hadenn eus ar re a had an diaoul en hor parkou hag a deu awechou da zarevi, pa garomp rei gwrez d'ez. En dro-man hon deus grêt, ha setu breman, ni 'rank dibri ar bara c'houero danzeet d'eomp gant hon enebour...

Ne fell ket d'in konta d'eoc'h va buhez, va redadennoù eus an eil penn da Vreiz d'egile, evit difenn va Relijion ha va Bro ouz ar Re C'hilas; c'houi ho pefe kemend all da zisklêria d'in pep hini ac'hanoc'h... Hogen, ar pezh n'ouzoc'h ket, hini ebet ac'hanoc'h, eo pelec'h en em gav mammenn ar walenn a zo kousezet warnomp, ha me 'oar!... Ar c'houiz a zo deut, a gredan, da rei da anaout d'an dud, d'ar gristenien, d'ar Vretoned a zo hirio dindan ar wasg, betek pelec'h eo dleet d'ezo mont er stourmadeg hag ouz piou o deus da stourm.

Me 'zo bet digouezet d'in darempredi, epad meur a vloavezh dioc'htu, eun den hag en deus bet gwelet o tont kement en em gav hirio. Breman zo seiz vloaz, e oamp e kêr Bariz, hen ha me, er bloaz 1785, — hag eun deiz ma oamp hon daou, skoaz ouz skoaz, en eul lein vras, e palez ar Roue, hag hen hag o lavaret d'in, en eur skei eun taol lagad a-gleiz, a-zehou, dre douez ar bagadou aotronez hag itronezed o lipat meujou c'houek hag oc'h ober pep seurt kamanbreou:

— Gwelit, emezan, an dud-ze, nag e seblantont evurus! Arok dek vloaz aman, e vo bet troc'het o gouzoug d'ezo holl!

Ober a ris eur zell ouz va c'hamarad, o sonjal en doa evet eur banne re; elec'h dislavaret, mat, e pouezas hag e tisklêrias a-nevez:

— Dek vloaz a zo gwall bell! Lakomp eiz, d'an hirra!

1) Ar pennad-man a zo tennet an danvez anezan eus an Istor skrivet gant Des-champs, Barruel, C. Jamet, L. Blanc, etc., diwarbenn an Dispac'h hag ar Franmasonerezh.

— Farsal a rit, emeon, nemet ho farserez a zo spouronus da glevet...

— Pa vo achu ar pred, emezan, ni en em denno a-gostez, ma kirit anaout va zonz penn-da-benn:

Va c'hredi a c'hellit, ar gomz-ze he doa troc'het d'in ar c'hoant dibri hag eva ha; dal ma kavis an tu da dec'het, e sachis war vrec'h ma mignon:

— Klevit, emezan, pa voemp en em gavet hon unan el hiorz, en eur vali pell diouz an trouz, lavaret em eus dirazoc'h, a vout uhel, ar pezh ne baouezan da zisklêrian d'in va-unan abaoe m'oun dizro dre aman.

— A belec'h e teuit? emeon.

— Bet oun en Alamagn, e Wilhemsbad, tost da Francfort-war-Mein...

— Hag eno eo bet diouganet d'eoc'h?...

— Eno, ya!... kredit ac'hanoun, emezan; dindan hon treid, en deiz a hirio, emeur o foulla eur foz hag e vezo sebeliet enni milierou a dud hag ar re vrasa, da gentan!

Me a chome dilavar da zellet outan.

— Anaout a rit ar franmasoned? emezan.

— Ya da, emeon, pegwir emeur o paouez goulenñ va hano diganin da vonet en o Urz.

— N'ez it ket! emezan. Me a anavez anezo gwell egedoc'h rak bet oun, bete vreman, unan eus ar pennou-bras anezo; tec'het diganto a rin adalek hirio, avat, hag en eur dec'het, e teuan da zisklêria d'eoc'h ar pezh am eus desket...

Franmasonerezh ar bed holl a zo o paouez en em voda dindan eun dorn galloudus, mar 'z eus hini er bed (1), ha da zivizout e vô diskaret, an Urz kristen war 'an douar... Dre ar Frans e vo staget gant al labour diaoulek-ze... Penn ar roue hag ar rouanez a gouezo da genta; milierou all a gouezo d'o heul...

O klevet seurt komzou, va bleo a zave a-bik 'n em fenn.

— Eul lezenn nevez a zo savet hag a vo embannet da rei lamm da lezenn an Aviel. Stad an dud ne chomo ket pell ken ar pezh m'eman hirio: pep den a deui da vezan e vestr, ha kement a zo a vo laket eire daouarn an holl... Nemet ar bed nevez-ze a ranko bezan badezet 'barz ar gwad...

Strafilhet krenn, evel ma c'hellit sonjal, ne gaven ger ebet da ranna diouz va zu. Hen a yec hag a deue, e benn pleget en e vruched; evel eun den mantret e vallee ha mantrus e oa gwelet ha klevet anezan.

Eun dro bennak ec'h eitgeriis:

— « Me 'grede d'in emezoun, ne oa ar franmasonerezh nemet eun dastumadeg tud a c'hoari gaer ha ne glaskent etrezo nemet en em didui?

Va mignon; — n'am eus ket lavaret d'eoc'h e hano; mat

Bouligney a veze grêt anezan, — va mignon a reas ouzin eur zell a druez.

— « Kalz, emezan, o deus an hevelep kredenn-ga-neoc'h!... Paour keaz tud! »

— Daoust, emezan, ha n'eman ket enni prinsed evel an duk d'Antin, ar prins Loeiz a Bourbon, ar brinsez a Lambal ?...

Elec'h respont, va mignon a lavaras d'in:

— Eun dra bennak am eus da ziskouez d'eoc'h!...

Kwitaat a ris ar palez war e lerc'h hag e heuilhis anezan betek eur ru ha n'ankounac'hain biken he hano, ar ru « Sourdière ».

Digouezet dirak eun ti hag a anavezan mat, Bouligney a gomzas evel-hen:

— « Aman, emezan, eman penn ha kalon ar franmasonerez, man an tu diaveaz hag an tu diabarz anezi. Serrit ho kenou; digorit, avat, ho taoulagad hag ho tiou-skouarn!

Tud vat a chilaou ac'hanon, en ti-ze, e welis, evit gwir, penôs al lodenn vras eus ar franmasoned n'o doa ket he gwiskamant penn-da-benn; kalz n'o doa nemet ar vantell. Ar re-ze dastumet en eur zal lugernus, tud a beb oad, a bep stad, holl avat, a renk uhel, a gorolle, a ebate ouz en em c'hervel holl « breudeur ».

P'hon doe tremenet eno eun eurvez bennak, va mignon a bignas an diri a gase d'ar gambr a-zioc'h; ne voe ket hep poan avat, rak eun den, gant eur c'hleze noaz, a oa en e zav e traon ar vins, hag eun all, henvel outan, en e zav ouz dor ar gambr... Pesort digarez a glaskas va mignon? N'ouzon ket; kaer ober en doe, da vihana, n'helas ket mont er gambr hag e tiskenjomp war hor c'hiz ha kemer dor ar ru.

— C'hoant am oa, emezan, da ziskouez d'eoc'h daour zremm ar franmasonerez, an hini faoz, hag a zo c'hoarz holl hag ebad, hag an hini gwir hag a zo gourdrouz ha maro. Er gambr diwallet ken mat, mignon brasa ar Roue Loeiz, an hini a vir e densor.

— Savalette de Lange? emezoun.

— Ya, eme Bouligney, an den-ze en deus eur garg all hag eo e hini wirion: gwerza ar roue, gwerza e dud hag ar rouantelez a-bez. Er gambr-ze zo bet skrivet e vije muntret roue ar Frans ha hini ar Sued; diskaret ar relijion, ha laket eur plac'h divez war ôter an iliz-veur, e Pariz hag e pep kêr!...

Goude chom eur pennad sabatuet, e teuas ganin:

— Red e vije d'eoc'h disklêria kement-ze d'ar Roue!

— Ar roue a oar freaz kement a gontan d'eoc'h, nemet ne gred ket!...

Kwitaat a ris an aotrou Bouligney en nozvez-ze zoken, ha Pariz en deiou warlerc'h... Abaoe n'am eus grêt ne-

met gwelet o tigouezout, tamm ha tamm kement en doa diouganet dirazoun!

An taol trubarderez a ra d'eomp hirio chom a-zav, pa oamp prest da vont da daga ar bleizi en o zoullou, da biou hon deus d'hen tamall? Ma n'ouzon ket, eun dra a c'hellan da vihana, lavaret:

Daoust hag ar jeneral karget da ren arme ar brinzed, breudeur ar roue, ha n'eo ket eur franmason eo, penn-ha-mestr bras ar franmasonerez en Alamagn, duk Brunswick? Danton, hag a oa dec'h e karg da stourm outan, franmason ive! Dumouriez, jeneral ar Re C'hlas, franmason, na petra 'ta!

Eur roued a zo bet stignet war ar bed gant mevelien an diaoul hag ennan omp paket, ni holl, paour ha pinvidik, gant hon c'hredennou ha gant hor madou.

Ha c'houi 'oar e ped kêr, er Frans, eo stignet ar roued-ze? E 282 kêr e kaver ar franmasonerez en he zav, ha va mignon a zisklêria d'in o deus forz arc'hant kinniget gant tost da zaou-c'hant mil franmason hag a bae, bep bloaz, skodenn d'o mistri...

Tud vat, va breudeur, ni hag hon deus miret yac'h relijion an Doue marvet war ar groaz, deut eo d'eomp ar c'houlz d'he difenn. Aman, en hon Breiz, eman bet a-viskoaz Bali ar gwir hag al lealded. Hon diou-skouarn ne chilaouont ket komzou diboeñ ha divlas; hor pennou n'hell ket a zorc'hennou diod mont enno! Aman, en hon touez-ni, e vo kavet nerz-kalon ha nerz-brec'h kement hag a vo red, evit ma'ha an dreitourien! Ni ne gilfomp kammed! Kentoc'h mervel!

Ha goût ouzoc'h petra vo mat d'eomp ober, p'hon do krouget ar giez diroll-ze, ar franmasonerez? Ni a zavo diraki, startoc'h hag uheloc'h eget biskoaz, garz hon frankiziu koz: Breiz d'ar Vretoned! Breiz d'ar Vretoned ma zomp ni, tud a feiz!... Armou a vo kinniget d'eoc'h; c'houi, kinniget ho nerz hag ho puhez! N'eus ken nemet e doare-ze e c'hellfet beva pe vervel evel tud!! »

Ar marc'heg en doa kôzeet hep distag ebet; ar bôtred o doa chilaouet hep divalvenni o daoulagad. Nag eur ger, nag eur finvadenn en o zouez. Pa davas, an hini tosta a astennas e vrec'h hag a lavaras.

— Roit d'in eur fuzuilh ha kemerit va hano! Neuze, kant ha kant mouez war an dro a youc'has-têr.

— D'eomp ni! D'eomp-ni ivez!

(Da heuilh).



Krouadur Athên ⁽¹⁾

Goude ma voe kemeret Athên gant ar Romaned, kear a voe holl dismantret hag an dud a oa enni a deuas da veza sklavourien. An drec'hourien a rannas etrezo keariz ker-koulz hag ar pezh a jome warlerc'h ar reuz-fall.

Ar jeneral roman karget da ingala ar vugale, a zavas c'hoant gantan, da c'houzout hag int o doa eun tamm deskadurez bennak, evit gallout delc'her ar re speredeka da ober ofiserien anezo.

Gourc'hemenn a reas neuze ma vije grêt da hep krouadur, skriva eur gêr bennak var e dôtenn (2).

En eur evesaat, da c'houde, e-unan, ouz ar pezh o doa skrivet ar vugale, ar jeneral a c'hellas lenn var dôlenn unan anezo, ar geriou kaër man: « Eurur, teir gwech eurur, an hini a zo maro e tachenn an emgannou, ha n'en deus ket gwelet kanv e vro! »

Souezet, ar jeneral a reaz gervel ar c'hrouadur; goude beza sellët outan eun tamm gant sioulder, e kemeras e-zourn gant madelez: « Te, a lavaras hen, hag a oar karout da vro, zoken goude m'eo dismantret, te a zo dleet d'it beva en da roll; chom en da vro, ma bugel. »

*
**

Ni Breiziz, daoust ha n'emian ket stad hor bro, peuz-henvel ouz Athên d'ar c'houz-se? gwasket eo hor frankizou gant ar C'hallaoued, a ren ac'hanomp hervez o giz. Daoust hag eur vro gristen evel hon hini, a dlefe beza renet gant dispac'herien, evel ma 'z eo, siouaz, en deiz hizio? Nann; n'eo ket leal; rak eur vro, mar d'eo gwasket he frankizou hag he gwirioù, a zo eur vro o vont war ziskar; goulskoude eur vro ne c'hell biken mont e rann ma kresk niver he bugalé; ha setu, dres, perag e c'hell Breiz sellët gant fizians ouz he amzer da zont. Rak-se hor bro garet a gen-dalc'ho he lusk, en desped d'ar skouerioù fall, a gav breman he fobl azaleg o c'havell beteg o bez.

(1) Athên, kear-benn ar Grêz breman.

(2) Eun dôlenn pe eur plankenn, e galleg: tablette.

Ya, dioc'htu a veac'h m'en deus ar c'hrouadur bihan, grêt e genta kammed, ma c'hoanter difenn outan da gomz yez e dad hag e vamm; ha pa deu ar furnez da vleunia en e spered, neuze avad e klask gouarnamant Bro-C'hall, mouga en e galon, da vad, ar feiz kristen, en eur lakat d'e gelenn mistri gall ha difeiz, ha skolioù gall ha dizoue. Ma ve goulennet o c'hoant ouz bugaligoù Vreiz, hag a zo kondaonet da heulia ar skolioù « laïk », dre an abeg ma ne 'z eus ket a skol gristen en o farrez, kalz anezo, pe mar-treze holl, e respontfent evel bugel Athên: « Eurur, teir gwech eurur, an nep a zo maro war dachenn an dispac'h vras ha n'en deus ket gwelet kanv e vro! »

Daoust ha lezet e ve neuze, gant ar gerent kristen, ar c'halloud da skolia o bugale hervez o c'hoant?

Bec'h em eus ouz her c'hredi; Bro-C'hall he deus aoun e chomfe gwriennet ar feiz kristen e kalon ar vugale; ober a ra evel Herodez, pa c'hourc'hemennas gwechall laza an holl vugaligoù, o kredi laza ar Mabig Jezuz da heul. Ha n'eo ket an dra-ze hepken; rei a ra an dourn da skuilha etouez ar yaouankiz levriou fall, kazetennou hudur ha peziou-c'hoari divalo, diouz an druilh. Pa rank an den yaouank kwitât e gerent evit mont da zervich e vro, ne gav ket zoken eur beleg, er c'hazern, na var al listri-brezel, evid e gentelia; hag e gennerza, ha kaout en e zerr karantez eun tad, eun tanva eus oaled e di ha boazamanchou e vro. Nann, gwelloc'h e kaver tezel an den yaouank er boan hag en denvalijenn.

Rak-se ma ve goulennet ivez o c'hoant ouz ar bôtred yaouank kaonek-se, a zo breman o tifenn o bro, kalz a youc'hfe ivez a bouez penn: « Eurur, teir gwech eurur, hon tadou hag hor breudeur a zo maro var dachenn ar brezel braz, hep beza gwelet disc'hwrienna ar feiz eus o bro! »

E gwirionez, Bro-C'hall a deu da veza evit hor soudarded hag hor martoloded, henvel ouz eun dervenn goz, ne c'heller ket ken mont da glask an disheol dindanni, en aoun da veza gloazet gant he skourrou pe gant he mêz.

Netra ne zisplij muioc'h d'ar c'hristen eget ktevout goapaat e feiz; netra ne zisplij muioc'h d'ar Breizad eget izellât e vro hag e yez; netra ne ra muioc'h a boan d'ar gerent eget gwelet o bugale var an hent fall. Evit kaout hor frankiz, hor gwirioù, hon liberte, **Breiziz war zav**, hag holl a-unan stourmomp, rag gwelloc'h eo beza maro eget beza e buhezioù evelhen.

Agde 20 a viz meur.

C. C. C.

KERNE

Potred Kerne, al linennou-man zo skrivet evidoc'h-kerkoulz ha muioc'h eged evid an holl Vretoned all. Lennit aneo: deut int diwar bleuenn unan eus ho pro. Lennit Feiz ha Breiz penn da benn, karit anean, roit ho komanand d'ean, embannit anean en dro d'oc'h, elec'h 'z' eus peg c'hoaz pa ve ano eus komz lenn ha skriva brezoneg.

Kerneviz, m'ho peuts eun draig bennag diwarbenn Kerne da lakat ho preudeur d'anaout ha da garet gwelloc'h o bro, e vo grêt digemer mat d'ho skrid ha laret d'och eur bennoz Doue kalonek.

E zigas d'an A. F: Mevellec, beleg mestr-skol e Sant Pabu dre Ploudalmezeau.

Intron Varia Rumengol

O Rumengol, c'houi hag a zo kenta chapel savet d'an introun Varia war douar Breiz-Izel;

Ha c'houi Landevennec, kenta manati savet e Kerne, hag a roas da Zant Gwennole eun dachenn gaer ha didrous da bedi ha da labourat, d'ar Roue Gradlon gwas- ked ha peoc'h da vare e wall drubuilhou, ha d'ezo o daou eur bê da ziskuiza;

O Ker-Iz, Ker benn ar Vro! Ker-Iz, brudeta Ker a oa neuze, uhel ho mogeriou, ha bras ar stujou ho tifenne ouz ar mor, ha brasoc'h c'hoaz an dizurziou a gasas ac'hanoc'h siouas da oueted an Dour-beuz!

Ha c'houi erfin Kemper-Odet ha Kemper-Korantin, kaera ker 'zo bet morse e Kerne, a-ramp war gaëra ster 'zo e Breiz;

N'oun ket evit distaga ma daoulagad diouz ar Roue Gradlon, an Eskob Korantin ha Gwennole an Abad, hep laret eur pozig, eur ger diwar ho penn.

**

Ne iafomp ket an dro-man c'hoaz da welet:

- « Petra 'zo neve e Ker-Iz »,
- « Ma z'eo ken foll ar yaouankiz »
- « Ha ma klevan ar biniou »
- « Ar vombard hag an delennou ? »

Rak siouas:

- « E Ker-Iz n'eus netra neve
- Nemet ar pez a ve' bemide
- E Ker-Iz n'eus nemet traou koz
- An ebatou a ve bemnoz ».

Nann, kristenien ne iafomp ket di en dro-man c'hoaz... er c'houraiz emaoamp. Tec'homp kentoc'h pell pell diouz ar gêr villiget... An diaoul a zo enni, hag ar stujou digor... An dour a zo warni. Tec'homp.

Duze war an hend bras, ar mor war o lerc'h, daou varc'h 'zo en daoulamm, unan du hag unan guenn (1); daou varc'h o taoulammi. Sant Gwennole war an hani du, ar Roue Gradlon war an hani gwenn hag e verc'h Dahud gantan adrenv war dailher ar marc'h. Tec'hi, nijal a reont; ar mor, avat, ne dec'h tamm: war o gorre e teu atô. Ne vo ket pell e vint beuzet.

« Roue, a lar neuze sant Gwennole. An drouk-spered 'zo ganoc'h war dailher ho marc'h, tolit anean er mor, a hend all emaoamp kollet, stlapit anean buan d'an traon, a hend all emaoamp lonket ».

Dour a ziveras eus daoulagad an Tad paour. Met red oa... ha buan! Eur frapp krenn hag eur vuntadenn hag e verc'h kez, Dahud, ar plac'h kollet a ieas en traon war he fenn, da veuzi er mor, e kenver an takad a zoug hiou [hizio] c'hoaz hec'h ano, e Poul-Dahud pe Boulldavid ».

Diwar an töl-ze ne reas ar mor lamm ebet ken war a-rök. Met achu gant Dahud e oa achu ive gant Ker-Iz: Doue n'en doa leusket ar brinzez fall da ziveza nemed evit m'en dije bet ar mor amzer a-walc'h da ziransa kêr eus an eil penn d'egile ha da beurlonka pep tra.

Ah! Ker-Iz neteet oc'h breman ha neteet mat eus pep lousdoni ha fallagriez!

— Roue, eme adarre sant Gwennole, troc'homp hend breman, trefez Landevennec, mall eo d'omp mont da bedi evit ar ger villiget hag ho merc'h Dahud, da ouela e kuz war o fec'hejou, n'è ket re abred d'omp mont da danva eun tannig peoc'h goude eun töl evel hen-man...

**

Emaint o daou breman o sevel krec'henn Mene-Hom... digouet int war beg an duchenn, ar Roue hag an Abad.

— Ma mignon Guennole, eme C'hallon, eur wec'h c'hoaz e rankan sellet ouz ma c'hêr baour, ouz Ker-Iz, pedit Doue 'vit ma ne fallgalommin ket! — Oh; Gwennole, ne welan nemed eonenn-mor a bep tu, eonenn-gwenn e pep lec'h. Ker-Iz n'eus mui anezi ha n'ouzon ket pelec'h eman he bê, na bê ma merc'h kêz, nag he ene... nebeutoc'h c'hoaz, siouas!... Oh! Gwennole n'oun ket evit sellet ken ouz an-tu-ze. Poan a ra d'in.

— Roue, eme Gwennole, sellit ouz tuchenn Rumengol, aze, e Koad ar C'hrannou; aze, war a leverer e veze skuilbet gwad gwechall gand ar bayaned en enor d'an doueed.

(1) War an dôlenn livet gant Luminais ha miret e « musée » Kemper eo e weier al liouiu-se evit an daou varc'h.

Mat, Gwennole, aman dirazoc'h, dirak Ker-Iz ha Koad ar C'horrannou, dirag an Dreinded, hag an Intron Varia, me ra le da zevel war an duchenn-ze hiou, (hizio) iliz ha fachenn an doueed didrue, da zevel eur chapel gaer d'ar Werc'hez, ma teuo Mamm Doue da skuilha puilh he grasou war Breiz-Izel.

**

Laret en doa ar Roue, ha derc'hel a reas d'e gomz.

Tuchenn Rumengol a voe benniget. Savet e voe enni eur chapel, eun iliz kaer en enor d'an Dreinded zakr ha d'ar Werc'hez venniget. Pevarzek kant vloa zo eus an dra-ze ha Bretoned an amzer-vreman o deus sonj c'hoaz eus o roue koz Gradlon hag eus e vignon sant-Gwennole. Pa 'zeont a vilierou da bardona da Rumengol, da Zul an Dreinded ha pa 'n em gav o daoulagad gant Mor Douar-nenez, Mene-Hom, Landevennec ha tour uhel iliz kaer an Intron Varia Remed-holl, n'int ket evit n'em virout c'hoaz da lâret, an daêlou en o daoulagad, en eur vale war zouar ar zent hag ar Rouaned:

Brasa burzudou a zo bet
Aman en amzer dremenet ! (1)

Ha neuze breman c'hoaz, eme ar re goz, bep bloa da Zul an Dreinded, ar Roue Gradlon hag e vignon Gwennole a bign evel gwechall war gern Mene-Hom da welet hag hen eo chomet ar Vretoned start d'ar c'hredennou o doa desket d'eo epad ma ra an heol eus tu ar Reter (1), eus tu koad an C'horrannou, tri lanm en enor da dri ferson an Dreinded.

**


Ijin an den en deus livet war unan eus gwerennou an iliz a welomp c'hoaz e Rumengol, istor al le grêt gant Gradlon goude tôl Ker-Iz. — Grêomp eur zell ouz an dôlenn-gaer-ze.

Gwelet a reomp: eur pezh mell tôl-ven e gwasked eur weenn dero bras-spontus; war leurenn an dôlven, skeudenn an Intron Varia gant ar mabig Jezus war he barmenn. Daoulinet e-harz he zreid, ar Roue Gradlon, a gin-nig d'ezhi an dôlenn eus an iliz eman o sonj sevel. E kichen ar Roue, Sant Korantin en e zao; en tu all, Sant Gwennole, harp war e vaz-abad. Eur pôtr yaouank, Gwenaël e ano, diskib da Zant Gwennole, zo kinniget gant e dad, an denchentil Rômelius ha gant e vamm: ar brin-sez Levenez. Gwelet mat a rër c'hoaz war ar werenn-se eun tiegez-tud gwisket e giz an amzer 'vreman; ar vamm a stard war boull he c'halon ar yaouanka eus he bugale.

(1) Telenn Rumengol. Yan ar Skour.

(2) Reter, tu ar zao-heol.

Eur barz koz, eus gouenn ar ganerienn, rannet e galon, stotet war e delenn vrevet, a zo da vat o lenva. Erfin gwisket e rû, eun drouiz, gouneet d'ar feiz kristen, a zo dija astennet a hed e gorf dirak skeudenn an Intron-Varia.



N'heller ket displega gwelloc'h istor Ker-Iz ha Rumengol hag hani an Arvor distroet diouz he falz kredennou ha tôlet e divrec'h an Otrou Krist ha war barmenn an Intron-Varia.

**

Ne larin ger ebed aman nag eus planedenn ar chapel e doug ar c'hantvejou, nag eus petec'h eo diveret an ano a

Rumengol; meur a baëron ha meur a dad' zo kavet d'e-zan. Achui a rin en eur zigas ma spered d'an 30 a viz maë 1858: an dê benniget ma voe kurunet Intron-Varia Rumengol gant ôtrê ar Pab Pi IX en amzer ma oa egiz Eskob e Kemper an Otrou Serjant; servicher bras an Intron Varia. E penn-kamm e vaz-eskob en doa grêt kizella skeudenn ar Werc'hez o vresa ar zarpant; ha skriva e kichen: « Intron-Varia Rumengol, en hor feiz koz hon dalc'hit holl. » E vanniël hag e c'her a oa: « Me ho salud steredenn-vor ». Ar Pab e-unan a rée anezan: eskob an Intron-Varia, ha gwir e oa? 16 bloa eo bet o ren eskopti Kemper, 14 gwech eo bet e pardon braz Rumengol da Zul an Dreinded.

Eun nebeut devezioù goude ar gouel, an Impalaer Napoleon III, hag an Impalaerez Eugeni, a zeûas da saludi an Intron Varia kurunet; o ano zo chomet war paper an Iliz gant hani eur bern tud chentil all, en o zouez ar barz brudet H. Kermarker, tad Barzaz Breiz. Eur bedenn en deus skrivet eno arôk sina. Lavaromp anei evit peurgloza ar pennad-skrid man:

« O Intron Varia Rumengol, hag a zo ive e gwirione, Intron Varia Piz ha Milan en Itali; Burgoz e bro-Spagn ha Kologn er Jermani, Intron-Varia Bariz, Amienz ha Chartr, Intron-Varia Wengamp, Intron Varia ar Bleuniou e Gwened, ar sklêrder e Kerne, ar Folgoat e Leon, c'houi hag a zo maeronez an holl broiou, mamm an holl gristenien vat, ra bijo ganoc'h leusk' eur Breton hag a c'hell laret gant unan eus ho servichourien gwechall n'eo bet morse eus kompagnunez ebet nemet eus hoc'h hini, ô Rouanez ar Baradoz, da lakat aman e harz ho treid eun cesteni a drugarez evit ar grasou en deus bet digant an ôtrou Krist, dre 'n em erbedi ouzoc'h.

D'an Intron Varia Rumengol, Sadorn gwengolo 1859.
Theodor-Klaoda-Henri Hersart, beskont Kermarker, eus Institut Franz.
(Da heuilh). F. M.

Breiziz, lennit :

- La Langue Bretonne en 40 leçons*, par F. Vallée, 6^e édition, imprimerie Saint-Guillaume, Saint-Brieuc, et chez tous les libraires de la Bretagne. Prix, franco..... 3,50
- Notennou diwar-benn Istor ha Sevenadur ar Gelted koz* (Notes sur l'Histoire et la Civilisation celtique) par *Meven Mordiern et Abherve*: 7 volumes avec lexiques, notes, cartes, etc. Chez R. Le Roux, St-Hélory, Pordic (Côtes-du-Nord). Prix, franco..... 2,15
- Marc'hekadenn Atepomaros tennet eus Sketla Segobran*, chez R. Le Roux, Pordic. Prix, franco..... 1 fr.

**LABOURIOU AR MERC'HEO
WARDRO AN TI**

Kentelioù Tintin Anna

XI^{et} PENNAD

Ar c'houlined pe « lapined »

Eus ar c'hreisteiz, eus bro an heol, eo e teu d'comp gouenn ar c'houlined pe « lapined »; abalamour da-ze e ranker o goudori ouz ar yenien hag ouz ar gwall-avel.

O lochennou a vezo troet ouz an heol; savet e vezint war eun troatad pe zaou a uhelder a hed hag a lehed ha dibradet eun troatad all dious an douar. Gant traou distet e c'heller ober lochennou brao, pa ne vez ket a c'hoant da gemeret mizou; kasedou ha barrikennou a zo mat ; eur penn anezo a vezo didalet hag e lec'h ar c'hoad e vezo laket orjal abalamour d'al loened da gaout ear; dindan e vezo graet toullou d'an hanvoez da vont er macz.

An hanvouez-ze a vez espernet e podou pe zailhou, laket dour ennan peder gwech muioc'h eget ne 'z eus anezan ha fuilhet war ar parkeier, el liorzou pe c'hoaz war ar bern teil. Dre ar vad a ra el lec'h ma vez fuilhet eman paet ar c'holo a vez laket dindan ar c'houlined.

An anevaled-man, koulz hag ar re all, a rank beza net o c'hraou, pe ne jomont ket beo; bep eiz dez, d'an hira, eo red skarza dindanno.

Boued a vezo kaset d'ezo diou pe deir gwech bemdez; dleet eo rei mui oc'h d'ezo d'o c'hoan, rak en noz eo e tebront ar muia; e kreiz an deiz e kouskont.

Ma vez roet boued glaz d'ezo, eo red o sec'ha a-raok o zeñler d'ezo; a bep seurt legumach a gavont mat: garotez, kaol, patatez poaz; a bep seurt deliou dioc'h ar gwez bras; a bep seurt louzeier dioc'h ar parkeier, evel: askol, teol, sklanvach, lez-koed, roz-ki; strew garotez, ilvoud, bare, troell, melchen hag all, met arabad rei d'ezo brulu, saladenn, pempiz, pao-bran, kleiz-rus, na morse traou gleb, pe dastumet gleb ha deuet da domma.

Brenn ha kerc'h a zo eun dra vat da rei d'ezo bep an amzer, dreist holl d'ar pazed a zo re vihan warno; lod a laka ivez eun tamm c'hoalenn d'ezo, et uhez o boued, da zigeri o c'halon, met ar c'houlined a zo traou direüs, eas da veva, gant ma chencher alies d'ezo; dont a reont da skuiza pa roer atao an hevelep magadurez d'ezo.

Tud a zo hag o deus c'hoant da lavaret e koller gand ar c'houlined muioc'h eget ne c'hounezet ker marlonk int: « Dek koulin [lapin], emezo, a zebr kement hag eur

vioc'h! » Kement-se a zo gevier; dister eo hanter kant koulin da zebri bouer eur vioc'h pa vez gouezet beza kompenn war ar pezh a daoler d'ezo.

E lec'h ma 'z eus bugale, ne vezer ket pell evit kaout gounid dioc'h ar c'houlined, rak ar vugale, en eur c'hoari, a red ar parkeier da zestum, hed-a-hed ar c'hleuziou, geot ha les-koed d'o loened bihan. Gwelet em eus eur bôtreg-zig o prederia, he-unan, ouz ugent koulin; he mamm, evit he zrugarekât a roe d'ezi, evit he foan, eur c'houlin war dek.

Eiz parez a c'hell rei daou c'hant koulin bihan er bloaz; ar parezed ganet e miz meur a c'hell kaout re vihan e miz Here, hag evelse e vez koulined da werza a-benn ma vez serret ar chase.

Epad eur miz ha c'houec'h sizun zoken e ranker lezel ar re vihan gant o mamm; pa 'z int gouest da ober o zreuz o-unan e c'heller o dispartia; betek o zri miz e c'hellont beza lezet en eun douez; d'an oad-se, eo poent lakat ar pared en eul lochenn hag ar parezed en eun all.

Ar c'houlined a c'hell beva seiz pe eiz vloaz; evelato eo gwelloc'h o laza pe o gwerza a-raok ma vezont deuet en oad-se; azalek o femp bloaz ne deu gwellaenn ebet enno ken.

Ar c'hrec'hen, pa vez lazec'h ar c'houlined er gêr, a c'heller da werza; met ne dalv ket ar boan klask mont da werza krec'hen ar re a vez bet lazec'h en hanv, rag ar bleo a deu da zistaga diouto. Krec'hen ar re a zo bet lazec'h etre miz Genver ha miz ebrel a zo mat da werza; o c'has a c'heller d'an adres-man: Itron Frick, le Cottage, à Vars (Charente).

Ar c'houlined a gouez a-wechou klenvejou warno evel war an traou all; setu aman ar re a bakont peurliesia: pa vez roet re d'ezo da zebri, e varvont gant re govad;

Eur c'hlenved all a zo: dont a reont da goenvi gand an dourou fall a jom en o c'horf hag e varvont dילו; dispartia ranker pa weler spig ar c'hlenved-ze enno, ar re glanv diouz ar re ya'c'h, ha rei d'ezo boued sec'h, da lavaret eo brenn, kerc'h pe foenn.

A-wechou all e pakont gal; ouz ar c'hlenved-man n'eus louzou ebet; red eo laza ar re a zo klanv: ar c'hig ne vez ket falloc'h da zibri.

Ar re vihan, teir pe beder zizun, o deus alies droug-daoulagad; o daoulagad a vez pikouzet ha mervel a reont. Paka a reont an dra-ze diouz ezenn an teil; en eur c'hraou dalc'het mat, ne vo ano ebet eus ar c'hlenved-ze.

Eur wech c'hoaz, e lec'h ma vez net an traou, e vez rouez ar c'hlenvejou.

Meur a ouenn a zo eus ar c'houlined; ar re rous eo ar re stanka en hor bro; bez 'ez eus c'hoaz ar re a hanver

e galleg. « géant des Flandres », pe « Argent de Champagne » pe « angora », du pe wenn, bleo hir d'ezo.

Eus ar re-man e livirin eur ger, rak e meur a di, war ar mêz, em eus gwelet eus o seurt; kerkoulz eo o c'hig hag hini ar c'houlin rouz, gwelloc'h eo zoken rak gwenoc'h eo ha blazet mat, hag ouspenn-ze ar bleo diouto a vez gwerzet ker hag ar c'houlined angora a zebri nebeutoc'h.

Displevet e vezont bep daou pe dri miz; lod a ro d'ezo eun taol krib, bep sizun, da viret na deufe ar bleo da fuilha.

Tri c'hartouron vleo a c'heller da gaout bep bloaz diwar eur c'houlin angora; betek ugent lur, tregont zoken eq bet aet ar c'hartouron; lakeomp ne 'z afe zoken nemed ugent lur; an dra-ze a ra ugent skoed er bloaz tra nemet ken nemet diouz bleo pep hini.

Dilhad a vez graet gand ar bleo-ze; lereier, dilhad-stamm flour ha brao.

Pell e vezer, na petra 'ta, o sevel eul lur rag ar bleo a zo tano, met arabad eo fallgaloni: gant poell hag youl da gendelc'her e teuer a-benn eus a veur a dra.

TINTIN ANNA.

KELEIER AR MIZ

KATOLIKED ESKOPTI KEMPER HA LEON E LANDERNE

Katoliked Eskopti Kemper ha Leon a zo en em vodet e Landerne d'an 28 a viz C'houevrer da embann dirag ar bed-holl ar gwir o deus da veva war zouar Breiz, goude m'o do kaset o goul-Mikeal da Bariz!

100.000 e oant eno diredet war galv an A. Duparc, o eskob-karet. Eujen Calvez eus a Blouneour, Eujen Pronost eus a C'houc'hen ha person Plouian an A. Thomas a gomzas d'ezo e yez ar Vro, hag ar c'homzou a yeas dounna e kalonou hag e sperejou an holl a voe o re; setu komzou an A. Thomas:

Ni a fell deomp kaout hor plas en ti

Goazed, perag oc'h diredet aman ken niverus, euz pevar c'horn an Eskopti, var galv Mestr ha Tad hoc'h eneou, an Ao. 'n Eskob?

Evit lavaret dezan ha d'an holl ez oc'h kristenien, hag e fell deoc'h chom kristenien; evit lavaret dezan ha d'an holl ne 'zafec'h morse a-du gand an dud dizoue, hag e chomo bepred dibikouz ho feiz; evit lavaret dezan ha d'an holl komz ho kentadou: « Potius mori quam fœdari »;

kentoc'h ar maro eget beza trubard da Zoue ha d'e Iliz!

Met ive, deuet oc'h aman evit lavaret dezan ha d'an holl ho peuz a-walc'h da veza dalc'het e traon an ti, hag e fell deoc'h a-grenn beza digemeret hiviziken er penn-uhella, evel ar re-all. Ya, pa reomp mad hon derveziad labour e tiegez bras ar Frans, e c'houlennomp beza digemeret evel ar vugale all eus an ti.



An A. THOMAS

Hor gwir, netra ken nemet hor gwir, met hor gwir oll, setu ar pez a c'houlennomp.

FRANKIZ HA LEALDED,
RAG HEB LEALDED N'EUS KET A LIBERTE.

D'un traon lezenn an disparti

Ma 'zeuz 'ta frankiz evit ar Radikaled, Sozialisted, Communisted, d'en em voda, — d'comp-ni ra vezo ive!

Daoust ha ni a vir outo da ober o C'hongrés e Paris, pe e Nice, pe e Bourdel, e pep lec'h a blij ganto? Perag neuze dont da vlej war hon lerc'h, pa blij ganeomp en em voda e Landerne? Ha perag e teu ar Gouarnamant, dre e Brefed, da glask ober e baotr fin en eur nac'h d'comp ar blasenn Foar d'ar mare diveza?

Frankiz a c'houlennomp da zont ha da vont dre ar ruioù, heb beza lazeta a dennou revolver gant hañoned, evel ma zeuz bet graet e Marseille hag e Paris, — ha da

veza diouallet gant ar polis a baeomp evit an dra-ze. N'eo ket ni a laz, ni eo a vez lazeta. Frankiz a c'houlennomp da bratika hor Relijion; hag evit-se, ra vezo restaolet d'eomp hon Ilizou, Chapelioù, Presbitalioù, hag hon oll madou haeret.

D'AN TRAON LEZENN AN DISPARTI !

D'an traon al lezennou a-eneb d'ar relijiuzed

Frankiz a c'houlennomp da zevel ar vugale badezet en eun doare kristen; hag evit ze, liberte d'ar C'hongregasioù da veva var douar Frans ha da ober skol.

D'AN TRAON AL LEZENN A-ENEP D'AR C'HONGREGASIONOU !

Pa voe diskleriet ar Brezel, eus pevar-c'horn ar bed e tiredas al Leaned evit difenn o Mamm Vro, hag houma n'oa bet evito gouskoude nemet eur lez-vamm kriz ha dinatur. Brezelekaet o deus evel ar zoudarded ar re wella. Nag a bed zo reudet du-hont var ar front, nag a bed zo distroet mac'hagnet.

Ah! Pa' oac'h du-hont, Tad Donœur, e pri ar Champagn, e skourn ar Vosges, en Ifern Verdun, nag Herriot, na Painlevé, na Blum, na Franmasoun all ebet ne yeaz da c'houlenn diganeoc'h pe Jesuist oac'h pe ne oac'h ket. N'eus ket a zanjier! re a fler a vije bet en o bragez, o vont dindan ar bouliji a goueze ken drus warnoc'h!

N'eus ket a zanjier: rag neuze ne oac'h ket a re evit savetei ar Frans. Forz a oa sur pe Jesuist e vijec'h pe ne vijec'h ket! Ha breman sikouret ganeoc'h da c'hounid ar Viktor gant ar priz eus ho koad, e lavarer deoc'h: « Er meaz euz an ti! »

Mad! ni a favar d'eoc'h: « Eur goaz oc'h: Ebars en ti, hag er penn-uhella: Setu ho plas! »

Ar C'houarnamant a rank sikour hor skolioù kristen

Ha grit skol, Rag evit skolia ar vugale, ze zo eun affer hag a zell euz ar gerent heñken: ho vugale zo d'eoc'h, kerent, n'int ket d'ar Gouarnamant. Ar Gouarnamant, evid ar skolioù, n'en deus nemet eun dra d'ober: *paer*. Arc'hant an holl zo gantan, ma pao skolia bugale an holl.

Ra o devezo ar Juzevien o skolioù Juzeo: hag ar Gouarnamant da baea hervez niver ar vugale vo enno;

Ra o devezo ar Brotestanted o skolioù Protestant: hag ar Gouarnamant da baea hervez niver ar vugale vo enno;

Ra o devezo ar Franmasouned o skolioù franmasoun: hag ar Gouarnamant da baea hervez niver ar vugale vo enno;

Ra o devezo ar Gatoliked o skolioù katolik: hag ar Gouarnamant da baea hervez niver ar vugale vo enno!

Eno hag eno heñken eman al Lealded! Ra vezo eta graet en hor bro ar pez a reer er Beljik, er Holland, er C'ha-

nada, en États-Unis, hag e vo gwelet neuze ped a vugale a vo e skolioù dizoue ar Finistère!

D'AN TRAON TA LEZENN AR SKOL DIZOUE, ha savet en he flas ar R. P. S.

Poania raimp beteg ar viktör

Goazed kristen, sklavourien oc'h bet o labourat evit eur Frans he deuz ho tisméganset, ha nac'het deoc'h peb gwir.

Mad! kendalc'hit c'hoaz da veza he sklavourien, pe gentoc'h, he Bugalle karantezuz; ya, kendalc'hit da labourat eviti. Bet ez eo ho Mamm: karit anezi, roit dezi hoc'h arc'hant, ho kwad a nevez ma vez red: ho tever eo. *Grit ho tever.*

Hag evit ober mad ho tever, diframmit anezi eus a dre daouarn ar Vistri divengont a zo hirio ouz he mezvi gant ar gaou hag ar gasoni, hag a veuzo anezi er fank hag er gwad, ken reuzeudik hag ar paour keaz Russi. Ya, difennit anezi en eur zifenn da genta gwiriou Doue hag an eneor: hag hoc'h oll gwiriou a deuto deoc'h var ar nar-c'had.

D'ar stourmad ta, breudeur! tenn hag hir vo ar brezel. Petra ra ze? Evel gwir gristenien, prest omp da c'houzanv peb tra: an amand! ya, ar prison! ya, ar maro! ma vez red.

Chomomp unanet, hag abred pe zivezad, ar viktör vo deomp! Ha dervez pe dervez, war Vro-C'hall a-nevez e lugerno skedusoc'h eget biskoaz kroaz hor Zalver Jezus-Krist.

D'ar stourmad ta, Goazed! Evit ar Gwir hag al Liberte; evit Doue hag ar Frans!

Bodadeg Landerne a zo bet kaer met ne c'hell dougen frouez puilh nemet dont a rafemp a-benn da derri, da vat, ereou hor Bro. Evel a lavar ar « *Bretagne intégrale* » a zo gwir: « Nous faisons de l'action à courte vue; le but cherché a beau être atteint, il est *sans lendemain*. Pourquoi? Parce que la conquête de ces buts ne détruit pas la cause du mal.

Ce qu'il faut? Il n'y a pas deux manières de le dire, c'est la *disparition du régime administratif sous lequel nous vivons*. Tant que nous n'aurons pas accompli cette destruction, nous devons manifester à perpétuité et sans résultats.

Cherchons donc un régime nouveau. Il y en a un: le *provincialisme*. Avant que les gouvernements français eussent tout submergé sous le poids d'une administration de plus en plus déplorable, la BRETAGNE vivait; elle avait même, bien longtemps avant la France, le régime le plus démocratique qui ait existé, avec représentation du peuple. Nous voulons un régime semblable, modernisé. Quand nous aurons reconquis *notre REGION BRETONNE* nous

aurons nos lois; nous serons maîtres de nos finances; nos impôts seront employés au développement de notre pays, et, comme nous comprenons le sens du mot *liberté*, bien que nous ne l'ayons jamais affiché à tous les vents, nul n'embêtera nos familles, nos curés. La sécurité viendra et régnera dans nos foyers. La *liberté dans l'ordre*, nous ne l'aurons que lorsque nous nous administrerons nous-mêmes, car, sous la botte de gens dont les idées sont opposées aux nôtres, dont les intérêts économiques ne sont pas les mêmes que les nôtres, nous ne pouvons être que de perpétuelles victimes. Et pourtant, nous avons tort de nous plaindre: nous subissons le régime que notre faiblesse, notre inactivité et notre veulerie ont toléré. Quels égards voulez-vous que l'on ait pour un peuple qui *supporte tout sans mot dire*? On a beau jeu à persécuter devant une telle veulerie!

Il y a quelque chose de changé, soit. Mais il ne faut pas que ce changement soit un geste *vain*: jusqu'au cœur du mal ou se taire. Ne pas consentir l'effort nécessaire, c'est accepter la prédiction d'Ossian: « Nous passerons comme un rêve; nul bruit ne restera dans nos champs de bataille; nos tombes seront perdues dans la bruyère; nos noms pourront être entendus dans des chants; qu'importe, notre force sera éteinte! »

MARO ANATOL AR BRAZ

Unan eus bugale Breiz a zo kouezet ar muia brud war e ano, Anatol ar Braz, a zo o paouez mervel e Menton.

Ganet e oa bet er bloaz 1859, e Sant Servez, e kichenig Callac; eur wech graet e studi gantan e reas skol e Kemper ha goude e Roazoun.

Ar brudeta eus e levriou eo *La légende de la Mort chez les Bretons armoricains*.

Pluenn arc'hant pa skrive e galleg, Anatol ar Braz en doa eur bluenn aour pa skrive e brezoneg; met perag en deus skrivet ken nebeut e brezoneg pa gave amzer da skriva kement e galleg?

Ar pezh a lavar Loeiz Herriou a zo komzou fur: « Ar skrivagner hag a oar brezoneg ha ne skriv nemed e galleg, me gred, me, penaos an den-se a zo eun nac'her e vro!

Ne vefe ket kavet tra a-walc'h a zour er Sen da walc'hi Viktor Hugo ma en divije bet skrivet e oberou en atamaneg hen hag a oa ganet e Frans hag a ouie galleg.

Ar pezh en divije saotret Viktor Hugo a zaotret bemdez bugale Breiz hag a oar brezoneg hag a laosk a-gostez yez o bro evid en em zervichout euz yez an diavezidi da skriva ar pezh a verv en o spered, ar pezh a darz eus o c'halon. Breiziz oc'h pe ne d'oc'h ket? N'hellit ket lavaret e karit eur vro ma ne garit ket an dra gaera a zo ebarz: ar yez.

Ha yez Breiz, c'hoaz eur wech, eo ar brezoneg! »

EUR C'HANV ALL

Hor mignon mat Yann Sohier, mestr-skol, e Plouguiel a zigas d'omp kelou glac'harus maro e dad, e Lamball, d'an oad a 59 bloaz.

Lennerien Feiz ha Breiz a raio eur bedennig evitan hag evid Anatol ar Braz, ma vo Doue laouen ouz o eneoù.

EUN EURED

Hor Mignon mat Iann Charles, is-letanant e skol ijin an ofiserien, sekretour ar Bleun-Brug, a vezo lidet e eured gand an dimezell Helena Dorange e iliz Itron Varia Ekeurdrevil d'ar 7 a viz Ebrel a zeu.

Feiz ha Breiz a ginnig d'an daou bried yaouank e wella gourc'hemennou.

I. — RESPONCHOU DIVINADENNOU MIZ MEURZ

I. — En disheol. II. — An dour glao. III. — Prest d'in da brad da lakât va beoc'h da beuri ha me 'raio d'it tri dervez gwriat.

IV. — K
T A L
K A Z E G
L E Z
G

V. — Eur chadenn.

II. — DIVINADENNOU MIZ EBREL

I. — Petra vez gwenna,
Pa vez al lousa?
20 p. ar r. Digaset gand eur mignon da Feiz ha Breiz.

II. — Eur benveg em eus moan ha hir
Graet, penn-da-benn, gant koad ha dir.
20 p. ar r. Digaset gant T. J., souldard e Gwengamp.

III. — Du pa hader,
Gwenn pa denner,
Suilhet holl gand an avel-skorn,
Malet gand ar villin-askorn.
20 p. ar r. Digaset gant eun toullad Bretoned, souldarded er R. C. C. e Roazoun.

IV. — Me 'm eus eur marc'hig em zi
hag a lavarfec'h hep si,
a jom fur ha ne ra van
nemet war e gein pa 'z an.
20 p. ar r. Digaset gant Tanguy Creignou, Cleder.

V. — Divin d'in me divinadenn,
me 'm eus pevar faotrig kempenn,
n'o deus o fevar met eun troad,
ha gantan 'treuzont park ha prad.
20 p. ar r. Digaset gant Gabriel Elies, Kergerez, Gwitalmeze.

Digas ar responchou hag an divinadennou nevez a gavfet gand o responchou a benn ar 25 eus ar miz da: M. le Directeur du Feiz ha Breiz, à Plouguerneau (Finistère).

Feiz ha Breiz

HA KROAZ AR VRETONED

KELAOUENN VIZIEK GANT SKEUDENNOU

Relijion — Istor Breiz — Marvailhou — Gwerziou
ha Soniou — Buhez ar Vro

RÉDACTION

J.-M. PÉROT, Plouguerneau (F^{re}) | Y. LE MOAL, Coadout, p^r Guingamp

ADMINISTRATION
du **FEIZ HA BREIZ** :
FR. GEORGELIN,
Brest — 4, rue du Château — Brest
c/c 44-40 RENNES

ADMINISTRATION
du *Bleun-Brug* et de l'*Emglec Sant Iluz*
Yv. DRÉZEN,
Brest — 4, rue du Château — Brest
c/c 6238 RENNES

ABONNEMENTS INDIVIDUELS
« FEIZ HA BREIZ » et « KORN-BOUD »
Bretagne 10 f. l'an
France 11 f. l'an
Etranger 12 f. l'an
Abonnements collectifs
Feiz ha Breiz (seul)
(à partir de 5 exempl.). 6 f. l'an

PUBLICITE
Toutes les insertions sont faites
à l'année
Une page entière 300 fr.
Une demi-page 175 fr.
Un quart de page 100 fr.

TAOLENN AR MIZ. — Dre ar c'herreg, E. AR MOAL. — Kervoruz, Kuburien, Kervorvan, G. P. — Angelus an noz, J. L'HELGOUALC'H. — Mikael an Nobletz, J. U. — Lik, Jaik, J. U. — Ar bugel hag ar Barz, GLAODA AR PRAT. — Kerne, F. M. — Roue ad Laz, D. N. D. — Va dousik koant, F. M. — Labouriou ar merc'hed war dro an ti, TINTIN ANNA. — Keleier ar miz. — Divinadennou.

SULIOU HA GOUELIOU MIZ MAE

- 2 a viz Mae. — IV^e Sul goude Pask. Oferenn ar zul-ze. Gousperou gouel an dervez warlerc'h: ar groaz kavet.
- 9 a viz Mae. — V^{vet} Sul Goude Pask. Kana a c'heller hizio oferenn ha gousperou Santez Jann d'Arc
- 13 a viz Mae. — Ar Yaou Bask.
- 16 a viz Mae. — Ar zul warlerc'h ar Yaou-Bask.
- 19 a viz Mae. — Sant Erwan, Patron Breiz: gouel devoision.
- 23 a viz Mae. — Sul bras ar Pantekost.
- 24 a viz Mae. — Lun ar Pantekost: gouel devoision.
- 30 a viz Mae. — Sul an Dreinded.

Dre ar c'herreg

Micher ar sturier a deu da vezan tenn a-wechou, dreist-holl pa gerz ar vag war eur mor hag e weler ennan kerreg o sevel hag o koac'ha diouz an eil deiz d'egile. Lestrig ar Bleun-Brug hag ez eus skrivet war e dalbenn: *Katolik da genta!* hag a zoug Feiz ha Breiz, a rank, koulskoude, derc'hel gant e hent, rak e veaj a zo hir hag e labour n'eo boulc'het nemet a-boan; nebeut a besked c'hoaz en e rouejou.

Daoust da ze, pa a em laker da brederia piz gant ar vuhez a-vreman, en em zanter souden kennerzet, rak ar gredenn hag hon deus bet a-viskoaz, penôs e vezo, da goulz pe goulz, hepdale marteze, an trec'h gant ar menozioù a zifennomp, a deu da sklêraat ha da grenvaat dirazomp; ma karomp derc'hel da harpa ar wirionez ha da zével uheloc'h-uhela he banniel, ar Vretoned a deuiou souden, gant eur youc'h a levezenez d'en em starda endro d'ezi.

Dirak reverzi vras an holl youlou a zizurz hag a zismantr renet gant spered ha gant dorn Satan, en em zav hirie er Frans eur reverzi all, hini an youlou mat, hag an emgann etrezo a zo eun dra skrijus da welet. Ma lavarfed d'in eman hirio, war dachennou Bro Frans, buhez ar bed holl o vont da veza gounezet pe gollet, muioc'h c'hoaz eget breman 'z eus daouzek vloaz, ne vefen ket kalz souezet. Gant se, e sonjan eo mat gervel d'ar stourmadeg kement Gwir a zo, o unani, en eur vi-ret e nerz da bep hini, ma vo krenv a-walc'h o zaol da flastra e benn ouz an enebour.

Ma vije diframmet diganin va Gwir a gristen, va gwir a Vreizad, va gwir a dad, a benn-tiegezh va gwir a berc'hen, petra deufen da vezan? Sonjit en eun den hag a rankfe diouered kement-se holl, ha beva, koulskoude... Sonjit er vuhez a renfe etre an dud laket er stad euzus-ze? Daoust ha ne bar ket raktal dirak ho taoulagad eun dôlenn henvel ouz an ifern e lec'h ma ren ar grizder, an dizurz

hag an denvalijenn? An urz, ar peoc'h, an evurus-ted a zo pa vez an den en e renk penn-da-benn, an dizurz a grog d'en em zila dal ma vez torret an urz diouz eun tu bennak.

Kevredigez ar *Bleun-Brug*, katolik da genta, a fell d'ezi e vefe restaolet ha miret d'an den, evel den, e wiriou a gristen, a dad, a berc'hen; — met o vezan m'eo breizad ivez, e fell d'ezi koulz all, e vefe restaolet d'an neb a zo evel dômp Bretoned, o gwir a Vretoned.

Ne vo ket disklêriet biken freas a-walc'h pe-naos e klask ar *Bleun-Brug* tizout ar pal-ze.

Tri hent a zo hag a welomp digor dirazomp, d'eomp da gemer an eil pe egile; ne gasint ket ac'hanomp keit ha keit; gwelloc'h, marvat, kemer unan evit eun all; — merkomp-sklear ha didroidell pehini eo hent ar *Bleun-Brug*.

Diouz ma labour pep rumm Vretoned, e welomp penôs darn a glask arruout dre zével disparti etre Breiz hag ar Frans; — darn all, o kroui oberou brezonek, en eul lezel, ahendall, pep tra er stad m'eman; — darn all c'hoaz, en eur glask, dre eur politik dereat, lakaat da veva e pep hini ac'hanomp, d'en em c'houzanv ha d'en em skoazelli, ar « citoyen français » hag ar Breton.

Evel ma weler, darn a glask pourchas gwir ar Breizad dre ar politik, ha darn all, hep skoazell politik ebet. Aman, ar *Bleun-Brug* a droc'h raktal, kuit a zigarez hag a lavar:

Politik a zo red!

Perak?

Breiz a vev hag en em zalc'h dre he yez, hec'h istor, he gizioù, he douar... An holl draou-ze a vezo laeret d'ezi, a nebeudou, ma ne vez ket laket eur harz endro d'ezo, garz pe voger ar frankiz politik. Sevel oberou brezonek, kroui kevredigezioù, ober gouelioù, kana, prezek, kement-se holl, ma ne vez ken, a zo 'vel klask sevel e di e park eun all; warc'hoaz e vint distroadet, pa garo ar perc'hen. Sant Iltud, gwechall, en e gouent, en doa eun dachenn evelse, war an aod, ha n'helle ket e venec'h kaout frouez ebet enni, kaer hada o doa,

rak ar mor a oa perc'hen d'ezi hag a deue, da bep mare, da veska ha da veuzi an douarou. Eun deiz ec'h eas Iltud ganto hag e reas d'ezo sevel eur c'hleun etre ar mor hag ar park; adalek neuze, e voe brao dastum ennan pep seurt trêvad; rak ar mor a oa lakët skoilh d'ezan. Setu ar pezh hon deus d'ober, Bretoned, en eur skuilh an had: ober ar c'hleun d'her mirout.

— Pesort kleun?

Deiz lun Fask, e kêr vras Nancy, katoliked Metz ha Strasbourg a zo deut, pedet gant ar jeneral Castelnau, da lakaat o dorn e dorn katoliked Frans. hag en eur gomz eus ar vodadeg-ze, ar jeneral a skriv er gazetenn an *Echo de Paris*, an 11 aviz ebrel:

Nul n'ignore, en France, les griefs articulés par nos frères des provinces recouvrées et, d'autre part, dans les milieux éclairés, l'opinion est depuis longtemps acquise aux bienfaits d'une *judicieuse simplification et d'une sage décentralisation dans le jeu des rouages administratifs*. Mais, à Nancy, dans une assemblée de catholiques, seuls, devraient être retenus, et, seuls, ont été retenus les problèmes d'ordre moral et religieux.

Oc'h ouzout mat eo katoliked an Alzas ken start da zifenn o gwir broadel evel da zifenn o gwir a gristen, ar jeneral Castelnau a ro da intent e vezo plêdet, da goulz pe goulz, gant ar gwir broadel ivez hag e verk raktal pesort kleun e kavfe mat sevel evit her mirout: « *Judicieuse simplification, sage décentralisation dans le jeu des rouages administratifs...* »

Ar promesseou a verk ar geriou-ze eo diês gouzout pesort vad a zigasint d'o heul evit ar broiou; red eo gwelet petra 'zo dindano. Ni, ar pezh a rankomp da gaout a zo bet disklêriet meur a wech. Da genta, eur Gambr evit ar vro hag enni, netra nemet tud eus ar vro dibabet gant o c'henvroiz. Red eo kroui e penn ar Vro, — lakomp e penn Breiz, — eur galloud gwirion hag a vo evel eur voger a roio d'ezi gwasked, goudor, gwarez da veva, da lakaat da vleunia he gizioù, he yez, he spe-

red, he c'honversou; hogen, ouz ar voger-ze, eun nor diwallet mat ha ne dremenno ket drezi, na da vont na da zont, kement a garo gouarnamant Pariz.

Met eun nor, evelkent! Ne glaskomp ket sevel moger evit harz pep darempred, met evit tanoât anezo, ober an dibab etrezo diouz ma vezint mat pe fall evit Breiz.

Hag an dra-ze a zo klask sevel re uhel e benn? Nann. Ha gellout a reomp klask distroc'h? Nann; nemet ha koulz e vefe ganeomp nac'h hon amzer dremenet hag hon enor a Vreton.

Ar *Bleun-Brug* eta a gav mat ma vo ar Vretoned a-gevred gant poblou all, o tougen, war c'horre an holl, an hano a « citoyens français », gant ma vezint ivez ha, da genta, Bretoned.


Ha mar deo hennez eur menoz yac'h, leal hag eun, hag ez eo, arabad kredi e tistagfemp dioutan 'vit digarez ebet.

— Met, emezoc'h, gouarnamant Bro-C'hall na roio ket d'eoc'h ar frankiz a c'houlennit; n'ho lezo biken da zêvel ar voger-ze!... Penôs e rafet-hu neuze? En em zispartia dioutan? Nann; labourat, avat, da zispenn ar gouarnamant divreton-ze, forz pehini a vo, ha da lakaat, en e lec'h, unan diouz hon dorn, diouz hon doare.

Setu eno, me gred, menoz politik ar *Bleun-Brug*.

Breman, koulz hag an holl gevredigeziou all e plêdo gant an oberou brezonek, da bourchas ar pezh eo kig ha gwad ar vro, e skuilho e pep lec'h an had breizad, da lavaret eo, kement a c'hell mont, dre ar skouarn, dre al lagad, da vaga ene ar Breton.

Ezomm ebet, en eur gloza da adlavaret, eur wech c'hoaz, penôs oberou brezonek hep politik ebet a zo labour didalvez; n'eus ket a greskans evito; henvel int ouz frouez hag a rankfe kreski heb êr, na sklerijenn pe a vez barnet da veza diskaret ha flastret dindan an treid hep gellout morse darevi.



Kervoruz, Kuburien, Kervorvan.

Ar skeudennou-man a dliretremen e *Feiz-ha-Breiz* miz Ebrel da heul buhez an Tad Penfeunteuniou; re ziverzat e-tigouesjont ha setu perag e-tispakomp anezo, evelato, er miz-man, gand eur ger ben-nak diwar o fenn.


War an daolenn genta e-weler an tu braoa eus a vaner koz Kervoruz, e kichenik Kastell-Paol, gand e apo-teiz hag e douribell.

E Kervoruz eo e voe ganet Kristof Penfeunteuniou, nann er maner a zo breman, rak heman a voe adsavet er bloaz 1589, evel m'eo merket war eur skoued e weler warnan armou tudchentil Penfeunteuniou ha Mesnoallet. Skouejou all a-weler c'hoaz armou ar Benfeunteniaoued skoaz-ha-skoaz warno gand re Aotronez Kersauzon pe Gervenguy, tud chentil brudet hag anavezet a-bell zo e Leon. Feunteun ar maner

diskouezet e traon an daolenn genta a zo kaer kenan; gand mein-ben eo graet hag eur werc'hez koz a zo ouz her benniga; e kichen e kaver eur

azezenn da lakat ar podou-dour. Eur skoued, armou ar Benfeunteniaoued warnan, a gaver kizellet war vein-ben ar feunteun. Tudchentil a zo bev c'hoaz hag a ziskenn eus a Benfeunteniaoued Kervoruz; e bro Gerne emaint o chom en eur maner bras, eus a barrez Klohars-Fouesnant, hanvet Kergoat gwechall; pa voe graet eur markiz eus a aotrou Kergoat gand ar roue Loeiz XV, maner Kergoat a voe roet d'ezan an hano a Benfeunteuniou, troet e galleg, hervez giz diskiant an amzer-se, ha dindan an hano a Cheffontaines eo ez eo anavezet abaoe.

Eur breizad all, brudet bras ivez, a zo bet ganet e Kervoruz. En eun ti hag a zo, en dourn kleiz, pa 'z aer e porz ar maner, eo e teuas er bed, er bloaz 1822, ar barz Gabriel Milin, a gendalc'has gant labouriou ar Gonideg war ar brezoneg. Goude beza graet e studi, e skolach Kastell-Paol, ez eas da labourat da borz Brest hag eno e chomas beteg ar bloaz 1880; neuze ez eas d'an Encz-Vaz da vevad diouz e zanvez; eur pennad e voe mear, met rei a reas e



zilez hag epad ar rest eus e amzer ne reas netra nemet labourat war ar brezoneg; mervel a eure er bloaz 1895; savet en deus: *Marvailhou gwrac'h koz, Furnez ar Gêiz, Sonjit er vat, Buez sant Tenenan, Penaos karet Jezuz-Krist, troet diwar sant Alphons Ligori, ha Jezuz-Krist skouer ar gristenien.*

**


War an eil taolenn e kaver diou skeudenn eus manati sant Fransez Kuburien, e parrez sant Martin Montroulez, el lec'h ma tremenas an Tad Penfeunteniu, e vloaveziou kenta goude ma oa aet da vanac'h. War ar genta e weler an iliz, tennet eus a gichen ar ster; uheloc'h a-zioc'h ar gwez, war ar grec'henn, e weler chapel gaer L. V. ar Sallett, savet, er bloaz 1859, gand eur beleg santel, an A. a

Gervenguy, pa ne oa c'hoaz e Sallett Grenobl nemed eur chapelig koat. Kalz tud eus a Leon koulz hag eus a Dreger a vez eno o pardona.

En traon eman chapel ar manati savet er bloaz 1527 gand Yann, beskont Rohan ha Leon. En he sav edo en amzer an Tad Penfeunteniu hag e vouez helavar a lakas he bolziou da dregerni. Ar skeudenn a roomp eus ar chapel a zo tennet diwar eun daolenn savet



P.F. CHRISTOPHORUS a Capitefontium Britanniæ ProVca Britanniæ Electus Romæ an 1571. Rexit an 8. Creatus Archiepiscopus Cæsariensis et Coadjutor Episcopi Senonensis an 1579




breman ez eus wardro kant vloaz; gwelet a raer warni eur porched hag a zo bet freuzet, eur pennadig zo, ha traon eun tour bihan a oa beget e plom hag a voe teuzet ar plom anezan en amzer an Dispac'h. An iliz-se, gwechall oa iliz ar re a oa e Trede-Uiz sant Fransez. D'an Dispac'h e oa 18 manac'h e Kuburien; pemp pe c'houec'h anezo a reas al le a c'houlenne ar C'houarnamant; unan eus ar re-man, an Tad Hippolyt Eolien, a voe person e Taule; eun all Nikolas Mace, kure e Plouezoc'h; eun trede, an Tad Simplisian, (Per Abgrall eus a Landivisiau) a oa beleg ar brizonierien e Kastell an Taro, er bloaz 1793. Etouez ar venec'h ha n'oa ket bet falvezet ganto plega d'ar c'houarnamant e c'hellomp henvel an Tad Dominik Nouel, prizoniet e Kastell Brest er bloaz 1792 ha kaset goudeze d'ar Spagn hag an Tad Syprian Baudon a voe tapet peg ennan, er bloaz 1793, e ti e vreudeur, e Kerourien, e Plouignau.

Etre an diou skeudenn-se, d'o dispartia, e kaver eur gwel eus maner Pennele, harp e Kuburien; aotroned Pennele o doa o bez e chapel ar manati; her gwelet a raer c'hoaz, dindan eur wareg a zo er voger a zo en tu dehou hag o armou a zo warnan.

**

An trede taolenn a ziskouez d'eomp skeudenn an Tad Penfeunteniu tennet diwar baperou koz hag eur gwel eus a vaner Kervorvan e Trebabu hag eus e chapel el lec'h ma reas Tanguy Benfeunteniu, pried Katell Gervorvan, sevel eur bez er bloaz 1634, da lakat relegou e contr brudet, maro er bloaz 1594, e Manati Ara Coeli, e Rom. Tanguy Benfeunteniu eo a lakeas adsevel ar maner gand an diou douribell a vraoa e vogerioù hag ar prenecher, kizellet er vein, a drouc'h ker brao e doenn. Kervorvan goude beza bet perc'hennet gant an Aotroned Penfeunteniu a voc perc'hennet gant an Aotroned Menez, Gouzillon Kerveno, Lesgwern ha Kergariou.


G. P.



Angelus an Noz



Hen : Sell, eus e dron, an heol a gouez Me a wel




c'hoaz, a-dreuz ar gwez, E la-gad ruz o lu-ger-



ni, an noz a dos-ta, tiz war-ni. Hi: Er c'hoad ar



bleun hag an de-liou, Bep an tam-mig, a goll o liou Ha dre ma



tu-a ar me-nez Ec'h e-naou tour-tan an e-nez

Hen. — Sell, eus e dron, an heol a gouez
Me a wel c'hoaz, a-dreuz ar gwez,
E lagad ruz o lugerni,
An noz a dosta, tiz warni.

Hi. — Er c'hoad, ar bleun hag an deliou,
Bep an tammig, a goll o liou,
Ha dre ma tua ar menez
Ec'h enaou tour-tan an enez.

Hen. — Ar mor a baouez da c'hourdrouz,
Al labous ne ra mui a drouz,
An avel hepken, heb ehan,
Goustadik a zistag he c'han.

Hi. — Ennan kant ha kant goulaouen,
Nag an oabl doun a zo flouen,
E tizerennou aour warno
Doue 'n deus skrivet e ano.

Hen. — Pa zeu ar bed holl da devel,
Na kaer eo klevout o sevel,
Mouez ar c'hloc'h ker c'houek e vennoz
Pa zon e Angelus d'an noz.

Hi. — D'hot labour tenn roomp arzao,
Hag en dachenn hon daou war zao,
Meulomp Mari a vouez uhel,
Evel m'he meulas an Arc'hel.

Hen. — Hon daou, te ganen, me ganez,
Stouomp dirak hor Rouanez,
Gant he Doue krouet dinamm,
Gantan dibabet evit Mamm.

O daou. — « Salud, o Mari, leun a c'hras,
Dreist an holl, Doue ho tkaras,
Salud, o Mari, leun a beoc'h,
An Aotrou Doue 'zo ganeoc'h.

Dreist ar gwragez oc'h benniget,
Rak Mab Doue ho peus douget,
Ha Jezuz, o kaera ano,
Morse da ren ne ehano.

O Santez Mari, Mamm Doue,
Mamm ho Krouer hag ho Roue,
C'houi an hini a zaludomp
Pedit anezan evidomp.


Pedit, Mamm druezus meurbed,
Evit holl bec'herien ar bed,
Bremen, e kreiz ar stourm garo,
Ha dreist-holl da eur ar maro. »

Hen. — Ha pedet ganeomp hor mamm ger,
Dienkrez, baleomp d'ar ger,
Ouz Mari, neb en em erbed,
A c'hell bate heb aoun ebed.

Hi. — Gant he Mab Jezuz ha ganti,
E vezo diouallet an ti,
En o c'haloun, en o envor,
E tougont bugale Arvor.

J. L'HELGOUALC'H.





CHAPEL SÂNT GLAODA e Kerodern skeudennet gant Y. Flocc'h.
Ar groaz a zo en he c'hichen a zo bet savet er bloaz 1572
gant tad Mikael an Nobletz.

Mikael an Nobletz

(1577-1652)

Petra oa Breiz e fin ar c'houezekvet hag e penn kenta ar zeitekvet kantved ?

Hor bro Vreiz a voe unanet gant ar Frans dre zimezi an dukez Anna gant roue Frans Charlez VIII ha gant Louiz XII, goude maro Charlez VIII. Hag eur pennad goude ma varvas Anna, dre eun emgleo sinet e Gwened gant pennou bras ar vro, er bloaz 1532, Breiz a voe staget ouz ar Frans. Met Fransez kenta, roue Frans, a zisklerie e vije lezet an traou en hor bro evet m'edont a-raok, ne vije graet netra nevez nemet gant aotre kannaded Breiz. Breiz, d'ar mare-ze, a oa pinvidik. Ar peoc'h hag an urz vat a rene er vro.

Met, edoug ar c'houezekvet kantved, e tirollas war ar Frans gwall-euriou spontus, a lakeas reustl ha keflusk e pep lec'h. Neuze eo e tiwanas gouenn fall ar brotestanted, heretiked a nac'he gwirioneziou ar relijion gatolik, a en em gemere ouz an Iliz, hag ar gatoliked a rankas en em zifenn outo, hag e voe epad meur a vloaz brezelioù kriz dre ar vro a-bez.

E Breiz, goulskoude, e voe nebeutoc'h a freuz eget e meur a lec'h all, met hor bro ne voe ket espernet ken nebeut.

Pa varvas roue Frans Herry trede, ar gurunenn a dlle dont d'an hini a oa tosta d'ezan, rak ne leze ket a vugale. Hag an tosta kar oa roue ar Bearn. Herry a Navar, eur protestant. Ar gatoliked ne felle ket ganto lezel eur protestant da bignat war droun Frans, hag a zavas an Unaniez katolik evit miret na vefe gweliet eur protestant o ren ar Frans.

Neuze, dreist-holl, eo e voe freuz e Breiz. Gouarnner Breiz, an duk Merkeur, a oa, skler eo, eus tu ar gatoliked, enep roue ar Bearn. Ar brotestanted o doa gouennet sikour ar Zaouzon, ar gatoliked sikour ar Spagnoled.

Roue ar Bearn, o wellet oa troet ar Frans gant ar relijion gatolik, en em c'hereas katolik, hag e voe neuze anavezet evit roue, hag e kemeras an hano a Herri IV. An duk Merkeur, gouarnner Breiz, ne fellas ket gantan anaout Herri IV, hag e teuas eun arme eus Frans e Breiz, da gemeret kerioù Montroulez ha Kemper, da gas kuit ar Spagnoled eus Kraon (1594).

Epad an nao pe zek vloaz ma padas ar brezel, stad hor bro a voe truezus ha reuzendik evel ma n'eo ket bet morse, zoken epad an Dispac'h vras. Neuze eo e reas Fontanellan e daolioù fall hag e lakeas ar spont e pep lec'h, dreist-holl e bro Gerne. Laeroni, lazerez, tangwall, pep seurd torfejou mezus, setu petra dremene bemdez. « Ar re a zeu war hol lec'h, eme eur skrivagner eus an amzer-ze, ne gredint ket ac'hanomp hag a lavaro n'eo nemet mojennou, sorc'hennou, ar pez a skrivomp. »

Ar Vro a voe rivinet, dismantret. Da heul an naonegez e teuas klenvejou spegus evel ar vosenn, hag e varvas eun niver bras a dud. Kavet e veze korfoù maro war an hent-chou, er parkeier, er c'hoajou. Amzer vras evid ar bleizi, stank c'hoaz neuze e Breiz. Ar re-man en em lakeas da zebri an dud, hag a zeuas da veza ken hardiz, ma tostant beteg an tiez ha zoken beteg ar c'herioù, da glask tud da lonka.

E 1598 e voe fin d'ar brezel. An duk Merkeur a blegas da roue Frans Herri IV. Heman a reas eun dro-vale e Breiz, hag e voe laket urz adarre en traou. Fontanella, paket, a voe koundaonet d'eur maro kriz e Paris, e 1602.

Goude an dismantret, oa labour d'ober evid adsevel ar vro. An urz vat hag ar peoc'h diouallet gant roue Frans a vefe falvoudous evit-se, met n'oa ket a-walc'h goulskoude. Rak stad an eneoù a oa truezus ive. An dud bet oc'h en em ganna, an dudjentil distro d'o manerioù goude meur a vloaz brezel, a jome c'hoaz kriz ha divergant. Al labourerien douar a oa dizesk war ar relijion, rak epad ar freuz oant bet alies dilezet, ha tud lezet hep katekiz, hep kelennadurez kristen, a zeu buan da ankounac'hat o deverioù e kenver Doue hag an nesa.

Ezomm a oa eta eus beteien santel evit lakat ar vuhez kristen da vleunia a-nevez e Breiz.

Hogen ar veleien, e meur a lec'h, n'oant ket eus ar re-wella. Meur a hini, re droet gant madou pe blijadureziou ar bed, a oa lezirek da labourat evit gloar Doue ha silvidigez an eneoù. — D'ar veleien eo bet lavaret en Aviel: « C'hwil eo holenn an douar. Ma 'z eo fall an holenn, gant petra e vo gallet salla? »

Daou rumm beleien a oa d'ar mare-ze e Breiz. Bez ez oa doktored, bet war ar studi e skolioù bras, e Paris, er Sorbon, desket war ar skianchou sakr, war ar galleg, war al latin, met ne anavezent ket ar brezoneg, ha ne dalvezent netra er parrezioù war ar-maez. Beleien all, savet eus Breiz, a veze desket buan d'ezo ar pez a renkent da anaout, er presbitalioù gant beleien all, rak n'oa ket stank d'ar mare-ze ar skolañchoù, ha tiez evid ar gloareged n'oa ket anezo c'hoaz.

Breman ez eus skolañchoù stank, ez eus e peb eskopti eur c'hloerdi bihan, eur c'hloerdi bras, hag enno ar vugale, an dud yaouank a vez desket d'ezo, ousspenn skianchou ar bed, en em zizober eus o flegou fall. Pell e pad ar studi, met ret eo evit prepari beleien desket ha santel, hag ar Pabed ne ehanont da c'houlenn digand an eskibien poania da gaout beleien eus an dibab.

Konsil santel Trent a roas urz da zével eur c'hloerdi e peb eskopti, ha pa voe sentet ouz an urz-ze, e teuas buan gwellaenn en traou.

Betek neuze e voe re elies beleien n'oant ket gouest d'ober labour vat er garg fiziet enno.

En amzer ma teuas er bed Mikael an Nobletz, ez oa beleien gouziek ha santel, met, evel ma welimp, ez oa ive hiniennou lezirek, ne zeskent ket o c'hredennoù d'ar vugale na d'an dud vras, hag e meur a barrez an dud a oa kristenien laosk, a zente ouz o youlou fall. An Tad Mamer, deuet warlerc'h Mikael an Nobletz, a lavar e kavas tud war ar maez hag a veve evel chatal.

Doue a zellias gant truez ouz hor bro hag a zigasas d'ezi eur beleg santel, eur misioner kallonek da rey da glevet e pep lec'h kelennadurez an Aviel ha da takat adarre ar-gizioù kristen da c'hrizienna e Breiz. Ar beleg-ze eo Mikael an Nobletz.

Mikael an Nobletz

Dont a reas er bed d'an 29 a viz gwengolo 1577, deiz gouel sant Mikael Arc'hael, e bro Leon, e parrez Plougerne. E dad, Herve, a oa eun denjentil, o chom e maner Kerodern; e vamm oa Franseza a Lesguern, eus Sant Fregant. An aotrou Herve an Nobletz, a oa noter, unan eus pevar noter ar roue e Leon. Beva a rae, heb ober trouz na dispignou fall, o sevet, gwella ma c'helle, e vugale, a voe niverus: pemp paotr ha c'houec'h merc'h. Mikael oa ar pevare eus ar familh. Fiziet e voe eur pennad en

eur vagerez, eur vaouez santel, a boanias, evet e vamm da takat karantez Doue da ziwana abred en e gaon.

E kichen maner Kerodern ez oa eur chapel savet en enor da zant Glaoda, met eul lenn a oa etre ar chapel hag an ti, hag e veze ranket bale dre eur chaoser. Mikael a gare mont da bedi d'ar chapel. N'oa c'hoaz nemet pevar bloaz, hag e tiskoueze kaout plijadur vras o pedi



CHAPEL AN TRAON, skeudennet gant Yv. Floch. Nevezet eo bet er bloaz 1572; Mikael an Nobletz a bedas an I. V. enni, sur a-walc'h.

Doue. « Me zo bet e ti Doue », emezan, pa veze distro eus ar chapel. E vamm he doa aon na gouesfe el lenn hag a zifenne outan mont d'ar chapel. Mikael, daoust da ze, a gendalc'he da vont, hag eur wech, goude beza bet goundrouzet, e lavaras oa bet eun itroun gaer krog en e zourn o kas anezan d'ar chapel hag o teski d'ezan pedi Doue. Eun deiz zoken, goude beza bet klozet en eur gambr, alc'houezet an nor warnan, e voe kavet er chapel, daoulinet dirag an aoter, henvel ouz eun eal eus ar baradoz. E vamm, souezet, a c'houlennas digantan penos en doa gallet digeri dor ar gambr. « An itroun gaer, emezan, a zo deuet d'am c'herc'hat. » — Piou eo an itroun-ze? » — « Ne ouzoun ket, met kaer meurbet eo. »

Kredi a c'heller eo ar Werc'hez Vari he-unan en em

ziskouezas evelse d'an hini a voe difennet ganti epad e vuhez penn da benn.

D'an oad a zeiz vloaz, Mikael a voe kaset da Lesguern, e Sant-Fregant, da di e dad koz. Eno ez 'oa eur beleg, an aotrou Cozic, oc'h ober skol da vugale ar maner. Mikael a zeskas lenn ha skriva e Lesguern.

Goude eur bloaz pe zaou, e tistroas da Blougerne, hag e dad a fizias anezan e beleien desket ha santel, an tri breur Gourvennec, a rae skol e chapel sant Anton, war ribl an Aber-Wrac'h. Deski mat a rae, hag abenn eun nebeut amzer e voe kavet gouest da vont da eur skol uhelloc'h, e Plouzeniel, a oa ive en he fenn eur beleg, an aotrou Gwern. Evit doare, tud Plouzeniel n'oant ket d'ar mare-ze kristenien vat evel hirio. Mikael a gare mont da bedi e keriadenn Kerventa e kichen eur feunteun, en eur foenneg. Eun deiz m'edo eno stouet o pedi, e teuas merc'hed da voalc'hi dilhad er poull-kanna, tost d'ar feunteun. Goulenn a rajont digantan petra rae eno, hag evel ne responte ket, e kasjont anezan kuit a doliou golvez.

Ar gwazed ive a reas goap outan meur a wech, pa glaske ober d'ezo katekiz er vered goude an oferenn-bred. C'hoarzin a raent d'ezan ha skey warnan a-wechou.

E Plouzeniel eo e roas Mikael an Nobletz e galon da Zoue evit mat. N'oa c'hoaz memet pevarzek vloaz, hag e oa enanet gand ar garantez evit Jesus, e Zakver. Lakat a reas en e benn bale war roudou e Vestr, labourat, gouzanv, lbeza paour evel dan, ober fac war ar bed evel dan. Mat da bedi, d'ober pinijenn, e veve unanet gand e Zoue, en em zioualle diouz ar pec'hed, ha ma teue e youlou fall da c'houeza en e galon, ec'h en em dole etouez an drez hag ar spern, hag eur wech e c'hourvezas epad teir eur etouez an erc'h.

Evelse e lakeas e gorf da blega d'ar spered hag e talc'has e galon glan ha kaer. Ar bedenn hag ar binijenn eo hent ar zantelez. Mikael, d'ezan da veza c'hoaz yaouank, a gerze a gammejou bras dre hent ar zantelez.

(Da gendalc'her).

J. U.



Lik, laik

(Kendalc'ht)

Evel ma lavaremp en dro ziveza, hervez ar Greto laik, n'eus ken Doue nemet an den, n'eus ken buhez nemet ar vuhez-man; an deskadurez a zo da lakat e lec'h ar relijion; ar pezh a zo mat eo ar pezh a blij d'ar c'houarnamant; ar pezh a zo fall eo ar pezh a zisplij d'ezan.

Ar Greto-ze a zo skignet abaoe hanter kant vloaz dre ar vro a-bez gand ar skoliou hag al lezennou. Ezomm ebet mui eus a Zoue, eus e c'houre-hemennou, eus an Aviel. An den e-unan a zo gouest da c'houzout petra en deus d'ober, e spered hag e galoun a ziskouezo d'ezan petra zo mat.

Gwelomp penos eo troet an traou abaoe m'eo kaset Doue er maez eus ar vro. Diouz ar frouez ec'h anavezet ar wezenn.

Gwechall, pa zente an dud en hor bro ouz lezenn Doue, ar briedelez ne c'helle ket beza freuzet. Unanet gand Doue, an daou bried a boanie d'en em garet, d'en em zikour, d'en em c'houzanv an eit egile. Ne c'hellent ober eun eil dimezi, nemet goude maro ar pried kenta.

Hirio, an divorz a zo aotreet gand lezennou ar vro. Ha petra c'hoarvez? Selaout mat. Er pemp bloaz a zo tremenet goude ar brezel, ez eus bet e Frans wardro 25.500 divorz bep bloaz, ha kreski a ray c'hoaz an niver, skler eo. An dra-ze a ra, e dek vloaz, ouzpen 250.000 divorz, ha rak-se, ouzpen 500.000 familh freuzet. Dizale, er c'heriou bras, an dud divorset a vo ker stank hag ar re n'int ket.

An den a ra e lezenn. Penak neuze en em zieza? « Bevomp hor buhez », a lavaront. « Gwir hon eus da gaout plijadur. »

Gwechall e veze lavaret e tile an den labourat, poania, ober e zever penn da benn, n'eus forz e pe stad eman; n'eo ket lakat er bed-man evit klask plijadur da genta, met evit kas e ero da benn er park m'en deus ennan da labourat.

Fin d'al lezennou-ze, a zo re striz, re galet. Ar vuhez a zo berr, an den a dle kaout plijadur, ha buan, ha kalz. Met marteze ho plijadur a ray droug ha poan da re all. N'eus forz. Gwaz a ze d'ar re ne ouzont ket en em dennal — Evit kaout plijadur, eo ret kalz arc'hant, rak gand arc'hant e c'heller prena pep tra. Hag e weler an dud o redek warlerc'h madou an douar, o klask beza pinvidik ar buana ma c'hellont, hag alies dre hentcho difennet. Ha kalz zoken a zo o micher laerez, ha ma ranker laza, e lazont. E peb amzer, ez eus bet laeron, met n'eus bet morse muioch eget hirio. E peb amzer ez eus bet muntnerien, met o niver a gresk bemdez, hag ar pezh a zo spontus eo gwelet pegement a vuntrerien a zo etre pemzek hag ugent

vloaz. Ar skol, an deskadurez, evel a weler, ne zigas ket, dreizi he-unan, gwellaenn en dud.

Ar skol, an deskadurez a zo mat pe fall, hervez ar c'hen-tellou a vez roet d'ar vugale. Eun tamm mat eo gwelloc'h eun den ne oar na lenn na skriva, met a oar karet ha servicha Doue, eget eun doktor a anavez holl skianchou ar bed, met ne gred ket e Doue ha ne gar ket anezan.

Gwechall an den, pa veze kouezet, a c'helle en em zével adarre, en eur ziskouez keuz, en eur c'houlenn pardon. Hag er relijion gristen ez eus eur zakramant, sakramant ar Binijenn, savet gant madelez Doue evit rey ar peoc'h d'ar pec'her glac'haret a c'houlenn pardon hag a c'hoanta ren eur vuhez vat en amzer da zont.

Hirio, er relijion laik, n'ez eus mui a bec'hejou. An den ne c'hell ket pec'hi. Ne ra nemet senti ouz e youlou, klask e-blijadur, ha mat a ra. An hini a c'hoantafe anzav en deus pec'het, goulenn pardon, a vefe kemeret evit eun den simpl, din a druez. An dud krenv, n'eus forz petra o deus gret, a gerz gand o hent, uhel o fenn, hep keuz na glac'h-ar.

Ar reolenn a vuhez eo senti ouz ar c'hoantegeziou, an yolou a zeu er galon. Setu aze mouez an natur. O selaou ar vouez-ze, ez aer gand an hent mat.

Gwir da gaout plijadur! Evelato n'int ket deuet c'hoaz a benn, hon doktored, d'en em zifenn ouz falc'h ar maro. Fizians o deus e vo kavet an tu divezatoc'h, dre an deskadurez, da join hep mervell. Da c'hedal, e tolont o c'houarnar hag o malloziou war ar maro. Pep seurt traou a lavaront d'ar maro: tra kriz, emezo, diskiant, dall, disleal. Ar maro ne ra van evid o c'blevet, hag a gendalc'h da skey.

N'eo ket souezus ec'h en em gemerfent ouz ar maro, rak ar maro a lamm diganto pep tra, p'e gwir e lavaront n'ez eus ken buhez nemed ar vuhez-man.

« Beva o buhez », « gwir da gaout plijadur », senti ouz youlou, c'hoantegeziou ar galon, setu aze ar reolennoù nevez kinniget d'an dud gand an doktored laik, a lavar beza furoc'h eget Doue.

Hag ar pez a zo gwasoc'h, eo ma c'hoanteont lakat o c'hredennoù dre nerz e penn holl vugale Frans, rak ar vugale, emezo, a zo d'ar c'houarnamant araok beza d'o c'herent hag a dle beza desket d'ezo kredennoù ar c'houarnamant. Ministr an Deskadurez, Daladier, en doa zoken prepart eul lezenn evit kas d'ar prizoun ar re o defe an hardisegez da lavaret n'eo ket mat al levriou lakeet e skolioù ar c'houarnamant. Ma vije gret al lezenn-ze, setu ar gerent lakeet nec'het: unan a zaou: mont d'ar prizoun, pe beza a du gand ar c'houarnamant, zoken en traou a zell ouz an ene, ouz ar relijion.

A drugare Doue, ez eus c'hoaz skolioù kristen, a jom hag a jomo digor, rak ar gatoliked ne lezint morse o serra. Dre ar skolioù kristen ha dre ar getennadurez roet en

iliz gand ar beleg eo e vez skignet dre ar vro ar gwirio-meziou a zalc'h anezi beo.

Ma ne vefe nemet doktored laik da zeski d'an dud e c'hellont ober ar pez a garont, oa gret gand ar Frans. Hevelep kelennadurez a ro d'ar broioù taol ar maro.

J. U.

Ar bugel hag ar Barz

AR BARZ

Lavar d'in-me, va mignonik,
A be Vro out-te-gimidik.

AR BUGEL

E Breiz-Izel oun bet ganet
Ar c'haera bro eo eus ar bed.

AR BARZ

Lavar d'in 'ta, paotr ar meziou
Petra ganes en da zoniou

AR BUGEL

Em soniou, me gan Breiz-Izel.
Bro goz ar Zent, douar santell!

AR BARZ

Lavar d'in-me, paotr an Are
Petra zonjes war ar mene?

AR BUGEL

E keit ha ma peur va denved
Me zonj en amzer dremenet

Me zonj en amzer dremenet
Pa oa Breiz dindan an Duked

Hag e teu d'in hekleo trouzus
An amzerioù-ze ken eurus.

AR BARZ

Ha petra lavar d'az kalon
O bugel Breiz, o gwir Vreton?

AR BUGEL

Lavaret a ra d'am c'halon
Eo dleet d'in frankiz wirion:

Frankiz evit karet va yez
D'he c'homz, e pep lec'h, ha bemdez;

Frankiz da véva e kristen,
Hervez Doue hag e lezenn;

Frankiz da viret gizioù koz
Va Zadou, hervez va mennoz.

Ar Frankiz-se 'zo bet laeret
D'am Bro, en amzer dremenet.

AR BARZ

Lavar d'in, mab an Drouized,
Gant piou out-te, bet kenteliet?

AR BUGEL

Skoliet ouñ bet gand eur mestr mat
Eus ar vro-man, eur gwir vreizad.

AR BARZ

Lak en da galon a vugel
E savo da vro Breiz-Izel;

Da Vro zispar, kred, a gavô
Ar peoc'h, eun amzer a deui,

Hag he devo ar gwir frankiz
Da heulia yez, gizioù ha feiz.

Kendalc'h, va mab, da veza fur,
Hag eun deiz, Barz, te a vo sur;

Hag e labouri a-zoare
Da zevet Bro-Vreiz adarre;

Hag e prezegi d'ar proiz,
Karantez Bro goz an Drouiz

Sevel a ray eun heol nevez
Kred, war an Arvor, eun dervez.

Abarz peñik, me lavar c'hoaz,
E Breiz 'vo chenchet penn d'ar vaz!

Da c'hedal, o Breizad yaouank,
Kan e brezoneg gwerzioù stank;

Lar da Vreiziz, da genvroiz,
Ez out eus gouenn an Arvoriz,

Hag e kavfes gwelloc'h mervel
Eget trei kein da Vreiz-Izel.

GLAODA AR PRAT.

(Mouez reier Plougastell).

KERNE

N'eus sant ebed marteze hag en defe merket dou-
noc'h e roudou war douar Kerne eged an hani en deus
savet ar c'henta Lann, ar c'henta manati war douar
Breiz: Sant Gwennole.

Mat e ve d'omp Kerneviz ha d'eoc'h c'houi holl Breto-
ned ober eur zell, eur c'hrogadig ne ve ken, ouz buhe an
den-ze, tad ar Venec'h ha diazeour Landevenneg.

**

Sant Gwennole — Landevenneg

D'ar mare-ze e oa fall o stal gant Bretoned Breiz-
Veur: brezel eus eun tu, kernez eus eun tu all, hag ar
vosenn e pep lec'h.

Eun den brudet, Fragan e ano, kenderv d'ar roue Ka-
toun, a lakeas en e benn tec'hi kwit dre vor gant e zaou
vab Gwezennog ha Jakut, hag o mamm Gwenn. Klask
a reas eur vag ha tud da zont gantan. Dastumet eun
dornadig mat, e savas al lien hag al lestr a droc'has
ar mor penn eun dirazan war ar c'hreiste, kren varzu
an Arvor.

An avel a oa ganto ha kas an dour ive. D'ar gourlan
war dro pemp eur eus an abardêz e oant en em gavet
e goueled porz Sant-Brieg. Douara a rejont ha setu
Fragan da 'n em lakât dioustu d'ober eur bale en doua-
roufosta; kouezout a reas war eun dachenn vrac: « Al
lec'h-man, a laras-hen, a zo gwaskedet mat gant koa-
jou; steriou a ziverr hag a zired dioufo: dour ne rayo
morse diouer. Aman e savin ma lojeis ha hini ma zud ».
Evelse e oa grêt.

Hep dale e kreskas an dud, hag an danvez da heul:
Ploufregan, ar genta parrez a zo ano anêi e Breiz-Izel
a oa savet (460).

**

Eno e teuas da Fragan eun trede krouadur, a oa roët
d'ean an ano a Wennole. E gwirione gwenn e chomas
penn da benn eus e gavell beteg e vé.

Sellou Doue a oa war ar potrik bihan: galvet e oa
d'eur blanedenn lugernus er bed-man. Eun devez ma
oa e dad o tiwall an denved e tarzaz warnan eur barr-
arne, luc'hed ha kurun ken a strake, hag e welas en eun
tôl krenn pe seurd c'hoant en doa Doue d'ober eus e
vab.

Fragan neuze a bignas gant Gwennole war e vag ; mont a reas hed ha hed gant an ôchou ma weler breman enno Binik, Etables, Sant-Kêe ha Brehek, beteg enez Laure.

Enni e veve eun den santel, Budog e ano, mianati gantan ha skôl ive, kalz menec'h ha kalz diskibiien.

N'em gavet dirag ar abad, Gwennole a heuilias ar giz, gourvez a reas e harz e dreid. Ar pôtrig a zouge eur



Dor vras Peniti Landevenneg

furnez-trec'h d'e oad hag e lec'h lenva evel ar vugale all, ne lakas man ebet evit en em zispartia diouz e dad. N'en doa neuze nemet seiz vloâ.


Renet gant eur mestr evel Budog, « ar mestr uhel e ouiziegez » **magister arduus**, vel ma taret, Gwennole ne voe ket pell evit samma eun deskadurez vrac ha lak ket e voe prim da geleann eun nebeudig all. Beb an amzer goulskoude, e teue d'ar ger da welet e gerent. Ma vije bet da jom ganto en dije grêt eun denchentil a zoare: ét e vije da di ar prinz gant bugale an noblanz d'ober eur mestr-breze].

Met Gwennole ne oa troet nemet gant Doue ha traou ar bed all hag evelse e chomo ato.

Eun tól c'hoarvezet en enez Laure gant diskibiien sant Budog, a ziskwezo d'omp n'o deus holl vugale ha

yaouankizou ar bed nemet eur spered-boutin (1) » : Tenna eun dro fin ne vern da biou ha dreist holl d'an tosta mestr.

Eun devez, sant Budog â zavas c'hoant gantan mont ive d'ober eun dro d'an douar bras. Dastum a reas e bôtred skol hag e laras d'êo: « Ma bugale, arabat e kleten ho pefe grêt eun diaoulegez bennak: rak-se, bezit fur keit ha ma vin du-ze. A hend all Doue ho kwall dapo e doare pe zoare » — « Ni vo fur. Tad, n'em chalit ket » a-ganas ar yaouankiz holl en eur vouez. —



Ar pez a jom eus a iliz Landevenneg

Bugale! Ne oa ket ét mat ar vag kwit eus ar porz, ma krogas ar vreskin enno, Gwennole hag all hag int da redeg dre an tevenn en dra ma c'hellent. Abenn ar fin, unan anêo a dapas eul lamm ker gwas ma torras e c'har. Neuze, avat, e savas lenv: « Penôz n'em denna breman? Pelec'h tec'het? Setu petra dalv dizenit ouz hon Tad hag ouz an hani m'eman o terc'het e bias en hor c'hichenn !

A drugarê Doue, Gwennole a oa eno: dont a reas a henn da barea ar c'har dorret; setu den ne glevas na trouz na grik.

**

Gwennole zo deut breman d'an oad a zaou vloâ war 'n ugent, Budog e c'haiv d'e gaout: « Ma mab, me gav d'in out den breman da vale da-unan gant hend ar bed,

(1) Eur spered hevel; eur memez spered kenetrezo.

ha gouest zoken da rena ar re all trezeg ar baradoz. War douar Breiz-Izel n'eus manati ebet c'hôaz ; te yelo gant unneg diskib da ziazeza an hani kenta. » — « Mont a rin, Tad », a respontas Gwennole. Hag hen ha mont. Treizia reas gant e gompagnunez eur vro a bez da glask eul lec'h kaer ha didrouz. Setu ma n'em gavas evelse e goueled mor-bihan Brest, e penn eur




Maen-bez Yann
ar C'hôz Kastell
abad Landevenneg



Skeudenn goz
sant Kaourintin
miret e Landevenneg

ster a raer ar Ster-Adin anezi. Eun enezennig 'oa dirazo, fustet gant peb avel ha goloët a reier garo. Daoust da ze e c'hoantejont mont di ha fall pe vat e oa laket war zao eun tibedy ha lochouigou; klozet oa ouspenn eul liorz en dro d'eo.

Tri bloa e c'helljont padout eno. Met n'eo ket an naon a reas ar muia diouer d'eo. Alies, alies pignet war eur roc'h uhel e taolent o zell war eur beg-douar a zave e benn dirazo dreist ar mor. Dont a rêe da zisken



LANDEVENNEG

evel ma oa araoek m'eo bet diskaret gard an Dispac'h

brao ha gouestad e traon eur stankenn gaer. Ar mor a lamme warni d'ar gourlan, ar stankenn-ze a oa gwas-
kedet ouz ar gwall aveliou gant ar reier ha troët a hend
all ouz ar zav-heol. Ne oa-hi stag ouz an douar-bras
nemet gant eun ero dister: eur stankenn hag a vleunie
enni hepred ar gwez hag ar bokedou, zoken pa vije
maro an traou e lec'h all e kreiz ar goanv ar gwasa.

Eun devez, d'eur reverzi bras; pa oa ar mor en e
izela, Gwennole a laras d'e vignoured: « Ha ma yafemp
bremen d'ar stankenn a welomp du-ze!... amzer hon
eus. » — « A-raok! » a respontas ar re all. Hag int ha
mont: Chôm a rêjont enni evit mat. An dra-ze n'eo ket
kaer e kavas Gwennole an dachenn! E spered, e galon
ken kizidig, ken douget da gement tra grouet a c'hell roi
ear skeudenn eus kaerder, brasder ha furnez an Otrou
Doue, a n'em zave diouz an douar betek ar baradoz,
pa rée eur zell hebken ouz ar c'hoad bras dira-zan, ouz
ar yeot, ar bokedou-dindan e dreid, ouz dour ar sterig
a lamme er mor en eur gana.

Dibab' a reas ar vrava takad er stankenn-ze, hag e
savas adarre eun tibedy, lochouigou gant eul liorz en
dro d'eo.

Diazezet e oa manati Landevenneg.

Ma pede start an dud ennan, e labourent mat ive:
toulla a reont dirazo er c'hoad bras. Elec'h ma pilent
gwez gant o bouc'hidi, e teuent goude gant an alar
da zigori an douar hag er bloavez warlerc'h e vije kavet
da eosti ...

**

Met Gwennole a gave e oant re nebeud en o c'hom-
pagnunez. C'hoant en doa e vije distroët tud an Arvor
da feiz an Otrou Krist, ha n'eo ket gant daouzek manac'h
e vije deut a benn. Setu hen, eun devez kemer e vaz hag
en hend gant unan pe unan eus e vreudeur da glask
diskibien yaouank evit e vanati. Mont a reas evelse,
lod a lar da Vro-Leon, lod all da Gemper, dre Mene-
Hom ha Lokournan...


Ar re a zav gant bro Leon a gred e pignas ar zant
gant hend bras ar Romaned, betek an dachenn-zouar
a zo hizio parrez Lanrivoare. Eno, en eur maner, e veve
eun denchentil ar Ronvel hag ar brinsez Levenez. Eur
c'hrouadur o doa, gwenn evel eun el, egiz ma verk e
ano Gwenaël.

Pa oa sant Gwennole o tremen ebioù ar maner, ar
pôtrik a oa da vat o c'hoari er porz. Seiz vîâ bennak
n'en doa ken, ken kaer, ken koant, ken seder e kavas
Gwennole anean ma c'houlennas digantan ken krenn
ha tra: « Ma foñrig mat, c'hoant t'eus da zont ganomp
da zervicha an Otrou Doue en eur gouent, en eur ma-

nati. » — « Tad, a respont ar bugel, ne c'houlennan
ket gwelloc'h; ober a rin ar pez a blijo d'eooc'h e servij
an Otrou Doue. Dioustu, ma karit, emoun ganoc'h,
hep laret kenavo da zen. »

Gwennole, skoet gant eur seurd respont, a gas ar
potrig da gaout e dad hag e vamm. Roi a ra da c'hoût
d'eo c'hoant o mab. Ha raktal Gwennol a zo lôsket da
vont da Landevenneg.

Hervez eur rumm all, en Erge-vihan en tu bennak
eo e c'hoarvezaz an fol-ze. War unan eus gwer iliz-veur
sant Kôrantin Kemper e c'heller gwelet livet kaer sant
Gwennole oc'h en em gaout gant ar c'hrouadur bihan, a
gemero eun de e vaz-abad da rena war e lerc'h manati
Landevenneg. (Da heuilh).



PRIZIOU AR C'HATEKIZ

Goulennit hoñ tri leor nevez-flamm, taolennet brao-ke-
nan ha skrivet en eur brezoneg plijadurus hag eas da lenn:
Prizioù dispar evit bugale ar c'hatekiz:

<i>Christo pe buhez patron an ostizien</i>	4 fr. 00
<i>Buhez Jenovefa a Vraban</i>	3 fr. 50
<i>Viktoria Konan a Zant-Luk</i>	3 fr. 00

Diskenn briz a bouez war ar bern

Skriva da :

EMGLEO-SANT-ILTUD
BREST — 4, ru ar C'hastell — BREST

ROUE AL LAZ

Eun daolenn a oa, peadra da lakaat an daelou da redek. Kadiou vras, koulskoude, ne oa ket a dristidigez en e galon. Karget e oa da gonta an dud ha, dre m'o anavezze holl, e stlape gant pep hini anezo, eur pöz fentus bennak.

— Ah! te 'zo aze, Mark an Herri? Ne-peus-ket digaset ganit da gontell laz an moc'h? Dêl, eur fuzuilh az pezo! — Ha te, Juluen vihan, te 'zo mat da baka lenn, sell aman labour evidout!...

E keit ze, ar marc'heg a oa et da doull an nor ha, kerkent, addeut er c'heo war e giz. Mont a reas da guzulikaz ouz skouarn ar C'hloareg hag o daou ec'h ejont ermêz, tiz warno. Kerkent, unan eus ar gedourien en em gavas ganto, o tont.

— Tennou fuzuilh, emezan; ne glevit ket? Warzu Lanuon.

— Klevet a reomp, eme ar C'hloareg, roufennet e dal gant an anken. — N'hon eus ket a armou aman ken, emezan. Koulskoude, me ne badin ket aman; red eo d'imp mont war o zikour.

— Pennou-baz a zo gant an holl, a lavaras ar gedour.

— Ohas ho peus aman? eme ar marc'heg. — Ar re-man, o klevet an tennou, a oa'n em laket da harzal.

— Ya, memet int deut da vezan ken gouez ha bleizi.

— N'eus forz, heli ar gordenn, e kasoc'h anezo ganeoc'h hag e kavoc'h kentoc'h roudou ho mignoned e kreiz an noz.

Dizrei a rejont er c'heo.

— Klevit, tudou, eme ar c'hloareg; stag-oc'h-stag eman hon zud hag Ar Re C'hlas; klevet e vez tenna.

Red eo d'eomp mont eur vandenn betek enno. Pennou-baz hoc'h eus; a-walc'h eo! Kadiou, kemer ganit an daou gi krenva, hini va c'hoar, « Furig » ha neuze « Kreo »; dalc'h anezo ouz ar gordenn ha kea araok da ziskouez an hent. Eun ugent a dud ganeomp, ar re all, chomit aman gant Kolas da ziwall an ti, ha mar rankit en em zifenn, distagit ar chas all. Ni a dle bezan distro araok an deiz.

Kadiou a oa et raktal da gerehat an daou gi. Warlerc'h Tinteniak hag ar c'hloareg, eur bagad en em daolas da gaout toull an nor. Kolas a ziredas, ha pa voe tremenet ugent:

— Heia! et ar gont, emezan; ar re all a chom ganin!

Den n'en doa c'hoant da chom gant Kolaz, met urz ar c'hloareg a oa; hini ne lavaras grik.

Ar bagad all a oa e penn ar vali, o c'hortoz Kadiou da zont gant « Furig » ha « Kreo ». Arruout a reas, an daou gi gantan kenver ouz kenver ouz an hevelep chadenn; poan vras en doa, daoust d'e nerz, o tere'hel anezo; en despet d'ezan her chachent d'o heul. « Kreo » a oa henvel ouz eur pikol danvad, bleo d'ezan da c'hobetek e zaoulagad; « Furig » a oa eur c'hi levrant, uhel war e zivesker, troc'h d'ezan, n'eo ket da redek, met da nijal, diou renkenad skilfou en e benn, henvel a-walc'h gant a hir e oa, ouz hini eun aerouant.

— Deomp da glask da vestrez [... da vestrez... « Furig » ! eme Gadiou. Hag ar c'hi bras a lamme, peadra da ziskarr e genseurt « Kreo » ha Kadiou.

— War 'raok! eme ar C'hloareg.

Ar chas, eur wech tapet ar roudou, a glaskas mont d'an daoulamm; heuillit an neb a c'hello... Gwech ha gwech, o fri d'an douar, ha d'ar red adarre, en eur heja o lost. Kadiou a c'houeze o chacha warno; tud ha chas ec'h eent war 'raok, mantrus o gwelet o tremen, dindan sklerijenn al loar en he c'hann; seblant o doa da vezan stag holl ouz an hevelep chadenn ha bezan jachet gant an daou gi.

An tennou a dregerne ar vro ganto breman; an daou loen a randone muioc'h-mui. Laket e oa bridou d'ezod'o harz da harzal.

— A-zav! eme ar C'hloareg, berr warnan, e zaoulagad war var e benn. — Stagit ho chas ouz eur wezenn, emezan, pan n'hellas kaozeal, ha gedomp eur pennadig; red eo gwelet pelec'h emamp ha penôs eman an doare aman. Arru ez omp warno, me gred!

Tinteniak hag a oa savet war eun torr-kleuz a ziskennas soudan;

— Ah! emezan: setu, 'm eus aon, ar c'hanfard en doa va digaset da Gersôzon!

Lamm a reas adarre war an torr-kleuz hag e wignas d'ar pôtrig. Ar Gwinver, o tremen ebioù d'ar red, a anavezas ar marc'heg hag a astennas e c'harr muioc'h c'hoaz. Pa welas ne oa ket heman e-unan hag en em gave eno kemend all a dud, e teuas seder en eun taol.

— Me a oa digemennet d'in gant Kevareg, emezan, monet da gas d'eoc'h eus e gelou! Ar Re C'hlas a zoaze, e porz kloz eur vèreri, gant an aotrou Kure hag an diou itron... hag o deus kaset eun den eus an ti da lavarret d'eomp lezel anezo da dremen, anez e lazjent hon tud.

Ar c'hloareg en doa lôsket eur glemmadenn.

— E keit ze, eme ar paotrig, e talc'hont da denna. Kevareg a lavar eo abalamour ma teuy harp d'ezo di-

gant o zud... hag en deus kaset ac'hanon da lavaret d'eo'c'h digas sikour d'ezan ivez...

— Belec'h eman Kevareg ?

— Du-hont, war ar run; ac'hane e wel mat porz ar vèreri hag ar vro tro-dro.

Ar C'hloareg a oa chomet d'en em zonzal. Pleget e benn gantan, e vuzellou a finve evel pa vije bet o pedi.

— N'hellomp ket dale, emezan; red eo mont er vèreri, e kuz, ha t'ol evez dre belec'h e c'hellfe hon tud tec'hel kuit, hep bezan gwelet; rei d'ezo da anaout ez eomp da denna sellou ar Re C'hlas war an tu kontrol d'al lec'h-ze, ha sikour anezo da gemer an tec'h pa vo deut ar mare. Te, paotrig, emezan, kea da gaout Kevareg ha lavar d'ezan donet betek aman kerkent.

— Hag ez an raktal! eme ar bugel.

— Piou, eme ar C'hloareg; a c'hellfe esaat an taol-ze, mont en ti ha gwelet hon tud ?

An holl a dave.

— Ar gwasa, eme Gadiou, n'eo ket kaout eun den, met kaout an tu da vont aze. Va lezit bepred d'ober eun esa, ha mar kavan va zro...

— Kleo, eme ar C'hloareg, benn eun hanter- eur aman, — nann araok, avat, — mar 'n em gav par an traou ganit, ro d'eomp da anaout pelc'h hon do da skei, ha pa vo diredet ar Re C'hlas evit herzel ouzomp, kea kuit dre an tu kontrol... ha Doue da reio d'it chas vat !

E vouez a grene gant an nec'hamant.

— Nag ar chas ? eme Gadiou.

— Distaget e vezint pa vo ar c'houlz. Dal, kemer ar bistolen-man !

Ar mevel a lakas ar bistolenn en e c'hodel, a reas sin ar groaz, hag a gemeras e dro, eur goumoulenn o vezan mouget sklêrijenn al loar, evit treuzi an hent hag ar park nesa. Neuze, war e zorn mat war bouez eur pemp munutenn bale, e welas ar vèreri.

Ar Re C'hlas, gant a aon o doa rak ar « Chouanted », a denne hep paouez dreist da vegeriou ar porz ha dre ar fenestr a-drenv an ti, hag an ti, koulz hag ar porz, a oa tro-zro d'ezo eur park dizolo ha frank da vat, eun hent-karr ennan, dirak dor ar porz, da vont da dizout an hent bras. Tremen eno na oa ket yac'hus, dreist-holl ouz sklêrijenn al loar. — Deomp bepred tosta ma c'hellimp ! a c'hrosmolas Kadiou. Hag ez eas, war e bouez, betek penn park an ti. Kant metr bennak c'hoaz da dreuzi... Red e vije d'ezan kaout eun dra bennak d'her gwaskedi, en eur gerzet, da harz bezan gwelet ha bezan gloazet.

Met petra ? Pemp munut da glask ha ma ne gav ne- tra, e kerzo war zizolo; gwaz- evitan!... Bing! eur bo-

lod a dremen ebiou d'ezan. Daoust ha gwelet eo bet ? Bing! Eun all. A dra zur, lagad ar gedour en deus anavezet n'eo ket eur post-kled eo an dra-ze nevez plantet, du-hont, e harz ar c'hleun.

— Klaskomp toull elec'h all! eme Gadiou; an amzer a dremen! — Setu du-hont eur c'harr bannet, troet e lost ouz an ti; betek hennez eo red tizout, forz penôs, a-ruz, war e gof... nemet ec'h arruo!... Eur zin ar groaz c'hoaz hag en hent war e grabanoù. Biskoaz hirroc'h hent n'en deus grêt... Birvi ra e wad... pizer- net eo an dour war e dal... Arru eo, koulskoude; setu hep; ouf!... dindan ar c'harr!... Eun diskwiz ha war raok adarre, nemet en dro-man e kas ar c'harr d'e heul. Sammet en deus anezan war e choug; e gein din- dan an ahell, e kerz a-souz-drenv, a dammigou bihan, lost ar c'harr o vont a-ruz en e raok. Piou a zoniñ e chench lec'h ar c'harr-ze hag ez eus eun den dinda- nan? Aze, talbenn an ti ha n'ez eus fenestr ebet en- nan... Eur ruzadenn c'hoaz ha setu gounezet an taol kental!... Eun dizamm kaer!... Breman, tro ar moge- riou... Set' aman, war eur zolier bennak, eul lukarn damdigor ha n'eman ket uhel... Eur zell d'an nec'h, eun all tro-dro ha, war bouez e ziouvec'h, setu Ka- diou e benn er zolier... Foen dindan e zorn; a-zioc'h d'eur c'hraou eman; klevet a ra ar zaoud o raskognat ar voger gant o c'herniou... Ma 'z eus eun toull da deurel ar foen e tiskenn dre eno. Hag e kav an toull hag e tiskenn, hep gwelet seurt, hag e kouez ouz penn eur vioc'h nevez alet, o lipat he leue... Hardisaat a ra Kadiou; c'hoarzin a ra, zoken, pa zoniñ e c'hell unan bennak dont breman soudan da lakaat al leue da zena.

Digeri dor ar c'hraou n'eo ket diés, met aze 'n hini zo eur gwall gammed d'ober; hounnez a vo an hini vat pe an hini fall, hag e chom Kadiou da chilaou ha da zellet dre doull ar chadenn... Hal! hal! trouz botou ! Arru zo tud gant goulou. Digeri 'ra an nor... Eur plac'h gant eur zailh a dosta ouz ar vioc'h alet hag a ginnig d'ezhi dour da eva. En eur zerc'hel mat d'ar zailh war he glin, e huanad hag e klemm :

— Salver Jezus! emezi, pebez nosvez en ti benniget- man!... Alo! Pechar! Chom a rit!... An diaoulou-ze, pegoulz ez aint ac'haleñ!... Aze eman he leue bihan, leue bihan Pechar goz! ya!... Ma c'hellfe ar Chouan- ted arruout, da vihana, ha foeltri kement hini zo ane- zol... Cho! Du! n'eo ket d'ac'h eo ar gouelien-man!... Ha sonjal emañ aze diou dimezell baour hag e kom- zont diouz o laza!... Moc'haj!... Pechar 'ta!... Sodez!...

Kadiou a reas eun tammik trouz er c'horn e lec'h ma oa kuzet; sonjal a rê: « Ar vatez, marvat, eo ar plac'h- ze! Gant hounnez e rankan klevet an doare! nemet ne

sponto ket ganin! » Ha pa welas anezi o sevel he fenn da chilaou, e lavaras gozik dre e alan :

— Na spontit ket! Eur Chouant a zo aman!

— Strafilhet holl, ar plac'h a lezas he zailh da goueza.

— Trouz ebet, en han' Doue! eme Gadiou. Me 'zo deut d'ho sikour ha n'emaon ket va-unan. Daou c'her hepken! Pelec'h eman an dibu dimezell hag ar beleg ?


(Da heuilh).

Va Dousik koant

Moderato



Va dou-sik koant o ya 'dra zur, va dou-sik



koant o ya 'dra zur, c'houi ra - fe d'in kalz pli - ja-



dur Dam da ram da la da ma c'hell-fen



ho ta - rem - pre - di Dam da-ram da la di

Hen. — Va dousik koant, o ya, 'dra zur (2 *wech*)

C'houi rafe d'in kalz plijadur,

Dam da ram da la da,

Ma c'hellfen ho tarempredi

Dam da ram da la di.

Red e vo d'eomp-ni, va mestrez (2 *w.*)

Mont d'ar pardonioù alies,

Dam da ram da la da,

Evit gellout 'n em zidui,

Dam da ram da la di.

Hi. — N'eo ket ried mont d'ar pardonioù (2 *w.*)

'Vit kaout ehez a ebatou.

Dam da ram da la da,

Gwell eo ganen teufec'h d'am zi

Dam da ram da la di.

Hen. — Ma n' zafe den d'ar pardonioù (2 *w.*)

Chomfe ar per, an avalou,

Dam da ram da la da,

Ne vefent gwerzet da hini

Dam da ram da la di.

Hi. — M'ho trugareka, servicher, (2 *w.*)

M'eus defot avalou, na per,

Dam da ram da la da,

M'ho peus arc'hant, mirit int-*z*,

Dam da ram da la di.

Hen. — Livirit d'in ta, va mestrez, (2 *w.*)

C'houi gemerfe priedelez?

Dam da ram da la da,

Ha c'houi ' gafe aes dimezi

Dam da ram da la di.

Hi. — Dimezi a zo trubuilhus (2 *w.*)

Eur plac'h yaouank 'zo ebatu.

Dam da ram da la da,

Eun den yaouank 'zo dizoursi,

Dam da ram da la di.

Hen. — Ma chomfe an holl tud yaouank (2 *w.*)

Ar bed a vefe kalz ne frank

Dam da ram da la da,

Red mat eo d'an dud dimezi

Dam da ram da la di.

Hi. — Nag a bed hini 'vez gwelet (2 *w.*)

Er briedelez enkrezet

Dam da ram da la da,

Ha ganto gwall verr ar peuri

Dam da ram da la di.

Hen. — Ken'vo va mestrez, a laran, (2 *w.*)

Houman eo va c'homz divezan,

Dam da ram da la da,

Birviken n'en em welimp mui

Dam da ram da la di.

Hi. — Deuit, goumezet oun, m'hen tou, (2 *w.*)

Va dousik koant, gant ho komzou,

Dam da ram da la da,

Ma 'z aimp hon daou da zimezi

Dam da ram da la di.

Destumet gant F. M. e Scignac.

Goulenñ ivez e Ti E. S. I.

LEVR OFERENN an A. Uguen,

moulet evid an eil gwech

Eur priz kaer ha talvoudek meurbed

LABOURIOU AR MERC'HED WARDRO AN TI

Kentelioù Tintin Anna

XV^e PENNAD

Ar yer

Ma 'z eus gounidegez, en eun tiegez, diouz ar c'houli-
ned muioc'h a zo c'hoaz diouz ar yer ha nebeutoc'h a
labour.

An enezi a stag da zefi, abred, er goanv, kerkent ha
ma vez klouar; dleet eo en em zizober, dioc'htu, eus ar
re anezo a dorfe pe a zefrfe o viou nemet dont a c'hell-
fed a-benn d'o divoaza; evit kement-se e roer an ali da
lakat eur vi, da galedi, en tan, da ober leun a doullou.
Bihan ennan gand eur spillhenn ha d'e ginnig d'ar yar,
ez-tomm; pa vezo bet skaotet he beg, daou pe dri dervez
dioc'htu, e kollo he fleg fall.

Ar yer kosa eo ar re wella da c'horri ar viou. Arabad
eo lakât viou dindan eur yar o klochal a-raok he daou,
vloaz, daou vloaz hanter, met betek he femp, c'houec'h
vloaz e vezo gallet hen ober goudeze. Seulvui ma vez
krenv ar yar, tomm an amzer ha seul-vuioc'h a viout a
c'heller lakât dindanni; a-raok miz meurz, o lakât daou-
zek vi e laker tra a-walc'h; e miz meurz e c'heller lakât
trizek pe bevarzek; e miz ebret pe viz mae e c'heller lakât
betek seitek ha triouec'h.

Red eo lakât e gor, dindan ar yar, ar viou freska hag
ar viou brasa; lavaret a raer n'eo ket mat lakât viou hag
o deus ouspenn pemzek dervez; arabad eo loc'hat ar viou
epad an teir zizun ma chomo ar yar warno; o zrei nemet
ken, ha beza sioul wardro ar yar; lakât en he c'hichen
eun tamm boued hag eur banne dour ma c'hello mont
war he neiz adarre kerkent ha m'he devezo debret;
ezomm he deus da gemeret eun tamm ear, eur wech pe
ziou bemdez, met da ziouall ez eus ne jomfe re hir er miz.

Abenn eun dervez war nugen e tinodo al laboused;
ar melen-vi o deus debret a-raok dont er miz eus o c'hio-
zou a vago anezo epad peder eur war nugen; n'o deus
ezomm boued all ebet edoug an dervez kenta; sec'hed o
devezo a-raok kaout naoun.

Yer bihan hor bro n'o devez ket a ezomm da zibri ken
alies marteze hag ar yer Indez; koulskoude al laboused
nevez dinodet a rank kaout boued meur a wech bemdez;
war evez e ranker beza anezo eta epad ar c'houec'h sizun

genta ha dreist-holl edoug an derveziennou kenta. Teir
gwech a-raok kreteiz eo mat rei boued d'ezo ha diou
wech goude, rak a-raok lein o devez muioc'h a c'hoant
dibri, met, en tri dervez kenta ne zellont ket kalz ouz ar
boued nag ouz an dour fresk. Bruzunaziou bara sec'h,
heiz pe gerc'h, brenn ha patatez, en eun douez, a zo boued
mat d'ezo. Gwelet em eus souba tammou bara krazet er
gwin da rei d'al laboused blank (1) pe d'eur yar diner-
zet, met ne vez ket a ezomm eus al louzou-ze alies: gand
ear, tommder, ha magadurez vat al laboused a-gresko dillo
ma ne vez ket ankounac'haet ar peb reta, war o zro,
koulz ha wardro an traou all, da lavaret eo an netadurez;
an dra-man, merc'hed, a zo eun dra hag a zell ouzoc'h.

N'eo ket eur rivin beva yer; skrabat a reont an douar
da glask buzug ha merien; pigosat a reont ar bruzuna-
zious bara, ar greun, ar prenved.

Pa vez distaliet dioc'h ar prejou n'eo ket diaes lakât,
en eur pod, da virvi, war an tan, ar restadou a bep seurt:
an dour bet o skaota al listri-kegin, eun dournad brenn
ebarz, brenn gwiniz, brenn heiz pe vrenn segal; ar starta
ma vez ar boued eo ar gwella. Etre c'houec'h ha seiz eur,
en hanv, eiz pe nav eur, er goanv, e vezo kaset o boued
d'ar yer; da boent merenn e c'heller teurel eur guchenn-
nig c'hreun d'ezo, hag, er rest eus an deiz e c'hellont
klask o zammig boued. Ar c'herc'h a laka anezo da zefi;
ar gwiniz du a ra ar c'hohtrol: dont a reont da veza re-
lant ha ne zofont mui. Ar yer a gav mat mouar du; ali
a roer da fourra drez da stanka, tro-war-dro da borz
glud ar yer; ma vezont laosket da redet e ranker teurel
evez, rak droug a reont er parkeier hag el liorzou; met
ne reont pec'hed all ebet nemet hennez hag evelse ara-
bad eo kounnari re en holl outo, rak gounid a vez diouto.

Red eo derc'hel atao, eur podad pe eul laoueriad dour
fresk, d'ar yer, ma c'hellint mont da eva pa girint; eun
dra vat eo ivez lakât eur guchenn ludu pe drez d'ezo
d'en em zifreta da gas al laou hag ar c'hoenn diouto; bep
pemzek dez e vezo nevezet ar c'holo, ar foenn pe ar brug
a vez lakat en neiziou e lec'h ma 'z eont da zefi. Grouan
a rankont da zebri evit kaout danvez klozou d'o viou;
ma ne c'heller ket lakât trez d'ar yer eo red bruzuna,
gwella ma c'heller, tammou mein-skient, plastr, atred hag
all da deurel d'ezo.

- Da genta eta: boued mat ha yac'hus;
- D'an eil: krevier kempenn ha goudor;
- D'am trede: trez pe ludu d'en em zic'hoenna;
- D'ar pevare: grouan pe vruzunazious mein;
- D'ar pempvet: dour sklêr ha fresk.

**

Ar yer ne zofont nemed er bloaveziennou kenta eus o

(1) Blank: faible; blankadurez, faiblesse.

buhez; teurel evez a ranker eta da gaout atao yer yaouank; d'o zri bloaz eo mall o laza pe o gwerza ha derc'hel hepken ar re a gaver gwella da lakat viou dindanno evit kaout laboused bihan.

Hervez an dud gouizieik eur yar a c'hell rei 600 vi en he buhez:

- 20, er bloavez kenta;
- 120, en eil bloavez;
- 130, en trede;
- 100, er pevare;
- 80, er pempvet;
- 60, er c'houec'hvet;
- 40, er seizvet;
- 20, en eizvet;
- 10, en navet.

Met lavaret a reont ivez e c'heller gant boued tomm, net, yac'hus, gant linod drailhet munut, asta ar yer da zefi; en hent-ze, abenn he fevar bloaz, pe he femp bloaz, da vihanon, eur yar he deus rei boued krenv ez eus kemm etre ar yer; kaer e vezo rei boued krenv da zarn ne zofint nemet tri ugent pe bevar ugent vi, er bloaz; darn all, en eneb, a raio kant hanter kant; ar vreg eveziek a ouezo an dra-ze; anaout a raio he yer ha ne zalc'ho nemed ar re vat; eur c'helc'h gwenn a weler en dro d'o diskouarn; o c'hribell a zo rus ha c'houezet; o fenn a-drenv digor ha ledan, stank ha sounn ar plu warnan. Eur yar, mat da gana, n'eo ket mat da zefi. E lec'h ma vez c'hoant da zerc'hel kilheien eo red derc'hel ar re a gan ar muia; eur c'hilhog a zo a-walc'h evit dek pe zaouzek yar.

**

Ar viou fresk a zo brudet da veza gwelloc'h eged ar re goz; ar vedesined a lavare evel-hen, gwechall: « En deiz kenta, eur vi a dalv aour; en eil dervez ne dalv nemed arc'hant; en trede dervez n'eo mui nemet ploum! » Da lavaret eo e ranker, pa vez tud kilanv, bugale, tud dinerz, hag a zo gourc'hemennet viou d'ezo, rei d'ezo ar re freska ma raint ar muia vad. Ne vez ket a viou fresk e pep mare.

Penaos kaout viou, er goanv, pa ne zof ket ar yer ha pa ne gaver vi ebet er marc'had?

Bez ez eus merc'hed, hag a espern o viou en hanv abenn ar goanv, ha n'eo ket ar re ziskianta int. Ar viou eost eo ar re aesa da espern; chom a reont mat, pell hag hiri; etre daou c'houel ar Werc'hez, gouel Hanter-Eost ha gouel an 8 a viz gwengolo eman ar poent gwella d'o gorrean; breman e kaver, er c'heriou, a bep seurt louzeier evit derc'hel fresk ar viou: « *Combinés Barral* » hag all. Ar re goz, kentoc'h, a zoube anezo en dour bero epad ma vezent o lavaret eur « Me ho salud, Mari », hag e cho-

ment fresk; daou, tri miz; gwelet em eus c'hoaz lakat ar viou d'en em viret, er c'herc'h, en trez, al ludu pe er brenn-eskenn, pe c'hoaz, — hag an dra-man a zo ken aes, — paka pep vi en eun tamm paper, hag o renka en eur baner, goustat, en aoun d'o fuka an eil diouz egile; eno e vezont kavet pa vez ezomm anezo ha rouez eo ar re a deu da vreina.

Ar yer a jomo yac'h ma vez entetet outo, evel m'eo dleet hen ober; ar c'hlenvejou a grog enno a bakont diwar al loustoni, ar boued fall, ar re nebeud a zour hag ar riou.

Bep eiz pe bep pemzek dervez eo red eta karza dindanno: ar garzadenn a vezo taolet war an teil pe implijet evel ludu-melen, rak ludu-melen eo, e gwirionez.

Daoust ha gounid a zo dioc'h al loened, bras ha bihan? Darn a lavar ez eus kalz ha darn all ne 'z eus tamm; ar pez a zo gwir eo e c'hounezer warno dioc'h ma prederier ganto. Ma 'z eo lezirek ar vaouez a vez war o zro, setu aman petra a en em gavo: ar yer, fall da zefi, pe galz re goz, ne zofint ket; dioc'h dek penn-yar ne vezo ket a zaou c'hant vi er bloaz ha c'hoaz lod a vezo kollet rag ar yer bevet fall a yelo da zefi peit dioc'h o glud; al laboused bihan a varvo gand ar riou pe a dapo klenvejou diwar al loustoni.

Ar zaout, prenet a-dreuz hag a-hed, hep skiant a vezo nebeud a lez ganto hag a gousto keit da veva ha re vat; bevet fall, goroet gand eur vaouez diskempenn hag hegas, e teuint da veza diléz, kalz re abred; ne vezo ket dioc'h an amann an hanter eus ar mizou a vezo ganto.

Ar c'houlined a raio re govad eun dervez hag a jomo hep tamm, antronoz; dre ma ne brederier ket tra a-walc'h ganto e varvint gand ar c'hlenvejou a dapint ha ne c'hellint morse sevel re vihan.

Gand ar moc'h ec'h en em gavo ar memez tra hag an tieg paour a 'z aio e stal da stalig hag e stalig da netra: mont a ranko da glask e vara en eun tu bennak all pe echni e vuhez en eun toull kampr tenval.

O va Zalver, pellañt dioc'h ar Vretoned ar ouenn merc'hed lous ha lezirek-ze. Ra o devezo an eur vat d'en em gaout gant labourerezed mat, sioul ha kempenn. Eun hevelep maouez a vezo skoaziet gand eur mevel hag eur vatez, o ano: *evez* ha *skiant-prena* hag an traou, en tiegez, a 'z aio mat, m'hen tou!

Ar yer ne vezint na re goz, na re yaouank; bevet mat, lojet mat, e roint teir gwech muioc'h a viou eget gand al loudourenned am eus komzet anezo uheloc'h.

Ar c'houlined ne wastint ket o boued dindan o zreid, rag ar vestrez, atao war evez anezo, ne roio d'ezo nemed ar pez a zo dleet, na re, na re nebeut; torrajou re vihan o devezo bep bloaz; d'an nevez-amzer, evit beza mat da werza abenn ar goanv.

Ar zaouf hag ar moc'h a vevo yac'h en o c'hrevier dilastez; dibabet e vezint bet gant poell, etouez ar re-wella, rag an hanter-tiegezh he devezo lavaret d'he gwaz a-raok m'oa aet d'ar foar: « Ma tigores eul lagad pa werzes, digor daou pa brenes! »

An ozac'h a vezo laouen o welet ne vank netra en e ger: lez da zouba ar yod; amann da leda war ar bara; viou pa zigouez gantan ar c'blenved; kig ha silzig da volarjez, ha pa deuo e vreur yaouanka d'e welet, Saik, an hini en deus kuitaet ar vro evit klask e chans e Paris; e vezo digemeret evel ar Mab Foran: ouz ar ber e vezo laket ar penn-yar larta; an anduilh mogedet a vezo tennet eus ar siminal hag an divroet, rannet e galon gand ar mor-c'hed, a anzavo: « Gwelloc'h e vije bet d'in-chom dre aman, rak bez ez out ken eurus ha ma c'heller beza war an tamm douar-man, e lec'h me ha n'emaoum ket ken em renk, ne ran nemed eur reder-bro; evel eur wezenn disc'hwrizien-net em eus kollet ar pezh a ro d'an den buhez ha nerz-kallon: karantez ar ger hag ar vro! »

Egile a responto: « N'out ket re goz da chench buhez; met arabad d'it kredi e teufe ar gwenneien, em godell, hep poan, mag an traou em ziegezh, hep preder: e serr al labour eman an arc'hant. Ma 'm eus eun ali da rei d'it eo klask en hor bro Vreiz, eun tenzor, eur maen presius evel an hini an eus kavet: eur vaouez kempenn ha d'az tro e vezi eurus en he serr! »

— « Ar veuleudi a rit ac'hanoun a laouenna va c'hanoun a lavaro neuze ar wreg; evit ho trugarekat ha diskouez d'ho preur ar blijadur am eus ouz e zigemeret ez an da denna d'eooc'h ar voutailhad win am oa kuzet dindan ar gwede tri bloaz a zo: gwin koz eta d'ar baotred vat hag ouspenn e lakin er foun ar gouignenn-man graet ganen: abenn koan e vezo poaz! »

« Pastezierez oc'h ivez 'ta, va c'hoar gaer? »

« Unan zister oun, va breur! evelato, pa vez vibu hag amann, e c'hellan, beb an amzer ober banvez d'am zud! Setu penaos am eus graet: tri vi am eus torret, *gand evez*, a-zioc'h eur bodez, ha laosket ar gwenn da goueza enni; ar melen am eus taotet en eur bodez all ha kemmesket gant peder loiad zukr malet epad eur c'hard eur; a neubdou, em euz lakeat neuze diou loaiad bleud-patatez, ha kemmesket adarre eur pennad-all. Goude, gwella ma c'hellen, em euz baset ar gwenn-vi, a-raok hen lakat gant an traou-all, gant ar brasa preder; eun tammig amann fresk en eur plad da viret ma stagfe, ha, pa n'eo ket re domm va foun, hen lakin ebarz da veza dare abenn ho pred! N'eo ket diaes!

TINTIN ANNA.

KELEIER AR MIZ

BLEUN-BRUG BRO-WENED

Semaine Religieuse Bro-Wened he deus disklêriet er zizun dremenet, en eun doare hagarat hag a laka levezon e kalonou mignoned ar *Bleun-Brug*; penôs ar *Bleun-Brug* en deus taotet troad, nevez 'zo war douar Santez-Anna hag a zo e zonz ober er bloaz-man, e Gwened hag e Santez-Anna-Wened, ar gouel bras a ra bep bloaz, e kêr pe ger a Vreiz.

Eur Strollad Bretoned eus an dibab hag hon deus roet amañ o hanoiou, a zo e karg da zevel ar gouel-ze ha da voda izili endro d'ar *Bleun-Brug*.

Kavet o deus dija evit o harpan, mignoned a bep tu hag an enor bras o deus da gaout er penn anezo an Otrou 'n Eskob hag an Otroned Guillevic, vikêl-vras, ha Buteon, person an iliz-veur.

Mall eo d'ar Bretoned a bep korn a Vreiz kemer o diarbennou evit dont niverus, niverus, da c'houeliou bras ar *Bleun-Brug* da Wened ha da Zantez Anna, d'an 13, 14, 15 ha 16 a viz gwengolo a zeu.

GLAODA AR PRAT

Hor c'henlabourer mat, Glaoda ar Prat, a zo marvet er Vern d'Anjou, el lec'h ma rene ar skot gristen, d'an 13 a viz Ebrel diveza. E gorf a zo bet digaset da Germa-ria Sulfard el lec'h m'eo bet beziat d'ar 17.

Erbedi a reomp anezan ouz hol lennerien ha lavaret hon eus d'e bried ha d'e verc'h ar perz a gemeromp en o glac'har.

Er miz a zeu e lakimp eur skrid hirroc'h war vuhez hag oberou ar barz Pluénzir.

EUN EURED

Ar Barz, hag an Itron Yann Caroff o deuz an enor da ober deoc'h perz eus o dimezi graet er Mans, d'ar 6 a viz ebrel diveza.

Hor gwella gourc'hemennou d'an daou bried nevez.

DIYINADENNOU

I. — RESPONCHOU DIVINADENNOU MIZ EBREL

I. — An teod. II. — Ar fuzul. III. — An irvin. — IV. — Eur marc'h houarn. V. — Eur forc'h a bevar biz.

EVIT DIVINADENNOU GENVER, CHOUVEYRER HA MEURZ

60 o deus bet 300 poent
 Henri 'n Arvor, Meilar.
 Un des quatre as, Ploumoguere.
 S. ar Berr, Sk. Pont-Kroaz.
 M. ar Berr, Gwiclan.
 Korantin Bechennec, Plou-
 neour-Lanvern.
 Bugel Breiz, Gwitalmeze.
 M. Cabon, Guisseny.
 Yann Cadiou, Sk. Kastell-Paol.
 A. M. Cadiou, Breles.
 Charl. Calvez, Yourc'h Wenn.
 Clet. Coz, Toulon.
 Soazig Cornen, Plouarzel.
 Tanguy Creignou, Cleder.
 Fransez Creignou, Cleder.
 Perig an Dantec, Plouzentel.
 Mikael Darchen, Mahalon.
 Biel Elies, Gwitalmeze.
 Louis Floc'h, Plomeur.
 Mari Geffroy, Treflez.
 Y. ar Goff, Gwiniventer.
 Y. hag A. ar Goff, Gwinevez.
 Victor Gouriou, S^t Thonan.
 Charl ar Guen, Lambezellec.
 Potr Gwite, Sk. Pont-Kroaz.
 Mari Guyader, Lanneufred.
 T. J., soudard e Gwengamp.
 Joseph Le Jeune, Plouguerne.
 Karevrou, Gwipavas.
 Mari Kerbrat, Kastell-Paol.
 Alan Kerlidou, Treflez.
 Azilis Kerrien, Plouenan.
 Gabriel Kersimon, Plabennec.
 Lennerez F. h. B., Plougastell.
 L. Lars, Plouzane.
 A. L., Sant Divy.
 Josephina Lossouarn, Guis-
 seny.
 Fr. Lucas, Breles.
 Henri Madec, S^t Divy.
 Alan Malgorn, Plouenan.
 Yann Mer, Gwiclan.
 Felix Moal, Enez-Vaz.
 J.-P. Moal, Tregarvan.
 M.-J. Nicolas, Gwiclan.
 Saik Palud, Sk. Kastell-Paol.
 Penn-kalet, Gwitalmeze.
 P. Pinvidic, Gwikar.
 Mikael Postec, S^t Thonan.
 Fr. Pouliquen, S^t Thegonnec.
 Yv. Premel, Tracy Le Mont.
 Visant Prigent, Sk. Kastell-
 Paol.
 Paotr Sant Korantin, Plomo-
 diern.
 Fransiz Salaun, An Trehou.
 F.-M. Sparfel, Sk. Pont Kroaz.
 F.-M. Sparfel, Sk. Kastell-Paol.
 Melani ar Sann, S^t Thegonnec.
 M.-A. Segalen, Gouesnou.
 J. Tanguy, S^t Thegonnec.
 I. Terrom, Coulommiers.
 P. Thomas, Plouider.
 W. L. V., Sant Nic.
 ha 15 o deus bet 100
 J. Aballea, Sk. Lesneven.
 M.-L. Cabon, Guisseny.
 Guill. Cazuc, Guimaec.
 Mari Deduyer, Loperhet.
 Mikael Draoulec, Gulvinec.
 Jani Fave, ar Folgoat.
 J. Goasduff, Kersent.
 Bugale Sant Joseph, Lille.
 M. Lagadec, Lanarvily.
 M. Lamour, Kersent.
 Fr. Masson, Lanhouarne.
 F. hag S. ar Page, S^t Thonan.
 Jos. Quillevere, Kastell-Paol.
 M. L. Uguen, Goulven.

III. — DIVINADENNOU MIZ MAE

- I. — Pehini eo bugel da dad
 ha n'eo na da vreur na da c'hoar?
 20 p. ar r. Digaset gant Visant Prigent, Skotach Kastell-Paol.
- II. — Piou eo ar gwaz
 n'en deus bet mamm ebet biskoaz?
 20 p. ar r. Digaset gant Henri 'n Arvor, Kervoad, Meilar.
- III. — Diou gamaradez 'm eus aman a glev
 hag o c'hamarad eo 'respont atao en o lec'h.
 20 p. ar r. Digaset gant Victor Gouriou, Sant Thonan.
- IV. — Pehini eo skanfa chadenn a zo er bed
 Ha koulskoude nemet gant daou ne vez douget?
 20 p. ar r. Digaset gant A. M. Cadiou, Plouenan.
- V. — Petra ne welomp ket
 hag a bouez warnomp bepred?
 20 p. ar r. Digaset gant Biel Elies, Gwitalmeze.

Digas ar respouchou hag an divinadennoù nevez a gavfet-
 abenn ar 25 eus ar miz da: M. le Directeur du Feiz ha Breiz, à
 Plouguerneau (Finistère).

Feiz ha Breiz

HA KROAZ AR VRETONED

KELAOUENN VIZIEK GANT SKEUDENNOU

Relijion — Istor Breiz — Marvailhou — Gwerziou
 ha Soniou — Buhez ar Vro

RÉDACTION

J.-M. PERROT, Plouguerneau (Fⁱⁿ) | Y. LE MOAL, Coadout, p^r Guingamp

ADMINISTRATION
 du FEIZ HA BREIZ :
 FR. GEORGELIN,
 Brest — 4, rue du Château — Brest
 c/c 44-40 RENNES

ADMINISTRATION
 du Bleun-Bruget de l'Emgleo Sant Iltu
 Yv. DREZEN,
 BREST — 4, rue du Château — BRES
 c/c 6238 RENNES

ABONNEMENTS INDIVIDUELS
 « FEIZ HA BREIZ » et « KORN-BOUD »
 Bretagne 10 f. l'an
 France 11 f. l'an
 Etranger 12 f. l'an
 Abonnements collectifs
 Feiz ha Breiz (seul)
 (à partir de 5 exempl.). 6 f. l'an

PUBLICITÉ
 Toutes les insertions sont faites
 à l'année
 Une page entière 300 fr.
 Une demi-page 175 fr.
 Un quart de page 100 fr.

TAOLENN AR MIZ. — XVI^o Gouel ar Bleun-Brug. — Mi-
 kael an Nobletz, J. U. — Ar chadenn, D. N. D. —
 Labouriou ar merc'hed wardro an ti, TINTIN ANNA.
 — Avel-vor, J. L'HELGOUAC'H. — Kerne, G. M. —
 Roue al Laz, D. N. D. — Ar goukou, J. U. — Penn-
 oc'h-penn, BREIZADIG. — Lazerez, laeronsi, follentez,
 P. QUEGUINER. — Divinadennoù.

SULIOU HA GOUELIOU AR MIZ

- 6 a vezeven. — Sul Korf Krist pe zul ar Zakramant bras.
 11 a vezeven. — Ar Galon Zakr : Gouel devosion.
 13 a vezeven. — Sul ar Zakramant bihan.
 20 a vezeven. — IV^o sul goude ar Pantekost.
 24 a vezeven. — Nedeleg an hanv: ginivelez sant Yann Va-
 dezour; gouel devosion.
 27 a vezeven. — V^o sul goude ar Pantekost.

XVI^{vet} Gouel ar Bleun-Brug

e Gwened hag e Keranna

d'an 13, 14, 15 ha 16 a viz Gwengolo a zeu



Tostaat a ra ar zizun vreizek; ar re a fell d'ezo he heulia, war he hed, a dle en em gaout e Gwened d'ar zul da noz 12 a viz gwengolo.

Antronoz e raint eun dro, *war vor ha war zouar*, evit gwelet an traou kaera a zo da welet e Bro-Wened.

D'ar meurzh, — 14 — e raint eun dervez retred.

D'ar merc'her, — 15 — eman dervez ar studiadedoug.

D'ar yaou, — 16 — gouel an tiegeziou breizad e Keranna, gouel hep par, a zigaso an dud a vilierou e harz treid an Itron santez Anna; en em gaout a raint eno, nann evel ma en em gavont peur-liesa, a *hiniennou*, met a *diegeziou*. An tiegeziadou a-bez eo a denio d'en em ziskouez da Vamm ar Vro ha da c'houlenn he bennoz: gwelet e vezo eno priedou nevez, a bep korn eus a Vreiz, skedus en o dilhad eured, ha priedou koz, bleo gwenn war o zal, daou pe dri rumm vugale o kerzet en o raok.

Na pebez taol lagad dudius e vo ar gouel-ze, gouel an tiegeziou kristen, gouel an tiegeziou breizad, gouel an tiegeziou niverus, eur gouel evel ma n'eus ket bet gwelet biskoaz e Breiz, hag a ziskouezo d'ar bed holl, pegen diouallet mat eo c'hoaz, a drugarez Doue, tenzor ar vuhez e bro Santez Anna.

Red eo e vefe, en deiz-ze, e Keranna, — gant kirridre-dan, breman e raer hent dillo — tiegeziadou a-bez eus a bep parrez hag eus a bep korn a Vreiz, en o dilhad kaera, ma welo an diavezidi a vezo eno peger brao eo ar Vretomed hag ar Vretonezed pa zalc'hont da wiskamant o zud koz.

Red eo e vefe, en deiz-ze, e Keranna, e tal-bez-meur an 250.000 soudard ha martolod breizad maro er brezel, eur mor a dud o pedi evito hag o kana o meuleudi.

Epad ar zizun vreizek ar veleien hag ar gloareged a vo digemeret er C'hloerdi bras e Gwened; ar wazed hag ar bôtred yaouank a heulio ar zizun vreizek penn-da-benn a vo digemeret e ti ar Retred; kant gwele a zo ennan da rei d'ezo; ar re n'o deus ket a c'hoant da veza tapet war an divezadou n'o deus ken tra da ober nemet skriva dioc'htu da: *Mlle Carré, Directrice de la Maison des Missionnaires, 17, rue du Mene. Vannes.*

Ar gwiragez, ar merc'her yaouank hag ar vugale a vo klasket ivez tiez d'ezo da c'hellout ober o diskenn enno (1).

D'al lun-da noz, d'ar meurzh da noz ha d'ar merc'her da noz, e vo kaniri ha peziou-c'hoari, e Gwened. D'ar yaou, a-raok kreteiz, e vo kenstrivadegou al lenn, an displega, ar prezeg hag ar c'hana, e Santez Anna. Goude lein dioc'htu warlerc'h bodadeg vras an tiegeziou breizad, e-harz treid santez Anna ha bez-meur ar brezel, e vo tolpet an dud e c'hoariva Nikolazig el lec'h ma vo peur-glozet ar gouel.

An hini ne oar ket c'hoaz pegen kaer eo e vro, pegen dudius eo he c'han, peger pinvidik eo he yez, peger krenv eo he feiz, peger seder eo he zud, n'en deus netra ken da ober nemet mont da Zantez Anna d'ar 16 a viz gwengolo a zeu.

N'en do ket a geuz d'e arc'hant ha goude ma rankfe dispign eur bilhed a gant lur oc'h ober e dro.

E pep lec'h ez eus traou kaer, met ne weler ket kement, e nep lec'h, hag er *Bleun-Brug*, dreist-holl pa c'hoarvez d'ar *Bleun-Brug-ze* bleunia, evel ma raio er bloaz-man, e-harz treid santez Anna!

(1) *Moula a raimp a-benn ar miz a zeu eul levrig, hag e kavo ennan pep sklerijenn kement hini en do c'hoant da vont d'ar Bleun-Brug.*

BRETONEZ, mar karit ho Pro, evel ma livirit, klaskit eta

LENNERIEN,

KOMZERIEN,

PREZEGERIEN,

KANERIEN,

da vont da Geranna d'ar 16 a viz Gwengolo a zeu da gemeret perz e kenstrivadegou ar Bleun-Brug.

Mikael an Nobletz

(1577-1652)

(Kendaic'h)

Er skol e Bourdel, Ajen




gand Yv. Floch diwar goad J. Malivel

Skoliou a-walc'h a oa e Breiz; kalz beleien, er parrezioù, a roe kelennadurez d'ar vugale, d'ar re a c'hoantae mont da veleien, ha da re all ive. Met skoliou bihan n'oant ken. Evit kaout deskadurez vras ha uhel, e veze ranket mont pell, da Baris pe d'ar c'heriou a oa enno Skoliou-Meur.

Mikael, wardro an oad a 18 vloaz, a voe kaset gant e vreurdeur da Vourdel. Dre vor n'oa ket dies mont eus Breiz betek eno.

Neuze, evel hirio, oa risklus buhez ar c'heriou evid an dud yaouank. Skolaerien Breiz, evel re ar broioù all, a veve a-unan, a rae evel eun arme, hag o doa eur Rener en o fenn. Ar Rener-ze, n'e ket labour na tregas a vanke d'ezan. Bez'en doa da voda e genvroiz, d'o hentcha, d'o difenn alies, rak c'hoari fall a zave alies etre ar vandennou skolaerien. Breur hena Mikael, Glaoda, a voe eur peniad Rener ar Vretoned, ha Mikael a rankas deski c'hoari gand ar c'hleze, evit sikour e vreur pa vije ezomm. Buan, evit



CHAPEL AR C'HROUANEG (1) e Plougerne, skeudennet gant Y. Floch

doare, e teuas da veza ampart. Edo war an hent d'en em goll, ma ne vije ket bet sikouret gand e Vamm eus an Nenv. Eun deiz m'edo bandennou skolaerien oc'h en em ganna, e klevas mouez e vreur Gloda o c'houlenn sikour. Mikael a dennas e gleze hag edo o vont da skey, pa zeu as eun itroun gaer da gregi en e zourn ha da zistrey an taol. Anaout a reas an itroun e gasas gwechall da japel Kerodern, hag, hep taol kleze ebet, e kavas an tu da lakat ar peoc'h etouez ar skolaerien.

Nebeut amzer goude, e voe hanvet Rener ar Vretoned,

(1) Ar chapel treuz a weler aman he frenecher en tu kleiz d'an daolenn oa chapel Aotronez Kerodern; war ar gwer a liou e kavet c'hoaz, breman tri bloaz, skeudenn tad koz ha mamm goz Mikael an Nobletz gand o skouejou, graet tost da bevar c'hant vloaz a oa; gweracrien berwelet o zorras sionaz; an tammou a zo gellet da zestum anezo a zo kaset d'an A. Waquet a die o renka e mirdi Kemper.

e lec'h e vreur, hag e ranke darempredi ar pennou fall, an trabaserien, o difenn zoken p'o deze graet gaou ouz unan bennak. Eun deiz m'edo o vont d'eur vadadeg Vretoned, e klevas eur vouez o lavaret d'ezan: « Chom a zav! » Tenna a reas e gleze evid en em zifenn, met, e lec'h eun enebour, an Itroun eo en em ziskouezas d'ezan, skedus-meurbet: « Sent, emezi, ouz Doue, kerz warlerc'h va Mab, bez ato izel a galon, eun, paour, gra fae war ar bed. » En dro-man Mikael a voe trec'het evit mat. Stoui a reas dirag ar Werc'hez, kinnig a reas d'ezi e gleze, hag e touas beza d'ezi hiviziken ha stourm hepken dindan hannel he Mab.

Met penos dalc'her d'e c'her o chom e Bourdel? Klevet a reas o doa ar Jesuisted, eun Urz nevez a relijiuzed, eur skol vras e kear Ajen, hag ez eas da Ajen. Pevar bloaz e-chomas eno (1597-1602), hag an amzer-ze a voe, emezan, an amzer gaera eus e vuhez.

Labourat a reas da binvidikat e spered hag e teuas da veza desket bras war al latin, ar gregaj hag an holl skianchou.

Pedi mat a rae ive. Goulenn a reas beza digemeret e Breuriez ar Werc'hez savet e skol ar Jesuisted. Ne zaremprede ket an dud yaouank eus e oad, na zoken e vreudeur deuet ive d'ar skol da Ajen. En em ziskouez a rae laouen, mat e kenver an holl, met mall en deze da vont d'e gambr, eur gambr feurmet d'ezan gand eur c'hristen hag eur gristenez vat. Er gambr-ze e laboure hag e pede hag e rae pinijenn.

Ne guitae e gambr nemed evit mont d'ar skol pe evid ober vad d'ar re all. Karantezus oa evid e nesa, hag o veva e-unan gant nebeut a dra, o lezel a gostez ar gwin hag ar c'hig, o yun bemdez kouls lavaret, e c'helle espern eur gwenneg bennak hag ober aluzen. Da zul ha d'ar goueliou e pede da leina skolaerien ezommek, hag e kave trovelse da rey d'ezo kenteliou mat. Meur a hini a c'hounezas da Zoue.

Ober a reas anaoudegez e Ajen gand eur c'henvroad eus Plouyann, Per Quinfin. Heman, goude beza bet soudard en e yaouankiz, en doa troet kein d'ar bed hag en em roet da Zoue. Dont a reas da veza divezatoc'h lean eus Urz sant Dominik. Troet oa ouz Doue araok ma tigouezas gand Mikael, met kenteliou heman hag e skouerion a reas kalz vad d'ezan.

Divezatoc'h ec'h en em gavo war hent Mikael, hag e labourint o daou a-uran eur pennad da brezeg an Avel, evel m'o doa pedet a-unan e Ajen, ha graet katekiz d'an dud dizesk ha d'ar re a oa bet gounezet gand ar brotestanted, stank endro da Ajen.

Daoust ma veve eur vuhez santel meurbet, Mikael ne voe ket espernet gand an teodou fall. O veza ma rae dishenvel diouz ar skolaerien all, e veze lavaret pep seurd geier diwar e benn. Gouzanv a reas gand nerz-kalon ar poanion-

ze; evelato e kave kalet beza tamallet e gaou. Eun deiz m'edo daoulinet en e gambr, o ouela hag o pedi, ar Werc'hez en em ziskouezas d'ezan. « Mikaelig, emezi, va Mab ho tiwall, hag ho sikouro. (1) » Hag e kinnigas d'ezan teir gurunenn skedus: kurunenn ar werc'hded, kurunenn an Doktored ha kurunenn ar re a ra fae war ar bed.

Mikael a voe frealzet ha kennerzet.



MANER LEZWERN, (2) e Sant Fregan,
gand Yv. Floc'h

Kement-man a dremenas er penn kenta eus ar bloaz 1600. Neuze eo e tisklerias trey kein d'ar bed, hag en e baperiou eo bet kavet ar pez a skrivas eneb ar bed hag e ardou. Ne lakeomp nemed eun diverra eus e skrid: « Kenavo, bed; me a ray brezel d'it heb ehan, p'e gwir ec'h eus graet brezel d'am Doue hag ez out mestr enebourien Doue. Me dro kein d'it, milliget ma z'out. Diskleria ran, dirak Jezuz Krist, va Zalver, a zo bet trec'h d'it, dirag e Vamm, ar Werc'hez Vari, dirag an Elez hag an holl Zent eus ar Baradoz, e fell d'in hiviziken, hed va buhez, terri da liammou, beva dishenvel diouz da lavariou. O va Zalver, Doue en em c'hraet den, me a vo paour evel doc'h; evel doc'h, me a garo ar groaz, an dismegans. Roit d'in ar c'hras da zalc'her d'am menoziou beteg ar maro. »

(1) E brezoneg eo e komze atao ar Werc'hez ouz Mikael an Nobletz.

(2) Mamm Mikael an Nobletz a oa merc'h eus a Lezwern hag e Lezwern, gand e dad koz, e tremenas Mikaelig bloavezioù laouenna e vugaleach.

Evel sant Fransez a Asiz gwechall, Mikael a gemere evid e lod ar baourentez-hag ar groaz.

Edo gand e 23 vloaz. Ne ouie ket c'hoaz peseurd stad a vuhez a gemerfe, met dizale e welas ervat e tlie beza beleg. Sonjal a reas mont e Urz ar Jesuisted, e vistri-skol, hag ive e Urz sant Fransez.

Da c'hedal rey e c'her diveza, ec'h en em lakeas a zevri da zeski an-theoloji, ar skianchou sakr e Bourdel adarre. Eno e klevas kelennadurez Tadou Jesuisted desket bras, hag e teuas, epad ar pevar bloaz ma chomas ganto (1602-1606), da veza e-unan desket meurbet. Evit doare, ec'h anavezze ar Skritur Sakr dindan envor, hag e gregaj zoken.

Met ouspenn deski, e kendalc'he da bedi ha d'ober pini-jenn, rak, evel ma lavare, an deskadurez heb ar furnez ne dalv netra. En em skourjeza a rae bemdez, ne zebre nemed ar pez a oa ret evit chom beo, kousket a rae war ar c'halet. Mont a rae d'an hospitaliou, d'ar prizoniou, ha gant e vignon Per Quintin, deuet ive da Vourdel, ez ae d'ober katekiz d'an dud war ar maez, evel m'o doa graet e Ajen.

Goude ar pevar bloaz tremenet e Bourdel o studia ar skianchou hag ar Skritur Sakr, Mikael en dije gelllet ober evel ma rae re all, goulenn digand eun eskob bennak rey d'ezan an urziou santel. An eskob en dije graet enklask war e vuhez, e zeskadurez, ha m'en dije e gavet prepart mat, en defe roet d'ezan sakramant an Urz hag eur garg en e eskopti, eur garg stag outi eun tamm leve, peadra da vea.

Evelse e veze graet en amzer-ze. N'oa ket a gloerdi. An dud yaouank a c'hoantae beza beleien a veze kelennet pe gant beleien all, er parreziou, pe e skoliou bras Paris, Bourdel, pe re all.

Ar c'hiz-ze n'oa ket eus ar re wella, Mikael an Nobletz a vevas evel eur zant e Bourdel hag e Ajen. Met an holl ne raent ket evel dan. Hag eun tamm mat eo gwelloc'h ar c'hiz hirio da zevel beleien, oc'h ober d'ezo tremen dre ar c'hloerdi bihan hag ar c'hloerdi bras. Evelse e vezont anavezet mat, hag ouspenn-ze, o veva pell diouz trouz ar bed, eo aesoc'h d'ezo beza santel, tec'het diouz pep droug.

J. U.

(Da gendalc'her).

Tud nevez

it, d'ar Bleun-Brug,

da Geranna, d'ar 16 a viz gwengolo a zeu,

gant ho tilhad-eured hag ho tud enor;

eur gurunenn mil ha mil gwech kaeroc'h eged ar gurunenn aour ha perlez a zo war he fenn a reoc'h da Vamm hor Bro.

Breiz a-bez a'en em gavo eno d'ho tiambroug.

AR CHADENN

Eur bobl a c'hell bezan laeret diganti he-unan. Mar kay war he hent krenvoc'h egeti ha mar teu da renkout plega, dibot eo ma vez lezet da veva hervez he doare-spered: ar mestr a rank ober e vestr. Istor hor broiou ni a ziskouez d'eomp meur a skouer, ar bobl krenva o poueza war an hini pe war ar re waka, o suna diganto o c'honsians pobl, pe o vonga anezi hag o klask lakaat enno neuze, evel en eur pod goulo, eun ene all, he hini.

Daou dra, ispisial, a vez en hent ha golou d'ar bobl krenva: yez hag istor ar re a zo dindani. Dont a-benn da lakaat eur bobl d'ankounac'haat an daou dra-ze a zo kas anezi da get; skuilh en he spered eur yez hag eun istor all a zo ober ganti vel eur bobl malarje mat da zerviji da vevel d'ar re-all ha da rei d'ezo digarez da c'hoarzin ha da c'hoapaat.

Ar yez hag an istor eo eta an diou wrizienn yras a zalc'h eur bobl en he sav hag a ro d'ezi magadurez. Bretoned, dizroomp warzu hon istor ha warzu hon yez, mar n'hon deus ket c'hoant da zont da vezan, evit ar poblou all, eur « zant Malarje » a bobl.

Hon istor, a lavaran, ha n'eo ket hini ar re all. Ar c'hoant, forz pegen bras e vefe, da welet Bro Frans ha ni o chom unanet na lle ket harz ouz ar wirionez da vezan disklêriet evel m'eman; kuzat hon istor dirazomp a vefe kuzat dirazomp hor c'honsians, ober gant hon istor eur mezellou fôz ha ne ziskouezfe ket ac'hanomp d'eomp non unan, ne rofe ket nemet an diskeud eus konsians ar Vretoned.

An istor, eur wech dizoloet he mammennou gwirion, a zo es da zeski; vit ar yez, n'eo ket henvel. Pa vez ar yez en argoll, evel m'eman hirie, koulz lavaret, ar brezoneg, penôs euna an hent d'her gounit-war e giz?

Dre benôs adober d'ar bobl, dre ar yez, eur gonsians nevez-flamm?

Eur bobl n'he deus ket diou, ter, peder gonsians; n'he deus nemet unan; evit ma reio ar yez e vertuz e rank eta bezan laketa unan; dre ma en em unano, ar bobl en em unano ivez, da lavaret eo, e tevio da gaout an hevellep doare pobl. E Breiz ez eus meur a rann-yez, hag ez eus meur a rann-pobl; n'eus ket eur yez hag eur bobl. Dont a raint da veza ma karomp labourat. Penôs?

Ne gredan ket e vefe galloud en eur yez lennek grêt a droc'h-tranch ha pourchaset, geriou hag all, dre eun hent ha ne dremen ket dre galon ha dre spered ar bobl. Ar yez lennek savet diwar ouiziegezh hepken en deus eun talvoudegezh bennak koulskoude, met ar gwir yez, an hini a zavo konsians ar bobl d'hen heul, bep ma

savo ivez, eo an hini a vo 'vel eun deuzadenn grêt gant amzer, gant gouiziegezh ha, dreist-holl, gant an ijin natur, eus an holl rann-yezou, eur wech deut da vezan da vat skrivet ha d'ennet. Lenn, an eil, rann-yez egile; perc'henni, an eil, yez ha doare-spered egile; hennez eo ar stumm hag a gavan hervez an natur evit steui a damm da damm eun hevelep yez skrivet, eur yez lennek. Yez Gwened a lennan ha setu ma kavan eur c'hornig en em spered da danva ar yez-ze, rak beo eo; strinka ra eus kalon ar bobl ha nann eus leoriou ar ouizieien. Lenn a ran yez Leon, Kerne, Treger, hag eur vlaz a gavan da bep hini hag a stag ac'hanon outo. Ac'hane, c'houi ha me, eun all c'hoaz, dek all, kant all, o vérat hag o advérat en hon spered hag en hon skridou kement hon deus desket a deui da zevel a nebeudou, kammed ha kammed, eur yez hag, eviti da vezan gouiziezh, e vervo enni spered ar bobl, ene ar vro, hag a lako e galon da dridal.

Ar yez lennek a gavomp e leoriou *Skella Segobrani, Gwalarn*, a zo krouans sperejou tud 'n em roet d'ober, war ar prim, dre c'halloud o gouiziegezh, eur yez nevez d'ar Vretoned. Eun taol marzus eo; ar Vretoned na gollfont ket nag an envor anezan nag an envor eus ar re o deus hen grêt, met ne 'z aint ket d'ar yez-ze evel pa vefe en he galloud rei d'ezo o c'honsians pobl; danvez a gemerint dioutan da greski o finvidigezh, met al labour, en e pes; ne vezo evito, — evit implija eur ger hervez doare ar yez lennek-ze, — nemet eun dibaodder (curiosité).

En deiz-all, e Gwened, warlerc'h pred kreizteiz, hag hon doa an enor da gaout da zibri ganeomp; an Ao. Chaloni Guillevic, vikêl-vras, an aotrou-man a zavas hag a reas e brezoneg eur brezegenn c'houek, helavar, leun a wirioneziou diwarbenn ar rimadell a lenner war baperlizer ar B.-B.:

Hon Doue a garomp,
Hor yez a viromp.

« Hor yez a viromp », emezan. Tec'hel a ra diganeomp koulskoude; ar bobl a zo deut da veza dianaoudek ha da leuskel he brezoneg ni, avat, komzomp, lennomp, skrivomp brezoneg... »

A dra zur, ma savfe e pevar c'horn Breiz skrivagnerien ha lennerien a-walc'h, ar yez a vefe salvet gant amzer, rak ar gonsians vro, eur wech krog d'en em ober en eun niver bras a-walc'h a dud ne goac'hfe ket ken.

Eno eo red d'eomp arruout, en eur veska, 'n eun doare beo, hor brezonegou, en eur binvidikaat anezo, gant evez ha gant poell, ma vezo grêt evelse eur chadenn hepken, hevelep danvez enni, hag a zalc'ho an holl Vretoned, mailh ha mailh, eus an izela d'an uhela.

D. N. D.

LABOURIOU AR MERC'HED WARDRO AN TI

Kenteliou Tintin Anna

Ha setu eun doare, d'aoza eur gouign all dishenvel he blaz diouz houman, hag a vez gellet da espern epad pemzek dervez pe deir sizun. « Gant pevar vi, e lakan eun hanter-lur aman, eun hanter-lur sukr malet, eun hanter-lur vleud gwiniz.

Dispartia ran adarre ar gwenn diouz ar melen; kemmeski a ran ar melen gant ar sukr; goude e lakan an amann, am bezo teuzet da genta, hag ar bleud. Poania ran neuze da ziboulouda, hag e lakan ar gwenn-vi baset ha c'houezet, gweñ evel an erc'h.

A-raok lakaat er fourn, a lardan eur plad houarn, doun, gant eun tamm amann; abenn eun eur goude ma vez bet fourniet e vez poaz ar gouign! »

Oh! an daolenn vras a zo anezi!
Piou n'en defe ket avi outi!
Ar wreg, evel eur wenanenn
A ya hag a deu, bepred laouen;
Labourat a ra heb ehan,
Evit an holl e kemer poan;
He foan ne vez ket kollet,
Gant eur mousc'hoarz e vez paët!

XIII^e PENNAD

Ar gwenan

Dleet e vije kaout gwenan e pep tiegezh war ar mēz; eur skouer int evid ar wreg hag eur gounid evid an ti.

Ar gwenan a vez laket e kestou; goudoret e rankont beza ouz ar yenien n'int ket evit gouzav hag ouz an dommder a lakafe ar c'hoar da veza re vouk.

Er goany e c'heller o lakat en ti, pe el lab, en eul lec'h tenval, pell diouz an trouz, diouz ar strons ha diouz al logod. En eur gest kolo e c'heller derc'hel etre 12 ha 30.000 gwenanenn; en eur gestenn vrasoc'h, eur c'hased pevar-c'horn, gant lanvennou koad da zispartia pep hed, e c'heller sevel betek 100.000 gwenanenn.

En eun hed-gwenan ez eus eur rouanezh pe eur vamm, labourezed ha sardoned. Ar vamm a zo karget da zefi viou; eus ar viou-ze e teuio gwenan all evit derc'hel plas ar re a varv; mervel a ra bemdez tri pe bevar c'han

swenanenn; bemdez ivez, ar vamm a zof 1.500 vi d'an nebeuta ha 3.000 bennak d'ar muia. Daou seurt viou a zo; ar re a vezo mammou enno a vez dofet en toullou gwella; ar re a vezo labourered enno a vez lakat e toullou bihanoc'h; ar re a zo sardoned ebarz a vez lakat d'an traon, en direnn-goar.

Ar rouanez pe ar vamm ne 'z a ket eus ar gêr; ar re a zo dindanni a zo karget da labourat; suna a reont war ar bleuniou, ar gwez pe en dour, ar peñ a c'hell servichout da vagadurez ar hed.

Ar vamm a vev tri pe bevar bloaz; ar zardoned ne badont ket keit: eus an nevez-amzer d'an diskar-amzer, rag al labourered a vir outo da zibri boued pa vez tremenet an hanv.

Al labourered a stag da labourat seitek dervez goude m'int ganet, pa deuont, er bed, d'an nevez amzer; poania a reont gant kement a diz ma varvont, peurlies, a-raok o zri miz, lazet gant al labourer, pe aliesoc'h gant an arnev, ar riu pe an avel; ar re a zeu d'an diskar-amzer a vez eun tammik hirroc'h o buhez rak tremen a reont ar goanv hep labourat.

Pa vezer flemmet gant ar gwenan, rag en em zifenn a rankont, eo red gwaska war al lec'h flemmet evit cha-cha ar binim er maez ha frota gant douar gleb pe yeot dourek; dont a raer d'en em voaza diouz binim ar gwenan ha ne raer van ebet ken evit beza flemmet.

Bep bloaz, e miz mae pe e miz mezeven, e rank ar gwenan teurel o hedou. Red eo neuze beza war evez; e kreiz an deiz, etre dek eur ha teir eur goude lein e teu ar vamm er maez ha ganti an hanter eus he labourered kosa. Ar gwella evid o faka eo strinka dour outo gant eur zifoc'hell pe c'hoaz teurel dournajou douar pe drez evid o lakat da jom a-zav; an trouz a vez graet gant eur billig pe eul lestr keur bennak n'eo mat nemet da ziskouez d'an amezeien e pelec'h eman ar perc'hen. Ker-kent ha ma chom an hed-gwenan a-zav, eo red e gester war eur skour pe eur bod-spern eo aes; lakat e vez ar gestenn dindan, eun taol krenn war ar skour hag an hed a zo paket; pa blanv war eur voger pe eur roc'h eo red en em zervicha eus eur bal evid e gester; war an douar eo aesoc'h c'hoaz: n'eus nemet lakat ar gest warnan da ober. Pa ne c'heller ket e baka dioc'htu eo red e c'houdori diouz an heol gant eun tamm sac'h ludu melen ha strinka dour outan: anez e c'helle nijal kuit.

Ar mel

Ar mel a vez dastumet gant ar gwenan diwar ar bleuniou; hen lakat a reont en o bruched da zigas d'ar gest hag her gorren a reont en toullou dibabet evid e zigermeret; eun dra all, poultr munut diwar ar bleuniou,

hanvet *pollen*, a gerc'hont ivez; ar poultr-ze a lakont e boutegi bihan a zo ouz o zreid' a-drenv.

Al louzeier pe ar gwez a ra ar gwella mel eo: an tilh, ar yeot gall, ar c'haol-garo, an irvin-gouez, ar roz ha meur a hini all c'hoaz; ar gwez oranjez a ra mel mat tre met ar re-ze me zavont nemet er broiou tomm; ar mel dastumet diwar ar bleun-brug pe ar gwiniz du ne vez ket ker koulz.

Ar gwenan ne garont ket mont da redet pell diouz o c'her; met pa ne gavont ket a voued tost e reont betek eul leo pe ziou da vont da glask; mat eo eta lakat e lioz ar gwenan bleuniou diouz e doare hag en hent-se e c'hellint labourat muioc'h.

Ar gwenan a labour en eun doare sebezus; n'eo ket dibaot gwelet eur gestenn pouneraet c'houec'h lur en eun dervez; eur gestenn hag e oa enni 100.000 gwenanenn a zo bet gwelet o pounneraat eus a driouec'h lur, en eun dervez.

Ar gwenan o deus ezomm dour; lakat a c'heller en eur bodez, e kichen ar gest, kinvi soubet en dour fresk.

Gwella ha kera mel a zo eo an hini n'en deus na liou, na c'houez, na blaz nemet blaz ar sukr; e vlaz c'houek e-unan.

E pep amzer, nemet er goanv, e c'heller tenna mel eus ar gest; arabad eo, avat, evid e gaout, gwaska war an dirennou, nag o zomma evit ma teuo ar mel er maez; red eo o renka war eun tamoer, eur bodez dindannan da zigemeret ar mel, pe c'hoaz prenan eur zunerez evel ma vez graet breman da denna ar mel eus an toullou; goude, e laker an dirennou-mel-ze er gestenn adarre hag ar gwenan a en em laka a-nevez d'o leuna.

Ar c'hoar

Ar gwenan ne reont ket o mel; e zastim a reont hepken war ar bleuniou, e lec'h ar c'hoar a vez graet ganto; ar c'hoar-ze a goust ker d'ar gwenan rak debri a rankont eur maread mel evit hen ober; en em voda a reont goudeze evit c'houezi ha dre ar c'houezenn-ze e teu ar c'hoar er maez eus o c'horf; he chaokat a reont goude, a-raok he lakat da ober o dirennou-koar. Lavaret a raer e rank ar gwenan dibri daou pe dri lur war nugen a vel evid ober daou lur goar; arabad beza souezet eta ma vez gwerzet ker ar c'hoar; koustout a ra keroc'h c'hoaz eget ne c'heller e werza; setu perag eo gwelloc'h espern an dirennou eged o gwaska; servichout a c'hellont d'ar gwenan estreded eur wech da c'horren o mel.

Eur benveg bennak a zo dister d'ar gwenaner da gaout ouspenn ar zunerez (*extrateur*, e galleg) a lavaren ano anezi bremaik, *da genta*, eur rastell vihan da netaat ar gestenn, *d'an eil*, eur c'horn, evid ober moged da zon-

vaat ar gwenan; *d'an trede*, eur vegin vihan gand eun aoted en he beg e tever warni keuneud brein pe bilhour da vleina, dre ar móged a zav diouto, ar gwenan kounnarret; *d'ar pevare*, eur bal doun, e koad pe e paper teo ha kalet, eun troatad hirder d'ezi war eun troatad ledander, da baka an hedou gwenan; *d'ar pempvet*, eur gaoued vihan da baka ar vamm pa vez c'hoant d'he dispartia diouz ar re all; *d'ar c'houec'hvet*, kaout a c'heller c'hoaz eur c'hased koad tano, neud-orjal outan, evit gellout, pa vez c'hoant chench plas d'eun hed gwenan; hag ouspenn eur mouch evid en em ziouall diouz flemmm al loened madoberus-ze a vez droug enno a-wechou pa deuer war o zro; met pa vez atao an hevelep hini e teuont hag ec'h anavezont anezan ha ne glaskont mui e flemma.

Klenvejou

Ar gwenan ne varvont ket kalz, dre glenved; evelato, a-wechou e pakont eun droug bennak; maro ar vamm n'eo ket eur c'hlenved eo ha koulskoude e laka eur maread hedou gwenan da vervel; red eo neuze rei eur vamm all d'an hed pe lakat er gest eur maread viou fresk, ma c'hello ar gwenan dibab eur vamm en o zouez, pe c'hoaz lakat ar gwenan en eur gesten all.

Ar red-kof n'eo ket eur gwall-glenved; parez a reont dioutan en eun dervez bennak; gwasz klenned ar gwenan eo ar vreinaurez a dag ar viou da genta ha n'oar ket evit he diarbenn; eur c'hlenved spegus eo; rak-se pa glever c'houez fall gand eur gestenn ha pa weler, en traon anezi, tammouigou traou du pe rouz, n'eus nemed eun dra da ober: he devi.

Ar gwenan o deus eun niver bras a enebourien; ar re anavezeta eo: al logod, ar gwesklevi, an tousegi, ar filiped, ar gwinilied, ar penn-glaouik, ar boc'h-ruzik, ar c'harzer-koad (1) ar merien, ar melc'houed, ar c'hivnid, ar garlostennou; war evez e ranker beza eta ha bihanaat a dleer, muia ma c'heller, an toull da vont er gestenn. Ar gwesped a ra gaou outo; debri e reont ar mel koulz hag ar balafennou; red eo ober brezel d'ezo; met gwasz balafenn a zo eo ar valafenn-noz; defi a ra tosta ma c'hell d'ar c'hestou hag he frenved a ra, e berr amzer, gwall labour etouez ar gwenan; met ne vez ket hardis nemed er c'hestou ha n'eus mamm ebet enno; rak neuze ar gwenan dinerzet ha fallgalonet, en o labour, ne enebont ket outi; evit o savetei eo red klask eur vamm all d'ezo, eur vamm yaouank, yac'h ha krenv a ouezo difenn he zi ha lakat an enebour er miz.

Echui a ran dre ar gériennou am eus lakat pa stagen gant va fennad: dbeet eo e vije gwenan e pep lec'h.

(1) Karzer-koad ha nann karzeg-koad: pivert.

Ar vad a reont a zo divent; mel a roont eur maread, da lavaret eo sukr; nag a sukr a implijer bep bloaz; digas a ranker sukr eus ar broiou all; daoust ha ne 'z afe ket gwelloc'h an traou ma vije sukr a-walc'h evidomp en hor bro, hep ezomm da lakat digas eus ar broiou all; sevel a ra war hon douar bleunv a-walc'h evit beva gwenan ha kaout mel drus.

Pegement a vad a ra ar mel-ze d'an anevaled klanv koulz ha d'an dud? Eur c'hras, eo e gaout war an teod; souplaat a ra ar c'houzoug, dieubi a ra poull ar galon eus an traou fall a jom warnan.

Ar gwenan o deus an enor da labourat evid an ilizou; ar goulou a zever ouz an aoter epad an oferenn a zo graet gand o c'hoar; ha setu perag e vez ano eus ar gwenan, ha kanet o meuleudi d'ar Zadorn a-raok ar Zul Fask pa vez ar beleg o kinnig da Zoue ar c'houlaouenn-bask hag o lakat an tan nevez da sklerijenna an iliz.

Traou disterik int ha lod a raio fae warno en abeg da-ze; met red eo sonjal ervat; gounid bras a zo diouto ha n'eus labour ebet war o zro, koulz lavaret; an hini en deus preder gand an traou dister en deus preder ivez gand an traou bras. Ar paour koulz hag ar pinvidik a c'hell sevel gwenan; an dud war ar miz koulz hag ar re a zo er bourc'hou a c'hell kaout gwenan: a-walc'h eo evit-se kaout eun tamm liorz e tal an ti; ar gwenan a gavo o boued war ar bleunioù hag a raio vad zoken d'ezo:

Evit kaout bleunioù kaer, savomp eta gwenan,
Hag evit kaout gwenan, roomp d'ezo bleunioù;
Ar bleunioù zo krouet gant Doue e-unan,
Da rei mel d'ar gwenan, tenzor al liorzou.

XIV^o PENNAD

An denved

Re alies, el lec'h ma 'z eus denved, e vezont berniet e krevier tenval, ha dalc'het el loustoni; al loened paour-ze o deus bet digant Doue eur wiskamant domm; diouallet e vezont ouz ar riou, met poan o deus kenan gand an dommder hag ar c'houez fall a vez en o c'hrevier; paka a reont neuze klenvejou diaes da barea ha spegus: ar gwasz eo ar c'hoenv-dourek pe ar vreinaurez.

Red eo rei d'an denved, aer vat ha sklerijenn; toullou da rei aer a c'heller da gaout en doenn pa ne vez ket a c'hoant da gaout prenecher; digor e vezint lezet noz-deiz pa ne vez ket er yen er maez. E Bro-Zaoz ar c'hrevier denved a vez yac'husoc'h eget ganeomp-ni; alies zoken ne vez kraou ebet; an denved a jom er maez epad ar bloaz; eun disc'hlavenn c'houder bennak a vez savet evid ar mammou nemet ken; met e Bro-Zaoz ne vez ket na ker yen na ken tomm ha ma vez dre aman.

Tri droatad a-hed hag a-dreuz a ranker da lezel gant pep penn-danvad ma c'hello trei ha distrei, gourvez ha sevel hep beza war hent ar re all; evit rei o boued dispartii d'ar re vihan ha d'o mammou eo red ober eur speurenenn evit o lakât.

Eur rastell a vez staget a-hed ar voger, pe savet e kreiz ar c'hraou; eun hanter troadad a vez lezet etre pep baz ma c'hello an denved foura o fenn er rastell da zebri rak ma rankont chacha ar boued, er mêz, gant begou o dent, e fuilhint eur maread hag ar boued a vezo gwastet dindan o zreid. Dindan ar rastell ez eus eun neo koad da lakat an irvin, ruta hag all.

Eul laouer a vezo laket er c'hraou, dour fresk ebarz; fasia a raer pa leverer n'o deus ket a ezomm an denved da eva dour; sec'hed o devez ivez, evel an anevaled all.

Bep bloaz e vezo spuret ar c'hraou gant lichou, pe gant dour, eun tamm kristo soud teuzet ennan; gwalc'het e vezo al laoueri, ar restell; dilammet e vezo ar gwiad kivnid ha hep tri bloaz e vezo razet ar mogeriou. Kempennet e vezo dindan an denved, pa vezo lous ar c'hraou; bep daou viz e vezo karget ha nann hep bloaz, evel ma ra darn; dioc'h an teil gfeb ha loued-ze e tap an denved droug-treid ha klenvejou all. Kolo, brug pe radenn a laker dindann; war an douar sec'h zoken e c'hellont beva, met neuze, e ranker, beb an amzer, lammet an douar-ze, da deurel war an teil ha lakat hini fresk en e blas.

An denved a rank beza ledan o dioukoaz, berr divesker, lemm o daoulagad, teo ar gloan war o c'horf; eur maout a vezo dalc'het evit hanter kant danvadez; krenv ha yac'h e tle beza, bevet ha lojet mat; eur guchenn gerc'h a vezo roet d'ezan beb an amzer.

Bevans mat a ranker da rei d'an denved; n'eo ket ar c'hant kollet eo rak gounid a vez diouto; en douar fall e c'heller hada yeot gall pe velchen ha lakat an denved warno; an douar a wellaio hag a-benn pevar pe bemp bloaz e c'heller kaout muioc'h a draou ennan rak teil an denved a zo eun tremp mat. En o c'hraou e vezo roet d'ezo: irvin, beterabez, kaol, kolo kerc'h hag eun nebeudig foenn. Er goanv, pe pa vez fall an amzer, ez a bemdez, daou lur foenn pe golo, tri lur irvin pe ruta, dre benn; pa vez brao an amzer e c'hellont mont er maez ha ne ranker ket rei kement d'ezo; ouspenn-ze vad a ra d'an denved beza, er mêz, o peuri.

D'an nevez-amzer e c'heller kaout re vihan; seul-vui ma teuont abred, er mare-ze, seul krenfoc'h e vezont; tri pe bevar dervez goude ma vezont deuet war an douar e ranker berraat lost peb oan; ar pastor en deus eun tamm ijin, nerz ha boaz ne vez ket pell evid ober an dra-ze; dizanjeroc'h eo eged ober gand eur gountell pe eur gwentle.

Pa stago ar re vihan da zibri boued e vezo drailhet

munut ar c'haol, ar beterabez pe an irvin ha kemmesket gand eur guchennig vrenn, kerc'h pe heiz; d'ar mammou ivez e vezo roet gwelloc'h boued ha muioc'h anezan; a-benn pevar pe bemp miz eo poent dizouna an oan; e zispartia diouz e vamm, en noz, a raer da genta; a-benn dek dervez e laker anezan eur wech bemdez hepken gand e vamm; abenn eur miz e vez dizounet evit mat.

Lavaret em eus ano eus gwaso klenved an denved: ar vreinaadurez; evit miret ouz an denved da dapa ar c'hlenved-ze, arabad eo o c'has er maez pa vez glao, pe c'hlebor ha dreist holl hep rei d'ezo eur guchennig voued sec'h a-raok. En o dour e vezo taolet tammou houarn hag eun dournad c'hoalen. Daoust da-ze e c'hell ar c'hlenved koeza warno; neuze e tevio malvennou o daoulagad hag o muzellou da zisliva; an anevaled klanv a vezo dinerz; kouenvet e vezo dindan o gronj; kenta a zo d'ober eo chom hep teurel traou glaz d'ezo ha rei bemdez da bep danvad klanv pe zinerzet teir pe beder loaiaid tizan, da lavaret eo gwin gwenn, deliou tin, saoch, ment pe lore bet o virvi ebarz; ar foenn pe ar c'holo a vezo glepet gand dour c'hoalenet krenv; ouspen ze e vezo laket er c'hraou, aman hag a-hont, en istribilh, sier lien tano, c'hoalen enno, d'an denved da zuna; ouspenn c'hoaz rei kerc'h d'ezo ha boued sec'h, bep pred; alies, evelse, e c'heller o farea pe o diouall diouz ar c'hlenved.

Droug-treid an denved a zo eun droug spegus; dindan an troad e weler eur gouli bihan a gresk dillo hag a zirent; kamn e vez an denved; ne gavont ket mat o boued, rak poan o deus hag alies e renkont mervel.

Pa weler eun danvad o kamma eo red e lakat war greiz e gein ha derc'hel mat d'ezan evit gellout gwalc'hi e droad klanv; goude gant kalz a evez, e vez rimiet ar c'harn beteg ar gouli; diouall a ranker avat en aoun d'e lakat da wada; goude beza e gempennet gwella ma c'heller e skuilher warnan eul louzou graet o touezia « acide sulfurique » gand « alcool pur » en eur lakat teir gwech muioc'h a alcool eged a « acide ». Al louzou-ze a c'heller da viret en eur vured stouvet mat; hen heja a vo ranket a-raok e implija.

Ma 'z eo dleet beva mat an denved arabad eo o beva re vat pe e varvint gand an taoliou gwad; sellet a ranker alies ouz malvennou o daoulagad hag ouz o garvaniour; ma 'z int re rus, rei nebeutoc'h d'ezo pe, da vihana, boued semploc'h; ma vezont gwenn rei boued krenfoc'h.

Ar re yaouank a varv alies gand an troadur-penn; ar pez a zo penn-abeg d'ar c'hlenved-ze eo eun amprevañ dister a en em laka e boedenn penn an oanig; heman neuze a vezo izel e benn gantan; troïdellat a raio dalc'h mat; dont a raio war e giz; n'eus louzou ebet evid e barea; e laza a ranker hag e werza d'ar c'higer rag ar c'hig a vez kerkoulz da zibri.

Evei ar zaout, an denved a deu da goenvi diwar ar melchen nevez pe eul louzaouen fall bennak; red eo entent outo hep dale; ar bale a ra vad a-wechou; met pa vez gwasoc'h e vez roet d'ezo louzou, evel d'ar zaout nemed e roer nebeutoc'h: 10 pe 12 herad amoniak pe ether en eul loaiaid zour pe ziou, da lounka; dour savon a ra vad ivez; souba a Cheller ouspenn penn an danvad en dour ha ma n'eo mui gouest da lounka e ranker e doulla evid e barea.

Diouz an denved ez eus gloan, kig, teil hag e meur a vro laez d'ober fromaj.

Ar c'hig a zo prizet, an teil zo mat, ar gloan a zo ker, rak-se ez eus gounid e pep doare diouz an denved. D'e dri bloaz eman ar penn-danvad e-stad da veza lardet: tri pe bevar miz a zo dister evit lakat kig da zavel outan.

Bep bloaz e vez touzet an denved wardro fin miz mae pe e deziou kenta miz mezeven; evesaat a ranker da ober al labour-ze pa vez brao en aoun ne dapfe riou; an tousa ma vez trouc'het ar gloan eo ar gwella; evit se eo red kaout eur gwentle lemm hag eun den boazet diouz ar vicher; ar gloan a rank beza netaet; epad daou zervez e vez lesket en dour savon; goudeze e vez gwalc'het en dour red e boutegi rouez, ken e vez sklaer an dour a deu dioutan.

Ar pennad skrid-man diwarbenn an denved a zigas da zonz d'in eus eun danevell am eus klevet gwechall:

Eun dervez edo Hor Zalver Jezuz-Krist oc'h ober eun dro war an douar gant sant Per, e abostol bras; bep an amzer e teuont da welet penaos eman an dud en izelvedman. Er bloavez-ze ez aent eta a-hed an hentchou, marvailhou ganto; an amzer n'oa ket tomm, miz mae anezi koulskoude, hag Hor Zalver a lavaras: « Da derri nerz an avel e karfen kaout eun dra bennak da lakat en dro d'am gouzoug. »

« Netra aesoc'h, Mestr eme Ber; aman, pelloc'h, en eur park letoun, e wellan eun den en oad, eur vandenn zenved gantan; pa 'z oc'h an Holl C'halloudek e c'hellit kemeret eun dournad gloan diwarno evit hoc'h ezamant ! »

« Ne fell ket d'in kemeret, Per; an den am eus krouet libr; a galon vat e rank rei ar pezh a ro; goulenn a rin digant o ferc'hen: va den mat, emezan, eun tammig e krog ar riou ennoun ha plijout a rafe d'eoc'h trouc'ha eur guchenn c'hloan diwar gein unan eus ho tenved evit rei skoazell d'eun tremeniad n'en deus na gwenneg na seurt evit ho paea, nemet eur « bennoz Doue » kalonek ? »

Egile a zellas outo gant herder hag a respontas dichek: « Gloan va denved n'eo ket evit tud a netra eveldoc'h eo; kaout a ra d'eoc'h em eus re a zanvez? E gwirionez oun pinvidik, met ar pezh a rofen d'eoc'h ne jomfe ket ganen! Kerzit eta gant hoc'h hent! »

Sant Per a oa droug ennan: « O va Jezuz, emezan, pegen dianaoudek eo an den! C'houi eo ho peus lakat

gloan war gein an denved hag an dud-ze a zo bet diskempenn a-walc'h en ho kenver evit nac'h ouzoc'h eun dournadig gloan. Kastizet e vezo ganeoc'h, michans? »

« Bez dinec'h, Per, Doue a zo just! » Aet pelloc'h gant o hent e weljont aezet e toull eur c'hae, eur vaouez koz o neza en eur ziouall he diou danvadez: « Doue r'ho pennigo, mamm-goz, a lavaras Hor Zalver; hag ar vadelez ho pefe da rei d'in eur bouc'had gloan? »

« Ya! ya! ha daou ivez, mar kirit, setu ar gwentle; trouc'hit hoc'h unan ar pezh ho peus ezomm; evidoun-me ne vezin ket paouroc'h rak an aluzen ne baoura den! »

« Doue ho paeo, kristenez vat a deu war zikour ho nesa; eme Hor Zalver, gant eur mourc'hoarz dudius. »

P'o doa graet eur pennad hent all sant Per a lavaras: « Ne c'hellfec'h ket diskleria d'in pe seurt kastiz a zigasoc'h d'an den piz-ze hon eus kavet war hon hent bremaik hag en deus respontet ac'hanoc'h ken divalo! »

« Kreski a rin, eme Hor Zalver, niver e loened; chans en devezo ganto holl; bernia a raio an aour war an arc'hant! »

« Han! eme Ber; bouzar oun, a dra zur, rak n'oun ket evid entent ho komzou! Ma roit kement-se d'hoc'h enebour petra rooc'h d'ar baourez a zo bet mat en ho kenver? »

« Dichans ha paourentez; ar wella eus he diou danvadez a vezo debret gand ar bleiz! »

« O mab ar Werc'hez Vari! kalet eo ho lezenn ha c'hoaz e livirit eo just an Tad a zo en nenv! »

« Selaou, Per, a-raok gwall-gomz evel ma peus c'hoant da ober; madou ar bed-man n'int netra pa ne vezont ket implijet evit gloar Doue hervez stad hag aes pep hini; dont a ra ar galon da galedi diouto. Pa ne jom nemed arc'hant etre daouarn an den, ne jom netra koulz lavaret; ar fals-pindivik-se a gav d'ezan eo eurus abalamour m'en deus danvez; meulet eo gand e amezeien rak n'en deus morse na laeret, na lazet; e c'hopr a gavo er bed-man evid an nebeudig vad a c'hellfe da ober; met stag eo e galon ouz e binvidigeziou ha ne zistago biken: gwas a-ze d'ezan da zeiz ar vara! »

An intañvez he deus graet d'in aluzen a zo kalz eurusoc'h rak he c'halon a zo e peoc'h; savet er boan e varvo er boan ha koulskoude ne chano ket da veuli Doue e peb amzer; ar garantez a zo en he ene a zo gwelloc'h eged an holl denzoriou distak diouz an traou krouet e savo betek tron va Zad hag er baradoz e kavo an digoll eus he foaniou. Kaout a ra da zarn e c'heller prena pep tra gand arc'hant; n'eo ket gwir; ar c'hantik hen lavar fraes:

« Gant ho tanvez ne brenoc'h ket
Eun hanter dervez eurusled! »

Sant Per a gouezas d'an daoulin dirag e Vestr: « Va

Jezuz, pardonit; ar wirionez a zo ganeoc'h ha me ne d'oun ha ne vezin nemed eun amparfal! »

Hag evel daou-alc'houeder e savjont adarre d'ar baradoz.

Setu eur gentel kennerzus.

Ma 'z eo mat sevel loened, klask gounit eur gwenneg bennak, dastum arc'hant gant onestiz, eo gwelloc'h c'hoaz sikour an nesa, lakat ar fizians e Doue, deski e lezenn d'ar vugale:

Gwelloc'h eo deski Mabig bihan
Eget dastum madou d'ezan.

Ma 'z eo talvoudus lakat en o fenn ar c'hrenn-lavarman: « Ma 'z peus c'hoant da gaout bara arabad d'it chom gourvezet war ar brenn! » eo ken talvoudus all lavaret d'ezo, d'ar re a zo en hor serr ar c'hrenn-lavariouman e tleomp pleustri hon-unan warno:

« Te hag a c'hell kousket, sonj er re o deus re a boan da c'hellout kousket; te hag a vale goestad, kemer truez ouz an hini n'eo ket evit mont d'az heul; te ha ga zo pinvidik, sonj en hini a zo bec'hiet gand an dienez! »

Bezomp mat, deskomp d'ar re all beza ivez; eun itron vras marvet er c'hantved diyeza a lavare: « Ar vadelez eo an anaoudegez eus a ezommou ar re all! » Bezomp war evez evit beza e tro da skoazella hon nesa ha Doue roio d'eomp eurusted e varadoz goude beza marteze skuilhet e vennoz war hor madou hag o laket da greski etre hon daouarn.

TINTIN ANNA.

Tadou ha mammou

it, d'ar Bleun-Brug,

da Geranna, d'ar 16 a viz gwengolo a zeu,

gant ho pugale hag ho tud koz,

gwisket holl en ho kaera, ha diskouezit eno, dirag ar bed, n'ema ket Breiz o vont da ziskenn en hebez, c'hoaz!

Santez Anna a vo kel laouen ouzoc'h ma teuio d'ho tiambroug war dreujou he iliz.

AVEL-VOR

Aet eo e kounnar an avel,
He mouez a glevan o sevel,
En hent eman abaoe dec'h
Ha dirazi an holl a dec'h.

Rust eo he c'homz ha trouz a re,
Ne spont dirag den na netra,
Ha, dre ma tosta, e pep ti,
An dud a stank an nor outi.

Er mor e krog ha, leo war leo,
E silej ar c'hoummou dre ar bleo
Hag o bunt, ein gwenn hep difenn,
War ar roc'h da faouta o fenn.

Hep mez, war ar bagou e lamm,
Ne zouj ket o gouel nevez-flamm
Hag alies, zoken, en dour,
E stlap destrad ha marc'hadour.

Hep goulenn aotre, war ar gwez,
Er c'hoad, en eur yudal, e kouez
Ha du-man du-hont, en henchou,
E skign, hep truez, o blenchou.

War dal ar gwiniz puilh ha druz
A hej, er park, o baro ruz,
Folloc'h foll an avel a red
Hag an eost a zo diskaret.

Diwar beder vrec'h ar vilin
E skilf ar c'hanab pe al lin,
Hag, araok diskenn en he zoull,
E tigoeff c'hoaz an tier-soul.

En eur dreuzi ar voure'h, ez a
War dour an iliz da c'houeza,
Met difiny war e dreid maen-rouz
An tour ne ra van ouz he zrouz.

Selaou, va breur, va c'hoar, diwall;
Dont a ray warnoc'h stourmou all,
Met, soun evel touriou ho pro,
Dalc'hit penn beteg ar maro.

J. L'HELGOUACH, o. m. i.

KERNE

Epad miz mê, re Kerfeunteun ha re Gemper zo bet alies oc'h ober eur gwel da unan eus kaera chapelioù savet d'an Introuñ Varia wardro Kemper.

Ne vo ket pell, e vo grêt enni ar pardon bras d'ar zul kenta a viz Gouere. Setu eta:

Roomp amzer
Da Wennole
Da zont d'ar gêr
Eus an Erge

Da zont d'ar ger eus an Erge
Gant Gwenêl e ziskib neve.
Ha ni ielo, ma mignoned
D'ober eun dro bale
Dre ar mêziou alaouret
Beteg Ty Mamm Doue...

*

**

Chapel Ty Mamm Doue

Eu hanter leo en tu nec'h da Gemper, tamm ebed deus hend koz Kastellin, 'z eus eun draoniennig gaer etre diou rôz, a ziskenn gouestadig gant he gwaz-dour da glask stankenn ar Steir. Eno, eun tammik eus koste ar gre-c'henn, emañ chapel Ty Mamm Doue. Bez' ê-hi sûr eus ar c'hoanta hag ar vrudeta a c'heller gwelet er c'horn-ze a Vro Gerne.

N'ouezer dare, ken emañ digouët ganti hag he gweler neuze kuzet egiz en eun toull-mengleun, gant he mogerioù laouet, marellet gant gwiskadou baro-gwê arc'hantet ha torchadou man-aour yell, he orioù kizellet, garrantez dellioù tennet deus ar vein oc'h ober tro d'ezo, he frenecher digor war dalbennou uhel ha lemm, he zou-rik koant gwintet mann war benn traon pe greiz ar chapel, giz elec'h all, met azeet brao-tre war unan eus ar peulioù bras-korn laket da grenvaat ar mogerioù, eur peul fichet kaer gant eur bern daezioù ha lochoigou-sent.

Eur chapel diouz ar stankenn: kaer an eil hag aben.


Pe vare ê bet savet ty mamm Doue?

Nebeut amzer goude ma oa douget ti ar Werc'hez, ti Nazaret, d'an Itali, er bloavez 1295.

D'ar mare-ze e oa eun denchentil bennag pe eun den a iliz oc'h ober eur bale dre an Itali. Mont a reas emichans betek kêr Loretta da welet ar « Sancta Casa » an ti santel. Distro da Vreiz-Izel, e c'hoantas kaout dirag

e zaoulagad eur merk beo eus ar pardon ' oa bet ennan hag eus ar burzud en doa gwelet, Ober a reas sevel chapel Ty Mamm Doue.

Er bloavez 1540, an tybedi kenta a oa dija koueet en e boull. Neuze, Otrou ar maner tosta, aotrou Keramaner, Per a Genekivilly, perc'hen leur-ger ar chapel, a roas



Ti Vamm Doue

ôtré da re Guzon (hizio parrez Kerfeunteun) da zével, en dro Ty Mamm Doue. Hen, avat, en distro, en dije gallet lakat e skouedou warni.

Ar chapel egiz ma zê-hi brema, zo ' evit ar peb brasa eus an amzer-ze. A-us d'an nor, e weler, eur skrid graet e lizerennou a c'hiz koz, dalc'het gant daou zenig bihan, dies bras da lenn, nemet an diou linenn genta:

« CESTE CHAPELLE EN LHONEVR
DE MAM DOE LMV «XLT (l'an 1541). »

Ar chapel man en enor da Vamm Doue, er bloavez 1541.

E nor-dal an traon, eus eun tu, 'z eus eun êl gantan eur bannielig skrivet warnan: PAX VOBIS — 1592 ». —

(1) A-uz: au-dessus, war 'horre.

Ra vo ar peñc'h ganoc'h — en tu all, eur zoudard bihan, houarn e dog hag e zillad, krog gant e zaouarn en eur banniel stag ouz eur bod-koad.

En diabarz, en dorn kleiz pa z'eer er Zantual, eman skeudenn gaer an Itron-Varia, azeit ha kurunet, gant ar Mabig Jezuz war he bartenn, hag eur bod-rejin en he dorn diou. — En traon-tre war al letrin (2), e weler skouedou an Otronez Furik a Gêrmaner.

Etre ar chapel hag an hend 'zo eun tybedi all. N'euz tour ebéd warnan hag ar muia ' ma tenn da netra, eo d'eun tiig diwar-mêz. Henez eo, war a leverer, gwir ty Mamm Doue, savet henvel beo ouz ti Santel Loretta. Lod all a gred eo ospital ar chapel, da lavaret eo, eul lochig, egiz ma veze kavet alies en dro d'al lec'hioù a zevosion vras, mat da zigemer ar bardonerien skuiz gant an hend, pe c'hoaz ar re zempl hag ar re glanv. Gweleou plouz a vije ledet enno da vare ar pardon hag an dud kêz a gaye graz n'em denn eus a-douez an dud ha mont ebarz d'ober eur gourvez.

Ar pez en deus tennet ar muia brud war ano ar chapel, devot-ze, eo an tól-burzud kaer c'hoarvezet er bloavez 1630 gant an Tad Maner. Ar beleg-man a oa da vat oc'h ober skól da bôtred ar bempet rumm e skolaj ar Jezuisted e Kemper. Ginidig oa eus koste Roazon, ha n'entente seurd ebéd gant ar Brezoneg. Setu ma lakeas en e benn goulenn digant e zuperioed ôtre da vont da Visionou Amerig an Nec'h, ar C'hanada. Panevet an Tad Bernard e oa grêt an tol. Met heman a livas dirak daoulagad e vreur fallgalonet eun dôlenn ken gwir ha ken doanius eus stad reuzeudik ar relijion e bro an Arvor, ma teuas an Tad Maner da 'n em zonzal ha da laret chom. — Met. Penôz siouas deski e berr amzer eur yez (1) kemend a droioù kamm enni egiz ar Brezoneg. Hag ar beleg paour da zebri e spered goasoç'h-goaz.

Eun devez ma oa o vont da bardoni da dy Mamm Doue, n'en doa ket c'hoaz diskennet ar greç'henn a zo etre Kroaz ar Gardien ha maner Kervorvan, m'en en zantas, a greis-holl, douget kenan d'ar Brezoneg. Ar memez mare eün hag eün, setu eur ban-sklerijenn o treuzi e spered egiz eur gaouad-luc'hed, hag e welas neuze dirazan ar misionou kaer en dije gelllet prezeg dre bevar c'horn eskoptiou Breiz-Izel, pa vije deut a benn da c'hoût mat ar Brezoneg. E oa c'hoaz o vala an traou kaer-ze en e spered pa n'em gavas gant ar chapel. Mont a reas neuze da n'em strinka dirak skeudenn garet an Itron Varia. « Oh! Gwerc'hez, bennigit ho peleg! truez ouzin hag ouz ar Vro-man, ha grit d'in anaout ar Brezoneg! » — Selaouet e voe.

(2) Tribune.

(1) Doare-komz, langue.

Da Zul ar Pantekost gant ôtre e Zuperioed, e n'em lake d'ar studi. D'ar mœurz warlec'h e ree katekiz ha c'houec'h zizun goude, hep paper na netra, e prezege e brezoneg.

Ar burzud-se zo bet displeget gant eul liver a vicher, Yann d'Argent, war unan eus mogerioù iliz-Veur Sant Korantin Kemper. Gwelet a reomp an Tad Maner



war benn e zaoulin, hag eun êl o lakat d'ean e viz war e deod, o sila ennan e giz-se a-berz Doue an doare da gomz Brezoneg.

Ar misionou brudet ne voe ket pell e deod hag e spered o tont da dapa ar pleg-neve. Hep dale e lammo diwar e blienn kantikou, forz pegemend, beteg eur geriadur hag eur grammadeg brezonek. Eul leor en deus grêt eus ar re man.

Eul leor d'ean eun ano eston a-walc'h. « Skolaj zakr ar Jezuisted, rannet ar bôtred ennan e pemp rumm, desket d'eo ar c'hentelioù kristen e Brezoneg gant tri a-

c'houez da vont e-barz: eur geriadur, eur grammadeg, ha reolennoù da reiza ar mennoziou. » Moulet e voe al leorpresiuiz-se e Kemper er bloavez 1659 gant Yann Hardouin.

Epad an Dispac'h vraz, chapel Ty Mamm Doue hag an tybedi a voe laket gwerz warno: eus danvez iliz Sant Kuzon e oant, o stal 'oa skler eta. Pebez tud kris, goue, ha dizeven, e oa, er memez tra, tammou potred an « Drailh », o vont da n'em daga, ouz an ilizou, ar chapeliou, o klask, o zôler d'an traon da laka ar yeot, da c'hlaza enno. En doare-ze, gave d'eo, e vije diverket, lammet kwit roudou ar rummajou tud deut a-dreuz ar c'hant-vejou da bedi ha da gana en tier santel-se. Oberiou kaer hon tud koz, an dantelez-vein savet gant o feiz ne dalvent ket hirroc'h evito eget an distera mengleun. Rag evit kaout ar vein hepken e vije dizac'het hor c'haera chapeliou. Brao oa d'eo mont goude, freuzerien milliget, da ginnig d'an dud vat tanva mel dudius « An Urz Neve » Tezennoù mignoned ar « Beg-Arok »! (1)

E Breiz, a c'hraz Doue, ma oa pilet kalz chapeliou, e voe saveteet eur bern mat ive. Pa vijent laket e gwerz, alies, alies e teue eur c'hristen mat bennag, o frene hag o mire. Eunn nebeudig tud eus Kerfeunteun a n'em glevas ken etrezo da breina Ty Mamm Doue: savet e voe eun tammig brao a arc'hant. Loeiz Ollivier eus Kergariou a voe dibabet da gemer ar chapel war e ano. Evit 3510 lur baper, talvoudegez 50 lur arc'hant marteze, e voe-hi roet d'ean d'an 8 Floreal eus ar bloavez III. Loeiz a viras ar chapel keit ma padas ar Freuz. Morse, avat, n'hellas he digori. Den ne deue war he zro: na kristen, na toer na mansoner ha bemde ez ae war fallaat.

O wélet ar chapel o vont d'an traon bep tammig, Loeiz Ollier, war a greder, en defe bet ar zonzj d'he fila evit kaout ar vein da zével en dro e verouri Kergariou. Meur a gentel a dapas digant Doue an eil goude eben ha dont a reas en e stern, ne voe ket pell. Eunn devez, e kreiz dourna, e teuas d'an traon eus ar c'hrac'hell mel d'ivel hag e torras e c'har glei. Ne oa ket pare mat c'hoaz ma pakas eul lamm all hag e torras e c'har ziou. Tamm ebed goude, e verc'h a voe flemmet gant eun aer-wiber hag e kinnigas mervel. Diwar an tôl-ze, e roas Ty mamm Doue d'ar barrez er bloavez 1807.

An ôtrou Vistort, person Kerfeunteun, a c'hoanteas dioustu ober eur c'hempenn d'ar chapel. Gwel't a ree an devosion, eur chrogadig distanet, o tont en dro etouez an dud: bep sul ar c'horaz, e tirede re Gemper ha tro war dro davet Ty Mamm Doue. Ne voe ket re abred eta lakât al labourerien warni. Met morse n'en dije kredet e vije bet kavet eun den fall a-walc'h da zont da hegal. Siouas!

(1) Ar Beg-arok, le progrès!.

Dont a reas unan koulkoude: Poullen, Otrou Keramaner: « Ar chapel, a laras hen, zo savet war ma douar, m'ho peus c'hoant d'ober eun dra bennag, sellit: kemerit ar vein ma vo skarz et al leur-ger; ha ma na rit ket, ho po urz digant ar prefed. » Kaer en doa an Aotrou Persouin, ne gave penn mat ebet ouz an trabaser; kinnig ' awalc'h a ree traou d'ean, nul ' bep tro! Eunn intron vras eus koste Kemper, a reas da gleout d'an den en dije 25 loù aour ma karje chom peuc'h Ne reas ket eur van! Doue a gomzas neuze hag e komzas yac'h! Rak tri devez goude, an dê-kenta a viz mê 1809, e pegas an tan e ti Otrou Keramaner, en ti en doa e Kemper. Devet lip e voe ar stal: pourpraj, marc'hadourc'z paper ha danvê. An ôtrou, avat, ne voe tamm furc'h. « Ty Mamm Doue d'an traon, a lare atô. » Abenn ar fin kemend-se, kuzulierien ti ar Prefed a roas e zistag d'hon aïlhon-bôtr hag eunn Urz eus a berz ar roue a zisklerias er bloavez 1817 e oa bet roet ar chapel gwir ha fond da iliz Kerfeunteun.

Dibaoe m'eo bet kempennet Ty Mamm Doue, an devosion n'eo bet êet morse da hesk na zoken war ziskar. Er bloavez 1822 an otrou Floc'h, a oa neuze person, a laras oferenni enni. Tud a deuas deus kemend parrez tro dro, tud a vandennajou deus kemend toull-hend. Setu ma komprenas ar veleien e vije mat digas d'ar ger ar skeudenn vuzudus a oa er mare-ze e chapel Sant Per Kuzon. Ar skeudenn-ze eo an hani o doa pedet dirazi an den Euris Mikêl an Nobletz hag an Tad Maner. Kerc'het e voe gant ar splanderiou: eur mor a dud a ia er proseion. Tremen kant vloâ zo eus an dra-ze, ha tud vat Kerfeunteun ha Kemper a zalc'h mat c'hoaz da chapel Ty Mamm Doue: dik int da bedi an Introu Varia, hag ar Werc'hez ne skuiz ket ive oc'h ober evito. N'eus nemet sell et ouz an dôlennoù, an « ex-voto » a ra an dro d'ar skeudenn vuzudus. D'ar Yaou, n'eus hend ebet a v' muioc'h a dud warnan eget hani ar chapel: bugale ha krennarded, potred-skol eus kemend liou o vont da bourmenn beteg ti an Introu Varia.

Sulioù zo hag e vez kanet ar Gousperou e Ty Mamm Doue, egiz sulioù miz mê. Da Wener a-wechou e vez grêt hend ar Groaz.

An ôtrou Serjant, Eskob Kemper (1855-1871) a deue di d'ofereni d'ar c'horaz.

Meur a skolaj ha Kenvreuriezh eus Kemper a ra enni eur pardon ar bloâ e serr mont da n'em erbedi ouz o mamm. Pa oa Kloerdi bihan ar Pont e Likez Kemper, pardon ty Mamm Doue ar bôtred skôl a oa eunn devez hag a verke ma oa unan.

Personed Kerfeunteun, eus o zu, n'int bet morse war lec'h gant o foan da gaeraât ar chapel. Gwer-liou ha tôlennoù zo bet laket d'he ficha (1). Eunn dôlen a zo

dreist-holl, livet goude ar brezel ha warni eur brosesion gaer oc'h ober tro ar c'hapel gant ar skeudenn vuzudus. E penn ar brosesion an otrou 'n Eskob Duparc. A-us (2) d'ezhi soudarded breton o lamma war ar Brusianed ha ar c'hirri-nij o troidella dre ar c'houmoul hag ar boliji o tarza warno.

Da zul kenta a viz Gouere e vez grêt ar pardon bras. Eur pardon devot-tre eo. Gwelet, vez ennan gwiskaman-chou kaer: pôtrede chupennou glaz, nend aour war o dilhad, ha merc'hed koefou dantelez gant tavancherou marellet. Echu an ofisou, ar bardonierien a bign alies beteg maner koz Keramaner. Eno e yeont da glask an disheol dindan ar gwê fao-braz ha d'azeza war ar yeot glaz ledet egiz eun doal war beg an d'uchenn. Pa 'z eo eet an dud holl d'ar ger, Ty Mamm Doue 'zo adarre eun ti a heuc'h, didrouz pep tra war e dro. Ac'han al lagad a sko pell du-ze war stankenn ar Steir hag a wel e kreiz sioulded dudius an abardê an-heol o tiskenn bep tammig war goajou Kistinig hag o veuzi gant e sklerijenn-aour ar c'horn dispar-se eus hor bro garet Breiz-Izel.

G... M...

(1) Fichta: bravaat, « orner ».

(2) Doal: tapis.

(3) Sioulded: peuc'h.

Er miz a zeu e kavoc'h war Feiz ha Breiz

Buhez Glaoda-ar Prat

Eur ger war vuhez c'hallek Sant Herve,

Skridou ha n'o deus ket gellet tremen er miz man.

Soudarded ha mortoloded koz ar brezel braz

it, d'ar Bleun-Brug,

da Geranna, d'ar 16 a viz Gwengolo a zeu, da welet ar bez-meur emæer o sevel eno

d'an 250.000 breizad

a oa er brezel ganeoc'h hag a zo kouezet war an dachenn.

It da lavaret ano anezo da zantez Anna!

ROUE AL LAZ

— Huchit war ho pioc'h, emezan c'hoaz, ha va chilaouit war an dro! — Ha gallout a rajen tostaat ouz ar beleg hag ouz an diou zimezell a zo gantan?

— Chô! Penndu!... (Hag a vouez izel): Emaint e traon an ti, daou soudard ouz o miret! — Bailhez! Luchez!...

— Nag ar zoudarded all?

— Penn-gwenn aman! Tra divergant!... — ...A zo er porz pe endro d'ar porz oc'h evêsaat hag o tenna.

— Daoust ha ne glevan ket eur c'hi o kunudal? eme Gadiou, savet e skouarn gantan.

— Eo! emezi. — Chom 'ta, Mignon!...

— Ar c'hi ac'han, marteze?

— Nann, emezi, pegwir ar re-man o deus roet eun tenn d'ezan, en eur zigouezout.

— Neuze e rank bezan unan eus hon re!... A dra zur, bezan eo, hag ar c'hi-ze en deus kavet va roud hag a zo aze ouz toull al lukarn o kunudal!

Kadiou a zavas Kerkent er zolier ha, diou vunutenn goude, e tiskenne adarre er c'hraou hag eur c'hi kerkent hag hen. Furig e oa, chomet hep dont er zolier, o vezan m'en doa Kadiou chachet al lukarn war e lerc'h. Ar paour kêz loen a oa stad ennan ken nê baouez da zevul e dreid araok war ziouskoaz e vestr ha da lipat e c'henou.

— Mat eo! mat eo, Furig! eme Gadiou. Arabad ober trouz, han? Hag ar c'hi a ziskenne kerkent war e dreid hag a chome ken sioul hag eun oan.

Eur zonj a denas neuze e penn Kadiou:

— Arsa, emezan, dre benôs out deut te aman?... Daoust ha n'eus ket eur c'helou bennak ganit?

Hag e furchas dindan e golier.

— Sonjal a-walc'h a ren, emezan; setu aman eur paper, Red d'in klask eur banne sklêrijenn da lenn petra zo warnan. Hag o tostaat ouz goulou ar plac'h, e lennas kement-man: « Mar tigouez ar paper-man gant Kadiou, lakaat e respont war an tu a-drenv anezan ha kas ar c'hi en hent war e giz. Rei d'eomp da anaout dre he tu skei war ar verêri, ha tec'het e kuit, e keit ze, dre an tu kontrol, gant ar beleg hag ar merc'hed. »

Kadiou en devoa lennet a vouez uhel, ar vatez o chilaou eveziek.

— Dre lec'h ma 'z oc'h deut, emezi, eo d'eoc'h tec'het war ho kiz: War ar parkou a-drenv ne sko nemet lukarn ar zolier foenn.

— Red vo ober o stal d'an daou soudard a zo oc'h ober gward war hor prizonierien, eme Gadiou etre e zent. Ez an da skriva d'ar C'hloareg skei du-ze, e tu all, tu ar

c'hreizteiz ha pa vo ét ar Re C'hlas war eno, ni a zigaso hon tud war aman, an ôtrou kure hag an diou vaouez.

Eur blienn blom a oa gantan, bet digant ar C'hloareg; gant kalz a boan, met en eun doare lennabl a-walc'h, evelato, Kadiou a skrivas:

« Deuit d'ezo dre du ar c'hreisteiz ha grit ar muia a drouz a c'helloc'h. Me zo aman; e kraou ar vereri, prest d'ober va c'hefridi dal m'ho po roet tu d'in. »

Ar paper a voe laket adarre dindan kolier ar c'hi... Met penôs ober d'ar pikol loen-man pignat er zolier?

— N'ho peus skeul ebet aze? eme Gadiou.

— Eo, eme ar vatez, aze dindan klud ar yer. Breman, me 'ya kuit, betegout na ve kavet ez oun aman re bell amzer zo!... Chans d'eoc'h!...

— Klevit eta, eme Gadiou; roit eus va c'helou, e kuz, d'hor prizonerien, mar gellit... Arabad, avat, dizolo ac'hanon!!...

— Kontit warnon! emezi.

Hag ez eas kuit gant he zailh hag he goulou. Pa voe adserret an nor, Kadiou a grogas er skeul hag he harpas ouz ar voger, dindan toull ar foenn. A-boan e voe savet er zolier ma voe Furig, en eul lamm, war e lerc'h.

— Aze! ki mat, eme Gadiou, dizro breman da gaout da dud, ha bez war evez ma ne vi na gwelet na tizet!

Ar c'hi speredek a reas eun hij d'e lost ha, raktal ma tis-kouezas Kadiou toull al lukarn, e reas eul lamm ermêz hag e treuzas evel eul luc'hedenn ar park bras a oa drek an ti.

— Sell aze, eme Gadiou, eur zonj vat d'ar C'hloareg. N'am eus ken d'ober nemet gortoz. Laouen e vefen da welet c'hoaz ar plac'h saoud.

Ar plac'h saoud a lakas amzer da zont war he c'hiz. Goulaoui a ree an deiz a-dreuz da faoutou an nor; ar yer war o c'hilud a veske, dihunet gant kan ar c'hilheg ha gant ar sklêrijenn o tarza. Kadiou a zonje e teujer da zigeri d'ar yer hag ivez da c'horo ar zaoud ha da lakaat al leue bihan da zena... Eur c'helou bennak a glevje adarre...

Bet en doa amzer da lavaret e bater, meur a wech, 'benn ma tigoras an nor a-nevez. Ar vatez a oa adarre. Astenn a reas eun dra bennak da Gadiou: eur pikol pez bara en eur dremen en e gichen: « Breman souden, emezi, ho po leaz gantan!...

— Gwelet ho peus hon tud? eme Gadiou.

— Ya, emezi. N'am eus gallet lavaret d'unan eus ar merc'hed nemet eur ger hepken: « Ho tud a zo-demdost; » a-walc'h e oa; he dremm en deus sederaet ha, kerkent, netra nemet gant eur zell, he deus roet da anaout, d'ar re all, ar c'helou mat... Me a ya da c'horo va zaoud. — Gras d'eoc'h da c'hellout o savetei!

Kadiou a ziskolpe bara a c'henaouadou. Eur c'hovad

leaz a evas ivez, e benn ouz ar zailh... Setu hen prest da staga. E skouarn a zo war evez, nemet e sonj en eun dra: penôs ez aio ermeaz hep bezan digemeret fall.

Disklêria a ra e zonj d'ar vatez:

— Ah! emezi, komzet hon deus eus ze breman souden, a-raok m'oun deut da c'horo. Setu aman... C'houi deuiou ganin hag a zougo ar zailhad leaz, evel pa vefec'h ar pôtr harnez nevez savet eus e wele... Setu aman eur porpant evidoc'h.

Kadiou a zonje: Mar n'eus hini eus ar re-ze oc'h anaout ac'hanon-mé!...

Hogen, ret e oa riskla an taol. Kuzat a reas e bistolenn en e vruched ha gwiska ar porpant, en em gavas braoik awalc'h diouz e vent. Ar vatez a zigoras an nor hag a c'halvas warnan:

— Arsa, lankon bras! Ne zougi ket d'in va zailhad leaz?... Daout hag abaoe dec'h da noz na teus ket bet amzer awalc'h da ziroc'hal!

Kadiou a deuas war he lerc'h, tenval e benn, pikou warnan. Ar zoudarded tosta a reas eur zell hag an hini a oa mestr warno, 'n e zav war dreujou an ti, a bôzas pounner e lagad war Gadiou hag a lavaras disfizius:

— N'am ket gwelet heman c'hoaz!

— Oh! heman, eme ar vatez, meo dec'h, a oa chomet da gousket du, ze e solier ar foenn ha n'eus ket gouveet e oac'h c'houi aman! Heman eo ar pôtr harnez!... N'eo ket gwir, Mark an Olier? Komz 'ta, bleup! Lavar da hano d'an ôtrou, ha laoska aze da zailhad leaz! N'out ket dihun c'hoaz!

An ofiser a reas eur mouse'hoarz hag a droas e benn. Ar zoudarded a c'hoarze o welet ober an tian gant Mark an Olier.

Heman oa paouezet da grena. Mont a reas en ti hag azeza ouz an daol. Ar vatez a lakas dirakan eur pikol skudellad soubenn dom. 'N eur gemer eul loa el listrier, Kadiou a daolas eur zell 'trezek traoù an ti. E galon a lamme en e greiz hag eur bedenn, hep gouzout d'ezan, a zave war e vuzellou... Amzer a lakas da zibri. E keit-ze, ar vatez a yee hag a deue dre an ti; ar wreg a luskelle eur bugel en e gavel; an ozac'h a oa gant e bred ivez. Pa voe echu d'ezan, e troas warzu ar pôtr harnez.

— Aze, emezan, ez eus sternaj er c'harti hag o deus ezomm da veza grêt eun tamm kempenn d'ezo. Aman, e traon an ti, ez eus re all...

— Mat eo! eme ar pôtr harnez; — hag e talc'has gorkrek da gas e loa d'e c'henou. E wad a verve, koulskoude, gant kement a zonjou evel a dremene dre e spered! Da hep kammed a ree, setu ma seblante d'ezan, breman, ez ee dounoc'h-doun e gouzoug ar bleiz... Petra raio, hen eunan, dirak kemend all a zoudarded armet hag o tenna? Mar ne vez ket bolonte Doue lakaat eur banne sklêri-

jenn da bara war e hent, gwaz a ze, rak ne wel ken berad. Aman en doa c'hoant d'arruout ha breman, p'eo arru, e lavar outan e-unan: Na sod e oan!

Evelse, pep den a vez, dre-varead, leun a nerz-kalon ha dinerz. Sonjal a ree Kadiou: « Daoust hag ar c'hi a vo dizroet? Daoust ha skei a refont evel m'am eus merket d'ezo? Ha penôs en em gemerin me goude? »

Debret e lein gantan, Kadiou a ya da draon an ti da gerc'hat ar sternañ en deus da gempenn. Arabad rei da anaout d'ar zoudarded ec'h anav an dud a zo eno!

(Da heuilh).

Ar Goukou

E F. H. B. miz mae am eus lennet gant plijadur kanaouenn ar goukou, savet gant P. Brelivet, eus Pluguenn. En hevelep amzer, e kouezas dindan va daoulagad eur ganaouenn latin, savet er zeisvet kanved, breman ez eus 1300 vloaz, e Bro-C'hall pe e Breiz-Veur, ha kaer meurbet. Setu hi aman, troet e brezoneg. Diviz etre ar goanv hag an nevez amzer diwarbenn ar goukou.

An nevez-amzer

Deus ta, koukou, labous karet. An holl o deus plijadur, pa ganez war an doenn gant da veg skedus.

Ar goanv

Ra jomo hep dont, ar goukou. Ra jomo da gousket en he zoullou-kuz, rak ato ganti e tigas naonegez.

An nevez-amzer

Deus, koukou, ha digas ganez bronsennou nevez d'ar gwez. Deus gant da vignon an heol, ha kas pell ar yenenn. An heol a gar ar goukou a gresk e amzer ar sklerijenn.

Ar goanv

Ra jomo hep dont, ar goukou! Rak ganti e teu al labourou hag ar brezelioù. Ehan ebet mui, keflusk e pep lec'h, war ar mor ha war an douar.

An nevez-amzer

Perak, goanv lezirek, ober rebec'hou d'ar goukou? Kousket eo en he zoullou-kuz, skuiz gand ar festou hag ar plijadurezioù.

Ar goanv

Me ive am eus danvez, festou laouen, me ro ehan d'an dud ha tan en oaled d'en em domma. Ar goukou ne anavez ket kement-ze, hag he deus da c'houzanv.

An nevez-amzer

En he beg ar goukou a zigas ganti ar bleunioù, ar mel; sevel a ra tiez nevez, nijal a ra dreist an dour sioul, dozvi a ra viou, laouenat a ra ar parkeier.

Ar goanv

Ar pez a gavez laouen a ra poan d'in-me. Me a gar kounta arc'hant en armelioù, ober leinou bras hep tamm labour d'am skuiza.

An nevez-amzer

Goanv lezirek, ato c'hoant kousket d'it, piou a zastum d'it plavidigez, tenzorioù? piou, nemed an nevez-amzer hag an hanv, ato o labourat evidot?

Ar goanv

Gwir a lavarez, hag evel ma labourit kalz evidon, c'hwiz zo va sklavourien. Me zo ho mestr, hag evel just, d'in-me eo dleet ar frouez eus ho labour.

An nevez-amzer

Nann, n'out ket hor mestr, met eur paourkez, leun a lorc'h. Morse ne c'helli da-unan dastum peadra da veva. Ar goukou, o toñt, eo a bourchas d'it ar pez e peus ezomm.

Ar veserien, en eur vouez

Awalc'h, goanv tenval, foraner, dispigner. Ra zeuio ar goukou, mignonez ar veserien! Ra vo gwelet war hon uhelennou ar bleunioù laouen! Ra zavo peuri d'hol loened, ra vo koant ar parkeier, ra zeuio delioù er gwez da rey disheol d'hon izilli skuizet! Ra vo gwelet ar girvi, stegn o bronnou, o kinnig o laez d'ar re o goro! Ra vo klevet al laboused o veuli an heol gand o c'han dudius! Deus buan, koukou, mignonez ker, gedet gand an holl. An holl draou o deus mall d'az kwelet: ar mor, an douar, an nenv. Salud d'it, labous karet, salud d'it, breman hag ato!

J. U.

Kerent kristen

D'ho pôtrede yaouank aet da zoudarded, en deizioù tremen, lakit kas FEIZ ha BREIZ: eun dudi e vo evito e lenn keit ha ma vezint pell diouz ar gêr. Evit ma tiguezo ganto, hep miz, epad ar bloaz, kasit 10 lur d'an A. Geor-gelin; 4, rue du Château, Brest. — C/C 44-40 Rennes.

Gant eur gartenn ruz-wenn a gavoc'h, e kement bureopost a zo, ne gousto nemet pemp gwenneg deoc'h kas an arc'hant-se; met, lakit an adres fraes, avat, gand a reoc'h.

Penn=oc'h=penn

N'o doa ket en em welet abaoe ar votadeg diweza, ar daou gensort gwechall. Daou di e oant, koulskoude, hag a en em zaremprede, bep tro pa c'hellent, tud vras ha bugale. Pa veze staget ar marc'h ouz ar wetur, er zul ar beure, e ti Per an Noan, ês e veze gouzout eo da vont da di Sulio Penn-ar-Stank. Sulio a oa o chom en eur penn eus ar barrez ha Per er penn-all; teir léo bennak a oa etre tiez an daou vignon: teir leo da vont, teir leo da zont, ret e veze lakaat an devez... Abadennou plijadur, nag a hini a oa bet, koulz e ti unan evel e ti eun all, hag o doa dalc'het sonj anezo ar re vihan, ma n'o doa ket paouezet da c'houlenn, kaer a oa berza anezo: « Ha pegoulz eta ez aimp da di Ber an Noan? — Ha pegoulz eta ez aimp da Benn-ar-Stank?... Ma o dije lennet e kalon o zadou, o dije gwelet skrivet enno ar respont-man: Gwech ebet ken!

Nann, gwech ebet ken!! Lavaret o devoa ze, pep hini diouz e du, gant ar votadeg diweza, an daou ozac'h bras, pep hini anezo perc'hen a zaou-ugent pe hanter-kant devez arat douar. Ar paour a rank a-wechou en em zislaret ha plega, diouz ma c'hoarvez gantan; ar pinvidik en deus e vadou da bara ar bec'h diwarnan hag en em zalc'h reut a-drenv d'ezo, 'vel a-drenv eur voger grenv...

Per ha Sulio a oa aet an eil eneb d'egile war diou listenn dishenvel: Per oa *gwenn*, ha Sulio a oa aet *ruz*. Ne oa ket bet dalc'had *ruz*; met avel ar politik en doa c'houezet ken krenv war ar barrez ken ar pennou ha ne oa ket a bouez hag a boell a-walc'h enno a oa bet troet holl gantan. Hini Sulio Penn-ar-Stank a droas eus ar regenta. Setu perak: eun tamm dant en devoa bet a-viskoaz ouz an hini a oa e penn ar barrez; heman a glaskas pemp pe c'houec'h, da zont war e listenn, a-raok mont da gaout Sulio; — Per an Noan a oa unan anezo; — setu ne voe ket an aotrou mear arru mat e Penn-ar-Stank... Pa deuas, avat, an aotrou mestr-skol d'ober e dro, en deiz warlerc'h, zoken, ha gantan birou a-leiz da skei e kalon Sulio, birou hep trempet ar beg anezo e peg laokus ar gwarizi, ne voe ket grêt a zigemer fall d'ezan; ne voe ket pedet da zistrei, met Sulio a asantas mont da gemer eur banne mik, er zul warlerc'h, da di ar mestr-skol.

Eno, neuze, e voe tremenet, dre c'henou ar paour keaz, eul lost leue lardet mat, — ar seurt-se! — flour ha melus, unan eus an dibab!... An itron mestr-skol, zoken, hag a oa eun tamm lennerez planedennou, a ziskouezas da Sulio, ken sklêr hag an heol, e oa ar c'hartennou a-du gantan penn-da-benn hag en doa dirazan kargou hag enoriou, forz pegement, ouz hen gortoz; n'en doa nemet en em la-

kaat war an hent d'o zizout ha 'n em lezel da vont goude... An holl draou-ze a voe grêt ha lavaret evel dre farserez, rak Sulio n'eo ket eur genaoueg bennak e oa; nemet an hevelep lasou e vez paket ganto ar genaouerien hag ar re all, gant ma vezint stignet a-zoare.

N'ho peus ket ezomm da c'houlenn ma voe troc'het an darempredou etre Penn ar Vali (hano ti Ber an Noan), ha Penn-ar-Stank!...

Sonj ho peus, pa n'ez eus c'hoaz nemet eur bloaz abaoe, pegement a reuz, a safar, a jolori, a voe diwarbenn ar votadeg... Sulio a bedas, eur wech, ouspenn kant a dud da vont di da goania, an holl dud en oad da voti. Per a reas kemend all, tri deiz warlerc'h; Sulio en doa lazet eul leue; Per a lazaz daou... Al leueou-ze, hag ivez ar joskennoù a voe debret da heul, a uhelaas etrezo moger ar gasoni; seul-vui a zroug etrezo ma teuent da zispign muioc'h an eil eneb d'egile. Bep sul, setu adarre ugent lur, dek skoed, hanter-kant lur aet e skouarn ar c'had, debret en ostaliriou; ha piou kiriek da ze, eme Sulio? — Per an Noan! — ha piou kiriek da ze, eme Per an Noan? Sulio Penn-ar-Stank. Ar gounnar a vagent a greskas kement, a zeiz da zeiz, ma o dije karet bezan, n'eo ket pep hini anezo o chom en eur penn eus ar barrez, met pep hini en eur penn eus ar bed... Elec'h ar garantez gwechall e oa savet eun drouk-rans, dreist-holl e kalon Sulio, ma ho piije lavaret eul loen gouez en eur gaoued, o c'hedal an tu da vont ermêz evit freuza ha taga pep tra.

Gant anken e c'hortozed deiz ar votadeg. Donet a reas, an devez-ze, da gloza an abadenn hudurnez bet araok. Sulio a voe koll; hogen, Per an Noan a c'hounezaz. Mat! breman p'eo achu ar c'hoari, ar peoc'h a deuo war e giz, hep mar ebet; gwaz evit an hini en deus kollet; ret vobremant d'ar gounnar terri h. d'an enebourien en em boket goude en em dourtal. Per an Noan a reas eur gammed war an tu-ze. Ah! paour keas! Pebez distro en doe! E gamarad koz, pell diouz kemer e zorn, a droas krak e gein en eur leuskel, eur: A bas les chouans! hag a reas da Ber ober eur souz a-drenv.

Bunum ar politik a oa hepred e gwazied Sulio. Hogen, ne dec'has ket; ne reas nemet kreski. Dont a reas ha ne rae kammed ebet ken, nemet dre politik; 'n em deurel a reas d'eva ha da baea da eva, abalamour da zastum ha da viret mignoned; nemet kaoz ar politik ne veze ken en e c'henou; pep hini a oa barnet gantan diouz al liou a zouge... Eur chenchamant ken bras a oa deut ennan ma veze kredet e oa eun all en e lec'h. Den an oferenn ne oa ket bet kalz biskoaz; ankounac'haat a reas krenn hent an iliz ha lakaat ar zul a-wechou da astenn ar pemdeiz. Henvel ouz ar vran ha n'he deus nemet eur vouez, ne ouie ken nemet ar ger: *A bas les chouans!* Pa veze klevet ar goagadenn-ze, pe er parkou pe en henchoù, an holl a

lavare: Eman Sulio, war vale! Hervez darn, leuskel ar youc'hadenn-ze a rae d'ezan memes vad evel ma ra d'eun tréin leuskel ézenn domm; ar pez a hârz ouz ar gôter da darza.

Eun deiz, da vihana, pegwir e lavarer n'ez eus nemet ar menezou ha n'en em gavont ket, Per ha Sulio a zigouezas an eil gant egile, kaer o doa tremen heb en em glask. En eur wenojenn voan e oa, ret da unan trei diwar egile. Sulio a chomas reut en e zav:

— Ma ne droez ket diwar va hent, me a droio diwar da hini, eme Ber.

— Ma karez! eme egile; rak me ne grenani ket dirak chouanted!

Per an Noan a oa dija troet e gein; dizrei a reas war e giz, eun tamm imor ennan ivez.

— Arsa, Sulio, emezan, bet omp mignoned gwechall; mar n'eo ket ankounac'haet krenn ganit an amzer-ze ma oa peoc'h etrezomp hon daou ha peoc'h er barrez, an amzer ma oa brao beva, gra eun tammik distro war ze, d'eomp da c'hellout kaozeal, rak war dachenn an amzer man, gwelet a ran ne gomzimp ket; dizrei d'an hini goz a rankomp evit-ze.

Sulio Penn-ar-Stank a droas e benn en eur c'hrozmolât etre e zent.

— Arsa, eme Ber, lavar d'in, da vihana, pe breman pe gwechall, pe breman pe araok ar votadeg, e oa ar c'houlz wella da veva?

Grik ebet digant Sulio.

— Me a oar mat e sonjez eo araok ar votadeg... Ac'hanfa, lavar d'in 'ta a-bers piou eo deut ar chenchamant, a-bers piou eo deut an dizurz er barrez ha laket enebiez etre an dud en em gare hag en em zikoure gwechall?

Sulio, pleget e benn, a griz e dal hag a c'hrozmol hep respont.

— Me, eme Ber an Noan, a oa a-raok ar pez ma 'z oun brema, ha kement hini en deus votet ganeomp a oa, a-raok ar votadeg, ar pez ma 'z eo brema. Ar pez a zo digouezet a-nevez n'eo ket eta eus hor perz eo, met eus perz ar re a oa eneb d'eomp. Ar re-ze n'hellez ket lavaret n'o deus ket chenchet. Te da unan a zo eur skouer anezo!...

... Me oar a-walc'h n'ez peus netra da respont, nemet ar pez az peus ar vrud da youc'hal, dre aze, koulz mezo evel divesv, hag am bevez mez evidout, pa glevan...

Tevel a rez, rak gouzout a rez out tec'het diwar an dachenn elec'h ma kaozeer e giz tud, e giz tud badezet!

Kenavo; truez am eus ouzit! Gras d'it adkaout ar gomz, komz eun den, komz eur c'hristen, komz eur Breizad!

BREIZADIG.

Lazerez, Laeronsi, Follentez.

Eun dervez e oan bet, du-ze, e kreteiz ar Frans, o kas kezeg lart am oa gwerzet da eur marc'hadour; en eur zistrei d'ar gêr, o veza ma oa kalzig arc'hant ganen, em oa aoun da veza laeret; setu eta, e lec'h chom da gousket er c'heriou bras, e klasken kentoc'h ar bourkou bihana hag er bourkou bihana an ostaleriou bihana.

Setu eta ma en em gavis da gousket, eun dervez, en eur bourk ha n'eo ket red e henvel, ha me ober va disken en eun tammik ostaleri vihan. Tud an ti a gaven doare vat d'ezo; koania em oa graet ouz an hevelep taol hag ar vistri: an ozac'h, ar wreg hag eur mab d'ezo; marvailhou a voe epad koan n'eus fors pegement, nemet he devoa ar wreg eun tamm enkreiz gand eur mab all d'ezi n'edo ket er gêr; meur a wech epad koan e lavaras d'he mab: « Asa, da vreur, avat, n'eman ket abred o tont d'ar gêr! » O veza ma kaven anezo tud a-zoare, e oan en em laket da gonta va nec'h d'ezo; lavaret a ris d'ezo e oa kalz arc'hant ganen hag em oa kalz aoun rag al laer; setu perag e c'houlennis eul lec'h sur evit tremen an noz. An ozac'h a lavaras d'in: « Mat, pa 'z eo gwir va mab n'eo ket deut d'ar gêr, a-benn breman, ne deui ket hirio, sur a-walc'h; chomet e rank beza da loja e ti e gamarad, rak-se ez eoc'h da gousket en e gampr, mar kirit; eno e vezoc'h sur; ar gampr n'ema ket en tu diouz an hent; war al liorz eo e sko; eno e c'helloc'h beza dienkreiz.

Setu eta, pa voe debret koan, an ozac'h hag ar mab a deuas da gas ac'hanoun da gousket; pa voent aet er mêz eus ar gampr e lakis va arc'hant dindan ar pennwele. Goudeze e liviris va fater hag en em fourris etre al linsierou; edon o vont d'en em rei da gousket pa gavas d'in klevet tud o komz er mêz; sklêr oa al loar ha setu me da zellet er prenestr; petra wellis el liorz? daou pe dri c'hwaz hag eun all a oa, en eur skeul, ouz ar voger, dirak ar prenestr.

« Va Doue, va Doue, eme-ve, eman al laer warnon, sur a-walc'h; darbet e oa bet d'in youc'hal, met dioc'htu em oa sonjet e oa gwelloc'h d'in klask va arc'hant ha mont er mêz; met d'an ampoent edo egile er prenestr hag en eur derri eur werenn e tigoras anezan hag e teuas er gampr: « Asa! a zonzjen, evid en taol-

man, eo graet ganen, sur a-walc'h; kement-se e teuas ar zonzj d'in d'en em fourra dindan ar gwele ! »

Met va den n'en doa nemeur a zoare eus a eul laer; mezo oa avat ha diouz e welet oa anat ec'h anavez mat ar gampr, rak kerkent ha m'oa deuet enni e tennas e zilhad hag ec'h en em fourras er gwele. M'hen assur deoc'h p'oa nevez aet dindan ar gwele n'oa ket re loréhus, met, pa ouien oa aet egile ebarz, oa laoskaet ar gwisou warnoun; breman, a zonzjen, ne 'm eus ken da ober nemet chom sioul aman ken a vo kousket h'eman; n'oa ket bet pell hag e kleven anezan o roc'h; breman, vat, eme ve, eo da d'in mont eus va glud da glask eur gwele all; edon o vont d'en em rinkl eus a zindan va gwele pa glevis an nor o tigeri — : Allas! avat, eme-ve, petra 'zo a-nevez aman 'ta c'hoaz? D'an ampoent e klevis mestr an ostaleri o lavaret d'e vab — : Chom aze gand ar goulou, en aoun d'e zihuna, mar deuez re dost d'e zaoulagad gand ar skleri-jenn. — M'hen assur d'eoc'h, n'em oa ket kalz a c'hoant c'hoarzin ha n'ouzoun ket penaos ne glevet ket ac'hanoun o tenna va halan ker berr 'oa warnoun.

An ozac'h a dostaas goustadik beteg ar gwele hag a blantas e gountell e kalon an hini a oa ebarz: « Breman, a lavaras d'e vab, e c'hellez tostaat; kemer an arc'hant a zo dindan e benni; me 'm oa gwelet anezan o lakaat anezo aze a-raok m'oa aet da gousket ha breman deomp buan da ober eun toull er marchosi da lakaat e gorf. »

Me 'm oa graet va akt a gontrision rak konta a raen e oa echu ganen; ma ne vije ket bet muioc'h a drouz ganto d'ar fin eget ne oa er penn kenta o divije bet klevet va c'halon o lammat em c'hreiz, sur a-walc'h; met pa oant aet kuit e oan deuet adarre ennoun va-unan; goude beza trugarekaet Doue da veza astennet d'in va buhez, ha me er menez, dre ar prenestr m'oa deuet egile ebarz; poent oa d'in; santout a raen beradou gwad o koeza warnoun; p'oa aet ermenez ez is, war eun, da glask ar c'homiser; heman, war va lavar, a deuas raktal ganen gant daou zen all beteg an ostaleri; mont a reas ebarz ha me a jomas e kichen an nor gand an daou all; mestr an ti n'oa ket re laouen o welet dirrenka anezan e kreiz an noz, met ar c'homiser a lavaras d'ezan: « En noz-man ez eus bet unan o kousket en ho ti hag a zo tamallet da veza graet eun torfed, ha gouest e vefec'h da anaout anezan ma vefe diskouezet d'eoc'h ? »

« Oh! ya, avat », a lavaras hen, dioc'htu. Ar c'homiser a lavaras d'an daou c'hwaz a oa er menez: « Digasit aman ho ten! » An ozac'h, pa 'm gwelas, a jomas mantret; kaout a rae d'ezan edo e zaoulagad o trelli pe

e oa advevet an hini en doa lazec'h: « Henez, an den-ze, eme ar c'homiser, ouz va diskouez, a zo bet deuet dec'h da noz da c'houlenn loja d'ho ti; ne ra netra d'eoc'h gwelet anezan dirazoc'h ? »

— « Nann, avat », a lavaras hen.

— Mat, a lavaras ar c'homiser, deuit neuze da ziskouez d'eomp e pelec'h eo bet o kousket. »

— « Ya! ya! deuit », a lavaras hen, ha setu ni, hell war e lerec'h d'ar gampr; met pa oamp aet enni e voemp souezet; inseriou fresk a oa war ar gwele; pep tra a oa renket a-zoare; n'oa ket anat e vije bet lazec'h eun den er gampr-se, eun eur kentoc'h: kuzet mat 'oa ar pec'hed: « Allas! va den, a lavaras neuze ar c'homiser, 'm eus aoun n'eman ket mat a-walc'h ho penn! »

— « Jezuz! Gwerc'hez Vari, daoust hag oc'h hunvreal e vefen bet, a liviris; nann, n'eo ket hunvreal eo am eus graet, rak ar beradou gwad a welet war va dilhad a verk eun dra bennak. Me a gav d'in, Aotrou komiser, e vefe mat d'eoc'h en em asuri eus an den-ze ha klask piz e kement korn a zo en ti-man! » Ne ouesjemp ano ken a voe gwelet an ozac'h o redet d'ar marchosi; eno e kemeras eur bal hag e lavaras: « Me a skoio war gement hini a glasko kregi ennoun! » Neuze e voe gwelet o tisvernina an tamm kolo a oa eno ha goudeze e stagas da doulla an douar en eun tachad hag en doa doare da veza nevez loc'het c'hoaz; prestik e voe gwelet korf eun den maro o tispaka gantan; kerkent ec'h en em daolas warnan en eur lezel eur youc'hadenn: « Va mab! va mab! » Ya, e vab eo en doa lazec'h; e vab eo a oa dizroet divezat en noz, mezo, ha da viret ne vije gwelet gand e dud e oa deuet dre ar prenestr en ti; hag ar mab-se en doa lazec'h, hep gouzout d'ezan, ha douaret en e graou kezeg, hep kemeret ar boan da zerra d'ezan e zaoulagad; lazec'h evit kaout va arc'hant; met, evel a wellit, bleud an diaoul a ya da vrenn; an anevaled a zebr eus ar brenn-ze a vez treut hag an dud a zebr kig an anevaled-ze a varv; me a voe restaolet d'in va arc'hant hag a zistroas d'ar gêr; an tad hag ar mab eus an ostaleri, war em eus klevet abaoe, a zo aet d'ar galeou da echui o buhez hag ar wreg a zo marvet en eun ospital: follez.

Difenn a ra Doue laza,
D'ezan eo buhez an nesa;
Da vadou zo d'it, met diouall
Da berc'henna traou ar re all!

Paul Quéguiner,
Euz Gwitevede, lazec'h er brezel.



I. — RESPONCHOU DIVINADENNOU MIZ MAE

I. — Te da unan. II. — Adam. III. — An diou-skouarn hag an⁴teod. IV. — Ar chadenn eured. V. — An oad.

II. — DIVINADENNOU MIZ MEZEVEN

I. — Me ne d'oun na den, na loen
Ha ya c'halon a zo em fenn.
20 p. ar r. Digaset gant Bugale Sant Joseph, Lille.

II. — Petra ne welomp ket
hag a bouez warnomp bepred.
20 p. ar r. Digaset gant Louis Pichon, Beliez, Treflez.

III. — P'hini eo 'r gwella keginer, war ar mêz kerkoulz hag e ker?
20 p. ar r. Digaset gant T. J., soudard e Gwengamp.

IV. † Me, eme ar c'henta, eus al leue eo ar penn,
† † † Ha me, eme an eil, a vez alies war da benn.
† † † † Ni zo loened bihan, gand an dud kaseet
† † † Ha me, va bleo, da veza gwenn, a zo deuet
† Me, er fin, da lost ar c'had a zo laket.
20 p. ar r. Digaset gant J. P. (mestr-skol) e Pluguen.

V. — Youenn a lavar da Jopik an ti-all: « Me m'oa teir gwec'h hoc'h oad pa m'oa an oad ho peuz breman, ha pa pezo tizet an oad am euz me breman, hon devezo, etrezomp hon daou, 60 vloaz. » Pe ' oad o deuz an daou amezog?

Digaset gant: Clet Coz, Gleden, actuellement: marin radio-télégraphiste, station La Mitre, Toulon (Var).

Digas ar responchon hag an divinadennou nevez a gavfet a-benn ar 25 eus ar miz da : M. le Directeur du Feiz ha Breiz, à Plouguerneau (Finistère).

Tud yaouank,

paotred ha merc'hed, pleustrit, a-zevri, war genstri-vadegou ar *Bleun-Brug*, bet moulet war *Feiz ha Breiz* miz Genver, m'ho po prizioù da gaout e *Santez Anna Wened*, d'ar 16 a viz Gwengolo a zeu.

Feiz ha Breiz

HA KROAZ AR VRETONEZ

KELAOUENN VIZIEK GANT SKEUDENNOU

Relijion — Istor Breiz — Marvailhou — Gwerziou
ha Soniou — Buhez ar Vro

RÉDACTION

J.-M. PERROT, Plouguerneau (F^{ce}) | Y. LE MOAL, Coadout, p^r Guingamp

ADMINISTRATION
du FEIZ HA BREIZ :
FR. GEORGELIN,
Brest — 4, rue du Château — Brest
c/c 44-40 RENNES

ADMINISTRATION
du *Bleun-Brug* et de l'*Emgleo Sant Ilu*
Yv. DREZEN,
BREST — 4, rue du Château — BRES
c/c 6238 RENNES


ABONNEMENTS INDIVIDUELS
« FEIZ HA BREIZ » et « KORN-BOUD »
Bretagne 10 f. l'an
France 11 f. l'an
Etranger 12 f. l'an
Abonnements collectifs
Feiz ha Breiz (seul)
(à partir de 5 exempl.). 6 f. l'an

PUBLICITE
Toutes les insertions sont faites
à l'année
Une page entière 300 fr.
Une demi-page 175 fr.
Un quart de page 100 fr.

TAOLENN AR MIZ. — Goueliou ar XVI^{et} Bleun-Brug : Pèziou-c'hoari; Lettre d'un recteur à ses confrères; Grand concours de chorales; Konkour Breuriez ar Brezoneg. — Mikael an Nobletz, J. U. — Kerlo al Leal, G. AR PRAT. — Kerne, F. M. — Labouriou ar merc'hed wardro an ti, TINTIN ANNA. — Janedig er skol, MELEGAN. — Glaoda ar Prat, Y.-V. PERROT. — An Aotrou Abgrall, Y.-V. P. — Divinadennou.

SULIOU HA GOUELIOU MIZ GOUERE

- 4 a viz Gouere. — VI^{et} sul goude ar Pantekost.
Hizio e lider en ilizou ar vro-man gouel sant Per ha sant Paol.
- 11 a viz Gouere. — VII^{et} sul goude ar Pantekost.
- 18 a viz Gouere. — VIII^{et} sul goude ar Pantekost.
- 25 a viz Gouere. — IX^{et} sul goude ar Pantekost.
Hizio e kaner oferenn sant Jalm, abostol, ha gousperou kenta Santez Anna.
- 26 a viz Gouere. — Santez Anna, Mamm ar Werc'hez Vari ha patronez Breiz; gouel devosion lidet e Keranna.



GOUELIOU
ar
XVI^{vet} Bleun-Brug

Ar Pêziou-c'hoari

DILUN DA NOZ, da 8 eur 1/2.

1. Prezegenn war ar *Sontou brezonek* gant kanaouenou ha taolennou.
2. *Kleier Sant Patern*.
3. *Heritourien ar Boulom*, pezh-c'hoari a vo disklêriet gant *Paotred Sant Patern*.

DIMFURS DA NOZ, da 8 h. 1/2.

1. *Fosfatinn ar vatez fin*, pezh-c'hoari farsus en 1 arvest.
2. *Ar fri a c'hounit ar verc'h*, diviz farsus.
3. *Stag ar vuhez*, pezh-c'hoari kentelius en 3 arvest.

An tri bez diwezan a zo savet gant an O. Bayon, ar skri-vagner bras anavezet koulz e Bro-C'hall evel e Breiz.

DIMERC'HER DA NOZ, da 8 h. 1/2.

Pasion Goneri, kloareg ha soudard breton, pezh e c'houec'h arvest, e brezoneg hag e galleg, savet gant an O. Bayon, ha laket er penn anezan eur c'henskrid meulcius bras gant an Ao. Henry Bordeaux, eus Akademi Bro-C'hall.

Kanaouenou *Pasion Goneri* a vezo kanet gant Strollad kanerien Rekouvrans (Brest).

E doug an tri dervez, ar peziou a vo c'hoarriet e Gwened a vo disklêriet e Sal-vras ar Cinema.

AR YAOU E KERANNA

DIZIOU, da 8 eur. — Kenstrivadegoù ar Bleun-Brug. — Lenn ha displega, prezek ha kana.

Da 9 eur hanter. — Kanaouennoù eus an dibab, a vo kanet, epad eun eur, gant Kanerien ha kanerezed brudet Rekouvrans (Brest).

Da 10 eur 1/2. — Oferenn-bred lavaret gant an Ao. Guillevic, vikêl-vras. Prezegenn gant an Ao. Buleon, person an Iliz-veur.

Da 11 eur 1/2. — Pred bras.

Da 13 eur. — Gouel ar Vretoned maro er brezel. — Gouel an Tiegeziou breizad.

Da 14 eur. — Peziou-c'hoari e c'hoariva Nikolazig. — Hag e c'hoariva, ar C'hloerdi bihan.

Da 17 eur. — Kan evit kimiadi diouz Santez Anna. Salud ar Zakramant.



Gwened hag e vaouez


Lettre d'un Recteur à ses confrères pour leur communiquer un projet du « Bleu-Brug Vannetais » que Monseigneur Gouraud bénit et encourage.

Mon cher confrère,

Sans préambule, voici ce dont il s'agit :

Le « Bleu-Brug » qui a organisé l'an dernier un cortège historique à Guingamp pour rappeler l'entrée de la duchesse Anne en cette ville, a conçu le projet d'offrir cette année à Sainte Anne, notre douce Patronne et

notre vraie duchesse, un hommage qui ne lui a pas encore été rendu — du moins dans cette forme — en y amenant, en septembre prochain, de tous les cantons de la Bretagne le plus possible de jeunes mariés de l'année avec leur cortège d'honneur, et le plus possible de familles chrétiennes: pères et mères entourés de leurs enfants. Ce projet peut ne pas être un rêve: il est parfaitement réalisable.



Bur c'horn eus iliz-veur Gwened

En effet, tous nous savons que la plupart de nos jeunes mariés se font un devoir d'aller sans tarder prier devant l'image miraculeuse, et nous voyons cela avec joie. Il s'agit seulement, cette année, de faire en sorte qu'ils y viennent tous le même jour, et le plus possible avec leur parenté qui les accompagnait au jour de leur mariage.

On a déjà convoqué à Sainte-Anne, plusieurs fois, les mères chrétiennes, et aussi les hommes; on n'y a pas encore appelé la famille chrétienne complète, au moins pour participer à une fête officielle.

Le « Bleu-Brug », qui a mis à l'ordre de son Congrès l'étude de la famille bretonne, voudrait grouper à Sainte-Anne une foule de familles patriarcales, pour aider à les sanctifier et à les exalter.

C'est une idée qui ne manque ni d'originalité ni de grandeur, et je suis chargé de vous demander votre collaboration pour en assurer la réalisation.

Il est à souhaiter qu'on publie dans chaque paroisse l'annonce de cette fête, qu'on encourage le peuple fidèle à y participer: et si l'on fait pour ce nouveau pèlerinage un peu de la propagande qu'on fait pour Lourdes, il n'est pas douteux que Sainte-Anne verra en septembre une fête qui fera époque dans les annales du pèlerinage. Cette fête projetée par le « Bleu-Brug » aura



Unan eus doriou koz kêr Wened

un double caractère: celui de rendre un hommage national à celle que nous nous plaisons à appeler notre grande duchesse, sainte Anne, et celui de déployer devant les multitudes qu'attireront ces solennités les richesses de notre costume que tous nous désirons voir estimer et conserver.

Elle pourrait se passer à peu près ainsi :

Les pèlerins, à leur arrivée, feraient leurs dévotions particulières dans la matinée, et assisteraient à la messe du Congrès à 10 h. 1/2 ou 11 h., durant laquelle les chorales chanteraient les cantiques du mariage et des mères chrétiennes.

— Vers 1 h. Ces pèlerins se rendraient dans la grande cour du Petit Séminaire, où ils seraient groupés par région et par costume.

— Le cortège ainsi organisé irait par l'enclos au Monument des 250.000 Bretons, où un discours serait

prononcé, avec, avant et après, un chant en l'honneur des morts de la grande guerre.

— Sortant de l'enclos, le cortège contournerait la fontaine, entrait sur le terre-plein de la basilique et défilerait devant la statue de sainte Anne placée sur une estrade et entourée du clergé pendant que les chorales, accompagnées du grand orgue, chanteraient le cantique à sainte Anne.

— Le cortège prendrait la direction du théâtre Nicolazig, où il assisterait à la Passion de Goneri et de ses compagnons soldats de la grande guerre, drame en six actes et en vers de M. l'abbé J. Le Bayon.

Tel est, cher confrère, le projet conçu par le « Bleu-Brug » Vannetais, projet béni par Monseigneur, qui désire sa pleine réalisation.

S'il vous plaît, faites-lui bon accueil et aidez-en la réalisation. Envoyez dès maintenant votre adhésion au Secrétaire du « Bleu-Brug » Vannetais, qui est l'abbé Le Gal, vicaire à Quiberon (Morbihan) et en retour il vous tiendra au courant du développement et de la réalisation de ce projet grandiose qui ne peut avoir sa raison d'être qu'à l'ombre du sanctuaire vénéré de Sainte-Anne d'Auray.

Ce projet réalisé et exécuté, nous aurons contribué à faire aimer notre sainte Patronne — et à exalter notre chère petite Patrie — et nous aurons prouvé aux étrangers que nous pensons bien ne pas être les derniers des Bretons.

SAINTE-ANNE-D'AURAY

Grand Concours de chorales du 16 Septembre 1926

Dans le but de donner aux Concours de chants leur maximum de valeur artistique et de faciliter la tâche du jury, il sera sévèrement tenu la main à l'observation des règlements qui veulent que les concurrents isolés ou groupés (solistes ou chorales) fassent connaître pour le 1^{er} Septembre, dernier délai, la catégorie en laquelle ils veulent concourir. Les catégories sont les suivantes :

a) Pour les solistes, et dans l'ordre: soprano, contralto, ténor, baryton, basse.

Les morceaux de concours sont imposés et ne peuvent être autres que ceux des Recueils parus de Kanaouennou 1921-22-23-25. Ne peut concourir: qu'un soliste par voix dans chaque chorale.

b) Pour les chœurs :

Chœur à 3 voix mixtes;

Chœurs à 2 voix inégales;

Chœurs à 2 voix égales;

Chœurs à 4 voix mixtes.

Les chœurs présenteront, en outre, un morceau libre breton, mais sans sortir de la catégorie adoptée pour le morceau imposé.

Après l'audition des chœurs, les chanteurs populaires seront admis à se faire entendre, à la condition expresse qu'ils choisissent leurs morceaux dans le recueil intitulé: Kanaouennou Koulmig Arvor 1926. Pour ce, ils devront, pour le 1^{er} septembre, signaler au secrétaire du Comité de musique le texte des chants qu'ils désirèrent faire juger.

Pour chaque voix et chaque chœur, les engagements sont reçus par le Secrétaire de la Section de Musique, Mlle de Kermenguy, château de Kermenguy, Cléder (Finistère).

Les Kanaouennou ar Bleun-Brug 1921-22-23-25, les Soniou Feiz ha Breiz et les Kanaouennou Koulmig Arvor sont en vente:

Emgleo Sant-Ildut, 4, rue du Château, Brest.

Librairie Le Goaziou, Quimper (Finistère).

Librairie Prud'homme, Saint-Brieuc (Côtes-du-Nord).

Librairie Perlier, rue Saint-Yves, Guingamp (Côtes-du-Nord).

Librairie Lafolye, Vannes.

OBSERVATIONS DIVERSES

— Les chorales doivent obligatoirement connaître à plusieurs voix: Bro goz, Sao Breiz-Izel, des « Soniou Feiz ha Breiz », ainsi que les cantates qui seront exécutées au Monument des Morts au cours du grandiose défilé des familles bretonnes.

— La répartition des prix des concours de chant est faite par le jury formé du Comité de musique du Bleu-Brug.

— Les chœurs à 2 voix égales ou inégales sont particulièrement écrits pour les groupes ruraux.

— Le Comité de musique pourra attribuer 1 500 francs de prix aux chorales, 250 francs aux solistes et 250 francs aux chanteurs populaires (Kenstrivadeg Koulmig Arvor; digor d'an holl baotred ha merc'hed yaouank etre 14 hag 20 vloaz). Cette année, par suite du grand nombre de chorales susceptibles de prendre part au Concours, le Bleu-Brug ne peut s'engager à leur rien donner, en dehors de ces prix, comme frais de déplacement.

— Les concours de chant commenceront au théâtre Nikolazig, à 8 heures très précises et seront suivies de 9 h. 1/2 à 10 h. 1/2 d'une audition de chœurs et de chants bretons par la chorale de Saint-Sauveur de Brest.

Le Comité de Musique du Bleu-Brug.

Breuriez ar Brezoneg

I. — Konkour dre skrid evit 1926

DEVERIOU AR C'HONKOUR

I. DEVER KENTAN :

Perak eo dleet d'omp karet ha miret hon brezoneg ?
 Ar re a gavo teir digarez o devo 20 poent ;
 Ar re a gavo peder o devo 25 poent ;
 Hag ar re a gavo pemp o devo 30 poent.
7 pe 8 linenn d'an hirran.

II. EIL DEVER :

Kaout 5 krenn-lavar (proverbes) anavezet en ho parrez. Skriva anezo e brezoneg ha trei anezo e galleg.
 Evit pep krenn-lavar skrivet l'hep fazi ha troet mat : 5 poent.

III. TREDE DEVER :

Pelec'h ha pegoulz eo ganet ha marvet Sant Erwan ?
 En pesort parrezioù eus eskopti Landreger en deus tremenet epad e vuhez ?
 Pe da zeiz e vez gouel Sant Erwan ha pardon Landreger ?

4 linenn: 15 poent.

IV. PEVARE DEVER :

E pe vloaz ha pelec'h en em ziskouezas Santez Anna da Nikolazig ?
 Kaout tri lec'h eo enoret enno Santez Anna en Breiz-Izel.
 Pe da zeiz e vez gouel Santez Anna ?

5 linenn: 15 poent.

V. PEMPED DEVER :

DIOU DIVINADENN

1° Ped devez a lakaio eur vele'houedenn evit pignat e beg eur voger d'ez 15 metr uhelder ? Ar vele'houedenn a bign pemp metr en deiz hag a ziskenn pevar en noz.
 15 poent.

2° Gant an nao niverenn gentan, grit eun
 delenn henvel ouz an hini a zo aman, en eun
 hevelep doare ma kavoc'h ar gont 15 en eur
 gontan eus an eil penn d'egile.

- a) A-glei da zehou ;
- b) Eus an nec'h d'an traon ;
- c) a groaz.

15 poent.

VI. C'HOUEC'H VET DEVER (d'ober pe da lezel).

An neb her graio brao, evit ar peiz a zell an displegadur hag an doare-skrivan, a vo laketa er gevrenn gentan.

Danvez. — Pegen brao ha pegenn mat eo bevan war ar miz, e kichen bevan er c'hêriou.

Ar c'horf, ar spered, ar galon, an ene a zo gwell diouz 'n em gaout war ar miz eget er c'hêriou.

Ar c'horf; — yac'husoc'h eo d'ar skevent alan ar gwez, ar yeot, ar bleunioù ;

Ar spered; — deskamant a zo muioe'h e kêr, met sperejou eun, poellek, diazez, a zo muioe'h war ar miz ;

Ar galon; — da galon ar c'houer ar mêziou a gomz hag a gân war gant ton dishenvel, diouz kouz ar bla, diouz doare al labourioù, diouz an telennoù en em ziskouez d'e zaoulagad hag a sked bepred meurded ha gened Doue. E kêr, safar an dud a voue pep mouez all ;

An ene; — an natur a gelenn an den, a frealz anezan, a laka kompouez e skianchoù. Ar relijion a gord muioe'h gant buhez ar mêziou.

Grit diouz chom war ar miz hag en ho pro Vreiz da bevan ; suroc'h e vezoc'h da bevan evurus.

**

Breman, selaouit mat !

1) Evel warlene e vo dalc'het kont eus an doare-skrivan hag eus an doare-renkan (présentation) an deverioù.

2) **Evit kaout prizioù, eo red bezan en « Breuriez ar Brezoneg ».** Ar re n'o deus ket c'hoaz roet o hano a c'hall hen kas raktal d'an O. Cocaign, Institution Saint-Joseph Lannion, gant 5 timbr a 8 gweneg da heul, e diabarz o lizer, ma 'z int lennerien da **Feiz ha Breiz.**

3) Lakaat, fraes, e penn pep dever :

- a) An hano ; — b) Al lezhano (prénom) ; — c) Ar barrez ; — d) Ar gêriadenn ; — e) An oad ; — f) Ar skol emae enni, kristen pe laik.

(Ar re a zo ét ermez eus ar skol a c'hall ive kemer peurz er c'honkour, ma n'o deus ket c'hoaz 15 vla).

4) An holl labourioù a renko bezan en em gavet gann da zivezatan a-benn ar **15 a viz east.** Kas anezo d'in d'an adres-man : **Monsieur l'abbé COCAIGN, Institution Saint-Joseph, LANNION (Côtes-du-Nord).** Lakaat, en tu pe du, a-ziavéz d'al lizer : **Breuriez ar Brezoneg.**

II. — Konkour e Santez-Anna

vit ar re, paotr ha plac'h, o do bet ar prijou kentan e pep rann-vro.

1. **Kân** : « Bro goz ma zadou ».

2. **Lennadeg ha disklêriadur** : Eur pennad eus eul levr brezonek bennak.

3. **Istor** : Sant Erwan ; — An Dukez Anna.

Piou e oa Richemont ? — Pesort servij e rentas d'ar Frans ? (Pa ve komzet eus Jann d'Ark, eur Breton a zonzj raktal e Richemont).

Tostaat a ra, bugaligou, ar mare merket evit digas deveriou ar c'honkour. Resevet e vint betek ar 15 a viz eost. Goude, avat, e vezo achu a-grenn.

Ha breman, n'eo ket 'ta, bugaligou, e fell d'eoc'h anaout pesort digoll ho po evit al labour grêt ganeoc'h. Setu aman, berr ha berr ha sklêr mat. Digorit erfad ho taoulagad ha lennit.

Breiz a zo rannet en pemp rann-vro. Evit ar bloaz pep rann-vro a roio prijou d'he bugale, ha goude, gant goueliou ar **Bleun-Brug**, an daou vugel an desketan, da lâret, eo, ar pôtr hag ar plac'h a vo bet da gentan en pep rann-vro a vo kaset da Santez-Anna-Wened evit ober eno, gant ar vugale a vo bet ive da gentan er rannvroioù all eur c'honkour neve. Eno, ar pôtr hag ar plac'h a vo da gentan evit Breiz a-bez, o do neuze, adarre, prijou dispar.

a) Prijou roet gant Bleun-Brug pep rann-vro.

Evel m'ho peus gwelet, bugale, er bloaz-man eo kalz êsoc'h evit wardene. N'eus nemet an dever diwezan hag a c'hallfe lakaat unan bennag da jom a zav. Met evel ma zo lavaret d'eoc'h, ar re a garo ne raint ket an dever-ze hag e vo grêt diou gevrenn eus ar vugale.

1) Ar re o devo grêt an dever diwezan ;

2) Ar re n'o devo ket grêt anezan.

Kevrenn gentan. — Evel just, ar re-man o do prijou kaeroc'h. Muioc'h a boan o devo bet : dleef e vo d'ezo eta eun digoll brasoc'h !

Setu aman ar prizioù a vo roet d'ezo evit **200 lur** a zo anezo :

Priz kentan :	50 lur	} ha pep a levr a eur skoed (Buhez santez Jenovefa a Vraban).
Eil priz :	40 lur	
Trede priz :	30 lur	
Pevare priz :	20 lur	
Pempvet priz :	10 lur	

Eus ar 5^{te} d'an 10^{te} priz : eul levr a ugent real ;
Eus an 11^{te} d'an 20^{te} priz : eul levr c'houezek real ;
Eus an 21^{te} d'an 30^{te} priz : eul levr a eur skoed.

LENNIT PIZ

1) Ar re a raio an dever diwezan a dle ober ive an holl deverioù all.

2) Gwelloc'h e vefe ma rafent an dever diwezan **war eur bajenn distag**.

3) Ar **pôtr** hag ar **plac'h** a vo da gentan eo a yelo da Santez-Anna-Wened.

Neuze eta, ma vez an tri briz kentan da dri bôtr, na ielo nemet an hini kentan diouto da oueliou ar B.-B. ; ar plac'h a vo da gentan, diouz tu ar merc'hed a ielo ive. Eur pôtr hag eur plac'h a vo kaset, ha nann daou bôtr pe diou blac'h. — Vel just, kement bugal a garo mont a c'hello mont da Zantez-Anna, ar muian ar gwellan, nemet ne vo nemet an daou gentan eus pep rann-vro a c'hello kemer pers er c'henstrivadeg, e Santez-Anna, ha beaji war gont B.-B. o rann-vro.

Eil kevrenn. — Er gevrenn-man e vo ar re holl n'o dezo ket grêt an dever diwezan. Kement-man a zo grêt evit ma c'hallo, memez ar re yaouankan ac'hanoc'h, bugale, kaout eur priz.

160 lur a brijou a zo evidoc'h.

Priz kentan :	25 lur	} hag eul levr a eur skoed.
Eil priz :	20 lur	
Trede priz :	15 lur	
Pevare priz :	10 lur	
Pempvet priz :	5 lur	

Eus ar 6^{te} d'an 10^{te} priz : eul levr a c'houezek real.

Eus an 11^{te} d'an 20^{te} priz : eul levr a eur skoed.

Eus an 21^{te} d'an 30^{te} priz : eul levr a eiz real.

Breman, avat, eus ar gevrenn-man ne 'z aio hini ebet da Santez-Anna-Wened, da c'hellout kemer pers er genstrivadeg a vo eno.

b) Prijou roet gant goueliou ar Bleun-Brug d'ar pôtr ha d'ar plac'h a vo da gentan evit Breiz a-bez.

Ar pôtr hag ar plac'h eus ar gevrenn gentan o devo grêt ar gwellan deverioù a vo kaset eta gant Bleun-Brug o rann-vro, da c'houeliou ar **Bleun-Brug** en Santez-Anna-Wened, ar 16 a viz gwengolo. N'o devo, evel just, netra da baeat. Ar rann-vroioù all a gaso

ive pep a zaou vugel. Eun dek bennag a vo eta du-front. Eur c'honkour lennadeg ha kan a vo grêt eno etrezo. Goulennet e vo ive eun draig bennag diganto diwar-benn **ISTOR BREIZ : Sant Erwan; an dukez Anna; traou és bras.** Goulennet e vo diganto kantan « Bro goz ma zadou » gant Taldir. Ha neuze, ar **Bleun-Brug** a roiô pep a briz dispar d'ar pôtr ha d'ar plac'h a responte ar gwellan.

Roet e vo da hep hini anezo :

1° 100 lur.

2° Eul levr kaër.

Daoust hag ober goap eo kement-se, bugale??...

Mignon ar vugale.

Tadou ha mammou


it, d'ar Bleun-Brug,

da Geranna, d'ar 16 a viz gwengolo a zeu,

gant ho pugale hag ho tud koz,

gwisket holl en ho kaera, ha diskouezet eno, dirag ar bed, n'ema ket Breiz o vont da ziskenn en he bez, c'hoaz!

Santez Anna a vo kel laouen ouzoc'h ma teuo d'ho tiambroug war dreujou he iliz.



—Galvit ho ki 'ta buhen, va Doué!

—N'em eus ket a zony pe hano eo,

rag dec'h diveza em oa prenet anezan.

—Loys eo ar werenn ganeoc'h

—M'ho peus c'hoant kaout eur we-

ren neat, e rankit lakat dek gwenngmuoch



Chapel sant Mikael e Plouërnez (1)
gant Yv' Floc'h

Mikael an Nobletz

(1577-1652)

(Kendalc'h)

Mikael an Nobletz beleget

Peurc'hraet gantan e studi, desket bras war an thooloji, Mikael an Nobletz, a-raok distrei da Vreiz, a reas eur pelerinaj d'eur chapel d'ar Werc'hez e bro Bourdel. Da c'houde, e kreskas c'hoaz e binijennou. Epad c'houec'h miz e yunas, e chomas hep dougenn eur c'hrez, hag e tremenas e zerveziou o pedi hag o pleustri war ar velegraj.

E dud, laouen o welet anezan ken desket, e alie da c'houlenn buan beza beleget, rak soñjal a raent e rafe enor d'ezo, e vije kinniget d'ezan ar garg dleet d'e zeskadurez.

Met hen a responte d'e gerent: « Karg ar velleien a zo uheloc'h eget hini eur roue pe eun impalaer. N'eo ket a-walc'h kaout an oad dereat, ma n'oar ket santel a-walc'h. Risklus eo mont er garg-ze hep beza prepart mat. Ar zent a grene o reseo an Urziou sakr. »

Hag e c'houlenne digand e dad eur pennadig amzer c'hoaz.

Er c'houlis-ze, an aotrou Neuville, eskob Leon, a c'halvas da Gastell tud da zisput war ar skianchou sakr, hag a c'hoanteas gwelet ive Mikael o tont, rak klevet en doa ano eus e zeskadurez vras. Plijadur en devoe oc'h e welet hag oc'h e glevet, ha muioc'h c'hoaz eget e zeskadurez e prizas e izelded a galon, e zantelez. Diskleria a reas dirag an holl e rofe d'ezan eur garg uhel en e eskopti, kerkent ha ma vefe tro.

(1) Ar chapel-man a zo savet harp ouz an ti ma chomas Mikel an Nobletz ennan endra m'edo oc'h ober taolennou an Mision.

Mikael ne voe ket touellet; hag a ziredas buan d'ar gear da veva eur vuhez kuzet. Met e dad, laouen-holl, a reas d'ezan eur zoudanenn gaer meurbet, henvel ouz an hini a zouge an dud a Iliz a renk uhel. Mikael a gavas an tu d'en em zizober buan eus ar zoudanenn-ze, re vrag evitan, ha d'he rei d'eun beleg paour eus ar vro. — An tad, pa glevas, a yeas e kounnar, a dennas ar zoudanenn digand'ar beleg paour: « N'e ket d'eoc'h, met d'am mab, eo em eus graet ar zoudanenn-ze. He c'hasit d'ezan. »

Mikael ne fellas ket gantan he c'hemeret, hag a reas rebechou d'e dad, gant doujans, o veza m'en doa gwall-gaset eur beleg hag en em lakaet war var da veza eskum-munuet.

An tad a zavas keuz gantan hag a gasas ar zoudanenn d'ar beleg paour.

Evelato e tispilje d'ezan doare beva e vab. Pedi a reas anezan da c'houlenn eur garg uhel en eskopti, eur garg a oa vak... Ret eo d'it, emezan, kaout eur garg bennak evit beva, rak diganen-me n'e pezo ket kalz a beadra. N'out ket ar c'hosa, breudeur ha c'hoarezed e peus da ranna ganez; da lod ne vezo ket pounner. P'e gwir out deuet mat gand an aotrou 'n eskob, e pezo da c'houlenn. »

Met ar mab a respountas en doa aon o samma e zious-koaz gand eur garg re uhel. « Penaos, eme an tad, goude ar pezh am eus graet evidout, goude beza dispignet ous-penn daou vil skoed evit da skollia, evelse eo oun paet ganez? N'e fell ket d'it kemeret eur garg a rofe d'it peadra da veva hag a dolfe enor var da dud? »

Mikael a respountas e vije gwelloc'h gantan diwall al loened eget beza e penn eur manati pe eur barrez. « Mat, eme an tad, diwall a ri al loened evel ma c'houlennez. » Hag epad eur pennad Mikael a voe karget da ziwall ar chatal. Erfin e dad e lakeas er mez eus e di.

Mikael en em dennas e ti e vagerez. Houman a rañnas gantan an tamm bara he doa, ha Mikael, an doktor, a vevas eno evel an distera eus an dud. Tremen a rae e amzer o lenn ar Skritur Sakr, oc'h ober katekiz d'ar yugale, o c'houlenn aluzen evit peorien ar barrez. Da zul e veze gwellet etouez an dud dister e Iliz Plougerne. E dud o doa mez gantan. Ar re all o doa truez outo, ha meur a hini a lavare oa bet direzizet e benn gand ar studi, en doa labouret re ha kollet evelse e skiant vat.

Goude beza tremenet evelse eur c'houec'h miz bennak, e c'hoanteas mont da Bariz, da welet doktored skol vrudet ar Sorbon, gand ar fizians da gaout war e hent eun den fur ha santel gouest d'e alia ha da ziskouez d'ezan an hent a dlle kemeret.

E dad a roas d'ezan peadra da vont da Baris, gand ar fizians e c'houlennfe beza beleget e Paris hag en defe, da c'houde, eur garg e eskopti Leon.

Mikael a yeas da glevet doktored ar Sorbon, met desket en doa e Bourdel hag e Ajen kement a veze displeget er Sorbon, ha ne reaz nemet en em lakat da studia yez an Hebreed (ar Juzevien), evit gellout lenn ar Skritur Sakr er yez-ze.

Ar pezh a gavas a wella e Paris a voe eur sturier, an Tad Kotton, jesuist, kovsour ar roue, brudet dre e brezegennou hag e zantelez. Mikael a zigoras d'ezan e ne, a lavaras petra c'hoantae: labourat evit gloar Doue ha silvidigez an eneou o prezeg e Breiz, hep klask na karg uhel nag enoriou.

An Tad Kotton e alias da zalc'her mat d'ar c'hoant santel-ze ha da c'houlenn an urziou sakr hep dale pelloc'h.

Mikael a zentas, en em roas d'ar badenn, hag e voe beleget e Paris, d'an oad a dregont vloaz.


Dont a reas da Blougerne da lavaret e oferenn genta. Evit doare, edo ar c'hiz, en emzer-ze d'ober leinou bras, pa veze eun oferenn nevez. Pedet e veze ar gerent, ar vignoned, an amezeien, tri c'hant, pevar c'hant den a-wechou, hag e veze pep seurt c'hoariou goude lein.

Mikael, evit enebi ouz ar c'hiz fall-ze, a lavaras e oferenn dirag e gerent hepken, ha ne voe, da c'houde, na lein vras na c'hoariou.

Mikael oc'h ober pinijenn e Tremenac'h

Eur wech beleget, penos e tremeno e vuhez? N'e ket kargou uhel eo a glasko. Pell zo en deus lakeet en e benn poania gand e genvroiz da zeski d'ezo o c'hatekiz, d'o farea eus ar gizioù fall a zo skignet en o zouez, d'o zrei ouz Doue, evit ma kaso Breiz eleiz a eneou d'ar Baradoz. Met evit gounit an eneou, eo ret beza santel meurbet. Hor Zalver, a-raok en em lakat da brezeg an Aviel, a dremenas 40 dervez er gouelec'h, o yun, o pedi, oc'h ober pinijenn. Mikael a c'hoantae ive prepari e ene, hag ec'h en em dennas en eul lec'h gouez, e kichen ar mor bras, e Tremenac'h. Sevel a reas eun tammig lochenn goloet gant plouz, hag eno e dremenas tost da eur bloaz, o pedi hag oc'h ober pinijenn. Kousket a rae war an douar moaz, eur maen dindan e benn, dougen a rae eur gouriz reun ha tamm lienaj ebet. En em skourjeza a rae betek lakat ar gwad da redet. Ne zebre nemet eur wech benn-dez, hag eun tamm yod heiz hep laez nag amann nag holenn. Ar yod-ze a veze digaset d'ezan en eur skudell gand eur vaouez eus a gichen, ha servichet dre eun toull preneustr a oa war e lochenn. Ne eve nemet dour, ha c'hoaz eun nebeudig hepken. Ober a reas droug d'e stomog, ha betek fin e vuhez en devoe da c'houde droug stomog. « Met, emezan, ma 'm eus graet droug d'am stomog, d'am ene em eus graet vad. »

Ne gwitae e lochenn nemet evit mont da lavaret an oferenn dek munut vale ac'hano, da iliz Tremenac'h, iliz hag a zo bet, goloet gand an trez, er bloaz 1720; ne gomze gant den, nemet pa z'ae da govez. Pedi, prederia war gwirioneziou ar relijion, studia ar skiantchou sakr, setu petra rae e doug an deiz. Neuze ive eo e sonjas en doare d'en em gemeret evit kelenñ ar bobl dre skeudennou, taolennou, parabolennou.



Ty Mikael an Nobletz (1)
skeudennet gant Y. Floe'h

Eur pennadig a-raok m'oa fin d'e vloaz, e kwiteas Tre-menac'h, rak eur vaouez teodet fall en em lakeas da lavaret pep seurt traou diwar e benn ha da zevel an dud enep d'ezan.

Divezatoc'h e tiredo kalz pelerined da Dre-menac'h, d'al lec'h m'oa bet ennan Mikael oc'h ober pinijenn, ha kalz grasou a vo roet eno d'ezo.

Mikael en em laka da brezeg e Plougerne

Goude beza graet kement a binijenn, pedet kement an Aotrou Doue, Mikael, entanet e spered hag e galon, en em lakeas da brezeg an Aviel e pep lec'h, en iliz, war an hentchou. Mont a rae dre barrez Plougerne da glask an dud en tiez, er parkeier; pa veze foar, marc'had, ec'h en em lakeae war an hentchou e tremene dreizo an dud, hag e komze d'ezo eus Doue, ar relijion, silvidigez an ene.

(1) Ti savet war lec'h ha stumm an ti bihan ma tremenas Mikel an Nobletz eur bloaz ennan e Tre-menac'h.

Da zul e veze gwelet a-wechou er parrezioù tro war dro da Blougerne, o prezeg, oc'h ober katekiz d'ar re vras ha d'ar re vihan, o kovez an dud. Gourdroutz a rae kalet an dizursiou hag ar pec'hejou m'en em roe an dud d'ezo, hag e tiskoueze d'an holl hent ar Baradoz.

Met, evel m'eo bet lavaret, den ebet ne c'hell beza profed en e vro. Mikael a voe kemeret gand eur c'halz eus e genvroiz evid eun diskiant, eur beleg foll. Evelato ar beorien hag ar re glany sikouret ha frealzet gantan e glevet gant plijadur hag a zente ouz e gomzou.

E gerent o doa ato poan ha mez o welet penaos e veve o mab. Tud a renk ubel evel ma 'zoant, gwelet o mab o tiskenn ken izel-ze! Pebez rann-galon evito! Eur mab ken desket, en dije graet d'ezo, ma karfe, kement a enor, setu ma ra fae war madou hag enorioù ar bed!

Pa veze e Kerodern, goude beza lavaret e oferenn e chapel sant Glaoda, Mikael, distro d'e di, a gemere eun tamm bara du, e zraillhe en eur skudell, hag a dole warnan eur banne zoubenn, soubenn mevelien an ti, ha setu peseurt prejou dister eo a rae.

E dad, dallet gant ar gounnar, a voe meur a wech warnez skei warnan. Ar vamm a glaske difenn he mab; evelato n'oa ket evit kaout mat ar vuhez a rene. E vreudeur hag e c'hoarezed, pa gemere Mikael e zac'h evit mont d'ar parrezioù tosta, a lenve hag a lavare: « Siouaz! Ar barr en deus kemeret adarre hor breur. » Eur barrad klenved, eur barrad follentez, setu petra groge en o breur, war a gredent.

Albenn ar fin an tad ne c'hellas mui dalc'her war ar gounnar, rak ne glevet nemet pep seurt traou diwarbenn Mikael, hag e lakeas anezan er mez eus e di, en eur lavaret: « Re bell zo e c'houzanvan ac'hanout. Mervel a ran gand ar vez. Kuita va zi, ha kerz d'al lec'h ma kari. »

(Da gendalc'her).

J. U.

**BRETONED, mar karit ho Pro, evel ma livirit,
klaskit eta**


LENNERIEN,

KOMZERIEN,

PREZGERIEN,

KANERIEN,

da vont da Geranna d'ar 16 a viz Gwengolo a zeu da gemeret perz e kenstrivadegou ar Bleun-Brug.



KERLO AL LEAL

Brema 'z eus ouspen kant vloaz ez oa e Pouelven e bro Vreiz, eun den diwar ar maez, koz-koz, e ano Kerlo, les-hanvet an den leal. Morse, n'en doa graet droug da zen; morse n'oa aet diwar an hent mat.

Ha koulskoude, tra iskis ! Kerlo n'oa ket karet ; doujet e oa, kredi read e gomzou, e onestiz a oa meulet gant an holl, met n'oa ket karet.

Ar gwel anezan a lakae an holl da veza nec'het, aounik zoken; c'hoariou trouzus ar vugale, c'hoarzedennou skiltrus an dud yaouank, konchennou ar c'homerezed, a ehane a-grenn, 'dal m'e weled o tifourcha en eun tu bennak; n'anavezad mignoun ebed d'ezan, hag e veve e-unanik en e deull-ti didrous.

Tenval a spered dre veza e-unan, ha skwiz o veva deiziou bepred henvel an eil ouz egile, Kerlo, an den eun, en doe eur menoz :

« N'oar ket eürus e Plouelven, emezan. Marvat ez eus dre ar bed broiou sederoc'h ar vuhez enno. Mont a ran pelloc'h da glask an eürusted ne gavet ket dre ama. »

Ha Kerlo a werzas e di, e zouarou; ha neuze, leun e c'hodellou a beziou aour, ez eas da glask an eürusted.

Bale a reas e-pad pell amzer, treuzi a reas meur a wech ar mor divent, gwelad a reas keariou bras ha pinvidik, mont a reas dre vroioù dudius, dre goajou koz gant meur a gantved bloaveziou, el lec'h ma klevad kanaouennou dispar laboused dic'hiz; pignat a reas war gern menezioù stok o c'hernioù oc'h an oabl; disken a reas e traoñiennou doun ha didrous, a vev enno ar bastored; chomm a reas a-zav dirak al lennou glas, hogen ne gavas an eürusted e nep lec'h.

Kement e valeas, ar c'hez, ma tigouezas e penn ar bed. Hag eno Kerlo a welas eur gêr goant, an toennou grêt gant mein lugernus a skede dindan bannou an heol. Dont a reas eus ar gêr-ze kanaouennou dudius, c'hoarzedennou laouen, mouezioù tud yaouank o pedi. Tro-war-dro ez oa

mogeriou gwer kristal, gant eun nor vras; Kerlo a lennas warni :

« Ama ema bro an eürusted ;
« Dont a ri ennan ma vezas kavet din. »

« Alo ! eme Gerlo leun a levenez, setu me eta digouezet e penn va beach hir ! N'em eus ket klasket en aher. Emaon o vont da danva an eürusted ! »

Teir bazenn a oa etrezan hag an nor; an hini genta a oa en arc'hant, an eil en aour, hag an drede e diamant net.

Kerlo a yea da bignat pa zeuas eun nerz vuzudus da staga e dreid e-harz ar bazenn genta, hag e klevas eur vouez o lavaret d'ezan :

« Petra ec'h eus gret evit dont ama ? »

— « Anvet oun Kerlo al Leal, a respontas ar Breizad, eun tammig lorc'h ennan. Kement-se a ro da entent n'en deus den netra da rebech d'in. Ne gredan ket em befe morse grêt an disterra droug, na grêt gaou ouz den. »

— « Kaer eo kement-se, a dra-zur, eme ar vouez adarre, hogen n'eo ket a-walc'h en em viret dioc'h ar pez a zo fall, beva hervez ar reiz; traou all a zo e lezenn Doue; red eo c'hoaz ober ar vad, beza karantezus e-kenver an nesa. Hen ankounac'haet ec'h eus, Kerlo al Leal; dizro e-touez an dud, arabad e vezo d'it dizrei ken az po bet an hano a Kerlo ar Madoberer. An nor-ma neuze a zigoro evidout. »

Kerlo a blegas e benn, eun tammig mezek, hag a yeas ac'hano.

Dont a reas daou vloaz goude da skei war dor ar gêr eürus. En dro-ma e c'hellas pignat war ar bazenn genta, a oa en arc'hant, evel a ouezer; hogen, kaer en doe, ne c'hellas ket mont war an eil; ar vouez en doa klevet en dro genta a gomzas adarre.

— « Petra ec'h eus grêt, Kerlo, evit beza digemeret ama ? »

— « Deuet 'eus sonj d'in, eme Gerlo, eus eun den brokus, eun dleour d'ezan eus va madou; pa oan yaouank ha paour e prestas d'in arc'hant da brena douar ha d'o labourat dioc'htu; pa falvezas d'in paea va dle, e nac'has kemeret ar vad diwar e arc'hant. Aet oun d'e gaout; paour eo brema d'e dro hag em eus roet d'ezan an drederenn eus va danvez. »

— « Mat ec'h eus grêt, eme ar vouez; diskouezet ec'h eus ez out anaoudek; hogen plijadurus hag aes kenan eo ober vad d'ar re a zo bet mat en hor c'henver; renta ar vad evit ar vad n'eo ken nemet ar bazenn genta eus ar garantez. Kea, ha gra gwelloc'h c'hoaz. »

Ha Kerlo en hent. A benn daou vloaz e tizroas adarre. Er wech-ma ez aes war ar bazenn aour, hogen, galloud ebed da vont war ar bazenn uhela.

— Kerlo, eme ar vouez kuzet, petra ec'h eus grêt evit beza digemeret ama ? »

— « Aet oun da Vreiz-Izel, d'am c'hêr a Blouelven; galvet em eus d'am zi holl beorien ar barrez, hag em eus rannet etrezo an eil drederenn eus va danvez. »

— « Brav e kavan kement-se, eme ar vouez. Ober vad d'ar re n'o deus grêt na vad na droug d'eomp, setu aze eil pazenn ar garantez; n'eo ket avad an hini uhela; kea, ha gra gwelloc'h c'hoaz. »

Hag, evit an dervet gwech, Kerlo a zistroas e touez an dud. Evelse e oa deuet da veza gwenn, hogen evel han-nou sklerijenn a oa en-dro d'e benn, cun earidigez a vadelez a oa brema war e zremm, e lec'h an ear fougeüs en deveze kent peurvuia.

Hep ma vije harzet gant netra, Kerlo a bignas ar bazenn arc'hant, ar bazenn aour hag ar bazenn diamant, hag e skoas war dor al lec'h ma rene eun eürusted peur-badus. E galon, me lavar d'eoc'h, a lamme meurbet en e greiz.

An nor a c'hourzigoras, hag ar vouez a anavez e c'hou-lennas:

— « Petra ec'h eus gret, Kerlo, evit beza digemeret ama ? »

— « Eun enebour am oa, eme ar Breizad, eun den kalet ha kounnarus, a reas kals a zismegans d'in. Bet oun oc'h e welet, lavaret em eus d'ezan ec'h ankounac'haen, hag em eus lezet gantan an drederenn ziweza eus va danvez. »

— « Ober vad d'ar re o deus grêt droug d'eomp, setu aze uhela pazenn ar garantez. Deus ebarz, ha bez eürus, her gounezet ec'h eus. »

An nor a zigoras frank, Kerlo a yeas e-barz... Eno ema abaoue...

G. AR PRAT.



Evit bez Glaoda 'r Prat

Doue r'her pardon.

An A. Perrot, Rener Feiz ha Breiz..... 100 lur.
An A. Moal, Rener Arvorig..... 20 lur.

Ar re o defe c'hoant da rei o prof evit bez Glaoda a zo pedet da gas o arc'hant d'an A. Drezen, 4, rue du Château Brest. C/C 6238. Rennes.

KERNE

SANT GWENOLE (Kendalc'h)

Landevenneg - Gradlon - Ker-Iz

Ema distro Sant Gwenolle da Landevenneg. Gwenel' zo d'he heul. Labour digeri e zaoulagad en deus ar pôtrig bihan, rak ebarz ar manati pep itra zo mewe evitam, hag ar c'hienta ma tro e ideod en e veg (1) eo da c'houlema digant e Vestr doare eus an traou hag an dud a n'em gav e zaoulagad ganto. Gwenniolo her c'has neuze d'ober eun dro dre ar manati, hag en eur vont e tisplig d'ean kement le gouest e oad da zougen.

Ni, ive, marteze n'ouzomp ket hirroc'h eget Gwenel diwar-benn doareou menec'h Breiz d'ar mareou-ze. Heuliomp neuze an Abad hag an diskab yaouank. Sellomp piz ha islaouomp mat.

**

E kreiz an abati 'z eus eun Iñiz-koad, lochou en dro deñ evit ar venec'h, distag an eil diouz egile. Pellloc'h, eun ti peuz-vrazig evit ar pred: rak ouz memez töl e tebr an holl. E kichen ar gegin ha lojeiz an estren, an ostalleni. Ti ebed nemed ar manatiou ne ro digor d'ar vea-chourien hag ar venec'h d'ar mare-ze a veze aites en hend eus an eil manati d'egile, eus an eil bro d'eben.

Etre Breiz-Veur ha Breiz-Izel 'z eus ato aneo o vont hag o tont. Sant Gwenel e-unan a redo lepad pevar bloa war n'ugent holl vanatiou emezeier an Arvor, Iwerzon, Bro-C'hall ha Breiz-Veur.

Aldreny, ouz eun duchenmig, eun tammig war an uhel hag he fenn dreist ar re all, ema lochemm an Abad. Ac'han en eul töl lagad e wel petra a dremen e pevar c'horn ar manati. An Abad eo an Tad, ar Mestr. Hen a ra all lezenn. War e vaz penn-kamm eo merket e c'hall-loud. Pa gomz, an holl a ro peuc'h. Eün dra laret gan-tan ne vo morse distlavaret, ato e vo grêt.


Evel da Zoue e kreder d'ean. Manac'h ebed ne zeo dinazan nemet gourveet, hag arök ober e c'houlema, en do bet ötre digant. Dibabet eo ganit ar venec'h o-unan; a-wechou, lavat, pa well ar maro o tont, an abad a ro e vaz d'an hani a blij d'ean; mar ten deus kerent er manati, war unan aneo e koueo an dibab. An traou zo reizet aman egiz en tiegezoù breizad all dindan holl gal-loud an Tad.

(1) Beg; en eur c'horn eus Kerne genou n'e ket ana'vezet.

Al lochoù a ra kelec'h en dro d'eur porz-kreiz. Pa vo savet tro dro eur valli-tôet da valle, herman a dalvo da borz-diabarz ar Manati.

Al lochennoù o-unan zo klozet ha difennet gant eur c'hleun bris, eum fôz doum dirazan.

Erméz, en tu all d'ar c'hleun-ze, e kaver ar pourprachou all, ar marchosi, ar c'hraou, ar samailh, ar c'hardi, ar forn da grazza ed, ar veil, [ar vilin], ar govel, an tikalvez. Rag er manati e reer an holl vicheriou. Mevelten a zo, pôtréd yaouank war ar studi, bugale c'hoaz o ti-



Ar pez a jom eus iliz manati Landevenneg

blas; an holl a labour, ar venec'h er penn-kenta. An Taid Abad a leusk arôk (1) egiz eur mestr-mével eman gant e dud.

Pa vez eul lochenn, eum tamm-bi da zevell; an holl zo mansonerthen: eum niebeud peulliou bountet en douar, eur zôl war c'horre da harpa treid ar c'haledennoù a zougo an doen; eur zôl all d'ober beg an ti ha da staga ar skourrou savet dija. Toit an dra-ze gant soul pe gorz, istankit ar mogerioù gant mouted ha tonchaldou phouz hag ho peus dioustu diwarbouez kemer pasianted eun ti, eul lochenn. Ne vo outan na mên, na gwer. N'eus forz, ennan e kousko dous ar venec'h pa vint bet epad an de gant all labour, ar studi hag ar bedenn. Rak striz eman an traou ganito. O buhe zo kalet: Senti, beva paour, m'em viret gwerc'h ha glan, atô hag atô.

An hani zo gourd da zentfi, vo krennet diwar e voued.

(1) A leusk a-rôk, a zigor an hent, zo er penn a-rôk.

An hani a zonz kaout war e amô ar c'hoz-boutou zo en e dreid, ar zae-rust zo war e gem, ar c'houriz stein zo o verzeria e gorf, hennez a lar eur gaou. Paour-Job ep evel ar re all; rak iden mên deus metra.

Etrezo hag ar bed zo eur c'hleun bras. An abad a skrive buhe sant Gwennole war dro ar bloaz 880, a lar: « N'e ket bet c'hoaz digor ar gleud war ar c'hleun-ze e manati Landevenneg zoken evit treid mamm an Abad. »

D'hanter-moz terna ar venec'h war zao da gana Psal-mou ofiz ar Mintin. Goude e reont eur gourvé dilhald hag all. Pa gan ar c'hilhog e stagent adarre gant meuleu-diou an Otrou Doue. Beteg eiz eur e choment da bedi. Displega reont a vouez uhel pedennoù savet alies ganto o-unan: libantioù mesket gant goullennoù hirvidik, huamadennoù santel. Kalz ané zo deut beteg ennomp, n'int ket maro c'hoaz war muzelloù an dud-se a vez e Kerne o laret grasou deus an noz; grasou ar re vieo war ar pemde, grasou an Anaon da noz-veilhou.

Da eiz eur d'al labour, ar trusta pinijenn, ar gwella pedenn! Krog gant o diaouarn en allar, er ball, er morzoh, er roieny pe en eskenn, o spered ne ziskrog ket evit an dra-ze diouz an Otrou Doue. Peb hani, marc'h gantan e-unan, a jomo diaou-bleget war e theiad (beziad) labour beteg feir eur. Lod a ra wardro an douar, lod all wardro an houarn, ar c'houevr hag ar metalloù all. Hen-man a zav leorioù neve, hennez a adkriv ar re goz war igorzennou ha trusk-gwé, eum trede a liv t'olennoù warno.

D'ar pred, azeet ouz memez tôl, ne zebront nemet an nebeuta ma c'hellont. « Ar yun a bad awechoù keit hag ar bloaz. » Ar re zantela ne zellont ouz ar boued nemet bep daou, tri devez. Ne vez ket gwelet alies kig war an dôl: d'ar zul hepken ha pa veze ganto eum den enorus bennag... Ha c'hoaz evit sant Gwennole eo re an dra-ze: legumach ha beller (yeod-seunteun) gant eum tam-mig uiou ha fourmaj d'ar zadorn ha da zul setu aze e voued. D'ar C'horaiz en deus a-walc'h gant daou bred ar zun...

Bebet diwar metra, ar venec'h a gav c'hoaz an tu da verzeria o c'horf gant pinijennou skrijus. P'o deus manket en tu biennag, en n'em dôlont noaz-en eur sber pe en eul lenn da sklasi, epad ma kanont kanaouennoù santel ha ma laront o fedennoù keit, ha ma c'hellont padout.

Lod all, evit bea (beza) tostoc'h da Zoue, a dec'h diouz ar manati, a n'em guz en eur c'hoad doum da veva o-unan penn. — Diskibien sant Gwennole zo eet evelse kwit eus Landevenneg an eil goude egile: sant Idunet pe Ebin pe c'hoaz Dihoan da goad-Lin, Izhio Kastellin; Martin ha Bally da Irvillhae; sant They da Lothery; ar

breudeur Coatmael bet laeron en o amzeriou kenta da Roskanvel; Conogan, eskob Kemper divezaboc'h, da Veuzit war Ster Elorn; Coullitz da Sant-Goullitz; Wigon da Dregournez; Tanvoald da Gonne; hag an Tad Rastian da Skaler.

Eus thennan eo ez eus ano e gwerz Bosenn Eliant :

« Etre Langolen hag ar Faouët
Eur barz santel a vez kavet,
Hag hien an Tad Rastian hanvet. »

Lod a lar 'z eus daou rumm etouez ar zent: ar re genta, seder o doare, tener o c'hallon ha plean o balie; ar re all prim ha taer, must o doare hag entamet o frezeg. » Mar id'eo gwir kement-se, eus lar rummaet diveza-ma eo diskibien sant Gwennole. Hien avat zo aneo o diou. Ma oa kalz e benn evel penn peb breton, ma oa dizannant ouz e gorf evel hon tadou koz, ha kri ouz ar boan, Gwennole, anvet El Breiz-Izel, oa mal, ha dous evit an holl, eur baradoc beva en e gichen. Ne zave e benn hag e vouez nemed dirag an dud vras, ar Rouaned... hag ar re-man a iee bitan o c'hallon pa bare warno e zaou-lagad beno, lemmoc'h eget re ar c'halloneka denchen-till...

**

D'ar mare-ze e veve e Kemper-Odet, eur roue, Gradlon e ano. Klavet en doa meur a dro trouz eus furnez ha santellez Gwennole. Mall en doa d'e wellet ha setu eun devez e kemeras eun nebeudig soudarded ha diao 'trezeg Landevenneg.

Digoulet er mamati, eo kaset dioustu da lochenn an Tad Abad. Kerent ha m'en en gavas gantan e c'hourveas eharz e dreid :

« Me eo, a laras hien, roue Kemper-Odet; galloudek oun, pinvidik ive. N'ouzou pet koufr am eus leun a aour, a are'hant hag a berlez. Soudarded forz pegemenid zo dimdannon, holl int brezelourien kalounek. Larit d'in petra a rafe vat d'ho kallon hag ho po dioustu ho koullenn. »

Ar zant, gant eur mousc'hoarz, a astennas e zorn d'ar roue :

« Savit, Roue! Met petra c'hoarvez ganoc'h o tont da gomz d'in eus profou ha danvé. M'o dije bet traou goullio ar bed peg war ma c'hallon, e kav d'oc'h 'ta, e vijen deut el lec'h distro-mañ da 'n em guzaz egiz en eur bez; e kav d'oc'h em dije laret kentavo da di ma zad, eun ti kaer ha bras; evit dont tann da veva diwar bara ha dour goude labourat evel eur sklavour ? »

Al ludu eo ma gwele ha ma zi eul lochenn digor da heb avel. Netra ne ra diouer d'in ha morse ar gwal blamedenn n'eo bet hejet ma fenn ganti. C'houll, roue,

n'ho peus plijadur nemed o laza hag o vrezeli. N'eo ket gant beg ho kleze ho po ar rouantelez a bado da viken. Dirak Doue, larit 'ta piou eo ar pinvidika ac'hanomp hon daou? Da zeiz ar varn ho tenzoriou vo kavet skanv e dorn an Holl-C'halloudek. »

Ar c'homzou dispont-se a stokas don e galon d'ar roue. Stoui a reas e benn :

« Mignon santel an Otrou Doue, ganec'h ema ar wirione. Ho servicher oun. N'ho peus nemed gourc'he-c'henn ha me zento ! »

Mont a reas kwit tristik a-walc'h, o trei en e spered an aliou fur en doa bet digant ar zant. Kemeret a reas aliés c'hoaz hent Landevenneg. Ha bep tro e vezo kentelliet gant Gwennole.

Roue kri ha didrute kaset en doa beteg meuze e rouantelez en dro dre nerz ha dre beg. Ne zelle ket ouz gwir ar bobl munut an dud hep difenn. Dont a reas da veza mestr mat. Paour ebed ne zeue da skoi war e zor hep kaout gantam da vont kwit, ar pezh a reé diouer d'ean.

Roi a reas breic'h dreist-holl d'am dud santel a brezege an Aviel dre bevar c'horn ar vro. Hen o dioualle, o zikoure en o dienez. Sant Guntthienn, mab d'eur Roue eus Breiz-Veur en devoue digantan eun dachen-gaer a zoudar-etre Ster-Elle ha Ster-Izol, anvet an Aour-ôd.

Ar roue a zonzias goude ober eun eskopti eus Kemper-Odet... Red e oa kaout eun eskob. Sent a-walc'h a oa dre ar vro. Abenn ar fin e tollas ezelhou war Korantin a veve d'ar mare-ze en e benity e kreiz Koad-Neve.

Eur wech savet Korantin da eskob, Gradlon a reas d'ean an dilez eus e ger rag aon en doa ne vije staket daoulagad ar zant gant an dizurz a rene siouas etouez e dud hag e zoudarded, ha ne vije deut re aliés e skouarn da vlonsa gant trouz an ebatou-moz ha kanaouenn ar yaouankizou diroll.

**

Mont a reas neuze daved plieg-mor Douarnenez, brava hani zo er bed gant plieg-mor Nâpl en Itali ha Rio-Janeiro en Amerig an Traon. Eno, benn d'ar mor, e oa Ker-Iz. Wann gwagennoù ha tarziou a zeue da dorri ouz an teir voger a reé kalc'h en dro d'ei. Kaer e oa da welet gant he zier men-grouan, en he c'breiz touriou uhel mamer bras ar Roue. Ne oa hend dre ar vro, hend roman ebed ha n'em divije ket e benn dirag mor-dall ker.

Met adreñv ar mogeriou n'eo ket kristenien a veve :

« Da c'houezek vlâ, an holl verc'hed
N'o deus Doue med ar pec'hed,
Ha da ober e gurunenn
E roont o c'haera rozenn. »

« Ahès, merc'h ar roue Gradlon,
 Tan an ifern en he c'halon
 Er penn kenta eus an diroll
 A gais d'he heul ar ger da goll.

Sant Gwennole a oar evel an holl :

« N'eus e ker Iz nemet traou koz
 An ebatou a ve bennoz. »



Ar roue Gradlon war iliz-veur Kempe

Deut eo da ger Is da skandelat ar roue.

« Gradlon, Gradlon, laka evez
 D'an dizurziou a ren Akès...

« E lec'h ma oa c'hoarzedeg kent
 « E vo neuze skrignadedeg dent
 « E lec'h ma oa kanaouennou
 « E vo neuze skrijadennou. »

Ar roue paour, e verc'h en deus kelennet. — Met n'eo ket bet kredet.

« Ha skwiz gant rebechou he zad
 'Vit mont pell eus e zaoulagad
 Hi deus grêt gant droug-sperejou
 Eur palez kaer tost d'ar sklujou. »

Eno ya an traou en dro goasoc'h eged biskoaz,

« Eno, en aour hag er pætlez
 Evel an heol e par Akès. »

Boëmet (1) eo an holl gant ar plac'h fallfakr.
 Sant Gwennole a stag da brezeg neuze dre ger evit
 distroi an dud diouz jar voutlhenin hag ar flank emaint
 abars beteg o goug.

D'en ne reas van, N'eo ket hen oa mestr kêr Is. An
 droug-spereid an hiani oa. Dont a reas e-unan da ren
 an dansadeg dindan dreemm eur prinz yaouank

« A zouge dilhad ru
 E varo oa hurr ha du
 E holl fizili a verv
 Hag e zaoulagad a zev. »

Goude beza grêt ha kontet eus a hep seurt, flastret
 ar grusifi, kranchet war an osti, e lammas warno gant
 potnéd an ebatou.

Pa voe fin d'an traou-ifern-ze, an droug-spereid
 chomet e-unan er palez a dosteas da gaout Ahès :

« Ma dousig koant, merc'h da C'hraton,
 Ha muia karet ma c'halon,
 Ha ne hellfen ket e mep giz
 Gwellet ale'houe sklujou Ker-Iz. »

— Ma zad a zoug en e gerc'hen,
 An ale'houe aour deus eur chadenn
 Ha va zad breman zo kousket
 Ha kaout an ale'houe n'hellan ket. »

Met an droug-spereid gant komzou flour a droas ar
 plac'h ezigiz netra. Hag hi da glask kaout an ale'houe ;

Kaer en e gosni, vel eun El
 E kouske roue Breiz-Izel
 Hag en dro d'e dal, e vleo gwenn,
 A ve dispak, eur gurunenn.

Ar verc'h a dosta war beg he zroad, ha goustadig
 deus e gerc'hen, e fenn hep c'hoarzin ar chadenn...

D'ar mare-ze e tigouez e ker d'an daoulamm, war e
 inkane (2) du, sant Gwennole, kannad Doue.

N'em gavet dirag dor al Lez
 E lec'h ma kouske tad Ahez;
 Diwar e varc'h an den santel
 A c'hallv en noz a voulez uhel :

« Gradlon, Gradlon, sav hep dale,
 Sav evit heulia Gwennole,
 Sav evit tec'hi deus ar mor,
 Stlujou Ker-Iz a zo digor. »

(1) Boëmet, strobinnel, strobet, ensorcelé.

(2) Inkane : marc'h.

Hag ar roue koz trubuilhet
 Ermez e welle zo savet
 D'in-me, d'in-me, ma marc'h priman (1),
 Siouas peungollet ar ger-man.

Emaint kwit, o daou.

Ha war o berc'h en eur yudal
 E klevan ar mor o ruihal. »

Neuze ar brinsez,

Dre ger Iz a glei hag a zeo
 A rede dispaket he bleo.

« Met pa glev daou lamp ar c'hezeg
 Arôk ar mor o finedek,
 Dre al luc'hed gant nec'hamant
 E c'halfe he zad hag ar zant.

« Ma zad, ma zad, mar am c'harit,
 War o marc'h skanv iam c'hemerit. »
 Hag hep respont, an tad terner
 A zav e verc'h war an tailher.

Kerkent ar mor a vuana
 Ha Gwennole, len eur grena,
 A hop: « Gradlon, töl iam diaoul-ze
 Diwar dailher da inkane.

Koulskoude c'hoaz, leun a renkrez,
 An tad a zalc'h ar bec'herrez :
 Met ar zant a ra sin ar groaz
 A deu hag a sko ganit e vaz.

Kerkent Alhez a ruih war he fenn er mor. Hag ar marc'h g'leb teil a liamm deus an dour war an douar.

Ar me o deus lennet istor Intron-Varia Rumiengof a oar ar peurrest leus gwierz Ker-Iz a g'lever ar me goz o kana c'hoaz war ar mêz.

Gradlon a drementis amzeñtjou diveza e vulhe, a-wechou e Kemper-Korantin, a-wechou e Landevenneg, etre an daou vignon oa bet ato e wella kuzulierien. Etre divrec'h sant Gwennole e varvas, tostoc'h da Zoue war an tremen eget ne oa bet en e yaouankiz. E Iliz-abati Landevenneg e voe sebllet. Houtan 'zo bet pillet gant pôted an « Drañh » er bloavez 1789, hag eus bez kaer ar roue ne jom mui nemet eun toull dôn.

Muioc'h a ano z'eus dioutan e Kemper. Eno e weler c'hoaz etre touñtjou iliz Sant-Korantin pigmet war e varc'h, o sebllet, pell dirazan eus tu Ker-Iz, egiz m'en defe ar roue pinienn d'ober epad an holl tamzer evit dizurziou e verc'h hag e zujidi. F. M.

(1) Priman: ar buanan, le plus rapide.



LABOURIOU AR MERC'HED WARDRO AN TI

Kenteliou Tintin Anna

XV^e PENNAD

Endro d'an ti

An dro d'an ti a vezo dalc'het kempenn; ne vezo ket taolet a draou lous el leur; ne vezo ket graet ar bern teil re dost d'an ti, gand aoun ne deufe an dud da glenvel gand ar c'houez a zav dioutan; pa vezo unan bennak kilav, ne vezo taolet netra ebet dioutan war an teil; en eun foull, en douar, e vezint kuzet ha raz, ma 'z eus, a vezo stillapet warno.

Harp ouz an ti e vezo digaset karigelladou douar mat da ober eun dachenn e vezo laket enni bodou roz ha bleuniou all a bep liou hag a beb c'houez vat, bleuniou kaer krouet gant Doue n'eo ket hepken evit maga ar gwenan met ivez evit laouennât hor c'halon ha kaerât hor buhez, traou hag a c'hell an holl da gaout, ar paour koulz hag ar pinvidik.

An holl verc'hed a gar ar bokedou; pa vez aet ar wazed d'ober o c'houk, en hany, e fteer o c'houennat hag o दौरa ma 'z eus ezomm d'hen ober.

Red eo ivez, ma 'z eus c'hoant kaout legumach da lakat er pod, kaout eun tammik liorz tost d'an ti; ar wreg he do c'hoant da gaout eun tammig teil da lakat el liorz-se; an ozac'h a c'hrosmolo rak ne gav ket d'ezan en dese re evid e barkeier: « An teil hag an arc'hant ne vez morse re anezo! » emezan; ha me a lavaro d'ar wreg: « Lez teil ar c'hreier gand da ozac'h ha gra da vern teil da-unan evid da liorz! Bep tro ma skubi an ti, laka ar skubachenn-se en eur c'hased ha taol anezi en eur c'horn bennak, er mêz; eno, e laki ivez, dre ma kavi, atred, deliou sec'h ar gwez, dreist-holl dioc'h ar gwez kraon, an elo (*peuplier*, e galleg), ar skao-gwrac'h (*syconome*, e galleg) ha c'hoaz al louzeier c'houennet er parkeier, ar bruzunachou-raz, an tammou mein-skfent, teil ar yer hag ar c'houlined... ha traou all. Dont a raint holl da vreina, en eun

douezenn, hag a-benn bloaz ho pezo eun tremp eus ar gwella! »

El liorz eo red kaout kaol, pour, irvin, karotez ruz, ougnon, kignen, fa, fa munut (*haricots*, e galleg); mat e vefe kaout ennan ivez eur wezenn ber bennak, gwez avalou, bodennou spezad ha kastilhez hag eur bengennad sivi bennak.

Eun dra vat eo ivez kaout gwez bras da c'houkori an ti pe, da vihanan, kleuziou, keuneut pe spern warno, d'al laboused da ober o neizioù ma teuint d'hor sikour da zont a-benn eus ar prenved a deu a-vernioù war an traou a hadomp en hor parkeier. Pa gomzan eus al laboused e komzan nann eus ar brini, ar piked, an dubeed pe ar c'hegined, met eus al laboused bihan, hor mignoned, « hor breudeur » evel ma lavare sant Fransez Asiz, gwisket ker koant gant Doue, hag a zeblant beza krouet evit debri ar prenved ha dre-ze ober vad d'an den evel ar beufig, ar filip, ar voc'h-ruzig, ar pintig, al laouenanig, ar penn-glaouik hag all; ra deuint ouz hor bernioù keuneud, en hor girzier, ouz hor gwez d'ober o neizioù pa deuo an nevez-amzer. An tadou hag ar mammou a gelenno o bugale hag a zifenno outo o laza, stlepel mein outo, difloupa o laboused bihan ruget hepken gant greun fall ha prenved. War ar mêz, hor gwella servicherien eo al laboused. Petra zigouezo ma ne espernomp ket o buhez d'ezo?

E berr amzer, hor c'haol, hor melchen, hag hor gwiniz a vezo lonket gand ar melled ha gand ar prenved.

Kemeromp truez ouz al laboused pa ne ehanont ket da labourat evidomp. Kaer o deus karga o c'hof ne deuont ket atao a-benn da zibri an amprevaned a zo el liorzou pe er parkeier. Pa stagont gand ar bodennou spezad pe gand eur bengennad kaol, ar prenved glaz ne vezont ket pell evit o dibri hag o dizec'ha; evit en em zizober anezo e leverer birvi dour diwar delioù skao ha pa vezo yen an dour, e deurel war ar prenved gand eun dourarez (*arrosoir*, e galleg). Evelse e varvint ampoezonet.

Mignoned all hon eus c'hoaz, mignoned izel, a ya da guzat en deiz, en aoun da veza gwelet, rak n'int na brao, na koant, en aoun da veza lazet ivez gand an den di-naoudek; hanvet em eus an tousegi, euzus da welet, marteze, gant o c'horf divalo, goriou eleiz warnan, hag o daoullagd difloupet, boazet da welet tenvalijenn an douar.

En hanv, pa vez sec'hor, diouz an noz, e klever o mouez en o zoullou; kana e reont war eun ton truezus hag en o diskan e seblantont lavaret: « Brud fall hon eus etouez an dud ha koulskoude ne reomp nemet vad d'ezo! »

Ar wirionez a leveront: an tousegi ne reont droug ebet; dieubi a reont an douar eus kement prenved lous a zo enni: laou-tar, c'houiled, garlostenned, prenved a bep seurt, holl int mat d'ezo. Deskomp d'ar yugale kaout truez

ouz an tousegi e lec'h o laza. Gwechall e veze lavaret o devoa binim war o c'hein, pe en o genou, met deuet oar da welet abaoe n'eo ket gwir kement-se, ha n'eus mui nemed ar c'henaouerien hag a lazfe an tousegi a zo en o liorzou.

**

An aered, ne lavaran ket; ar re-ze o deus binim, dreist holl an aered-viber; met, a drugarez Doue, ma 'z eo stank an aered en hor bro, ar re viber n'int ket; an aered viber a zo bihanoc'h eged an aered divinim ha n'o deus ket an hevelep liou; rousoch e vezont; berroc'h e vez o lostou ha begok; o fenn a vez plat/ha tri-c'horn; o c'horf a zo tevoc'h; evel an aered all e chomont kousket er goanv hag hep tamm; pa deu an heol e tivorfllont hag e teount er mêz eus o zoullou; klask a reont neuze boued da zibri. D'ar mare-ze ez eus da ziouall outo rak ma krogont e raint droug o veza m'eo leun o sac'h-binim; en o genou, er javed uhela ez eus daou zant lemm ha kleuz hag a-drenv d'an dent-ze eo eman o sac'h-binim; pa flemmont e ront eun toull er c'hroc'hen hag e lakeont binim da vont dre an toull-ze; pa vez digor o genou ganto e weler mat an dent-ze ha ma c'hoarvez ganto beza torret, an aer-viber a c'hell en em zifenn c'hoaz, rak a-drenv he daou dant hurr he deus re all bihanoc'h ha kleuz ivez.

War *Feiz ha Breiz*, « al labourer » en deus merket ar peza oa da ober pa vezet bet flemmet gand eun aer-viber: Binim an aer-viber, emezan, a zo eur poezoun evid ar gwad hag an nervennou; pa vez evet, ma 'z eo yac'h ar c'henou hag ar stomog, ne ra ket a zroug; droug a ra pa vez mesket war eun gand ar gwad. An ezel a zo aet binim ennan a deu da c'houeza, terzienn a vez hag a-wechou ar maro a c'hell dont d'he heul. Gwella 'zo da ober eo klask miret ouz ar binim da vont, dre ar gwazied, beteg ar galon hag evit se eo mat starda uheloc'h eged ar gouli hag ivez gand eur gountel pe eun dra bennak all eo talvoudus brasaat ar gouli evit lakât ar gwad da redek: da heul ar gwad e teu binim er mêz hag ez ay nebetoc'h warzu ar galon. Darn a laka an tan war ar gouli. Evel ma 'm eus lavaret, gellout a raer, hep riskl, eva binim, rak-se ma 'z eo bet flemmet an dour pe ar vrec'h e c'heller suna al lec'h flemmet gand ar c'henou; met red eo, 'vit gellout ober an dra-ze, e vefe yac'h ar c'henou. Ouz an derzienn e c'heller rei louzou an derzienn hag ivez traou tomm da eva. Evit doare, emezan c'hoaz, n'eus ket ouspenn unan dre zek o vervel, eus ar re a zo bet flemmet gand an aered-viber. » Ar moc'h gouez hag ar moc'h donv a zebr aered, heb aoun ebet; ar broc'h, an avalaouer hag al laboused bras a zebr ivez kalz aered. Beva a reont en douar, pe er gwez kleuz, pe dindan ar reier; o c'haout a raer c'hoaz dindan ar ber-

niou teil pe ar berniou keuneud; eur wech c'hoaz, an darn vrasa anezo n'int ket binimus.

XVI^e PENNAD

Diabarz an ti

Dor an ti, koulz hag ar prenecher, a vezo livet bep an amzer, gand aoun ne deufe ar c'hoad da vreina; ar prenecher a vezo digoret allès, da rei aer; ar gwer warnezo a vezo frotet bep sadorn, pe walc'het gand eun torch gieb pe gentoc'h gand eur gazetenn goz; skleroc'h e vezo ar gwer hag ar sklasennou ma lakaer eun nebeudig gwin egr en dour a gemerer d'o gwalc'hi.

Bep sadorn ivez e vezo puret, an daol, ar skinier, ar fourno, ma 'z eus unan; ar gweleou a vezo laket da luia gand eur bros ha torchet goude; bep miz e vezo frotet eun tamm koar outo ha chenchet an dilhad-wele; en armeliou, renket er zolier, e vezo berniet an dilhad; hizou, rochedou lien teo ha padus, pleget gant preder, merkou enno evid o anaout: diou lizerenn da ziskouez piou eo o ferc'hen; e traon an armel e vezo laket ar bou-teier; an dilhad dindan er stal e kreiz hag an dilhad war gorre er stal uhela.

Ha pa 'z eo gwir e kavomp tro, leveromp eur ger di-warbenn ar gwiskamanchou. N'eus ket a verc'hed gwisket ker kaer e nep lec'h ha merc'hed Breiz pa zougont gwiskamanchou o bro. An holl a anzav kement-se ha daoust da-ze e weler Bretonezed oc'h heulia giziou ha gwella ma 'z int eo da lakât ar re a gerz d'o heul da goll o gened, o danvez hag o furnez.

Eun tammig koef bihan ha tano a jom c'hoaz war gern penn ar merc'hed, met dizale e nijo kuit evel an tavan-cherou broudet, ar chaliou a-liou, al lostennou danvez teo, tro ganto. Ar wazed, e Leon, a zoug atao o zokou ledan; hag o dougen a ouezont, met a hent all ne jom ket kalz a dra ken eus a wiskamant ar re goz. ha koulskoude e pellec'h e oa gwazed gwisket ker klok gwechall ha re Sant-Thegonnet, Landivisiau, Bodilis ha tro-war-dro?

E Bro-Gerne, e talc'her gwelloc'h eged e Leon da wiskamanchou Breiz. Kerneviz a oar peger brao eo o chupennou a-liou, o dilhad broudet gant neud seiz pe neud aour; kompren o deus graet ez eo eun nerz evid eur bobl derc'hel mat d'he gwiskamant koulz ha d'he yez.

Daoust ha tud Leon ha tud Treger n'o deus ket kement a skiant ha tud Kerne? Lavaret a ve graet, rak skouarn vouzar a reont; an diaoul a c'hoarz o wetet sotoniach ar Vretoned diskiant-ze: « Bro santez Anna, goudoret gant he mantell betek vremen a zo d'in hep dale », emezan, ha bemdez e kouez, unan pe unan, war vizied e forc'h lemm: eneou kollet gand al lorc'h.

Eur pôtr yaouank pevar bloaz war nugen, aet d'eun eured, a oa, diouz an noz, o sellet ouz ar re a oa staget da zansal, goude koan; e giniterv, mamm diou blac'h yaouank, skanv o zroad, tortiset o bleo, a lavaras d'ezan: « Kea en o zquez ha kemer da blijadur; pehini eus ar merc'hed koant a zo aze eo da hini goz? »

Hag hen, hep c'hoarzin a respontas: « N'eus, er zaldan, na gened, nag onestiz! Bez dienkrez, mamm va bugale-me m'eman ket aze! » hag ez aes er maez raktal.

Doue holl c'halloudek, selaouit hor pedenn; mirit ouz hor bro da vont da goll; lakit eun tamm poell e penn he bugale; roit da entent d'ar merc'hed eo eun tamm mat enorusoc'h d'ezo heulia giz o bro eged hini ar harizianezed divergont kollet gand ar franmasoned; ra zeuio adarre, er mêz eus an armeliou, dero pe gistin, ar gwiskamanchou kaer ha padus o deus laket Breiz da veza ker brudet ha ma 'z eo dre bevar c'horn ar bed kristen.

Janedig er skol

(MALL GANTI MONT D'AR GÉR)

War don : An hini goz.

1
Dre brenezier digor ar skol
E welan o para an heol
E klevan kan, tra la la,
An evn bihan, tra la.

2
Er skolvez ez oun dalc'het
Vel eul lapous en e gaoued
A c'hed digor, tra la la,
A drev an nor, tra la.

3
Mall bras am eus da vont d'ar gêr
Da redek buan ha seder
Dreuz al lannou, tra la la,
Hag ar parkou, tra la.

4
Pelloc'h pa vin digabestret,
Evel eun heiz pennfollet
Me a fringo, tra la la,
Hag a lampo, tra la.

5
Diouz ar mintin ne glevin ket
Mouez ar c'hloc'h d'in o lavaret
War zao, war zao, tra la la,
Dillo, dillo, tra la.

6
Elec'h deski skriva ha lenn
Ha lakat eur bern traou em fenn
Me a zesko, tra la la,
Goalc'hi, goro, tra la.

7
Meur a dra all a zeskin c'hoaz
Rei boued d'ar yer, d'ar zaout, d'ar c'haz
Ober gwelhienn, tra la la,
Trempa soubenn, tra la.

8
Me zesko kignat patatez
Ribotat hag ober krampoez
Hag aoza yod, tra la la,
Leun barr ar pod, tra la.

9
D'am leoriou me a lavaro
Pad daou pe dri miz ke-avo
D'ar grammadeg, tra la la,
Har d'ar galleg, tra la.

10
Me a gumzo va brezoneg
Va yez ken kaer, ker flour, ker c'houek
Me a grano, tra la la,
Soniou va bro, tra la.

11
Amzer am bo c'hoaz da c'hoari
Gaud Anna, Finig ha Mari
Edoug an deiz, tra la la,
Ken e vin skuiz, tra la.

12
Ha pa vo deut gant miz here,
Da zistrei d'ar skol, ar mare
Me a deuio, tra la la,
Laouen en dro, tra la.

MELEGAN.

Glaoda ar Prat

Barz Plougastell

1875-1926



D'ar meurzh, 13 a viz Ebrel diveza, e varve, e Angers, unan eus Bretoned hon amzer a gare ar muia e vro: an A. Glaoda ar Prat, Renner, skol gristen ar Vern d'Anjou.

Ganet e oa bet e Sant-Louis Brest d'ar 25 a viz Genver 1875, met e dud ginidik eus a Blougastell a zistroas d'o farrez koz pa n'en devoa c'hoaz nemet pevar bloaz; Glaodaig a yeas d'o heul hag a voe savet gand eur voereb koz d'ezan, e Kerzadiou.

« Eno, eme J. ar Braz, gant e gamaraded, en deus redet, diarc'hen, e benn noaz, a-dreuz ar parkadou sivi, ar brug hag al lanneier. Nag e kare dija d'an ampoent kaerderiou e vro. Nag e plije d'ezan chom pennadou hir da arvesti ouz ar c'herreg...

Savet ganto en nenvou linenn rouzet o c'hein (1)

En e bennadou eurusted, nag e kare, gand e vignoned, mont da gonta e levez e d'ar reier-ze hag a

... Gemere lodenn en o flijaduriou

Hag a responte skiltrus d'o holl c'hoarzedennou (2).

Met pa deue d'an dristidigez gwaska e galon, a vugel, neuze e kerze d'an aod da glask frealzidigez. Azezet war eur garreg, e dreid en dour, e lavare e boan-spered d'ar mor glas, hag henman, gand e vouez klemmus, a skanvae d'ar paotrig e velkoni.

Eno eo e teskas hor mignon karet Breiz, ar vro gaer « koad en he c'hreiz, mor en he zro » a dlie kana mat divezatoc'h. Eno ivez eo e tanvaas pennadou kaer a blijadur o lenn marvailhou brezonek er paperennou a goueze dindan e zaouarn, ha, diouz an noz c'hoaz, nag e kare, er veilhadez, selaou kontadennou ar Re Goz!

Liammou nerzuz a zo o terebel an Aotrou Prat stag ouz douar e yaouankiz: « Eul lodenn eus va c'halon a zo chomet e Plougastell! » a lavare alies. » (1)

D'e drizek vloaz, Glaoda, evit gounit e vara a voe kaset da vevel bihan d'al Likez, da Gemper, met unan ben-nak eno o welet en doa spered hen distroas diouz al labour-korf ha pevar bloaz goude Glaoda a oa mestr-skol

(1) Mouez reier Plougastell.

(2) Mouez reier Plougastell.

(3) Kentskrid J. ar Braz da Nozvezioù an Arvor, p. IV et V.

e Landivisiau el lec'h ma tlie chom tri bloaz war nugen.

Pa deuas ar brezel, daoust ma n'oa ket eus ar re grenfa e rankas tec'het diwar e labour, evel ar re all ha mont e kostez torr e benn; et lec'h ma n'en devoe droug 'bet koulskoude, a drugarez Doue.

Er bloaz 1916, da viz Here, e voe eunnejet e Kermaria-Sulard gand ar skrivagnerez Loeiza Charran a dlie daou vloaz goudeze rei d'ezan eur verc'h vihan anvet Janig da zeiz he badizant.

Goude ar brezel Glaoda a voe tenzorier Feiz ha Breiz epad bloaz da c'hortoz kregi adarre da ober skol e Montroulez hag e Landivisiau. Evit redet warlerc'h e vara e rankas mont, breman daou vloaz, da Vern d'Anjou da ren ar skol gristen. Ne voe ket hir e bennad buhez eno; da zadorn Bleuniou e reas e skol ziveza; ar berr-alan hag an droug-lounezi a stlupas anezan war e wele; d'al lun-fask e voe nouet; d'ar merc'her e teuas e anaoudegez d'ezan adarre met n'oa ket evit kredi, daoust pegen to-c'hor oa, e vije ar maro gantan c'hoaz; d'ar merc'her warlerc'h, o veza m'en doa poan vras ar medesin a gasas anezan da Angers da denna dour anezan met dal ma voe graet d'ezan gourvez war an daol, a-raok ma oa bet amzer da ober eun dister dra d'ezan, e tremenas. D'ar zadorn warlerc'h, 17 a viz Ebrel, e voe diskennet e gorf e douar Breiz, e bered Kermaria-Sulard, parrez e bried. Glaoda a zo bet eur mestr-skol, met eur mestr-skol oa ha ne lake ket ar vugale a veze war e dro da gaout mez eus o zud hag eus o Bro; yez hag istor Bro-C'hall a zeske d'ezo met n'o lakea ket evit-se da gasaat ha da zillezel yez hag istor Breiz evel ma ra darn.

Gant bugale Breiz edo e breder o veza ma ouie ervat eo i ar Vro da zont ha pa rankas tec'het diouto evit gellout dont gwelloc'h a-ze war zikour e dud e voe rannet e galon, evel m'her gweler dre al lizer-man a zigasas d'in d'ar bloaz nevez:

Vern d'Anjou, 26 a gerzu 1925.

Otrou ha Mignon ker,

N'hellomp ket lezel da dremen ar bloaz nevez hep kas d'eoeh hon mennoziou, hon hetou, hag eus hor c'helou.

Hon hetou? Ra blijjo gant Doue skuilha warnoc'h ha war hoc'h oberou breton ken talvoudus d'hor Bro Breiz, e wella bennoziou, rei d'eoeh nerz ha yec'hed da gas da benn an alar oc'h krog ker mat ennan. N'emaomp ket e Breiz, n'eus fors, hag abalamour da-ze, marvad, hon daoulagad a zo digor frank o sellet war-zu bro hor c'havel da c'houzout petra dremen enni. A drugare Doue, n'emomp ket hep kaout keleier eus Breiz, p'eo gwir ho peus ar vadelez da zigas d'eomp bep miz Feiz ha Breiz. Trugare d'eoeh, a greiz kalon!

Daoust ha Jenovefa, petra e teu da veza? Er zizun dremenet hon deus bet ar blijadur da ober anaoudegez gant an O. Jollec, person Bretoned Trélazé. Setu aze eun den a zoare hag en deus plijet kalz d'eomp. Mont a raimp d'e welet. Fizians am eus da vont da vestr skol di a-rôk pell. O eurusted! beza adarre e bro ar Brezoneg! e-touez ar c'hantikou hag ar zoniou breton! Va Doue! hastit digas d'eomp an deiz-se!

Dorn ouz dorn, evit Doue ha Breiz!

Ho mignoned.

GLAODA 'R PRAT.

Evel mestr-skol, Glaoda ne reas morse an distera gaou ouz e vro; evel m'hen anzave e Breiz-Atao, Abeozen, unan eus e wella diskibien; n'oa ket evit gouzanv e vije taolet an distera dismegans, gand ar re en doa da welet warno, war ar yez en doa desket war bartenn e vamm; evel barz e klaskas he lakât er renk uhel hag enorus he doa gwechall, hag eur barz, e gwirionez, oa Glaoda: e Plougastell e tastumas danvez e levr kenta *Soniou ha Gwerziou* anvet gantan; mouez *Reier Plougastell*, ha moulet er bloavez 1905 gant bennoz an A. Dubourg, eskob Moulins.

Goudeze, er bloaz 1907, e ro d'eomp *Marvailhou ar Vretoned, e tal an tan*; er bloavez 1909, *Nozvezioù an Arvor*; er bloavez 1911, *Rimadellou brezonek*; er bloavez 1914, *Marvailhou ar Vretoned*.

Evel marvailher Glaoda n'en deus ket e bar; etouez al lizri a zo bet digaset d'ezan, da veuli e labour a varz, hini m'arvat ne reas muioc'h a vad d'e galon eget henman bet kaset d'ezan gand eur person bras eus a Vro Dreger.

MON CHER AMI,

Tous les amis de la Bretagne vous sauront gré de ne pas désespérer d'elle. Elle est bien menacée, hélas! dans tout ce qu'elle avait de beau et de glorieux. Nos compatriotes n'ont plus de fierté nationale. Il y a cependant un mouvement nouveau de relèvement, et dans cette tendance admirable de renaissance vous avez une part abondamment hors ligne.

Que le peuple se mette à suivre tous ces vaillants initiateurs, à les écouter, à les lire, et la Bretagne sera sauvée! Peut-être serait-il très utile d'avoir des colporteurs. Les protestants en ont.

Je vous envoie la trop modique somme de dix francs avec l'expression de mes vœux les plus ardents pour le succès de vos travaux. En tout cas, Dieu vous en tiendra compte, et aussi, j'aime à croire, la Bretagne de l'avenir.

Votre tout dévoué

C. GUITTEREL, ch. hon., Curé de Gouarec.

Goude ar brezel Glaoda a zavas *Jenovefa a Vrabân*; o tont eus ar vouterezed edo c'hoaz p'edo war e dremen-van hag o welet peger koant a oa fichet sae nevez ruz-wenn al levr-se da vont da gaout al lennerien en deus roet d'ezan e vouse'hoarz diveza gand e vennoz; lavaret en do d'ezan, en e galon, ar pezh a lavare dre skrid d'e bevare levr marvailhou:

« Kea, levrig nevez, douget war aezenn ar balan, ar brug hag al lann, kea da lavaret d'ar paour *kez Bretoned* eus an ugentvet kantved, a gomz c'hoaz ar Brezoneg, ez en o yez din a bep doujans, a bep karantez, a bep enor; lavar d'ezo ouspenn ez eus en hon amzer tud a bep renk, a bep stad, lod zoken er c'hargou uhela, o deus desket

ar Brezoneg, a gar hag a gomz ar Brezoneg, ken alies gwech ma kavont tro d'hen ober, a zifenn ar Brezoneg hag a c'houlenn evitan, e Breiz, ar frankiz a zo dieet d'ezan e pep lec'h! »

Ma 'z eo bet eur breizad penn-kil-ha-troad Glaoda a zo bet ivez eur c'hristen mat: kenteliou e voereb Fransez a zankas ken doun en e galon ma n'o ankounac'heas morse; hi eo a zeskas d'ezan penaos tostaat evit ouz Doue:

En deiz a-raok, va moereb vat
Abred am c'hasas da gouskat
Gand aoun n'am hije 'n eur c'hoari,
Saotret va ene o pec'hi.

O devez kaer va Fask kentan,
Hep hini henvel er bed-man,
Evidoun c'houi voe luc'heden
An deiz a bado da viken.

Ar feiz e kalon Glaoda a jomas atao ker birvidik ha da zeiz e bask kenta.

E c'her oa: *Da genta Doue* hag ar ger-ze, lugernus war e levriou kenta en divije gelllet lakat war gement skrid a zo kouezet diouz e *bluen-zir* rak n'eus ket bet unan anezo ha ne vije ket bet skrivet gand eur spered leun a zoujans evit hor Mamm Zantel an Iliz. Eun den a zoujans Doue oa Glaoda; e Trede Urz sant Fransez edo, ha skouer Paour Aziz hel lakeas, m'arvat, da gaout kalon a-walc'h da c'houzanv, heb en em glemm re, trubuilhou ar vuhez daoust peger kalet ha peger c'houero int bet evitan (wechou!

Skriva eur yez pa c'heller ouz hen ober lakaat arc'hant da goueza er c'hodell ha brud da zavel war an ano a zo eun dra hag a vez gwelet ken alies ha bemdez, met karet eur yez, evel ar brezoneg, he difenn hag he skriva pa n'eus c'hoaz nemet dismegans ha paourentez da zastum evid ar re her gra, setu aze eun dra ha ne vez ket gwelet stank ha setu aze koulskoude ar pezh en deus graet Glaoda e doug e vuhez, dre garantez evid e Vro.

Kalz o deus e lennet en e levriou, war *Groaz ar Vretoned, Feiz ha Breiz* hag *Arvorig*: lavaret a raint eur bedenn evit diskuiz e ene.

E bered Kermaria-Sulard ema e gorf; karout a rafemp lakât war ar c'horf-se eur bez, stumm kristen ha stumm breizad d'ezan, ma vo diouz doare an hini a vo dindann; eur bez hag a vo savet gand ar re a zo bet en e skol, gand ar re o deus e lennet ma c'hello kement hini a zaoullino warnan lavaret e c'hell Breiz, daoust peger paour eo he yalc'h, kaout kalon a-walc'h c'hoaz evelato da ziskouez he anaoudegez vat d'ar re a labour eviti heb ehana da labourat evit Doue.

Y.-V. PERROT.

AN AOTROU ABGRALL

1846-1926



Eur breizad kalonek all, an Aotrou Yann-Vari Abgrall a zo tremenet ivez d'an 10 a vezeven diveza.

Ganet e oa bet d'an 22 a vezeven 1846, e Lambaul-Wimiliau, e bro ar feiz krenv hag an ilizou kaer. Beleget er bloavez 1870, an A. Abgrall a voe kaset da ober skol da Bont-Kroaz, el lec'h ma chomas 18 vloaz; abaoe ar bloaz 1888 edo e Kemper; an ospital a oa en e gang; an enor en doa da veza dean ar chaloned; pell amzer eo bet

Rener ar « *Société archéologique du Finistère* »; karet ha doujet e oa gand an holl evel ma 'z eus gelllet her gwelet, antronoz gouel ar Galon Zakr, kement all a dud a oa diredet a hep tu da ziambroug e gorf d'ar vered.

Den ne anaveze tenzoriou e vro evel dan; gwelet e veze betek e 75 vloaz oc'h ober tro Breiz war e varc'h-houarn; ne oa ket eur chapel kuzet e gwasked eun draonienn ha ne vije ket anavezet gantan tu ha tu. Anaout a rea an holl denzoriou a oa bet kizellet gand ar re goz e mein gallet ar vro; met anaout a rea ivez an tenzoriou all o doa ar Vretoned savet, a rumm da rumm, gant o c'halon hag o spired.

Pa voe krouet ar *Bleun-Brug*, er bloaz 1905, beleg ebet ne voe lacuenoc'h egetan o welet hag oc'h harpa, e pep doare, labouriou ar Vreuriezh nevez.

E c'hoar Mari-Anna a zo bet unan eus skrivagnerezed brudet a Feiz-ha-Breiz hag atao, betek ma teuas kanvou ar brezel bras da ranna he c'halon, e staged gant mall da lenn ar skridou dudius a goueze eus he fluenn aour.

Diveza gwech ma wellis an A. Abgrall eo da c'houel ar *Bleun-Brug* e Lesneven d'an 13 a viz Gwengolo 1923, p'edo Duk ha Duhez Breiz, endra ma sone kleier ar Werc'hez en o enor, o tont, en o dilhad alaouret, — evel ma teujont 500 vloaz kentoc'h, skoaz-ha-skoaz, war o c'hezeg sternachet kaer, o daou dindan eun de ruz herminiget, tudchentil vrasa Bro-Leon hag 20 pe 30.000 breizad ouz o heul, — da staga ouz iliz an Itron Varia leveou a-walc'h evit ma vije hiviziken beleien da bedi Doue enni da virviken evit Breiz. An daolenn-ze eus Bretoned ar XV^{et} kantved diskleriet gant Bretoned an XX^{et} kantved a skoas kement war e galon ma welled an daerou o koueza puilh eus o zac'lagad, hag hep mar ebet, epad an oferenn a lavaraz dirazi, war blasenn vras ar Folgoat kel leun ha d'ar pardonioù brasa, e c'houennas ouz an Itron Varia lakaat Bretoned e amzer da vale war roudou ar Zent o deus krouet Breiz-Izel.

Ar bedenn a reas e Folgoad e harz treid an Itron Varia d'an 13 a viz Gwengolo 1923 a gendalc'ho da ober en nenv, el lec'h ma vo dizale, dre nerz hor pedennou, ma n'eman ket breman, o kana menleudi an Dreinded, etouez sent Breiz, goude beza gwelet Jezuz

O lakat war e benn
Ar gaera kurunenn,

evel ma sone an ograou, p'edo e gorf, yen skourn, astennet dirag an Aoter e iliz veur sant Kaourintin, endra ma lavaret warnan ar pedennou diveza.

Evit beza mat an traou e tle beza ar vuhez atao e kenver ar maro. Breiz a goll an eil goude egile he gwella difennourien; trumm goude Theodor Botrel eo marvet Anatol ar Braz; trumm goude Anatol ar Braz, Gloda ar

Prat, trumm goude Glaoda ar Prat, ar chaloni Abgrall: Breiz an nenv a binvidika, met arabad eo, evid an dra-ze e teufe Breiz an douar da baouraat.

Pôfred yaouank, 15 vloaz, 20 vloaz, 25 bloaz, piou ac'hanoc'h a zavo da genderc'hel al labour vat evid ar Vro boulc'het gand ar skrivagnerien-ze a zo o paouez tremen?

Ouz eur barz a varv evit beza mat e tlefe beza dek, o sevel da genderc'her e ero.

N'eo ket labour eo a vank, evel ma lavar an Aviel, labourerien avat, an hini eo.

Y.-V. P.



RESPONCHOU DIVINADENNOU MEZEVEN

I. — Eur gaolenn. II. — An ear. III. — An naon.

IV. — L
TOK
LOGOD
KOZ
D

V. — 25 ha 15.

Er miz a zeu e lakimp aman anoion gounideien divi-
nadennou c'houec'h miz kenta ar bloaz.

Soudarded ha mortoloded koz
ar brezel braz

it, d'ar Bleun-Brug,

da Geranna, d'ar 16 a viz Gwengolo a zeu, da we-
let ar bez-meur emær o sevel eno

d'an 250.000 breizad

a oa er brezel ganeoc'h hag a zo kouezet war an
dachenn.

It da lavaret ano anezo da zantez Anna!

Feiz ha Breiz

HA KROAZ AR VRETONED

KELAOUENN VIZIEK GANT SKEUDENNOU

Relijion — Istor Breiz — Marvailhou — Gwerziou
ha Soniou — Buhez ar Vro

RÉDACTION

J.-M. PERROT, Plouguerneau (F^{re}) | Y. LE MOAL, Coadout, p^r Guingamp

ADMINISTRATION
du FEIZ HA BREIZ :
FR. GEORGELIN,
Brest — 4, rue du Château — Brest
c/c 44-40 RENNES

ADMINISTRATION
du Bleun-Brug et de l'Emgleo Sant Iluz
Yv. DREZEN,
BREST — 4, rue du Château — BRES
c/c 6238 RENNES

ABONNEMENTS INDIVIDUELS
« FEIZ HA BREIZ » et « KORN-BOUD »
Bretagne 12 f. l'an
France 15 f. l'an
Etranger 25 f. l'an
Abonnements collectifs
Feiz ha Breiz (seul)
(à partir de 5 exempl.) 8 f. l'an

PUBLICITÉ
Toutes les insertions sont faites
à l'année
Une page entière 300 fr.
Une demi-page 175 fr.
Un quart de page 100 fr.

TAOLENN AR MIZ. — XVI^e Congrès du Bleun-Brug. —
Gouel Maria Hanter-Eost, J. L'HELGOUACH. — Ar
Bleun-Brug hag ar c'hevredigeziou kristen, E. AR
MOAL. — Leve Breiz e Rom, Y.-V. PERROT. — A zehou
hag a gleiz, AR C'HERNE. — Kerne, F. M. — Roue al
Laz, D. N. D. — Etre Sant-Pabu ha Plougin, PAOTR
PLOUGIN. — Labouriou ar merc'hed wardro an ti,
TINTIN ANNA. — Troiou kamm Leon ar Bris, MABIG
BREIZ.

SULIOU HA GOUELIOU MIZ EOST

- 1 a viz Eost. — Ober a rear hizio, en holl ilizou Breiz,
genei Santez Anna, Mamm ar Vro.
- 8 a viz Eost. — XI^{vet} sul goude ar Pantekost.
- 15 a viz Eost. — Goue' Itron Varia Hanter Eost.
- 22 a viz Eost. — XIII^{vet} sul goude ar Pantekost.
- 29 a viz Eost. — XIV^{vet} sul goude ar Pantekost.

XVI^e Congrès du Bleun-Brug

sous la haute présidence

de sa Grandeur Mgr GOURAUD, évêque de Vannes,
à Vannes et à Sainte-Anne-d'Auray,
les 13, 14, 15 et 16 septembre 1926

PROGRAMME GÉNÉRAL

LUNDI 13

Excursion dans le golfe du Morbihan.

A 8 heures, départ de Vannes, en bateau, pour Port Navalo.

De Port Navalo à Saint-Gildas, par train spécial. Arrivée à Saint-Gildas de Rhuys à 11 h. 15. Messe basse avec cantiques bretons.

Déjeuner à la Communauté des Religieuses de Saint-Louis.

A 1 h. 30, Conférence sur la vie de Saint-Gildas. Promenade dans le Golfe. Retour à Vannes à 5 h. 30.

— Le prix de l'excursion, — bateau, train et repas compris, — ne dépassera pas 25 francs.

— M. l'abbé Rio, 6, rue Noë, Vannes, recevra les adhésions jusqu'au 1^{er} septembre.

A 18 h., ouverture de la *Retraite annuelle* (1), 17, rue du Mené, par M. l'abbé Breurec, missionnaire diocésain, vice-président du Bleun-Brug vannetais, en présence de M. le chanoine Guillevic, vicaire général.

Sujet de la Retraite: Le Breton catholique.

A 20 h. 30, Séance dramatique, sous la présidence de M. l'abbé M. Buléon, Recteur de Saint-Jean-Brevelay.

1. — *Le Mensonge de Corentin Lamour*, drame de M. l'abbé Le Bayon.

2. — *Les Cloches de Saint Patern*, paroles de M. l'abbé Le Bayon; airs populaires.

3. — *Sant Isidor, Labourer*, drame en 3 actes, de M. Le Bayon.

Ce programme, ainsi que les intermèdes, sera entièrement exécuté par les *Pautred Padern*, de Vannes, et la *chorale de Saint Patern*, sous la direction de M. l'abbé Candalh, vicaire à Saint-Patern, et de M. Gagnier, directeur de la chorale.

MARDI 14

A 6 h. 30. — Méditation.

A 7 h. — Messe.

A 9 h. — Sermon.

(1) Les retraitants sont priés d'adresser leur adhésion à M. l'abbé Breurec, 17, rue du Mené, Vannes.

A 10 h. 30. — Conférences sur les *Méodies bretonnes*, par Dom Hervé, bénédictin de l'abbaye de Kergonan.

A 12 h. — Repas en commun.

A 15 h. — Sermon.

A 16 h. — Conférence.

A 18 h. 30. — Prières et salut.

A 19 h. — Repas en commun.

A 20 h. 30. — Séance dramatique sous la présidence de M. André, Président des *Korrigans*, de Vannes.

1. — *Fosfatin, ar vateh finn*.

2. — *Ar fri a c'hounid ar verc'h*.

3. — *Santez Noluen*.

Ce programme, ainsi que les intermèdes, sera entièrement exécuté par la *Troupe de Bignan*, sous la direction de M. Edouard Gillouard, de Belz.

MERCREDI 15

A 7 h. — Messe de Communion.

Sermon de clôture de la Retraite par M. l'abbé Yves Le Clerc, licencié ès-sciences, professeur à l'Institution N.-D. de Guingamp.

A 9 h. — Séance d'étude présidée par M. Cadic, maire de Noyal-Pontivy, député du Morbihan.

1. — Rapport annuel du Président du *Bleun-Brug*.

2. — La Famille bretonne. Rapport présenté par M. Le Corre, d'Inguiniel.

3. — Les mœurs de la famille bretonne d'après la *Très Ancienne Coutume de Bretagne*, rapport présenté par M. l'abbé Poisson, directeur de *Foi et Bretagne*.

A 11 h. 30. — Repas en commun.

A 13 h. 30. — Séance d'étude sous la présidence de M. l'abbé Le Goff, aumônier à Pontivy.

Situation de la langue bretonne au pays de Vannes. Rapport présenté par M. l'abbé Mary, professeur au Petit Séminaire de Sainte-Anne.

A 15 h. — Matinée dramatique, sous la présidence de M. Loth, professeur au Collège de France.

Pasion Goneri, kloareg ha sudard breton, drame en 6 actes et en vers, de M. l'abbé Le Bayon, texte breton et français, illustrations scéniques empruntées à la *Pasion* de N.-S.

Les chants de *Pasion Goneri* seront exécutés par la Chorale de Saint-Sauveur de Brest.

A 18 h. — A l'issue de la représentation, réunion spéciale des membres du *Bleun-Brug*, 17, rue du Mené.

A 19 h. — Repas en commun.

A 20 h. 30. — *En ereden é bro Guened*, paroles de M. l'abbé J. Le Maréchal, curé-doyen de Pluvigner, musique de M. J.-P. Le Dantec, vicaire à Saint-Louis de Lorient, chantée par les chorales de Saint-Jean-Brevelay et de Pluvigner.

JEUDI 16. — A Sainte-Anne d'Auray

A 8 h. — Concours de lecture, de déclamation, d'éloquence et de chant.

A 9 h. 30. — Grande audition de musique bretonne; choix de morceaux et chœurs exécutés par la chorale de Saint-Sauveur de Brest. — 50 exécutants, — sous la présidence de M. l'abbé Mayet, organiste à la cathédrale de Quimper, président du Comité de musique du *Bleun-Brug*.

A 10 h. 30. — Messe du *Bleun-Brug*, dite par M. le Chanoine Guillevic; chant de cantiques bretons. Sermon par M. le Chanoine Buléon, curé-archiprêtre de la Cathédrale de Vannes.

A 11 h. 1/2. — Banquet.

A 13 h. — Grande manifestation à la mémoire des 250.000 Bretons morts à la guerre. Discours. Exécution des cantates de MM. Le Maréchal et Jaffrenou (Taldir) au Monument des Morts. — Quête en faveur du Monument. — Cortège de la Famille bretonne.

A 14 h. — Grande séance dramatique sous la présidence de Sa Grandeur Mgr Gouraud, évêque de Vannes.

1) Au théâtre *Nikolazik*; *Pasion Goneri*.

2) Autre séance dramatique dite des « Quatre frères », (*Ar pevar breur*) au théâtre du Petit Séminaire, sous la présidence de M. l'abbé Marián, curé-doyen de Gourin. Le programme de cette séance sera exécuté par des troupes appartenant aux quatre dialectes de Bretagne.

3) Théâtre de verdure, dans le parc du Petit Séminaire.

a) *En ereden é bro Guened.*

b) Audition de chorales et chansons diverses.

A 17 h., sur le parvis de la Basilique, proclamation des lauréats. Distribution des prix. Salut du Saint Sacrement et clôture du XVI^e Congrès du *Bleun-Brug*.

Adieux à Sainte Anne Exécution du *Bro goz va Zadou Keranna le 26 Juillet 1926.*

Y. LE MOAL,
Président du *Bleun-Brug*.

E. LE NESTOUR,
Président du *Bleun-Brug vannetais*.

Pour tous renseignements, s'adresser à M. Milon, trésorier du B.-B. vannetais, 6, rue du Maréchal Foch, Vannes, ou à M. l'abbé Rio, 6, rue Noé, Vannes.

Les séances d'étude se donneront à la Retraite.

Les séances théâtrales de Vannes se donneront au *Cinéma de la Garenne*.

Les prix d'entrée au *Cinéma de la Garenne* seront: Premières: 10 fr.; Secondes: 5 fr.; Troisièmes: 3 fr. A partir du 1^{er} Septembre on ne distribuera plus que des Cartes d'entrée.

Les Cartes du *Bleun-Brug*. — 10 fr. — ne donnent droit qu'aux séances et aux représentations du Congrès à Vannes, ainsi qu'aux auditions du jeudi matin à Sainte-Anne.

Toutes les représentations de l'après-midi du jeudi sont payantes même pour les membres du *Bleun-Brug*.

Prix des places des séances du jeudi après-midi:

I. — Théâtre NIKOLAZIG: chaises: 20 fr.; nef centrale: 10 fr.; bas-côtés: 5 fr.

II. — Théâtre du Petit Séminaire: Premières: 10 fr.; Secondes: 5 fr.

III. — Théâtre de verdure: Prix uniforme: 2 fr.

Location: 5 fr. en plus quelle que soit la classe.

Les établissements suivants pourront donner logement et pension principalement aux groupes (acteurs, chanteurs).

Retraite, 17, rue du Mené (hommes seuls), 100 lits, — chambre ou dortoir, pension et logement, 15 fr. par jour.

Père Eternel, Place de l'Ancien Evêché (dames seules), 50 lits en dortoir, — pension et logement, 10 fr. par jour.

Etablissement de Sainte-Anne, sur la Rabine, chambres, 2 fr. 50.

Les ecclésiastiques seront reçus au Grand Séminaire.

Pension et logement pour les prêtres, 15 fr. par jour; pour les séminaristes, 12 francs.

N. B. — Pour la pension et le logement à Vannes, s'adresser à M. l'abbé Rio, 6, rue Noé, Vannes.

Pour les séances théâtrales, s'adresser à M. Milon, trésorier du *Bleun-Brug* vannetais, 6, rue du Maréchal Foch, Vannes.

Gouel Maria Hanter-Eost

En-dro da vez o Mamm zantel
E oa e keic'h an Ebestei,
Eno, a bewar c'horn ar bed,
Dre vuzud, douget e oant bet.

Abaoe daou zervez pe dri
Eo aet d'an tienv ene Mari,
Nijet eo pell diouz an anken
D'an dudi a bad da viken.

Goulskoude he c'horf disklabez
A gousk c'hoaz dindan ar men-bez
Ha warnan falc'h lemm ar maro
He deus skoet he zaol garo.

Bodet holl en-dro d'o Roue
An eled a zell euz Doue
O klask gouzout pe seurt ratoz
A ra dezan keit all gortoz.

Neuze Doue a zao e vouez,
Hag en o mesk e gomz a gouez:
« Nijit, ha ra zeuio ganeoc'h
Mari, korf hag ene, d'ar peoc'h ».

Hag int, en o fenn sant Mikel,
D'an traon, d'ar red, a daol-askell...
Hag ar Werc'hez kelc'het ganto
Warzu an nenv a bign ato.

Plac'h hep he far, e barr an oad,
E toug eur rozenn war he zroad,
Eur gurmenn aour war he bleo,
Ouz eur Rouanez henvel eo.

« Piou, eme ar zent, eo hounnez
A bign ahont, el levenez ?
A bign en tu all d'ar stered,
Harpet war he muia-karet ?

Na tal an heol, na dremm al loar
N'eo warno ken lafrus o gloar;
Piou 'ta eo, eme an Eled,
Na pegen kaer eo da welet!

Tostait, eme an Tad dezi,
D'eoc'h an tron uhela em zi,
Va Mab, o Merc'h, e peus douget
Ha gant ho laez e peus maget.

Tostait, va Mamm, eme Jezuz,
Echu eo hon doaniou gloazuz,
Evidoc'h ez eus em falez
Eun tron dispar graet gant perleuz.

Tostait, eme ar Spered glann,
O pried fur, o pried glann,
Rouanez an nenvou ez oc'h
Ha da virviken e vezoc'h ».

**

Ha pa glaskas an Ebestel
Er bez korf ar Werc'hez santel,
Korf ebet mui ne oa eno,
Hag ar joa a grogas enno.

O va Mamm, o va Rouanez,
Chach da yugel d'an nenv ganez,
Yeo ar c'hlaçhar a zo pounner,
Deus d'am c'herc'hat, Gwerchez tener.

Pell e kavan aman gortoz,
Digor d'in dor ar baradoz,
Digor d'in feunteun an dudi,
Rag mall eo ganen nijal di.

J. L'HELGOUACH, O. M. I.

AR BLEUN-BRUG

HAG AR C'HEVREDIGEZHIOU BREIZEK

E pep rann-vro a Vreiz, ez eus bet, hag ez eus bepred, Bretoned hag o deus labourer, studier, skriver, prezeget, evit rei da anaout o Mamm-vro ha lakaat da nevezi, da greski ar garantez eviti. Grêt o deus hag ober a reont ivez al labour-ze evel kristenien; ne garfent ket pourchas netra evit Breiz a gement a c'hellfe nozout ouz ar relijion. Ar Vretoned kalonek-ze a oa chomet betek hen o-unan, dispartiet pep hini en e gorn-bro, ha n'en em anavezent nemet diouz a-bell ha ne oant ket evit lakaat, evel m'o dije bet c'hoant, o labouriou da glota an eil gant egile. — Setu deut ar *Bleun-Brug*, ar *Bleun-Brug* hag a zo war an hevelep tro, unan ha meur a hini, a zastum an holl-rann-vroioù en unan hag a lez, koulskoude, gant pep hini anezo, frankiz da labourat hervez he doare. Ar *Bleun-Brug* a gemer war e gont al labour grêt betek hen e pep rann-vro hag a ro d'ezan eur spered ledanoc'h, a laka ennan eur vuhez uheloc'h, a ro lusk, a ro ton, a ro mouez ha galloud d'ezan. Setu eno petra ra ar *Bleun-Brug* bep ma astenn e gammejou dre Vreiz, diazezan, unani, nerzan an Emzao breizek kristen.

Ar c'hevredigezhioù all a grou kevrennoù hag a zastum enno tud a bep doare, da bléal pe gant al lennegez, pe gant ar muzik hag an ijinou kaer, pe gant ar madou. Ar *Bleun-Brug* en em gemer en eur stumm dishenvel. An dud-ze a bep doare ez a d'o c'haout en o bro, Treger, Leon, Kerne, Gwened, Breiz-Uhel; kinnig a ra d'ezo ar benviou labour en deus ijinet hag a zo, betek breman, vit adsevel ar *spered* hepken, — ti-gwerz leorioù brezonek, *Breuriez ar Brezoneg*, Kannad brezonek, Teatr brezonek, Kendalc'hiou ha gouelioù brezonek, hag e lavar d'ezo: « Grit impli gant kement-se holl hervez an doare a zere ar gwella ouzoc'h, gant ma talc'hoc'h bepred ho sellou war ar mezoioù a die sturia peb ezel eus ar *Bleun-Brug*: ar spered kristen, ar spered broadel.

Eun dra c'hoaz hag a zo d'ar *Bleun-Brug* ha n'eo nemet d'ezan: ar c'hevredigezhioù all a vod tud a bep kredenn hag a bep stad; — ar *Bleun-Brug* a vod ivez tud a bep stad, nemet e c'houlenn diganto kaout holl an hevelep kredenn, ar gredenn gatolik. Ken lies a stad, a oad, a vicher, a renk, evel ma 'z eus e Breiz, met eun hevelep kredenn d'ezo. Goulennet zo bet: Met petra rit-hu eus ar Vretoned digredenn hag a zo gwir Vretoned, kalz anezo? — Ar *Bleun-Brug* a fell d'ezan lakaat ar relijion e kont evit adsevel ar Vro ha ne c'houlenn nemet aotre da lavaret d'ar Vretoned: « Aman, ne zigemerer nemet Bretoned hag a vefe katoliked war an

hevelep tro... » Aotre a lez, d'e dro, gant ar Vretoned digredenn, da zevel kevredigez etrezo hag en em glevet ganto a fell d'ezan en o c'hevredigez. Met evel ma ne adsaver ket eur vro hep relijion, evel m'eo ar relijion gatolik ar gwir hini, ha bet hini Breiz a-viskoaz, setu ma rank ar *Bleun-Brug* troc'han krenn etre ar Vretoned a gred hag ar re ne reont ket. Breiz breman, gant an niver a gredennou pe, kentoc'h, a amgredennou a gaver etouez an dud, a zo eur Vreiz oc'h en em zizoher, oc'h en em zispenn, oc'h en em zismantri; ar stad a amgredoniez-ze n'eo ket eur wellaenn eo, nag eur bazenn da gas da welloc'h, met eur stad dister hag a gas bemde warzu disteroc'h, betek pal ar maro. Ac'hano, ne adsaver ket nemet dre ar Gredenn eün, rik, kalet, dre ar Feiz unanet start gant Breiz.

Ret eo d'ar Vretoned anzañ, hep digareziou, eo eno eman ar wirionez, ha penôs hon deus gwir da zevel eur gevredigez war eur seurt diazez. Labourint ahendall, ma kavont gwell, da lakaat anaout ha karet o bro; ne vezimp ket a-du ganto; met enebiez ne vezo ket ivez etrezomp, gant ma taolint evez ouz kement-man hag a zo disklêriet gant *Abalor* en e leorig: *Après Carentoir*, talvoudus kenan da lenn.

... « D'accord avec MM. Le Moal et Brochen pour n'ouvrir les portes du *Bleun-Brug* (ce qui s'entend parfaitement) qu'à des catholiques convaincus et pratiquants, J.-P. Calloc'h eût-il adhéré à l'interdiction faite aux « Brughers » de collaborer dans les associations, jusqu'ici respectueuses de notre Religion Nationale, avec des personnalités non catholiques, mais dépourvues de toute haine et de tout prosélytisme anti-religieux ? Où iront les patriotes bretons non catholiques ? N'en déplaise à MM. Le Moal et Brochen, il en est... A l'heure où l'on doit faire appel à toutes les forces morales encore vivantes, à l'heure où 80.000 citoyens réclamaient, seulement, à Landerneau, le Droit Commun, c'est avec tristesse que nous voyons une association issue d'un effort commun, refuser la collaboration des siens à toute « renaissance intellectuelle », chose éminemment humaine et « temporelle », qu'elle n'aura pas estampillée ».

Setu eno unan eus ar gwsa rebechou bet grêt biskoaz d'ar *Bleun-Brug* hag e tisklêrian anezan war e hed, evel m'eo kouezet diouz pluenn hor c'henvroad ha mignon *Abalor*.

Da genta, lavaromp penôs an art. VIII hag a zifenne ouz ar vleun-vrugerien rei o hano da gevredigeziou all hag a vije *neutr* a-ratoz kaer, a zo bet chenchet ar geriou anezan; — « ezel a c'hello bezan d'ar *Bleun-Brug* kement Breizad a asanto gant e *Reolennou* »; difenn an art. VIII a zo bet lemmet eta; *perak*? Adlenmit aman, uheloc'h, ar skouer a gemer *Abalor* evit lakaat e rebech da spega

muioch: ET E VIJEMP A-ENEB da SPERED AN UNVANIEZ KATOLIK. Hogen, ar rebech-ze ne splod ket. *Bleun-bruger* ebet, ne nac'ho ober empleo, *eus an eil kevredigez d'eben*, gant Bretoned ha, daoust d'ezo da vezad digredenn, a zifenne an « Droit commun », a-unan gant ar gatoliked; rak red eo teuler evez penôs ar Vretoned-ze, « personnalités non catholiques mais dépourvues de toute haine et de tout prosélytisme anti-religieux », tud hag a zo lod eus ar « forces morales encore vivantes » e komz anezo *Abalor*, red eo teuler evez eta *penôs an dud-ze n'int ket neutr*: enebi a reont ouz al lezennou laik a grign pep buhez, pep kredenn, peb onestiz... bezan int lod eus ene an Iliz ha tostoc'h d'ezi eget ne zonzj ganto. Perak eur bleun-bruger, ma en deus digarez mat, ne gemerfe ket pers en eur gevredigez hag a verk en he Reolennou eman, da vihana, evit an « Droit commun », da lavaret eo, e fell d'ezi he defe an Iliz katolik gwiriou keit ha keit gant pep kredenn ha pep relijion all? Gwell eo, koulskoude, ne vefe ket darempred etrezo hag ar *Bleun-Brug*, nemet eus an eil d'eben, dre gannaded dibabet evit ze, pegwir ar *Bleun-Brug* eo e venoz goulenn 'vit an Iliz katolik muioch evit an « Droit commun », ma vezo savet, dreist d'ar re all, er renk a zo dleet d'ar Wirionez hepken. Da betra ez afe bleun-brugerien da rei o hano, a-benn kaer, d'eur gevredigez hag a laka an Iliz en eur pal izeloc'h 'vit n'ez eo dleet? Diazez an « Droit commun » a c'hell rei digarez d'ar *Bleun-Brug* evel kevredigez, da henti kevredigeziou all, 'vit ober ganto labour vreizek, nann, avat, da gaout an hevelep izili, evel pa ne vefe kemm ebet etre an eil hag eben. Forz penos e vo disklêriet an art. VIII, ar spered anezan a chom bepred, da lavaret eo, n'eo ket eun dra eün, eun dra da vezan *kemeret da lezenn*, ez afe eur Breizad katolik en diou gevredigez, unan katolik rik evel ar *Bleun-Brug* eben oc'h anzav hepken an « Droit commun ».

An dra-ze n'eo ket reiz ha n'hell bezan nemet gouzanvet, da lavaret eo, aotreet eur wech bennak... *Bleun-Brug* ebet ken, ma tec'her ac'hano, pegwir *Feiz ha Breiz* eo e ziazez.

E gwirionez, an Iliz, daoust d'ezi da voda tud a venoziou dishenvel en Unvaniezou katolik, he deus, a-ziavêz d'ar strolladou-ze hag a zo diouz doare hon amzer, strolladou all a zo a beb amzer, a gemer lod ivez en Unvaniezou katolik, nemet ez int diazezet, ahendall, war ar menoz ha war ar vuhez kristen rik. En eun doare bennak evelse, ec'h intentfen darempredou ar c'hevredigeziou breizad etrezo, nemet ne ziskennfe hini anezo diouz an tu kristen, izelec'h eget an « droit commun ».

Hennez ar c'hember hag e c'hell hon holl gwaziou en em gaout ennan, ma karont, hag unani o nerz da bourchas, evit mad Breiz, kement a zo boutin etrezo.

Ha breman, pegwir *Abalor* a varn hel labour hervez ar pezh en dije kavet mat pe fall J.-P. Calloc'h, me gred e

c'heller, dreist-holl en deiz a hirtio, respont evellen d'ar gouleann a rea breman souden.

« Ya, mat en dije kavet Calloc'h an difenn grêt, — hep droug nag enebiez, — gant an art. VIII, rak, anez, ne lakomp ket hon oberou da gorda gant hon lavariou. N'eo ket d'ar *Bleun-Brug* eo diskenn da ginnig darempred d'ar c'hevredigeziou ha n'int ket eus an doare gantan; d'ar re-man 'n hini eo *sevel*, da vihana, betek tachenn an « droit commun » d'ober eno eun emgleo leal ha sklêr, evel ma tere ouz Bretoned hag o deus, gozik holl, e goueled o c'halon, miret feiz o zadou koz.

E.-A. MOAL.

L'Emgleo Sant Iltud

serait reconnaissant au Cercle Celtique de lui trouver un représentant bénévole qui accepterait d'exposer les ouvrages bretons de la Société à l'exposition de la Bretagne à Paris — Hall du « Petit Journal » — 61, rue La Fayette, d'en assurer la vente, de recueillir les commandes, de distribuer la publicité.

Ecrire à M. Yves Drézen, 4, rue du Château, Brest.

Les Actionnaires de l'E. S. I. sont convoqués en Assemblée générale à Brest, 4, rue du Château, le 20 août 1926, à 14 heures.

Le Conseil d'Administration.

BRETONED, mar karit ho Pro, evel ma livirit, klaskit eta

LENNERIEN,

KOMZERIEN,

PREZEGERIEN,

KANERIEN,

da vont da Geranna d'ar 16 a viz Gwengolo a zeu da gemeret perz e kenstrivadegou ar Bleun-Brug.

Tud yaouank,

paotred ha merc'hed, pleustrit, a-zevri, war genstrivadegou ar *Bleun-Brug*, bet moulet war *Feiz ha Breiz* miz Genver, m'ho po priziou da gaout e *Santez Anna Wened*, d'ar 16 a viz Gwengolo a zeu.

Leve Breiz e Rom

Daoust ma n'oa ket kement he ec'honder ha meur a vro all, Breiz he deus bet he iliz hag he zi, e Rom, evel rouanteleziou brasa ar bed kristen.


I. — *Penaos eo deut d'o c'haout?*

Er XVvet kantved, Breiz, renet gant Duked kristen ha distag c'hoaz diouz ar Frans, oa pinvidika bro a oa en Euprop: « Neuze, eme Alan Bouchart, ar skrivagner koz, ar Vretoned a oa kement a zanvez o treuzeuler etre o daouarn, ma n'oa ket eur geriadenn ha ne vije ket kavet a listri arc'hant enni a-vernioù. » Ne deuet ket d'an iliz da vadezi eur c'hrouadur heb eur plad hag eur picher arc'hant da lakat dour d'ar beleg da walc'hi e zaouarn, goude ar vadiziant; an arrebeuri, en tiez, a oa, e dero, ha kizellet kaer; ar presou a oa karget a lien; an dilhad sud, e mezer fetiz, a veze broudet gant neud aour pe arc'hant; ouz hanou an heol, oa eun dudi gwelet ar boukleier, arc'hant o skedi war dokou ha bouteier ar wazed hag ar c'hroaziou aour o lugerni war vruchedou ar merc'hed, ha ma oa danvez en tiez n'eo ket dre ma vijet re biz en holl oa; brokus oad e kenver an A. Doue; ar zent a lakad en ilizou, e lec'h beza e pri, evel breman, a oa neuze e maen hag e koad, pa ne vezent ket en arc'hant hag en aour; kement a ilizou, a japeliou, hag a galvariou a zo bet savet en amzer-ze, dre bevar c'horn Breiz, ma n'eo ket bet gouest bugale vihan ar re o diazezas da zerc'hel an hanter anezo en o sav, ker paour e oant deuet da veza o lezel re all da c'houarn, en o lec'h peadra o zud koz. An neb en defe poan o kredi kement se n'en deus nemed ober tro Vreiz ha sellet en dro d'ezan: ilizou meur hor bro, daoust peger blonset int bet gant morzoliou digristen an Dispac'h, a zo c'hoaz testenioù hep par eus Feiz ha pinvidigez Breiz en amzer he Duked.

Breiz, en amzer-ze, a ouie derc'hel he renk e pep lec'h; bugale he devoa hag a glaske he mad, met nebend a zo bet oc'h ober kement eviti hag ar c'hardinal Alan Goativy, tiab brudet Koad-Lestremeur, e Gwiniventer (1). An den-chenil-man ganet d'an 8 a viz du 1407, a voe hanvet, yaouank flamm da eskob, e Avignon, d'an 30 a viz here 1437; d'an 20 a viz du 1448, ar Pab Nikolas V hen hanvas da gardinal hag a lakeas iliz santez Praxedez, e Rom, en e gang; da varo Nikolas V, er bloaz 1455, e oa hano da hen-

(1) Ar c'hornad eus Gwiniventer eman ennan Koad-Lestremeur a zo bet distaget abada diouz ar barrez-ze da ober parrez nevez Sant Derc'hen, Mamm ar c'hardinal Katell ar C'hastell, a oa ginidik eus a Wifalmeze.

vel, en e lec'h, ar c'hardinal Bessarion. Koativy a enebas muia ma c'hellas, hag a reas henvel. Pab ar c'hardinal spagnol Alfons Borgia a gemeras an hano a Galixt III. D'an 22 a viz genver 1456, ar c'hardinal Koativy a voe kaset gand ar Pab daved roue r Frans Charlez VII, d'e bedi da vale eneb an Turked o doa kemeret Konstantinopl d'an 29 a viz mae 1453. Charlez VII a lavaras eleiz a gomzou kaer, met ne roas ket eun den ha ne ginnigas ket eur gwenneg!



Bez ar c'hardinal Koativy e iliz santez Praxedez.

Laouenoc'h digemer a gavas ar c'hardinal pa zeuas e Breiz, evel kannad ar Pab ivez, da ren gouel kenta sant Visant Ferrier, e Gwened, d'ar 5 a viz mezeven 1456; kana a eure oferenn ar zant nevez ha goude an Aviel e voe embannet, e latin, e brezoneg hag e galleg, e oa laket Visant Ferrier, prezeger bras ar varn ziveza, war roll ar Zent.

Goude beza bet eskob e Palestrina, Alan Koativy a varvas eskob e Sabina, d'an 22 a viz gouere 1473; ar c'hosa den a oa war an douar n'en doa ket gwelet biskoaz ober kement a enor da eur c'hristen evel ma voe graet d'ezan p'edod o kas e gorf d'ar bez. Sebeliet e voe e iliz santez Praxedez hag e traon e vaen-bez e leuner an emskrivadur-man:

Sedente Xisto III

*Alanus Eps Sabinensis, Ec. Ro. Cardinalis,
Nobiliss, in Britonibus Coetivor gente natus,
illustri legatione ad Gallos pro fide functus,
cuius vita exemplum virtutis
actiones autem privatim et publice salutares fuere
hoc monumento conditus est.
Vix. an. LXVI. men. VIII. Dies XV.
MCCCCLXXIII*

Epad m'edo e Rom, Koativy ne ankounnac'heas ket e vro; war e c'houlenñ eo e lavaras Nikolas V, d'ar 24 a viz Gwengolo 1454, rei iliz sant Andre-ar-varbrierien d'ar Vretoned; hag o veza ma varvas a-raok m'oa laket e gomzou da dalvezout, an hini a gemeras e lec'h, Kalist III, eo a zinas, d'an 20 a viz ebrel 1455; d'an deiz end-eeun ma voe kurunet Pab, ar paper a roe a-leve, da virviken, ar iliz-se d'ar Vretoned. An iliz-ze a oa flall; Koativy a lakeas he c'hempenn en enor d'an Aotrou Sant Erwan hag adalek neuze e voe hanvet *Sant Erwan ar Vretoned*; staga a eure outi ivez eun ti e c'hellfe ar Vretoned a 'z afe da bandona da Rom ober o diskenn emman: ti Breiz hag iliz Breiz a oa savet e Rom e kichen Kador sant Per; Bretoned all a heulias skouer ar c'hardinal hag stagas leveou ouz iliz sant Erwan evit kaout pedennou ennt goude o maro: e bloaveziou kenta ar XVIvet kantved iliz Sant Erwan he doa 15.000 lur leve — ar pezh a dalvezfe breman da nebeuta dek gwech muoc'h — ha 1.300 oferenn a dljed lavaret enni, bep bloaz, e kichen heziou ar Vretoned o doa o goulennet.

II. — Petra eo deuet an holl vadou-ze da veza ?

Keit ha m'int bet gouarnet gant Bretoned int bet aet war gresk; er bloaz 1532 e voe staget Breiz ouz ar Frans; adalek neuze, ne voet ket bet a-wel anezo ken; ar C'hallaoued a zastume ar gouel-mikaeliou, met ne reant goude-ze kempenna ebet ganto, d'an iliz; koulskoude, an Dispac'h ne laeras ket leveou sant Erwan hag eur person breizad a jomas e penn-e iliz betek ar bloaz 1824.

En eul lizer skrivet d'an 19 a viz mae 1845, d'an Aotrou Graveran, Eskob Kemper, gand eur beleg yaouank oc'h ober e studi e Rom, an A. Leopold a Leseleuc, — a dlhe mervet eskob e Autun er bloaz 1873, — e welomp petra eo deuet da veza leveou Breiz e Rom ha penaos int bet aet e skuilh hag e ber:


Le jour que je choisis pour renouveler entre les mains de Votre Grandeur la promesse d'obéissance que le Vicaire de Sa Sainteté a reçue pour elle, apporte au sentiment de mon ardent amour pour le pays où je suis né une vivacité nouvelle, et j'éprouve aujourd'hui plus que jamais que le sang breton ne se refroidit pas pour s'éloigner de la Patrie. On célèbre ici, comme à Quimper, comme

à Tréguier, comme à Louanec, comme dans toute la Bretagne, la fête de saint Yves et c'est dans notre *Eglise nationale* que j'ai offert ce matin le Saint Sacrifice, en priant Dieu de ne point laisser arracher sa foi à un peuple qui a tant fait pour la défendre et la conserver pure. Hélas! Monseigneur, j'ai trouvé au pied de cet autel, presque abandonné depuis quelques années, des pensées amères et un contact cruel entre le présent et un passé qui n'est pas loin. Je me suis promis de déposer dans votre cœur paternel un chagrin que partagent avec moi tous les Bretons qui ont visité Rome dans ces derniers temps.

Au commencement du xv^e siècle, le Pape Calixte III, si je ne me trompe, donna à notre Nation une des plus vieilles églises de la ville. Aussitôt elle fut mise en état de servir au culte; des fondations très importantes y furent faites, et la générosité que nous avons toujours eue pour les choses de Dieu, malgré notre pauvreté d'ancienne date, eut bientôt trouvé moyen de bâtir plusieurs maisons pour nos pèlerins et nos pauvres, de fonder et de doter un hospice pour nos malades. *Saint-Yves-des-Bretons* devint une paroisse et, comme toutes les nations de l'Europe, la nôtre fut représentée auprès du tombeau des apôtres; elle y eut sa modeste résidence pour les jours de Pèlerinage ou de persécution. Après la réunion (1), nos établissements, comme ceux des Lorrains, des Bourguignons, etc., devinrent Français, et furent confiés à l'Administration dont l'Ambassade est le centre. On peut bien voir aujourd'hui que, dès les premiers jours, ou peu s'en faut, la protection de notre nouvelle métropole ressemble singulièrement à celle du Seigneur de Lafontaine. Notre Eglise fut négligée, laissée sans réparations, et, si l'on peut encore assez admirer son magnifique pavé de mosaïque et ses colonnes de granit, c'est que tout cela était à l'épreuve d'une longue négligence. Cependant la révolution de 93 elle-même ne nous dépoussa pas entièrement. Il y eut toujours un recteur breton à Saint-Yves; nos maisons et notre hospice furent loués au profit de Saint-Louis-des-Français, mais enfin elles restèrent; nos 12 ou 15.000 livres de revenus se conservèrent; les 1.300 messes fondées à perpétuité par la piété de nos ancêtres furent célébrées près des tombeaux où j'ai lu les noms celtiques des fondateurs; Saint-Yves était toujours une paroisse, et, par conséquent, une Eglise vivante et fréquentée. Aujourd'hui, Monseigneur, ce n'est plus qu'un bénéfice en commande, et, si j'en crois certains bruits, nous sommes menacés d'être plus dépouillés encore que nous ne le sommes. — En 1824 (car la consommation du mal que je viens dénoncer à Votre Grandeur n'est pas plus ancienne) on obtint du Souverain Pontife l'autorisation d'acquitter dans l'Eglise de Saint-Louis les fondations Bretonnes, et Saint-Yves fut fermé, au grand mécontentement du quartier qui se trouvait compris dans la circonscription d'une paroisse plus éloignée. Mais il est vraisemblable qu'aucune réclamation ne fut faite au nom des propriétaires de l'Eglise; elle fut donc close et abandonnée. En 1842, on pensa à reconstituer l'ancienne communauté de Saint-Louis, en obligeant les chapelains à la vie commune; plusieurs de ceux-ci, presque tous Corses, s'étant montrés peu disposés à subir la nouvelle loi, on chercha le moyen de s'en débarrasser, et la rectorerie de Saint-Yves fut rétablie pour y placer un de ces prêtres. — Je dois dire en passant, que, tout Corse qu'il est, sa voix est la seule qui s'élève pour réclamer au moins quelques uns des droits de notre Eglise; mais vous comprenez, Monseigneur, que ce n'est pas une grande Autorité. Il y a quelques semaines, plusieurs de nos compatriotes, MM. de Kerguelen, Donquer, de Kermenguy, Le Vicomte, etc., allèrent y célébrer la Sainte Messe, et ensuite se rendirent en corps chez M. Lacroix, clerc national de France, pour lui demander que l'on fit au moins quelques réparations à notre Eglise. Mais je suis convaincu que, cette fois encore, on s'en tiendra à de belles paroles. Déjà deux maisons, dont l'une était notre hospice, ont été vendues à l'Eglise des Portu-

(1) C'est-à-dire après le traité d'Union de la Bretagne et de la France de 1532. N. D. L. R.

gais pour le prix de 800 piastres ou de 42.000 fr.; une troisième est louée par bail emphyteutique, ce qui ressemble bien à une aliénation: il ne se dit pas dans l'Eglise d'autre messe que celle du Recteur, et aujourd'hui, jour de saint Yves, je m'y suis servi d'un calice de cuivre, et d'un ornement troué. Enfin, il est dit-on, question d'abandonner l'Eglise à une confrérie d'avocats.



Ordral Iliz sant Erwan ar Vretoned e Rom.

Je crois, Monseigneur, qu'il serait très facile d'obtenir, sinon complète justice, au moins quelque respect pour les intentions les plus essentielles des fondateurs. Si Votre Grandeur confiait le soin de cette affaire au patriotisme de MM. de Carne, du Dresnay, et autres députés Bretons, je suis convaincu que le ministre des Affaires Etrangères consentirait à ordonner que des réparations fus-

sent faites à l'Eglise de Saint-Yves, que l'on prélevât pour son entretien au moins une partie des dix mille francs de revenu qui lui restent, encore, enfin que les 1.300 messes qui doivent s'y dire annuellement cessassent d'être acquittées dans une autre Eglise.

J'ai cru de mon devoir, Monseigneur, de révéler à Votre Grandeur un état de choses qui blesse autant la justice que le sentiment national dont les Bretons sont universellement animés. Je serais heureux, si je suis encore à Rome lorsque vous viendrez, de vous conduire sans éprouver un trop vif chagrin, à cette Eglise que vos prédécesseurs ont sans doute chérie, et de lire avec vous sans éprouver une sorte d'indignation ces mots qui peut-être furent gravés à son fronton par un Evêque de Quimper: « Sancto Ivoni, pauperum et viduarum advocato, Natio Britanniae dicavit ». (Archives de l'Evêché de Quimper).

Ar pezh a ranne kalon an A. Leseleuc n'oa netra e skoaz ar pezh a dlie en em gaout divezatoç'h: er bloaz 1875, war zigarez ledanaat an hent, iliz Sant Erwan ar Vretoned a voe diskaret hag en he lec'h e voe savet an ilizig striz a weler breman gand ar geriou-man skrivet e lizerennou bras a-zioç'h he dor-dal :

Deo sacrum in hon S. IVONIS Presb. Advocati pauperum.

Kinniget da Zoue en enor da sant Erwan beleg hag albo-kad ar beorien.

« Ar chapelig nevez-ze, a skriv d'eomp eur mignoñ eus a Rom, a zo evel eun aluzen graet d'eur vro koezet ivez en he foull. Eur chaloni eus Sant-Loeiz-ar-C'hallaoued a lavar bemdez an oferenn war aoter hor zant. Tro dro d'ar zant e-unan, war al livadur a zo a-zioç'h an aoter n'ez eus nemet sent gall: sant Bernez, sant Loeiz, santez Jenovefa, santez Jann d'Ark. Divroet eo, diou wech divroet, hen hag en doa dastumet gant karantez « *bleuniou Sent* » e vro (1).

N'en deus ket eur c'henvroad, unan hepken, en dro d'ezan; abaoe warlene, da vihana, da zeiz e c'houel, kloareged: vretou Rom a ya d'e bedi hag a gan d'ezan ar veuleudi a gavoc'h aman warlerc'h. »

Meulgan da Zant Erwan

(*Kanet gant Breiziz Rom, evid ar wech kenta, d'an 19 a viz Mae 1925.*)

Diskan :

Ni holl ho meul, ni holl ho kar,
A greiz hor c'halon, ni a lar
Meuleudi d'eoc'h, o sant hep par.

(1) Ar vuhez ar Zent ze, skrivet, e brezoneg, gant sant Erwan, a zo kollet, siouaz !

1

Ne 'z eus e Breiz, nag e nep lec'h,
Sant all ebet a vefe trec'h
E barr an nenv da nerz ho prec'h.

2

Ne 'z eus, nep lec'h, sant all ebet
A ve ken karet dre ar bed
Ne 'z eus ket c'hoaz ha ne vo ket.

3

C'houi eo a zo mellezour splann
Ar re a zalc'h a-uz d'ar c'hann
Bannielou gwenn ar gwir er vann.

4

Eur barnet rik ha koulz breutaer
A vije trec'h hep beza daer :
Ar re-ze eo hoc'h hanvou kaer.

5

Dalc'h mat e vev e kreiz o doan
Frealzer kunv an dud e poan
Ha skoazell start ar beorien wan.

6

C'houi ziskouez d'eomp an hent a rank
Ar beleg heuilh da vlenia stank
Eneou glan a-uz ar fank.

7

Ha d'eomp-ni c'hoaz c'houi zesk ouspenn
Penaos e tefe kas da benn
Eur c'hloareg mat e studi tenn.

8

D'an holl ho skouer a lar trei kein
D'ar bed ha d'e blijadur brein
'Vit mont d'an nenv dre an hent drein.

9

Koulskoude darn, er Feiz a vrall,
Kostezia reont war an tu fall,
Ar bed o zouell, an acour o dall.

10

Dre nerz ho pedenn, Paeron Breiz,
Ra jomo sanket en hor c'hreiz,
Gwriziennou doun ha yac'h hor Feiz.

Daoust d'an dud drouk a skriñ o dent
Ra jomo Breiz ar bobl a zent,
Ar bobl a bed, gwir vro ar Zent.

**

An noz a deu, kent mont en dro
E laromp c'hoaz, o Tad hor bro
Meuleudi d'eoc'h ha kenavo...

Ar ganaouenn-ze savet (1) gand an A. J. Kerrien, eur c'hloareg eus a Zant Thegonnec, bet beleget e Rom d'ar 25 a viz gouhere diveza, a laouennaio, da vihanan, bep bloaz, hiviziken, kalon sant Erwan, en e iliz broadel, da zeiz e bardon.

Eun oferenn ouz Aoter Sant Erwan a vez lavaret bemdez e Rom en eun iliz hag a zo d'eomp: n'eo ket neneur a dra a lavaro darn, mete naz a vrotou hag a zo eun tamm mat brasoc'h ha n'o deus ket hanter kement; neo ket neneur a dra, met ar pep reta a zo chomet: ar bedenn evit Breiz hag evit Breiziz: dindan gliz ar bedenn e weler pep tra o nevez.

Y.-V. PERRQT.

(1) Savet eo war don « Peger kaer ez eo Mamm Jezuz » met ar barz en deus taolet evez bras da lakât pouez ar ger da goueza en e lec'h hag evelse n'ez eus ket a draon evelhen.

*Pegen kaer ez... éo Mamm Jezuz
Pegen mat hà... m'adelezuz*

rak traou evelse a vije dileet o c'hempenn hag o renka a-nevez, ma 'z eus c'hoant e kendalc'hfet d'o c'hana.

Tadou ha mammou

it, d'ar Bleun-Brug,

da Geranna, d'ar 16 a viz gwengolo a zeu,

gant ho pugale hag ho tud koz,

gwisket holl en ho kaera, ha diskouezet eno, dirag ar bed, n'ema ket Breiz o vont da ziskenn en he bez, c'hoaz!

Santez Anna a vo kel laouen ouzoc'h ma teuo d'ho tiambroug war dreujou he iliz.



A zehou hag a gleiz... War an hend

Etre Kemper ha Pont-Abad, 'z eus eur « c'hantonier ha n'eo bet kavet morse e c'houezenn da brena: Yann Vari a raer anezan hag eun tamm mat a vigoudenn zo dioutan.

« Ma zad, a lavar hen, en doa unnek krouadur. Kalz a spered a rannas etrezo ha muioc'h c'hoaz a zal'has gantan ».

Mar d'eo gwir ar pezh a gonter diwar e benn, ne flemm e deod nemet pa c'hell ive.

Troc'hi a ra kemend a wel ha ne wel ket diwar goust ar re a zo war e hend-ha kalz ez eus. Pa n'eo henman, eo hennez, unan bennag a vez ato o vont ebioù, o konta pemp ha nao en eur dremen hag hor Yann Vari ne c'houfenn ket gwelloc'h eget kas an dorz d'ar ger.

— Kantonier, da belec'h e ya an hend-man ?

— Mar plij, Otrou, an hend-man ne ya da nep lec'h; aman e chom.

— Goap a res, kantonier, eus finoc'h egedout. War ar post-koad eo skrivet.

Evel a giri, otrou, c'houi oar lenn marteze. Evidoun me a zo war an hend abaoe ar mintin, ha na ma bern mein na ma zamm tra n'o deus finvet eus eun troatad. — Chans vat !

Dal a unan.

— Kantonier, pegeit amzer, mar plij, evit mont eus Pluguen da Pont-'n-Abad ?

... Respont ebed...

Bouzar eo ta !

— Kantonier, pegeit amzer evit mont eus Pont-'n-Abad da Bluguen ?

— Respont ebed c'hoaz.

Mut eo eta?... c'hellit beza sur, pa wellin ar Bail, e kontin d'ezan e *bater noster*, pe d'ezan pe d'e wreg, pe d'ezo o daou... Penaos ? lakât war an henchou tud mut pe bouzar. Eun druêz eo. Dran, Doue ! kemend man a zo da veza embannet er *C'hourrier*. Korantin mar d'eman c'hoaz e penn an traou, en deus eul lizer da gaout diganin, a c'hras Doue, ma merc'h Mari Janig a oar skriva hag a fardo d'id eun tammig « s'il vous plaît ».

Hag an otrou kwit droug ennan, tiz warnan. E dreid a stoke ouz an douar. E zent a skrigne « Kantonieren stoup! mat hepken da dorri mein seiz kwech faoutet dija ha da dorri penn an dud gwelloc'h c'hoaz... Dran, Doue!...

... Hep, Hep, gouestadig! Hep, Hep!

— Piou ar c'heveleg, an istroge! a...

— Me, otrou!

— Me gave d'in e oac'h bouzar ha miut, kantonier di...

— Ia, Ia, c'houi a gav traou ellec'h n'eus ket.. Ma! abenn teir eur ma kendalc'hit da vale evelse, emaoe'h e Ptu-guen; c'houi lavaroc'h... bonjour da dour Sant Keon...

— Ia, Ia, diou wec'h kentoc'h eget mankout. Met perak n'ho peus ket lavaret abretoc'h.

— Ah! Otrou. Ya met d'in e oa da c'houit peseurd tiz ho pije Iaket da vont di. Aze e oa an dalc'h eun hag eun.

Mar am c'hredit, ne iafoc'h ket da lakat ho merc'h Mari Janig da skriva da Gorantin. N'eman mui eus ar bed-man. Aaet eo da welet an Otrou Doue; lavarit avat, eur bater evitan, eun den kalonek e oa; eur Breizad ive hag eur c'hristen betek mel e eskern. P'ho po ezomm da glask penn ous ar « C'hourrier », — pe evit kas ho komanand, ar pezh zo mat pe evit dougen klemm eneb ar gantonieren all, an dra-man zo falloc'h, — skrivit da Youenn an Drezen. Deus Pont-n-Abad eo. Bigoudenn penn kil ha troad eveldomp hon daou, freilh kôz!

Diwar va fenn, avat peuc'h en tu-ze!

Evit ar Bail, kontit d'ezan e damm ha yac'h! Ne rafoc'h re morse. Kemend a zroug en deus grêt d'ar Vigouden-ned... ha d'ar c'hantonieren! Mantrus eo an trouz hag ar boultrenn a ra e garr dre-dan o redeg dre hend Pont-Abad da laerez moueziou war an dud vat... Displantet tout ar vein gantan! Diaoul ar Yeuc'h! — Arabat voti evitan, hein! a-benn an tîl-all. Klevet eo? Neuze e lavarin d'eoec'h pegeit amzer da vont da Gemper, Kastellin, Montroulez ha Bourdel... Da c'hortoz it gouestadig hein! gant aoun da foeltra, ma hend..... Mar plij!

AR C'HERNE.

Soudarded ha mortoloded koz ar brezel braz


it, d'ar Bleun-Brug,

da Geranna, d'ar 16 a viz Gwengolo a zeu, da welet ar bez-meur emacr o sevel eno

d'an 250.000 breizad

a oa er brezel ganeoc'h hag a zo kouezet war an dachenn.

It da lavaret ano anezo da zantez Anna!



K E R N E

Ar c'harrad foenn

Eman ar mêziou en o c'haera. Parkeier ha foenneier, traoniennou ha tuchennou, liorzou ha koajou, kleuniou hag henchou e gwisket ganto o dilhad eureud. Ne glever a bep tu nemet sonerez ha kanaouenn. Lapoused, c'houiled, loened ha tud: ar Grouadelez-a-bez, n'he deus nemed eur vouez da ziskleria en diavez al levenez zo en diabarz.

Du-ze e traon ar stankenn, ne glevit ket ar men-higolen o vont en dro, ar morzol o wellaat (1) ar falc'h? Boule'het e ar foenneg. Ne vo ket pell, e vo ledet ar yeot war ar prad, eostet ha krazet ha sec'h ar foenn da vont ebarz, ar c'harr.

Piou a ray ar c'harrad foenn er bloa-man. Piou a lako ar boked warnan da zont d'al teur? Da biou e vo grêt? Eun dra hag a ra plijadur da lod, displijadur da lod all; hen-man a gav gantan blaz ar per c'houero, hennez blaz an avalou trenk, Yann, blaz krenv ha Per blaz ebed. Aman n'eus ano nemed eus ar c'harradou foenn-ze a ra ar bredeur an eil d'egile hag ar c'hoarezed an eil d'eben. Karrad 'z eus, ken alies tro ma timez en eun ti ar breur pe ar c'hoar yaouank arôg an hini pe ar re gosa... Lezenn ar c'hoari eo eta; ar re yaouank oc'h ober, ar re goz o tapa... (2).

Ma kav lod dies gant o c'harrad, lod all avat n'int ket chalet gant o hini, e giz an hani en deus savet ar zôn-man.

(1) Wellaat : lemma, aiguiser.

(2) E Léon e leverer ober eur c'harrad-lann.

SON AR C'HARRAD FOENN

1

Deut da welet ar c'harrad foënn,
Ar c'harrad foënn zo d'in grêt !
Deut da glevet e ganaouenn,
Ar c'harrad foënn, ar c'harrad foënn !
Deut buan, ô ! deut da welet
Ar c'harrad foënn zo d'in grêt !

2

Ha gantan me zo chichen
Ar c'harrad foënn zo d'in grêt !
Seiz plijadur ha dek ouspenn !
Ar c'harrad foënn, ar c'harrad foënn !
'Vit kant skoued, nann, ne roin ket
Ar c'harrad foënn zo d'in grêt !

3

Ha pa z'in d'an oferenn
Ar c'harrad foënn zo d'in grêt !
Ne ray ket d'in stoui ma fenn
Ar c'harrad foënn, ar c'harrad foënn !
Laouen gantan e vin bepred,
Ar c'harrad foënn, ar c'harrad foënn !

4

Eun dra 'zo a gafen tenn :
Ar c'harrad foënn zo d'in grêt !
Ma ne yafe ket da benn
Ar c'harrad foënn, ar c'harrad foënn !
Aon bras am eus e ve foëltret.
Ar c'harrad foënn zo d'in grêt !

5

N'eman ket mare ar foënn :
Ar c'harrad foënn, ar c'harrad foënn !
A vezo sûr rous pe velen.
Ar c'harrad foënn, ar c'harrad foënn ;
Gant ar glao e liou vo chenchet,
Ar c'harrad foënn zo d'in grêt !

6

Ma vije bet grêt e poent
Ar c'harrad foënn zo d'in grêt !
N'eo'n di (1) talvez kant skoued war n'ugent
Ar c'harrad foënn, ar c'harrad foënn !
Breman, neubeud vo gwerzet
Ar c'harrad foënn zo d'in grêt !

(1) 'n di, evid en divije.

7

Gwerzet vo war an dachenn
Ar c'harrad foënn zo d'in grêt !
Hopet vo warnan a bouez-penn
Ar c'harrad foënn, ar c'harrad foënn !
Rag en inkant e vo laket
Ar c'harrad foënn zo d'in grêt !

8

An hani vo e berc'hen,
Ar c'harrad foënn zo d'in grêt !
'N do « lagout » leiz eur werenn
Ar c'harrad foënn, ar c'harrad foënn
Met kerkent, ranko béa paët —
Ar c'harrad foënn zo d'in grêt !

Per Brelivet, eus ar Skerneg, Plugüen. *qui omnes*

"Foken" di c'houe
Salo e talvez an holl garradou foënn keit hag hani
pôtr Plugüen. Ne vefe ket koll warno fiag o ferc'hen e
lec'h 'n em chala a vefe laouen gant seiz plijadur ha dek
ouspenn. Mont da daeri ne ra nemet prena poan : poan
o taeri, poan o chom taeret, ha poan o tidaeri (1).

Majerieu ha tud koz

Mare ar foënn, mare ar baleadennoù ive. Tomm an
amzer, brao an hend hag 'harr an de, pôtréd ha mer-
c'hied a ia hag a zeu da zul: c'hoant diskwiza ha
muioç'h c'hoaz c'hoant gwelet ha klevet.

Netra kaeroc'h sûr eged an dud o vont d'ar pardo-
niou hed-ha-hed an henchou gant devosion gwirion.
Netra tristoc'h ive eged eur rummad all o tont da glask
ar fest goude ar gouel, an ebatou goude an ofisou.

Netra gwelloc'h evit ar gerentiaj hag ar mignoned
 eget n'em welet. Rak n'em welet 'zo n'em garet. Met ga-
loupat eus an eil parrez d'eben, tremen evel eur gaouad
avel, evel tud o tont, den ne oar eus a belec'h hag o vont,
Doue a oar da belec'h ive, kemend-se ne ket eur c'hoari
eo. Ha talvout ra d'omp kaout daoulagad, ma ne zel-
lont ket, kaout dioukouarn ma n'ouzomp ket selaou ?

Leor ar bed zo digor digazomp. Lennomp ennann. Ar
grouadelez he deus eur vouez hag a gan d'eomp war
seiz mil ton Brasder ha Madelez an Otrou Doue. Ara-
bad e vefe eur Breton hepken saret e skianchou dirag
an traou kaer strinket gant eur gomz diwar dorn an

(1) ta-ri, n'em « facha ».

holl c'halloudeg, ha dientent en eur welet an traou kaer savet ive gant ijin an den.

Bretoned, pa 'n em gavomp gant eur chapel, eur be-
denn mar d'omp tud a feiz! ha mar d'omp tud a zoare
deomp tre d'ober eur zell en diabarz hag en diavéz.

Pa dremañomp dirak hor maneriu koz, dalc'homp
sonj e oa gwechall adrenv o mogeriu an dud chentil
kalonek-se a skuilhe o goad war gemend tachenn-vre-
zel a oa dre Vreiz ha Bro-C'hall. Enno e vije kavet an
dud a benn hag an dud a galon, an dud a zeskadurez
hag an dud a feiz, difennourien an Iliz ha madoberou-
rien ar bobl.

Talvout a ra ar boan klask pe goulenn gant piou eo
bet savet ar maneriu-se ha peseurd gouenn dud he
deus bevot enno a-dreuz ar c'hantvejou. Gwas aze avat,
m'o deus kollet ar vugale eus kalon ha gouiziegez o
zadou. Eston eo pegen dizesk e an dud war istor pla-
nedenn o farrezioù. Ar gwerzioù koz a zalc'he envor eus
an tóliou kaer pe an traou doanius c'hoarveet er vro.
Gwechall peb kemener, peb meiler (meliner), peb klas-
ker bara a zave eur zôn pa droe en e benn. Siouas kol-
let eo ar ouenn anêo hag ar gwerzioù zo eët da heul
ganto ebarz o bê.

Kavet e vez choaz awechou kemend-se eur person
pe eur c'hure da gana o farrezioniz, da liva eun dólenn
eus dremm ar barrez :

« Etre Laz ha Korre, Ederm ha Langolen,
Z'eus eur barrez vihan wardro euneg kant den
Gant mein glaz penn da benn eo toet o zier,
Ar plouz a jom ganto da lakat n'o c'hreier. »

O tremen dre Gerzu, daouzek gwaz o torna
A lakée gant o frailh al leur holl da gana
Startoc'h potred biskoaz, mann zur, n'em eus gwelet
Gant kalon o lopa, o fusta war an ed.

Evelse e tibias (1) eur werz savet gant eur person
eus Tregourez oc'h ober tro e barrez evit ar wech kenta.

Eun amzer zo bet e tregerne ganti stankennou ha
meneier. Hizio emañ-hi o vont da goll...

Kerobezan

Pá z'eus ane eus maneriu, laromp eur ger diwar-
benn unan eus bro « ar Glaziked » maner Kerobezan, e
parrez Brieg. N'ê ket e vefe gwelloc'h eged ar re all, met

(1) Tibias : commencer, partir.

ennan eo ganet eun Eskob, ar pezh ne gaver ket e pep ma-
ner nag e pep parrez. Ha mat e ve da re « Vrieg » kle-
vet an dra-ze, pa ne ve nemet eur wech en o buhe...

Tost d'an hend a ia eus ar vorc'h da Gemper, e ka-
vomp ar maner-ze, eef hizio da verouri. Etrezan hag an
hend, eur pezh bali hurr, enni gwechall c'houec'h renken-
nad gwê kaer. Breman siouas, int eet d'an traon gant
an taoliou-bouc'hal, ha den ebet n'eus bet ar zoni da
lakat re all war o lerc'h. Istor pet harzad koad !

An ti zo eus ar XVI^e kantved. Kempennet eo bet di-
vezatoc'h. Chomet eo bet gantan avat, an nor rond d'he
ficha eul las fennet deus ar vein, arouezioù warnañ.
Dirak ar porz e oa eur voger enni eun nor dal e daou
damm. Dizac'het eo-hi bet. Ne weler mui eus eun tu,
nemet eun bour a dalvez da gouldri hag eus eun tu all,
eun telt, ti borzier ar maner. Adrenv, en eur c'horn eus
al liorz e weler c'hoaz tammou eus ar chapel.

Maner Kerobezan a oa gwechall da ouenn re
Botneur. En amzeriou Loeiz XIV, roue Bro-C'hall,
ar re-man e roas d'an « Tanguyed » tud eus an
nobiansou koz. Daou eus an ti a voe d'ar mare-
ze abad e Landevenneg an eil goude egile. Mén-
bêz an hani kenta, Yann Tanguy, zo c'hoaz miret en
abati, evel ma weler war « Feiz ha Breiz » miz mê.
Mari-Anna Tanguy, pennherez Kerobezan, a zimezas
gant eun den chentil eus bro Lambal, tost da Zant-
Brieg: Fransez Yasint ar Fruglay, ôtrou Kervez. Dont a
reas hen-man da jom da vaner e dud kaer. Meur a
grouadur a doe. Ar c'houec'hvet anêo, Fransez Yasint,
grêt e studi gantan evel eun doktor, a zigemeras an
Urziou Sakr. Er bloavezh 1718 e oa person e parrez vras
Kraon, elec'h m'eo ganet an ôtrou 'n Eskob Graveran.
Grêt goudeze chaloni ha barner bras eskopti Kerne, vi-
kel vras Kemper (1726), e voe anvet neuze (1731) d'es-
kob Tregur.

E oa o paouez diskenn eus kador sant Tugdual eun
den rust an tamm anean, ha kalet e binijenn; an ôtrou
Olier Jegou, a Gervillo. Dizamant e oa eun tammig re
ouz sempladurez an den: dir a oa war e galon; heulia a
rae kelennadurez Jansenius. Gant henman e oa muioc'h
a grisder er relijion eged a garantez; nebeud-tre spe-
red an Aotrou Krist. — N'em skignet e oa e gentelioù dre
an eskopti. Hag an Tad santel ar Pab, evit diskouez d'an
dud ne reent ket mat o lerc'hel pennok d'ezo, a zina-
c'has outo grasou kaer ar Jubile bras...

Labour an eskob neve a oa euna an sperejou ha ja-
kat peuc'h er c'houstiansou.

D'an 11 a viz mê 1732 e voue trônnet eskob e Tregur
gant ar brasa splannderiou. Daou vîa divezatoc'h ec'h
embannas eur gemennadurez da harpa Lizer bras ar

Pañ, al lizer « Unigenitus ». Boda reas holl bersoned an heskopti hag ar re-man, an eil goude egile, a sinas trei-kein a-grenn da Leor ar « Prédicationnou » a oa « Aviel » ar Jansenisted.

Er bloavez 1745 e welomp an eskob o vont da voda-deg-veur beleien Bro-C'hall, anvet da gannad evit Breiz-Izel hag arc'heskopti Tours. An devez diveza eus ar bloa-se, e varvas e Landreger. E santual an iliz-veur e voe laket e gorf en douar, hag eur bê-kaer savet, war-man. Pa darzas an « Dispac'h vras », pôtrede an « Drailh » a gavas anean da zismantri.

E Brieg e chom c'hoaz eun draig bennag eus maner koz Kistinig savet er XV^{re} kantved. Kalz a zouar hag a leve a oa stag outan. An otrounez a oa barnerien ar vro. Unan eus ar re-man a zo ano anean e istor sant Edern hag e garq. Unan all aneo a reas sevel chapel intron Varia « del Populo » e Landudal. Itron Varia « del Populo » pe intron Varia an Niver, egiz en Edern, eo deut an devosion anei eus an Itali gant otrou Kistivit bet eno evit mont d'an Douar-Zantel. An eil hag egile o deus o istor sapaturus (1) a-walc'h. Pa vo amzer e teuo o zro.

Dalc'homp mat, Bretoned, d'hon traou kaer, d'hon tud brudet, ne vern pegent koz e vent.

**

Baleomp ive, gant hon amzer. Breiz hizio a dalvo Breiz gwechall ma karomp 'nem glevet. Banniel ar Vro n'eo ket c'hoaz kouezet er boultrenn. Douget e vo d'ar 16 a viz Gwengolo war dachenn Santez Anna Wened gant gwa-zed dispout, bleün yaouankiz Breiz.

Pôtrede Kerne, ma zeus c'hoaz kalon — hag e'z eus — dindan hor chupennou glas piket gant neud-gour .. holl da Zantez Anna evit gouel ar Bleun-Brug! Merc'hed Kerne, fichet an diveza ac'hanoc'h kaeroc'h eged pinvidek penherez Bro-c'hall, it da zeski d'an estren ha d'ar re a gemer o gizioù divalo an doare da 'n em wiska brao ha dereat...

Kanerien ha kanerezed Kerne, sod gant hor gweziou hag hor zoniou koz, da Zantez Anna! Eno e trido-an dachenn penn da benn gant kanaouennou quadius hor bro-garet Breiz-Izel!

F. M.



ROUE AL LAZ

Met pa oa o kregi e klanched dor traon-an-ti, d'he digeri, e savas safar barz ar porz hag ar c'habiten glas a deuas war e giz d'ar red. Glas sur e oa hag e zaoulagad spouronnet a oa evel diou vrinikenn.

— Ar Chouanted a zo e toull ar porz! Aman ho taou! a youc'has d'an daou zoudard a oa o tiwall ar brizone-rien, — hag e tigoras an nor gant herr.

An daou soudard a deuas er miz hag an ofiser a bren-nas an nor hag a lavaras, en eur zellet en dro d'ezan:

— Ma tec'hont kuit, gwas a-ze evidout te, mevel; da benn a vo torret ouzit ma chom eur bolod er bistolenn-ze.

— Mirit ho polod evit ar chouanted, sitoian ofiser, eme Gadiou; ma 'zo prizonerien aze, me en em garg d'o mēsa! Set aman ar youc'hal hag a reio o stal outo, ma klaskont finval.

— Mat eo! eme an ofiser.

Koulskoude, d'ezan da vezan muioc'h asur, e serras dor ar porz war e lerc'h hag e kasas an alc'houez gantan.

Kadiou a reas eur zell dre ar prenestr.

— Emaent krog ha krog, emezan.. Daoust ha n'heller ket tec'hel hep mont er miz dre an nor-borz?

— Toull ebet ken! eme ar perc'henn.

— Eo, eme ar vatez, dre ar zolier, en eur doullan an doenn!

— En'han' Doue, eme Gadiou d'an ozac'h, it c'houi, ha grit toull d'eomp da dremen, m'ell eo! Me a chom aman, betegout na deufe an ofiser en ti!

— Kouiz d'eomp neuze tec'hel holl war an dro! eme an ozac'h, rak chom aman, goude toulia d'eoc'h da vont kwit a zo 'vel toulia d'in-ya-unan va bez!

— Ah! Salver benniget! eme ar wreg, ha ne baouez da boket d'eur bugel en e gavel, da belec'h ez in-me gant ar c'hrouadur-man?

Kadiou en doa digoret eborpant hag a rea eur zell piz ouz e bistolenn.

An ozac'h a ziskouezas e benn e toull ar skeul.

(1) Sapaturus : eston.

Neuze, Kadiou a zigoras dor traou an ti. E cant an tri
brizoner, ken sioul ha ken disliou evel pa vijent arche-
det.

— Me eo Kadiou! Deuit prim d'am heul!

Kregi a reas en dorn an dimezel, hag e lavaras d'ar be-
leg.

— Krogit e brec'h eben.

Hag e savjont d'an nec'h, didrousan m'hellent, evel tud
o vale dre greiz eun hunvre: An ozac'h pa voent et ebliou,
a deuas war e giz.

— Hastit dont ho tiou! emezan; roit d'in ar bugel.

Ar vamm a hirvoude oc'h astenn d'e dad, war bouez he
diouvec'h, ar bugelig mailhuret.

— Koulz eo chom aman, emezi. Da be lec'h ez aimp? Ar
maro a gavfomp e pep lec'h!

— Tavit! eme ar vatez; kemerit kalon; marteze e c'hou-
nezfomp warnan o tec'het en e rok.

Pignat a rejont o-diou, hag an ozac'h hag a oa disken-
net goude rey ar bugel da Gadiou, da harpan eur bank-
tosel ouz an nor, a bignas d'e dro hag a ziskennas a-ruz
diwar an doen betek ar skeul harpet ouz ar voger din-
dan an toull nevez grêt.

— A-grip breman! eme Gadiou; hag e tiskaras ar skeul
e harz ar voger.

Ar re all a oa dija o krapat war ar c'hleun er penn-
all d'ar park, pa voe gwelet unan eus ar peder blac'h, an
hini a oa ar bugel ganti, o leusket anezan da gouezan hag
o kouezan d'he zro en eur zevel he diouvec'h d'an nec'h.

Kadiou a oa chomet mantret.

— Lazet o deus anezi! emezan.

— Va fried eo! eme an ozac'h, o tont gwenn.

— Da c'houzout eo! eme Gadiou. Met an tenn-ze 'zo
deut eus an tu dehou d'eomp. Sur awalc'h, zo arru si-
kour gant ar Re C'hlas Dampasion! emezan; petra rin-
me gant ar bistolenn-man!

An ozac'h, hep chilad, a oa tec'het da gaout ar mer-
c'hed daoulinet endro d'an hini a oa bet tizet. Tenn ebet
ne voe skoet ganto ken, nemet e tu all an ti ar vrud
hag ar youc'h a oa et souden war wasaat.

War belec'h mont! Evel mez en doa o tec'het rok ar
gann, ha dilezel e dud bodet du-hont e sein ar park ne
fizie ket ober ivez.

Eun nevezenti a reas d'ezan loc'han, an deiz a oa deut
da vat hag o tont d'ann druilh-drask war draou gant ar
run du hont, Kadiou a welas eur vandenn dud armet o
fuzuilhou ganto en er.

— Kevareg! emezan. E galon a dridas en e greiz o son-
jal pebez lazadeg a raje an houc'h gouez-ze breman sou-
den pa gouezje e kreiz an ebad. Hep gouzout d'ezan en
er lakas da redek ivez d'o c'haout ha da youc'hal: « Dao
d'ezo! dao d'ezo! »

Gwir eo, ar Re C'hlas a oa kresket o niver eun hanter-
sikour a oa deut d'ezo dre forz gedal ha tennan; eur ba-
gad soudarded o vont da ober eun töl yudas bennak war-
dro a oa troet diwar hent o klévet an tennon hag e oant
breman o vont da zrailha bandenn ar C'hloareg betek an
diweza. Da genta, o doa tennet warno eus a-drek o c'hein,
int o-unan kuzet drek eur c'hleun, ha diskaret seiz pe eiz;
breman e oant lammet dreist d'ar c'hleun war an hent hag
e teuent da beurober o stal d'ar re ziweza tapet etre daou
dan.



Etre Sant-Pabu ha Plougin

Etre Plougin ha Sant-Pabu zo bet krogad, kannou ha
chach-bleo diwarbenn eun dra vreo, diwarbenn Sant
Ibilio... Lod a lavar 'z eus marteze c'houec'h pe seiz
kant vloaz hepken eus an dra-ze. Lod all a gred eo tos-
toe'h d'eomp... Lakomp! Erfin, chach-bleo a oa, kroget
zo bet ha kannou mui ne vo ket. Rak keriadenn Sant-
Ibilio hirio evel gwechall ne vo ma da Blougin, na da
Zant-Pabu... an hanter zo da hou-man, an hanter d'an
hini all, hag ar peurrest n'eo da zen...

— Kemend ha kaout tu ar c'hreisteiz, eme Blougin,
kerkoulz-eo d'in kaout tu an hanter-moz... N'eo ket brao
gwelet eur geriadenn, enni chapel ha tud devot, rannet
etre diou barrez. N'eus nemed an hend etre an daou du!
Lakomp tout er memez bern. A hend all ar re a dre-
meno a flepo, hag a gonto penoz n'em renk ket an dud!
Allo! Sant Pabu, eun tammig kalon vat! Diskrog... ken
nebeud a dra! Doue az paeo hag an Intron Varia!

— N'eo ket fall, Plougin, komz mat a rez. Anat eo out
bet er skol e Milizag... Met me zo bet e Gwitalmeze hag
em eus desket hirroc'h eget va fater... « Eun hanter
hag eun hanter all a ra daou hanter... hag an traou n'e-
maint keit ha keit nemet pa z'int war zaou hanter...
Rak-se eta, kemend ha kaout an hanter, kerkoulz eo
d'in kaout an hanter all... Diskrog ta Plougin... ken ne-
beud a dra!... Petra ne rofe ket eun den evit lakat an
traou keit ha keit! Allo! grêt ar mare'had?.. »

Chomet int evelse da n'em zinkana epad daou vloaz...
Goudeze int ehanet.

Sant Pabu en deus dalc'het tu ar chapel, chapelig
vihan Sant Ibilio... Hag evelse re Blougin a rankas ober
pemp kammed bep bloaz, treuzi an hend bras evit mont
d'ar pardon d'ar barrez all. Siouas! ar chapel a oa ker
bihan ma ne oa ket frankiz da zaou gi da n'em daga
enni. An hini en dije c'hoant eta kaout an oferenn hag
hend, hep sellet a-zehou nag a gleiz, gant aon ne vije
ato da c'houzout piou a zaje eharz. Merc'hed Sant-Pabu
ato skanv a droad, a goate, a fuste, a faoute, a droc'he
hend, hep sellet a-zehou nag a gleiz, gant aon ne vije
karget an iliz gant merc'hed Plougin. Ne vije ket bet
brac gwelet ar re-man o kas ar c'han en dro e chapel
Sant-Ibilio, war dachenn Sant-Pabu. — Ah; nann, avat!

Tud Plougin, abaoe, ken alies tro ma welont unan
bennag o vont gant e hend tiz bras warnan a gustum
lavaret: « Ac'hanta, emaoe'h o klask ho spered? » —
Oh! tra! tra!

— Emaoe'h o vont da bardon Sant-Ibilio neuze???...

Paotr Plougin.



Tud nevez,

it d'ar Bleun-Brug,

da Geranna, d'ar 16 a viz gwengolo a zeu,

gant ho tilhad-eured hag ho tud enor;

eur gurunenn, mil ha mil gwech kaeroc'h eged ar
gurunenn aour ha perlez a zo war he fenn, a
reoc'h da Vamm hor Bro.

Breiz a-bez a en em gavo eno d'ho tiambroug.

**LABOURIOU AR MERC'HEDE
WARDRO AN TI**

Kenteliou Tintin Anna

XVIIth PENNAD

Giziou kristen an ti

Tud digredenn, estren ha n'avezont nag hor bro nag
hor yez, a deuio hag a lavaro: « ar giziou koz o deuz
grêt o amzer! » ha darn a gredo, ha gant aoun da veza
kemeret evit « tud divezat », a droio kein d'ar boaza-
manchou kristen, d'ar giziou a-zoare en o sav beteg hen.

Setu penaos e rankomp ober evit bale, evel m'eo dileet,
war roudou hon tadou.

Pa deuer en eun ti e lavarer a vouez-tuhal: « Doue r'ho
pennigo! » hag e vezer respountet: « Bennoz Doue
d'eoc'h! »

Pedet e vozer neuze da zével war laez hag, alies, da ge-
meret perz er pred, pa vez an dud endro d'an daol. Ne
stager morse da zibri, a-raok ma vezo lavaret ar *benedicite*
gant an tad pe ar vamm; pa vez echu lein, ne vanker
morse da drugarekaat an Aotrou Doue ha da ziskouez
karantez d'ar Verc'hèz, dre an Anjelus; goude koan e vez
lavaret grasou, hag an « de Profundis » evid an anaoun.

Er goanv, pa vez hirr an noz, ar wreg a grogo enn he
stamm, an ozac'h a raio eur c'hornad butun hag ar c'hosa
eus ar vugale a lenno buhez ar Zent; evelse e c'hello an
holl sonjal ervad, hag outañ e-unan pep hini a lavaro:
« Me a fell d'in ive beza eur zant, bale war roudou ar
zant-ma-sant, en deuz bet eveldon, poan hag enebiezou
war an douar ». Eur varvailhadenn warlerc'h buhez ar
Zant, ha goude e chomer, eun pennad all, da zeskri ar
c'hatekiz d'ar vugale, a-raok ma 'z aint d'o gwele. Diouz
ar beure, bras ha bihan ne vankint ket da ginnig o c'ha-
loun da Zoue, a-raok staga gand o labour.

Ha da zut, peger kaer e vez gwelet, ar bôtred gant o
zad, ar bôtreded gant o mamm, o vont warzu an iliz-par-
rez, d'an oferenn bred pe d'an oferenn-viñtin, pep hini d'e
dro. Ar zui a zo da Zoue penn-da-benn, rak-ze, goude lein,
ne vez ket ankounac'haet ar gousperou! Hogen, n'eo ket
difennet ober eun dro dioc'h an noz, mont da zellet ouz
ar-pez a zo hadet er parkeier, ober eun taol « domino »
pe c'hoari c'harioù, an neb a gar; mont da velet eun ame-
zog klanv hag all; eur c'hraz eo diskuiza ha kemeret eun
tam plijadur en onestiz!

E meur a di e vez grêt eur veilhadez bep sadorn, er

goanv, ha dreist-holl, da noz an askoaniou (1), hag araok mont d'ar pellgent.

Ar c'hartou, an dominoiou a vezo war an daol; ar re goz, e-tal an tan, a chacho war o c'horn en eur gomz eus o amzer dremenet. A-wechou e teui ar re yaouank da c'houlenn diganto kana eur zôn war doniou Breiz, pe da gounta d'ezo eun dañevell desket gwechall, pe eun dra c'hoarvezet en o amzer. Sioulder ha furnez a vezo merket war bep tal. Derc'hent ginivelez Hor Zalver e vezo lakat an eteo Nedeleg en oaled, da zerc'hel goude epad ar bloaz evit digas chans en ti, dre vennoz Doue; d'an anevaled e vezo roet eun tamm askoan a-raok mont da gousket, e-koun d'ar vad o deus grêt an ejenn hag an azenn d'ar Mabig Jezuz en e graou diskloz.

Met, arabad e teufe ar veilladegou-noz da veza eun abeg a zizurz en eur c'harter!

Arabad ez afe ar penhou-tiegezh da gousket, ha lezel ar bôtred hag ar merc'hed yaouank mistri en o zi ha libr da laza ar goulou pa dro en o fenn!! An tadou hag ar mammou a rafe an dra-ze a zo o vernia keuneud war o c'hein evid ar bed-all!

Pa deui mare ar c'halanna, an amezeien ne vankint ket da reketi bloavezh mad an eil d'egile, « hag ar baradoz da fin o buhez », hag evit lakaat ar bloavezh nevez dindan skoazell ar Werc'hez hag he Mabig bihan, ha trugarekaat an A. Doue eus e vadoberiou, epad ar bloaz tremenet, ez aint, muia ma c'hellint, d'an ofereñn ha da gommunia. E lec'h en em vezvi gant banneou, e riskl da noazout d'o iec'hed, e kinnigint da Zoue o foaniou, o fedennou, ar vad a raint, kement tra a c'hoarvezo ganto epad ar bloaz a zo o tont; eur voutailhad win er gêr, pe etr kamaladed a ra vad d'an den gant ma ne jomer ket da redet eus an eil ostaleri d'eben evid en em gaout er gêr, goudeze, mezo dall!

Ha da Veurlarjez, memez tra! An deziou-ze n'int ket roet d'omp evit dibri re, pe eva dreist hor galloud, met evit diskuiza, mont da welet ar gerent, adori ar Zakramant ha sonjal ervad, a-raok ma tigo ar C'horaz, eo an amzer-ze eun lamzer a binijenn evid an holl. Ar re o deus dispans da yun, abalamour d'o iec'hed, d'o oad, d'o labouriou tenn, a c'hell ober eur binijenn bennag all, evel: dibri nebeutoc'h eus ar pezh a gaver mad, ha muioc'h eus ar pezh ne gaver ket; chom hep lakat sukr er c'hafe, chom hep butuni, chom sioul pa vezer e kounnar; chom heb eva gwin; dere'hel war ar muzellou eur ger gouest da ober poan d'an nesa; en em ginnig d'ober eul labour ha ne garer ket; chom heb komz ouz ar re a zo troet war ar c'homzou goulo ha kant tra all c'hoaz a demio e spered eur c'hristen devot a c'hoanta plijout d'e Vestr. Seut-

(1) An noz-man a en-em gav eiz dez a-raok noz Nedeleg.

vui e tostaio ouz amzer Flask, seul-vui e kresko e zevosion; da zul ar bleuniou ne vanko morse, da lakat, en e di, hag en e barkeier eur bod-deuz benniget, ma plijo gant Doue skuilh e vennoz war e dud ha war e vadou.

Epad ar zizun zantel, ec'h unano e boaniou gant re Hor Zalver; kinnig a raio d'ezan e holl skuizder evit diskouez d'ezan e anaoudegezh vat; d'ar Yaou-Gamblid, en envor d'ar pezh en doa grêt Jezuz, ne ankounac'haio ket gwalc'hi treid e dud hag e re e-unan diouz an noz.

P'oan bihanik em oa bet an eur-vat da welet, en eur geriadenn eus va bro, eun dra zouezus, a c'hoarveze bep bloaz ha da gredi eo e c'hoarvez atao.

D'ar Yaou-Gamblid, goude lein, me gred, edon o tremen gant va mamm, dirag dor-vras an ospital: « Hizio ez eo digor d'an holl, emezi; n'hon eus dale ebet evid ehana laman eur pennadig! » Ha, dre al fiorz leun a vokedou e valeomp hon diou beteg ar chapel.

Eno, e-kreiz, e oa renket war ziou skaon, daouzek paour ha daouzek paourez; daou v-veg, pleget war dreid diarc'henn ar wazed, a walc'he anezo en eur bailhad dour, hag a zec'he anezo gant al liareñn a oa endro d'o c'horf; goude e pokent d'ezo gant feiz, en eur bedi Hor Zalver Jezuz da lakaat er c'halonou izelded ha glanded. Dirag ar merc'hed, diou itron a rea an hevelep tra; o diou oant choazet etouez ar re uhela pe ar re binvidika, abalamour da ziskouez omp holl breudeur ha c'hoarvezed e Jezuz-Krist. Eur pezh arc'hant pe aour a veze roet da bep paour, evit gwalc'hi ar peziou-ze euz ar perz o deuz kemeret e torfed Judaz.

Ne 'z ay biken an dra gaer-ze eus va spered! « Beleien zantel, itronezed bras en o c'haera dilhad, oc'h en em izelat beteg servicha ar beorien-ma! emeve! ha Jezuz, santeloc'h ha brasoc'h, hen ar zantela hag ar brasa, a en em izelao beteg dont em c'halon, me paouroc'h ha disteroc'h eged ar re-ze! »

Gand a raimp, dalc'homp d'ar gizioù mat savet gant hon tud koz, ha na reomp ket ivez fae war ar Miz Mari, savet evit enori ar Werc'hez, hor Mamm, hon difennerez; ha pa ne lavaromp nemed: *me ho salud Mari*; dioc'h an noz gant karantez! Gant miz Mari, e teu an hanv, peurlies, mare ar pardonioù, an tantajou!

Evid enori Sant Yann, eo mad mont d'an tantad, evit Sant Per e reer kement all; arabad eo ankounac'hat louzaouenn Sant Yann! he zomma e vez graet ouz an tan, a-raok he zostaat ouz an daoulagad, evit goulenn ar c'hras da veza dilivret eus an droug-daoulagad, hag ive evit goulenn ma kresko hor feiz, gant aoun da veza dallet gant traou ar bed-man. Pa ne jom mui eun horden en he sav, pa vez devet an drujenn, ha zo e kreiz an tantad, eur boked roz outi, e kouezer-holl d'an daoulin evid ar pedennou dioc'h an noz; pedennou c'honek war douar Breiz ha dindan

ar stered lugernus; Sant Yann ho kaso beteg tron Doue; chiacha a reoc'h war hor bro e wella bennoziou! Pa vez graet teir zro, en dro d'an tan, gant ar brasa soulder, pep hini a gerz war zu e di, pe e wele; e meur a lec'h, e kemerer eun tam glaou eus an tantad evit teurel er punz, da zantelaat an dour.

Antronoz e vez ar pardon: endro d'ar chapel venniget pe d'an iliz parrez e weler staliou, met n'eo ket evit prena c'hoariellou, nag eva banneou e teu ar gwir Vretoned d'ar pardoun; evit goulenn skoazell ar Zant pe ar Zan-tez, en eur vont d'an oferenn-bred ha d'ar gousperou. Ar re yaouank a jom pelloc'h dioc'h ar pardaez, da vale ha da gemeret eur blijadur onest; mat eo beza laouen, c'hoarzin bep an amzer: eun den santel ha ne c'hoarzte ket, ne deufe biken da veza eur zant! Met ma z' eus eun ali da rei d'ar gerent, eur c'huzul da rei d'an dud yaouank eo: dont abred d'ar gêr, heilla war ar vugale!

N'oa ket dleet e vije plac'h yaouank ebet er mez pa vez kuzet an heol! Ar bôtred yaouank a zo o klask diazeza eun tiegez kristen, n'o deus hast ebet ouz ar rederezed noz! Hag ar re o deus, e vez buhez fall ganto, hanter-amzer, eur wech ma vezont dimezet.

A dugare Doue ez eus c'hoaz tud yaouank fur en hor bro! p'o deus dibabet eur gwaz, pe eur vaouez, eus a-douez ar re-all, e c'houlennont gant doujans digant o mamm hag o zad, ha plijout a ra d'ezo ar mab pe ar verc'h-kaër, hag e reont diouto, daoust pegen diaes e kavont a-wechou. Deiz an eured, a-raok mont d'an iliz, e reont evel m'o deuz grêt deiz o Fask kenta: en em deurel a reont d'an daoulin, dirag o zad hag o mamm, en eur lavaret: « Va zad, va mamm, c'houi a zo o terc'hel-pias an Aotrou Doue evit ho krouadur, roit dez an, mar plij, a-berz Doue, ho pennoz a-rôk ma stago gant e vuhez nevez! » Hag ar re goz, an dour en o daoulagad, a ra eur zell warzu an nenv, hag a zav eun dourn gant levenez: « Va mab, va merc'h, dreizomp-ni, tud dister, ra gouezo bennoz Doue warnoc'h, en hano an Tad, ar Mab, ar Spered-Santel! »

En iliz, ar gristenien vat ne vezont ket dievez; heulia reont, war o levr, pedennou kaër an Iliz, goulenn a reont ar c'hraz da jom bepred fidel an eil d'egile, da c'houzanv an eil mankou egile, da zigemeret gant fizians ha laouenedigez ar vugale a blijo gant Doue da rei d'ezo. Goude an eured, ez eont d'ar vered evit pedi war beziou o zud maro, ha prometti d'ezo bale evelto, war hent ar furnez hag ar zantelez.

Epad ar friko, eman ar c'hiz da gana soniou bep an amzer; eun dra vrag eo, gant ma vo kanet soniou Breiz war doniou Breiz, ha nann rimadellou diskempenn, youc'het e galleg fall, gant eul lakipod hanter-vezol!

Goude lein, ar re yaouank a ya da vale beteg eur voure'h all, pe an aod pa vez tost, hag e tistroer adarre a-benn koan.

Dansou Breiz a zo dereat; en eun eured e oant kaer da welet, met e kalz parreziou eo aet ar c'hiz anezo d'an traou; eur c'holl eo, rak en o lec'h, siousaz, n'eus deuet nemet dansou a c'hiz nevez, savet gant tud gouez pe gant marmouzed pe arzed (1). Red eo tec'het diouz an hevelep dansou evel ma tec'her diouz an tan: an diaoul a zo en o c'hreiz.

Eun tad kristen a lavare d'e verc'hed yaouank: « Gwelloc'h eo ganen terri, va-unan, ho tivesker ouzoc'h, eget ho kwelet o vont d'al lidou e vez dans enno ».

Sant Yann Vianney, Person Ars a lavare: « Dre an dans, ar merc'hed yaouank a goll o brud-vad, o ene, o baradoz hag o Doue! eur gordenn eo da Zatan, ha dre ar gordenn-ze e chach eur maread tud en ifern! » Eur skrivagner brudet ha n'en doa ket a feiz a lavare d'eur vaouez yaouank: « Arabad eo d'id lezel da bôtreded da zansal, ma fell d'it o derc'hel mat, doujus, karantezuz ha glan; kred ar pezh a lavar d'it eun den koz, en deuz renet eur vuhez direiz en e amzer! »

Prezegerien a bep bro o deuz graet o dever en eur ziskleria eus ar gador petra eo an dansou; atao her greont, hag an dud ne reont van evid o c'hlevet, ha koulskoude ma karfent sonjal pegement a dud a zo en ifern abalamour d'an dans! ma karfent kompren pebez digemer a raio an Aotrou Doue d'an danserien!

Kaout a ra d'ezo e vezo faziet ganto beteg lavaret: « Deuit bugale garet va Zad; c'hoari dansal ha c'hoarzin oc'h euz graet evidon! »

Nann! n'emaoch ket war an douar evit se ha n'eo ket an dansou mezus a raer er frikojou eo a denno bennoz Doue war an dud nevez.

Brasa enor a c'hell hor C'hrouer ober d'an dud dimezet, eo rei bugale d'ezo da zével. Pebez eurvad pa deu eun êlig bihan eus ar Baradoz! Beteg neuze, ar priejou o doa karantez an eil oc'h egile, a dra zur, met ken e oa neuze, ne ouient ket petra oa al levenez! Gant pebez teneredigez e sell an tad nevez ouz e vabig, ouz e wreg yaouank! hag hi a daol pled gant daskren war ar vuhez disterik, fiziet enni; aoun he deus ne deufe da vervel a-raok m'en defe het ar Vadiziant! Rak-se, kerkent ha ma c'heller, eo red kas ar c'hrouadur d'an iliz da veza badezet; ar c'henta ar gwella ma vezo graet eur c'hristen anezan, ha laket dindan skoazell eur zant anavezet. Ar voazamant vat a zo da rei hano an tad-koz pe ar vamm-goz, d'ar mab bihan, d'ar verc'h vihan; red eo kenderc'hel gant ar c'hiz-ze, ha lakaat ar vugale all en hanojou bet douget gant enor, en ti pe er vro. Kounnari a ran pa glevan meneg eus an hanojou a glasker da lod eus ar vugale, en dervez hizio!

Daou pe tri bloaz ' zo, en eur gêrig, demdost d'am

(1) Arzed: ours.

lochenn, e weliz eur vadiziant o tont er menez euz an iliz. Tostaat a riz, rak ar re goz, tost d'o bez, a blij d'ezo ober eur zell ouz ar re a zo galvet d'ober o zreuz er vuhez war o lerc'h, hag e c'houlennis pe seurt hano a oa roet d'ar c'hrouadurig? — Eur bôtrez oa; he maeronez, eur plac'hig daouzek vloaz, pe war dro, a respountas: « Hanoiou brao hon eus kavet d'ezi: Eufemi-Natali-Silvi! ha me a zo: « Valantin-Zeffrin ».

— « Da belec'h ez eoc'h gant an dra-ze, emevel! Setu aze hanoiou, avat! roet dre lorc'h d'an diou gristenez-ma! » hag en eur soroc'hal e trois kein hag ez is em hent.

Feiz d'am Doue! n'eo ket mank a hanoiou c'houek a zo en hor bro, koulskoude! hanoiou diginkl a sikour ar vugale da veza didroidell o-unan, er vuhez! D'am zonz-me, hano ar Werc'hez venniget eo ar c'houeka, ha goude eman hano he mamm, va fatronez, patronez Breiz-Izel. Lakaat a c'heller daou hano d'ar bugel, digemmeskoc'h e vez! Anavezet em eus teir c'hoar, war an hevelep hano. *Mari* e veze graet euz are gosa, *Marie* eus an eil, *Mariig* euz ar yaouanka! Kalz e vije bet êsoc'h henvel anezo: Mari-Anna pe Anna-Mari, Mari-Yvona, Mari-Jozef pe Mari-Liz; pe Azenor, Azilis, Heodez, met en hano Doue, lezomp an Eufemiou hag ar Zeffrinou el lec'h ma ' maint, ha bezomp Bretoned, ni hag hor bugale! Bretoned a-galon, a spered; falloc'h evito a zo, ha gwelloc'h. . n'eus ket kalz!

**

« An den a zo brasoc'h eged ar bed! eme eun Eskob santel, ha gouizie; p'en deus krouet Doue spered an den, en deuz graet brasoc'h labour eged p'en deus taolet eur steredenn en oabl glas! » Pebez anaoudegez vat a rank kaout, neuze, evid an hini en deus e grouet, evit e servicha hag e garet!

« Beva el labour, mervel er bedenn » setu dever ar c'hristen.

Pa deui ar c'hlenved warnan, ne ehano ket da zonzal e poaniou. Hor Zalver, da zougen e Groaz asamblez gantan, ha dre garantez evitan. Ma rank chom pell var e wele, e tenuio Doue e-unan d'e gennerza, dre ar gommunion; n'eo ket red d'ezan beza toc'ho: evit gellout reseo e Zoue, ha ma 'z eo klanv da vervel, eo gwelloc'h gelver ar beleg a-raok ma vezo fall.

Abarz ma teui ar gommunion gant ar beleg, ar merc'hed a zo o labour renka an ti, lakaat neat an traou; a-wel d'ar c'hlanvour e vezo digaset eun dol vihan warni eun douzier wenn-kann; ma 'z eus eun tamm dantelez ouz an douzier-ze, e vezo lakeat an tachad plean war an daol, an tachad dantelezet en distribil. E-kreiz an daol e veza ar grusifi, eun troad outi, ma chomo en

he sav; a bep tu d'ar Groaz, eur c'houlouen venniget; dirazi, eur verennad dour benniget, eur bod-beuz benniget enni.

Eur verennad dour euz ar pôd, d'ar beleg da zouba e vizied; eul lianenn evit o sec'hi; ouspenn-ze eo red lakaat eur mouchouer-fri fresk pe eul lianenn all war gwele ar c'hlanvour, evit ober touzier d'ezan da gommunia.

Dereat eo ive teurel eur plueg pe eur pallenn war al eul leur-zi, e-kichen an daol, ma c'hello ar beleg daoulina dirag korf Hor Zalver.

Eur boked bennag, pe eur bod-glaz a c'heller lakaat ivez var an daol; dilhad-wele ar c'hlanvour pe ar glanvour a vezo dilastez; taolet e vezo eul linsar wenn war ar gwele penn-da-benn; ma 'z eo eur vaouez eo a zo klanv, e c'heller lakaat eur c'hoef d'ezi war he fenn pe da vihana eur mouchouer pe eun dantelezenn ma 'z eus; gwella ma c'heller e raer evid an Aotrou Doue. M'en deus poan ar c'hlanvour o lounka ar gommunion, e vezo kinniget eur banne dour d'ezan da eva.

An dour a zo bet o walc'hi bizied konsakret ar beleg, a vezo taolet en tan, hag en tan ivez an tammou « ouat » hag ar bara a chom goude ma vez nouet an den klanv.

Evit sakramant an Nouenn, e vezo red lakeat ouspenn, war an daol, c'houec'h tam « ouat » kement hag eur graoenn hag eun tamm minvig bara, evit sec'hi bizied ar beleg, pa jom oleo sakr outo.

N'em eus ket ezomm da lavaret eo brao da dud an ti dont endro d'ar gwele evid adori ar Zakramant, pedi evid ar c'hlanvour, kaout perz e bennoziou an Aotrou Doue.

Pa dosta poent ar maro, e vezo lavaret ar pedennou a vouez-uhel, litanion hag all; — « p' lit, pedit, merc'hed, a lavare eur c'hristen war e dremenvan! n'ouzoc'h ket pegement a ezomm a zo eus sikour an hoell Zent, er mare-ma! » Gant feiz ha devosion, e vezo lavaret: « Kuitait ar bed man, ene kristen, en hano ar Tad en deus ho krouet, en hano Jesus-Krist mab Doue, en deuz gouzanvet evidoc'h, en hano ar Spered-Santel a zo diskennet ennoc'h! » ha c'hoaz: « Aotrou Doue, digemerit ene ho servicher, e porz ar zilvidigez, hervez ho promesaou; grit ma vezo eurus da viken! »

Hag ar Breizad kristen, e zourn e dourn e bried, skeudenn e Vestr war e galoun, e hano santel war e vuzellou, a losko e huanadenn ziveza, e peoc'h, evel eur c'hrouadur oc'h en em gaout er gêr.

Goude ar maro, e vez klasket tud a volontez vat evit liena ar c'horf; tiegeziou a zo, zoken, e fell gand ar vugale renta an dever-ze d'o zud, evel an diveza merk eus o c'harantez: serra a reont, gant doujans, ha glac'har daoulagad o zad hag o mamm; kroazia a reont o

daouarn war ar chapeled, o astenn a reont var ar varc'h-skaon, o archedi a reont en eur bokad d'e zal skourmet: « Kenavo ar Baradoz ».

Pa vez aet o zud da anaoun, ne ehanont ket da bedi evito, da lakaat servichou, oferennou ganto, d'ober aluzen en o hano, hag an tiegez kristen, unanet dreist ar maro, a gendalc'h d'en em garet, ha da adori Doue er bed-man hag er bed-all !

XVII^e PENNAD

Al Ievriou en ti

Evel ar c'horf, ar spered a rank kaout boued pe e teuo d'illo da veza dinerz ! Hogen, da ziuall ez eus, rak, evel boued ar c'horf, boued ar spered ez eus daou seurt anezo: hini mat hag hini fall; hini da rei buhez, hag hini da laza. Gant aoun ne vije lounket hini fall gant hor breudeur, hor potred, hor gwazed, eo red d'ar merc'hed rei digor d'ar boued mat. Evel ma reer evit ar c'hebillitousegi, a zo mat lod anezo, lod all noazuz; hag evit-ze ne vezont kutuilhet nemet gant ar re o anavez; evelse, ar vaouez a vezo aketus da gutuilh al leoriou mat, evit maga sperejou ar re a zo enn he serr. Estreget *Buhez ar Zent*, estreget *Miz Mari* a ranko da gaout en he zi; kountadennou brao, danevellou plijadurus, buhez tud a vrezel ne dud a iliz, troet e brezoneg gant tud gwiziek, pe zoken, savet em hor yez dudius ! Eun « istor Breiz » a ranker ive da gaout; bez ez eo eul leor talvoudus; dreizan ec'h anavezer istor ar vro, hag e c'heller dizlavaret ar gevier savet a-vernioù diwarbenn an amzer dremenet. Ne ouezomp ket a-walc'h eus pe seurt gouenn omp ! pe seurt labour o deus graet hor c'hentadoù ! pe seurt sperejou tud eo oant ! ha koulskoude, dioc'h an ilizou kaer kizellet ganto: dioc'h ar c'hroaziou an touriou dantelezet ker stank en hor Breiz, eo aes kompren ne yanke d'ezo na kalon, nag ijin, nag arc'hant ! Met, kaer ez euz kaout arc'hant, ijin, kalon, kaer ez euz kaout binviajou nevez, gwended ha spered: ma n'en deus ket eur feiz beo, an den ne rai netra vat ! n'eo ket gouest da rei, evel pa lavarfen, eun dremm d'e oberou, ha da lakaat an dud da sonjal, a-hed ar c'hantvejou da zont: « Setu ama kristenien hag a garie o Doue, hag a enore ar Wer-c'hez, p'o deuz savet traou ker souezus ! »

Lenomp traou diwarbenn an amzer goz: istor hon tiez, hor parrezioù, hon eskopioù; karomp ar brezoneg, al leoriou brezonek; e ti Emgleo Sant Iltud (1) e vezo moulet eur maread, ma plij gant Doue, hag hor vez, e lec'h beza disprizet, a vezo komzet ha enoret euz an eil penn d'egile da vro Arvor !

TINTIN ANNA.

Troiou kamm Léon ar Bris
da Baol Gornioù

War donar Breiz-Izet, daou c'hant vloaz a zo e veve eun denig koz, bihan ha teo, Léon ar Bris e hano. Léon a ioa eur galouper bno, eur c'hlasker bara hag en doa ar brud da veza hep par evit tenna taolioù kamm d'an dud. Mont a rae dre an hentchou, laouen evel an heol en eur gana dibreder:

An hini goz eo va dous...

An hini koant eo va dous,...

Abaoe ma ouie bale, Léon n'en doa graet nemet galoupat hag ober troiou kamm; ar brud anezan a ioa en em skignet dre bevar c'horn Breiz ha diskennet oa zoken betek toull dor an ifern. Kerkent Paol gornioù a zispakas e skillfou; fae oa gantan klevet e oa war an donar unan finoc'h sgetan. « Gerto-zomp, emezan, hag e vo gwelet piou eo ar mestr; mont a ran da ober eun dro vale da Vreiz ». Ha setu hen en hent.

War nibl an hent bras, astennet e disheol eun dervenn goz, Léon ar Bris a oa oc'h hunvreal en eur lipat e vourrou divar an tamm bara soubet el laez kaoulet en doa bet d'e verenn. Tennet-se voe eus e hunvre gant eur flae spon-tus o tont beteg ennan. « C'houez an deo eo, eme Léon, petra ar gitez a zo erru aze ? » N'en doa ket echu e gomz pa welas dirazan eur pikol den, baro hir d'ezan, bleo ken hir all, kerniel hirroc'h c'hoaz hag eur pezh-lost korvigellet o skuba an hent dre ma zea. An tam en e zaoulagad, an diaoul a ioa bamet o sellet ouz Léon: « Ata, flaezier kaez, petra, rez aze o sellet ouzin evel eur vioc'h dirag eur c'harr dre dan, ha petra eo an torch-listri a welan aze a-istribilh ouz da ziadrenv ? » — « Me, a respountas an diaoul, eo Paol Gornioù, ha c'hoant em hefe da vont d'ober eun dro-vale ganez. » — Sonjal a raen, eme Léon ez oas eun urupailh bennag eus ar ouenn-ze, met ma n'eo red nemet an dra-ze d'id ez aimp en hent dioc'htu.

Eur pennadig goude e pije gellet gwelet Léon ha Paol lig o vont dre an hent, mignonet vras, evel diou gazeg koz bet pemzek vloaz o chacha war an hevelep alar, eur c'hlabouz ganto ken a deue war an treujou an dud da zellet outo. « Perak, te ivez, a lavare an diaoul da Léon, ez eus kement-se a zrailh hag a youc'h ganez; digas a res an holl da c'hinouata ouzomp. » — Te eo da vihana, a respounte Léon a laka anezo da zont kement a flae a zo ganez. » Hag evelse en eur c'hlabousat ec'h en em gavont en eun c'hoad; o c'hovou moan, hag an heol war-nez mont

(1) 4, Ru ar C'hastell, Brest.

da guzat a deuas da rei d'ezo da c'houzout e oa mare koan. An diaoul a i eas d'ar c'hastell, a oa eno demdost, da ger-c'hat diou gaolenn hag en eur lammat dreist eur c'hlaez e welas eur c'had en eul laz-kroug; kredi a c'helloc'h, ne reas ket sin ar groaz evit he digas gantan. Neuze e reas diou lodenn; en eun tu e lakeas ar c'hroc'henn, ar penn hag ar bouzellou hag en eun tu all e lakeas ar c'hig mat. — « Pehini, ez pezo, Paolig, lavar? » — O! an hini vrasa n'eo ket ouspenn d'in, eme an diaoul. » — Mat! ouspenn d'in me, eo eme Léon, kas anezi ganez; hag e strinkas d'ezan en e bod, stripou, kroc'hen, kaoc'h ha bouzellou ar c'had. « Ha brema, eus ar c'haol-man, petra ez po, ar pez a ioa en douar pe ar pez a ioa war c'horre? — O gwelloc'h eo ganen ar pez a ioa ebarz, eme Paolig, ar re ze n'o deus paket na tomm na yen, na glao nag avel. » Ha war c'horre e stripou gad, an diaoul a voe taolet d'ezan trujou kaol d'o ber e bodad soubenn. Ha ker kent, tan ken a sute dindan ar podou; ar zoubenn a vervas hep dale hag eun heur goude edo dare koan gand an daou gaulard. — Stagomp ganti, eme an diaoul touketoc'h eget daou gi; met ar vec'h m'en devoa lounket diou pe deir loaiad ma en em lakeas da streffial, da c'hlaourenni ha da granchat a gleiz hag a zeou kement ha kement ma c'houlenmas Léon, en han Doue, eun disc'blavier. « Chê, a lavare Léon outan e-unan, me a gave d'in an dud eus ar seurt-man a ioa tud direus, tud hag a zebrfe ar marc'h hep e gignat, met fazia em eus graet rak an Aotrou Paolig a zebiant kaout ar staon gwall dener; gwir eo, e zoubenn, daoust dezi da veza eus ar re zrusa n'edo ket eus ar re wella. »

Paolig a oa brema ehanet da duffal; dont a reas da c'houlenn tanva soubenn Léon: « Ar c'haz eo, eme Léon bremaik mar kerez e po ar pod da lipat; ma karfez beza graet eun tammik nebeutoc'h a dan dindan da goan e piye gallet hen lakaat da zisken c'houekoc'h; sell, breman e c'helles lipat d'in strad va fod. » An diaoul a gavas ken mat soubenn e vignoun ma ne c'helle mui distaga e beun diouz ar pod; karer en dije bet chom d'hen lipat betek hanternoz. — « Aillo! eme Léon, n'eo ket red d'id chom aze marc'had mao bloaz rak toulla ar rafes din va fod. » Daoust ha ma n'oa ket leun e gov (o! n'en dije ket e garget buan o lipat evelse) Paotig a dennas e benn er maez rak mall edo dezo mont da glask loj en eun tu bennak. An heol a ioa aet pell a ioa da guzat hag an tousegi hepken o youc'had er c'haeou koz a dorre sioulder ar maeziou...

(Da gendalc'her).

MABIG BREIZ.

Feiz ha Breiz

HA KROAZ AR VRETONED

KELAOUENN VIZIEK GANT SKEUDENNOU

Relijion — Istor Breiz — Marvailhou — Gwerziou
ha Soniou — Buhez ar Vro

RÉDACTION

J.-M. PÉRROT, Plouguerneau (Fr.) | Y. LE MOAL, Coadout, p' Guingamp

ADMINISTRATION
du FEIZ HA BREIZ :
FR. GEORGELIN,
Brest — 4, rue du Château — Brest
c/c 44-40 RENNES

ADMINISTRATION
du *Bleun-Brug* et de l'*Emgleo Sant Iluz*
YV. DREZEN,
BREST — 4, rue du Château — BRES
c/c 6238 RENNES

ABONNEMENTS INDIVIDUELS
« FEIZ HA BREIZ » et « KORN-BOUD »
Bretagne 12 f. l'an
France 15 f. l'an
Etranger 25 f. l'an
Abonnements collectifs
Feiz ha Breiz (seul)
(à partir de 5 exempl.). 8 f. l'an

PUBLICITÉ
Toutes les insertions sont faites
à l'année
Une page entière 300 fr.
Une demi-page 175 fr.
Un quart de page 100 fr.

TAOLENN AR MIZ. — Lizer an A. Gouraud, Eskob Gwemed. — Ar Bleun-Brug e Gwened hag e Santez-Anna. — Gwerz Santez Anna Wened. — Alc'houez an eurusted. — Digoromp mat hon daoulagad, BREIZADIG. — Kenteliou Tintin Anna. — Ar Vretoned beziet e Sant Erwan ar Vretoned, P. G. — Mikael an Nobletz, J. U. — Kerne, Y.-M. COADOU. — Kalon vat eur bugel, P. BRELIVET. — Troiou kam Leon ar Bris, MABIG BREIZ.

SULIOU HA GOUELIOU AR MIZ

- 5 a viz Gwengolo. — XV^{et} sul goude ar Pantekost. Oferen ha gousperou ar zul-ze.
- 8 a viz Gwengolo. — Ginnivelez ar Werc'hez Vari. Gouel devosion.
- 12 a viz Gwengolo. — XVI^{et} sul goude ar Pantekost. Oferenn ha gousperou ar zul-ze.
- Er zizun-man e tigouez ar pevare amzer.
- 19 a viz Gwengolo. — XVII^{et} sul goude ar Pantekost. Oferenn ha gousperou ar zul-ze.
- 26 a viz Gwengolo. — XVIII^{et} sul goude ar Pantekost. Oferenn ha gousperou ar zul-ze.

*An A. Gouraud, Eskob Gwened, en deus kaset da
Rener ar Bleun-Brug al lizer madelezes a zo
aman warlerc'h :*

Evêché
de
Vannes.

Vannes, le 7 août 1926.

MONSIEUR LE PRÉSIDENT,

Ainsi que j'ai déjà eu occasion de vous le dire, je suis très heureux et très honoré de voir le Bleun-Brug tenir son prochain Congrès annuel à Vannes.

Je veux croire que ce Congrès continuera et consacrerà le succès de celui de Guingamp et qu'il contribuera, par ses enseignements, à fortifier l'amour de nos populations pour leur Bretagne.


Sans rien renier de la gloire qui lui revient d'appartenir à la grande et belle nation française, la Bretagne a, dans son passé, dans sa langue, dans ses mœurs et jusque dans les services qu'elle a rendus et qu'elle rend encore, un ensemble de traits providentiels qui suffisent à autoriser, chez elle, un régionalisme bien compris.

A l'encontre d'une centralisation à outrance, nous affirmons que la nation est faite, plus de la mise en commun des énergies particulières à chaque région que de la prépondérance d'une province sur les autres ou de leur opposition. Mais nous reconnaissons que chaque province a des intérêts et des droits qui lui sont particulièrement chers.

C'est dans ce sens que notre régionalisme se préoccupe surtout de maintenir chez nous l'esprit catholique qui fait la grande force de la Bretagne.

Il serait superflu qu'un évêque breton vous en félicite. J'aime mieux vous dire simplement ma joie de bénir vos efforts, Monsieur le Président, et ceux du Bleun-Brug.

† ALCIME,
Evêque de Vannes.



An Aotrou GOURAUD
Eskob Gwened

Ar BLEUN-BRUG

— e Gwened

— hag e Santez-Anna

An traou kaera a vo da welet e Santez Anna, d'ar 16 a viz gwengolo, goude ar c'henstrivadegou, a vo staget ganto da 8 eur, diouz ar beure, eo, eus a 9 eur hanter da 10 eur hanter, kanadeg kanerien ha kanerezed Brest a gano, e c'hoariva Nikolazig: setu amañ reolenn ar gana-deg-se a vo eun drugar he c'hlevet.

Sainte-Anne d'Auray Concert breton du 16 Septembre

PROGRAMME

1^{re} PARTIE

Cantiques Bretons

- 1° Itron Santez Anna, chœur à 4 voix mixtes.
- 2° Patronez dous ar Folgoat, chœur.
- 3° Adoromp oll, chœur à 3 voix mixtes.
- 4° Santez Mari, chœur à 3 voix mixtes.
- 5° Ni ho Salud stereden vor, chœur à 4 voix mixtes.
- 6° O Guerc'hez Vari, chœur à 4 voix mixtes.

2^e PARTIE

Chants profanes

- 1° Bemde Bemnoz (Solo de Basse).
- 2° Kalon ha Kalon (Solo de Soprano).
- 3° Silvestrik, chœur à 3 voix mixtes.
- 4° An durzunel (Solo de Basse).
- 5° An Tour dantelezet, chœur à 4 voix mixtes.
- 6° Pa guz an heol (Solo de Basse).
- 7° Loeizaik, chœur à 4 voix mixtes.
- 8° Bro goz va Zadou, chœur à 4 voix mixtes.

Tous ces morceaux sont tirés des Kanaouennou, à l'exception de *Itron Santez Anna* et *Bro goz va zadou*.

E Santez-Anna, an oferenn a vo lavaret, evel an deveziou brasa, war ôter ar *Scala sancta*, gant an Otrou Guillevic, vikêl-vras Gwened. Ar brezegenn a vo grêt gant an Otrou Buleon, person iliz-veur Gwened, da lavaret eo gant an hini en deus hentchet a-bell pe a-dost kement hini a labour hizio evit ar Vro.

E c'hellit kredi, ar brezegenn a reio en em gavo enni ar pep brasa eus e ouiziegezh, ar pep gwella eus ar c'hen-teliou en deus bet roet a-viskoaz diwarbenn traou ar Vro.



An A. BULÉON

Person Iliz-veur Gwened

Raktal goude lein, *Tiegeziou Breiz*, ar re goz gant o bugale hag o bugale vihan, ar re nevez gant o dilhad-eured hag o renerien, a raio tro Keranna evit lavaret eur bedenn dirak *bez-meur* ar zoudarded ha daoulina dirak

Santez Anna, a deñio d'o digemeret war droujou he iliz.
 Goudeze e vo diskleriet peziou c'hoari e tri lec'h asamblez
 hag e holl yezou Breiz-Izel ma c'hello an holl en em
 gaout e Santez Anna evel eur gêr.

PASION GONERI,

gant J. AR BAYON.

Elouez an holl beziou-c'hoari a vo displeget e Gwened
 hag e Santez Anna, gant gouelioù ar Bleun-Brug, ar renk
 kentan a vo da « *C'honeri* ».

Petra, *Goneri*? Eun dôlenn tennet eus istor ar brezel
 bras. Kalz a dôlennou evelse hon eus lennet; hini ebet,
 avat, stummet seurt gant hini an O. Ar Bayon. Kontan,
 disklêrian, livan poaniou ha reuzioù ar zoudarded, ze
 zo bet grêt n'oufer lavaret ped gwech dija; perak eta en
 em gaver ken souezet dirak pezh-c'hoari an O. Ar Bayon,
 evel dirak eun dra nevez flamm, eur pezh hag ez eo pell zo
 an danvez anezan eun dra brudet dre holl? Abalamour
 m'eo disklêriet kement zo ennan en eun doare nevez ha
 setu pehini.

Poaniou e gloareg soudard ha pasion Hor Zalver, an
 oberour en deus laket anezo kenver-ouz kenver, ma wel-
 ler, hed-a-hed ar pezh, ar Mestr hag e ziskibl o c'houzanv,
 war an dro, an hevelep pasion.

Talvoudegez dispar an drajedien-man a deu eus an
 henvelidigez-ze; ac'hano ar gened, al lusk, an uhelded a
 zo enni. Eur skouer d'her rei da entent.

Goneri a deu da vriata e vamm en deziou warlerc'h
 m'eo bet kemeret da zoudard; houman a ya d'ambroug
 anezan eun tammik war an hent ha setu ma wel dirazi
 e korn eur park an arnou hag ar zac'h en doa dizammet
 Goneri eno, breman souden.

Er vam, e tistroein he deulegad

Petra e splann aze ? Ha ! Doh troed un eruen,
 Eur sah sudard, armaj... eur glean, eur fuzillen !

Goneri

Kroez er sudard, me mam !

Er vam

Kemer hi, Goneri,
 A men dehorn, dehorn te vam, kemer hi,
 Ha nerh ar vartired santel e te galon,
 Ke da andur, ive, me mab, te basion.

**War ar memez tro, e weler, e diadrenv al leurenn-
 c'hoari Jezus o samman e groaz.**



An A. BAYON

Oberour « *Goneri* »

Setu, dre eur skouer, petra eo *Goneri*; anaout a rer,
 dre ze, pegen estlammus tra e vo da welet e Gwened
 hag e Santez-Anna, c'hoariet ma vo, e tu-hont, gant pô-
 tired hag a zo boaz da bleustri leurennou c'hoari ha des-
 ket gant an oberour e-unan.

Evurus ar Vretoned a c'hello tarva kaerder ar pezh-ze



An A. LOTH

Mestr-Kelenner er « Collège de France »

a vezo c'hoariet dindan paeroniez an A. Loth mestr kelenner er « Collège de France » hag unan eus gouizieka tud ar bed holl war an traou keltiek.

**

Evit bezan sur da gaout eur plas e teâtr Santez-Anna, d'ar 16 a viz gwengolo, kas an hano ha priz ar billhed a c'houlenner, *gant 20 real ouspenn* da:

An Ao. Milon, 6, rue du Maréchal Foch, Vannes. Setu priz ar plasou: *Kadoriou: 20 lur; E kreiz ar zal, 10 lur; E kosteziou ar zal: 20 real.*

**

A zo pedet da gesta evid ar *Bleun-Brug* e Keranna d'ar 16 a viz Gwengolo:

An Aotrou hag an Dimezell Delisse, eus a Venez-Alban, Breiz-Uhel.

An Aotrou hag an Dimezell Jaffrennou, eus a Geraez, Bro-Gerne.

An Aotrou P. hag an Dimezell Val. Abjean, eus a Blougerne, Bro-Leon.

**


***Ez veo pe ez varo an holl Vretoned, war a leverer, a dle mont da Zantez-Anna.**

Kemerit eta tro eus ar goueliou kaer a vo er miz-man, e Bro-Wened, evit mont da bardona da di ar Vamm goz. Ar pezh a c'heller da welet a gaera e Breiz,

evel Feiz,
evel prezegennou,
evel kêr ha kanaouennou,
evel peziou-c'hoari,
evel gwiskamanchou,

a weloc'h eno!

Bretoned, it holl-da Zantez-Anna.



Ar Scala-Sancta

Gwerz Santez Anna Wened

Me

eo

ANNA

Mamm

Mari !



C'houi

eo

ANNA

Mamm

Breiz !

Itron Santez Anna,
Mirit ho Pretoned,
Goulennit dreist pep tra,
Ma vint fidel bepred.

1. D'eomp da Zantez Anna,
Ya d'eomp holl Bretoned,
Eno an neb a ya
Ganti zo selaouet.
2. Evidomp, pebez sked
Ha levenez ive,
P'eo deut d'hor c'hemeret
Evit he bugale.
3. Evidomp-ni ema
He c'harantez vrasan,
Evidomp-ni e ra
He hurzudou kaeran.
3. Pegement a re glanv
O deus d'ez i rekour
Hag en drougou gwasan
A gav ganti sikour.
5. Pet gwech he deus roet,
O madelez hep par,
D'an den dall ar gweled,
Ar c'hleved d'ar bouzar.
6. Pet gwech war ar mor bras
Da dud o vont da goll
P'he fedont e tigas
Avel vat en eun taol.
7. Ne vern gant pe seurt kroaz
E vezoc'h ankeniet,
Hi a wella pep gloaz
Er c'horf hag er spered.
8. C'houi tud, gwenn gand an oad
Na zoujit ket an hent,
Ganti goulennit mat
Mervel evel ar Zent.

9. Tud yaouank hag a venn,
A-zevri, mont d'an neuv,
Deut aman da c'houlein
Beza fur, ya'h ha krenv.
10. Deut c'houi, mammou tener
Evit ho pugale
Warni kemerit skouer
Hi zo bet mamm ive!
11. Ar gwerc'hezed ganti
Sur a vo selaouet
Mamm ar Werc'hez Vari
A gar ar Gwerc'hezed.
12. C'houi, tud diwar ar mēz,
Gand ar poaniou gwasket,
Pedit hi, hep paouez
C'houi eo he zud karet.
13. N'eo ket eun den a ger
Eo he dizoloas,
Met d'eur c'hez labourer
Ec'h en em ziskouezas.
14. Pedit hi, tud a vor,
E kreiz ar gwall armer,
He c'halon zo digor
D'ar re zo en danjer.
15. Dreistoc'h, dal ma savo,
Ar mor e houlenou
D'ez i, vit m'ho migo,
Gwestlit ho kalonou.
16. Itron santez Anna
Vid atao trugarez,
D'ho kaout da Geranna,
Ni deuo bep bloavez.
17. Vel eur perc'hirinded
E tremen hor buhez,
Evel dan eo kalet,
Leun a distridigez.
18. Mirit hor c'halonou
Mirit ar Vretoned
Grit d'hor bugaligou
Dont lies d'ho kwelet.
19. O mamm ar Vretoned,
Piou n'ho kar en hor bro?
Ra vimp ho pobl karet
Bremen, warc'hoaz, atao!
20. Grit d'eomp holl d'erc'hel mat
D'ar feiz e pep mare,
Ma vo Jezuz dalc'h-mat
Hon Tad hag hor Roue.



Alhue en Eurusted


Alc'houez an Eurusted



A pe oen é me zri-hueh vlé, pla - hig hemb a - vis
Pa oan em zri-ouech-vet bloa-vez, pla-chig hep nec'h e-



ted, Pla - hig hemb a vis ted, é oé bet rein
bet, Pla - chig hep nec'h e - bet, e voe ro - et



t'ein un al - hué, al - hué en eu - rus - ted é - ted.
d'in eun al-chouez, al-chouez an eu - rus - ted. e - ted.

2

Ha chetu me oeit tre er vro,
E men dorn an alhue,
Eit klaskeien er bed tro a tra,
Dor kaer er leuine.

3

Ar en hent hir e hellen.
Pel d'oh bro en Arvor,
Ag en en eurusted e glasken,
Ne gavèn ket an nor.

4

Splannein e hras men brouite,
Er palezieu kaeran,
Mès ol en eur sireuvet enné,
Ne dorre ket men nan.

5

« Laret d'ein, me tuchentil vat,
« D'emen e vou rekis
« Ridek, eit ma hellein tanhoat
« Huné me iaouankis ?

2

Ha setu me aet dre ar vro,
E va dourn an alc'houez,
Evit klask er bed tro ha tro,
Dor gaer al levenez.

3

War an hent bras hir a heulien,
Pell diouz bro an Arvor,
Eus an eurusted a glasken,
Ne gavèn ket an nor.

4

Skedet he deus va braoentez,
En tiez alaouret,
Met va naon gant o holl danvez,
Biskoaz n'eo bet torret.

5

Livirit d'in, tud chentil vat,
E pelec'h 'vo rekiz
Redek 'vit ma c'hellin tanvaat
Hunvre va yaouankiz.

6

« Plahig iouank, p'er haveët
« Kuhet get er gué bras,
« Mamen en dar e vou-hesket
« En hou teulagad glas ».

7

« Chetu me, eun dé, digoëhet
Get sam er gohoni,
E tal eun ti hanter koëhet,
Dilauket ha gouli.

8

« Get en alhue me zigoras
Dor an tiig hemb toen
Hag ar en ueled me huelas
Leh me havelig guen.

9

Me hanauas me zi a-ben,
Ennon em ès kresket,
Ennon, me mam, ar è barlen,
En dès me luchennet.

10

Koehet é me zi tamm ha tamm,
Me eurusted eüé,
En eurusted ha ti me mam
En dès er memb alhue.

6

P'her c'havoc'h, tost da benn ar bed,
Kuzet gant ar gwez bras,
Mammenn an dærou 'vo hesket,
En ho taoulagad glas.

7

Setu me, eun deiz, digouezet,
Kroummet gand ar gozni,
E tal eun ti, hanter gouezet,
Goloet a ginvi.

8

Gaut an alc'houez e tigoris
Dor an ti hep toenn,
Ha war an oaled e welis
Lec'h va c'havelig gwenn.

9

Anaout a ris va zi a-benn,
Ennan em eus kresket,
Ennan, va mamm, war he barlenn,
He deus va luskellet.

10

Kouezet eo va zi tamm ha tamm,
Va eurusted ivez,
An eurusted ha ti va mamm
N'o deus met eun alc'houez !

J. LE MARÉCHAL.



BRETONEZ, mar karit ho Pro, evel ma livirit,
klaskit eta

LENNERIEN,

KOMZERIEN,

PREZEGERIEN,

KANERIEN,

da vont da Geranna d'ar 16 a viz Gwengolo a zeu
da gemeret perz e kenstrivadegou ar Bleun-Brug.

BREIZ

Digoromp mat hon Daoulagad !

Red eo d'eomp kaout eul lennegezh en hor yez. Perak? Abalamour ia veur a dra; hogen, an digarez a gavan mat disklêria en dro-man eo ma n'heller digeri, sevel ha blêrima d'eur bobl he spered nemet dre he yez hec'h-unan. An holl a lavar eo divlas, eo izel sperejou an dud war ar mêz e Breiz. Deuit eur mizvez bennak da chom e parrez pe barrez eus hior bro, — me zonzj n'eus ket kalz a gemm etrezo, — hag e santoc'h hep dale, mar doc'h boaz d'ober impli eus hō spered ha d'her maga gant gwirioneziou uhel, ez oc'h eno evel en eul lec'h dibourvez a êr, hag ec'h eer evit moug e annan, ma chom'er re bell heb her c'huitaat. N'eo ket dre zroug, na dre oaperez e lavaran kement-man, netra nemet evit disklêria ar pezh a zo.

Ar peb uhela 'barz an den a zo lezet a goste, e spered.

Lavaret a reer, koulskoude, eo desket an dud en deiz a hirio; — lakomp 'ta, hep klask pelloc'h, ez int desket; gouzout a reont lenn, skriva eul lizer, ober eur gont; kozeal eun tamm galleg, met n'o deus tennet goudegezh ebet ac'hano evit ar pezh a zell seveni o spered, e uhelaat, e lakaat gouest da *welet* ha da *danva* ar pezh zo kaer ha da gommunia gant an holl gaerderioù stlabezet endro d'ezo. Devejer pe m'erer karget a vugale, stag da c'hounit e vara adalek beure betek noz, me wel ha ne danva netra eus ar pezh a gaer a ginnig ar bed, an natur d'ezan, nemet ha donêzonou ispisial en dije bet digant e Grouer; — ha koulskoude, nag e santfe skarvoc'h hec'h ar vuhez ma c'hellfe dibrada e spered diouz a douez an traou dister, ma c'hellfe, dreist-holl, rei eur c'horf d'e venozioù, skriva ar pezh a zonzj! Eno 'n hini eman an den, oc'h eñtent hag o tisklêrian an traou kaer kuzet dindan spesou an natur; eno eman ivez, goude dudi ar gonsians vat, brasa plijadur a c'hellfe da danva. Met al lodenn vras vras eus an dud war ar mêz, n'anavezont ket ar blijadur-ze hag a c'hellfent kaout, koulskoude, an eil hag egile, ma vijed 'n em gemeret mat ganto.

'N em gemer fall an hini a zo grêt; eun draik bennak a ouzont, kement ha rei d'o spered eun tamm liou deska-

durez; met en e ziabarz, ar spered n'en deus danzeet netra.

Berr e oant gant o brezoneg; desket 'zo galleg d'ezo, en eur ober pevar, pemp bloaz; setu m'int chomet ken berr all gant o galleg; peadra o deus da lenn ar c'heleier, en eur gazetenn, ha da skriva eul lizer deiz kenta ar bloaz. Lakomp o dije ouspenn... Ouspenn n'eo ket awalc'h!... Dre hent ar galleg, n'arruint e nep lec'h, nemet dre forz amzer 'ha studi, da lavaret eo, dre forz arc'hant ha donêzonou...

Dre ar galleg, n'arruint ket; dre ar brezoneg, ec'h arruint... Grit eun dibab, savit eul lennegezh e brezoneg, — danvez ez eus dija; — grit d'ar vugale deski lenn ha skriva o yez; grit d'ezo pleustri ar skridou dibabet evito; c'hoti welo neuze ar sperejou-ze o tont da vleunia hag hep dale c'houi glevo gant hini pe hini ar gomz-man: Me skrivfe evelse ivez!

Arabad lavaret n'eo ket mat deski ar galleg; ar galleg zo ezomm anezan ken alies ha bemdeiz; met ar gwir deskadurez eo an hini vrezonek. Klask seveni eur bobl, netra nemet gant eur yez ha n'eo ket he hini, a zo labourat eneb d'ar bobl-ze, lakaat re ger an deskadurez eviti, hant anezi da chom dall ha mui dirak ar pep kaera a zo war an douar. Daoust hag an dra-ze a dleje 'n em gaout en hon amzer a *demokrasi*?

Lenn a reomp, war *Dihunamb*, eur skouer kemeret diwar eur brezegenn grêt, neve so, da Vretoned an Hâvr, gant *Taldir*, — skouer Bro Geunri (Pays de Galles). Eno, ar studioù a vez grêt dre yez ar vro, hag an holl en em gav, e skeud-ze, zoken ar paoura, barrek da vezan eun doctor.

Lennit kement-man, me ho ped, ha lakomp doun en hor spered penôs n'eo ket ni eo ar c'henta eus ar poblou, penôs n'hon deus ket debret an aval lokard, troad hag all, hag eo chomet ar pep gwella gant ar poblou all.

« Le pays de Galles a réussi à maintenir sa langue et à la doter d'une littérature extrêmement riche et variée tel qu'aucun pays au monde de même étendue, a dit M. Joseph Loth, de l'Institut, ne peut, excepté la Grèce, en présenter l'équivalent.

Dans cette contrée, peuplée exactement comme la Basse-Bretagne, trois journaux quotidiens, tout en gallois, peuvent subsister! Et ce seul fait en dit long sur l'étendue de l'instruction dans le peuple, et sur sa volonté bien arrêtée de rester Gallois d'abord: deux de ces journaux de 12 et 16 pages, paraissent à Carnavon, le troisième, *Banner ac Amserau Cymru*, une espèce de *Times*, à Denbigh.

Quant aux hebdomadaires et aux revues, ils sont légion,

et ne manquent pas d'abonnés. Chaque Gallois galloisant se fait un point d'honneur de les subventionner tous: et il le fait bien, car quand on m'est qu'à 1.500.000 et qu'on veut demeurer soi-même, aucune individualité ne doit tiédir, chacun doit donner, dans son rayon, le maximum de rendement. Aussi bien, dans cet extraordinaire Pays de Galles, tout le monde se pique, plus ou moins, d'être écrivain ou poète; on rencontre partout des auteurs qui ont publié trois, quatre livres et même davantage; vous entrez chez l'ouvrier, le paysan, vous apercevez un piano et, bien en évidence, les mélodies celtiques: on vous indique tel boutiquier qui est lauréat de plusieurs joutes littéraires et tel modeste passeur qui a remporté un prix d'éloquence.

A quoi donc est due cette extraordinaire vitalité du gallois moderne? A une institution nationale tout d'abord, appelée *Eisteddfod*; et, en second lieu, à l'organisation des « Ecoles du Dimanche ».

L'*Eisteddfod* est une grande assemblée nationale annuelle, où la musique vocale, la poésie et la déclamation occupent le premier rang. Elles sont dotées de prix en espèces qui atteignent des sommes dont nous ne pouvons nous faire une idée.

Les *Eisteddfods* étaient primitivement les assises du Druidisme. Lorsqu'en 1282, mourut le roi Llewelyn ab-Gruffydd, le Pays de Galles perdit son indépendance. Les Druides et les Bardes traqués par les Anglais, eurent grande peine à maintenir, dans l'ombre, leur vieille organisation. Ce n'est qu'en 1819, que le gouvernement de Londres autorisa enfin les Gallois à tenir des *Eisteddfods* publiques et des Gorsedd.

A côté de cette institution purement civile, une autre d'essence religieuse s'était constituée, il y a tout près d'un siècle, sous le patronage du clergé protestant, dans le but d'enseigner au peuple à lire et à écrire sa langue maternelle, à la barbe de l'enseignement officiel, qui voulait la détruire.


Le clergé gallois fonda l'*École du Dimanche (Ysgol Sul)*. Tous les dimanches, dans les villes comme dans les bourgs, le plus modeste vicaire devint l'apôtre de la renationalisation. Les jeunes gens, les enfants, les vieillards, confondus dans le même désir d'apprendre, accoururent à l'école improvisée, souvent en plein air: on lisait la Bible, on épelait les vieux poèmes, on chantait une rhapsodie. Et grâce à la *Ysgol Sul*, l'opinion était préparée à revendiquer l'enseignement du gallois dans les collèges et les écoles primaires. C'est aujourd'hui chose acquise, le gallois est entré à l'école, à côté de l'anglais qui a dû, de fort mauvaise grâce, lui bailler la moitié de la place.

Lavarit d'in breman ha n'eo ket trist, poanuis d'ar galon gwelet penôs e tesker ar vugale vihan en hor skoliou! Abenn ma teuont ermêz ac'hano, da drizek, pevarzek vloaz, petra ouzont-i? Mac'hagni galleg ha mac'hagni brezoneg; n'ouzont ken yez ebet; met bet o deus o « sertifikat! »... Pesort digeri a zo grêt d'o spered? Pesort galloud, pesort lusk beo a zo diwanet en o c'hreiz? Netra ha netra; met bet o deus o « sertifikat! »! Gwell a ze mar deo bet trec'h natur da zeskadur, ha mar o deus miret, en despet d'ar skol, eun tamm eienenn hag a redo adarre, marteze, ma chomont da veva en o c'hêr, war ar mêz.

E Bro-Geumri, dre zikour ar yez, eun niver bras a dud a zo desket c'houek, a zo skrivagnerien, barded; donêzon hor gouenn eo, nemet eo taget ennomp muio'h-mui, e pep giz, gant êzenn mougus ar « programmou »...

En hano Doue, taolomp pell diouzomp sorc'henn diod an deskadurez divrezonek; anez, e vo moustret en hor bugale ar pep kaera' eus o donezennou.

BREIZADIG.



Tadou ha mammou

it, d'ar Bleun-Brug,

da Geranna, d'ar 16 a viz gwengolo a zeu,

gant ho pugale hag ho tud koz,

gwisket holl en ho kaera, ha diskoëzit eno, dirag ar bed, n'ema ket Breiz o vont da ziskenn en he bez, c'hoaz!

Santez Anna a vo kel taouen ouzoc'h ma teuo d'ho tiambroug war dreujou he iliz.



LABOURIOU AR MERC'HED WARDRO AN TI

Kenteliou Tintin Anna

XIX^e PENNAD

Ar Brezoneg en ti

Tro hon eus da veza lore'hus eus hor Breiz, eus hor yez, eus hor Feiz, tri dra dalc'hiet sounn, en o sav, gant hon tadou koz, daoust pegement a ioul o deus bet hag o deus atao an dispac'herien d'o diskar. Ar re o deus rannet ar Frans ha Breiz e « departamanchou », er bloaz 1789, o deus c'hoantaet lakaat an holl da veza henvel, e pep giz: hevelep lezennou, hevelep yez, hevelep gwiskamant; tud oant ha ne oa nemet fallagriez ouz o heul; red eo diskouez d'ar Vretoned an droug o deus grêt ar re-ze e Breiz, o lakaat a-nebeudou ar Vretoned da gaout mez oc'h anzav ez int kristenien ha mez oc'h anzav ez int Bretoned.

Evid enebi ouz spered milliget an Dispac'h eo ez eo bet savet *Feiz ha Breiz, Emgleo ar Bleun-Brug* hag hini *Sant Illud*: pep hini, en e gêr, a c'hell hag a dle poania, hervez e c'halloud, da harpa ar gwir Vretoned a ro o amzer, o deskadurez, o feadra, evit derc'hell « an ti en e zav ». Desket e vezo o c'hreansou d'ar vugale, e *brezoneg*; lakeet e vezint da gomz *brezoneg*, da lenn ha da skriva *brezoneg*. Dija e leverer: « Ar Vretoned a zo iskis! Komz a reont eur yez ha ne ouezont ket he skriva; skriva a reont eur yez all, ha ne ouezont ket he c'homz. » Spered ar ouenn eo a gendalc'h gand ar *brezoneg*; ma

teu ar yez war a-drenv, ar feiz a 'z aio ive d'an traon, ha ma varv ar feiz en hor bro, ar ouenn a zo graet ganti!

Eur vreuriezh all a zo bet savet en eskopti Treger; hounnez eo *Breuriezh ar brezoneg*. « Savet eo, eme an A. Coccagn, dindan paeroniaez santez Anna ha sant Erwan evit miret etouez bugale Breiz-Izel, gwiriou, giziou, yez ha feiz hon tud koz. »

En eul leorig a zo etre va daouarn an Aotr. Coccagn en deus displeget freas petra eo ar vreuriezh ha perak eo savet. Ne c'hellan ket ober gwelloc'h eged lakaat ama ar bajenn a zo diwarbenn ar yez:

« Te yez koz eo buhez Breiz, a skriva eur barz breiz-zad; ha c'hoaz: An dra ar muia red, an dra a dleer kregi dreizan, ez eo ar yez. Ma vez kollet ar yez, Breiz a zo var he zremenven, ha ne vezo ken nemed eur c'hornbro henvel ouz ar re-all.

» Abaoe m'eo staget Breiz ouz Frans, ar brezoneg, daoust d'ar brezel a zo bet grêt dezan evit klask e laza, a chom beo bepred.

» War wellaat, zoken, ez eo aet eur pennadig a zo, ha var wellaat eo red ez afe c'hoaz, rak seul-vui ma vezo krenv ar yez, seul-vui ive eur vro a vo plomm en he sav, hag e vo selaouet he mouez gant an holl vroioù-all. Hag ar yez-ze, penaos e vo miret, penaos e vo krenfaet?

» En eur zeski anezi d'ar vugale, dreist-holl en iliz hag er skol: eur yez a gav he nerz, he sked, he gened, pa vez pleustret warni evit he deski ervad!

» Kement-man n'eo ket lavaret eo dileet lezel a-gostez ar galleg. Nann, deskit galleg d'ar vugale, er skol, met n'ankounac'hait ket penaos ar stumm gwella da zeski d'ar bugel yez Bro-C'hall ez eo he deski d'ezan *dre ar brezoneg*.

» Anaout a ran-eur barrez a zo enni eur c'hure kalonek ha breizad, hag a ra bep sizun, epad eun eur, skol vrezoneg d'ar bôtred hag eun all d'ar merc'hed. Ar vugale a blij kalz dezo ar skol vrezoneg... Evel al labourer ha ne gar ket chom bepred er memez park gant an hevelep labour, ar bugel ive a blij d'ezan eun tam-mig nevezenti.

» Bezit dinéc'h! ar vistri hag ar vestrezed n'en em glemmont ket. Er c'hontrol eo! An eur a roont d'ar brezoneg, n'eo ket eun eur gollet, nag evit deski ar galleg, nag evit digeri spered ar bugel, nag evit lakaat anezan da veza furoc'h, na, dreist-holl, evit kreski en e galon karantez Doue ha karantez e vro.

» Siouaz! dre holl n'eman ket kont evelse. E meur a skol, zoken, mistri ha mestrezed a vefe diaes d'ezo deski d'o bugale yez o bro, p'e gwir i-o-unan n'he

» anavezont ket, pe, ma ouezont he c'homz, n'ouzont nag
 » he lenn nag he skriva. O! pebez kammed vras en do
 » grêt ar brezoneg, an emzao breizek a-bez pa vo brei-
 » zad penn-kil-ha-troad ar vistri hag ar mestrezed kar-
 » get d'ober skol da vugale Breiz-Izel!

» Da c'hortoz, « Breuriez ar brezoneg » a glasko ober
 » al labour talvoudus-ze. Tamm ha tamm, e lako e kalon
 » ar vugale a vo fiziet enni eur garantez vras evit yez
 » o bro, yez o zadou, ar yez kaer-ze hag a zo bet komzet
 » epad keit amzer, hag e lavare anezi, eur breizad goui-
 » ziek ha kalonek, an Aotrou Chaloni Uguen, rener
 » Kloerdi bihan Pont-Kroaz: « Bez' ez eo eun herez san-
 » tel, deuet deomp a-dreuz ar c'hantyejou. Ha lezel da
 » vont da goll eur yez ken kaer a ve eun dra vezus evi-
 » domp, c'hoant am eus da lavaret e vefe eur pec'hed! »

Ya, eur pec'hed e vije! poaniomp holl eta da zavetei
 ar brezoneg, yez hor Zent hag hon duked! Deskomp d'hor
 bugale ar yez-ze hon eus desket var barlenn hor mamm,
 savomp Bretoned kalet, hag e savimp kristenien stard,
 rak ar brezoneg hag ar Feiz, a zo breur ha c'hoar e
 Breiz!



Ar Vretoned beziat e Sant Erwan ar Vretoned ha kompagnunez Sant Erwan ar Vretoned

E **Feiz ha Breiz** miz Eost ez eus bet moulet aman eur
 pennad-skrid war iliz sant Erwan ar Vretoned e Rom
 hag ez eus bet lavaret gant piou eo bet savet ha gant piou
 eo bet diskaret an iliz-se e teuet enni da bedi sant Er-
 wan Heloury hag a vire dindan he leurenn beziou eleiz
 a Vretoned. War zigarez ledanaat an hent e voe taolet
 d'an traon er bloaz 1875; ne jomas anezi nemed eun
 tammig chapel; he mein-bez a zo bet renket e porz
 bras Sant-Loeiz ar C'hallaoued; diouz ar vein-ze e we-
 lomp e oa beziat en hon iliz broadel, Bretoned hag eur
 gall pe eun italiad bennak troet d'en em erbedi ouz All-
 vokad ar Beorien hag o deus bet c'hoant da veza beziat
 en e leve. Ne gomzimp aman nemed eus ar re genta ha
 goudeze e livirimp eur ger bennak diwarbenn « kompä-
 gnunez » ar Vretoned e Rom karget da c'houarn an iliz,
 ar c'hlanvdi hag al leveou a oa stag outo.

Evid anaout beziou ar Vretoned ec'h heulinn ar stu-
 diañenn en deus graet J. de Laurière warnezo; ar
 c'henta maen-bez a zo e marbr gwenn; skeudenn eun
 den gwisket gand eur zae shir, eur gougoul en dro d'e
 benn a zo warnezan; hennez eo maen-bez Per Amect,
 chaloni eus a Roazon, noter ha skrivagner ar Pab, goui-
 ziek bras war gwirioù an Iliz ha gwirioù an dud. Mer-
 vel a eure d'an 31 a viz gouere 1510; harp ennan edo be-
 zioù e vreur Gabriel hag e ni Julian.

War an eil maen e kaver tres eur beleg eus a Gem-
 per an A. Hervé ar Guiriec (ar **Gwiriek**), chaloni e
 iliz Kemper, person ar Gerch e eskopti Roazon, a varvas
 e Rom e miz Gouere 1471. E skoued, — teir vleunenn
 aour war ar glas — a zo kizellet e kornioù uhela ar
 plueg a zo dindan e benn. Tiegez ar Gwirieged a zo
 hano anezan a-bell-ze e Kemper; meur a chaloni en
 deus roet d'an iliz-veur ha meur a damm leve en deus
 staget outi; maner Kermabeuzen e Penhars hag hini ar
 Boueskad e Plogonnec a oa d'ezo; ar c'henta a zo, en
 eun draoniennig koant, e kichen milin ar Pontigou,
 hanter ziskaret, met an eil a zo brao bras, c'hoaz, en e
 zav, tost d'eur c'hoz kastel douar.

An trede maen-bez a zo d'eul Leonad ha, daoust ma
 n'oa ket ker brudet hag e genvroad ar c'hardinal Koativy,
 a oa anavezet gand an holl evit beza eun den desket

bras, barrek da zirouestla ar c'hudennou fuilheta ha da lakat an dud hag ar broioù d'en em glevet: e hano oa Jakez Pennc'hoadig; hanvet e oa bet eskob e Sant-Brieg, met tremen a eure e vuhez evel barnar e Lez-varn ar Pab ha mervel a eure e Rom d'ar 25 a viz eost 1462.



Maen-bez Jakez Pennc'hoadig

Pa deuas ar prins Fransez da veza duk, er bloaz 1442, Jakez Pennc'hoadig a voe e guzulier bras; er bloaz 1450 e voe hanvet gantan ha gand ar Pab Nikolas V da eskob e Sant-Brieg; met chaloniad Sant-Brieg a oa o paouez henvel da eskob Yann Prijant, bet sieller Breiz, hag eskob Leon abaoe ar bloaz 1436; eul Leonad oa ivez p'eo gwir oa ginidik eus a Greac'hkellen, e Gwilkourvest. Trouz a zavas; Jakez Pennc'hoadig a yeas da

Jakez Pennc'hoadig a oa ganet e Gwiklan, er geriadenn a zoug e hano; e dud koz marteze a ziskenne eus aotoned Pennc'hoad Sant-Thegonneg. Yann Hingant hag then a voe kaset evel kannaded da Vro-Zaoz, er bloaz 1442, evit goulenn Izabel ar Skoz da bried da Fransez mab hena an duk Yann V. Pa voent dizro, an duk a oa mall gantan klevet hano, na petra 'ta, eus an hini a dlie beza e verc'h kaer; Pennc'hoadig hag Hingant a lavaras d'ezan e oa braoik a-walc'h ar brinsez da welet, met ne ziskoueze ket kaout kalz a spered. — « O ! eme an Duk, a-walc'h a draou a oar ma 'z eo gouest da lakaat kemm etre sae ha lerou he fried. » War a lavar ar chaloni Guillo-tin de Corson, an dukez nevez, ma ne voe ket unan eus ar re spere-deka a voe da vihanan unan eus ar merc'hed gwella ha kareta a zo bet azezet war dron Breiz.

Rom evit gwelet ha gounid a raje e brosez; met eur wech en em gavet e Rom ec'h en em blijas eno ha ne glaskas ket dizrei ken d'e vro. Beva a eure eno c'hoaz daouzek vloaz ha beteg e varo e viras, evel eun enor, al dezhanoe a eskob. **hanvet** e Sant-Brieg hag e lezas e genvroad e peoc'h en eun eskopti a oa e hini. Dont a reas da veza unan eus barnerien Lez-varn ar Pab.

War ar pevare maen-bez e weler skeudennet Gwilhou Huelgoad, (**de Alto nemore**) chaloni eus a iliz Gwened ha madoberour iliz Sant-Erwan; da gredi eo e oa ginidik eus a vaner Kymerc'h, e Bannalec. War eur maen all, skoued herminiget Breiz warnan, e kaver skrid-bez Yann Channe, eus a eskopti Roazoun, « eur skrivagner mat ha deal eus a lez ar Pab ». War eur maen all e kaver skrid-bez eur c'herne, « Anton ar Barvek, den brokus ha brudet, bet ganet e Kemper ha maro e Rom, er bloaz 1468 », savet d'ezan gand e vreur Bertran, vikel vras Landreger. Ar Barveien-ze a oa ginidik eus ar C'hilhou, e Plogastell-Sant-Jermen. Gwelet a raer c'hoaz e koad ar C'hilhou, moudenn ar c'hastell koz bet dismantret epad brezelio u ar re unanet. Beziou all c'hoaz a weler eno evel re Ber Ragot, beleg eus a eskopti an Naoned, Konan Rieu, eus a eskopti Gwened, desket bras war gwirioù an Iliz, maro er bloaz 1462, ha Jakez Evain, person Sant-Kongard, en hevelep eskopti, maro er bloaz 1529, dres p'edo o vont da zizrei d'e vro. Ar vein all a zo bet war C'hallaoued. Spagnolad hag Italiiz, a oa bet falvezet ganto, dre zevosion evit sant Erwan, ober o c'houisk diveza en e iliz. Arabad koulskoude chom heb ober hano c'hoaz eus bez eur breizad all a gaver eno, hini Stephan Broussaud, person Moutiers, en eskopti Naoned, alvokad er prosezou a veze kaset da Rom, maro er bloaz 1458.


Eleiz a Vretoned all a oa o relegou e iliz sant Erwan, met mein o beziou a zo kollet. E ilizou all euz ker e kaver ivez beziou Bretoned; e iliz Santez-Mari **del populo** e kaved hini « Yann Kardelec, dijentil breizad, vikel vras Landreger, maro er bloaz 1493, e Sant-Gregor-ar-Bras, hini Yann ar Bigot, chaloni an Naoned ha Dol, maro er bloaz 1499, eun eil sant Erwan rak war e skrid eo dezhanvet: « Paeron ha difennour mat prosezou ar beorien » hag hini Yann Blumaugat, chaloni an Naoned, doktor war ar gwir koulz war hini an Iliz hag hini an dud, maro er bloaz 1508. E iliz an **Incoronata**, e Napl, e kaved bez Emer Bouchier, dijentil eus a eskopti Leon, maro er bloaz 1387, hag a dlie beza ginidik, m'oarvat, eus a vaner Kermaldic, e Kleder. Skouedou ar Bouchiered a weler c'hoaz war eur maen-bez e Lokrist-an-Izelve, e parrez Gwinevez.

Er XV^{vet} kantved e oa kalz Bretoned ha Bretoned a renk uhel e Rom — rak eun darn vat eus ar c'hargou- iliz a oa e Breiz, d'ar Pab-oa henvel ar re a dlle mont enno, setu perag e ranke kaout tud war e dro d'e skle- rijenna. Eleiz a veleien a yee neuze da jom da Rom da heul ar c'hardinal Koativy, Hug Montrelez, Philip Koat- kiz, Yann Malestroit, Andre d'Espinay, ha Roparz Guibe, unan gwelet mat dreist gand an Dukez Anna. Hen- man, maro er bloaz 1513, a oa bet beziet e Sant-Erwan ar Vretoned; hag unan eus brasa madoberourien an iliz e oa, met e vez n'eo ket bet kavet; beleien Breiz, deuet da Rom da heul an Aotronez vras-ze, a en em glev- mat; savet o devoa ken etrezo eur gompagnunez, hag er bloaz 1420, ar gompagnunez-se he devoa eur c'hlanv- di evit digemeret ar Vretoned paour a yea da bardona- da Rom. Er bloaz 1455 ar Pab Kalixt III a reizas reolen- nou ar Gompagnunez-se hag a roas d'ez i a-leve, iliz Sant-Andre, a voe adalek neuze, hanvet iliz Sant-Er- wan. Eskop Condom, Gwillou d'Estampes, eo a lakas an iliz-ze, d'ar 16 a viz mae 1455, etre daouarn Gwil- hou Huelgoad, chaloni Gwened, rener kompagnunez ar Vretoned, he ferc'hen nevez; leveou bras a voe staget ouz an iliz hag ouz ar c'hlanvdi.

An A. Pocquet du Haut-Jusse en deus embannet er bloaz 1919 eur studiadenn vat war ar gompagnunez-se. Re hir e vefe tenna anezi an holl hanoioù a ro da anaout; rei a raimp hepken hanoioù ar re a zo bet er gompagnunez-se hag e oa ginidik eus a- eskopti Kem- per pe Leon. Etouez kenvreudeur ar gompagnunez e kaver, er bloaz 1514, Raoul Koatanscour, person Plou- gasnou, gnidik eus a Gerveney, er barrez-se; er bloaz 1519, Dominik Chevede, kloareg eus a Gemper; Olivier Trevaroc, eus a Landudal, chaloni Landreger; Charl Mehault, manac'h eus a Landevenneg pe eus a Gem- perle; er bloaz 1510, Yann Kenderv, person Briec, bet gouarner Kompagnunez Sant-Erwan a ro, dre destam- mant, e weleou hag e zilhad wele d'ar c'hlanvdi. Yann al Leskoued hag hen, o devoa eun draig bennak da gaout bep bloaz digant parrez Kemeneven. Anzav a ra e tle 5 skoued aour da Dhomas an Diyanac'h, rei a ra e zae hag e vare'h d'e vevel Visant ar Braz, e zilhad ruz da Yann al Leskoued, e zilhad glas-ruz da Fransez Ker- fors, eus a Erge-Gaberic. Ar re a zo kanget da lakat e destamant da dalvezout eo Yann al Leskoued, Thomas ar Roue, unan eus ar re o devoa ar muia kargou-iliz, en amzer-ze ha Krisof Corr a vezo person e Plouyann, divezatoc'h. Etouez an testou e kaver Mauris Bozec, chaloni Landreger, eus a Golledic, e Gwerlesquin, ha

Gwenole Gwikasnou, kloareg Leon, eus a Lezireur en Henvic.

Er bloaz 1556. Per Conyn, kloareg Kemper, a voe be- ziet e Sant-Erwan. Er bloaz 1563, heritourien Gwilla- med ar Vreizadez a laka eur maen war he bez hag a ro diou linsel d'ar c'hlanvdi. An iliz he devoa bet eun draig bennak eus a relegou he sant paeron, hag a vire anezo en eur relegouer arem alaouret roet gant Gwil- hou Huelgoad; kaout a raet enni ivez eleiz a zilhad-ofe- renna, herminigou warno, hag eur glozenñ alaouret ki-



zellel er bloaz 1561 gant an orfebrer Galesio hag e ve- vel Charl Troclere, eus a Vontroulez. Skoued Breiz ki- zellel er marbr gant Per ar Bigot a weled a-zioc'h an nor-dal gand an enskrivadur-man : DOMUS : ECCLE- SIAE SANCTI YVONIS : NATIONIS BRITANIE. Ar Gompagnunez a lakeas kempenn an Iliz etre ar bloaz 1556 ha 1575. Tro-war-dro d'an aoter vras, ar moge- riou a oa livet herminigou ha lili warnezo hag an dao- lenn a oa adre kein an aoter a weled sant Erwan warni. Ne ouezer ket ha bez' e oa eur zant breizad all bennak o kaout eun aoter en iliz pe ne oa ket; goude burzudou Keranna, santez Anna he devoa he aoter enni; san- tez Genovefa he devoa ivez he hini. Pa zigoueze gouelioù bras, ar Vretoned a deue d'an ofereñn a oa bro- kus gant o frofou. Etouez ar re vrokusa e kavomp, er

bloaz 1549, Joël Quinio ha Jakez de Bouteville; er bloaz 1551, Julian Demeayre, chaloni Kemper, er bloaz 1533, Yann Kergelenen, eus a Bouldergerat, e kichen Kemper. Er bloaz 1501 evit gouel sant Erwan, kemeret evit paeron gant Lez-varn ar Pab, e oa seiz kardinial er gousperou kenta ha daou anezo zoken a dlhe pignat divezatoc'h war gador sant Per, Piccolomini, a deuas da veza Pi III hag Alexandr Farnèse a deuas da veza Paol III. Antronoz, an eskob breizad Roparz Guibe, kannad ar Roue, a deuas d'an oferenn-bred, gand eun arc'heskob ha pevar eskob. Ar pardon-ze a veze graet gant lid bras, ouz son an ograou hag an trompillou; ar mogerioù a veze fichet kaer hag an eskob a oferenne a veze roet dour roz d'ezan da walc'h e zaouarn; eur pred bras a gloze ar gouel.

Da c'houel ar Zakramant e veze graet eur prosesion gaer ha beleien Sant-Loeiz ar C'hallaoued a gemere perz enni. Da veurlarjez e veze gourinadegou. Kement hini a deue da c'hourin a veze roet d'ezan eur zae lien gwenn, eur gouriz seiz, eun tok hag eur re vanegou; ar gouriner en deveze an trec'h war ar re all en deveze tri gilhog. Da gloza an abadenn e vezo roet d'an holl eur c'hortozenn gant mel, avalou ha gwinn.

Met ar Vretoned n'en em vodent ket hepken evit c'hoari ha pedi; en em glévet a raent ivez evid ober aluzen; savet o devoa evit se eur c'hlanvdi; er bloaz 1569, ar beleg a oa e benn oa Fransez Fabri eus a Zan-Malo, ha gwellet a reomp e c'houe hemenned d'ezan dere'hel urz vat en ti, digemeret bep noz ar beorien, hag o lezel da vale antronoz yntin, ar pez a ziskouez ne roet nemet loj, da vihanan, d'ar beorien a oa gouest d'en em jacha. Eleiz a aluzennou a veze graet eno d'ar Vretoned ezommek. Er bloaz 1581 e paeet dilhad nevez d'eur beleg paour eus a Vreiz evit ma c'helle antronoz mont d'an oferenn da Zant-Erwan. Er bloaz 1550, Per Botrel, eus an Naoned, deuet da veza dall, Kompagnunez sant Erwan a roas d'ezan eun tamm arc'hant, bep miz, hag a lakeas anezan da vont da glanvdi Sant-Loeiz-ar-C'hallaoued, en eur baea evitan eno, beteg e varo. Ar re a zistroe da Vreiz a veze roet eun mebeud skouejou aour d'ezo da ober o hent, dreist holl ar bardonerien, evel ar beleg leonad Yvon Lagadeuc, er bloaz 1578. Er bloaz 1567, eun itron, Michela ar Borgn, eus a Lesquiffou e Pleber-Krist, pried pe intañvez Roland Kerjagu, o veza deuet da Rom da bardona gant peder dimezell hag o flac'hed, renet gant Yann ar C'hoz hag e vaouez, ar gompagnunez a zigemeraz anezo en he c'hlanvdi nevez kompennet hag a roas d'ezo kement o devoa ezomm. Ar re-man a en em gavas ker brao eno ma chomjont betek ar bloavez warlerc'h. Ar gompagnunez

gnunez koulskoude, o wellet e oa eur mizou bras ganto a gemennas d'ezo ne vijent ket dalc'het ken en tu all da c'houeliou Pask hag a c'houe hemennas da Yann ar C'hoz ha d'e vaouez ren eur vuhez dereatoc'h.

En amzer-ze ivez e kavomp, e touez ar re a zo e kompagnunez sant Erwan, eur C'herne eus a Scaer, Kristof ar C'houedig, eus a Gergoalder, bet kabiten e stourmad Sant-Albin-an-Hiliber, unan eus tadou koz kabiten kalonek ar **Zurveillantez**. Darn eus ar bardonerien a yea betek Jerusalem, daoust pegen danjerus e oa an hent. Er bloaz 1581, Armel Brunel, eus a Roazon, goude ma oa bet laeret gand an Durked, a voe roet d'ezan, gand ar gompagnunez, peadra da brena dilhad nevez.

Fransez du Pré, eus an Naoned, bet trouc'het e zourn dehou dioutan gand ar Vuzulmaned a voe lojet er c'hlanvdi. Ar breizad Per an Herisson, barnet d'ar galleou evit dle, a voe paeet e zle d'ezan gand e genvroiz madelezus ha lezet da vale. Er bloaz 1579, ar gompagnunez a baeas ivez ar pez a dlhe evid o finijenn daou veleg eus a eskopti Kemper, Ronan Plousec ha Yann Hourman, deut da glask an absolvenn da Rom evit beza lazet eun den, daoust ma n'edont ket o klask hen ober.


Etouez Renerien pe c'houarnerien kompagnunez Bretoned Rom e kavomp Yann Kendery, person Brieç, er bloaz 1510. — Yann al Leskoued, chaloni Kemper, er bloaz 1514. — Per Chevede hag Alan Coatrehiou, kloareg Kemper, er bloaz 1521. — Gabriël ar C'hleuziou, kloareg Kemper, person Maël-Pestivien, er bloaz 1547; — Yann Kergelenen, chaloni ha tenzorier Kemper, er bloaz 1555; Yann Rimesco, (eus a Blozevet) kloareg Kemper, er bloaz 1557.

Etouez ar re vrudeta, a gavomp er gompagnunez, e c'heller henvel Yvon Laudrein, diwardro Kemperle, er bloaz 1547; Nicolas Bozec, eus a Werleskin, er bloaz 1548; Alan Lezongar, eus a Eskibien pe Benhars, er bloaz 1548; Julian Bridou, person Landerne, er bloaz 1554; Yvon ar Yaouank, person ar Forest, e kichen Landerne, er bloaz 1555; Ronan Neve, e Plounevez-Parzay, er bloaz 1557.

E eil hanterenn ar XVI^{vet} kanved Breiz, da heul ar Frans, a grennas gwirioù ar Pab; o veza ma n'oa ket Rom eo a hanve ken personed ar parrezioù, beleien Breiz a yeas kalz nebeutoc'h da gêr-benn ar gristenien; o c'hompagnunez a gollas e galloud; er bloaz 1583, war goulenn Herri III, Gregor XIII a stagas Sant-Erwan ar Vretoned ouz Sant-Loeiz ar C'hallaoued; Bretoned Rom a welas gant tristidigez o zi o koueza, rak daoust pegeit e oant diouz o bro n'oant ket evit he ankounac'haat; unan anezo a skrive, e latin, war baperou ar gompagnunez :

« Daoust da bep tra, bevet hor Breiz karet! » eun all a skrive, e galleg: « Vive la noble nation de Bretagne (malgré qui) contredire voudra ». Hag eun trede goude beza skeudennet skoued herminiget Breiz a laka dindan ar geriou-man: **Ewiva Bretagne**. An dud-ze a gare o bro, met abeg a gavomp enno dre ma ne skrivent ket en he yez; ene eur vro koulskoude eo he yez; klozomp lior pennad skrid dre ar bedenn-man a rea unan anezo da zant Erwan: « **S. Ivo, ora pro nobis, adesto nobis propicius custos, pius et clemens defensor** ».

G. P.



Chapel sant Mikael e Plougerne
gant Yv. Floch

Mikael an Nobletz

(1577-1652)
(Kendalc'h)

Mikael an Nobletz a gendalc'h da labourat e Plougerne

Kaset kuit eus ar gêr gand e dad, Mikael en em lakeas etre daouarn Doue, evel ma reas gwechall sant Fransez a Asiz, a c'hoarvezas gantan ive hevelep tra. « O va Doue, a lavaras Mikael, da bellec'h ez in breman nemet davedoc'h? C'hwi eo Tad ar beorien hag an emzivadec. Va c'hemerit, va Doue, evit ho pugel. Roit d'in ar c'hras da veza ivez ho pugel. Roit d'in ar c'hras da veza eur bugel sentus ha leun a fizians ennoc'h. Va hentchit: me a raio ar pezh a c'houlennot diganen. Ho pezet truez ouz va zad ha va mamm, ha n'o c'hastizit ket evid ar pezh o deus graet enep d'in. »

E lec'h mont pell eus Plougerne, Mikael a jom en e barrez, en deus c'hoant da c'hounit holl da Zoue. E ti e vagez vat e kavo adarre dor-zigor. Ac'hano ez aio dre ar barrez d'ober katekiz ha da brezeg.

Eun dudid oa e wetet etouez ar vugale, o kelenn anezo, o teski d'ezo o fedennou, ar *Bater, Ave, Credo, Confiteor*, gourc'hemennou Doue hag an Iliz. Habask, madelezus, e c'houneze buan ar vugale, hag ar re-man a rae ar pezh a veze goulennet diganto.

Met, ma 'z oa habask gand ar vugale, pa veze o prezeg d'ar re vras e komze gand nerz ha dispont eneb ar pezh c'hejou, ar gizioù fall. Gand ar vugale oa evel eun oan, a skriv an Tad Maner, met yudal a rae evel eul leon war bec'hejou ha siou fall ar re vras, al laeronsi, ar vesventi, an hudurnez, ar festou, dansou, c'hoarioù noz. Eur c'hiz fall a oa war ar mez en e amzer: ar c'hiz da vont da veilha, epad ar goanv, gwech en eun ti, gwech en eun ti all. Var zigarez neza, ober stamm, ar merc'hed en em vode evelse, en eun heyelep lec'h. Met an dud yaouank, potred, plac'hed, a gave tro evelse da vont da c'haloupat noz, hag e veze dizursiou. Mikael a skoas kalet war ar gizioù fall-ze, ha mat a reas, rak gand hevelep gizioù ne vez ket pell eur barrez evit beza kollet.

Skler eo, e brezegennou ne blijent ket d'an holl. Ar wirionz a zo kasas. An dud fall eus ar barrez a glaskas meur a wech en em gaout gantan war an hentdou war tremene dreizo, evit skei gantan. Eun dijentil eus e gerent a c'hoanteas, betek teir gwech, e laza gand e gleze, met ne c'hellas ket e baka. Eun deiz, en iliz, edo o vont da denna varnan eun taol pistolenn. Mikael, e lec'h tec'het, en em lakeas war e zaoulin, a zispakas e vruched. Dirag eun hevelep merz-kalon, an dijentil a jomas souezet ha ne dennas ket.

Meur a hini eus beleien ar barrez en em zavas ive en e eneb hag e damallas dirak vikell vras Kastell, an aotrou Gat. Mikael n'en doa gwenneget ebet evit mont betek Kastell, hag a rankas goulenne digant fabrik ar barrez presta d'ezan eiz real.

Ar vikell vras a welas buan oa bet tamallet Mikael dre warizi, hag e lec'h e goundaoni, e bedas da veilha var doare beva e damallerien. Mikael a reas evel m'oa goulenne digantan, nann dre gasoni, met evit mad an enecou hag enor an Iliz.

Met ar re a voe diskleriet gantan en em unanas etrezo hag en em glemmas en dro-man ouz an aotrou 'n eskob e-unan. An trec'h o defe bet, ma ne vije ket bet difennet Mikael gand an aotrou Louet, vikell vras, en doa anavezet p'edo var ar studii.

Mikael an Nobletz a lak e dad, e vamm, hag e c'hoarezed da gerzout dre hent ar zantelez

E dad a jome ato kounnaret outan. Poan a rae d'ezan e welet o ren eur vuhez paour ha dister, gwisket fall, bevet fall, hep karg ebet, goude beza bet keit amzer er skol. Eun deiz zoken, dallet gand ar gounnar, ez eas war e lerc'h gand eur vaz, da glask lopa warnan. Met Mikael a c'hellas tec'het kuit en eur redet, hag a viras evelse ouz e dad d'ober an taol fall a oa en e benn.

Antronoz, eun deiz sul, Mikael a bignas er gador, hag a reas eur brezegenn gaer war deveriou an tadou hag ar mammou ha deveriou ar vugale. E dad, an aotrou a Gerodern, a oa en iliz, hag o tont d'ar gêr, e lavaras d'e wreg: « Mat! Eur prezeger dispar eo hor mab evelato. E zoare beva a zisplij d'in, met er gador e lavar traou kaer. Hent an Nenv a ziskouez. »

Ar prezeger en doa gwelet e tiskenne e gomzou e kalon e dad. Bemdez e pede evitan, ha leun a fizians e Doue, ez eas d'e gaout da Gerodern. Digemeret mat e voe. An tad n'oa mui kounnaret, komz a reas brao ouz e vab. Heman neuze a gemer an hardisegez da rei eur gentel d'e dad, evid e c'houmit da Zoue. Eun dournadig pri a lak en eur skudel ha dour da c'houde. « Meskit an dour hag ar pri », emezan d'e dad. P'en devoe mesket, e lavaras d'ezan: « Ha gwelet a rit ho skeudenn en dour-ze? » — Ne c'hellan ket gwelet, nak re denval eo. » — « Mat, eme Vikael, hoc'h ene a zo evelse ive. Ne c'hellit ket en em anaout ennan, o veza m'eo reustlet ha tenvalaet gand ar garantez direiz evit madou an douar-man. »

Gras Doue a ziskennas e kalon an tad, a lavaras kerkent: « Petra am eus d'ober? Lavarit d'in. » Mikael a roas d'ezan eur reolenn a vuhez. An tad a zentas ouz aliou fur e vab. A-nebendou e tistagas e gallon diouz traou ar bedman, hag ec'h en em-droas a-zevri ouz Doue. Ober a reas abuzennoù kaer, mat e voe da bedi, lavaret a rae bemdez ofiz ar Werc'hez, pleustri a rae war gwirioneziou ar relijion, hag epad ar pemp bloaz ma chomas c'hoaz war an douar, e voe eur c'hristen eus ar re wella.

Ar vamm a voe ive gounezet. Ato oa bet eur gristenez vat, met ne gomprens ket a-walc'h petra eo talvoudegez an eneoù, ne gomprens ket mat en dije he mab troet kein da vadou hag enorioù ar bed evit gounit eneoù da Zoue. Mikael a reas d'ezi prezegennou e chapel Kerodern, hag ar vamm a zavas buan beteg an uhela santelez. Beva a reas er bed evel all leanezed en o leandi. Tri bloaz goude he fried e voe skoet gand ar maro, hag he devoe ar joa da welet he mab en he c'hichen evid he frepari da vont dirak Doue.

Ouspenn e dad hag e vamm, e c'hounezas ive e c'hoar Mac'harit. Houman, he deus sikouret kement he breur en

e visionou, a oa, ez yaouank, eur plac'h vat, karantezus, met eun tammig re droet ouz ar bed hag e blijadureziou. Mikael a-nebendou he distroas diouz follenteziou ar bed hag a reas d'ezi dilezel an dilhad kaer, ar perlez, an dantelez hag ar seizennou.

Eur c'hoar all, Anna, yaouankoc'h eget Mac'harit, a c'hounezas ive. O diou e voent lakeet gantan en eun ti eus ar bourk. Eno ez aent bemdez d'an oferenn hag e teskent gand o breur gwirioneziou ar relijion. O c'has a rae da welet ar re glanv, ar re haour, hag e tisplege d'ezo an doare d'ober katekiz, da frealzi an dud poaniet.

Setu eun diverra eus labour Mikael an Nobletz e Plougerne. Hada a reas greun an Aviek er barrez-ze. Ar greun a zavo, ha re all a esto. Abaoe tri c'hant vloaz Plougerne a zo bet ato eur barrez vat, he deus roet eleiz a veleien, a leanezed d'an iliz ha kaset eleiz a eneoù santel d'ar Baradoz.

Mikael an Nobletz e Montroulez, e leandi sant Dominik

E Montroulez ez oa eul leandi eus a urz sant Dominik, hag ennan an Tad Kintin, mignon bras Mikael, abaoe ma oant bet war ar studi e Ajen hag e Bourdel. An Tad Kintin a oa eul lean santel, met ad leaned all, e genvreudur, n'oant ket d'ar mare-ze direbech a-walc'h. E lec'h karet ar bedenn hag ar binijenn, e klaskent kentoc'h beva en o aes, dibreder ha lezirek. An Tad Kintin a glasse o digas adarre war an tu mat, sentus ouz reolenn sant Dominik, hag a roe d'ezo kentelioù ha skouerioù santel, met ne veze ket selaouet.

Mikael an Nobletz, aet da Vontroulez, a voe aliet gand e vignon da c'houlenn ive beza digemeret el leandi: « Ma vijemp hon daou aman, e c'hellfemp dont a-benn da lakat urz vat en ti, ha kement-se a vefe talvoudus bras evid ar vro-man. » Mikael a zentas ouz e vignon. Laket en deus en e spered beza mistoner e Breiz, met leaned sant Dominik a zo dreist pep tra prezegerien, hag e c'hello prezeg d'e genvroiz kement ha ma karo.

Digemeret e voe el leandi, hag ec'h en em roas d'ar bedenn, d'ar binijenn muioc'h eget biskoaz. Met ne blijas tamm ebet d'e genvreudur. Doare en doa da glask ober skol d'ezo.

Eur wech, dreist-holl, e roas d'ezo eur gentel galet. Eur plac'h yaouank eus a Vontroulez o veza deuet da vervel, he mamm a c'houlennas digant Tad Rener an Dominikaned ma vefe beziet he merc'h e chapel al leandi. Er mare-ze e veze beziet kalz tud en ilizou. An Tad Rener a oa bet gwechall mestr-skol bugale an itroun-ze, hag a roas e aotre. Ouspenn-ze, e kichen ar bez, ar vamm a lakeas skeudenn he merc'h livet kaer. Ar skeudenn n'oa

ket gwall zereat, ar vruched a oa hanter-zispak, ha n'e ket en eur chapel oa lakat hevelep skeudennou. An dud diwar ar mez, pa zeuent d'ar chapel, e bede dirag ar skeudenn, o kredi oa skeudenn ar Werc'hez, ar pezh a rae da dud Montroulez c'hoarzin goap: « Eur vez eo », a lavare Mikael alies. Met kaer en doa en em glemm, ar skeudenn a jome ato er chapel.



Manati Sant Dominik e Montroulez

Eun deiz ne c'hellas mui en em zalc'her, hag e kemennas ar skeudenn, evit na rafe mui droug. Ar vamm, pa welas, en em glemmas ouz an Tad Rener, o lavaret ne rofe mui netra d'al leandi, ma ne vefe ket kastizet an hini en doa graet an taol fall-ze.

Evit ne vefe tamallet hini all ebet, Mikael en em ziskuilhas heb aon. Laket e voe e pinienn, skourjezet, kastizet en eun doare kriz, ha tollet er mez eus all leandi, rak n'oa ket c'hoaz stag ouz an Urz, n'en doa ket c'hoaz en em vouestlet.

An Tad Kintin a oa lean hag a jomas en ti. Poania a reas gant nerz-kalon da wellat an traou, hag ugent vloaz goude, reolenn sant Dominik a oa adarre heuliet mat e leandi Montroulez hag en tiez all eus a Vreiz.

Da gendalc'her.

J. U.



KERNE

PARDON AN TEIR VARI

D'ar zul warlerc'h an 8 a viz Gwengolo, e tiguvez ar pezh a anver e bro Gemper « pardon an Teir Vari ». Kalz a berc'hirined a ia neuze da welet, an eil goude eben, teir iliz, eun tamm mat a hend etrezo, savet o zeir en enor d'ar Werc'hez, hag e vez, en deiz-se, o fardon bras. Klevet a reont eun offerenn genta e chapel *Intron-Varia ar Sklerded*, e Kombrit; da c'houde ielont, karr hag all, dre ar vag-treiz, da Venodet, hag e valeont, dre ar Perget ha Fouesnant, warzu ar Forest, elec'h n'ema iliz *Intron-Varia* an Izel-Vor. Eno e klevont an oferenn-bred, ha, raktal e kemeront, dre Zant-Evarzeg, an Erge-Vihan ha pont an Dour-Gwenn, hent chapel *Kerdevoit*, en Erge-Vras, elec'h ma erruont eun hag eun evit ar gousperou.


I. — I. V. ar Sklerded

Eur birc'hirinerez kaer, hir ha devot a reont aze. Deomp ganto da bardona, m'ho peus c'hoant. Setu o sevel beure (1) skedus eur zulvez c'houek ha klouar a viz Gwengolo: ar c'hoajou a zo glas c'hoaz, ar parkeier a zo leun a frouez hanter-azo, ar c'hleuniou a zo goloet a vouar. D'eomp da japel I. V. ar Sklerded, en eur dreuzi bourc'h Kombrit, tost da goajou bras maner ar C'hozker. Ar « Bonedou-Ruz », epad emzispac'h ar « Paper-timbr », a gomas, a breizas ar maner-man, hag a lakeas an tan ennan, goude beza krouget an otrou, Nikolaz Euzenou a Gerzalaün, ouz unan eus prenechou e vaner. Ar roue Loiz XIV, evit kastiza ar barrez, a reas diskar kiloc'hdi an iliz ha re ar japeliou; ha, gwechall, n'hellet ket toler war eur barrez a Vreiz mezusoc'h dismegans. Ha difenn a reas o adsevel morse. Ha ma hellomp-ni hirio gwelet e Kombrit eur c'hloc'hdi en e-bez, eun tourig a bep tu

(1) beure = matin.

d'ezan, eo dre ma roas ar roue Loiz XV, war c'houlenn bugale an O. a Gersalaün o-unan, ôtre d'e adsevel.

Chapel ar Sklerded a zo bet savet wardro 1540. Azioc'h he frenestr bras, e weler eur skoed; douget gant daou leon, hag a zo warnan eun er, astennet e zionaskell: setu aze aroueziou (1) aotroned ar C'hoz ker, Kerlaëzec o anp. War dor an traon, ez eus eur skoed all, hini tiegez Penmorvan: eul levran hag eur c'horn-boud. Traon ar chapel a zo bet brasaet, breman ez eus eun daouzek pe bemzek vloaz, evit rei muioc'h a henchou d'ar berc'hirined. Kavout a reer enni skeudennou I. V. ar Sklerder,



sant Venec, breur sant Gwenole ha sant Jakut, ha re sant Alar, sant Sebastian ha sant Loranz. Kempennet mat eo bet an iliz. Ar gwasa 'zo, ez eus bet tennet eus ar werenn vras tamnou eus gwerigner koz, e welet warno, livet splammus tôlennou eus ar Basion pe eus buhez ar Werc'hez. E 1824, e voe dismantret ar chapel gant eun tan-gwall, a lakeas da gregi eur c'houlaouen-goar ankounac'heet e kichen skeudenn an Itron-Varia. Gwechall goz, al lambrusk a oa goloet holl a livadurez, hag, e 1856, e welet c'hoaz warnan an Arc'hel o tigas d'ar Werc'hez kelou e vije-hi mamm ar Zalver. Abaoue neuze, ar volz a-bez a zo bet grêt a-nevez.

Da bardon ar Sklerded e tired hep bloaz eun niver bras a gristenienn, dreist-oll eus tu Pont-n-Abad. Bi-

(1) Armoiries,

goudenned a-vandennadou a weler eno, gant o dilhad du ha n'int mui kement ha gwechall kaereet gant brouderez melen ha ruz ken skedus ha gant o zokeier teir boulozenn, hag ar merc'hed gant o c'hoefou ema ar c'hiz hirio o c'haout uhel uhel.


Pedet e vez I. V. ar Sklerded evit an droug-daoulagad hag evit paredigez ar poaniou. Breman 'z eus hanterkant vloaz, ar berc'hirined, epad an daou zêvez pardon, a gase, heb lavaret gaou, ar feunteun da hesk: eva a reent eus an dour; gant an dour e c'hlebieint o malvennou, ha dour a lakeent da zivera var o c'hein, var o bruched, hag e manchou o roched. Eur c'hantig koz « d'an ôtrou sant Tudal, patron deus a barres Combrit » a lavar e teur da I. V. ar Sklerded eus ar broiou pella, hag o deus eno kant mil den kavet ar pare d'o droug daoulagad. Ar chapel a zo re vihan evit an niver a dud a zeu d'an oferenn-bred ha d'ar gousperou. Varlerc'h ar gousperou e vez grêt ar prosesion, kaer da welet, en dro da vogeriou glas-wenn an iliz, e disheol ar gwez kistin hag ar gwez kerez koz a dreuz bannou alaouret an heol, epad m'en em ziskouez er pellder, adreñv an tevennou, linenn c'hlas ar mor, ha ma astenn an oabl, a-us d'ar pennou diskabell, d'ar c'hoefou gwenn ha d'ar bannielou skedus e delt voulous ker plijus d'al lagad.

II. — I. V. Izel-Vor

Poent eo d'comp avat kemer hent ar Forest. Treuzi a reomp koad ar C'hozker: en eur dremen, tôlomp eur zell war ar maner bras savet e lec'h an hini a voe devet gant ar « Bonedou-Ru ». Tennomp hon tok dirag chapel « Sainte Marine ». (E brezoneg, e lavarar « Sant Marenn », hag, er papezioù koz, an ano a vez atô skrivet e galleg « Saint Morand », ar pezh a ro da gredi he deus aman eur zantez a Vro-C'hall, dianav koulz lavaret, kemeret lec'h eur zant koz Breizad). Ar vag-treiz dre-dan a gas ac'hanomp e berr amzer da Venodet, unan eus brava kornioù-bro a gaver war aochou tu ar C'hreisteiz e « Bro-Gerne ». Tremen a reomp dre ar Perget, chapel goz, koantik c'hoaz etouez ar gwez bras; dre Fouesnant, elec'h m'eo ker mat ar sistr ha ker brao gwiskamand ar merc'hed, elec'h m'eo ar meziou, goloet a vleuniou hag a zelliou, ha leun a c'houez vat, henvel ouz eur mell diorz. Ha goudeze e tiskennomp warzu ar Forest.

Ar vorc'haden-man a zo savet e tal eur pleg-mor, en em dôl ennan eur waz-dour a ziskenn eus torgennou Sant-Ivy. Ar grec'hennou goloet a c'hilazvez a zo a hep tu d'ar stankenn, erruet er Forest, a bella an eil diouz eben, o kas d'o heul o gwez bras, o avalennegou, o lanneier, beteg Beg-Meil eus eun tu, hag, eus an tu all, beteg aod Konk-Kerne e weler, pell duze, he mogerioù mein-grouan savet dre urz an dukez Anna.

Eun iliz vras ez eus er Forest, warni eur c'hloc'hdi dantelezet. E kichen an iliz, eur groaz, en dro d'ez e voger pevar-c'hornek: setu eur gador-brezeg, e pigner enni dre eun nebeut pazennou, hag e veze grêt enni gwechall ar brezegenn, da zeiz ar pardon bras. Troad ar



groaz a zoug skeudenn hor Zalver ha re an daou laër. En tu diabarz eus an iliz, ez eus eun ôter kizellet ha fichet gant skeudennou bihan ha gant tôlennigou eo livet warno an Arc'hel o tont da gacut ar Werc'hez hag ar Werc'hez o pignat d'an nevy. Kavout a reer c'hoaz en iliz eur mean-badizant, gant eur golo stummet holl, war e c'horre, sant Yann o vadeza hor Zalver. Hag ouспен eun dôlen goz, livet warni ar Rozera, hag a zoug aroueziou eskob Kemper, an O. Fransez a Goëtlogon. E traon an dôlenn, e weler ar roue Loiz XIII gant e lez, hag, ize-loc'h c'hoaz, eur gwall emgann etre listri-brezel. Kredi

a reer ez eus bet c'hoant lakât dirag an daoutagad trec'h ar C'hallaoued, er Rochel, e 1628, war ar brotestanted hag ar Zaizon unañet.

Ar batronez a beder aman eo I. V. Izel-Vor. Er santual emma he skeudenn, ez a ar berc'hirined da zaoulina dirazi. Kristenien a zired d'ar pardon eus kement parrez a zo azaleg Rosporden ha Konk beteg Benodet ha Kemper. Kalz a dud a vez en oferenn-bred hag er gousperou ha dudius eo gwelet, var leurger ar vorc'hadenn, ar prosesion o tistrei d'an iliz a zav he c'hloc'hdi eus a greis bodou gwe stank ha deliennet hag azioc'h melezour skedus ar pleg-mor.

(Da heuilh).

Y.-M. COADOU, *professeur de Rhet. Parl. Civ. diwar notennou L. ar Guennec.*

Kalon vat eur Bugel

Mamm, eur paour zo o ouela
E kichen dor an ti
O c'houlenn eun tamm bara
N'en deus seurt da zibri.
Sec'hed ' lavar 'n deus ive
Ha gant ar riou e kren
Selaouit en han Doue
Selaouit e bedenn.

Ma mamm d'ezan me laro
Ouz hon tôl azeza
Ha d'ezan c'houi a gerc'ho
Hag aman ha bara
Goude c'houi ' glouarao
D'ezan eur bannig lêz
Evelse, c'houi frealzo
Poaniou kris ar paourkêz.


Ma mamm d'ezan me laro
Pignat war an oaled,
Eun tantad c'houi a raio
Evit e gonf sklaset
Klaskit e armel ma zad
Eur roched, eur bragou
Roit d'ar paour a galon vat
Da c'helei e vemprou.

Ma mamm, Doue, ho paeo
Evit ho madelez;
Hag ar paour kez a bedo
Da c'houlenn d'in furnez.
Ha selaou a ray Doue
Pedenn ar paour kez koz
Hag hor c'haso goudeze
Gantan d'ar baradoz.

P. BRELIVET, *eus Skerneg, Pluguen.*

qui est cognomen "Bokéren"

Cette au manoir de Kerobezan en Briec



Maner Kerobezan e Brieg

Setu aman, skeudennet gand an A. Guennec, ar pezh a jom c'hoaz, eus maner Kerobezan, e Briec, a zo bet hano anezan, e *Feiz ha Breiz* ar miz tremen.

Er maner-ze eo e oa bet ganet, er bloaz 1680, an A. Fransez Yasint ar Fruglay, a Gervers, a deuas da veza eskob e Landreger, er bloaz 1731, goude beza bet person e parrez vras Kraon ha vikel vras e Kemper. Mervel a eure e Landreger d'an 3 a viz Kerzu 1745.



Treioù kamm Léon ar Bris da Baol Gorniek (Kendalc'h)

Léon ha Paol a ieas eta da glask loj. — « Me, avat, a lavare Leon, ne vefe ket bet diaes d'in kaout loj; n'eus fors e pe diegezh e vefe bet digoret d'in frank ha ledan an doriou; met pa vo ouz va heul eun ampouailh flae-rius evelvoud, e vezin kaset da gaoc'h-kezeka, brao ha kempen. Ar pezh a zo ar fura d'eomp da ober eo mont da gousket er c'hoad-man; etouez eur guchennig deliou ha yeod sec'h, e goudor eur wezenn bennag e kouskimp ken c'houek ha ken dinec'h eget n'eus fors e pe lec'h. » Mont a reont neuze er c'hoad o daou, hag eur pennadig goude e roc'hent ken krenn ma kasent diwar o neiziou al laboused strafuilhet holl, ha ma vezent klevet dreist mouez an avel o sourral goustadik e deliou ar gwez uhel.

Diouz ar mintin Leon ar Bris a zihunas da genta; evit lakaat e vignon ivez da zevel ne gavas netra gwelloc'h eget hilligat d'ezan e skouarn gand eur goloenn zec'h. Kounnar ennan an diaoul a zavas en eur c'hrosmolat. — « D'eomp en hent, emezan, ha baleomp, rak a-raok ar pardaez e rankan beza e Kerzatan. » — « Kerzomp, kerzomp, eme Leon, n'eo ket eur jilgamm evelvoud eo a raio mez d'in da vale! »

Hag e-kreiz an hent-bras gwenn kann, a vec'h sklerijennet gand bannou kenta an heol o sevel, a-dreuz ar maeziou didrous goloet gand ar gliz, Léon ha Paol a g rze, sioul kenan an abadenn ganto. An heol a oa uhel pa jomas an daou ganfard a-zav evit kemeret eun tamm bennag. — « Greomp soubenn adarre; n'eus netra gwelloc'h, eme Leon. » Mont a reas kerkent er park tosta da glask eur guchennig legumach, epad ma chomas an diaoul d'ober tan; n'en doa ket e bar evid an dra-ze, rak e vicher oa. Gantan eur vriad irvin ha karotez, Leon a deuas adarre, hentchet gand e galon vat, da ginnig d'an diaoul dibab ar pezh a garie. — « O! eme Baolig, n'oun ket glapez a-walc'h evit lakat diou wech va zroad en hevelep podad dour'bero. Digas d'in en dro-man ar pezh a oa er maez eus an douar. Sklaer eo petra c'hoarvezas: soubenn an diaoul a ioa trenk, c'houero, ken fall ma n'en defe ket he debret an direusa penn-oc'h. En e gounnar skrijus, Paolig a roas da glevet da Leon e-rankfe dont da deir eur d'en em ganna outan evit m'en defe e begement. — « Me vo etre va daouarn eur vaz ha te po eur minaoued, » a lavaras an diaoul en eur vont kuit. O klevet ar c'homzou-ze Leon ne finvas ket; unan bennag a vefe bet deuet da lavaret d'ezan e oa alet bioc'h koz.

Fanch an Enez-Vras, n'en defe ket graet muioc'h a ziaes d'ezan.

D'an taol a deir eur, Leon a erruas goulskoude el lec'h ma oa bet kemennet d'ezan gand an diaoul, da lavaret eo e ti-fourn eun tiegez demdost d'al lec'h m'edont bet o fibri merenn. An diaoul a ioa eno aet 'barz er furn evit beza e goudor taoliou minaoued Leon; hemam a ieas en eur droidella betek genou ar furn, hag en eul lamm Leon en em lakeas e dor ar furn, stanka a reas anezi klok, hag an diaoul ne c'hellas mui nemet youc'hal dindan taoliou minaoued ar c'hilasker bara, a zebllante beza lakat en e benn divergla e venveg ouz stripou an diaoul. Pa ehanas, Leon a ioa skuiz (hag an diaoul 'fa), goulskoude Paolig a falvezas gantan staga a-nevez gand an emgann, nemet en dro-man ar minaoued a vefe dezan, hag ar vaz hir d'e enebour. Neuze e savas war eur voger uhel, met a vec'h ma oa en em gavet warni e wellas edo kalz re verr e vnaoued evit gellout paka Leon, a ioa chomet e traon ar voger. O vont da ziskenn edo an diaoul kez, pa zistagas Leon gantan eur vazad a lakeas anezan da welet pemp heol o para ha da ruilh etouez an drez en tu all d'ar voger.

Ken dinec'h eget ma vefe bet o tiskar polotrez gand e vaz hir, Leon a ieas adarre en hent da gonta d'e genvroiz an troiou kamm en doa c'hoariet d'an diaoul. Henman a zizroas ivez da Gerzatan; e holl vevelien a ioa ouz hier gedat, ankeniet holl, p'her gweljhont, hanter vac'ha-gnet, e izili gouliet holl, bec'h d'ezan o vale hag o komz, e c'houlenmont outan: « O, mestr, c'houi ken krenv ha ken bras, penaos ez oc'h bet bazatet evelse? » An diaoul a deuas neuze da zonzj d'ezan eus unan eus krenn-lavariou ar Vretoned koz:

Gwelhoc'h ijin eget merz
Em eus klevet eus mer a berz.

Mabig Breiz.



Feiz ha Breiz

HA KROAZ AR VRETONED

KELAOUENN VIZIEK GANT SKEUDENNOU

Relijion — Istor Breiz — Marvailhou — Gwerziou
ha Soniou — Buhez ar Vro

RÉDACTION

J.-M. PERROT, Plouguerneau (F^{re}) — Y. LE MOAL, Coadout, p^r Guingamp

ADMINISTRATION
du FEIZ HA BREIZ :
FR. GEORGELIN,
Brest — 4, rue du Château — Brest
c/c 44-40 RENNES

ADMINISTRATION
du Bleun-Brug et de l'Emgleo Sanitlu
Yv. DREZEN,
BREST — 4, rue du Château — BRES
c/c 6238 RENNES

ABONNEMENTS INDIVIDUELS
« FEIZ HA BREIZ » et « KORN-BOUD »
Bretagne 12 f. l'an
France 15 f. l'an
Etranger 25 f. l'an
Abonnements collectifs
Feiz ha Breiz (seul)
(à partir de 5 exempl.) 8 f. l'an

PUBLICITE
Toutes les insertions sont faites
à l'année
Une page entière 300 fr.
Une demi-page 175 fr.
Un quart de page 100 fr.

TAOLENN AR MIZ. — Gouel Hor Zalver Jezus-Krist,
RONAN. — Ar Bleun-Brug e Gwened hag e Keranna,
P. ABVEZO. — Feiz ha Breiz. — Laennec, G. M. —
Paolig ha Perig, LOEIZ AR FLOC'H. — Divinadennou.

SULIOU AR MIZ

- 3 a viz Here. — XIX^{vet} sul goude ar Pantekost: Pardon bras ar Rozera.
- 10 a viz Here. — XX^{vet} sul goude ar Pantekost: ofis ar zul-ze.
- 17 a viz Here. — XXI^{vet} sul goude ar Pantekost: oferenn ar zul-se. Gousperou kenta sant Lukas Avielier.
- 24 a viz Here. — XXII^{vet} sul goude ar Pantekost: ofis ar zul-ze.
- 31a viz Here. — XXIII^e sul goude ar Pantekost: Gouel ar Christ-Rone.

Gouel Hor Zalver Jezuz-Krist

Roue ar bed-krouet

« *Adveniat regnum tuum,
fiat voluntas tua in caelo et in terra.* »

Setu aze ar bedenn a'ra bemdez an holl gristenien war an douar abaoue 1900 vloaz evit m'en em skigno muioc'h mui rouantelez Doue dre ar bed; ha koulskoude ez eus c'hoaz eleiz a dud ha ne anavezont ket, pa ne fell ket d'ezo anaout nag ar bedenn nag ar pezh a c'houlennomp dreizi. Gant-se, war goulenn eun niver bras a gardinaled, a eskibien hag a gristenien, hon Tad Santel ar Pab en deus, d'an 11 a viz Kerzu diveza, kaset eul lizer d'an holl gatoliked a zo war an douar, ha savet eur gouel nevez da azeuli Hor Zalver Jezuz-Krist evel *Roue ar bed*. An hano hag ar c'halloud a Roue a zo dleet d'Hor Zalver evel *den*; ganet eus ar Werc'hez Vari dre nerz ar Spered-Santel, rak evel Doue ez eo Mestr war bep tra, p'e gwir an holl draou a zo krouet gantan.

Darn a c'hellfe lavarout marteze e teu ar Relijion da jench gant an amzer. Doue a jom ato henvel, an doare hepken d'E azeuli a c'hell chench hag a jench diouz sperejou ha sevenadurez an dud eus an eil bro d'eben, eus an eil kantved d'egile.

Evel Hon Tad Santel en e lizer, taolomp eur zell war ar Skritur Zakr (1), hag e welimp n'eo ket ar gredennman nag eur gavadenn nag eur mennoz ijinus diwanet e sperejou an dud.

Peger galloudus e vezo ar Zalver

An *Testament koz* a ziskouez d'eomp e meur a lec'h galloud-veur ar Zalver da zont, ha dreist holl e leor kaer ar psalmou:

« Ar *Gouarner* a dle genel eus lignez Jakob a zo lakaet da *roue* war menez Sion. » (Num. XXIV. 19.)

« An holl broiou a zo dindan e c'halloud a en em astenn betek harzou ar bed » (ps. II.) « Ho trôn a zo savet evit ato hag ho kwalenn-roue a zo eur walenn a lealded. » (p. XLIV.). « En deizioù ze e tiwano al lealded hag ar peoc'h gwirion; e c'halloud en em astenno eus an eil mor d'egile betek penn pella ar bed. » (ps. LXXI.)

(1) Ar re genta eus al leorioù-man a oa skrivet ouspenn 1500 vloaz a raok m'oa ganet Hor Zalver, hag ar re ziveza o deus muioc'h eged 1800 vloaz pad.

An *Diouganerien* d'o zro o deus komzet meur a wech eus galloud ar Zalver da zont:

« Eur c'hrouadur a zo ganet d'eomp, ar beli a zo lakaet war e ziouskoaz, e c'helver a reer: kuzulier, Doue, Nerz, Tad peurbadus, Mestr ar peoc'h; e *rouantelez* a vezo d'ezan da ziaveza, da starda dre ar gwir hag al lealded azalek brema da virviken. » (Is. IX. 6-7.)

Daniel (3) (II. 4.) a gomz d'eomp eus eur *rouantelez* diazezet gant Doue an nenv hag a bado da virviken. Eun tammig pelloc'h e lavar d'eomp: « En noz e wellis a spered eur mab den; tostaat a reas ouz eun den koz, heman a roas d'ezan galloud, meulendi ha renerez; an holl broiou, en holl boblou an holl vezou; e rouantelez ne vezo dispennet morse. » (VII. 13-14.)

En *Testament nevez* ar skridou hag an diouganioù ze a zo fraesoc'h ha splannoc'h: — an Arc'haël Gabriel a lavar d'ar Werc'hez « e vezo roet d'he Mab trôn David, e dad, hag e reno da virviken war lignez Jakob (4) » (Luc I. 32).

Jezuz-Krist holl-c'halloudek

Epad m'edo war an douar Jezuz en deus roet alies merkou anat eus e *c'halloud-veur* war an holl draou krouet: an douar deut da veza gwin e Kana (Joan II. 8.), eur bred da 5.000 den gant 5 bara ha 2 besk (Matth. XIV. 17), ar brasa barrou-amzer sioulaet en eun taol, ar vuhez o tistrei er re varo. . P'edo o pignat da Jerusalem evit ar wech diveza e tispleg d'e Ebestel eur skeud eus ar pezh a dremenno da fin ar bed pa varno pep unan hervez al lezennou douget gantan, rak an Tad en deus roet d'ezan ar varnerz penn-da-benn:

« Mab an den a zeuio hag an holl elez ouz e heul, an dud holl a vezo bodet dirazan; neuze e tispartio ar re vat diouz ar re fall, ar re vat a lakaio en tu deou hag ar re fall en tu kleiz. Goude, ar *Roue* a lavaro da re an tu deou: Deuit, c'houi hag a zo benniget gant va Zad, da gemer perz er *rouantelez* a zo kempennet d'eoc'h abaoue ar penn kenta eus ar bed... Da re an tu kleiz: It pell diouzia tud miliget, it d'an tan ne varvo biken, a zo bet c'houezet evit an diaoul hag e zrouk-sperejou. » (Matth. XXV. 31-34, 41).

Goude beza savet eus ar bez, araok pignat d'an nenv, e lavar d'e Ebestel: « *Holl-c'halloud* a zo roet d'in en nenv ha war an douar; It da brezeg d'an holl boblou ha deskit d'ezo heuilh kement an eus gourc'hemennet d'eoc'h. » (Matth. XXVIII. 18-20).

(2) An Diouganer Isai a veve wardro an VIII^e kanvet kent Hor Zalver.

(3) Daniel a veve er VII^e kanved.

(4) Ar re a anavez ar gwir hag a heul e lezenn.

60 vloaz goude, p'en em ziskouezas da zant Yann e enezenn Patmos, e touge ar geriou man warnan ha war e zilhadr: « *Roue* ar rouaned, *Mestr* ar vistri » (Apc. XIX. 16). An abostol sant Paol a lavar ive d'e dro: « An Tad en deus roet e holl vadou d'ezan. » (Hebr. I. 1.). « Red eo d'ezan ren betek ma taolo e holl enebourien dindan e dreid. » (I. Cor. XV. 25.)

E wir evel Dasprener

Hor Zalver Jezuz-Krist, Doue en em c'hraet den, a zo par d'e dad e pep tra, setu perak e tle an elez hag an dud senti outan gant doujans. Koulkoude n'eo ket hepken evel Doue ha Mab da Zoue en deus da welout warnomp met dre eur gwir gounezet gantan evel *Dasprener*: « N'oc'h ket bet *dasprenet* gant danvez dibad ha didalvez, gant aour na gant arc'hant, met gant *good talvoudus* ar C'hrist, kinniget evel eun oan dinamm. » (I. Petr. I. 18.)

Bezomp eürus e kerz an Hini en deus hon dasprenet, p'eo guir ez omp e izili. « *Roue* oun, eme Jezuz da Bilat, ganet oun ha deut er bed evit dougen testeni d'ar wirionez, kement hini a zo war hent ar wirionez a zelaou va mouez. » (Joan XVIII. 37). E c'helloud a dle en em astenn warnomp, war hor sperejou hag hor c'halonou, nann dre an tan, ar c'hleze hag an nerz, met dre ar skiant-vat hag ar garantez; a hent-all « e Ebestel o dije stourmet evit e zifenn ha mirout na vije kouezet etre daouarn ar Yuzevien. » (Joan XVIII. 36). E welout a reomp o tifazia e ziskibien, a c'hede eur roue hervez ar-bed; an Hini ez eo an nerv d'ezan n'en deus ket ezomm eus pinvidigeziou an douar, goulenñ 'ra hepken ma vezo anavezet e wiriou ha heuilhet e lezennou; en dizro e roio perz en e rouantelez.

Evit diskouez e *c'halloud da c'hourc'hemenn* e welomp, en Aviel, o tougen lezennou ha n'oant ket anavezet betek neuze. Ar pezh a lakae e genvroiz da estlammi, eo dre ma komze en e hano e-unan ha nann en hano an dud gouizieh ha brudet a oa bet en e raok. Da ziskouez eo gwir e lavariou e ra burzudou eleiz: ar gweled a ro da dud ganet dall, ar pare da glanvourien dibare, ar vuhez da Lazar, a oa dija hanter vrein e gorf.

Goude r goan ziveza e lavar d'e Ebestel: « Kredi a rit e Doue kredit ennoun ive, mont a ran da gempenn d'eoc'h peb a lec'h..., dreizoun avat ez eo red tremen, rak me eo an hent, ar wirionez hag ar vuhez; den ne 'z a betek an Tad nemet ar Mab, hag e skol ar Mab hepken e tesker anavezout an Tad..., kredit war va ger ez oun em Zad hag ema va Zad ennoun; kredit da vihana dre va oberou. » (Joan XIV. 2-12.)

Harzou rouantelez H. Z.

Galloud ha rouantelez Hor Zalver a en em astenn, n'eo ket hepken war an holl gristenien, hogen war an holl dud, war an holl broiou, war an holl draou krouet, betek war an elez o-unan: « Galloud a zo roet d'ezan; dirag e hano pep unan a stou e c'hlin en nenv, war an douar betek e bro ar re varo », a lavar c'hoaz sant Paol (Phil. II. 10.)

An dud e karg, ar vistri, ar rouaned, a zo e penn ar boblou er bed-man, a dle evel o zujidi, senti outan gant doujans. Ar pezh a zo *kiriek da stad truezus Bro-C'hall en deiz hirio, eo dre ma 'z eo lakaet Doue ha Jezuz-Krist er maëz eus lezennou hag holl draou boutin ar vro..* O lezel Doue a gostez, hor renerien, ha renerien kalz broiou siouas! a fell d'ezo ober o mistri e pep lec'h ha war bep tra, o youl o unan hepken a dalv eun dra bennag. Tud berr-welet ma 'z int, elec'h kreski o galloud her bihanaont; n'int mui ken doujet gant ar bobl; alies ne zenter ket outo, an distera ma tisprijont o zaoler d'an traon. Hogen, ma anavezfent ez int o unan sujidi Jezuz-Krist, pegement a furnez ne lakfent ket en o oberou hag en o lavariou, pegen doujus ne vent ket e kenver mad ar vro hag ar bobl; ar bobl munut, d'o zro, a garfe kalz muioc'h o fenn-renerien, o welout en dud-se, dibabet en o zouez, eur skeudenn eus galloud ar Mestr gwirion; an urz vat hag ar peoc'h a rende e pep lec'h kouls ha hiskoaz; an dud a welfe sklear al liamm o stag etrezo.

Ar gouelioù a lidomp edoug ar bloaz a zo savet holl evit meuli Doue, met pep hini a zo skoret war eur mennoz dishenvel: gouel ar Zakramant a zo savet evit lakaat an dud da zont da azeuli muioc'h Jezuz a jom ganeomp bepred war an aoteriou; gouel ar Galon-Zakr evit digas sonj eus karantez Hor Zalver evidomp, karantez hag a oamp o vont da ankounac'haat bep an tammig. Hirio, evel ma teuer da ankounac'haat ha da zilezel pep beli, pep galloud, ez eo red diskouez a nevez d'an dud ez int holl *dieourien d'eur Mestr*; evit-se, eur gouel da veuli *Jezuz-Krist, roue ar bed holl*, a dle beza ar gwella louzou a eneb ar gwall-c'hoantegeziou direiz. Pa welo an dud dizoue, difeiz ha digredenn an aked a lakeomp da veuli Hon Aotrou ec'h anavezint marteze o dallentez, ha pa ne rajent ket, ni da vihana hor bezo graet hon dever. O tont da lida ar gouel man, ne raimp nemet embann dirag an holl ar pezh hor beus graet abenn vremen ar gear, rak abaoe a brezel an darn vrasa eus familhoù Breiz a zo en em woestlet d'ar Galon-Zakr, da c'houlenn ouz Jezuz ren o ziegeziou hag o madou; e lec'hioù, ar c'hêriou hag ar broiou a-bez o deus roet d'hor Zalver hervelep testeni a zoujans hag a garantez.

Hon Tad Santel ar Pab Pi XI eta hervez ar c'halloud

a zeu d'ezan dre an Ebestel a zav hag a ziazez gouel « *Hor Zalver Jezuz-Krist Roue* », gouel hag a vezo hiviziken li-
det er bed katolik d'ar zul diveza a viz here, ar zul tosta
da c'houel an Holl-Zent; d'an dervez-se ive e vezo voes-
tlet, a-nevez, bep bloaz, an holl dud a zo war an douar
da Galon Zakr Jezuz. An Iliz he deus ar gwir hag an de-
ver da gas d'an eirusted peurbadus an eneo fiziet enni
gant Hor Zalver e-unan: « An hini ho selaou, am selaou,
an hini am selaou hag a heuilh va gourc'hemennou en
devezo perz em baradoz da virviken. »

D'an dud e karg, da renerien ar broioù, ar gouel a zi-
gaso sonj ez int holl *dleourien d'Hor Zalver Jezuz-Krist*
a zeuio eun deiz da varn gant eun dremm garo ar re o
dezo disprijet e c'hourc'hemennou, d'an dud desket e ti-
gaso sonj e tleont *delc'her start* d'ar gwirioneziou diskle-
riet gant Doue, ha d'an dud a youl vat e tleont *senti* ouz
Doue. Red eo da *Jezuz ren* war ar *sperejou*, ar *c'halonou*
hag an *eneou*, red eo d'ezan *ren* war ar *c'horfou*, izili a
zervij d'an ene d'en em zantelaat er bed ma, hag a dle da
zeiz ar varn ziveza kemerout perz e eirusted peurbadus
ar Baradoz.

Ar genta iliz savet d'ar « *C'hrist-Roue* » a zo bet gous-
tlet d'an 28 a viz eost 1917 gant an Ao. Witner, eskob mi-
sioner a Urz sant Fransez. An danvez hag an aluzennou
da zevel an iliz man a zo bet dastumet gant an Tad Youen
Poulliquen, ganet e Brasparts, lean a Urz sant Fransez,
misioner e bourc'hadenn Siyu, Kostez Chêfou, er Zav-
heol d'ar Chin. Allas! hor c'henvroad, maro e Chêfou,
d'an 13 a viz genver 1913, n'eo ket bet koz awalc'h evit
gwelout o tont da vad al labour boulc'het gantan, eve-
lato e feu d'ezan an enor da veza laket eun hevelep mien-
noz en e spered ha da veza bet ar micherour kenta.

Ra zeuio Hor Zalver benniget da skuilha e vennoz war-
nomp, war Vro Vreiz evit ma talc'ho mat d'he Feiz. Ra
blijio gantan dreist holl skoazella ha kenneza ar re a
labour da zifeññ gwirioù Doue hag e Iliz, evit ma c'hel-
lint mirout ouz ar c'hredennou dizoue d'en em zila etouez
hor c'henvroiz ha lakaat da vleunia evel gwechall ar boa-
zamanchoù kristen da c'hortoz ma vimp holl eun deiz
unanet gant hon tadou koz oc'h E veuli da virviken.

RONAN.



Ar Bleun-Brug e Gwened hag e Keranna

Ar Bleun-Brug, e gwir Vreizad ma 'z eo, a oa ret d'ezan
mont da bardouna da Zantez Anna Wened

Peb Breizad, ez veo pe ez varo,
E Santez Anna ra e dro,

a leverer.

Ar Bleun-Brug en deus graet e hini er bloaz-man hag
her graet, ez veo, m'hen asur d'eoc'h.

Ganet e gwasked mogerioù koz kastell Keryann, e Bro
Leon, e miz gwengolo 1905, ar Bleun-Brug a zo brema
kaer da welet gant karunenn e vloaz warnugent o'skedi
war e dal. Gened ar yaouankiz a lindr war e zremm, an
nerz a verv en e wazied, ar vuhez a darz eus e izili.
Hag hen diskouez en deus graet, kement pe vuioç'h
eged er bloaveziou all, e Gwened hag e Keranna
edoug ar zizun dremenet. Labourat a ra ato startoc'h
starta; digeri a ra dounnoc'h dounna e ero e park Breiz,
ha renet gantan, eur mor a dud a zo bet diredet a bep korn
a Vreiz da gana da Zantez Anna, da rouanez ar Vro, tru-
garez evit an amzer tremenet, karantez evit an amzer vre-
ma, fisians evit an amzer da zont. Ya, fisians! Ger diveza
ar Vretoned da Zantez Anna ha ger diveza Santez Anna
d'he Bretoned a zo eur ger a fisians. Fisians, daoust da
bep tra, e chomo bepred,

Ar brezoneg hag ar feiz
Breur ha c'hoar e Breiz.

En amzer dremenet, Santez Anna he deus graet evit
Breiz re an holl evelato evit ma teufe d'he dilezel en am-
zer da zont!



Gant daou c'her e c'hellfed merka labour ar Bleun-
Brug e Gwened er bloaz-ma: gwelloc'h gwella, kaeroc'h
kaera.

Labour vat a zo bet graet o tivorfila ar re a c'helle beza
morgousket e kenver o Breiz, o lakat da veza evesiant ar
re a oa dizeblant, o kreski nerz-kalon ar re a stourme.
Labour vat o tiskouez peger buhezek eo atao Breiz, o rei
da anaout peger kaer eo. Gouelioù ar Bleun-Brug er bloaz-
ma eo bet gouelioù gened Breiz.

Kaer eo bet, evit deraoui ar gouelioù, an digemer ka-
lonek a reas Gwenediz d'ar zul da bardaez 12 eus miz
Gwengolo da ziazeour, da rener ha da vignoned kosa

ar Bleun-Brug en eur zigouezout en o c'hear. Ar re n'em em anavezent ket c'hoaz a reas buan anaoudegez an eil gant egile ha raktal renerien Bleun-Brug Bro-Wened a gasas ac'hanomp darn-ama, darn ahont

da glask ti hag oz
ha gwele da dremen an noz.

Darn, daoust ma 'z eo c'houek ar vuez evito c'hoaz, a voe hentchet warzu ti « An Tad Eternel ». An ti-ze zo eur gouent eus Gwened e lec'h ma kaver an digemer ar gwella ha ma ne vez dalc'het den ebet ennan evit ato en desped d'eزان l...

Komzomp brema eus al labour vat a voe graet hag eus an traou kaer a voe gwelet a zeiz da zeiz e gouelioù Bleun-Brug 1926.

E Gwened

Al Lun, 13 a Wengolo

War vor-lenn Gwened. — En eur vont eus ti ar Retred war-zu porz-mor Gwened e tremenomp e-biou an Iliz-Veur. Mont a reomp da zaoulina e tal relegou Sant Visant Ferrier ha goulenn a reomp outan pedi evidomp, evit gouel ar Bleun-Brug hag evit Breiz.

Er porz, eul lestrig dre dan, staget ouz ar c'hae, a zo ouz hor gedal. Er penn a-raok anezan banniel Breiz a c'hour-nij laouen ouz ezennig fresk ar beure. A benn eiz eur, ouspenn 200 eus mignonned ar Bleun-Brug a zo diskennet e bourz al lestr. En o zouez e welomp an Aotronez Guillevic, viket-vras Aotrou 'n Eskob Gwened; Buleon, person an Iliz-veur; Coetmeur, ketenner e Kloerdi bras Gwened; Milon, tenzorier Bleun-Brug Gwened; Perrot, diaze-zour ar Bleun-Brug; Erwan ar Moal, e rener; Havas, person an Dre-Nevez; Mayet, ograouer Iliz-Veur Kemper; Olier Chevillotte, eus a Blougonvelen; J. Chevillotte, e intron hag e verc'h, eus a Vrelez; de Parcevaux, hag e vugale, eus a Blouzane; Regnault, eus a Roazon, J.-L. Pichon, eus a Dreflez; P. Abjean, eus a Blougerne; Saout, Kure Kerfeunteun; an dimezel a Gervenguy, eus Kleder; an Ao. Havard, beleg ar zoudarded e Sant-Malo, breizad kalonek hag en deus desket e-unan ar brezoneg dre garantéz evit Breiz hag evit gelout ober muioc'h a vad d'ar zoudarded breizad a ya da Zant Malo da ober o c'honje; an Ao. Batany, Ketenner e skolaj Lesneven hag e vreur, rener skol gristen Plouneour, renerien Bleun-Brug Gwened, ha meur a hini all diredet ken eus Breiz-Uhel, ken eus Breiz-Izel. Dleet eo d'in henvel c'hoaz evelato an Tad Riedinger, digaset gant bro Alzas da gemeret perz e gouelioù ar Bleun-Brug; an

Ao. Siret digaset gant bro Lorrain; an Ao. Achille Glorieux, digaset gant bro Flandrez; an Itron Ely-Monbet hag he bugale; an Ao. Maolmhuiré Diolun, unan eus izili *Connradh na Gaedhilge*, eus bro Iwerzou, deuet da Vreiz da zeski ar brezoneg. War an divezadou, e tigouez kanerien ha kanerezed Sant-Yann-Brevelay, renet gant an Buleon o ferson. En o zouez eman an Ao. Gillet, konseiller general. — Da eiz eur ha kart hol lestrig, ar « Gavr' inis » a ziblas ha kan « Bro Goz ma Zadou » a laka da dregerni an hekleiou en daou du d'ar ster. Ar ganol a zo plean evel eur mellezour, habask evel eun oan, a-vec'h ma teu bep ar mare eun halahad ezenn fresk da lakat da rida gorre an dour. Dre-ze hol lestr a rinkl flour ha dillo,

rak, pa vez ar mor hedenna
eo e kerz ar vag buanna.

Douara a reomp eun teir pe beder gwech dirak bourkou, gwaskedet gant ar gwez, tremen a reomp dre douez an enezennou hadet ker stank e mor-lenn Gwened, ken dudius da welet dindan o mantelloù a c'hlasvez. An Ao. Guillevic, laouen ha madeleuz, a lavar d'eomp o hanoioù hag o historioù dre ma kerzomp dirazo. Goude beza tremenet etre « Enez Arz » hag « Enez ar Venec'h » e chomomp a zav dirag « Enez Gavr' Iniz » pe enez ar c'harvrig. Eno, darn a zouaras evit mont da welet unan eus ar beziou brasa ha kosa a zo war an douar. Doun eo dindan zouar ha red eo d'eomp kemeret peb a c'houlouenn da c'hellout kerzet ha da zonzal gwelet eun dra bennag ebarz. An Ao. Marseille, rener eur « Musée » e kear Wened, a lavaras d'eomp eur ger bennak diwar e benn. An Ao. Marseille eo unan eus an dud desketa a zo er bed war draou an amzerioù koz. Diouz ma kred, ar bez-se en deus da nebeuta pevar mil bloaz; ar vein a zo oc'h ober leurren, kostezioù ha gorre ar bez a zo kizellet warnezo kelc'hou, ar pez a c'hell, eme an Ao. Marseille, merka goagennou ar mor, pe douarou bras, hag a ro da gredi dre eno, eus bet beziet eno eur beachour bras bennag, pe eur roue galloudus.

Eur blijadur eo klevet an Ao. Marseille o komz. Met, kals traou a zo merket da ober hirio hag an Ao. Rio, rener ar bourmenadenn a ra d'eomp dizrei warzu ar re a oa chomet el lestr hag o devoa, e keit-se, klevet eur varvailhadenn gant ar c'horonel Fonsagrives diwar-benn an emgann war vor a zo bet etre Jul Sezar ha Gwenediz brema 'z eus 2.000 bloaz.

E Sant-Weltas. — Da unneg eur e touaromp holl e Porz-Navalo, hag ac'hano, eun « train », a oa ouz hor gedal, hor c'has a dreuz gourenez Rhuys beteg bourg Sant Weltas. Breman, evit eur pennad, e paouezomp da veza pourmenerien evit beza pardounerien. Warlerc'h ar groaz douget, en hor penn, gant Yvon Floc'h, ez comp, a-renk,

d'an iliz e lec'h e voe roet bennoz ar Zakramant, kanet an « Adoromp holl » hag eur c'hantik brezonek en enor da Zant Weltas.

Ema tremen kreizdeiz, Poent merenn eo. An ear-vor zo yaçhus; digeri a ra ar skrin. Debri a reomp a galon vat ar pred fonnus aozet d'eomp gant Leanezed-Sant Loiz...

Ha buanna ma c'hellomp adarre d'an Iliz da zelaou an Ao. Buleon o komz d'eomp eus Sant Weltas hag eus sent koz Breiz. Eur garantez birvidik a darz eus kalon an Ao. Buleon evit hor zent koz ha kaout a oar evit o meuli komzou ker kaer, ker c'houek ma lakeont ive ar garantez da virvi, e kalonou ar re her selaou, evit ar « zent o deus graet douar Breiz ». Ar zent koz a zistrouezas war eun dro douar Breiz hag enepu hon tud koz. En eur drei hor c'hentadou war al labour e rajont anezo eur bobl kalonek ha krenv, rag

al labour eo hag ar c'houezen
a vag hag a yaçha an den.

En eur drei anezo war ar bedenn ouspenn, e rejont anezo eur bobl santel:

Al labour eo hag ar bedenn
War an hent mat a zalçh an den.

Manati Rhuys, evel hini Landevenneg a zo bet unan eus kavellou Breiz ha Sant Weltas, evel Sant Gwenole, a luskellas ouz trouz ar mor bras hor bro hag hor ouenn. — Sant Weltas, evel sent koz all Breiz, a zo bet teuzet eun tamm e sked hag e vrud gant kelennadurez ha burzudou Sant Visant Ferrier breman 'z eus 500 vloaz. Hag, heman d'e dro en deus roet plas da Zantez Anna. Bretoned, na zillezomp nikun eus sent hor bro. Pedomp anezo holl. O galloud dirag Doue n'eo ket bihannaet, na ken nebeut o c'harantez evidomp. Goulennomp outo miret bepred ar Feiz e Breiz ker start hag ar gwez dero e kalonenn hon douar, ken divrall hag ar reier pounner war hon aotchou. Selaouet e vo hor pedenn.

Ma n'hor selaou ket sent hor bro
Piou eta hor selaou?

Goude an Ao-Buleon, an Ao. Roger Grand, Kelenner e Skol-Veur ar Skridou Koz e Pariz, a zisplegas dirazomp istor manati hag iliz Sant Weltas. Pa deuas an Normaned da ober skrab e Breiz en navet ha dekvet kantved, menec'h Sant Weltas a renkas tec'het, ha kas a rejont ganto relegou ar Zant. E derou an unnekvet kantved, manati hag Iliz Sant Weltas Rhuys a voe savet a nevez. Abaoe an iliz a zo bet nevezet estreget eur wech hag eus iliz 1032 ne jom mui nemet eun tammig moger en he sav, e tu ar ar c'hreisteiz d'an iliz hirio...

Ha yao, war eun warzu ar gar. Wardro teir eur hon « train » hor c'has adarre warzu Porz-Na-

valo a-dreus gourenez Rhuys. An douaron-ze, n'eus n'eus ket c'hoaz pell amzer a oa drus hag a zouge rejin. Gwin Rhuys a zo bet brudet. En deiz a hirio ar vro a zo dizec'h ha paour.

Eus Porz-Navalo, hol lestr hor c'has da Lokmariaquer, hag eno e welomp eun daol-ven gaer, hanvet « Taol ar Varc'hadourien », ha brasa menhir a voe gwechall er bed. Daou vetr warnutgent hed en devoa. Brema eo kouezet ha torret e pemp tamm. N'eo ket bet torret, evel a lavar ar « c'hartennou post », gant ar gurun, met gant eur c'hrendouar, eme an Ao. Marsille: Lavaret a reas ive d'eomp an Ao. Marsille e voe ar vein-hir, dreist pep tra eun dra zantel evit ar Gelled Koz, Merk o relijion oa, evel m'eo ar groaz merk relijion ar gristenien, hag evel ma laka ar gnistenien ar groaz, ar Gelled ive a lakea ar menhir, war ar c'hreac'hou, ar c'broaz-hentchou, ar beziou...

Ar pardaez a dostea; sevel a rejomp el lestr-evilidre war-eun da Wened. An heol dem-guzet diouz ar beure a daole brema war ar mor hag an enezi e vannou skedus hag alaouret. Treuzi er mare-ze mor-lenn Wened en eur glevet kanerien ha kanerezed Sant-Yann-Brevelay o kana gant o mouezioù ar floura ar soniou an dudiusa en enor da Vreiz, n'em eus ket gwelet, nag a bell nag a dost, koantoc'h taolenn. Bretoned, na deomp ket a bell da glask braoentez hag a gavomp tost d'eomp, e Breiz, er gear.

Goude Koan. — Da eiz eur hanter diouz an noz, ez eus beilhadez e « Sinema ar Warem », ar zal vras he deus gwisket he dilhad kaera evit digemeret, ar 60^e den eno bodet. Seizennou ha banielou herminiget a zo stegnet a bep tu; frugarez d'he ferc'hen, an Ao. Guillom. Peziou-c'hoari ha kana a zo da gaout.

« Pautred Padern », eus Gwened eo a zigor an abadenn. Displega 'reont « Gaou Kaourintin Lamour ». An traou a dremen en amzer an displac'h vras 1792. Eur c'heaz koz a zen, pouezet gant diaoul an arc'hant, a asant rei da anaout da vestr soudarded ar Republik an toull-kuz e lec'h m'eo kuzet eur beleg a zo bet koulskoude brasa madoberour e diegezh. Met, ar mestr ne oar ket a vrezoleg hag an den koz ne oar ket a c'hallég. Ret eo eta kaout eun hanterour a droio d'an eil komzou egile. Eur zoudard zo kavet hag a anavez an diou yez. Dres, ar zoudard-se zo mab d'ar c'heaz koz. Trei a ra fall komzou e dad hag ar beleg a zo saveteet. Digas a ra e dad da gaout keuz d'e dorfed. Met, hen e-unan a rank paea dre ar maro ar gaou dister en deus graet. Kinnig a ra e vuhez evit e dad.

Warlerc'h ar pezh-se setu kanerien ha kanerezed « Sant Padern » o tont da gana d'eomp ar pezh a glevont hemdez gant « Kleier Sant Padern ». — Pevar gloc'h tour iliz Sant Padern ne ouezont na galleg na brezonek. Met eye-lato, en eur stumm dudius, heb eil tro, e kanont, e ouelont, e pedont. Ni ive brema a gompren o mouez en eur zelaou

strollad Sant Padern. — An Ao. Bileon, bet kure gwechall e parrez Sant Padern, a lavaras en eur brezoneg yac'h ha dibistik, bennoz Doue d'ar ganerien, kanerezed, c'hoarierien. Lavaret a reas d'ezo d'erc'hel mat ato da c'hiziou mat an amzer wechall. Kleier Sant Padern, emezan abaoe 25 bloaz-zo m'emañt en o zour dantelezet n'o deus ket chenchet a yez ha n'her grañt morse. Dalc'hit evelse da yez ho tadou, emezan, ha diwar ho muzellou, ar muzellou-ze am eus lakaet gwechall warnezo hoalenn breizad, ra gouezo bepret soniou Breiz, ha ra ne gouezo nemeto. Kentel vat ha talvoudus da gement paotr ha plac'h yaouank zo e Breiz!...

En eur zisplega goudeze buhez « Sant Izidor, labourer », Pautred Padern a ziskouezas n'o doa ket laeret ar meuleudiou roet d'ezo. Diskouez o deus graet d'eomp Santelez Izidor, e lealded e servij e vistri, e vadelez e-kenver ar beorien, e basianted e kreiz an dregas en devoa da c'houzanv eus perz « Vinsant », ar mevel a oa en e greiz eur galon-ifern hag en e c'henou eun teod-aer.

Da gloza dervez kenta ar goueliou, an Ao. Nestour, rener Bleun-Brug Gwened a drugarekas c'hoarierien ha selaouerien hag a lavaras d'an holl kenavo an deiz warlerc'h. Ha goude beza kanet « Bro goz ma Zadou », pep unan a yeas da glask e lojeiz, e zaoulagad o trelli gant an traou kaer en devoa gwelet, e ziskouarn o voundinella gant an traou kaer en devoa klevet, e galon o lammet teroc'h dre garantez evit Doue hag evit Breiz.

Meurs, 14 a Wengolo

D'ar meurz vintin, eun hanterkant bennag a dud a oa bodet e chapel ru ar Mene evit heuilh ar retred prezeget d'ezo gant an Ao. Breurec. Eur retred a ra vad. Pell diouz trouz ha safar ar bed e vez gwelet sklearoc'h an traou, barnet justoc'h, roet d'ezo o zalvoudegez gwirion. Eno ive e vez pourchaset gwella an amzer da zont.

Ar Vretoned a zelaouas edoug daou zervez an Ao. Breurec hag an Ao. Leclerc a zeskas ganto brao bras penaoz beza war eun dro gwir Vreizad ha kristen start ha penaoz labourat a zoare evit ar feiz hag evit Breiz.

Ar c'han breizad. — Goueliou ar B. B. a zo bet er bloaz-ma, em eus lavaret, goueliou Gened Breiz. Etouez ar pez a ro ar muia lufr da c'heued hor bro, ema ar c'han, hep mar ebet. Eur brezegenn dreist a zo bet graet d'eomp da zek eur hanter diouz ar beure gant an Tad Herve, eus manati Kergonan, e Bro-Wened. Ar brezegenn-ze ne c'helle beza nemet kaer ha kentelius e pep doare dre ma oa graet gant eur filhor da Zant Herve, paeron ar Varzed. — An Tad a lavar d'eomp ne fell ket d'ezan ober eur zermou, met eur varvailhaden hag e kerz e varvailhaden, e onezo, da heul eur mousc'hoarz, sila en hor sperejou meur a wirionez.

Beteg a-nevez zo, eme an Tad Herve, Breiz he doa he c'hanaouennou hag he zoniou d'ezhi he-unan, dishenvel diouz re ar broiou all, Evel m'eo he yez dishenvel diouz re ar boblou all. An Ao. Bourgault-Ducoudray, desket bras war ar c'han a lavare, eun ugent vloaz bennag a zo: « En deiz a hizio n'eus mui nemet tri rummad kan hag a dalvesfe eun dra bennag: ar C'han-Iliz, kan ar Rusi ha kan Breiz. An tri-ze zo dispar ». — Daoust ha kan Breiz-Izel a zo eus anezan ato ? Ya. Ar Bleun-Brug en deus graet hag a ra ato kals evit her miret, her skigna, her c'haerât. Beza en deus laket moulla pemp leor kan a zo eun tenzor eus ar c'henta evit kement hini a gar ar c'han. Strolladou kanerien a zo diwanet, dre holl, hag a gan soniou Breiz, ha gant goueliou ar B. B. hor bezo an eurvad da glevet darn anezo: re Sant-Yan-Brevelay, Gwened, Pluvigner, Rekouvrans, Folgoat, hag all. — Enebourien en deus koulskoude kan hor bro. Toniou ha komzou galleg, pe fors petra, a ziruilh brema, abaoe ar brezel dreist-holl, eus Pariz, pe eus fors pelec'h, hag a glask kailhara ha goueledi war eun dro glanded hon tud yaouank ha kan hor bro. Ar « piano automatique » a c'hourin start ouz ar biniou hag a ro bec'h d'ezan. Bretoned, dalc'homp start da zoniou ha da doniou hor bro. Stourmomp gwenv evit savetei war eun dro hor brud-vad, hon enor, hor c'han; sikouromp ar biniou da rei lamm « chouk e benn » da gement « accordeon » peultriner brein a glevimp en dro d'eomp.

Gant ar c'han breizad, eus hor bro
Eun eulfen eus gened Breiz a yelo,

hag eur bastell eus ar feiz, ive.

Da harpa e gomzou, an Tad Herve a roas d'eomp ive skoueriou. War e c'houlenn, an Ao. Gagnier, ograouer iliz Sant Padern, e Gwened a c'hoarias war an « harmonium » darn eus toniou kaera hor Bro. Darn anezo a zo oajet kaer, darn all a zo koz Noe. Ton « seziz Gwengamp » en deus tremen 200 vloaz. Ton Kantig Santez Anna a zo yaouankoc'h. Hini « Kimiad da Intron Varia Lourd » en deus 1400 kant vloaz, ha ton eur zon goz e parrez Plumergat, Bro-Wened en deus 1700 vloaz.

Ha lezel a rañmp da vont da goll eun herez ken talvoudek ha ker kaer ? Nann, gant sikour Doue hag hini Santez Anna.

Ar barz Yann-Per Calloc'h. — Da beder eur, an Ao. Palaux a lavar d'eomp eur gomz bennak diwarbenn e vignon muia karet, ar barz Y.-P. Calloc'h, lazet er brezel hag a zo brema e hano war muzellou hag e kalon kement hini en em emmell eun draig bennag eus traou e vro. Dleet eo zoken ne vefe den e Breiz o chom hep kaout etre e zaouarn ha zoken ouz e c'houzout kazi holl dindan envor al leor dispar a zo bet graet gant e obe-

rou: « *Ar en Deulin* ». Eno peb unan a zeskfe gant Y.-P. Calloc'h beza ar pezh ma zeo bet e-unan, hag ar pezh a dlefe beza kement hini a zebr bara e Breiz: kristen start, Breizad gwirion.

Dourn-ouz-dourn, evel pa lavarfen, ha kalon ouz-kalon ive gant Y.-P. Calloc'h, an Ao. Palaux a zisplegas dirazomp buhez e vignon adaleg e vugaleaj beteg e vao a zigouezas d'ar Meurz Fask 1916, d'e 28 vloaz. Doue, Santez Anna ha Sent Koz Breiz o devezo, hep douetans, graet er baradoz, eun digemer eus ar c'haera d'an hini o c'haras kement hag a varvas e bleun e yaouankiz pell eus e vro, e gwir Vreizad hag e gwir gristen (1).

Eil beilhadeg. — E doug an deiz, niver ar Bleun-Brugerien a zo aet war gresk, a eur da eur. Aotronez beleien ha kloareged a zo brema niverus. Gwelet e vez graet gwiskamanchou, ken goazed, ken merc'heñ, eus pevar c'horn Breiz. An Ao. de L'Estourbeillon a zo digouezet, echu gantan bodadeg « Kevredigez Breiz » e Janzé, e Breiz-Uhel.

Er pardaez-ma, eun 800 den da nebeuta a zo bodet e « Cinema ar Goarem ».

Strollad Pautred Bignan, skoliet gant an Ao. Bayon, eo a weñmp hag a glevimp er pardaez-ma. N'eus ket ezomn da lavaret piou eo an Ao. Bayon. Hen eo an hini a zalc'h an penn en deiz a hirio evit aoz peziou brezonek. Eur pemzek pe ugent pezh-c'hoari eus deus savet ken kaer an eil evel egile. Er B. B. er bloaz-ma ne vo c'hoariet nemet peziou savet gantan. Tro ha tro hor bezo fred da c'hoarzin ha da ouela. C'hoarzin a raïmp er pardaez-ma o welet troiou kam « Fosfatin, ar vatez fin », a ra goap eus he mestrez etre m'ema hومان, gant diou pe deir « Vari beg araog hag o fri partout, » oc'h eva flip da gas kwit eur « rum » koz, kabac'h, pe da vihana d'e domma ma n'hellont ket hen diloja. C'hoarzin a raïmp c'hoaz gant ar « Pilhaouer » a zo gwelloc'h gantan ober n'eus fors pe vicher, nemet an hini a ra. — Ouela a raïmp o welet displega dirazomp « Buhez Santez Noluen » a gavas gwelloc'h lakât war he fenn eur gurunenn a werc'hez hag a verzeret eged eur gurunenn a rouanez.

N'oañ ket evit miret da druez outi muioc'h c'hoaz dre ma voe gwall gaset gant « Minabel » an teod fall, evel en derc'hent Sant Izidor gant « Visant » Anez d'ar spe-rejou ourgouilhous, d'ar c'halonou jalouzus ha d'an teodou fall an douar a vefe porched an nenvou. « Santez Noluen » a baouezas war ar gaera taolenn. He gwelet a reat e sked an nenvou, elez ha sent en dro d'ez. Neuze, war hor muzellou, evel war re he zad, da gelou he maro, e tarz an « Te Deum ».

(1) Gouelen e Emaleo Sant Ildut, 4. ru ar Chastell: Brest, levr nevez an A. Palaux: *Un Barde breton, Jean-Pierre Calloc'h*, prix: 15 fr.

Merc'her, 15 a viz Gwengolo

An amzer a gendalc'h da veza kaer ha dre-ze niver an dud a gendalc'h ive da greski en hor studiadedoù. Gwelet a reomp digouezet en hon touez an Aotronez Goasguen euz Kemper, Madec, eus a Vrest, Thubé, viket vras, De Gouyon, Renner *Breuzie Breiz*, de Laigue, eus Redon, Perquis, eus Tours, Regnier eus Paris, Yann Charles, eus Versailles, Charl Lémarié, eus Bagger-Morvan, an A. Elies, eus Roazon, L. Nemo, eus a Vrest; ar Goff., kure Douarnenez; Fave, kure Skæer, L. ar Menu, kelenner e skolaj Lesneven, hag all.

An A. Moal, a zigor ar studiadeg, en eur rei da anaout al labour en deus graet ar Bleun-Brug e Breiz abaoe gouelioù Gwengamp. Ar pezh a zo graet, emezan, n'eo metra e-skoaz ar pezh a jom c'hoaz d'ober. Stagomp eta d'al labour hag evit se gwelomp hizio petra a zo da ober evid ar familh vreizad.

Ar familh vreizad. — Ar B.-B. a fell d'ezan adsevel Breiz. Ret eo d'ezan eta soursial eus ar familh, rag eur vro a zo diazezet war ar familh. Eur vro a dalv ar pezh a dalv enni ar familhou. E lec'h ma ya ar familhou da hesk, ar vro a ya d'ar bez. Hag eur vro a vezo yac'h, nerzus ha doujet ma ya enni ar familhou war greski ha war startât. — Eus ar familh e Breiz brema ha *gwechall* eo e vezo komzet d'eomp er mintin-man.

Ar vodadeg a zo renet gant an Ao. Cadic, kannad Pondy, pe Pontivy, eur Breizad penn-kil-ha-troad ha n'en deus tamm mez ebet, — ar c'hontrol eo, — o tougen e Pariz gwiskamant Breiz. En e blas edo e penn eur vodadeg a gomzet enni eus ar familh, rag en derc'hent oa badezet an eizvet krouadur d'ezan.

An Ao. an Nestour a lenn labour an Ao. Corne, eus Inguiniel, n'en deus ket gallet beza en hon touez hirio.

Breman, ar familhou e Breiz n'int mui ker start ha kent. N'int mui ken kristen ha kent. Dre-ze eo bihannaet galoud an tad hag ar yamm hag ive karantez ar vugale evit o zud, ha war ar marc'had, nerz-kalon an holl evid al labour. Ha gant al leziregezh ar familhou breizad, evel re greis-deiz Bro-C'hall a yelo da netra ha neuze ive hor bro, evel ar c'hreisdeiz ne vefe mui nemet ar relegou anezi. Gwasa enebourien ar familh eo an hudurnez a zo digaset d'eomp gant ar C'hallaoued, hag an divorz, lezenn villiget douget gant ezezh ha n'oañ ket evit en em glevet gant o gwra-gez. Evit lakât adarre ar familhou breizad da veza start war o aelou, evel *gwechall* eo red e vefent reizet evel *gwechall*, gant lezennou a furnez hag a justiz, lezennou hag a lakae da vean-diazezh d'ezo ar reiz kristen hag al labour. Ret eo d'eomp e Breiz teuleri d'an traon al lezennou diouanet diwar had brein ar « Revolution vras », ha dizrei a-nevez d'ar frankizou a roe d'eomp emgleo

1532 etre Breiz ha Bro-C'hall. An emgleo-ze, nevezet ha kempennet eun tamm evit hon amzer, eo a die beza hor reolenn; kement-se eo an nebeuta a rankomp, ni Bretoned, da zivizout ouz ar C'hallaoued ma ne fell ket d'eomp gwelet hor bro o vont da netra evel o hini. — Ar wirionez-se a voe displeget sklear dirazomp gant an Ao. Poisson, kure I. V. ar C'helou mat, e Roazon, ha Rener *Foi et Bretagne*.



An A. CADIC
Kannad ar Morbihan

An Ao. Cadic a drugarekeas ar brezegerien hag a lavaras e poagnfe da derri al lezenn displeal eus ar « vot » dre benn da lakat dougen en he lec'h ar « vot » dre familh. En deiz-se Breiz, bro ar familhou, a c'hello lavaret krenv he ger, ker krenv ma n'hellor ket chom hep he selaou hag ober diouti.

Goude merenn, an Ao. Mary, kelenner e kloerdi-bihan Keranna, a gomzas d'eomp eus stad ar brezoneg e Bro-Wened. Da betra kuzet ar wirionez? E meur a gorn, ar brezoneg en deus kollet tachienn en 50 vloaz diveza-ma. Skoliou gouarnamant Bro-C'hall a labour eneb d'ezan, ke-

ment hag a eneb d'ar feiz. Marteze ive, meur a veleg n'o deus ket dalc'het start a-walc'h hag o deus re vuan, war goulenn eur familh bennak, digoret an hent d'ar c'hatekiz ha d'ar prezegeou gallek. Ha koulskoude arabat hen ankounac'haat:

Gant ar brezoneg eus ar vro
Feiz hag onestiz a yelo.

Antronoz e Santez Anna e komzen eus kement-se gant eur mignon d'in, kure e eskobti Kemper, hag hen a lavaras d'in: « Gwir, re wir eo an dra-ze evit va farrez, ha zoken evit ar c'horn-bro emañ ennan. » Ra deujo kement hini en deus karg da gelenn an dud da gredi kement-se diwar ar mare!

Arabat koll fisians evit hor yez, zoken e Bro-Wened. Labourat a rer start ha founnus d'he skora. E touez an dud desket, muioc'h-mui bemdez a ra stad anezan, hen desk, her c'homz, her c'har hag a boagn da lakat ar re all da ober eveldo. Er skoliou kristen bihan e vez desket e lenn hag e skriva. Er skolachou e vez pleustret dounnoc'h. Kelaouennou, evel « Dihunamb » ha « Mem-Bro » a gerz da fuilha dre ar peder avel anaoudegez eus anezan er sperejou ha karantez evitan er c'halonou...

Trede beilhaded. — En enor d'ar familhou breizad eo bet lidet ar veilhaded-ma. Eur werz eus an dudiusa a voe kanet d'ezo gant moueziou eus ar floura. An « Eured e Bro-Wened » a zo eun dastumadenn eus toniou kaera ar soniou a vez klevet c'hoaz er pardonioù hag en eurejou. Savet ez eus war an toniou-ze komzou kaer gant an Ao. Marechal, person Pluvigner. Hen eo en deus savet ive « Kousk Breiz-Izel ». An « Eured e Bro-Wened » a zo c'hoaz kaeroc'h eget « Kousk ». Gwelet a reomp er c'hanze an den yaouank o c'houlen dourn an hini a vezo e bried, mamm ar plac'h yaouank nec'het-maro, ar gerent hag ar beleg e rei o bennoz d'an daou bried nevez, i o daou o toui karantez an eil d'egile, o pedi evit o zud varo, hag o kaout dre an hent-se « Alc'houez an eurus-ted ».

Pebez tra vras ha santel eo eun eured lidet en doare-ze. Re alies, siouaz! an deiz kaer-ze a vez saotret gant pep seurt dizursiou... ha pep seurt kanaouennou. Ar c'homzou a glevjomp d'ar merc'her da noz a ziskoueze n'eo ket an eured eur farserez, met eun dra eus ar vrasa a zo ret goulenn ha tenna warnan bennoz Doue.

Ra deujo Doue da viret ha da wellat c'hoaz hor familhou breizad ha kristen a vezo, gant e zikour ha skoazel Santez Anna, silvidigez hor Breiz! Ra deujo Doue da lakat.

En hol liorzou bep bloaz kals a vleunioù
Ha da gutuilh anezo kals a vugaligou.

P'eo gwir ez eus hano ganeomp eus ar familhou, arabat ankounac'hât an ober kaer o deus graet ar re deuet d'ar Bleun-Brug a berz Bro-Flandrez. Rei o deus graet mil lur da rener ar B. B. évit ober aluzen d'eur familh gristen ha breizad. Bennoz Doue d'ezo!

E kerz ar velihadeg-man an Ao. Nestour a bedas an Ao. Perrot, kure Plougerne, da bignat war an teatr ha da lavaret eur ger bennag diwarbenn ar B. B. An 1200 den a oa er zal a zavas raktal da strakal o daouarn d'an Ao. Perrot, ha da youc'hal en e enor.

Ar *Bleun-Brug*, eme an Ao. Perrot, a zo ganet e gwas- ked mogerioù koz kastell Keryann e Bro-Leon; adaleg e c'hinevelez, e peb amzer hag e pep lec'h, ne ra nemet eun- dra: lakat ar Vretoned da denna lorc'h eus o gouenn hag eus o bro en eur ziskouez d'ezo peger yac'h, peger beo, peger kaer int; lakat ar *pevar breur* d'en em anaout ha d'en em garet; lakat anezo da startat en o feiz gwella skor ar ouenn hag ar vro; en eur ger labourat évit Doue ha Breiz!

E. Keranna

D'ar yaou, 16 à Wengolo

Gwelloc'h gwella, kaeroc'h kaera em eus lavaret diwar benn gouelioù ar B. B. eus an eil bloaz d'égile. An hevelep ger a lavaran diwar-benn gouelioù ar bloaz-ma eus an eil dervez d'égile.

Keranna he devoa gwisket he gwiskamant kaera. Glasvez a oa staget ouz an tiez, da heul eur mor a zrapoioù herminiget. A zioc'h an hentchoù eus an eil ti d'égile garlan- teziou a zo stignet. Ha diwar lein an tour, an Itron San- tez Anna, banniel Breiz o ficha e-harz he zreid, a zeblant astenn he divrec'h da zigemeret he bugale, he Bretoned muia-karet. Abred e tigouez kals tud. Niverusât a reont a eur da eur hag abenn kreisteiz e vezo 10.000 den bodet e Keranna.

Da eiz eur e tigouezomp. Kenta reomp eo saludi santez Anna dre eur bedenn kaonek. — Prez a zo war ar vu- gale, an dud yaouank, ar ganerien hag ar c'hanerezed o vont da gemeret perz er c'henstrivadegou.

Da zek eur hanter, e voe lavaret oferenn ar Bleun-Brug, er « Scala sancti », gant an Ao. Guillevic, viket-vras Gwe- ned. An Aotronez Eskibien Gouraud ha Picaud a oa eno.

D'an Aviel, an Ao. Buleon, person Iliz-veur Gwened a reas eur brezegenn en eur brezoneg eus ar gwella, aes d'an holl da entent. Diazeza a reas e brezegenn war an daou c'her-ma: Feiz ha Breiz (1).

(1) E: c'haout a reoc'h, war he hed, aman pelloc'h, p. 383.

E doug ar oferenn e voe kanet meuleudi da zantez Anna er yez a gomzas he-unan ouz Nikolazig brema 'z eus 300 vloaz.

Goude merenn. — Pemp kant hanter-kant den a zebras o merenn a-gevret, e porz ar c'hloerdi bihan. An Ao. Gouraud, eskob Gwened, a rene ar pred, a bep tu d'ezan an Ao. Picaud hag ar Marechal Franchet d'Esperey. Da fin ar pred, an Ao. Moal, rener bras ar *Bleun-Brug*, a zavas hag a ginnigas d'an Itron Santez Anna, d'an Aotronez Eski- bien, da strollad Bleun-Brug Gwened ha da holl genla- bourerien ar Gouel, — aotronez kloerdiou Gwened ha re Gloendi Santez Anna hag an Iliz-veur, dreist-holl, — holl drugarez hag anaoudegez vat ar Bleun-Brug. Kentel vras an deiz-man, emezan tennet diouz an daolenn gaer a welomp dirak hon daoulagad, hon diou rouanez, Santez Anna ha Breiz oc'h en em vriata, eo ma teuo ar Vretoned d'en em unani holl e sell a Zoue hag o bro.

An Ao. Gouraud, o respont d'an Ao. Moal a lavaras, gant nerz, d'ar Vretoned derc'hel start da Vreiz ha d'ar pezh a ra he sked hag he finvidigez ha banna pell diouto kement tra a c'hellfe he divaloat pe he faourât.

Raktal goude merenn ez ejot en eur strollad da vez- meur ar Vretoned marvet er brezel. N'eo ket achu c'hoaz ar bez-se; met sevel a ra ha diouz ar stumm anezan e hel- ler kredi e vezo kaer pa vezo peurec'hraet. Ra deuiô, a la- varas an A. Moigno, an holl Vretoned da rei o frot évitan. Kement familh he deus unan eus he zud marvet er brezel a rafe eun aluzen gaer en eur gas 200 lur évit lakât e hano war eur mean.

Dirag ar bez e oa bodet wardro 10.000 den; kanet e voe meuleudi ar zoudarded hag ar vortoloded varo gant ar barz Jaffrennou. Ar Yeodet a lavaras d'eomp oa maro ar vrezelourien vreton, e gwir Vretoned évit o feiz, évit o ziegez hag évit Breiz. An Tad Riedinger a lavaras ar perz a gemer bro-Alzas e kanv ar Vretoned d'o zud varo hag an anaoudegez vat he deus d'ezo évit beza sikouret he di- framma eus skilfou en Allmagn. An Alsas, emezan, a vezo bepred, dourn ha dourn, gant Breiz évit goulenn he franki- zou, he holl frankizou hag ouz he sikour d'o c'haout.

Hag ar mor a dud-se a lavaras neuze an De Profundis... Eneou ar vrezelourien vreton a dleas tridal o welet n'oant ket c'hoaz ankounac'haet!...

— Raktal neuze, eus bez ar zoudarded da blasenn vras an iliz e voe graet eun ambrougadeg-enor d'ar priejou koz ha yaouank a oa diredet a bep korn a Vreiz da lakât o ziegeziou dindan skoazel Mamm-goz familh vras ar Vre- toned.

Santez Anna a oa deuet, war dreuz dor he falez, da zigemeret he fobl muia karet, renet gant he eskibien. Kaera taolenn!

Da c'houde darn a yeas da c'hoariva Nikolazig da wet displega « Pasion Goneri, kloareg ha soudard breton ». Ar pez-se a oa bet displeget ive en derc'hent e Gwened. Savet eo gant an Ao. Ar Bayon.

Darn all a yeas da zelaou-kana « an Eured e Bro-Wened ». Darn all c'hoaz da zellet displega peziou-c'hoari « ar Pevar breur », da lavaret eo peziou-c'hoari e yez Leon, e yez Treger, e yez Kerne hag e yez Gwened.

Da bemp eur, goude bennoz ar Zakramant meulet ra vezo roet diwar dreujou or-dal an iliz, gand A. Gouraud, hag eur bedenn ziveza da Zantez Anna, pep unan a gemeras hent ar gear, laouen da veza bevet deizioù ken dudius, en o c'hallon karantez birvidikoc'h e kenver o Breiz, en o bolontez eur mennad startoc'h da labourat maïoc'h c'hoaz eviti.

**

Gouelioù ar Bleun-Brug e Gwened hag e Keranna a zo bet gouelioù gened Breiz.

Diouz ar pardaez ez ean gant eur mignon eus a Geranna da gouent ar « Chartreuse » e-tal kear Alre. Goulenn a ris outan petra zonje eus an deizioù bremenet: « Deizioù int, emezan, eus ar re gaera em buhez. Ne gave ket d'in oa ken kaer va Breiz. He c'haout a ran kaeroc'h kaera... Da e vije bet da holl dud yaouank Breiz beza gwelet ar gouelioù-ze ».

Kaer eo ar vro el lec'h m'eo bet lidet ar gouelioù dispar-ze, kaer mor-lenn Gwened gant he saë a c'hlasvez, kaer gourenez Rhüys o kerzet evel eur vag er mor, kaer Gwened ha Keranna, kaer traonienn sioul Trealre e lec'h m'eo gwaskedet « Park ar Verzerien » ha kouent ar « Chartreuse » el lec'h m'eo dastumet o relegou, kaer oa ar gwiskamanchou ken dishenvel ha ker pinvidig, kaer ar c'han hag ar peziou-c'hoari, kaer gwelet ar priejou yaouank o c'houlenn bennoz Santez Anna war o ziegeziou hag an tadou-koz hag ar mammou-koz, o bugale hag o bugale vihan en dro d'ezo evel eur gurunenn berlez presius, o kerzet dindan daoulagad karantezus Mamm-Goz Jezuz. Kaer oa gwelet ar Vretoned holl, pe i zo eus a Vreiz-Uhel pe eus a Vreiz-Izel, eus Leon, Treger, Kerne pe Wened, unanet evit enori Sant Padern, Sant Weltas, Sant Visant hag evit lakât amzer da-zont o bro etre daouarn Santez Anna.

Lavaret ez eus bet graet eo an disunvaniez a reas simpladurez ar Vretoned en amzer dremenet. Ar Bleun-Brug a labour da unani anezo holl hag an unvaniez a raio o ners en amzer da zont. Gouelioù Gwened ha Keranna a ziskouez splann n'eus nemet eur Vreiz, dre ma n'o deus ar Vretoned, en despet d'ar c'hemm a zo etre o yezou, nemet eur galon hag eun ene da garet da labourat evit Doue ha Breiz!...

P. ABVEZO.



An Ao. BULEON

Person iliz-veur Gwened

Prezeger ar Bleun-Brug e Keranna d'ar 16 a viz Gwengolo diveza

Feiz ha Breiz

Feiz ha Breiz, — da lavaret eo: ar relijion hag hor bro-ni, — a zo dimezet an eil gand egile, abaoe pell amzer, dirak Doue ha dirak an dud; eun eured kaer a oa bet graet ganto aman, beza ez eus ouspenn tri c'hant vloaz, e ker Santez Anna. Unanet e oant ker start o daou a-c'houdevez, ma ne oa ket seblant hepken ganto da c'hellout beva an eil heb egile.

Ha peb unan anezo a gave gand e bar gounid hag eurusted.

Feiz, ar Feiz, he devoa strewet, hed a hed, d'an hent-chou ha, dre hold ar vro, chapelioù, ilizou, kroazioù ha feunteunioù benniget ha pep pardon a oa eviti eur vamenn ysterius e teue enni, bep bloaz, da nevezi nerz he yaouankiz.

Feiz, ar Feiz, he devoa hadet e pep tiegez, e kement korn eus ar vro, vertuzioù kaer, vertuzioù ar gristèniez hag, 'vel ma lavare an dud koz gant o marvailhou gwechall, — pa zeue Jezuz da ober eun dro vale e bro ar Vretoned gant S. Per ha S. Yann, — abostol ar feiz hag abostol ar garantez, — ne oa tiegez ebet ha ne c'helle ket Jezuz chom da ziskuiza ebarz. E nep tu ne oa kalonou teneroc'h evit kredi e Doue hag evit her c'haret.

Ha Breiz, hor bro-ni, nag a vad e denne hi ivez euz ar Feiz!... Breiz ne oa ket eur vro pinvidik en amzer-ze; met resevet he doa gant Feiz argourou hep par, eun tenzor: alc'houez an eurusted! Feiz he doa desket d'ez-sevel he daoulagad etrezek an nenv. An neb a ouele e Breiz, an neb a oa paour, an neb a oa ankeniet, a gave ganti skoazell ha gwir zikour.

Feiz, ar Feiz, henvel ouz eun dervenn kantvloaveziek, he doa diskennet doun he gwrizioù e douar ar Vretoned.

**

Perag eta ez eus seblant ganeomp breman e vo dis-c'wrizienet ar Feiz?... Perag eta e komzer e vo disparti etre Feiz ha Breiz, disparti etre ar Vretoned ha relijion o zadou, disparti etre mab ar Werc'hez, mabig santez Anna ha bugale ar Vretoned? Perag?

Lavaret a rear, ha gwelet a rear alies, allas! eun den ha p'en deus laket en e zonz dispartia diouz e vaouez, ez a da ziavéz-bro, gwisket 'vel e diavéz-bro, komz a ra 'vel e diavéz-bro, beva a ra 'vel e diavéz-bro; en eur guitât e bried e fell d'ezan he disanaout ar pezh ma c'hell.

Lavaret a rear ac'hanomp-ni ar memez tra: eman hor bro o klask en em zispartia dioc'h ar Feiz!...

Feiz ha Breiz

Feiz ha Breiz, — da laret é, er relijion hag hun bro-ni, — e zou dimezet unan get en al a houdé pel amzer, dirag Doué ha dirag en dud; un éredén gaer e oé bet groéit geté aman, bout e zou open tri hant vlé-sou; é kér Santez Anna. Unanet e oent ker stert ou deu a houdéveh, ma né oé ket sublant emkin geté gelloud biéin unan emb en al.

Ha peb unan a nehé e gavé get é bar gounid hag eurus-ted.

Feiz, er Fè, en doé stréuet hed ha hed d'en henten, ha dré ol er vro, chapélieu, ilizieu, kroézieu ha feunténieu bé-niget; ha peb pardon e oé aveit hi ur vamen mistérius é péhani é té, bep plé, de reneuteien hé nerh hag hé iouankis.

Feiz, er Fé, en doé hadet é peb tiegeh, é kement korn ag er vro, vertuieu kaer, vertuieu er gristèneh; hag, el ma laré en dud koz get ou maravéliou guéharal, — a pe zé Jésus de hobér un dro balé é bro er Vretoned get S. Piér ha S. Yehan, — apostol er fé hag apostol er garanté, — ne oé tiegeh erbet emb ne hellé Jésus chom de ziskueh abarh. E neb tu né oé kaloneu tinéroh aveit kredein é Doué hag aveit er harein!

Ha Breiz, hun bro-ni, nag a vad e denné éan-memb ag er Fé!... Breiz ne oé ket ur vro pinuig én amzer-hont; més reseuet en doé get Feiz argouvren emb par, un trezol: allhué en eurusted!... Feiz en doé disket dehon seuel é zeulagad tremâ en nenv. En neb e ouilé é Breiz, en neb e oé paeur, en neb e oé ankinet, e gavé geton konfortans ha guir sikour.

Feiz, er Fé, hanval doh un dertien kantvléadeg, en doé diskennet donk hé gouriad é doar er Vretoned.

**

Perag enta é hès sublant genemb breman ma vou dihour-hiennet er Fé?... Perag enta é konzér ma vou disparti itré Feiz ha Breiz, disparti itré er Vretoned ha relijion ou zadou, disparti itré mab er Huirhiez, mabig Santez Anna, ha bugalé er Vretoned? Perag?

Laret e hrér, ha guélet e hrér liéz; allas! un dén, a p'en dés lakeit en é chonj disparti e zoh é voéz; monet e hra da véz-bro, gusket el é méz-bro, konz e hra el é méz-bro, biuéin e hra el é méz-bro; én ur guitât é bried, hé disha-natein a fantehon par ma hel.

Laret e hrér a neham-ni er meméz tra: é ma hun bro é klask disparti a zoh er Fé. »

**

— Betek vremen Breiz, va bro, he doa eur yez, deut a rumm da rumm, a c'henou da c'henou, a galon da galon, betek ennomp.

He yez, da lavaret eo ar parlant he doa va bro komzet gantan gwechall, ha kanet ha gouelet ha pedet a-holl viskoaz, ar parlant he doa ar veleien prezeget ennann, ar parlant he devoa an Itron Santez Anna komzet 'ennann, amann, da Nicolazig, a berz Doue, — ar parlant-se, lavaret e vefe, ne blij ket mui d'am bro; komz galleg a glasker, ha ken nemet galleg, galleg dibalamour, met ne vern; nemet e vo henveloc'h ouz ar galleg eged ouz ar brezoneg e vo mat... Ma kavit Bretoned war hoc'h hent, ne ouezit ket mui pe ez int breudeur pe ziaveourien. Na gomzit ket outo, pe ma' komzit brezoneg ne respontint ket a-c'hanoc'h nemet e galleg!

O truez!

**

— Betek vremen, Breiz, va bro, he doa gwiskamanchou 'vel ne gaver e kornad bro ebet, gwiskamanchou dudius, gwiskamanchou hag a laoske o braventez gand ar merc'hed, gwiskamanchou hag a wiske ar goueriaded evel tud a noblans, gwiskamanchou ha ne lakent ket ar vugale digempenn ha noaz pilh.

Met trei kein he deus graet va bro, hervez ma leverer, da vraventez ha da onestiz ar gwiskamanchou-se. Gizioù ker a glasker breman, gizioù nevez, gizioù diavez, gizioù marc'had mat.

O truez!

— Betek vremen Breiz, va bro, he doa gizioù evit pep tra: gizioù evid enori ar Werc'hez hag ar Zent, gizioù evit derc'hel sonj eus hon tud tremenet, gizioù evid ar banvezioù, gizioù evit dansal gand onestiz; gizioù e kenver ar veleien, e kenver ar vugale, e kenver ar beorien, gizioù kristen, gizioù niverus, eur souez, ken he doa pep parrez he hini, met bepred atao unan giz ar Vro.

O truez, ar gizioù-ze a ya da goll, disprijet gand ar re yaouank.

**

Betek vremen, Breiz, va bro, a lavare « me gred e Doue! » Va bro a grede eo ar vugale d'an tad hag ar vamm; va bro a grede e tle eun tad hag eur vamm gristen deski o bugale da veza kristenien, va bro a veve gand ar zonz e oa Doue hag an Itron Santez Anna a-du ganti; hag, en eur eus ar maro, ar Vretoned pa zerrent o daoulagad ouz an douar o digore kerkent en nenv.

Met allas! setu va bro o trei kein d'ar relijion; strewa a ra he bugale du-man ha du-hont; met ar Vretoned-se, o truez! a dro da veza nac'herien o feiz!

— Betag breman Breiz, mem bro, en doé ur yez deut a rum de rum, a veg de veg, a galon de galon, betag omb.

E yez, de laret er parlant get péhani en doé mem bro gueharal konzet, ha kanet, ha ouiled, ha pedet a ol viskoah, er parlant get péhani en doé er véléan predéget, er parlant get péhani en doé en itron Santéz Anna konzet aman de Nicolazig a berh Doué, — er parlant-sé, hanval e vebé ne blij ket mui de mem bro; konz galleg e fantehon, ha kinnameit galleg, galleg dibalemont mès ne vern; moiant ma vou hanvaloh d'er galleg eit d'er brehoneg, é vou mat!. Mar kavet Bretoned ar hou hent, ne houiet ket mui mar dint bredér pé dianvézerion. Ne gonzet ket doh t'é, pé mar konzet brehoneg, ne reskondeint kei t'oh nameit e galleg!

O truhégeh!

— Betag breman Breiz, mem bro, en doé guskemanteu el ne gaver é kornad bro ebet, guskemanteu digras, guskemanteu hag e lauké ou braùité get er merhed, guskemanteu hag e huské er baysanted avel tud a noblans, guskemanteu ha ne lakent ket er vugale digampen ha nuah-pilh.

Mès dihoustet é mem bro, revé ma larér, doh braùité ha doh honestis er guskemanteu-sé Modeu kér e glaskér breman, modeu neùé, modeu dianvèz, modeu marhad mat.

O truhégeh!

— Betag breman Breiz, mem bro, en doé gizioù aveit peb tra: gizioù aveit inouerein er Huerhiéz hag er sent, gizioù aveit derhel chonj ag ou zud tremenet, gizioù aveit er banùezieu, gizioù aveit korol get honestis; gizioù é kever er véléan, é kever er vugale, é kever er breurizioù; gizioù kristen, gizioù niverus ur bam, ke nen doé peb paréz hé hani, mès prepet atañ unan mod er vro.

O truhégeh, er hizieu-sé e ia de goll, disprijet get er ré iaouank.

— Betag breman Breiz, mem bro, e laré « me gred é Doué ». Mem bro e gredé penaus un tad hag ur vam e vieu ou bugalé, mem bro e gredé penaus un tad hag ur vam kristen a zeli diskein ou bugalé de vout kristenion; mem bro e viùé get er chonj é oé Doué hag en itron Santez Anna a du geton; hag, én ér ag er marù, er Vretoned a pe cherrent ou denlagad doh en doar, ou digoré trema en nenv.

Mès allas! chetu mem bro é troein kein doh er relijion! Stréù e hra é vugale du-hont ha du-man; mès er Vretoned-sé, o truhégeh! e dro de vont tud renavi.

Laret e vé: son é en fé é Breiz, el ma'n dé son ur huènderù en hé saù! — Ha! ne gonzet ket mui d'ein az er hoèderù; guélet em ès éan hed ha hed d'en henteu; é ma er hlinùed geton; er hoèd-deré e zou idan merùel; hag é ma, er Fé a gristèneh el d'on idan merùel é man bro.

Mès, kleuet mat: er Fé a pe vou-marù genemb Breiz ne vou ket mui Breiz; troein e hrei de vout ur vro gal; pinui-

Lavaret e vez : sounn eo ar feiz e Breiz, 'vel ma 'z eo sounn ar wezenn zero en he sav ! — Ha ! na gomzit ket d'in ken eus ar c'hoad dero; Her gwelet em eus hed-a-hed an hentchon; eman ar c'hlenved gantan; ar c'hoad dero a zo warnez mervel; hag eman, er memez tra, ar Feiz a gristeniez warnez mervel em bro.

Met, klevit mat; ar Feiz, pa vo maro ganeomp, Breiz ne vo ket mui Breiz; trei a rei da veza eur vro c'hall; pinvidikoc'h e vo marteze he bugale; eur baradoz a vo evito marteze war an douar; met baradoz an Aotrou Doue a vo serret evito. Setu torret liamm ar garantez a lavaro neuze ar c'hoaperien: « Breiz ha Feiz, kazaliet gwechall 'vel daou bried, bez ez eus breman disparti etrezo ! »

Ha Breiz, kollet gantan e bried, a vo henvel neuze ouz eun intanv dirollet, e keit ha ma varvo, hen e-unan, ha ne vo ket mui kavet, warlerc'h, Breiz ebet war an douar!
O na pebez truez !

**

Va breudeur, klevet ho peus ganen, evel pa vije, kloc'h an angoni.

°Ha ! mat n'eo ket!, n'oun ket deuet aman da gomz d'eooc'h eus ar maro.

Deut oun kentoc'h da lavaret d'ar Vretoned: « Na gollet ket kalon. Ya, gwir mat eo, kouezet ez eus klenved war ar vro, met eur c'hlenved n'eo ken ha ne varver ket gantan !

Kianv eo va bro, n'eus ket da lavaret nann. Met o va breudeur, nag a glenvejou en deus bet hen dija da c'houzanv en amzer dremenet. Ha pa lavare enebourien ar vro: « D'eomp da enterri Feiz ha Breiz; marvet int o daou ! »... Kent pell, warlerc'h, Feiz ha Breiz a zave endro, gredus 'vel atao, evel p'o divije darempredet feunteun ar yaouankiz.

**

— Bet ' ez eus mil bloaz, en deiz hizio, goullouet ha gwasket e oa ar vro gand an Normaned hag int a lavare: « Ne vo ket mui Feiz e Breiz ebet e nep tu »!!! Kant vloaz goude bez ' e oa Bretoned leun ar vro, gredusoc'h o feiz eget biskoaz !

— Bez' ez eus pemp kant vloaz breman, e oa truez eus eur penn d'egile d'ar vro; kousket e oa ar relijion e kalon ar Vretoned; ne oa na peoc'h na garantez e mesk an dud: lazerez, hudurnez, laeronsi, netra a vad!... Met setu deut sant Visant d'ober eun dro e Breiz; prezeg a reas, dihuna a reas ar relijion; lakat a reas ar peoc'h e mesk an dud. Ha tregont vloaz goude, ne oa kornad bro ebet kristenoc'h nag eurusoc'h vit ma oa hor bro ni.

— Beza ez eus breman tri c'hant vloaz pe ouspenn, brezel a oa adarre ha truez goasoc'h eget biskoaz. Dont

koh e vou martsé e vugale; ur baradouiz e vou martséhad aveit é ar en doar; mès baradouiz en Eutru Doué e vou cherret doh t'é: « Chetu torret liam er garanté, e larou nesen er hoaperion: Breiz ha Feiz, kazaliet guéharal el deu bried, bet e zou breman disparti itré z'é. »

Ha Breiz, kollet é bried dehon, e vou hanval nesen doh un intanv dirollet, én atretant ma varvou éan-memb, ha né vou ket mui kavet, arlerh, Breiz erbet ar en doar!

O na pé un druhégeh!

**

Men bredér, kleuet e hués gesein, hanval e vehé, kloh en angoni.

Hama pas! — Nen don ket deit aman da gonz t'oh ag er maru. Deit on kentoh de laret d'er Vretoned: « Ne gollet ket kalon. Ia, guir mat é, koéhet e zou klinuéd ar er vro, mès ur hlinuéd elken ha ne varvèr ket geton. »

Klan é mem bro, nen dès ket a laret pás. Mes,, o mem bredér, nag a glinuédeu en dès éan déjà bet de andur én amzér treménét! Hag a pe laré énéberion er vro: « Damb de interrain Feiz ha Breiz: maruet ind ou deu! »... Kent pèl arlerh Feiz ha Breiz e saùé indro, gredus el atau, el p'ou devehé darimprédet feuntén er iouankis.

— Bèt e zou mil vlé, hiniù en dé, goleit ha goasket e oé er vro get er Normanded; hag ind e laré: « Ne vou ket mui Feiz é Breiz; ha ne vou ket mui Breiz erbet é neb tu »!!! Kant vlé goudé, be oé Bretoned lan er vro, gredusoh ou fé eit biskoah!

— Bout e zou pemp kant vlé breman, be oé truhégeh ag ur pen d'er pen aral ag er vro; kousket e oé er relijion é kalon er Vretoned; ne oé na péah na karanté é mesk en dud: lahereh, pajlardigeh, laeronsi, nitra a vad!... Mès chetu deit S. Uissant de hobér un dro é Breiz; predeg e hras, dihousk e hras er relijion; lakat e hras er péah e mesk en dud. Ha tregond vlé goudé, ne oé kornad bro erbet kristénoh nag eurusoh eit ma oé hun bro-ni.

— Bout e zou breman tri hant vlé-sou pé open, brezél e oé arré, ha truhégeh mui eit biskoah. Donnet a hré Hugaude ag un tu,, sudarded Spagn ag en tu aral; er vosen e skrapé en dud; kérieu abeh e oé skarhet geti. Biskoah ne oé bet sublant er maru tostoh get hun bro!... Mès en itron Santez Anna e oé hi deulagad é spial arnamb; hi e ziskennas aman; ha, chetu, biskoah nen dé bet Feiz ha Breiz stagetoh doh en égilé.

Ia, hoah ur huéh, koeh e bra taul ha taul klinuédeu ar Feiz ha Breiz, mès biskoah nen dint klinuédeu hag e varuér geté.

Naren, naren, ne gredet ket, mem bredér, é hon deit aman de sonein kloh bras en angoni.

a rea Hugenoded diouz eun tu, soudarded Spagn diouz eun tu all; ar vosenn a skrape an dud; keriou a-bez a voe skarzet ganti. Biskoaz ne oa bet seblant ar maro tostoc'h gant hor bro !... Met an Itron Santez Anna a oa he daou-lagad o spial warnomp; hi a ziskennas aman; ha, setu, biskoaz n'eo bet Feiz ha Breiz stagetoc'h an eil ouz egile ! Ya! c'hoaz eur wech, koueza a ra, taol ha taol, klenvejou war Feiz ha Breiz, met biskoaz ne 'z int klenvejou hag e varver ganto. Nann, nann, na gredit ket, va breudeur, ez oun deut aman da zeni kloc'h bras an angoni.

**

Petra eta a vennan me lavaret ?

— Lavaret d'eoc'h a vennan: diouallit! rag, eun dra splann eo, da welet, frankaat a ra liamm ar garantez etre Breiz ha Feiz; beza ez eus seblant ganto d'en em zistaga an eil diouz egile.

Seblant a zo. Met seblant hepken, a drugarez Doue.

Diouallit koulskoude, diouallit, a lavaran d'eoc'h.

— Lavaret d'eoc'h a vennan eman boaz va bro diouz klenvejou er seurt-se. Met betek vremen Feiz ha Breiz n'o deus ket c'hoaz en em zispartiet grons gwech ebet; hag er wech-man, ma karomp, ne zispartiint ket c'hoaz.

— Lavaret d'eoc'h a vennan: bep wech ma sav ar vro a zindan ar c'hlenved, ne 'z eo ket mui, warlerc'h, hollik henvel ouz ar pezh e oa a-raok. Kaer, ho po eta ober, hor bro ne deuiou ket a-dreñv ha ne vo ket en amzer da zonef ar pezh ma oa en amzer dremenet.

Kaer ho po harz ha difenn, eul lod bras a draou a chench hag a chench bepred.

— Ar yez hizio n'eo ket henvel piz ouz yez ar Vretoned, breman ez eus tri c'hant vloaz.

— Ar gwiskamanchou, en deiz a hizio, n'int ket, nag e bro Leon, nag e bro Gemper, nag e Landreger, nag e Pondi, nag e Guemene, nag e bro Wened,... ar pezh ma oant breman ez eus kant vloaz. — Ar modou a jench, ar gizio a jench, ar gwiskamanchou a jench. Difenn ouz ar modou chench! Kerkoulz lavaret d'eur vaouez antronoz he eured: « chomit dalc'h mat yaouank ha koant evel m'emaoc'h breman! » Kerkoulz lavaret d'eul labourer: « C'houi a zourno gant freilhou evel ho tad; ha ne 'z eot ket da bardona, e nep tu, nemet 'vel ho tad koz, war droad pe war varc'h. »

Nann, ne c'houlennomp gant Doue netra direzon; ar vaouez yaouank a jench min d'ezi gand an oad; an dournerez a chench; pardonerien n'oc'h ket deut hizio aman, evel ma teue ho kourdadou; kouefou ar merc'hed n'int ket mui tatm henvel ouz kouefou o mamm goz. Goulou rousin a oa gwechall e ti va zad, goulou seurt all a splann breman e ti e vugale. Den ebet, den ebet, ne viro ouz ar chenchamanchou d'en em gaout.

Petra eta e vennan mé laret ?

— Laret t'oh e vennan: dihoallet! Rag, un dra splann é de huélet, frankat e hra liam er garantez itré Breiz ha Feiz; bout e zou seblant geté distag a zoh en egilé.

Sublant e zou. Mès sublant embkin frugéré Doué. Dihoallet neoah, dihoallet, e laran d'oh.

— Laret t'oh e vennan e'ma duah mém bro doh klinuéchanj hag e chanjou brepet. — Er iéz hiniü nen c'é ket hoah dispartiet grons gueh erbet; hag er hueh-man, mar karamb, ne zispartieint ket hoah.

— Laret t'oh e vennan: sel gueh ma sau er vro a zan ur blinued, nen dé ket mui, arlerh, ollig hanval doh er pé e oé ér raug. Kaer hou pou gobér enta, hun bro ne ze ket ardran, ha ne vou ket én amzér de zonet er pé ma oé én amzér tremenet.

Kaer hou pou harz ha dihuen, ur lod bras a dren e chauj hag e chaujou brepet. — Er iéz hiniü nen dé ket pakret iez er Vretoned, boutezou tri-hant vlé-sou. — Er huskemanteu, hiniü en dé, nen dint, nag é bro Léon, nag é bro Kemper, nag é Landrégér, nag é Pondi, nag é Guéméné, nag é bro Guéned,... er pé ma oent bout e zou kant vlé-sou. — Er modeu e chanj, er hizieu e chanj, er hüske-manteu e chanj. Dihuen doh er modeu chanjein! Kerklous laret d'ur voéz, en trenoaz ag hé 'rédén: « Chomet dalbeh iouank ha koant el ma hoh breman! » Kerklous laret d'ur labourer: « Hui e zornou get fralieu el hou tad; ha ne yehet de berhindetat é neb tu nameit el hou tad koz, ar droéd pé ar varh.

Naren, ne houlennamb get Doué nitra dirézon, er voez iouank e chanjou min dehi get en oéd; en dornereh e chanjou; perhinderion, nen doh ket deit hiniü aman, el ma té hou kourtadeu; kouifeu er merhed nen dint ket mui tam hanval doh kouifeu ou mam goz. Goleu rusein e oé guéharal é ti me zad, sort aral e splann breman é ti é vugalé. Dén erbet, den erbet ne barrei doh er chanjemanteu.

Un dra emkin, Bretoned, ne zeli ket chanjein ha ne chanjou ket: hun HALON!

A houdé kant ha kant vléieu, hun halon nen dès ket chanjet; hag aben kant vléieu aral kalon Breiz e vou atañ et atañ; kalon Breiz e zeli chom staget doh er Fé, rag get er Fé embkin é kavou mém bro eurusted en doar hag eurusted er baradouiz.

— Petra hoah e vennan mé laret ?

Er Bleun-brug, pehani en dès hou tolpet aman hiniü, nen dé ket fol arhoath aveit kredein é hellou parrat doh peb sort chanjemanteu; mès deu dra, deu pé tri, e garché gobér, hag éan ou groei get sikour Doué.

— De getan, er Bleun-brug e garché parrat doh er modeu a chaujein ré fonabl ha ré liez.

Eun dra hepken, Bretoned, ne dle ket chench ha ne chench ket: hor C'HALON!

**

Goude kant ha kant vloaz, hor c'halon n'eo ket bet chenchet; hag a benn kant vloaz all aman kalon Breiz a vo atao evel atao; kalon Breiz a dle chom staget ouz ar Feiz, rag gant ar Feiz hepken e kavo va bro eurusted an douar hag eurusted ar baradoz.

**

— Petra c'hoaz a vennan me lavaret?

Ar *Bleun-Brug* hag en deus ho tolpet (bodet) aman hierie, n'eo ket foll awalc'h evit kredi e c'hello harz ouz pep seurt chenchamanchou; met daou dra, daou pe dri, a garfe ober hag heñ o grei gant sikour Doue.

— Da genta, ar *Bleun-Brug* a garfe harz ouz ar gizio da chench re brim he re alies.

— Ar *Bleun-Brug* a garfe rei dour d'ar Vretoned da gemer o gizio nevez bepred hervez ar gizio a oa en o raok; chench meur a dra n'eo ket fall, gant ma vo dalc'het start d'ar pez a zo rekis derc'hel.

— Ar *Bleun-Brug* a zav e benn 'trezek Paris gant hardiziegezh hag a lavar da vro Frans: « N'hellan ket mui tenna va alan dindan ar zamm pounner a daolit warnon hep paouez. Diouer am eus eus al liberte hoc'h eus lammet diganen; roit frankiz d'am bro da veva 'vel ma karo, hervez lezenn Doue; laoskit ar Vretoned da gomz 'vel ma plijo ganto. Laoskit ac'hanomp da zével hon bugale 'vel ma tleer sevel bugale badezet. Bras awalc'h omp breman, hep na vefe ezomm d'hon c'has a-bouez eun ère.

Frans, 200.000 Breton a zo maro evit difenn ho frankiz; perak eta ne vefemp ket; ni ive, lodek, eur draig bennak, er frankiz hon eus prenet ken ker evidoc'h-c'houi?

Frans, grêt hoc'h eus eul lezenn villiget evit dispartia ar priejou an eil diouz egile. Klask a rit, en hevelep doare, dispartian Breiz ha Feiz; distagan va bro a vennit diouz ar relijion; c'hanta! kement-se ne vo ket grêt, peotramant e vo bec'h!... Goulennit c'hoaz soudarded diganeomp, mar karit, evit brezelat, met-eneou ar vugale n'ho po ket anezo birviken!

— Frans, klevit mat, ha komprenit, mar gellit.

Va bredeur, *Feiz ha Breiz* a zo dimezet unan gant eun all, ha dimezet e chomint, gant sikour Doue hag an Itron Santez Anna keit ma chom Bretoned war ar douar.

Evelse bezet grêt.

— Er Bleun-brug e garehé rein dorn d'er Vretoned da gemer ou modeu neùe révé berpet er modeu e oé én ou raug. Chaujein mar a dra neñ dé ket fall, moiant ma vou dalhet stert doh er pé e zou rekis derhel.


— Er Bleun-brug e sañ é ben trema Paris get hardeted, hag e lar d'er vro a Frans: « Ne hellan ket mui dihostal » idan er sam e daulet arnan emb arsau Dioué em ès » d'er liberte e hués lamet genein; reit frankis de mem » bro de viuein el ma karou revé lézen Doué. Lauket er » Vretoned de gonz el ma plijou geté. Lauket ind de ze- » sañ ou bugalé, el ma teliér desañ bugalé badeet. Bras » erhoalh omb breman, emb ne vé dobér ag hun has ari » er stag..

» Frans, 200.000 Breton e zou marù aveit dihuen hou » frankis: perag enta ne véhemb ket, ni eùé, lodeg, un » draig benag, ér frankis hun ès prenet ker kir aveit oh » hul.

» Frans,, groeit e hués ur lézen miliget aveit disparti er » priédeu unan a zoh en al. Klask e hret, er meméz tra, » disparti Breiz ha Feiz; distag mem bro kristén e vennet » a zoh er relijion: hama! kement-sé ne vou ket groeit, » pétrémant é vou beh!... Goulennet hoah sudarded ge- » memb, mar karet, aveit brezelat, més inéaneu er vugalé » n'hou pou kei ind biskoah. — Frans, kleuet mat, ha » komprénet mar gellet! »

Mem breder, *Feiz ha Breiz* e zou dimezet unan get en al, ha dimezet é chomeint, get sikour Doué hag en itron Santez Anna, kéhed ma chom Bretoned ar en doar.

Elsé revou greit.



Ar Scala-Sancta



Tud vrudet Kerne

Gouel ar c'hant vloaz eus maro LAENNEC e PLOARE

D'ar yaou 12 a viz Eost, zo bet gouel e borc'hadenn vihan Ploare da zigas da zonj d'ar Vretoned zo kant vloaz zo eo maro ar medisin brudet hag ar c'hristen bras ma oa an doktor Renan-Teofil Laennec. D'ar 17 a vis c'houevrer 1781 e teuas er bed e ker Kemper, en eun ti bras savet gant maen-grouan, war ar vali a ya hed a hed an ôd, e kenver an takad ma teu Ster-Odet hag ar Steir da veska o dour.

Mont a reas dirag e Varner d'an 13 a viz eost 1826 en e vaner bihan Kerlouanec, a ier d'ezan eus iliz Ploare dre eur vali-gaer disheoliet gant renkennajou gwez-fao ha dero. N'en doa nemet 45 bloaz. Met skuizet e oa a-benn neuze gant al labour ha taget ouspenn gant an droug-skevent. Ar c'hlenved-ze, eun hag eun en doa furchet kemend all evit kaout ar pare anezan, ha digouezout e oa plomtin war eur pleg-neve da louzoui ar c'hlenvejou diabarz. Den ebet arôzan ne oa deut en e spered, tôl e skouarn da zelaou trouz ar galon ha finvadennou ar c'hreuz eus an den. Hen en deus digoret an hend ha lakeet ar vedisinerez er pal eman hizio.

Ar gloar-ze en deus bet, ha chom a ray gantan keit ha ma 'z ay ar bed en dro hag ar c'hlenved war an dud... Pion a ouezo morse pet ha pet mil den eo aet ar maro diwar o

zro, dre m'en deus desket Laennec d'ar vedisined an tu d'anaout aes tre pelec'h e oa an droug, ha d'e louzaoui d'ar mare ret...

D'ar iaou-ze, e oa kaer an heol ha lugerni a rae an oabl glaz war bleg-mor Douarnenez. Borc'h Ploare a oa he dilhad-sul ganti: fichet e oa an tier gant banniellou-brezel: dre ar streajou e oa stennet kerdin delliou ha glasvez. En ti-kêr eman an Otrou Mèr, Hallma ar Fretay oc'h ober digemer d'ar re zo pedet d'ar gouel. Etouez ar re-man e c'hellomp gwelet prefed ar « Finister » hag ar vegen (1) eus medisined « Franz ».

Da zeg eur eman ar c'hleier war « vole » en o zour bras, eun tour hag a zav e benn eus beg e duchenn, dreist kemend all a zouar hag a zour! Neuze ez aer war renk d'an iliz. Eno eur pemzek beleg bennag a gan eur servij bras. Eur wech achu, an Otrou Duparc, eskob Kemper ha Leon, a bign er gador hag a zispleg gant tan ha nerz « parabollenn » ar Samaritan mat, breur gwirion da Laennec... Meuli a ra hen-man n'eo ket hebken dre m'eo bet eun den a zeskadurez eur seurd ne oa ket, brasa medisin o deus gwelet an dud dibaoue Hipokrat, a veve pell arôg hor Zalver, met ive, ha dreist-holl, en abeg d'ar c'hristen izel a galon, sentus en e feiz, a lavare e chapeled pa 'z ae eus ar ger, hag a vije bemde en oferenn, o c'houzout evel ma ouie e oa Doue ar Mestr n'eus nemetan kerkoulz war ar maro ha war ar vuhe.

Kroaziou aour hag arc'hant an trizeg parrez tro war-dro o vale a-raok, ar veleien da heul an Otrou n'Eskob, a gemer hend ar Vered. Eno dindan eur maen noaz Kersanton eman Laennec. An dud a ra kelc'h en dro d'ar bez warnan eur bern bokedou gant eul lore kouevr laket gant Kenvreuz Medisined Breiz. Pell pell ac'hano e weler ar mor glaz, ôchou Kraon ha Morgat, reier Beuzek ha Kleder, kor Douarnenez, tôlet ganti he zier gwen evel diri ouz ar rôz chigac'hret, etre aberiou Rosmeur ha Porz-Ru, erfin maeziou chichen glaz-melen Ploare ar Yeuc'h ha Pouldergat. Pebez lec'h a ziskwiz da gousket e disheol ar groaz lusket, bep eil tro, gant ezen domm an hanv hag avel gouez ar goanv.

Meur a brezegenn a voe klevet war bez Laennec; en o zouez unan gaer ha kristen tre penn da benn grêt gant an Otrou Mevel, medisin eus Douarnenez. Met hini ebet ne voe trec'h d'ar pôz brezoneg a deuas gant Otr. Poulhazan, alvokad e Kastellin evit meuli Laennec, breton a galon hag a deod. Pa zonjer e teuas ar medisin brudet-se, labour warnan eus a bep tu koulskoude, ha ganet etouez ar galleg, a benn da zeski mat tre ar brezoneg! Skriva' a rae brezoneg e lizeri, pa c'helle; komz brezoneg a rae ouz e verourien, an dud diwar ar mêz a zae war o zro. Klask a rae e pep

1) Vegen: le choix.

lec'h da brena leydriou brezoneg, geriaduriou, kantikou, gwerzioù ha soniou. En eur vervel e roas an holl baperiou dastumet gantan da leordi bras Kemper...

Da achui ar gouel-se eur pred bras dindan gwez Kerlouaneg. Mont a rer di dre ar vali, neve ar c'hoad enni, red evel ma oa bet pila ar c'harzad koz deut da veza brein.

Ar wezenn diveza troc'het breman z'eus ugent vloaz-zo oa merket war an drusken anezi daou benn rim latin, diwar gontel Laennec. Stok ouz kleud ar maner e weler c'hoaz ar chapelig vihan, savet er bloavez 1701, ma oa kustum ar medisin bras da vont enni bep mintin da laret e bater.

An toliou zo renket e kichen e goudor ar gwez dindan eun doenn deliou treuzet gant an heol a dôl war ar ieot beradennou dour aour.

Eno e ya c'hoaz ar prezegennou en dro da gana holl meuleudi da zeskadurez ha ijin dispar an den meur a dremenas er c'horn didrouz-se ar gwella mareou marteze eus e vuhez ker berr... Ar Brezoneg ne voed ket warlerc'h gantan adarre. An ôtrounez ar Berr (Abalor) ha Nihouarn eus Plogonneg a zo e penn ar c'hanaouennou. Bro goz ma Zadou, Sao Breiz-Izel, ar Pilhaouer... a deu an diskan anezo gant an holl! Meur a vaer eus ar c'hanton zo deut gant o dilhad breton, dilhad ken kaer ha n'int ket eus an diveza o kana ha o strakal o daouarn.

N'heller ket mont kwit hep ober eur weladenn da vaner Kerlouaneg: eun ti izel kuzet dindan ar glazvez hag ar bokedou, ouz koste eun duchenn a ziouall anezan ouz an aveliou mor! Eur gwir baradoz an douar! takad boemus (1) gant e wez dero hag evlec'h gant e vleuniou eus a bep seurd hag a bep liou.

A-us an nor, eun dôlen-varbr du a zigas da zonzj en deus bet eno Laennec fin eus e vuhe verr met ken enorus! Adrenv an ti, eun tour rond gant eun doenn vegok. Dre-ze e ouzomp eo Kerlouaneg eur maner koz: Istor Breiz a zo enni ano eus eun Thibod Kerlouaneg bet skoueder eus gward an dug Yann V.

En ti. Eur zell ouz kambr an traon hag e pigner warlêz d'an hini eo maro enni Laennec. N'eus chomet netra war e lerc'h nemet ar vaz a vije gantan o vale epad e glenved diveza hag eun dôlen, eur patrom, e hini, skeudennet treset gantan e-unan. Treut eo warni, kastiz evel an dud, ar maro war o zrenjou, met e lagad zo lemm ha bero c'hoaz. Gant doujanz e treuzer ar gambr noaz-se beuzet en eun denvalijenn melkonius, mouchet evel ma vez bepred ar prenecher.

E Porz ar maner, an Otr. ar Fretay a lavar kenavo da Laennec ha d'e di. « Krena a ra e vouez eun tammig : santout a raer z'eus aze eun den hag eo stag e galon ouz

kemend a zell ouz ar medisin brudet. N'int ket kar, nag a dost nag a bell an eil d'egile, mignoned vras koulskoude e vefe lavaret int bet a viskoaz! Laennec, emezan en eur gloza e brezegenn, a gare douar Breiz, ne glaske nemet eun dra: tec'hi diouz ar laeziou hag an enoriou ha dont da dremen ar pez en doa c'hoaz da veva etouez ar re a ziwar ar mêz, da zelaou mouez an douar. Komz a ra c'hoaz hizio an douar ha komz a ra d'omp anezan.

Sur oun, Otronez, c'houi a glevo e vouez ive pa embanno-c'h gloar ar medisin bras dirag ar bed holl. Fiziants am eus e talle'ho ar zonzj eus ar maner bihan-man beb c'hoaz en ho kalon ar garantez evit an den didrouz ha mat m'eo bet ato hor c'henvroad Renan Teofil Laennec.

G... M..



(1) Takad boemus: Site enchanteur.

Paolig ha Perig

Disul oan bet o welout va zintin Anna, e Gwipavaz. He daou bôtr bihan 7 ha 9 bloaz a oa o c'hoari kornigell war an hent bras e-tal an ti. Galleg a oa ganto leiz o genaou ha galleg fall, war ar marc'had. Perig a lavare da Baolig « Ton toupie à toi ne tourne pas si long que mon mienne. Mon sifelle à moi est plus longue que ta tienne ». Donne-moi la tiens, et regarde que mon toupie à moi il est pas fendue comme la tienne à toi, et elle est pas si gros que mon mienne, a lavare Paolig da Berig.

Eun druez eo, tintin, klevout an daou bôtr-se o komz galleg fall e lec'h brezoneg mat, ha me lavar d'eoc'h e vezo diwezadoc'h dibaot d'ezo komz galleg hervez ar reolennou, goude beza bet boazet diouz ar yez trefoet a zesk d'ezo o zud hag a zeskont an eil gand egile en o c'hoariou!

Petra dalv kunudi, Louis, ar c'hiz eo deski galleg d'ar vugale a-raok o c'has d'ar skol, ha neuze e komprenont dioustu ar pez a lennont. Ma n'oufent nemet brezoneg, n'e komprenent netra en o levriou, ha kalz diaesoc'h e vije d'ezo deski galleg.

— Ma n'oufe ar vugale nemet brezoneg en deiz ma 'z eont d'ar skol, e teskfent galleg reiz, desket d'ezo gand ar mestr-skol, e lec'h breman, er skol zoken ha goude, e komzint hag e skrivint yez o zud, eur yez trefoet, ha c'houi a oar a-walc'h ez eus kalz a vugale ha n'ouzont ket lavaret bara e galleg en deiz ma 'z eont d'ar skol, hag a deu ganto goudeze gwelloc'h galleg eget na deu gand ar re o deus desket galleg o zud en o bugaleach kenta.

Abenni eur pennad, va filhor Louis, eur pôtr seitek vloaz, bet en oferenn, a erruas en ti, hag en eur bokat d'in e c'houlennas : « Comment que ça va-t-il, parrain... Il y a un siècle qu'on vous a pas vu, et je croyais que vous devriez être mort ! »

— Petra, filhor, te ac'h eus ankounac'haet da vrezoneg mat o teski galleg fall ?

— N'em eus ket, parrain!

— Lavar paeroun d'in 'ta, ha lez parrain gand ar C'hallaoued !

— O n'em eus ket, paeroun, met ma komzfen brezoneg aman er vourc'h, an holl a c'hoarzfe d'in; kemeret e vijen evid, eur genaouek, eun diwezad! ha p'eo gwir oun bet er skol o teski galleg e-pad seiz vloaz e komzan galleg, evit ober ar c'hiz hag evit diskouez n'oun ket muioc'h panezenn eged ar re all. Hag ouspenn, paeroun, en deiz all va zad koz a lavare d'in pegement a c'hoap a veze graet gwechall er c'hazarniou euz ar Vretoned ne ouient nemet brezoneg ! Ni aman a vez e Brest bemdez o werza eur seurd pe seurd, alies e rankomp kaout da ober gand ar C'hallaoued, ha neuze e rankomp mont e galleg.

— Evel just, filhor, ha n'eo ket me eo a viro ouzit da c'houzout galleg mat, ha da gomz galleg fetis... pa vezo ret d'it... met avat, karout a rafen e komzfec'h brezoneg etrezoc'h aman er gêr, hag ouz an dud a oar brezoneg c'hoaz er barrez-man ! Pa ranki mont d'ar foariou, diskouez neuze d'ar C'hallaoued da c'halleg mat, desket ganez dre ar reolennou.

— Petra fell d'eoc'h, paeroun: gwechall diouz gwechall, hirio diouz hirio ! Ar skoliou, skignet hirio stank er vro, a zesk d'eomp ar galleg, ha ni a gomz galleg; p'e gwir e kavomp enoraploc'h komz yez an aotrounez hag an itrounez faro a zo en-dro d'eomp, hag a gomz ouzomp bepred e galleg.

— Te, filhor a zo beo da vamm-goz ha da vamm. Lavar d'in breman ha bez 'e pefe ar galon da lakat da vamm-goz da veza er c'hardi, abalamour ma 'z eo aet ar c'hiz anezi, abalamour ma c'halles tremen hebdi ?

— Ne rafen biken cun hevelep tra ziskiant, eun hevelep torfed, rak ar penn uhela eus an daol, ar gwele e-tal an tan a zo dleet rei d'am vamm-goz.

— Ma ! filhor, ar pez a rafes evit da vamm-goz, a zo ivez dleet d'it ober evid ar brezoneg, abalamour ma 'z eo bet gwechall komzet gant hor hendadou, hon Duked, hor Rouaned; abalamour ma 'z eo yez hor gouenn, ha dre ma 'z eo kalz kosoc'h eged ar galleg. Ret eo d'eomp-ni miret an tenzor-ze abalamour ma 'z eo bet roet gant Doue d'hor zent koz, evit deski d'hon tadou ar feiz kristen.

— Ma ve graet diouzoc'h-c'houi, paeroun, an holl dud aman e Gwipavaz, ha dre holl e Breiz, a gomzfe brezoneg ha netra ken etrezo, ha pa vent gant Gallaoued, e komfent e galleg, ec'h oufe an holl dud diou yez.

— An dra-ze eo a glaskan, filhor, hag evit ma ouezo an holl Vretoned galleg mat, e karfen ne ve ket kemmesket ar galleg gand ar brezoneg, nag ar brezoneg gand ar galleg.

— Gwall rouestlet e kavan ez eo ho kudenn, ha sonjal a ran ez eo breman re droet an dud da c'hallegat, zoken ken etrezo, evit o lakat da zistrei adarre evel gwechall d'ar brezoneg.

— Petra livirit!... an dud dizesk hepken eo a zo o c'hallega ?

— Ar Vretoned a oar petra eo o gouenn, petra eo bet gwechall o zud koz, o Sent koz, o Duked, o Rouaned, hag en eur ger, an dud a oar istor o bro, a deu breman da garout muioc'h-mui Bro o c'havell, an douar santel elec'h m'eman douaret relegou o hendadou. Dont a reont da zeski ar yez a gomzas gwechall ar venec'h, pa oant o hada er vro-man ar feiz kristen, a lugern c'hoaz enni a-dreuz ar c'hantvedou.

— Hag a draou mat a zeskit d'in hirio, paeroun ! Ha kement a blijadur am eus ouz ho selaou, ma kav d'in ez oun breman gwelloc'h Breizad eget n'oan dec'h da noz.

Kendalc'hit eta d'am c'helenni, ha livirit d'in penos ober evit terri ar c'hiz fall o deus ar Vretoned dizesk da zeski galleg da genta d'o bugale vihan. Gwelet a ran a-vreman ez eo eur c'hiz fall, ha c'hoant a deu d'in da veza lakaet war an hent-mat, evit gallout lakat ar re all.

1. — Ar c'hiz a zo da gomz galleg, dreist-holl er bourkou, hag ar gerent a zeski galleg d'o bugale ez-vihanik a laz enno ar garantez-vro, a ra diouto Gallaoued, rak eur wech lazet ar yez, eo muntret ar spered broadel.

Evit terri ar c'hiz fall-ze, ez eo ret kregi start ha dizamant da lakat da enaoui e kalonou ar gerent tan ar garantez-vro. Pa ouezo ar gerent-se dre zeski istor o Bro, peira a falloniou o deus graet ar C'hallaoued d'ar Vretoned, neuze e tistano o aked da zeski d'o bugale yez ar waskerezh.

Ar Vretoned n'ouzont ket, ha n'eo ket ar C'hallaoued eo a zesko d'ezo, ar poaniou gouzanvet gant hon tud abaoe m'eo stag hor Bro ouz Bro-C'hall. Deskomp eta o istor d'hor c'henvroiz ha na lezomp ket anezo da goueza er ster evel gw chall denved Panurge.

2. — Da eil, e welomp ar Vretoned o c'hallega dre ma teu lorc'h enno. Neuze e kavont iskis komz e brezoneg, mont da vale gand eun tok ledan war o fenn, *la plaque tournante*, evel a lavar al lakepoted n'o deus ket a aes da brena) a deu evito da veza mezus, hag e kemeront eun tok aotrou, dilhad aotrou penn-kil ha troad, abalamour ma 'z eo ar wiskamant-se gwelloc'h marc'had eget an dilhad breizad, ha gand eun hevelep gwiskamant, ez eo ret komz galleg, pe na vefed ket Gall a-walc'h! Eur vez eo, ha netra ken!

3. — N'eo ket dre gasoni ouz o yez eo e teu ar Vretoned da zilezel ar brezoneg, met dre ma 'z int dizeblant ouz o yez; ha kennebeut, n'eo ket dre m'o deus karantez evit o yez eo e komzont anezi, met dre m'o deus he desket ez vihanik, dre ma ne glevont komz nemeti en o bugaleach. Ar Vretoned a zo eta dizesk war ar pez a zell ouz ar yez, D'ar Vretoned desket eo zeski d'ezo karout an tenzor dibriz-se lezet ganeomp evit ma c'hallimp hen starda war boull hor c'halon e koun eus hon tud-koz.

4. — Ar Vretoned eta a gendalc'ho da c'hallega galleg fall, e keit ha ma ne gavint ket tud da lavarout ha da adlavarout d'ezo emaint o teurel dismegans war o gouenn, war yez o zadou-koz, emaint oc'h ober fae war ar relijion he deus graet o nerz, he deus lakaet anezo da veza tud kalonek ha krenv e-kreiz gwall-zarvoudou ar vuhez-man.

5. — N'eo ket a-walc'h d'ar Vretoned desket lavarout d'an tadou ha d'ar mammou deski brezoneg da genta d'o bugale, met red eo c'hoaz rei d'ezo skouer vat, dre gomz o unan ha dalc'hmat ar yez a garfent gwelout ar re-all o komz, rak ma ne rafent ket, e ve gallet lavarout d'ezo

mont da benselia o loerou a-raok lavaret d'ar re all ez eo toull o re.


Evel a leveres filhor, diaes ha diaes bras zoken e vezo mirout ouz ar gerent da zeski galleg da genta d'o bugale o veza ma kav da bep hini eus ar gerent-se ez eo ampart da zeski galleg mat d'ezo, o veza ma ne reont ket a forz evit deski d'ezo galleg fall, o sonjal e teskint diwezatoch galleg mat pa 'z aint d'ar skol.

Penos terri ar c'hiz fall-ze. N'eus nemed eul louzou gouest da barea ar c'hlenved-se hag a zo breman o taga an holl, zoken war ar maez. Lavaret em eus ez eo ret d'an dud desket komz brezoneg, rei dalc'hmat war ar poent-se skouer vat d'an dud dizesk, dre gomz o unan hag aketus ar brezoneg. Ret e vije ober prezegennoù d'an dud, lavarout d'ezo n'eo ket ret gouzout galleg fall da genta evit deski galleg mat diwarnan. Ha da biou muioc'h eget d'ar veleien eo da ober al labour-ze?

Pa gomzo ar Vretoned o yez dre garantez eviti, neuze e vevo peil smzer c'hoaz, rak diazezet e rank beza ar yez war ar garantez-vro, ha war ar garreg-se e c'hall beva seder a-dreuz ar c'hantvedou.

Ar brezoneg hag ar feiz a zo breur ha c'hoar e Breiz, ha pa 'z eo gwir kement-se, ez eo eun dever bras evid ar veleien lakat da vleunia ar brezoneg dre-holl, mirout na deufe an dud da c'hallega etrezo, rak ar re-man, p'o devo lemeret evito yez ar C'hallaoued, a deuy buan da gemer ar spered gall, ha neuze, kenavo yez, kenavo feiz kristen.

Loeiz ar Floc'h Bodiliz.



EVIT DIVINADENNOU EBREL, MAE, MEZEVEN

Herri Madec, Sant Divy.
17 o deus bet 300 p.

L. an Ars, Plouzane.
Herri an Arvor, Meilar.
Seb. ar Berr., Pont-Kroaz.
Kor. Bechenec, Plouneour-Lanvern.

M. Cabon, Gwiseny.
Clet Coz, Toulon.
Kar-e-vro, Gwipavas.
Gabriel Kersimon, Plabennec.
Lennerez F. h. B., Plougastel.
Paotr Gwite, Sh. Pont-Kroaz.
Maze Postec, Sant Thonan.

J. P. Moal, Tregarvan.
Paulina Pinvidic, Gwikar.
Visant Prigent, Sk. Kastell-Paol.

M. A. Segalen, Gouesnou.
J. T., soudard, Gwengamp.

14 o deus bet 260

Bugel Breiz, Gwitalmeze.
Biel Eliès, Gwitalmeze.
Alan Kerlidou, Treflez.
Yann Mer, Gwiklan.
Felix Moal, Enez Vaz.
Fr. Pouliquen, St-Thegonnec.

Yv. Premel, Offemont.
Un des gautre as, Ploumoger.
Fransiz Salaün, an Trehou.
Melani Sann, Sant Thegonnec.
Jann Tanguy, Sant Thegonnec.

Itron Terrom, Coulommiers.
P. Thomas, Plouider.
W. L. V., Sant Nic.

9 o deus bet 240 p.

M. ar Berr, Gwiklan.
Soazig Cornen, Plouarzel.
Tanguy Creignou, Cleder.
Mikael Darchen, Mahalon.

Mari Geffroy, Treflez.
Mari Guyader, Lanneufred.
Azillis Kerrien, Plouenan.
Josephina Lossouarn, Gwiseny.
Alan Malgorn, Plouenan.

8 o deus bet 200 p.

August Abarnou, Plouvian.
Louis Floc'h, Plomeur.
Victor Gouriou, St-Thonan.
Ch. ar Guen, Lambezellec.
Mari Kerbrat, Kastell Paol.
Saig Palud, Gwitevede.
J. Patinec, Plugüen.
F. M. Sparfel, Kastel-Paol.

O deus gounezet prizioù c'houec'h miz kenta 1926: ar 17 o deus bet 300 poezet hag ar 14 o deus bet 260 p.

E kerz ar miz-man e vo kaset d'ezo o levriou m'o c'havint da lenn a-benn ar goanv.

KENSTRIVADEG DIVINADENNOU

TRI MIZ DIVEZA AR BLOAZ

(digor hepken d'ar re n'o deus ket bet a brizioù er genstrivadeg kenta).

DIVINADENNOU MIZ HERE

I. — Goullo da noz,
karnel en deiz,
yaouank ha koz
o c'har e Breiz!

20 p. ar r. Digaset gant Mari Kervella, Plougastel-Daoulas.

II. — Pevar en traon, pevar en ear
ha pevar da zigas d'ar gear.

20 p. ar r. Digaset gant Kar-e-Vro, Gwipavas.

III. — Pemp biz en deus 'vel da zaou zourn
hep m'en defe kig hag askourn.

20 p. ar r. Digaset gant J. Patinec, Plugüen.

IV. — En holl diez emaint en hanv
ha n'o gweler ket mui er goanv.

20 p. ar r. Digaset gant A. Pichon, Skolach Lesneven.

V. — Eul linsel vras hag hi glas-wenn
ha n'he deus na gwri na gouremm.

20 p. ar r. Digaset gant Herri an Arvor, Konfort.

Breman eo re ger en holl an timbrjou hag en hent-se arabad digas respont ebet ken na vo gellet digas, war eun dro, abenn Nedeleg, respouchou here, du ha kerzu.



Feiz ha Breiz

HA KROAZ AR VRETONED

KELAOUENN VIZIEK GANT SKEUDENNOU

Religion — Istor Breiz — Marvailhou — Gwerziou

— ha Soniou — Buhez ar Vro

RÉDACTION

J.-M. PERROT, Plouguerneau (F^{re}) | Y. LE MOAL, Coadont, p^r Guingamp

ADMINISTRATION
du FEIZ HA BREIZ :
FR. GEORGE LIN,
Brest — 4, rue du Château — Brest
c/c 44-40 RENNES

ADMINISTRATION
du Bleun-Brug et de l'Emgleo Sant Ilu
Yv. DREZEN,
BREST — 4, rue du Château — BREST
c/c 6238 RENNES

ABONNEMENTS INDIVIDUELS
• FEIZ HA BREIZ • et • KORN-BOUD •
Bretagne 12 f. l'an
France 15 f. l'an
Etranger 25 f. l'an
Abonnements collectifs
Feiz ha Breiz (seul)
(à partir de 5 exempl.) 8 f. l'an

PUBLICITÉ
Toutes les insertions sont faites
à l'année
Une page entière 300 fr
Une demi-page 175 fr
Un quart de page 100 fr

TAOLENN AR MIZ. — An Anaoun, F. M. — Pedenn d'ar C'hrist, roue ar bed holl. — A bep tu, sklerijenn! E. AR MOAL. — Fiziit er Bleun-Brug, E. A. M. — Kerne, F. M. — Tud vrudet Kerne, G. M. — Ar C'haz marlounk. — Mikael an Nobletz, J. U. — Kentelioù Tintin Anna. — Keleier ar miz. — Divinadennoù.

SULIOU HA GOULIOU AR MIZ

- 1^a a viz Du. — Gonel an Holl-Zent. Gonel berz.
- 2 a viz Du. — Hanter gouel an Anaon.
- 7 a viz Du. — XXIV^e sul goude ar Pantekost. Oferenn ha gousperou ar zul-ze.
- 14 a viz Du. — XXV^{vet} sul goude ar Pantekost. Oferenn ha gousperou ar zul-ze.
- 21 a viz Du. — Sul diveza goude ar Pantekost. Oferenn ha gousperou ar zul-ze.
- 28 a viz Du. — Sul kenta an Asvent. Oferenn ha gousperou ar zul-ze.

An Anaoun

Miz Du ! Klemm a ra an Anaoun !
Tentral ar Bed, an dud e kanv !

E kornig ar vered
Daoulinet war bouldrenn
Bet korf eur breur karet,
Eur paotr yaouank kristen
A c'hleb gant e zaelou
An douar benniget
A zoug ar relegou.
An eskern, boued prened,
A jom warlerc'h an den
Deut d'ezan e dremen.

Va breur, va breur paour, fresk eo ho pezh c'hoaz !
Beo oac'h dec'h ! hag aet hirio da betra siouas !
Kerkent ar maro, ha setu doustu
C'houi graet diwar pri, aet prim da ludu.

Hag hoc'h ene, va breur, hag hoc'h ene,
Hag aet eo war eun da Varadoz Doue ?
Oh ! Mar d'oc'h eun ael, perak hirvoudi
Ha mar d'oc'h eur zant, e c'hellan ho pedi.

Redet peus ganen siouas, hent ar vuhez !
Tomm oa hor c'halon, tomm hor c'harantez !
Yaouank-flamm hon daou ! ha n'eo ket d'an oad se
E roer al lodenn vras e pep lec'h da Zoue !

C'houi 'zo er Purkator
C'houi 'zo e kreiz an tan
C'houi 'zo e kreiz ar c'hor.
Ha den, den ne ra van !

En Nenvou ho peus eur gwall Varner !
E vrec'h a zo hira hag e zourn pounner
Ken, na vez roet diner evit diner
Ne ro ket d'anaout e galoun dener !

Ha war an douar, eur breur n'ho peus ken
Da droi diwarnoc'h ker kriz planedenn.
Pec'her eo ive ! siouas, siouas e bedenn
A-wechoù ma vez tom, aliesoc'h ve ien —

Eun all a zo, Doue ha Den, Mab d'an Tad
A ro d'e vreureur, e gorf hag e wad !
A ziskenn bemde, da derri ho naon,
Naoun ar re veo, sec'hed an Anaoun.

Evel gwechall, diskennit ta hirio,
Oh ! Jezuz beteg bro ar re... varo,
Sec'hit o daelou ! Livirit d'am breur,
O ! livirit d'ezan, eo deut erfin an eur

Da vont da eva, eus dour ar Vuhez
A ra en Nenvou ar gwir levezet :
A c'hortoz keit all zo an Anaoun keiz —
Ha dezo ganeoc'h e vo roet an deiz.

Miz Du ! Ma 'z eo tentral ar Bed !
Ma ped an dud, leun ar vered !
Gwell a ze. Rag seul yui 'vez kanv,
Seulvui diboniet an Anaoun !

Evelse bezet graet.

F. M.

Pedenn d'ar C'hrist, Roue ar bed-holl

O Sálver Jezuz, me Hoc'h anavez' evit Roue ar bed-
holl. Kement tra a zo bet grêt a zo bet grêt evidoc'h.
Nevezi a ran promesaou va Badiziant, o trei kein d'an
drouk-spered, d'e ardou ha d'e oberou, hag e roan va
ger da veza kristen mat hiviziken. Prometi a ran, dreist
pep tra, difenn, hervez va galloud, gwiriou Doue hag
hoc'h Iliz.

Kalon Zakr Jezuz, kinnig a ran d'eoec'h va oberiou
dister, evit ma teuo an holl galonou da anavezout ho
rouantelez sakr, en hevelep doare ma vo gwelet ho
peoc'h o ren var ar bed-holl.

Evelse bezet great.

(Eun induljans leun (plenier) bemdez d'an nep a
lavaro ar bedenn-ze goude kommunia hag a bedo evid
ezommou Hon Tad Santel ar Pab).

Roet e Roum, d'an 24 a viz c'houevrer 1923).

Imprimatur : Kemper, 23 gwengolo 1926.

P. Messenger, v. v.

A beb tu, Sklerijenn !

Komz a fell d'in, hirio, diwarbenn an tabut savet en deziou-man endro d'an « *Action française* », war zigarez ar falz-kredennou m'eo techet da rei da gredi d'he zud, — ha diwarbenn an tabut all a zisrann etrezó, abalamour d'o bro, katoliked an Alzas.

Eur gelennadurez vras hon deus da denna ac'hano; arabad e vefe kollet.

Lakaat menoziou d'en em steki a laka sklérjenn da strinka, a leverer e galleg. Aman n'am bo netra d'ober nemet tostaat an eil ouz egile menoziou dastumet aman ha du-hont; peb unan a zo barrek, goudeze, gant ma tigor e zaoulagad, da wetet ar sklérjenn, d'anaout ar wirionez.

Testenious seurt m'eo ar re-man a ranker lakaat dirak an daoulagad er yez m'int skrivet, aman, e galleg.

**

E leor ar skrivagner brudet Charles Maurras, « La Politique religieuse », bet dibabet ennan meur a falz-kredenn, e lenner kement-man (p. XXXVI):

« Chez nous, à l'*Action Française*, cette convention du respect de l'Eglise une fois établie aura suffi nous seulement à rendre la vie en commun tolérable et facile à des esprits très divers, mais encore à permettre et à susciter des actions décisives: ce fut entre des catholiques très fervents et des incroyants très respectueux du catholicisme que se combinèrent nos récentes campagnes contre Dreyfus, contre Bernstein... Ce genre d'union, offre donc le premier caractère de permettre la concorde en vue de l'action. L'action qu'elle suscite se caractérise, à son tour, par le succès.

Il n'est pas absurde de calculer que le *modus vivendi* si heureusement pratiqué à l'*Action Française* ne serait pas moins apte à pacifier le reste du pays. Ce qui s'est fait en petit, parmi nous, pendant quinze ans, peut se refaire en grand dans l'Etat français, pour des siècles... »

Al linennou-man a ziskouez n'eo ket krevredigez an A. F. eun enebourez *a-benn* d'ar relijion; (ac'hano, end-eün, e teu m'eo chomet he siou fall pell amguzet;) — deut, koulskoude, lizer ar C'hardinal Andrieu ha hini an T. S. ar Pab da varn anezi hag ar varnedigez a zo bet kalet. Perak?

Eur filozof brudet deut da vezan kristen, Maritain, hag en deus kalz a vignoned etouez tud an A. F., a respont d'ar perak-ze; Charles Maurras, penn-rener an A. F., n'eo ket kristen dre gredenn; ar pezh a ra d'ar filozof Maritain skriva kement-man:

N'est-il pas anormal que des catholiques obéissent politiquement à un chef qui n'ayant pas la lumière de la foi n'a pas l'idée complète du but à atteindre?

Si leur situation est, en effet, anormale, si leur conscience les oblige, en pareil cas, à un contrôle perpétuel et particulièrement vigilant, les catholiques dont il s'agit peuvent répondre que, dans certains cas, la politique d'un non-chrétien peut défendre les points les plus urgents d'une politique chrétienne; et qu'il n'a pas dépendu d'eux, mais des permissions de la Providence, que la tête politique la plus solide de leur âge et de leur pays soit privée des dons de la foi: situation historique exceptionnelle qu'ils n'ont pas choisie, et qui les oblige à adopter eux aussi, en raison des circonstances et en vue du bien commun, une ligne de conduite exceptionnelle. Quelque parti que l'on adopte soi-même, on ne saurait trouver déraisonnable une telle réponse.

**

C'est ainsi que je m'exprimais en octobre 1925. Je ne crois pas que ces considérations aient cessé d'être vraies. Mais elles sont devenues insuffisantes. Il est nécessaire de les compléter. Un événement nouveau s'est produit, et de quelle portée: le Pape s'est prononcé, il juge qu'en fait le principat politique exercé sur la Jeunesse catholique d'*Action Française* par un esprit privé de la grâce de la foi comporte des dangers qui risquent de « faire dévier le véritable esprit catholique », d'« abaisser la perfection de la pratique chrétienne et plus encore de l'apostolat, de la véritable action catholique, à laquelle tous les fidèles, les jeunes gens surtout, sont appelés à collaborer activement pour l'extension et l'affermissement du règne de Jésus-Christ dans les individus, dans les familles, dans la société »; dangers contre lesquels des mesures de protections spéciales sont nécessaires, et assez grands pour moti-

ver une approbation publique donnée par lui aux avertissements sévères du cardinal Andrieu.

Dans le cas présent, lorsque les catholiques d'Action Française répondent qu'ils n'ont jamais suivi Maurras dans ses opinions philosophiques et religieuses, que leur foi est pure de tout alliage d'erreur, qu'ils s'attachent et s'attacheront plus que jamais aux enseignements du Saint-Siège, ils agissent d'une façon loyale et que l'on ne peut qu'approuver. Mais s'ils en restaient là, cette réponse, à mon avis, serait *insuffisante*. L'obéissance demande autre chose. Ils font partie d'une certaine communauté librement choisie, d'une certaine formation politique. L'affirmation de leurs sentiments intégralement catholiques, *comme personnes privées*, ne suffit pas à faire tomber les appréhensions manifestées par le Souverain Pontife. C'est une assurance portant sur l'esprit de *leur groupement comme tel* qui est ici nécessaire. S'agit-il pour eux d'abandonner les directions politiques de Maurras, de renier leurs amitiés, de détruire leur œuvre et leurs organisations politiques? Allons donc, *la lettre du Saint-Père ne dit rien de semblable!* Il s'agit de trouver un moyen de garantir les intérêts de la foi et l'esprit catholique *dans l'association elle-même qui les réunit*, prise comme corps organisé, non comme simple collection d'individus. Quel moyen? C'est à eux d'y aviser dans le concret. Je puis bien dire cependant dans quelle direction, selon moi, ils ont chance de trouver la bonne solution.

Dans l'association purement politique qui les unit, pour des buts pratiques, bien définis, à des hommes professant par ailleurs les opinions les plus différentes, il y a place non seulement pour des individus, *mais pour des groupements variés*. Pourquoi les catholiques d'Action Française *ne s'organiseraient-ils pas entre eux au sein même de leur parti, en un groupement spécial*, religieux et non politique, ayant pour objet non pas l'action politique, mais la formation religieuse, l'étude de la doctrine catholique, des enseignements des Papes, de la théologie dogmatique et morale, groupement constitué non par des sections politiques, mais par des cercles d'études, dirigé par des théologiens et directement contrôlé par l'autorité ecclésiastique? Ainsi seraient publiquement garantis le maintien de l'intégrité de la doctrine et de la morale chrétiennes parmi la jeunesse catholique adhérente à l'Action Française, et la possibilité pour elle *de compléter et de redresser les enseignements, opinions ou exemples reçus de certains de ses maîtres politiques*.

Ch. Maurras a lavare penôs skouer an A. F., tud digredenn ha katoliked o vevan mesk-mesk, — betek ma o dije holl, a-unian, doujans ouz an Iliz

katolik, — a oa da vezan heuilhet ha digemeret evit mat. Maritain a gav n'eo ket rik ken an doare bevan-ze, tremenet ar c'houlz anezan...

— Lakomp eta, eme darn all'neuze, ne vefe ket mat *evit padout*; daoust ha ne zerefe ket, da vihana, evit eur maread amzer, abalamour da denna ac'hano eur gounid bras bennak all? Hag aman e klevomp digarez eur rummad Alzasiz ha hini eur rummad Bretoned.

E Mouez I. V. Sklerded, 17 genver 1926, e lenner:

Pourquoi réservons-nous notre opinion (dans toutes les questions où l'Eglise est directement intéressée?) Pour un certain nombre de raisons devant lesquelles toute personne de bonne foi et de sang-froid doit s'incliner.

Il est un fait indéniable: la Bretagne a perdu son unité spirituelle. Il existe, aux flancs d'une masse assez amorphe comme partout, une aile catholique, et une aile socialiste, ou à tendances socialistes, athée, ou anticléricale. Nous ne perdrons pas notre temps, d'ailleurs, à évaluer leurs forces respectives. Il s'agit de savoir si les Bretons de gauche sont encore des Bretons. Nous pensons que oui. Et nous croyons que la libération de la Bretagne les intéresse intimement, autant que les autres. Notre but étant d'unir tous les efforts déjà trop rares et trop dispersés, nous avons cru nécessaire et profitable de faire de notre Breiz Atao une maison hospitalière à tous les Bretons. Et nous prétendons, contrairement à la personnalité du Bleun-Brug qui écrivit dernièrement à *Mouez Itron Varia Sklerded*, que les catholiques comme les non-catholiques y sont également chez eux.

L'Eglise a cru bon de bénir l'union sacrée qui sauva la France. Ne peut-elle pas bénir l'union sacrée qui sauvera la Bretagne? qui seule peut la sauver? Il ne s'agit nullement là de « libéralisme », mais de sens pratique, mais *d'intérêt breton*. Il va de soi que, *le jour où, par suite du succès de nos efforts, la Bretagne serait appelée à se gouverner*, les représentants de Breiz-Atao se répartiraient au gré de leur conscience, de la droite à la gauche de la nation bretonne; et le journal lui-même sortirait de sa réserve en matière religieuse. Il est aussi vraisemblable que d'autres organes naîtraient, pour défendre le point de vue contraire que Breiz-Atao aurait choisi. Qu'on attende ce demain inconnu pour lui adresser des reproches, de quelque côté que ce soit. Aujourd'hui, nous crions « Rassemblement » aux hommes de bonne volonté, sans exception, pour sauver la Patrie.

Et sachant assez de difficultés devant nous, nous nous en tenons là.

« Voici bien défini l'esprit de *Breiz-Atao*. Nous ne le trahirons pas. »

O Mordrel a lavar eta, mar intentan mat, penôs, e *Yaouankiz Vreiz*, e fleanor chom dizeblant e kenver ar relijion (abalamour da unani an holl sperejou), — ken ne vo gounezet he frankiz da *Vreiz*.

En Alzas, zo bet lavaret kemend-all ha setu, war ze, barnedigez an Ao. Ruch, eskob Strasbourg:

« Récemment, eme an O. Ruch, un journal hebdomadaire de Strasbourg, qui n'est pas lu seulement par des personnes étrangères à notre foi, donnait le conseil suivant: *Quand, à des élections, un candidat honnête et loyal défend les droits de l'Alsace (Das Heimatrecht), qu'il soit communiste, catholique de l'Union populaire, libéral (et on sait ce qu'en Alsace ce mot veut dire), ou qu'il n'appartienne à aucun parti, tous les vrais Alsaciens-Lorrains doivent se grouper derrière lui... Tous les partis doivent se soumettre à cette directive.*

Préférer, aux élections, un communiste ou un radical à un citoyen dont on peut, à bon droit, espérer qu'il défendra les droits de l'Eglise et de Dieu, c'est commettre une faute grave. Aucun catholique fidèle à sa religion ne saurait discuter cette règle.

Pour justifier le conseil contraire, on peut être tenté de faire la proposition suivante. Que les catholiques, les communistes et les radicaux concluent une trêve. *Jusqu'à ce qu'ils aient fait triompher un programme alsacien sur lequel ils sont d'accord, que chaque parti renonce à combattre pour le succès de son propre programme.*

A dessein on écartera de la discussion de ce plan toute remarque d'ordre purement politique. Le projet ne sera examiné qu'à la lumière de l'enseignement religieux. *Un catholique a-t-il le droit de cesser un instant, et peut-être des années, de parler, d'agir, de lutter en catholique, non seulement dans sa vie privée, mais encore dans son existence publique? A-t-il le droit d'ajourner à une date qui pourra être lointaine ou même n'arriver jamais la revendication des droits et des libertés de son Eglise? Pendant la trêve, les préceptes de la religion sont-ils suspendus; la loi canonique, par exemple, ne reste-elle pas en vigueur qui interdit aux parents catholiques de confier leurs enfants à des écoles interconfessionnelles et qui, partout, leur ordonne de réclamer un régime scolaire*

acceptable pour leurs consciences? Et pendant que les catholiques renonceraient à défendre leur programme, ceux de nos adversaires qui n'auront pas signé la trêve, socialistes et libres penseurs, ne travailleront-ils pas à faire triompher les leurs? Durant tout ce temps, le mal ne s'accomplira-t-il pas, favorisé par la complicité de notre silence? Les abus existants sur lesquels volontairement nous fermerions les yeux, ne produiraient-ils pas leurs néfastes conséquences? Les masses populaires des campagnes et plus encore celles des villes, ne s'habituerait-elles pas à subir d'abord, puis à tolérer, enfin à trouver acceptables des institutions que les dirigeants catholiques condamneraient sans doute encore théoriquement, mais sur lesquelles, par tactique, ils consentiraient à garder le silence? Les fidèles, non seulement l'élite, mais le grand nombre, sans les suffrages duquel la défense de nos libertés religieuses est impossible, tiendraient-ils encore dans quelques années nos droits pour sacrés, si leurs chefs, si des prêtres, par exemple, en renonçant longtemps peut-être à les revendiquer avaient semblé reconnaître eux-mêmes que ces droits des consciences, de l'Eglise et de Dieu sont d'une importance secondaire et peuvent être sacrifiés, pour un temps du moins, à des intérêts purement humains?

On espère, il est vrai, que grâce à la trêve, une coalition de catholiques, de communistes et de certains radicaux obtiendraient au peuple d'Alsace le droit de se gouverner lui-même. Et on estime que s'il est seul appelé à délibérer sur les affaires religieuses du pays, tout sera sauvé. De nouveau, il faut bien que nous rappelions le principe: Alors même que la morale ne condamnerait pas le but à poursuivre, est-il permis pour l'atteindre de recourir à tous les moyens? Appeler pour éteindre le feu les incendiaires et non les pompiers, n'est-ce pas une périlleuse aventure? Le danger n'est-il pas plus évident encore puisqu'en s'associant aux communistes et aux radicaux, les catholiques ne proposeraient pas à leurs alliés un programme pour le lendemain de la victoire, programme où seraient garantis, en termes exprès, le respect de leurs droits et de leurs libertés.

Renerien kazetenn Strasbourg ha re Strollad Y. V. a heuilh an hevelep gwenojenn; barnedigez an Ao. Ruch, hag a zo hini an Iliz, a gouez eta koulz war eur rumm 'vel war eun all.

Kaer e vo lavaret penôs katoliked ar seurt emgleoiou a c'hello stourm evit o feiz, *a-zivêz* d'o c'hevredigez; *ar virionez eo e ranker strolla, en hevelep labour, Feiz ha Breiz*, evel ma zo bet lava-

ret hag adlavaret, n'ouzon ped gwech, e Gwened hag e Santez-Anna.

Er *Bleun-Brug*, ni a lavar, *keit ha keit*: « N'heller ket, war digarez labourat evit Breiz, a-unan gant an *holl* Vretoned, lezel a-gostez ar feiz ken n'he devo bet Breiz an trec'h; — na, kerkoulz all, war digarez labourat evit ar Feiz, a-unan gant an *holl* gatoliked, lezel a-gostez ar vro ken na vefe trec'h ar feiz, rak: *Feiz ha Breiz* a zo dimezet unan hag an Itron Santez-Anna, keit ha ma chomo Bretoned war an douar. »

Hogen, tud dimezet ne gerzont nep pred an eil heb egile.

Hervez an testeniou emeur o paouez lenn, katoliked seurt emgleoiou a dle eta 'n em voda etrezo en o c'hevredigeziou, abalamour, evel ma lavar Maritain: « Garantir la foi et l'esprit catholique. ». Ar pezh hen diskouez kaeroc'h c'hoaz eo komzou ar C'hardinal Gasparri, o skriva en hano an T. S. ar Pab, d'ar c'hardinal Dubois, diwarbenn Studierien katolik an A. F. hag al lizer a zoujans o doa kaset da Bi XI.

Setu eur pennad eus o lizer:

« Si, comme il arrive dans beaucoup d'autres formations politiques, ils (les étudiants) rencontrent des incroyants sur le terrain où l'Eglise laisse à ses fidèles une juste liberté, ils ont conscience des dangers que cela peut présenter: c'est de l'Eglise seule qu'ils reçoivent et acceptent les leçons pour tout ce qui concerne la foi et la morale. Ils s'efforcent d'y subordonner leur tâche comme leur vie. »

Re verr ar respont.

Ar c'hardinal Gasparri hel lavar:

« ... Affirmer, emezan, que l'on reçoit et que l'on accepte de l'Eglise seule les leçons pour tout ce qui concerne la foi et la morale ne saurait paraître cohérent ni suffisant à sauvegarder l'un et l'autre, quand on reste sous l'influence et sous les directions de dirigeants, qui, par leurs écrits, ne se sont pas montrés des maîtres de la doctrine et de la morale chrétienne... »

La sollicitude du Saint-Père a été précisément, en dehors et au-dessus de toute considération politique, de


rappeler à tous les catholiques, et particulièrement à la jeunesse, ce danger et cette incohérence.

Ar pezh a dalv da lavaret: Lakit eta da vistri warnoc'h tud ha ne vezo ket a riskl evidoc'h o tarempredi anezo, evit ar pezh a zell ouz ar feiz.

En de-ze, e vefe grêt eur gammed vat etrezek ar wir unvaniezh.

E. A. MOAL.

Kement-man a zo evit servicha da respont d'eur goulenn grêt ouzin, e Santez-Anna, gant unan eus pôtrez Y. V. — hag ive d'eun all, a skrivas, nevez zo, diwarbenn ar *Bleun-Brug*, komzou ha ne oant ket tost-kar d'ar wirionezh.



An archer. — Ho paperiou ?
Ar paour. — Paperiou ? me ne'm eus paper ebet ha neuze petra rafen ganto pa ne ouezau ketlenn.

Ar paour. — Eun tamm bara adarre ? gwelloc'h e vije d'eoc'h eun tamm mat. Soaz rei d'in peadra da gaout eur werennad hini krenv.

Fiziit er Bleun-Brug !

Paneved d'ar C'hendalc'h grêt bep bloaz, ne vefe ket, war gant Breton, unan c'hoaz hag a anavesfe ar **Bleun-Brug**.

Met, setu ar re hen anavez dre ar C'hendalc'h-ze ken brudet a zo techet awechou da gredi- eo ar **Bleun-Brug**: eur seurt-pardon, pardon ar bleun brug evel ma 'z eus: eur pardon bleun-lann, bleun ed-du.



August **ABJAN**, eus a Blougerne, e Keranna, sand e bried hag e dud enor.

Ah! nann! ar bleun brug m'emaint aman nemet evit diskouez Breiz. Ya, evit diskouez Breiz; ha pesort Breiz c'hoaz? Breiz en he c'horf, Breiz en hec'h ene, en he feiz, en he yez, en hec'h istor, en he gwiskamanchou, Breiz a-bez; — ha n'eo ket hepken da gana he meuleudi, met d'he studia piz en he zechou, en he mankou a-vreman, abalamour da glask an tu d'he adsevel plomm war he diazev.

Ar « Bleun-Brug » a lavar kement-se holl; lavarout a ra labour, studi ha kerzet bepred war wellaat.

Ar gouel a zo kaer, met n'eo grêt nemet evit bruda al labour, rei ton d'ar studi, chacha ar Vretoned d'en em zastum ha da boania e kement stumm a zo, evit eur Vreiz nevez.

Hogen, ne vezo ket adgrêt gant Breiz eur vro yac'h, ma ne vez ket troc'het ha dispennet, evit mat, ar roue-jou m'eo paket enno, dreist-holl abaoue an dispac'h.

Setu eno ar wirionez dreist d'ar re all; labour kristen ha breizek ar **Bleun-Brug** a gav enni e stur hag e reo-lenn. Daou c'houli hon amzer eo al « laïcisme » hag ar « centralisation », hag int maget gant bunum an Dispac'h. Eur mennad relijius unanet gant hini an Unvaniez katolik en deus' ar **Bleun-Brug** a-eneb d'ar c'hentan; eur mennad politik a-eneb d'an eil...

Piou bennak eta, e Breiz, a wel gant nec'hamant an taoliou pounner savet a-us d'hon fennou hag a gouezo hepdale, marteze, a dle dont d'ar **Bleun-Brug** evel d'eur porz a zilvidigez. Neb lec'h ne gavoc'h evel eno, tro da unani ha da zifenn kement mad ho peus. Kement stern all a zo, re frank int pe re striz; aman ar stern a zo diouz ho ment ha diouz ho toare, Feiz ha Breiz.

E tu-hont da ze, ar **Bleun-Brug** a skoulm, dreist garzou Breiz, liammou gant pep bro hag he deus, evel-domp, eur yez, eur spered, eur feiz c'hoaz da zifenn. Er bloaz-man, e Gwened, hon eus bet an eur-vat da zaludi kannaded ar Flandrez, an Alzas, al Lorren... An eil a gresko e nerz diouz nerz egile.

Bretoned, ha c'houi, dreist-holl, pennou-tiegez, na chomit ket d'ober diou zonz; kasit ho hano hag ho skodenn da **Bleun-Brug** ho rann-vro. Ar Frans a zo henvel ouz eun ti deut da vezan dirapar, mogeriou ha toenn, ha ne dalv ket ken sonjal chom ennan evel m'eman. Hen adsevel a zo ret a-benn-font. Diboeil e vefe-lakaat hon holl amzer, hon holl aked da harz anezan, — ha netra ken, — da goueza war hon c'hein; war an hevelep tro, e fell d'eomp kregi gant eun ti nevez. Er **Bleun-Brug** e vez bodet micherourien an ti ze.

Ya, kasit ho hano hag ho skodenn d'ar **Bleun-Brug**; fiziit ennan ar pezh a garfec'h miret; ar **Bleun-Brug** ho tougo, c'houi ha kement ho peus.

E. A. M.




KERNE

PARDON AN TEIR VARI

(Kendalc'h)

Intron Varia Kerdevot



An oferenn vintin er Sklerder, an oferenn-bred e ti Intron Varia Izel-Vor, d'ar gousperou breman da Gerdevot e parrez an Erge-Vras.

Eur peziad mat a hend, zo d'ober evit mont di deus ar Forest. Ne safomp ket da lonka poultrenn war hend bras Kemper da Gonk, na da glask disheol elec'h n'eus bod koad ebet war ar c'hleunioù. Deomp kentoc'h gant hend Erge-Vihan. Diskennomp goude d'ar stankenn, d'an drao-

nienn ledan e teu enni Ster-Jet ha Ster-Odet da veska o dour. Treuzomp Ster-Jet e Pont an Dour Gwenn ha kemeroomp hend Elliant, hag e vimp buan e penn hor beach.

Intron Varia Kerdevot. — Chapel Kerdevot zo ebars eun draonienn leun a c'hlazvez, treuzet gant eur wazig dour a ra d'ei freskadurez; tro dro tuchennou, round o fen-nour. Dirazi eur c'hoad, stank an delliou ebarz: dreizo e c'hellomp gwelet pell dirazomp skeudenn skip an tour.

Er bloavez 1701 da c'houel Maria ar Goulou e voe diskaret an tour-ze gant eur gaouad avel spountus. Mont a reas d'an traon war e benn hag en eur dapa an douar, e flastras daou zen dindanan. Laket e voe prim war e zao, ken brao hag arôk gant eur renkennad diri a bep tu, ar vali-vaen e harz troad an tour hag hen-man e unan gant e veg lemm hag e gant toullig digor d'ar sklerijenn.

Pa z'eer en iliz, e chomer estonet ken uhel all e ia ar volz da glask beg an doen. Gwelet reer c'hoaz ar pez a jom eus ar gwer-koz. Warno eo merket arouezioù tier koz Breiz-Izel o deus greet eur vad benag d'ar c'hapel: re Wengat, Treanna (Elliant), Kerforz, Kersulgar, ar C'hastel ha Liziard. Talvout a ra c'hoaz sellet ouz eun dôlenn gaer kizellet warni badiant hor Zalver, ouz skeudenn Sant Telo a-ramp war eur c'haro ha dreist-holl ouz tôl burzuduz an ôter vras eman a-us d'ei Intron Varia Kerdevot.

Ar c'honchennou koz a lar d'omp eo an dôl-ze labour eur c'hizeller yaouank deus ar broiou estren. An Intron Varia hec'h unan a henchas e spered hag e zorn. Pa voe kempennet an tamm-koad, ar micherour a bignas anean war eur vatimant, eur vag. Lezet da vont gant he fenn he unan, houman a ieas pell pell evelse gant ar mor. A-benn ar fin e teuas da zouara war ôd Benodet. Diredi a reas beleien an holl barrezioù tro war dro da welet an tôl-labour dispar. Peb hani a glaskas kaout anean evit e iliz. Ar vag, avat, a dec'he bep tro ha den n'hellas pignat warni nemed beleien ha kuzulierien iliz an Erge-Vras. Kas a rejont ganto an dôl-ôter ebars eur c'har beteg ar chapel e oant da vat o ehan sevel d'an Intron Varia e Kerdevot. Hag en iliz laket en he zao evit frugarekaat ar Werc'hez da veza miret ar barrez ouz ar Vosenn a ree kemend a reuz war douar Elliant, en iliz-se e voe laket an ôter vur-zudus.

Diskouez a reer c'hoaz etre Rubernard ha Nivernod en Erge-Vras, eur pont-maen a c'hoanteas ar vosenn mont dreistan. N'em gavet e kenver ar c'hreiz, setu an Intron-Varia o tigozeout ganti. En he zao e oa hi ha dremmou ken rust d'ezi ma teuas ar vosenn war he g'hiz en eur n em ruza. E tal ar pont, ez eus eur roc'h hag a zoug roudou troad ar Werc'hez, hag e kichen, roudou all; re eun troad distumm, egiz hini eul loan divalo, troad ar vo-

(1) Skip, moan, élançé.

senn. Oter Kerdevot zo unan eus kaera labouriou kizellet war ar c'hoad e Breiz-Izel. N'ê ket, avat, eus ar vro. Deut eo eus bro Flandrez; an dud enni a zoug merk eur stal eus ker vras Anvers; eun dorn, treset gant eun houarn ru. E c'hell beza eus amzeriou an duke Anna. Eur bern tôlennou zo livet hag alaouret warni: gwelet a reomp ar Werc'hez o tont er bed man hag o vont d'ar bed all, o ver-vel astennet war eur gwele etre an euneg abostol. Goude eo douget d'an douar benniget; tri zoudard Juzeo a glask miret ouz an dud da vont ebou ha lakat o daouarn dizakr war an arched. Neuze an daourn a zistag diouto hag a jom stardet ouz ar c'hoad; an tri aïthon a n'em wef (1) war an dachenn, o iudal gant ar boan. Gwellet a reomp c'hoaz an Tad hag ar Mab o lakat war benn an Intron-Varia eur gurunn gaer eman ar Spered Santel o c'hournij a-us d'ei.

Diou dôlen all a ziskouez d'eomp ar Rouaned e harz treid ar Mabig Jezus hag hor Zalver douget d'an templ. N'int nag eus amzeriou nag eus talvoudegez ar re all.

Er vered, eur c'halvar kaer hag eur sakreteri, eun doënn sapaturus d'ei; egiz kein eur wag, eur vatimant. Tri c'hant metr benag deus ar chapel, eus tu ar Zao-heol, eman ar feunteun zakr gant he zalbenn kizellet hag he lennou bihan a c'hell an dud mont enno da eva ha da 'n em walc'hi.

Diaes bras e ve d'an den laret peger brao eo pardon bras Gwengolo ha pegemend a dud a vez ennan, deus Brieg, Elliant, Langolen, Landudal, Kemper ha deus a belloc'h c'hoaz. E Kerne-Izel n'eus ket kalz pardonioù hag e ve trec'h da hani Kerdevot: Goude Santez Anna ar Palud hen eo sur pardon bras ar Glaziked.

Kantik koz Intron Varia Kerdevot zo bet embannet er bloavez 1891 gant an Otrou Favé, beleg. Goâl hirr eo: 56 pennad zo dioutan. Brezoneg fall a-walc'h a gaver ennan. D'ar mareou m'eo bet savet (1712) e oa galleg leiz ar falc'h da droc'hi etouez brezoneg treut. A c'hraz Doue, an devez hizio eo bet c'houennet an alc'houezenn-se a golle hor parkad ed.

Ar c'hantik daoust da ze, n'eman ket ar berr halan gantan ha dont a ra dioutan a-wechou ar pez a ra talvoudegez ar gwerziou: an tan hag an nerz.

Roet e vo d'oc'h an diverra eus ar c'hantik, hag an tanva eus e Vrezoneg drouk livet gant terzienn Bro-C'hall.

Da genta, ar barz, evit heuilh ar giz, a ra eur bedenn d'an Dreinded Zakr. Goude e tigas da zonz, n'eus bet morse muioc'h a zigarez da 'n em erbedi ouz ar Werc'hez:

*Tristidigez a welan, allas! pell zo er bed
 Quernez hon eus bet ivez commañcet da velet
 Assista a reomp bemdez en enterramanchou
 Demeus a dud hor c'hanton, hag en'o servichou*

(1) A n'em wef, se tordent.

*N'en deus nemet ar vosen, n'hon eus ket c'hoaz gwelet
 En hon touez er vro-man. Doue ra vezo meulet. »*

Ar gwella tu da n'em viret ouz ar gwaligner-ze eo pedi ar Werc'hez Vari gant eur fizians vras, hag aspedi c'hoaz anei da herpel brec'h he mab. Meur a lec'h santel, gwir eo, zo bet lakat dindan he ano eun tamm e pep lec'h dre Vreiz; met ar barz a gred, « hep choqui a nep faeson iliz santel ebed » eo parrez an Erge Vras an hani he deus ar wella hag an devota iliz, egiz ma verk an ano a Gerdevot.

Neuze e teu gantan konchenn ar ôter koad-kizellet a zo o ficha ar Zantual: an Itrou-Varia o c'houlenn digant ar micherour yaouank labourat warnan; o lavar roi d'ean ar c'haera digoll: ar baradoz. An ôter neuze zo pignet war eur vag a deu da zouari e traon ster Gemper. Pa zigouez beleien ha kuzulierien iliz an Erge-Vraz da glask he c'haout egiz ar re all, e ya ganto a galon vat beteg o chapel neve.

Ar vro a-bez he deus bet da c'honid gant al lec'h santell-ze. Tud Elliant:

« Attaquet oant gwechall gant eur c'hlenved kri

Eur pestilanç dangerus, commanc a reent da vervel.

Ken stanc a varvent bemde quen na vanque loenet

Ha quiri d'ho c'has d'ar vorc'h d'an douar binniget. »

Tud Elliant a reas le da vont d'ober eur weladenn da Intron Varia Kerdevot gant o bannielou hag o c'hroaziou. A vec'h oant diskennet da draon ar vorc'h, ar re glanv a wellaas d'êo, ha buan e oant pareet, an eil hag egile. Dibaoue ar burzud ze prosesion Elliant a ia ato eur wech ar bloa da Gerdevot.

Nag a draou kaer, a lar c'hoaz ar barz, he deus grêt ar Vamm vat! Pet ha pet, gloazet, beuzet, brevet n'eus ket bet digaset buhe enno ganti. Hag a dud dall zo deut da welet sklerijenn an heol benniget, goude beza soubet o daoulagad e dour ar feunteun zakr! — « D'an dud troublet a skiant ha memez foll rentet — Kerdevot zo ordinal ur remede assured.

An traou laeret o unan, n'eus nemet o gouestla da Intron Varia Kerdevot, a zeu da veza ken pounner ma n'eo ken al laeron evit o stilleja.

N'eus poan gorf na poan spered ebed kement ha ne teufe ar Werc'hez a benn outo. Ar bec'herien aheurtet, kaledet, ma c'heller o c'has da Gerdevot, a gavo feiz da zont d'ar ger.

Ar barz a zispleg goude eur renkennad vat a draou burzuduz. An hani kenta eo istor ar zoudard Deschamps eus Kemper. Heman a oa bet er bloavez 1711 gant ar reder-mor brudet Duguay Trouin oc'h ober tro Rio-Janeiro. Pa oa ar batimanchou o tistroi en dro, eur c'halz anezo, en 'o zouez bag an Deschamps, a voe taget gant eur

(1) Barz, poëte, pôtr ar gwerziou.

(2) Gwaligner-se, reuziou, fléaux, malheurs.

barr avel spontus. Pôtr Kemper hag ar re oa gantan a deuas ar spered d'ezo da en em ouestli da Intron-Varia Gerdevot. Dont a rejont yac'h pesk da zouar Breiz. Eur bern re all, avat, a ieas d'ar goueled bag hag all, korf ha madou. Deschamps hag e vignoned a voe mall ganto mont da Gerdevot. Kinnig a rejont eur chapelad-kaer d'ar Werc'hez ha meur a oferenn voe lakat ganto.

Goude e teu eur dornad mat a anoïou tud bet diouallet, pareet, saveteet, lod en eur bedi er chapel, lod en eur eva eus dour ar feunteun.

Achui a ra hon den e gantik en eur c'houlenn diganomp beza dik da vont da Gerdevot, da welet splanderiou ar pardon bras. D'an deiz-se e vez digaset di ar Zakramant meulet ra vezo eus borc'h an Erge; an ograou hizio diskaret, a zone gwechall hep distag. Ma ne gantont ket ken breman, pedennou ha kantikou ar bardonierien a zav o mouez, trezeg ar baradoz da denna bennoz Doue ha selou trugarezus an Intron Varia war douar hor bro garet Breiz-Izel.

F. M. *enll*

diwar notennou L. ar Gwennec.

Bosenn Elliant

N'hellomp ket plega evelse istor Intron Varia Kerdevot, hep laret eur poz eus gwerz Bosenn Elliant. Ne gaver ket kalz kosoc'h egeti; ha nebeud tre a dosta outi: an traou koz alies a dalv traou kaer.

Tre Langolen hag ar Faouet
Eur barz santel a vez kavet;
Hag hen Tad Rasian anvet.

Laret en deus d'ar Faouediz
Laket eun oferenn bep miz
Eun oferenn en hoc'h iliz.

Eet eo ar vosenn en Elliant
Hogen ne ket eet hep forniant
Eet zo gat-hi seiz mil ha kant.

E Bro Elliant, hep laret gaou,
Ema diskennet an Ankou
Maro an holl dud, nemed daou.

Eur c'hroegik koz tri-ugent vloa
Hag eur mab ken he devoa.

Edo ar vosenn ' penn ma zi
Pa garo Doue, teuy en ti;
Ni iei 'mez pa deuy, emezi.

E kreiz Elliant, er marc'hallec'h,
Geot da falc'hat e kafec'h.

Nemed eun hentig eus ar c'har
A gas re varo d'an douar.

Kri vije 'r galon na ouelje,
E bro Elliant, neb a vije:

Gwel't triouec'h kar tal ar vered
Ha triouec'h all eno ' tonet.

Lec'h oa nao mab en eun tiad
Eent d'an douar en eur c'harrad,
Hag o mamm baour ouz o c'harrat.

O zad adrenv o c'houbannat:
Kollet gantan — e skiant-vat.

Hi a iude, 'chalve Doue;
Reustlet e oa korf hag ene:

Laket ma nao mab en douar,
Ha me roi d'oc'h eur gouriz koar,

A ray teir zro en dro d'ho ti
Ha teir endro ar minic'hi,

Nao mab am boa, am boa ganet
Setu gad an Ankou int eet;

Gant an ankou e toull ma dour
Den da roi d'in eul lonmig dour!

Leun ar vered rez ar c'hleuniou,
Leun an iliz 'rez an treuzou.

Red eo benniga ar parkou,
Da lakat enno ar c'horfou.

Me wel er vered eun dervenn
Hag en he beg eul liser wenn,
Eet an holl dud gant ar vosenn.

Ne ve kanet morse gwerz Bosenn Elliant, hep displega da heul ar gonc'henn estlammus-man:

« An de-ze e oa pardon e borc'h Elliant: Eur poir yaouank o tont d'an dour gant e gezeg, a welas eun in-

tron gaer ganti eur zae wenn, azeet war bordig ar ster, eur gouel en he dorn. « Kas ac'hanon dreist, a laras-hi. — Oh! ya sur, a respontas hen. Hag hi a-ramp war dailher ar marc'h ha buan d'an tu all... Neuze an Intron a zisklerias kemend-man d'an den: « Potr yaouank, n'ouzoc'h ket piou ho peus digaset d'an tu man: Me eo ar Vosenn. Tro Breiz-Izel am eus greet, hag emañ breman o-vont d'ar vorc'h. Klev a rit tinta! ar zon: kemend hani a skoio ma baz gantan, hennez varvo war an tõi; evidoc'h, n'ho peus ket ezom da gaout aon... Ne c'hoarves droug ebet na ganoc'h na gant ho mamm. »

N'he deus ket laret gevier; rag ar zon eo merket enni.

Maro an holl tud nemed daou
Eur c'hroegik koz tri-ugent vloa
Hag eur mab hepken he devoa...

N'ouzoc'h ket penoz, a dare unan, e voe kavet an tu da gas ar vosenn, mez deuz ar vro? o kana anei. Pa n'em zantas diskleriet, e troc'has kwit. Ar gwella tu eta evit kas ar Vosenn diwar hon tro eo he c'hana. Setu perak diwar an de-ze, n'eus bet gwelet morse tiou anei.

Tennet eus leor « Barzaz-Breiz » Kermarker.



AR VANN — Pet gwech nem eus ket lavarret d'it arabat lakat da vizied en da fri?
Ar spi michans, n'eo ket gret vid an de-ze.
AR POTR — Perag neuze ez eus disou doull ebet?

Amzer ar Bedenn

1. Diouz ar mintin raktal m'oc'h savet,
Warzu Doue kasit ho spered :
Grit, war ho taoulin hep dale,
• Eur bedenn leun a garante,
Diouz ar mintin, raktal m'oc'h savet.
2. Diouz an noz, a-rok mont da gousket,
E leit adarre beza bodet :
Daoulinet war leurenn an ti,
Dirag kroaz Jezuz o pedi,
Diouz an noz, a-rok mont da gousket.
3. Pa glevit toliou an Angelus,
Deus an tour o koueza tregernus,
Larit, gant respet, tri Ave,
Evit saludi Mamm Doue,
Pa glevit tōliou an Angelus.
4. Da zul, da c'houel, 'bars en ilizou,
Klevit oferenn ha gousperou :
Eun dever eo da bep hini
Kana da Zoue meuleudi,
Da zul, da c'houel, 'bars an ilizou.
5. E kreiz ar boan, e kreiz al labour,
Grit eur bedenn, 'vit goulenn sikour :
Jezuz ive 'neus labouret
Hag a ro skor d'an neb a bed,
E kreiz ar boan, e kreiz al labour.
6. Pa vez levenez 'leiz hoc'h ene,
Larit buhan bennoz da Zoue :
Doue 'vidoc'h a zo-ken mat !
Ha c'houi rank e drugarekat,
Pa vez levenez 'leiz hoc'h ene.
7. Pa zon ar c'hloc'h tol ien ar c'hanvou,
Da ziskleria tremen an Ankou,
Grit eur bedenn garantezus,
Evit an Anaon hirvoudus,
Pa zon ar c'hloc'h tol ien ar c'hanvou.
8. Ar beden 'zo evel diou askell :
Betek an Nenv e ra deomp sevel.
Pedomp eta, pedomp ato,
Ha d'ar Baradoz ni 'nijo !
Ar bedenn 'zo evel diou askell.



Tud vrudet Kerne

LAENNEG

1771-1826

Pegwir em'omp ar bloa-
man gant gouelioù ar c'hant
vloa eus maro Laenneg, eur
pôzig, eur gerig c'hoaz di-

warbenn ar medisin bras-ze.

Laret hon eus, en tól all, eo ganet e ker Gempér en eun ti (1) tost d'ar ster, e penn ar ru, ar stræet Reunan Madek hec'h ano. E dad oa barner war an traou a vor: batimanchou, martoloded, marc'hadourez ha kemend-so. Ne oa ket eun den da 'n em chala gant netra; eun tammig penn skanv a zouge war e ziousoaz: ne vale ket kalz a vleud furnez gant e spered: gwelloc'h e oa d'ôza soniou daouen ha da rima gwerziou tener. Gant an dra-ze ne oa ket hec'h e relijion d'ezan hag ar bed a gemere egiz ma c'helle kentoc'h en eur c'hoarzin eget en eur lenva:

Pa darzaz ar « Freuz bras » e voe torret eus e garg gant pôtrez an Drailh. Ne lakas man ebed, pa c'hellas kinnig e skoaziou d'eur garg all; beza barner eus ker Gempere. Ne reas ket pikol (1) a dra, avat, wardro e

(1) E skendenn a welit uheloc'h, en tu dehou da hini Laenneg.

(1) Pikol a dra: kalz a dra.

vugale, ha den ne oar petra e vijent deut da veza gantan, panevet eur breur en doa, Mikel Laenneg, doktor eus skol-veur Paris, ar Sorbonn, ha person en Elliant. Hen man, goude beza badezet Teofil bihan, a gemeras anezan en e brespital, da varo e vamm. Eno e voe kenteliet ar pôtr kemend a lavar e ouie eun draig bennag da vont pelloc'h. E Naoned e oa eur eontr all, eun doktor ive Laou (2) Laenneg, penrener ar skol-veur; ne c'houlenne ket gwelloc'h eget peurachui e studi d'e niz bihan. Setu Teofil d'an Naoned! Siouas d'ezan! E kreiz an Dijspac'h e oa hag an eontr ne gare ket kalz ar veleien a zalc'he penn d'ar c'houarnamant. Ar Breton yaouank a glevas hag a welas da heugi e dammig kalon: re ar « Vande » draihet goasoc'h eget n'ouzoun petra, bannajou tud bezet, ar goad o redeg e pevar c'horn ker, hec'h da dri c'hant den o toullia hep distag da c'ho-lei ar c'horfou maro.

Eno e teskas pegen euzus e oa ar c'hredennou-se mat hebken nemet da lakat an dud e pal ar bleizi. Eno e welas n'eus nemet Doue hag e Iliz kemend hag a ve gouest da gabestra, da waska ioulou fall an den.

Er bloavez 1795 e stagas gant ar vedisinerez ha d'e drivac'h vloaz e oa mat e baperou gantan da labourat war gorf an den ha da droc'ha war ar heo. Goude ar medisin yaouank a zavas c'hoant d'ezan da vont da Baris. Kentelioù a gemeras gant daou zoktr brudet: Korvizard ha Beyl a rae skol e hospital ar Garantez.

Pa voe kavet desket a-walc'h, hag ôzet gantan eun displegadenn gaer eus e ouiziegez, er bloavez 1804, e voe anvet, daou vloaz goude, medisin e hospital Neker. Eno eo e teuas a benn da gaout an tu d'entent ouz klenvejou ar c'hreuz, ha setu ama penaoz. E oa eun devez o pourmen e porz an hospital pa welas daou « vousig » unan e peb penn eus eur pezh mell tamm koad, da vat o krabisa hag o selaou heb eil tro. Tra eston l an trouz, hag hen dister tre koulskoude, a rede penn da benn ar c'hoad hed n'ouzoun pet metr. « Mat! a zonjas Teofil Laenneg, ma rafen kement all war an dud da welet. Gant ma biz, ma skouarn ha trusken an den em bo sur eur respont, benag eus an diabarz... Diouz an trouz e c'hellin marteze barn ar c'hlenved pa n'hellan netra gant ma daoulagad... Evelse e voe digaset war an hend da goueza war ar gavaden dispars-se, a raer an « auscultation » anezi e galleg.

Embann a reas er bloavez 1819 e levr brudet war ar pleg-neve-se d'anaout ar c'hlenved-skevent... Hag ar vedisinerez a bez a rankas troi krenn da vale war e lerc'h gant an hend neve digoret...

Laenneg ne jomas ket pell da c'hortoz kurunenn hag

(2) Laou: Gwillhaou.

enoriou ar bed-man. N'en doe nemet dastum d'ober. Dont a reas buan ar maout gantan war gemend tra a zelle ouz e vicher. Dukez Berry a reas he medisin anezan ha panevet ar maro a oa siouas war e zeuliu, e blanedenn n'he dije grêt, nemet mont war gaeraat bemde. Rankout a reas mervel eta. Met beza e oa war zonzj pell zo. N'en doe ket ezomm da c'houlenn dale digant e varner: an traou a oa war eun gantan. Eur c'hristen e oa eus seurd ne weler ket kalz' hag ar muia ma tenne da netra, e oa d'eur beleg. Gortozit ma kontin d'oc'h eun dra hag a ziskouezo e zevosion.

Eun devez, o tistroi da Vreiz, Laenneg, epad an hend, a oa da vat gant e chapeled hervez e gustum. Ar re a oa d'e heul a responte. E kreiz holl trulhet ar c'harr ! hag an dud ouz ar c'hleun. Hag eus a bep tu neuze avat! Dont a reas eun nebeudig war o zikour ha war bouez poania a-walc'h e voe laket kar ha loan plom en o sav. Ne voe lazet den a drugarez Doue, setu ne oa nemet pignat adarre hag an traou kwit... Neuze Laenneg da gemeret e chapeled en dro: « Ma mignoned, a laras hen, e kemend am eus zonzj, e òamp gant an **Ora pro nobis peccatoribus** pa ieas ar bec'herien ma 'z omp da voucha d'an douar. Kemeromp aze mar kirit ha kendalc'homp da bedi. »

Ne oa ket stank ar vedisined kristen d'ar mare-ze. Ne gredent nemet d'ar pez a stoke ganto o daoulagad, o daouarn pe o skianchou all... Ha Laenneg a rankas mont eneb ar c'hiz evit heuilh e greansou.

Eun devez e ieas da Rom gant eun dornadig hag ec'h alias anezo da vont da welet ar Pab... Setu int war e lerc'h ». Penoz! a laras an Tad santel pa glevas piou oant. Penoz medisined katolik! biskoaz kement all! Eur blijadur dispar evidon, rak ne welan ket bemde anezo ! »

Bez en doa eta feiz eur gwir Vreton! Kalon eur Breizad en doa ive hag eun teod d'e zispleg. Miret zo c'hoaz liziri-brezoneg diwar e bluenn. Enno e komz gant fouge ha karantez eus ar parlant, ar yez koz ma'z eo hini ar Gelted, ar Vretoned. Pa oa bihan e rae gant ar brezoneg. Ma teuas d'e ankounac'haat o redek dre Naoned ha Pariz, ne voe ket evit mat. Rak er bloavez 1805 ni wel anezan daoubleget war grammadeg Gregor a Rostrenen hag o teski adarre ar pez a oa nijellet kwit. Pa iee d'ober eun ahadenn kozeal gant an Itronezed a Lobierr ha Pompery, gindig evel dan eus Breiz ne brije ket ober gant ar galleg. C'hellfe beza kenta bodadeg kenvreuriez ar brezoneg e Paris d'an 30 a viz meurs 1805 eo hag en defe digaset d'ar ger spered ha teod hor breton aet mēz e vro. Er bloavez 1806, an tad a dap eul lizer bloaneve digant e bōtr bras fardet penn da benn e brezoneg

yac'h ha dibistik. Hag a benn ar fin e teuar da gredi en doa e vab gwerzet tout e c'halleg bras, rak ne tēte mui eus Pariz eur zutenn eus ar vare'hadourez-se!

Goasoc'h! er bloavez 1815 e oa deut da veza ken gouest ma skrive d'e verourien Kerlouaneg evit divizout ganto penōz e vije grêt al lizer-ferm neve; ha ni oar pegen diēs eo c'hoari gant al lezennou hag ar marc'hajou e brezoneg reiz;

Laket en deus eur bērn notennou ouz ar Grammadeg embannet er bloavez 1807 gant ar Gonideg ha meur a ali mat en deus roet c'hoaz da henman evit mouladenn ar bloavez 1826. Kredi a c'hellomp en dije Laenneg, ma ne vije ket bet skoet ken abred gant ar maro, savet eul leor benag e-unan: eul leor brezoneg da henchha tud e vro war an doareou da grenvaat ar yec'hed, da labourat gwelloc'h an douar, da ren ive eur vuhe devot ha fur.

Pebez kentel evit kalz a Vretoned eus ar mareou-ze hag an amzer a vremen! Gwelet eur medisin bras ha ne ouie ket e pelec'h lammet gant al labour, laerez c'hoaz diwar e amzer, evit deski ha peurzeski parlant e dadou koz, en eur c'hornig tenval eus e gambr-labour, e kreiz Paris. Penn Bro C'hall !

Bretoned, stouomp dirag-seurd tud-se ha dougomp kanv d'ezo dirag ar vro hag an Doue a zo er Baradoz o viret ouz Breiz da vont d'an traon yez ha pobl !

G.M.

N. B. — M'ho peus c'hoant da anaout gwelloc'h c'hoaz buhez Laennec, goulennit al levr « *Laennec* » skrivet gand an A. Henri Bon hag embannet gant:

Publications « Lumière », 15, Rue Bossuet, Dijon.
Eur skoed eo al levrig-se.

AR C'HAZ MARLOUNK

Bez e oa gwechall, en Amerik, war a leverer, eun itron goz, eur vaouez a-zoare, hag he devoa en he zi eur c' haz hag eur perroked.

Eun dervez, ar perroked a bedas ar c' haz da zont da zibri e c'hortozen gantan. Aoza a eure pemp kant kouignenn, ha ker brao ha tra e lakas pevar c'hant triouec'h ha pevar ugent wer blad ar c' haz ha daou war e hini.

Ar c' haz a zebras e lodenn, d'ar red, ha p'en devoe he debret e selle gant e zaoulagad marlounk ouz an diou gouign a jome war blad ar perroked:

— Petra, eme ar perroked, daoust ha c'hoant dibri va diou gouignenn ez pefe ivez?

— Ya! eme ar c'haz; c'hoant am eus da zibri ho tiou gouignenn ha p'eo gwir eo digor mat va skrin e febrin ac'hanout ivez war ar marc'had.

Hag hep rei amzer d'ezan d'en em zifenn, — krik! krak! — e lounkas anezan evel ma lounker eur berenn.

An itron goz, eur vaouez a zoare, evel ma oa a gavas an dra-ze, re en holl hag a vennas gourdrouz he c'haz:

— Nann! nann! eme heman, n'it ket da lavaret eur ger d'in hag evit miret outi d'hen ober e lounkas anezi e tri lounk hag eun astenn gouzoug.

Evit lakat e govad da ziskenn, setu hen ha mont da ober eur bale er maez; kaout a reas war e hent eun aotrou koz a lavaras eur gomz bennak d'ar c'haz ha n'oa ket diouz e zoare; raktal ar c'haz hen debras, hen, e gar hag e azen.

Eur pennadig ac'hano edo ar roue, ar rouanez ha daou c'hant brezelour d'o heul, holl a-c'haoliad war pep a ganval; ouz o gwelet ar c'haz a deuas eun naoun du d'ezan:

— Grit hent d'ar roue! a lavare ar mestr-mevel.

— Grit hent d'ar roue! Grit hent d'ar roue! eme ar c'haz, m'ho kaso da zeski komz brao d'an dud hag e lounkas ar mestr-mevel, ar rouanez, ar roue, ar brezelourien hag o c'hanvaled.

Eun tammig bihan pelloc'h, daou granik, ken dinec'h ha tra, a gerze, skoaz-ouz-skoaz, pa glevjont ar c'haz, war o lerc'h, ouz o gervel:

— Deuit aman 'ta, kranked bihan, m'ho tebrin ivez! A vec'h m'o doa bet amzer da lavaret:

— Met, Aotrou, ni ne anavezomp ket ac'hanoc'h, — m'edont kouezet ivez e kof ar c'haz marlounk.

Ar vrezelourien o devoa kavet kartou hag a c'hoarie evit kaout herroc'h o amzer; an itron goz a rea stad ouz he marmouz hag ar roue en devoa doare da veza diaes e benn.

— O bremaik e weloc'h, eme ar c'hranked; gant o c'hrabanou e rejont eun toull e kostez ar c'haz ha dizale an toull a voe bras a-walc'h d'an holl da c'hellout tremen dreizan.

Ar rouanez, ar roue, ar vrezelourien war o c'hanvaled, an aotrou koz, e azen hag e gar, an itron goz hag he ferroked, holl, didrousa ma c'helljont, ez ejont er mæz, dre an toull gret e kostez ar c'haz.

Hag ar c'haz a rankas lakat eun dervez penn-da-benn da benselia an toull a oa bet graet d'ezan en e gostez.

An dra-ze a zesko d'ezan beza furoc'h, eur wech all wech all.

Diwar Sara G. Bryant.

Mikael an Nobletz

(1577-1652)

(Kendalc'h)

Mikael an Nobletz o prezeg e Montroulez hag e eskopti Treger

Ar pez a c'hoarvezas gant Mikael a reas kalz trouz e Montroulez An darn vrasa eus an dud a c'hoarze goap d'ezan. Ar re o doa eun tamm truez outan a lavare en doa kollet e benn oc'h en em skuiza re gand ar studi hag e binijennou re vras.

Hen a c'houzanve pep tra heb en em glemm. Didamall a rae zoken an Dominikaned, en eur lavaret oa get e-unan marteze dreist ar muzul.

Hag, e lec'h fall-galon, ec'h en em laka da labourat. Goude eun nebeut amzer tremenet e ti e dad, e teu anevz da Vontroulez, kaout a ra lojeiz e kichen leandi an Dominikaned; o gwelet a ra alies o tremen, hag gant doujans e salud anezo.

Doù e gar an dud izel a galon hag a ro d'ezo e c'hrasou. Mikael, gand aotre an aotrou 'n eskob, a ra katelaz en eur chapel eus a ger hag en e di, hag eileis a dud a zired d'e zelaou hag a zent ouz e genteliou.

Gounit a reas da Zoue eun dimezell a renk uhel, Franseza a Gizidik. Eun deiz, goude eur brezegenn, Mikael a c'houennas diganti ha laouen e vefe o servicha Doue evit mat. An dimezell a lavaras ya. Mikael neuze a ziskouezas d'ezi oa ret dilezel a-grenn ar bed hag e follen-teziou, ha kemeret kroaz Jesus Krist e trede Urz Sant Fransez. An dimezell a asantas adarre, met o fiskleria e ranke da genta goulenn aotre he mamm: « Ma kirit, eme Vikael, me a c'houlenno an aotre-ze evidoc'h. »

Hag ez eas da gaout ar vamm: « Dont a ran, emezan, da ginnig d'eoc'h ar gwella mab-kaer a c'hellfe beza kavet. Morse ne zello ouzoc'h a-dreuz, ne savaro metra d'ober poan d'eoc'h, n'ho kaso ket er mez eus ho ti, evel ma ra kalz re all. » Ar vamm a oa souezet, rak n'he doa kle vet hanô ebet c'hoaz eus eur mab-kaer evid he merc'h. « Ar pried-ze, eme ar belég, eo Hor Zalver Jesus Krist, hag ho merc'h a fell d'ezi en em rei d'ezan, en eur ober fae war ar bed. Ho merc'h ne vo ket kollet evidoc'h. Chom a raio en ho ti, d'ho sikour ha d'ho frealzi en ho kozni. »

Ar vamm a roas laouen he aotre, hag an dimezell n'he devoe ken d'ober nemet senti ouz kenteliou Mikael. Heman, evit he lakat da zvel uhel uhel er zantelez, a c'houennas diganti traou dies, kalet mearbet: dilezel he dilhad kaer, gwiska eur zae hag eur vantell gret gant danvez dister, liou louet d'ezo, eur gouriz kanab, eur c'houef

rouz, ha mont evelse dre ger Montroulez heb aon. An dud a jome mantret da zellet outi, a c'hoarze, a rae goap. An dimezell a gontas ar boan he doa bet, met Mikael, didruez, a c'houlennas muioc'h c'hoaz diganti, he c'hasas da wellet he c'herent war ar mez, a oa holl tudjentil, o chom er maneriu tro war dro. Da c'houde e roas d'ezi tri zra: eur gouriz reun; eur skourjez hag eur penn-maroc.

An dimezell, o senti, a voe trec'h d'ar bed, a reas fae war e follenteziou. Adalek neuze e vevas eur vuhez a binijenn, eur vuhez santel beteg he maro a c'hoarvezaz d'an oad a 82 vloaz. Bemdez e kleve an oferenn hag e rae pedennou hir lha hirvidik; yun a rae, ouspenn ar c'hoaraiz, bep gwener hag epad an Asvent. Ne ehane tamm da labourat.

Franseza a Gizidik a neas eur vad souezus e Montroulez, ha dreist-holl en he farrez sant Martin. Gand he denvez e sikoure an dud ezommek; digemeret a rae en he zi ar re baour, ar re glanv, hag e roe d'ezo kement o deze ezomim.

Eun deiz e voe gwellet o tont da Montroulez eur plac'h yaouank gwisket evel an dud diwar ar mez, met stummet mat ha doare d'ezi da veza eun dijentilez bennak. Hounnez oa Mac'harit an Nobletz, galvet gant he breur da labourat e Montroulez. Graet he doa hent gand eur baourez koz ha chenchet dilhad ganti, hag e touge, en eur zont e Montroulez, eul lostenn lien rouz hag eur boutoukoad. He breur en devoe poan oc'h he anaout, met laouen e voe o wellet edo e c'hoar war hent ar zantelez, hag e rae fae war ar bed. He c'has a reas da gaout Franseza a Gizidik. Hou-man he gwiskas paoutroc'h c'hoaz, a roas d'ezi eul lostenn liou louet, n'oa henvel nemet ouz eur zac'h; hag eur bisac'h ouz he c'hein, eur skudell brenn en he dourn, Mac'harit an Nobletz en em lakeas e kichen doriou an ilizou, eun deiz gouel bras, da c'houlenn an aluzenn, evel pa vije bet eur vaouez kez n'oa ket gouest da c'hounit he boued. Kalz arc'hanit a zastumas, hag he devoe peadra da zikour ar beorien. Met, daoust d'ezi da veza gwisket fall, e voe anavezet gant meur a hini. Hep mez ebet e c'houzanvas ar goaperez, hag adalek neuze e voe trec'h mat d'ar bed, ne voe mui touellet gand e blijadureziou, e follenteziou.

Pa voe evelse temzet he c'habon, he breur he lakeas e ti eun intañvez santel da zeski ar vicher a gemererez, hag a roas d'ezi eur reolenn a vuhez ker striz hag hini eul leanez. He gourdrouz a rae alies evit rei tro dezid da c'hounit ato eun dra bennak, da gaerat he ene, hag e savas uhel meurbet e skeul ar zantelez. Muioc'h ez eas war ar aok e bloaz eget re all e 60 vloaz, a lavare he breur.

Lakat a reas anezi ive d'ober katekiz d'ar merc'hed ha d'ar plac'hed yaouank. He madelez, he habasked a c'houneze an holl.

Setu petra reas Mac'harit an Nobletz: sikour he breur, evel ar merc'hed santel a welomp, e penn kenta an Iliz, o sikour an ebestel.

Mikael a skignas e Montroulez ketennadurez an Aviel, hag a zeskas da galz a dud an doare da garet ha da zervicha Doue. Evelato an holl n'edont ket a-du gantan. Kalz beleien a gave abeg ennan, rak ne rae netra evel ar re all. « Nann, e gwirionez, a skriv an Tad Maner, nann, n'oa ket henvel ouz ar re all. Ne veze gwellet morse en tavar-niou, ne zaremprede ket an dud vras ha pinvidik, ne eve ket a win, nen doa ket a aon o skei var gizioù fall ha lavariou diskiant ar bed. » Geriou flemmus a skriv e an Tad Maner!

Goulnnet e voe digand eskob Treger difenn outan pignat er gador brezeg. Met an aotrou n'eskob, e lec'h kredi dioc'htu ar pezh a lavare an damallerien, a reas enklask, lha goude beza anavezet peger santel lha peger desket oa Mikael an Nobletz, e pedas anezan d'ober misionou e pep korn eus e eskopti.

Mikael a zentas, laouen holl, hag evel n'oa ket gouest e-unan d'ober eun hevelep labour, e c'houlennas digand an Tad Kintin dont d'e zikour. Al labour a voe rannet etrezo. An Tad Kintin a brezege, ha Mikael a rae katekiz. Mikael a fellas d'ezan beza evel servicher an Tad Kintin ha senti outan gand ar brasa doujans.

N'e ket hepken en ilizou e labourent, met ive er mez, war an hentchou. Boda a reant an dud e kichen eur groaz bennak, hag eno e roent d'ezo da glevet gwirioneziou ar relijion. Evit ma touge frouez o frezegennou, e pedent kalonek hag e raent pinijennou bras. Eun tamm bara zegal a veze a-walc'h d'ezo evit tremen o dervez.

Epad tri bloaz (1609-1611) e labourjont e eskopti Treger, ha kalz vad a voe gret epad an tri bloaz-ze.

Mikael an Nobletz e enezenn Eusa, Molenez, Baz.

Goude beza prezeget e eskopti Treger, Mikael an Nobletz a zistroas da eskopti Leon, a gare meurbet, rak ennan oa ganet. « Karet a rae an eskopti-ze, a skriv an Tad Maner, evel perlezenn eskoptiou Breiz ha Frans. Neo ket ganet c'hoaz an hini en dije gwellet protestanted, heretiked, gimidik eus bro Leon. »

Met, ma z'oa bet diwallet mat an eskopti diouz an heretiked, evelato an dud n'oant ket desket a-walc'h war o c'hredennou, ha meur a c'hiz fall a oa da zisehwrizien-na.

Mikael a yeas da genta da enezenn Eusa a oa enni neuze wardro pevar mil den, muioc'h eget hirio. Gwall vor a zo etre an douar bras hag an enezenn, lha, p'en em gaver, eo dies pignat en enezenn, ken uhel ha ken sounn eo an aotchou. Abalamour da-ze n'oa ket kalz a zarempred etre

Eusa hag an douar, hag eskibien Kastell n'ez aent ket d'an enezenn.

N'oa nemet eur beleg e Eusa evit kement all a dud, hag evelato oa chomet eur barrez kristen. An dud a oa madelezus, santel, ar pec'hed hudur n'oa ket anavezet en o zouez, en em glevet a raent, hag ar peoc'h a rene en enezenn. Ne vanke d'ezo nemet beza desket anoc'h war ar relijion, ha tostet aliesoc'h ouz ar zakramanchou.

Mikael a voe digemeret mat e Eusa. Unan eus an dud pinvidika e bedas da zont da jom d'e di hag a breparas d'ezan eur gambr dereat. Met n'ez eas ket da gousket er gambr-ze. War ar c'halet eo e kouske, gand eur maen din-dan e benn.

An eneziz, souezet o welet peger santel oa, a zirede da glevet e brezegennou hag e gatekiz, ha goude beza bet kenteliet a-walc'h, e c'houlennent holl kovez ha kommu-nia.

Mikael a zeskas da bersoun Eusa e zoare da zisplega ar relijion d'an dud, hag evelse ar vad en doa gret e-unan a voe kendalc'het war e lerc'h.

Eus Eusa ez eas da Volenez. Digemeret mat e voe ive ha selaouet gant doujans. Met eur c'halz eus ar wazed a oa o pesketa ha ne c'hellent ket klevet e brezegennou. Petra ra ar misioner? Pignat en eur vag ha mont da glask ar besketaerien. Pa veze digouezet el lec'h ma vezent, e lavare d'ezo tostet outan; neuze e save war ar vag uhela hag ac'hano e kelenne ar besketaerien bodet endro d'ezan. Eun deiz e komzas gant kement a nerz eus an ifern ha poaniou Hor Zalver, ma voe gwelet an dud-ze o lenva hag o kemeret kerdin o bagou evid en em skourjeza e pinijenn d'o fec'hejou.

Araok distrei d'an douar Ibras, Mikael a c'hoanteas mont da Enez Vaz, ugent leo diouz Eusa. Epad ar veach a sonje e Sant Pol a Leon en doa prezeget gwechall goz e Eusa hag e Baz.

Ar feiz a oa ato beo e Enez Vaz, met an dud n'oant ket desket war ar relijion, ha klaz gizioù fall a oa en o zouez. Ar beleg kalonek en em lakeas da labourat ker-kent ha ma tigouezas. Diou wech bemdez e prezege hag e rae katekiz. Eur paotrig en doa digaset gantan evit diskouez d'an eneziz penos e vez gret katekiz. Ar paotri-ze a oa boazet da respont ouz ar goulennoù, ha p'en deveze respontet, Mikael a lavare d'ar re vihan ha d'ar re vras: « Lavarit breman d'ho tro evel ar paotr-ze. » Evelse e voazas lanezo da besk' ar c'hatekiz. Kovez a raent ive o fec'hejou, ha Mikael dre e vadelez, e zous-raent ive o fec'hejou, ha Mikael dre e tizoloent o holl fec'hejou der, a roe fizians dezo, hag e tizoloent o holl fec'hejou « Arabat klask kuzat netra ouzin, emezan, rak me a ana-vez kement oc'h eus graet. » Eur c'hovesour oa eus ar re wella.

An holl a voe gounezet gantan, ha p'o e'hwriteas e

voe skuilh'et d'elou puilh e Enez Vaz. Boda a reas an dud eur wech c'hoaz. « Kenavo, va bugale ger, emezan. Doue am galv da vont d'eul lec'h all. Deuet oun en ho touez da ziskouez deoc'h hent ar Baradoz. M'am befe gelllet, gant gra Doue, savetei eun ene hepken, nag e vijen eurus! » Ehana a rankas, rak an holl a lenve hag a zifronke. Abenn eun tachad e kendalc'has: « Setu aman eun dervez, emezan. Na lenvit ket, va bugale, met dat-c'hit sonj eus ar pezh am eus desket deoc'h. Karit ha servichit Doue a greiz kalon. Dre ar binijenn gwellait ho puhez. Kentoc'h mervel eget ober poan da Zoue dre ar pec'hed! » Gand eur vourz krenv e lavaras ar c'hom-zou-ze, hag e tiskouezas da c'houde eur groaz ruz warni eur penn maro. « Hag unan bennak a zo amañ ha ne gredfe ket e vo eun deiz e benn henvel ouz ar penn maro-man? Mat! E lezel a ran gameoc'h evit ma prezego d'eoc'h em lec'h. En han' Doue, pleustrit war ar maro. Pa vezot oc'h ehana, pa vezot o tebri, pa vezot o labourat, sonjit e rankot mervel. Grit fae war ar bed, rak mervel a rankot. »

Enebit ouz ar c'hoantegeziou fall ha direiz, rak mervel a rankot. Na stagit ket ho kalon ouz madou ha plijadureziou an douar-man, rak mervel a rankot. » — Komz a rea d'ezo ive eus an tri banniel : ar banniel ruz, ar banniel gwenn, ar banniel du.

« Ar banniel ruz, emezan, a zigas sonj d'eoc'h eus Passion Hor Zalver. Pleustrit warni epad ho puez penn da benn. Stourmit dindan ar banniel-ze, hag e vezot trec'h d'hoc'h enebourien, youlou ha siou fall. Hag en ho kalon e vo karantez Doue gand an holl vertuziou. Ar banniel gwenn a zo eur skeudenn eus ar zakramanchou a laka kaer an ene. Deuit alies da govez ha da kommu-nia, ha gand an daou zakramant-ze e chomo gjan hoc'h eneoù. Ar banniel du a zo skeudenn an daonasion, ha ma ne fell ket d'eoc'h dilezel ho puhez fall ha poania, e vezot daonet ha daonet evid ato. »

Mikael a lavaras neuze da dud Enez Vaz kemeret ive o banniel, en em rei da Jesus Krist en deus gouzanvet, a zo maro evito, beza aketus da zakramanti, evid en em ziwall evelse diouz an ifern ha gounit ar Baradoz.

Pa ziskennas eus ar gador, an holl e heulias betek ar vag a dlle e gas d'an douar bras. Ne vije ket bet grêt anoc'h a enor da eur toue. D'elou a zivere eus an daoulagad, an holl a drugarekae ar misioner, a lavare kenavo d'ezan, hag e chomjont pell er porz da zellet ouz ar vag a gase Mikael d'an douar bras.

Tud Enez Vaz a zalc'has mat d'ar c'henteliou roet d'ezo. Hanter kant vloaz goude, an Tad Mamer, deuet da brezeg da Enez Vaz, a welas oa sonj mat c'hoaz eus Mikael an Nobletz hag oa chomet an dud sentus ouz e aliou. Eun douar santel, emezan, oa Enez Vaz. Prezegennou Mikael o doa douget frouez mat.



LABOURIOU AR MERC'HED WARDRO AN TI

Kenteliou Tintin Anna

XX^e PENNAD

Doue en ti

« Digemeromp Doue en hon ti, er bed-ma, hag e tige-mero ac'hanomp en e di er Baradoz. » Roomp da Zoue ar plas kenta: en hon ti, en hor buez, en hor c'halon.

Ma 'z eo merket d'eomp sevel eur maread bugale, evitan, arabad eo d'eomp marc'hata, na grosmolat. Pa vez ano ganen eus an dra-ze, Mac'harid a lavar! « Va zintin, n'ouzoc'h ket pegement a reusti a vez en eun ti! pegement a boan hag a zicenez! »

Ne lavaran ket eo êsoc'h sevel eun toullad bugale, eged sevel eur penher! gouzout a ran ez euz poan, skuis-der, mizou da gaout; met, eun dra hebken a gont: « Arruout, eun deiz, er Baradoz! » N'emaomp ket war an douar evit dibri, éva, fripa arc'hant, beva evidomp hon-unan!

Eun hent a zo merket d'eomp, ha dre an hent-ze e rankomp kerzet; en eur stad omp lakët, deveriou ar stad-ze a rankomp da ober, pe ne 'z aimp ket d'ar Baradoz. Hor Zalver Jezuz-Krist en dije gallet genel en eur c'hastell kaër, beva pinvidik, eur maread servicherien en dro d'ezan, mervel en eur gwele plu' etouez meuleudiou e genvroiz! êsoc'h e vije bet d'ezan! hag en deus dibabet eur c'hraou dister, eur vuhez poanius, eur maro skrijus!

D'an tadou ha d'ar mammou a c'houlenno digantan skoazell ha nerz-kalon, ne nac'ho nag an eil nag egile, hag ouspenn e roio dezo e vennoz hag e beoc'h. Dont a ra da zoni d'in eus ar c'homzou kelennus, am eus

klevet gant eun tad kristen, e bloavez kenta ar brezel bras:

« Ken alies gwéeh ma teu d'in eur c'hrouadur, e tru-
» garekaan Doue, eus an enor a ra d'in; hogen, bep tro
» iye, e rankan poania muioc'h ha derc'hel tostoc'h d'am
» gwenneien, rag ar geraouez a zo arru warnomp.

» Dioueret a ran eun dra benhak goude pep badiziant:
» eur banne gwin em beze bep pred; abaoe m'eo ganet
» Jobig, ar pempvet eus ar vandenn, ne evan mui banné
» ebed, nemed da zul; eun tamm sukr a laken em c'hafe;
» evid ar c'houec'hvet krouadur, em eus grêt, a galon-
» vat, an dilez euz an tamm sukr-ze; mat e kaven eur
» c'horniad: deiz badiziant ar seizvet em eus devet va
» c'horniad diveza, ha kuzet va c'horn ouzin va-unan. Hen-
» nez en deus koustet ar muia d'in!

» Ma teu an eizvet, a-berz Doue, n'ouzoun ket dioc'h
» petra e tiskrogin, met ar pezh a zo sûr, e dad a raio
» evitan kement hag en deus grêt evid ar re-all, rak ken
» tost a vezo d'e galon! »

Ar c'hristen kalonek-man en deus bet e gurunenn: marvet eo tri bloaz a zo, d'an oad a c'houec'h vloaz ha daou-ugent. Eun digemer mat en devezo bet digant an Holl-C'halloudek; n'eo ket hebken en e di e roe al lec'h kenta da Zoue, met ivez en e vuhez hag en e galon. Lavaret en deus gallet d'hor Zalver : « Nao grouadur a zo chomet, war va lerc'h; diouallit anezo, rak d'eoc'h, c'houi int gouestlet; desket em eus d'ezo meuli, hoc'h hano e peb tra, roet em euz d'ezo skouer ar sakrifis hag ar garantez kenetrezo. »

Ar vugale, diouz ma vezont savet, eo e vezont kavet: bezomp kristenien eta hon-unan, evit sevel bugale gristen.

Merka d'an den ar pezh a dle ober n'eo netra, ma, ne c'heller ket hel lakaat d'e garet! Eman echu va c'henteliou! Ma n'em eus ket gallet enaoui e kalon va lenne-rien, eun elfen garantez evit hor bro hag hor yez kaër, em euz kollet va amzer! Ma no'un ket bet gouest da lakaat ar merc'hed da garet o labour pemdeziek, o zi hag o farrez, em eus labourer en arer.

Hogen, fizians am eus em gouenn! fizians am eus e vezo savet c'hoaz, e Breiz-Izel, bugale sentus ha merc'hed mat.

Eur gazetenn eus an Amerik a c'houlennas, eun deiz, ouz he lenneien:

« Petra ' reoc'h eus ho pôtrezed? »

Respouchou a voe kaset d'ezi, e-leiz, ha setu aman ar respout a voe roet d'ezi ar priz kenta:

« Petra rin eus va fôtrezed? »

» Da genta kristenezed fur, kalonek ha krenv en o feiz...

- » Goude e teskin d'ezo aoza 'r prejou, gwalc'hi, ferra,
- » dresa al lereier hag an dilhad, staga bountonou, kem-
- » penn rochedou, gwriat o dilhad, goude o zrouc'ha.
- » Deski a rin d'ezo c'hoaz ez eus tri-ugent gwenneq en
- » eur skoued; red eo d'ezo beza kempenn evid espern
- » gwenneien abenn an amzer da zont; ra ouezint abred
- » prena o diankachou ha me:ka o dispignou.
- » Lavaret a rin d'ezo kaout muioc'h a istim evid eul
- » labourer mat, goude ma n'en defe gwenneq ebed, eged
- » evid ar c'henaoueiien lorc'hus ne reont nemed rôdal.
- » Deski a raint c'hoaz ganen labourat o liorzic'ha ka-
- » rout ar bokedou, ha pep tra krouet gant Doue...
- » Ma c'hellont va c'houmpren, n'em bezo ket a drabas
- » ganto, ha va merc'hed a vezo euruz en o hent;
- » Evid ar rest, em eus fizians e Doue hag en e Bro-
- » vidans! »

Kerent kristen, taolit evez-braz ouz ar c'huzulou-ze; lakit Doue da ren war ho tiegez, war ho puhez; ha kement tra a c'hoarvezo ganeoc'h a zebianto deoc'h beza eur merk euz e garantez. E drugarekaat a reoc'h, alies, da veza lakaet ac'hanoc'h en eur vro-gristen, da veza roet deoc'h kaera micher a zo er bed: an hini he deus an enor da lakaat en douar, ar winizenn a deuio eun deiz, da veza eun hosti zantel, korf Jezuz-Krist!

P'he devezo, ar vaouez sevenet he holl deveriou; ma vez mat ouz he zud, sioul e-kenver he gwaz, digestusk ouz he bugale, habask ouz he anevaled, ha kempenn war bep tra; ma vez boazet da rei d'ar paour, da skoazia an nesa; aketus, dreist-holl da bedi Doue ha d'e adori, e vezo direbech e pep doare, hag e kavo en he zi ar peoc'h hag an eur-vad... nemed gant mevel an diaoul e vije dimezet! Neuze, n'eus forz petra raio, pegement a boan a gemero, e vezo kavet abeg da c'hrounial!

Peurliesea, el levrig-ma, em eus lakaet ar bec'h war ar merc'hed, ha n'em eus ket a geuz d'am lavar; hogen, hizio e chenchin penn d'ar vaz, rak, hen anzao a ran, an holl her goar pell-zo:

- « Fazi ar wreg a vez kavet
- » Ar vad a ra a vez nac'het! »

« Eur gwaz ne rea nemed soroc'hal pa deue d'e brejou: « N'oa netra vat! Ar boued ne veze ket hanter-boaz! ar pemoc'h ne vella ket! ar vioc'h n'oa ket a lèz ganti! N'oa urz ebet en ti! Han! ma vije bet ar wreg kerkoulz hag hen, neuze! » rak, war e veno, n'oa ket gwelloc'h evitan! da arat pe da derri ar pennou, da falc'hat pe da c'hoennat; n'oa den evitan! hen, oa ar « maout » e pep lec'h!

E hini goz, eur vaouezic sioul ha mat da boania, a lavaras d'ezan, eun dro, dioc'h an noz, p'he doa klevet he litanou, evel ar c'hustum: « Kleo 'ta; Yanni? war-c'hoaz, ma keres, ez in d'ar prat da falc'hat, ha te a jomo d'ober al labour wardro an ti? »

— Mat-tré, emé Yann; ne vezin ket nec'het, met, te avat, a gavo kersé!

Antronoz, eta, Marc'harit a zavas abred, a aozas lein, ha goude beza diskouezet da Yann e pé lec'h edo an traou, ez eas d'ar prad, eur falc'h ganti war he skoaz.

Ha Yann e-unan er gêr!...

— Stagomp gant ar ribotadenn; emezan! An dienn a voe laket er ribod, hag epad eun hanter-eur e chomas Yann da strapa, da strapa... met an amann ne deue ket!

— Gortoz, emezan! Marc'harid a laka dour er ribod, me a raio ive; hag e taolas eur zailhad dour er ribod!

D'an ampoent e klevas trouz er mêz: ar pemoc'h a oa deuet eus e graou, hag a durie war-dro an teill; ar yer, spountet gantan, a nije hag a youc'he.

« Sell, eme Yann, henman n'en deus bet tamm ebet c'hoaz, nag ar vioc'h ken nebeud. Eur banne gouelienn d'an eil ha d'egile, deliou ruta abarz! »

Dre ma sonje e rea: klask a rea ar brenn dindan an deleziou... met, ar pemoc'h, o klask e voued, a deuas war e lerc'h en ti, a stokas er ribod, hag a fulias an dienn war al leur-zi!!

Ar paour kêz Yann, kolllet e benn gantan a grogas er skubellenn, hag a dôliou baz, a dôliou freid, e skoas kement gand an aneval mut, ma vârvas war an eur!

— « Danvez silzig, emezan, en eur zutal! ha gant eur gordenn e chachas anezan beteg e graou; — « Lavaret a rin d'ar wreg en deus bet eur maro trumm! »

An hanter euz an dienn a oa chomet er ribod; Yann a zammas anezan war e ziouskoaz, araok mont da denna dour d'ar vioc'h, gand aoun n'en em gavfe ki pe gâz d'e bilat evid an eill gwech. Met, pa 'z eas da blega, an dienn, tanaoet c'hoaz gant an dour en doa taolet er ribod, a ziredas war e benn, en e gein ha penn-da-benn d'e gorf.

Damantus outan e-unan, Yann a zonjas: « Pez kaër evid eur ribotadenn! » hag ez eas da denna ar vioc'h eus he c'hraou.

— « Petra rin ouz houman? eur banne dour he deuz evet, met dibri a rank ive! Kasomp anezi war ar melchen da beuri, an didrabasa eo! ma ne 'z a ket da laerez! Gwella em eus d'ober eo chom ganti, nemed e rankan aoza lein da genta! »

Ar yod silet a gavas en eur bodez; er pod e voe laket gantan, dilav hag all, hag ar pod war an tan!

Neuze, en empenn Yann, e savas eur menoz ijinus!

An ti a oa savet en eun toull mengleuz; a-reas gant

an doenn edo an tachad melchen; kas a reas ar vioc'h da beuri, eur stag ouz he c'herniel, hag e taolas penn ar gordenn, dre doull ar siminal, en ti.

« Evel-hen, emezan, e c'hellin derc'houl mat d'am bioc'h, dre ma vezin oc'h aoza lein! Setu aze petra eo kaout spened ha skiant! »

Distrei a reas laouen en ti; diou zro a reas endro d'e gorf gand ar gordenn, hag e pakas peg e baz ar yod. A-vec'h m'en doa laket eur bod-lann dindan ar pod, ma santas oa hojet kordenn hag all! ar vioc'h he doa gwelet eur c'henaouad velchen hag a c'hoantea mont d'he lipat; siouaz! n'oa ket hirr a-walc'h he c'hordenn, hag e chache ar pez ma c'helle! Seul-vui ma pellae, sul-vui e chache war Yann!

P'oa uhel an heol, Marc'harid a reas eur zell war-zu an ti: « Dizale e klevin ar c'horn-boud. » Kendalc'her a rea atao da labourat, ken oa skuiz, ar baourez keaz! Neuze ec'h eunas he c'horf, hag e sonjas: « Gwelloc'h eo d'in mont da welet; Yann a zo dare lein gantan, da gredi eo, ha me em eus trouc'het eur steud founnus, daoust ma n'eo ket ledan! »

Dre ma tostae, e chome sebezet, rak gwelet a rea eun dra bennag o loc'h, ne c'helle ket gouzout petra oa! Abenn eur pennad, e stagas da grial: « Yann, Yann? deus ta! ar vioc'h a zo aman, war greiz he c'hein er park! » D'ar red e teuas en ti; darbet e voe d'ezhi koueza a-stok-korf d'an douar, o welet ar pez a oa dirazi: Yann, dibradet dioc'h an douar, daou droadad a-zioc'h an tan, a zave hag a ziskenne, dioc'h ma loc'he ar vioc'h! ar vaz yod gantan en e zourn, e benn hag e zillhad leun a huzil.

— « Gwelloc'h eo d'it trouc'ha ar gordenn eged chom da c'hoarzin, hourjinez ma 'z out, eme Yann! »

— « Neuze e kouezi er podad yod, pötr!

— « Ne jomin ket aman da vervel, evelato? O Marc'harid karet, kemer truez ouzin! hiviziken e kavin mat peb tra! Distag ac'hanon, ta. »

Ar gordenn a voe trouc'het gant Marc'harid, ha ker-kent e kouezas Yann er pod, war e du a-dreñv.

Ar yod a oa tano c'hoaz, p'e gwir n'oa ket bet dilavet gant Yann; sonjal a c'hellit pe gement e strinkas!

Eur vaonez trugarezus oa Marc'harid: pardoni a reas d'he gwaz ar gwall-ouriou en doa grêt en ti, hag hen, morc'hedet en deiz-ze, a ziouleas; ne c'hoanteas ket ken ober al labour war-dro, ar gêr: « Pep hini war e vicher » oa e c'her!

A drugarez Doue n'eus ket kalz a wazed henvel ouz Yann, rak n'eo ket ebat beva en o serr!

En tiegezou kristen e vez urz'ha peoc'h; en em sikour a reer, hag evelse p'en em glever, « tri a ra labour

c'honec'h ». Pa deu poent al labouriou bras, hag amzer benniget an eost, ar merc'hed ne c'hinont ket evit mont er park, ha kemeret perz e skuider o zad, o breudeur, o fried; kinnig a reont da Zoue c'houezenn o zâl, evel ma reont o holl oberou. Labour ar c'horf pe labour ar spe-red, holl e rankomp labourat, al lezeñn eo!

« Eur bôtrezig a veze kaset d'ar park letoun da ziuall » ar zaout; kement-se ne blije ket dezi; huanadi a rea: « Mall am eus da veza bras! pa vezin eur plac'h yaouank; » ne rin nemed pourmen! »

» P'oa savet da blac'h yaouank, he mamm a lavare d'ezhi: « Kea, gant da dad, d'e sikour, er park! » Huanadi a rea ar plac'h, hag e sonje: « Mall am eus da vont gand eur gwaz! pa vezin dimezet, ne 'z in mui » war-dro an douar! »

» Pa voe dimezet ar verc'h, e rankas, evel just, mont » bemdez d'ar park! huanadi a rea: pa vezin mamm, e » chomin da luskat; ne 'z in mui d'ar park! » Met, pa » deuas dezi eur c'hrouadurig, e rankas mont d'ar park, » er memez tra.

» Pa deuas da veza koz, ez ea da ziuall ar zaout, evel » en he yaouankiz, asamblez gant he bugale-vihan. A- » wechou, ec'h huanade: « Pa vezin maro, ne rankin » ket mont d'ar park! »

» Pa varvas ar vamm-goz, an amezeten a gasas he » c'horf, en eur park benniget, hag e voe kanet warnan » an « De profundis ».

Karomp an douar, hor mamm-vat; gant douar eo bet furmet hor c'horf gant Doue; gant an douar e vezomp maget, tre ma pad hor buhez;

An douar hon digemero goude hor maro, evit ehana betek ar varn diveza.

List ac'hanon da gloza war ar rimadellou-ma, en enor d'am fatronez:

Santez Anna mamm Breiz-Izel,
Ouz ho pro gaër, taolit eur zell;
Mirit outi da vont da goll,
Rak enni bras eo an diroll!...
Astennit ho mantell warni,
An diaoul a glask he dismantri,
Gwella pez 'zo, Paol ar C'hornek
N'hell ket deski ar brezoneg!
Dalc'hit beo en hor c'halonou
Karantez 'vit yez hon tadou,
Ha Satan, ganec'h diskaret;
E puns an ifern vo kraouiet.

TINTIN ANNA.

KELEIER AR MIZ

Enoriou an Hiz

D'ar 17 a viz Here diveza, H. T. S. ar Pab Pi XI en deus laket 191 merzer nevez war roll ar verzerien. Laket int bet d'ar maro gant Dispac'herien Paris d'an 2 a viz Gwengolo 1792.

Enoriou ar c'houarnamant

Abaoe amzer Hippokrat, a veve a-raok Hor Zalver Jezuz-Krist, n'eus bet medesin ebet e nep lec'h o talvezout hor c'henvroad Laennec; kant vloaz a zo bet e miz eost diveza abaoe m'eo marvet e Ploare; evid en enori, ar c'houarnamant en deus roet urz da lakat e gwerz, adalek an deiz kenta a viz Kerzu a zeu, timbrjou nevez gand e skeudenn warnezo. Enor dister ha, m'oarvat, ne bado ket pell.

Eurejou breizat

Eured an A. James Bouillé gand an dimezell Franseza Paturel a zo bet lidet d'an 21 a viz Gwengolo, e iliz Porzig; hini an A. Emil Cuffe gand an dimezell Jann Alanic a zo bet lidet d'an 22 a viz Gwengolo, e iliz Pont-Aven.

Kinnig a reomp d'an dud nevez hor gwella gourc'hemennou.

Kanvou bras

Erbedi a reomp ouz hon lennerien an Itron Mauris Yung. — Janed Malivel oa he hanol plac'h yaouank — marvet e Roazoun, d'he bloaz ha tregont, d'an 2 a viz gwengolo diveza hag an Aotrou Rene Largillière, marvet, hen ivez, e barr e vrud, e Beauvais, en deiziou tremen. Dizrei a raimp war al labouriou kaer o deus graet evit Breiz rak kelou o maro en deus laket n'eo ket hepken o zud, mét ar Vro a-bez e kanvou.

Levriou nevez

E kenver an diskouez eman ar gwerz, a leverer; mar d'eo gwir an dra-ze, ez eus etf levr nevez, *Ar Roc'h toull*, eus a Zant Thegonnec, hag embannet gant Gwalarn hag a savet gant hor c'henlabourer mat an Tad Jakez Kerrien, 'z aio e flip dizale ker brao all ha m'eo fichet gand ar mouler.

Goulennit anezan ouz an A. Drezen, 4, rue du Château, Brest, — evit 22 real e vo kaset d'eoc'h dre ar post.

Goulennit ivez abenn ar goanv, — er goanv e vez amzer da lenn.

Bilez hag e vestr, pezh-c'hoari fentus gant Dir-na-Dor, a vo kaset d'eoc'h evit 10 real.

Saint Herve, skrivet, e galleg, gand an A. Calvez, person Lesneven, a vo kaset d'eoc'h evit 22 real.

Prenit, e ti « Emgleo Sant-Itud », rener an aotrou Drezen, 4, ru ar C'hastell, Brest, al levriouman, embannet pe erbedet gant « Breuriez-Veur ar Brezoneg »:

<i>Conseils de l'Académie bretonne aux écrivains</i> , pep levrig.....	1 50
<i>L'enseignement du breton</i> , gant Meven Mordiern.....	1 50
<i>Manuel pour l'étude du français par les Bretons</i> , gant E. Ernault.....	3 50
<i>La Langue bretonne en 40 leçons</i> , 7 ^{es} mouladur, gant F. Vallée.....	6 »»
<i>Notennou diwar-benn ar Gelted koz</i> , pep levrig.....	2 »»
<i>Sketla Segobrani</i> , pep levr.....	8 »»

GWALARN, ketc'hgelaouenn lennegel trimiziek (skrivet e brezoneg penn-da-benn).

An enor hon eus da gemenn d'eoc'h ez eo « *Gwalarn* » dizalc'h adaleg ar c'henta a viz gouere 1926.

REOLENN NEVEZ. — Priz ar c'houmanant-bloaz: 20 lur. **Koumanantou.** — Ar c'houmanant da « *Walar* » a dalv evid eur bloavez adaleg ar c'henta a viz genver. Pep koumananter nevez a vez kaset d'ezan an holl niverennou embannet adalek derou ar bloaz, hag e goumanant a zo echu d'an 31 a viz kerzu war-lerc'h.

Adkoumanantou. — An neb na fell ket d'ezan adkoumananti a dle kas d'imp en-dro niverenn an nevez-amzer goude m'eo echu e goumanant.

An adkoumanantou a dle beza paeet a-raog ar c'henta a viz ebrel d'an diwezata. An neb n'en devo ket paeet a vo goulennet digantan priz ar c'houmanant dre ar post gand ar mizou ouspenn.

Kas ar c'houmanantou da: M. l'Administrateur de « *Gwalarn* ». Boîte postale 75, Brest.

(Kont-red ar postc'hekou: C/C 96-38, Rennes).

Koumanantit da « Gwalarn », ketc'hgelaouenn savet evit tud desketa hor bro, da rei da Vreiz, en he yez, eul lennegezh dudius, buhezek ha dreistholl eus an amzer breman.

Deut hizio end-eeun d'hon harpa.

Notenn. — Eun niverenn-skouer a vo kaset evit netra d'ar re a c'houlennno.


DIVINADENNOU



DIVINADENNOU MIZ DU

- I. — Seulvui e freuzan
Seulvui e plijan.
20 p. ar r. Digaset gant Henri Madec, S^t Divy.
- II. — Eun intron gaer aet da vatez
kollet ganti he holl ferlez.
20 p. ar r. Digaset gant pôtr Gwite.
- III. — Gant teir lizerenn e flemman atao,
Lakit d'in peder hag e vezin brao,
Kemmit va c'henta ma 'z in d'an disc'hlaou.
20 p. ar r. Digaset gant J. P. Plinguën.
- IV. — Mab oun d'eun tad lugernus;
heb eskell, er vann, e savan;
Me-ra d'an dud gouela founnus;
A vec'h m'oun ganet, ma varvan.
20 p. ar Digaset gant Bugale sant Joseph, Lill.

V. — Sellit mat azé ouz ar seiz toull a welit izeloc'h, stag-ha-stag; en tri doull kenta ez eus tri dousog merket gant an teir groaz-man +; an toull kreiz a zo goullou; an tri doull all a zo tri gwesklef enno, merket gant teir groaz evelhen x.



[+] = tousog x = gwesklef

Livrit breman penaos ec'h en em gemeroc'h evit lakat an tousegi da vont e toullou ar gwesklef hag ar gwesklef e toullou an tousegi?

An tousegi a c'hell lammet dreist ar gwesklef koulz hag ar gwesklef dreist an tousegi; met arabad eo da loen ebet mont war a-dreñv, na koneza en eun toull hag a zo eun all bennak ennan, na lammet dreist e bar, da lavaret eo arabad d'eur gwesklef lammet dreist eur gwesklef, na d'eun tousog lammet dreist eun tousog.

20 p. ar r. Digaset gant Bretoned Pariz.

Gedal evit kas ar responchou ma c'helloc'h kas, en eur wech, responchou here, du ha kerzu.

Feiz ha Breiz

HA KROAZ AR VRETONED

KELAOUENN VIZIEK GANT SKEUDENNOU

Relijion — Istor Breiz — Marvailhou — Gwerziou
ha Soniou — Buhez ar Vro

RÉDACTION

J.-M. PERROT, Plouguerneau (F^{re}) | Y. LE MOAL, Coadout, p^r Guingamp

ADMINISTRATION du FEIZ HA BREIZ : FR. GEORGELIN, Brest — 4, rue du Château — Brest c/c 44-40 RENNES	ADMINISTRATION de Bleun-Brug et de l'Emgleo Sant-Illu YV. DREZEN, BREST — 1, rue du Château — BREST c/c 6238 RENNES
---	---

ABONNEMENTS INDIVIDUELS « FEIZ HA BREIZ » et « KORN-BOUD » Bretagne 12 f. l'an France 15 f. l'an Etranger 25 f. l'an Abonnements collectifs Feiz ha Breiz (seul) (à partir de 3 exempl.) 8 f. l'an	PUBLICITE Toutes les insertions sont faites à l'année Une page entière 300 fr. Une demi-page 175 fr. Un quart de page 100 fr.
---	--

TAOLENN AR MIZ. — A bep tu, sklerijenn! E. A. M. — Pelec'h emaoamp? E. A. M. — Sant Fransez Asiz, F. M. — Prizioù Bleun-Brug 1926. — Hadenn ar vroadelezh, E. AR MOAL. — Roue al laz, D. N. D. — Mamm ar martolod, DIR-NA-DOR. — Kerne, G. M. — Mikael an Nobletz, J. U. — Doghadeth hav en breten wygan, HAL-WIN. — Keleier ar miz. — Divinadennoù. — Taolennou Feiz ha Breiz 1925 ha 1926.

SULIOU HA GOUELIOU MIZ KERZU

- 5 a viz Kerzu. — II sul an Asvent.
Oferenn ha Gousperou ar zul-se.
- 8 a viz Kerzu. — Ar Werc'hez Vari krouet dinamm. Gouel devosion.
- 12 a viz Kerzu. — III sul an Asvent.
Oferenn ha Gousperou sant Kaourantin.
- 19 a viz Kerzu. — IV sul an Asvent.
Oferenn ha Gousperou ar zul-se.
- 25 a viz Kerzu. — Ginivelez Hor Zalver Jezuz-Krist. Gouel berz.
- 26 a viz Kerzu. — Ar zul en eizvetez Nedeleg. Gouel sant Stephan, kenta merzer.

A beb tu, Sklerijenn !

II

Daou dra vras a oa da bouezan e lizer an Tad Santel ar Pab skrivet d'ar C'hardinal Andrieu diwarbenn an *Action française*. An hini kentan hon doa gwelet er miz tremenet: an eil a welimp er miz-man.

Eur prezeger brudet, an Ao. n' abad Desgranges en deus grêt, névez so, tro Vreiz, o hadan war e hent pep seurt gwirioneziou dibabet etouez ar re a zell ar muian ouz hon amzer. En eur gear bennak, e kemeras an danvez studi-man: *L'équivoque laïque*. Ne gredan ket e vefe, evit gwir, menoz ebet hag en dije kement ezomm ha heman da vezan laket sklerijenn da baran warnan: gwiriou an Iliz ha gwiriou ar c'houarnamant pe gwiriou al laik, da lavaret eo, ar c'hristen o veva er bed, a zo bet kemmesket a-ratoz kaer gant ar franmasoned en hevelep doare ma ne ouezer ken ober dibab en o zouez ha ma weler eleiz a gatoliked o kaout abeg en Iliz dal ma sav he mouez da varn tra pe dra ha n'aparchant ket rik ouz ar relijion. Kement kammed a ra ar beleg a-ziâvez d'an Iliz a vez tamallet d'ezan; « clérical » eo pa fell d'ezan lakat ar politik da blega d'ar relijion; — « clérical », pa varn al leoriou skol leun a c'heier nozus d'ar feiz ha d'ar furnez; — « clérical » ken lies gwech ma teu d'ober implij euz gwirioneziou ar relijion evit barn buhez pemdeziek al laik... — Prim ha prim e kaver tud, katoliked zoken, da respont d'ezan: « C'houi n'ho peus netra da welet aze! It da c'houer'hemen d'hoc'h iliz! »

— « Petra en deus ar groaz d'ober 'barz ar skol? » a lavare d'in, n'eus ket pell, eun den hag a ya d'an oferenn bep sul. Ma n'en deus netra d'ober eno, nag el lez-varn ivez eta, nag en hospitaliou! Ha perak neuze ar beleg, al leanez, er skol? Er skol laik eo red kaout mistri hag a vo laik, ha laik betek mel o eskern, betek bezan digristen... Setu eno ar fazi! N'eus ket a laik ken, diouz klevet nemet digristen e vefe; al laik kristen a zo « den ar veleien », eur seurt beleg hep soudanenn; en doare ma weler penôs kelennadurez hag oberou hon amzer a denn da ziskar gwir menoz al laik, da vouga al laik kristen, da laerez e hano hag e stad digantan; — den ar veleien, gwerzet d'ezo, renet ganto e pep pleg hag en peb ober, — pe den an diaoul, gwestlet d'ezan, koulz all, korf hag ene, n'heller bezan nemet an eil pe egile.

Gwasat gaza eo hennet! Ha nag e tleomp, eur wech

c'hoaz, lavaret trugarez d'ar Pab da vezan distroadet anezan hag en diou gomz hepken, laket ar wirionez war he reiz!

S'agit-il, eme Maritain, pour les membres de l'*Action française*, d'abandonner les idées politiques de Maurras, de renier leurs amitiés, de détruire leur œuvre et leurs organisations politiques? *Allons donc, la lettre du Saint-Père ne dit rien de semblable!*...

Ar Pab na c'houlenn nemet eun dra ouz katoliked an A. F., diazezan, etrezo holl, o labour, o oberou war ar feiz kristen. An oberou-ze, avat, pep frankiz o deus, ahendall, da zerc'hel ganto, — da labourat evit digas ar roue, evel ma ra katoliked all evit miret ha gwellaat ar republik. Ar Pab n'eus ket da welet, evel Pab, war bolitik dishenvel ar gristenien-man; ra 'z aint war an tu a girint, gant ma vo doujet ar relijion.

Troomp, me ho ped, war hon tu ni, ar sklêrijenn en deus laket an T. S. ar Pab da bara war dachenn tud an A. F. Diganeomp, evel diganto, an T. S. ar Pab a c'houlenn ma vo harpet war roc'h Per an ti breizad a fell d'eomp adsevel. Nag hen, nag eskob, na beleg ebet n'hell goulenñ ouspenn diganeomp: frankiz hon deus, pez a garomp, da labourat evit hon bro Vreiz, he yez, he gizioù, he frankizioù, hep rebech na skoilh bet a-berz an Iliz, gant ma en em gavo eta, e gwirionez, unanet en hon labour Feiz gant Breiz.

Netra muioc'h iskis, na muioc'h souezus eget klevet Bretoned hag a zo katoliked ivez o lavaret: « Petra he deus ar relijion da welet e stal ar brezoneg? — Nemet ha bezan e vefe klevet an hevelep re o c'hourdrouz ar veleien goude ze, hag o tamall d'ezo, gant kalz a c'houer-voni, ne reont netra evit ar brezoneg!!!

Setu eno petra c'hoarvez: an hini n'eman ket ar wirionez gantan a zo evel eun den hag a zo kamm diouz an daou du, kollet gantan e blomm; gwech e kamm en eur stumm, gwech en eur stumm all; hirio e lavar: Ar brezoneg hag ar Feiz, breur ha c'hoar e Breiz? Foei! ze n'eo ket gwir! Ar beleg n'en deus ket aotre d'en em emmell diouz doare ar brezoneg! — En deiz warlerc'h e tisklerio, ken c'houek all: Ar veleien a dlefe difenn ar brezoneg! Allas! tud didalvez n'int ken! Fae a reont war yez o bro c'hinidik!

Eur wirionez a zo hag eo houman eo: Ar beleg n'eo ket galvet, dre e garg, da bléal gant ar brezoneg; rei tu d'hen ober a c'hell hag a ra, rei skoazell, zoken, e meur a zoare, evel ma welomp hirio dirak hon daoulagad. Pelec'h eman al laiked a ra muioc'h egetan? Ha koulskoude, techet e vefen da lavaret ne ra ket trawalc'h; e c'hellfe lakaat, muioc'h eget ne ra, e zorn el labour-ze, oh! ya, kalz muioc'h! Met gwelomp breman piou zo da damall ma chom ar beleg da zilerc'ha awechou. Daoust ha n'eo

ket al laiked eo? Daou rummad a oa bet anezo betek hen: ar re ne reant netra hag ar re a labour, nemet o labour ne oa ket kristen. Eun trede rummad a zo savet a-wel d'an holl Vretoned, abaoe daou pe dri bloaz: heman a labour, hag a gemer da stur evit e labour, ar feiz. En droman en deus kavet ar beleg e dud: gant al laiked-man, n'en deus digere ebet da dremen hep kerzet: hag her gwelet a reomp o tont gant levezenez d'en em voda endro da vanniell ar *Bl.B.*, kement, ma 'z eus bet, breman zo bloaz, skrivet en eur gazetenn, e oa ar *Bl.-B.* eur « gevredigez beleien ». Goude ar pezh hon deus diskleriet, n'halled ket ober eus ar *Bl.-B.* kaeroc'h meulendi; ar ger-ze a dalveze da lavaret e oa anezi eur gevredigez hag e oa ar beleg er gêr enni, rak renet e oa gant laiked kristen. Ha n'eo ket eta evit ober o mistri, evit gourc'hemenn e pep tra, e teu ar veleien d'ez, met evit labourat da adsevel o bro, a-genver gant laiked hag a anzav didroidell o feiz en o c'hevredigez. Ar c'homzou-man lavaret, ar 16 a viz gwengolo diweza, e Colmar gant an Ao. 'n eskob Ruch, a zo e kalon pep hini anezo:

« L'Eglise laisse *pleine liberté* à ses enfants de rechercher, à la lumière de la raison individuelle, de l'expérience des siècles et des leçons de l'univers, ce qui convient le mieux à une cité, à une province ou à une nation, ce qui assure davantage le *bien public*. Pape, évêques, curés ont le devoir et le souci de ne pas commettre un véritable abus d'autorité en s'immisçant hors de leur sphère d'action, en imposant aux fidèles des conceptions purement humaines au nom de l'autorité divine. »

Evit ma vo sevenet ganto ar c'homzou-ze, evel m'eo dleet, petra reont nemet kemer perz, en doare c'hellont e labour al laiked kristen o klask, o studia, oc'h aprou ganto ar pezh a ra ar muian vad da ene, da spered, koulz ha da gorf o bro.

E. A. M.

WAR VARCH D'AR MOR

pez-c'hoari savet e saozneg

gant *J. M. Synge*

ha troet e brezoneg gant

Y. Drezen.

Her goulenñ ouz Emgleo-Sant-Iltud

4, Rue du Château, Brest

evit dek real e vo kaset d'eo'h.

Pelec'h emamp ?

Eur c'hlenved ia zo hag a vez grêt anezan, e galleg, « *phthisie galopante* ». An hini a stag ar c'hlenved-ze emman a vez paket e berr amzer. N'ouzon ket ha hinien-nou a gavo da damall d'in eo re denval va zonjou; techet oun da gredi, da vâhana, eo knog ar c'hlenved-ze er brezoneg.

Piou bennak a zo o chom war ar meaz, (ha war ar meaz, n'eo ket 'ta, emman mammen ar brezoneg?) a renk anzav, ma sell endro d'ezan, eo distummet kaer ar yez war diourweuz ar re yaouank, distummet ken eo eun dreez. Ar galleg, a-wechou all, a gemer e lec'h; klevet a rêr distaga frazennoù a-bez pe ober implij, dre gustum, eus giriou gallek, dre ma n'anavezer ket ken ar re vrezonek. Ar miziu, ped etouez ar re yaouank, o anavez war o hed? Ped a oar konta, e brezoneg, dre real ha dre skoed? Ped a gemer ar boan da henvel, e brezoneg, ar bloaveziou? Nag all lizerennou hanvet « *mutations?* » Gant ped ha ped, etouez ar vugale ha, zoken, an dud vras, e klever irou evelhen: *va gi, va dad, he gouef?*

Eur c'hrog tenn a zo er mare-man, ha piou oar ha ne vo ket an hini diveza ?

N em gemer a ranker diouz kaout an trec'h. Penôs ?

Gwechall, an tiegez hag an iliz a gerze kevret a-du gant ar brezoneg: pedennou ha katekiz e brezoneg, *Buhez ar Zent, Miz Mari*, kanaouennou, pezfou-c'hoari e brezoneg. Hirio, an iliz hag an tiegez ne zalc'hont ket penn ken, koulz hag o deus grêt: ar skol a ra al lezenn muioc'h-mui, hag ar skol a zo divrezonek. Evell ma lavare an O. Mary, e Gwened, er Bleun-Brug, an iliz, a rank rei he c'helenna-durez er yez komzet e pep parrez; ar c'hatekiz, ar prezegennou a ziskouez eta, reiz a-walc'h, stad ar yez; rak al labour grêt dre zindan, hag eo ar gwasan, pegwir ar frouez anezan eo ar c'hatekiz gallek, hennez a vefe ret tizout 'vit gellout lakaat war zizolo doare ar yez evel m'eman. Al labour-ze, an O. Mary, en e brezegenñ, a ziskoueze dre helec'h e krog penôs e tenn da grignat e kuz ha da zismantri tamm ha tamm ar yez, evel ar prenev, ar c'hoad.

Ar giziou nevez, ar c'hazern, ar c'hazetennou, ar skol 'ta, holl e tennont da vouga, da gontammi an cijenenn lec'h ma tarz ar brezoneg, en tiegez.

Penôs enebi? Ne daly ket esaat stourm a-benn ouz ar giziou nevez, esaat serri ar c'hazerniou na difenn ouz hon zud da vont a-ziavêz bro; dre ar c'hazetennou, avat, ha dre ar skol, e vo gallet marteze, kaout krog war spered hon c'henvroiz.

Ar brezoneg er skol? Nag a bed gwech hon eus ni, ha kalz all, huanadet warzu an amzer evurus ma vije gwelet dor ar skol o temdigeri, da vihana, da yez ar vro. Nag a wech zo bet klasket kaout alc'houez an nor-ze hag a vefe, evit ar brezoneg, dor liorz ar vuhez! Kannaded Breiz o deus, meur a wech, savet o mouez e Pariz; ar c'haeran prezegennoù, avat n'o deus grêt da vinistred ar Republik frammason nemet stardan muioc'h-mui an alc'houez etre o douarn: « Biken, eme unan anezo, n'ho po ar brezoneg en ho skolioù ! »

Setu, raktal, o tigouezout d'in lenn eur « *Géographie des Côtes-du-Nord* », savet gant eur mestr-skol laïk, er bloaz-man zoken, 1926. Studiet piz eo gantan pep tra; diwarbenn ar yez, setu petra lavar: « A l'école, on n'apprend que le français...; tout le monde, à part quelques anciens, peut aujourd'hui parler la vraie langue nationale. » E daou c'her, barnet ar brezoneg !

Ha renerien ar skolioù kristen, daoust ha ne glevint ket, eun dro bennak, garm ar yez koz o vervel? Eo, var a gredan. Int o-unan, daoust ha n'int ket Bretoned, all lodenn vras anezo? Evurus e vefent o sevel ar wasg a-ziwarnan, nemet emezint, ez eus n'ouzon ped ha ped dalc'h a-beurs ar gerent, ar « programm » hag all ! Gwir eo ze: goulenn a reomp digant ar vistri-skol ober ar pez a zo e tu-hont d'o nerz. Red e vije d'eomp, diouz hon zu, gwelet pesort skoazell eo dleet d'eomp rei d'ezo. Rei d'ezo leoriou, da genta: eul leor da lenn, eun all da studia an istor: eun all da zeski kanaouennoù ha tonioù ar vro; — e kenver ar gerent, labourat da rei d'ezo da entent 'zo dleet dor zigor d'ar brezoneg er skol. Aman, prezegennoù a rafe mil vad: eur gazetenn vrezonek a rafe muioc'h c'hoaz...

Er bloaz da zont, holl ijin ha galloud ar *Vretoned* o deus roet o hanoioù d'ar *Bleun-Brug*, a dlefe bezan troët war ze: rei skoazell da lakaat ar brezoneg en eur renk bennak er Skol gristen. Rei prijou d'ar skolioù hag o dije grêt ar gwella labour: prijou ive d'ar vugale.

Er bloaz-man, neb en deus lennet taolenn prijou ar *Bleun-Brug*, en devo gwelet ar renk kaer roët da *Vreuriezh ar Brezoneg*: daou rummad prijou a oa, eur rummad roët gant *Bleun-Brug* pep rann-vro; eun all, gant Bureo bras ar *Bleun-Brug*, hep konta ar prijou kinniget, a hent all, gant mignoned, evel al leoriou kaset gant *Taldir* d'ar daou o doe ar renk kenta e Santez-Anna.

Bleun-Brug Treger, hepken en deus dispignet, o kas e vugale da Santez-Anna, 250 lur. E Santez-Anna, 'zo bet rannet 200 lur etre an daou genta, ha roët d'ezo peb a leor.

Da vloaz, e vo grêt kaeroc'h. Adalek miz genver, d'an diwezata, e krogfer da urza al labour; ar skolioù, ar c'ha-

tekizou, ar strolladoù bugale bodet e *Breuriezh ar Brezoneg* o devo ar peurs ar c'hoara er *Bleun-Brug* da zont.

Red eo kemer ar gwella stumm d'ampledi al labour, pa 'z omp ken dilerc'het ha ma 'z omp.

E. A. M.

1226 Sant Fransez Asiz 1926

Beati pauperes spiritu quoniam ipsi Deum videbunt.

« *Eurus an dud paour a spered: gwelet a raint Doue.* »

Breman, seiz kant vloà-so, e varve e ker Asiz en Itali brasa sant marteze zo bet morse er bed: Fransez e ano.

D'en n'en deus 'n em ziframmet, 'n em zibradet diouz an douar hag ar grouadurien egiz m'en deus grêt. Sod ha foll eo bet gant e Zoue, gant an Otrou Krist stag ouz ar Groaz, teuzet eo bet e galon gant e garantez evit e Zalver, merzeriet beteg kaout war e gorf merkou gouliou e Vestr. Bevet en deus e zaoulagad ato paret war ar Baradoz ha goulskoude den ebet c'hoaz n'en deus tanveet levenez ar bed hag ar vuhez gwelloc'h egetan. Karet en deus an dud, an holl dud, karet en deus an traou, an holl draou. Mignoned en deus bet forz pegemend etouez an eil hag egile. « Ma breudeur al lapoused, a lavare hen, ma c'hoar al loar, ma breur an heol, ar bleiz, an danvad. N'en doa er bed man nemet breudeur ha mignoned.

Kanet en deus e garantez hag e eurusted dre henchioù ha kêriou e Vro. Hadet en deus en eur vont hag en eur zont Peoc'h, Unvaniezh, Levenez. Troet en deus an dud da 'n em garet, da 'n em entent, o distaget en deus diouz madou ar bed, ha naon ha sec'hed en deus roët d'ezo eus ar madou a bado da viken.

Biskoaz sant n'eo bet goapeet ha meulet egiz Fransez, n'eo bet ken paour ha ken laouen, ken sod da welet ha ken fur da gaout, n'en deus kemend karet Doue hag an dud e vugale, ha n'eo bet kemend karet ganto...

Nann, goude an Otrou Krist, Hor Zalver, den n'en deus chenchet penn d'ar Bed evel ar zant-man hanvet gant tud e amzer, an eil Salver, ar C'hrist all...

N'hellomp ket, Bretoned, leuskel ar bloaz da vont e biou hep kana eur werz d'an hini n'eo bet e vuhez nemed eur ganaouenn heb ehan, d'an hini en deus desket d'an dud dallet pelec'h e oa an eurusted gwirion, petra oa kaer, petra oa mat etouez an traou strewet gant Doue dre bark bras ar Grouadelez...

« Sant Fransez Asiz »

Kinniget d'an ôtr. Korantin Le Grand evit Trede-Urs
Kloerdi bras Kemper.
Bet diskleriet da c'houel Kenvreuriez ar Brezoneg, me-
zeven 1926.

Lêvenez gwirion



*Erc'h a ra: war an hent a gas da Asiz, daou zen o vale,
skwiz-maro. Unan anezo eo Fransez, ar zant etouez ar
ar Zent, roue ar Baourentez. An hini all, ar breur Leon.*

— Breur Leon,
Pa n'eus den
war an hend
Nemedomp hon daou,
Deus tost ha selaou
Ma tiskargin ma c'halon
E kalon eur gwir vignon,
Breur Leon.

— Petra zo nevez,
Ganeoc'h Tad Fransez,
Ma welan ho taoulagad
O virvi en ho penn
Ma welan ho tamm gwad
O liva war ho tremm
Liou tanet an derzien,

P'eman ar goanv en e yena
Hag eun amzer d'ober kreñs
Ne vern piou
Gand ar riu?

Ha Doue...
en defe...
marteze...

Stoket eur wech c'hoaz.
ouz kalon ha spered
e vignon bras?
O! Tad, me a gred,
Diouz klevet ho mouez
en-deus Doue
sur, adarre,
Komzet ouzoc'h, Fransez

— « Breur Leon,
Ma c'halon
Tomme evel eur forn vero
Eman ganti an daou iamm,
Ha dre ma fenn traou a dro
O! ken na' ehanont tamm
Ya... Fransez! Fransez ar paourkez,
Sod gant ar C'hris, stag ouz ar Groaz,
Zo tont diouz klevet e vouez
Egiz n'en deus klevet biskoaz!
Deus tost, Breur Leon,
Ha digor da galon,
Ma tremeno enni
An tan zo o leski va hini
Skriv doun ar c'homzou-man, warni.

LODENN GENTA

Na pa 'zafe dre ar bed,
'Vel sklerijenn ar stered,
Trouz, c'houez vat ha brud
Eus santelez
« Ar Vreudeur munut » (1)
Ne zigasfent ket en dro
o tont d'ar ger eus a bell bro
Al Levenez!
Levenez gwirion
Da leunia ar galon!

**

Rei d'ar re zall ar gwelet,
D'ar re vouzar ar c'hievet,
Lakât ar re dort ken sounn
Ken plomm ha te Breur Léon,
Gant an dra-ze n'ho pefe ket
Eur hanter devez eurved.
Rei ar prezeg d'ar re vut,
D'ar re gamm, rei ar bale,
Eus holl klenvejou an dud
Kaout ha louzou ha pare;
En eskern ar vered
c'houeza ar vuhe!
Warlerc'h an eurved
Emaoc'h c'hoaz goude.

**

A! Gouiziegez!
Deskadurez!
Netra ha ne ve ket gouillo!
Moged hepken! Moged ato!
Goude komz an hoil yezou,
Entent an holl skrituriou,

(1) Breudeur munut, les frères mineurs.
(1) Anaoued, riu, froid.

Ha lenn en amzer da zont,
Hag e goueled pep kalon,
N'ho pefe ket c'hoaz eun tanvad
Eus al levenez-se
A jomo ganeomp evit mat
Ha ne dec'ho morse.

**

Breur Leon, danvadig Doue,
Ha pa c'hellfemp anaout ive
Gant pe hend e red ar stered
Dibaoue penn kenta ar bed!
Peseurd nerz o deus al louzeier
A zo mantel ar parkeier;
Lakomp e teufemp
En devez a-benn
Da zizolei holl denzorion
An douar, holl berlez ar moriou;
Galloud al lapoused
Ar pesked, al loened;
Holl gouiziegez an den,
Nerz an dour hag ar vein
Vertuz ar gwriziou hag ar gwê,
Ez afemp c'hoaz d'hor gwele,
D'hor gwele da gousket,
Pe d'ar bê d'ar vered,
Hep beza klevet na gwelet
Hano na liou an eurved.

**

Ha pa c'hellfemp
Lakât da ziskenn
war gemend penn payan
Dour ha gras ar Vadiziant,
Gounit ar bed evelse
d'ar C'hris ha d'ar Werc'hez
N'eo ket c'hoaz an dra-ze
ar Gwir levenez! »
— O Tad, larit d'in neuze
Pelec'h neuze vo kavet
Efin ar gwir eurved? »

EIL LODENN

En Intron Varia an Nec'h pa vimp
[erru,
Dare bras da chelpel gant an naon du,
Skornet, sklaset
Gant an anaoued, (1)
War hon tamm korf a vec'h
Eun hanter-neudenn zec'h,
Ouzomp, avat, hor bec'h a bri,

Ni a skoio war dor an ti,
 War dor an ti ni a skoio,
 Ha d'ar porzier ni lavaro: [kez
 « Digor, 'n han Doue da, zaou baour
 A zo rivet aman erméz. »
 Met ar porzier ne rayo van,
 Droug ' avat, a ielo ennan:
 « Piou oc'h c'houi? petra 'rit aze
 O lopa war an nor egiz-se?
 — « Daou eus ho preudeur. »

— Gevier!
 Na rit ket goap eus ar porzier
 Nag ouz den all,
 Daou bez fall!
 Padal emaoch dre an henchou
 O klask noz-de aluzennou
 O laerez boued ar beorien!
 Allo! tec'hit kuit da bourmen
 Da glask ho neiz, laboused noz!
 Aman ho po labour gortoz. »

Pa vezimp neuze war an hend,
 Hon treid en dour-erc'h sklas ha yen
 O krena egiz eur bern delliou,
 Hag o tizec'hi gant an naon;
 Arabat d'omp skuilha daelou
 Nann, ma breur, met a greiz kalon,
 Hag hep ranna eur ger,
 Lonkomp ar pred-c'houero
 A ro d'omp ar porzier
 Gant e gomzou garo,
 Beteg an noz chomomp eno
 Nann da c'hrognal, d'ober klemmou,
 Met da laouennaat hor c'halon
 Da veza 'bet eun digemer.
 Evel ar chas hag al laeron,
 Ni, goulskoude, aman er ger.
 Ni gredo c'hoaz e oar mat tre
 Ar porzier piou zo dirazan
 Ha n'eo nemet a berz Doue,
 omp gwall-gaset hon daou gantan.
 Ma reomp an dra-ze;
 Breur, skriv neuze
 Eman kavet ganeomp
 An eurusted gwirion.

Ni gendalc'ho war an nor
 Da c'houlenn ato digor
 Ken na deuo ar porzier,
 Gant ar gounnar, war an hend!
 Ha neuze siouas war hor penn
 An toliou dourn herr hag herr
 A gouezo drus egiz glao!
 « Dall, skampit, lapoused brao,
 M'ho kaso diwar ma zro,

Koz tammou foeterien-bro!
 Desket vo d'oc'h dont d'ober trouz.
 Na dour, na bara, na-plouz,
 N'ho peus da gaout en ti man,
 Chachit ho skasou breman;
 Peziou divalo, laeron fall
 C'houi oar mat hend an ospital!

Ma lonkomp eur seurd begad
 Laouen bras, a galon vat,
 O, skriv, ma breur Leon,
 Eman kavet ganeomp
 Al Levenez gwirion

Met ma n'omp, evit padout ken
 Gant an naon hag ar yenijenn
 Ma 'z eomp c'hoaz d'aspedi
 E tal an nor da c'houlenn
 Eur c'hornig-tro ebarz an ti
 Eun dornad plouz evit hor penn.
 Ma lenvomp eno hon daou,
 Hag ar porzier elec'h selaou
 Eef net lip dreist e spered
 Egiz eur c'hi kounaret

A garnacho
 Dre ma c'hello:
 « Nann, seiz biskoaz war ma hend
 N'em eus kavet daou dorr-penn
 Eus danve an den ienn-man.
 Peuc'h a vo, erfin, aman?
 Mall am eus d'ho tigoll potred.
 Eus an holl drouz ho peus grêt. »
 Warnomp o tilamm neuze
 Gant e vell benn baz dero
 E tapo peg ebarz hor saë
 War an douar hon stlapo,
 Eno e vimp hon daou dornet
 Goasoc'h eged eul leuriad ed,
 Ma 'n em lezomp gantan
 O c'houzanv laouen hor poan.
 Ma pignomp gant hend ar Groaz
 Dorn ha dorn ha skoaz ha skoaz
 Gant hor Zalver benniget.
 O! neuze, eman kavet
 Kavet, ô breur Leon,
 an eurusted gwirion.

« DA BEUR GLOZA »

Hag evit rei penn da benn
 Ma zonz Breur, war ar poend-se,
 E lavarinn d'oc'h ouspenn
 Eman holl grasou Doue,
 Donezou ar spered Glan
 Warlerc'h an 'n em drec'hi hon unan,

N em ziouet, gouzanv a galon vat,
 Gant skoaziou krenv ar Garantéz
 Pep poan, ha tregas, gwall deodad,
 Ha labour, dismegans ha mez!

all, ve d'an den n'em fougeal

Gant ar grasou en deus bet
 Ha diwar goust unan all,
 An hani en deus o roet.
 Da Zoue int, d'ezan e tle
 Mont ar veuleudi ive.

Petra ho peus, eme zant Pôl,
 He ne vefe ket da Zoue?
 Perak tud bresk ha pennou foll
 Klask en em fougeal neuze?
 Dindan ar groaz pa vimp pleget
 E c'hell beza lorc'h ennomp
 Aze war lodenn den ebed
 War hon dachenn avat, emaomp.

Rak-se sant Pol a lavar c'hoaz.
 Fouge ne vo ennon biken,
 Nemet pa vezin krog er Groaz
 Kroaz hor Zalver ha netra ken.

F. M.

FIORRETI

Tro dro da Zant Fransez

Ma oa sod Fransez gant ar baourentez, e Intron, ne oa ket evit gouzanv, anat eo, an arc'hant, an arc'hant daonet.

« Eun devez e teuas eur beleg da bedi e Iliz Intron Varia ar Porzionkul. Achu gantan, e lakas en eur vont kwit eur dornadig arc'hant e kichen ar Groaz. Unan eus tud « Fransez » a deuz war e lerc'h da rastella an arc'hant hep ober seiz sonj ha e stlapas en eur c'héf (1). Fransez a voe kaset d'ezan kemend-se eur mare bennag. Neuze, an den, o welet e oa tapet, a redas da n'em damall e unan evit kaout an diskarg. Klevet a reas e bater sec'h ha rust. Fransez ne varc'hate ket war an traou-se Stoki penn ar biz ouz arc'hant an estren a oa a-walc'h evit kaout trouz digantan. Ober a reas d'ar « Breur » mont da gerc'hat an arc'hant a-dreuz en e c'hinôu, d'e gas erméz eus al liorz a gloze ar gouent, ha d'e lakat ato gant e zent war eur bern pri pe rotell...

Aon bras en doa ive da welet ar re a oa en gompagnu-mez, oc'h en em c'houezi pe o klask en em zével. Eur wech e teuas d'e gaout eur pôtr yaouank eus ar gouent, c'hoant bras d'ezan d'ober implij eus Levr ar Psalmou;

(1) Kef, tronc.

latin a ouïe ha dre-ze ne wele ket perak n'en dije ket e lennet. Nann, a lavaras Fransez, n'ho po ket al Leor-ze. — Eur pennadig goude hon doktor da zistroi. Memez goulenñ, memez respont. — Ya, a laras ar zant, p'ho po leor ar psalnou, ho po c'hoant da gaout eur « Breviel » p'ho po bet hen-man, c'houi a bigno er gador egiz eun eskob hag a hopo d'ho preür: « Digas d'in me, ma Breviel. » — Me ive, ma fôtr, am eus bet c'hoant a-walc'h da gaout leoriou. Ne ouïen ket bolonte Doue war ar poend-se hag em eus pedet anezan da laret d'in me e zonj el linenn genta eus an Aviel a vije kouezet ma daoulagad warni. Setu amañ ar pezh am eus lennet: « Deoc'h c'houi eo bet roët d'anaout traou kuzet rouantelez Doue, d'ar re all, avat, n'e zeus bet kinniget nemet ar skeud anezo. » — Ha neuze, emezan: « Kemend all a dud a glask pignat kre-c'henn an Deskadurez, ma kavan eo eurus an hini a dro kein d'ezi dre garantez, evit an Otrou Doue. »

Prizioù Bleun-Brug 1926

I. — KOMZ PLEN (Prose).

Kenta priz. — Mathurin Robert, Meslan.

Eil priz. — Alphons Tanguy, Quistinic.

Trede priz. — Joseph ar Pabie, Melrand.

Menegou a enor. — Fransez Corlobé, Crac'h; Julian Volantin, Langonet; Louis Le Roux, Guiscriff; Joseph an Déaut, Quistinic; Hyasent an Douaran, Plougonmelen; Fransez Nicolas, Plouay; Yann Scieller, Guiscriff; Louis Hervé, Arradon; Mathurin ar Galloudec, Melrand; Louis ar Floc'h, Lannilis.

II. — BARZONIEZ (Poésie).

Kenta priz. — Mathurin Robert, Meslan; Yann an Helgoualc'h, Jersey.

Eil priz. — Joseph Trevarin, Guiscriff.

Trede priz. — Perig ar Saus, Plouhinec.

Menegou a enor. — Joseph Blanchard, Kerfourn; Fransez Corlobé, Crac'h; Joachim Lécuyer, Kerfourn; Casimir Lorant, Bignan; André Toulan, Faouët; André Gohebel, Lokmariaker; Yann ar Bas, Roudouallec; Joseph ar Pabie, Melrand; Marc'harit Gwegen, Sizun; Joseph ar Pabie, Melrand.

III. — KENSTRIVADEG AN A. ROUDOT.

Kenta priz. — Mathurin Robert, Meslan; Louis ar Floc'h, Lannilis.

Eil priz. — Louis Le Roux, Guiscriff.

Trede priz. — Yann-Louis Allain, Moustoirac.

Menegou a enor. — Gabriel Audo, Bubry; Casimir

Lorant, Bignan; Hyppolite Le Vaillant, Guidel; Prosper Moguedec, Bignan; Joseph Blanchard, Kerfourn; Yann Scieller, Guiscriff; André Toulan, ar Faouët; Julian Volantin, Langonet; Marc Caudal, Gregam; Kristof ar Mestr, an Oriant.

IV. — KENSTRIVADEG ARZUR DE LA BORDERIE.

Kenta priz. — Charl Lemarié, Baguer-Morvan; Perig Tanguy, Quistinic.

Eil priz. — Auguste ar Marouille, Gregam.

Trede priz. — Hyppolite Le Vaillant, Guidel.

Menegou a enor. — Yvonig Cadiou, eus ar Zant; Joseph Morio, Arradon.

V. — PREZEGEREZ (Eloquence).

Kenta priz. — Kristof ar Mestr, Sant-Kristof an Oriant.

Eil priz. — Joseph Scieller, Guiscriff; Gabriel Audo, Bubry.

Trede priz. — Jak Dourmap, Lanarvily.

Menegou a enor. — Yann Brushec, Kervignac; Mathurin Robert, Meslan.

VI. — DISPLEGADEG (Déclamation).

Kenta priz. — Stephan Boucher, Plougerne.

Eil priz. — Prosper Labour, Moréac.

Trede priz. — André Pronost, Plougerne.

Menegou a enor. — Cyr an Texier, Moréac; Janny Pronost, Plougerne; Lusian an Douarin, Moréac; Gabriel Roudaut, Plougerne; Yvon Salaün, Plougerne.

VII. — BREURIEZ AR BREZONEG.

Kenta priz. — Marsel ar Parc, skolach Gwengamp; Alexandrina Cöcain, Pleumeur-Bodou.

Menegou a enor. — Yvonig Floc'h, Sant-Thegonnec; Charl Uguen, Plougerne; Ambrosina Pennec, Plouider; Alphonsina Allain, Brelevenez.

VIII. — AR C'HAN.

a) **Kannerien a-strollad.**

Kenta priz. — Pluvigner.

Eil priz. — Moréac, Sant-Yann-Brevelay.

b) **Kanerien a-unanou.**

Kenta priz. — Viktoria Ferrand, Sant-Yann-Brevelay.

Eil priz. — Louisa Jan, Pluvigner.

Trede priz. — Marc'harit Sanson, St-Yann-Brevelay.

Pevar priz. — An Itron Douarin, Gwened.

Menegou a enor. — Helena Morvan, Pluvigner; Anastasia Jahier, Sant-Yann-Brevelay; Mari Calonnec, Sant-Yann-Brevelay; Bernadetta Guymare, Sant-Yann-Brevelay; Giletta a Halgouet, Meriadec.

D'AR VRETONEZ, GLOAR HAG ENOR DA VIRVIKEN.

Hadenn ar Vroadelez, penn kenta al labour ar yez

En eun emzao evel an hini emeur stâg gantan en hor bro, ez eus meur a dra da zellet ha ne fell ket nag o dispartia nag o meska, na rei da bep tra nemet ar renk a zo dleet d'ezan. Araok ar yez eman ar feiz, rak warlerc'h ar bed-man ez eus eur bed all hag ar broiour n'int nemet eur furni hag a dremenno evel an holl furniour all. Warlerc'h an holl, eman ar Vicher, benveg roet d'an dud evit maga o c'horf. Ene, spered ha korf, eno eman an den hag eno ivez eman peb emzao rik.

Ar Feiz hon laka par d'ar re holl o deus an hevelep kredeinn ganeomp, daoust ma teu ivez natur pep broad tud da rei da Zoue eur veuleudi dishenvel e meur a zoare. Ar Vicher, en hon amzer ma var techet d'en em vaga, d'en em wiska, d'en em loja, en hevelep doare, dre holl, a zo deut da vezan eur falz êre etre ar broiour, en eur ziverka, a damm da damm kement a-ra d'ezo eun dremm dishenvel. Ar Yez, hag eo, 'vit ar muian skeud natur pep Gouenn, ma c'heller lavaret ivez « ar yez eo ar oulenn », hounevez eo gwriazienn an dishenvelidijez yac'h ebarz ar bed ; e kement ha ma c'hell bezan dishenvelidijez etre daou zen hag o deus, — forz pebez kemma vefe etrezo, — ene, korf ha spered, ar yez eo hen diskouez hag her merk ar sklêra.

Ar yez eo hadenn ar broadeleziou ha n'eus nemeti; eur wech m'eo mouget, ar Feiz, ar Vicher a unano muio'h-mui ar pobladoù; n'int ket grêt, nemet da heul vertuz ar yez, evit lakaat kemm eus an eil bro d'eben.

Ma ne dle ket eun emzao rik lezel a-gostez na feiz na micher, war ar yez eo e tle, atao en em harpa, ma tenn da viret d'eur vro he dremm, he natur.

Bez ez eus tud hag a lavar penôs en hon amzer T. S. F. ne dleer ket ken miret disparti etre ar broiour, rak an dra-ze a 'zo kontrol d'ar peoc'h, d'ar « progrès » e tleer eta unani ar yezou, abalamour da unani ar sperejou... Gwasat ma 'z eo touellet an dud-ze hag a zeblant kredi e teu ar peoc'h hag ar garantez diouz ar c'hiz henvel da gôzeal, d'en em wiska!... Gwelit eta en hevelep kêriadenn, en hevelep tiegezh, tud o veva a-gevret, o tibri eus ar memez torz, oc'h ober gant ar memez gerioù, ha n'eus ket, awechou, gwasoc'h enebourien egeto! E yez a zo roet d'an den evel e holl hag e vouez d'al lapous: galloùd en deus an den da chench yez, met n'eo ket evit e vad-ee; n'eo ket en hent-ze e kavo peoc'h ha gwellaenn evit e gorf hag e spered, met o heuilh e natur hag ar c'halvedidijez, — a

zo merket en e yez, en e istor, — gant war c'horre an holl, ar gwir relijion da ren.

Setu, berr ha berr, eur gelennadurez hag a zo, evel pa lavarfen, eul lod eus katekiz an Emzao « Feiz ha Breiz », an hini emeur o plêal gantan er *Bleun-Brug*.

Ar *Bleun-Brug* a fell d'ezan rei d'ar Vretoned tu da adnevezi en o c'hreiz o c'honsians pobl; n'eo ket hervez interestou ar vicher e klask, da genta, boda anezo, met e sell o hano, o galvedidijez, o enor a Vreiziz, e sell o yez, o istor; pegwir eno aman gwriazienn, mammenn, hadenn o broadelez. Kentel ar Yez eo kenta hini 'zo da boueza warni; ar peurrest n'eo kentoc'h nemet eur wiskamant, eun diaveaz; e diabarz, o terec'hel hag o harpa pep tra, eman framm ar yez.

« Dans le groupe social, quel qu'il soit et si étendu qu'on le suppose, la langue joue un rôle de première importance. C'est le lien le plus fort qui unisse les membres du groupe; c'est à la fois le symbole et la sauvegarde de leur communauté (1).

Anat eo; ar yez, anezi hec'h-unan, a zo êre, liamm unvaniez, entent; pa gomzer d'eur bobl en he yez, e roer d'ez ar gelennadurez ar wella hag ar gwella skouer, ma tisklêrier d'ezil, gant ze, ar wirionez. En he yez hec'h unan eo e tle pep pobl bezan kelennet, ha ma 'z eo chomet hi ken berr gant he yez m'eo deut houman da veza eviti eur benveg peuz didalvoud, adstumma ar yez-ze a ranker; anez, n'eus emzao ebet.

Hogen, pep yez he deus daou seurt lusk, keit ha m'eo beo: techet eo da vont gwech war en em strisaat, gwech war en em ledanaat, en em unvani; daou bleg a zo eno hag a stourm an eil ouz egile. Eur benveg, divalo e teu da vezan pa 'z a war strisaat, rak rannet ha adrannet e vez a dammou, betek na zervijfe ken da metra, 'benn ar fin, e genou an dud; — pa 'z a war en em unvani, neuze e kresk ibemdeliz niver an dud-ee eo liamm etrezo hag e teu ivez da vezan uheloc'h, flammoc'h, gwevnoc'h, pindivokoc'h, m'et ma vez gant milieroù ha milieroù a bep seurt sperejou tud.

Ma taolomp eur zell war hor yez; e welomp mat an daou lusk-ze ganti; strisaat a ra, pegwir e kavomp n'ou-zoun ped seurt doare brezoneg; ar re man a laka, eus an eil korn-bro d'egile, an dud da rankout implija eur yez estren evit en em entent; da lavaret eo, an unvaniez en em ziskouez ivez, da stourm ouz an dismantr, nemet a-ziavêz e teu hag eo gwasoc'h c'hoaz d'ar yez eged ar strisa-dennou.

Unvani a-ziabarz a zo ret ober, hag aman va mouez n'eo nemet eun hekleo eus hini an Ao. Vallée ha ne gaver ken nemet ar ger-ze en e skridoù ha war e vuzelloù; unvani,

(1) J. Vendryès, *Le Langage*, p. 282.

dre ar brezoneg, c'houennet ar galleg dioutan, ha stummet henvel diouz an eil penn d'egile da Vreiz-Izel.

Aman, e rankomp ober eur pôz abalamour da boueza mat penôs en em gemeret evit dont a-benn d'ober eur yez hepken e Breiz, da vihana, eur yez skrivet. Vit gwelet sklêroc'h, kemeromp eur skouer hag en em ginnig d'eomp anezan e-unan, skouer hon arc'hant-paper.

Hon arc'hant a zo trec'hel gant arc'hant ar broiou all, ha deut eo da goac'ha kement ma ne dalv ket hor pevar real nemet tri gwenneg hanter, e kenver an arc'hant sôz ha hini an Amerik. Diarbenn d'ezan al lamm diwezan 'zo ret ober, ma paouezo da vont war draon; ober ar « *Stabilisation* », evel ma lavar'er e galleg ha goude, ar « franc » a bounneraio, a wellao adarre.

Troc'ha ar c'hlenved ha, goude, gwellaat ar c'hlanvour setu al labour. Ar starta, vit ar c'hlanvour, eo chom azav da stumm-ouz an enebour. Eur poent a zo ha, diouz ma vo tizet hennez, e tenio an dro da vat gantan pe ez aio da fall. Ezet eo gouzout e ranker lakaat eur skoilh da garr an arc'hant vit na gouezo ket ar « franc » izeloc'h; arabad, aviat, hel lakaat na re uhel na re izel, pe e ve klouz ober metra. Uhel a-walc'h e rank bezan, abalamour d'eomp da c'hellout d'erc'hel penn hep beza flastret ken gant an arc'hant estren; izel a-walc'h, koulskoude, diouz hon nerz, ma ne vezimp ket taget en eur stumm all, ar vuhez o tont da vezan re ger diouzomp.

An daolenn-man a ziskouez d'eomp penn-da-benn stad ar brezoneg pa vez laket kenver-ouz-kenver gant hini ar galleg. Hon yez a zo war nez beza mouget gant ar galleg; ar Vretoned a zo ken boaz da lenn ha da gomz galleg m'eo deut ar brezoneg da vezan, en o genou dister, tano ma ne chom ken, e lec'hioù zo, nemet ar retegou anezan. Skoilh eo red lakaat da harz ar brezoneg da vont pelloc'h war draon hag, evel evit an arc'hant, me gred eo ret ivez ma na vo na uhel ma re izel. (Ne gomzer aman nemet eus ar yez skrivet).

Evel am eus bet lavaret dija e *Feiz ha Breiz*, gouizieien, tud a studi, o deus krouet a-benn-font eur « yez lennek unvan »; (1) da lavaret eo, èt int, *en eul lamm*, d'ar pal a zo dileet da dizout. Lakomp e vefe savet evelse an arc'hant eus a dri gwenneg da bevar real; den n'hellfe beva, ken ker ha ma tenfe an traou, nemet ar vilionerien vras; ar brezoneg lennek unvan n'eo ivez ententet nemet gant gouizieien ar yez; ar hobl munut a rank chom gant... Mut? nann, pa ne intent ket ar yez lennek unvan, e talc'h d'ober gant e labez brezoneg galleget, evel pa ne vefe yez lennek ebet... Re uhel e sko ar ouizieien. Ha koulskoude, mar bez laket skoilh d'ar galleg, e ranker chench penn d'ar vaz? Penôs 'ta en em gemeret? Lavaret va zonj ne

(1) Eur yez lennek unvan: *une langue littéraire unifiée*.

rin ken, met va zonj a lavarin, fall pe vat, evel m'eman, o *pedi ar re all d'ober evel-down*.

Evit salvi ar brezoneg, e kredan eo red kregi pe d'erc'hel da skriva ar rann-yezou. Neuze eta, n'eo ket war unvan ar yez e fell d'eomp mont? Eo, met a gammejou bihan; nann en eul lamm zañh hepken. Ni eo berr war hon spar-lou ha berr ivez hon divesker; evel ar vugale vihan, eo ret monet ganeomp gorrek ha skeudik; ret eo d'eomp deski kerzet arôk ober lammou... Unvaniez, avat a lakfomp en hor rann-yezou, dre zoare-skriva ha dre c'houennaat ar gerioù gallek. Goudeze e krogimp da binvidikaat ar yez dre c'herioù tennet eus pep rann anezan, doareou-lavar, ereadur unvan hag all. Ni wel du-ze, en uhel, evel en eur baradoz lintrus, skouer ar yez da zont; warzu eno e kerzomp; nemet eo ret d'eomp kemeret hon amzer.

Arsa, gouizieien, c'houi lavar d'eomp: « Eun druez eo gwelet pegen mebeut a dra a chif ac'hanoc'h etrezoc'h, Tregeriz, Kerneviz, Leoniz! Unan ne fell ket d'ezan lenn: *ankounac'haat, d'eoc'h, bioc'h*, — met *ankouat d'ac'h, beuc'h*. Hogen, me her goulen diganeoc'h, ha n'eo ket ze eun dister dra? Ha n'hellfer ket skriva evit an holl an bevelep doare! » D'am zro, e lavarin d'eoc'h: An dister dra-ze, ha traou all henvel, ma ne gavet ket mat asanti ganto e stumm ebet, arabad d'in mont en ho eneb; ne c'houlenman nemet o c'houzanvfech eur pennad ken na deufont da goueza anezo o-unan, ar pezh a zo c'hoarvezet dija evit meur a hini.

Kaset em eus betek hen an tamm studi-man, — ha pedi a ran re all gouizieiekoc'h ha speredekoc'h egedon d'her c'has pelloc'h, — rak eun niver mat a dud a zo hag a gred eo deut ar c'houz da bega startoc'h-start el labour evid ar Vro, hag holl e sonjont ma 'z eus eur benveg a-zoare evit ze, eo eur gazetenn. Setu ma 'n em c'houlenner dioustu e pe yez e vo skrivet, pe e galleg, — pe e brezoneg, — pe e galleg hag e brezoneg; ha ma vez diouyeziek, da be yez e vo roet ar renk kentan hag al lec'h franka. Sklêr eo gouzout e vo respont pep hini diouz ar stumm en deus da welet war ar pezh a aman araok; ar galleg a drec'h gantan mar pouez war du ar vicher, kentoc'h eget war du ar yez, rak ar yez a zo re dister da zezreveñ holl zoareou ar vuhez a-vreman. Kaout a raio digarez ivez da lavaret; a-du gant ar galleg, eo re voazet ar dud da lenn ar yez-ze; met boaza anezo d'hen ober a reio muoc'h-mui; ahendall, seurt komzou a denn da dronc'ha krenn gwri-zienn an emzao. Da betra e talc'homp d'hon bro, ma n'eo ket abalamour ma ro d'eomp eur vuhez hag eur gened dishenvel diouz re ar broiou all? hogen, ar wrizienn a gement-se eo ar yez.

War va meno, gazetenn eun amzao *broadel*, forz pegen izel e vefe doare ar yez, n'hell ket bezan skrivet penn-da-

benn, nag al lodenn vrasa anezi, zoken, en eur yez estren; na gomzomp ket neuze a emzao broadel.

Skrivomp hi e galleg, mar sell hepken ouz eul lod eus an emzao-ze, evel ar vicher; — met ez-eün d'ez, r'hon do eun tall e yez ar vro, da c'hortoz ma vo gallet kaout an hini hon deus c'hoant hag a zello ouz an emzao penn-da-benn, hag a vo skrivet ivez penn-da-benn e brezoneg.

E.-A. MOAL.

ROUE AL LAZ

An heol en doa savet e benn dreist ar run hag e vannou a goueze war an teir bandenn oc'h en em zrailha ouz toull ar vêreri, diou vandenn ar Re C'hlas, kelc'hiet ganto seittek den ar C'hloareg ha Tinteniak, ha lazet dija pe gloazet an hanter anezo; — war Gevareg, an Tokous bras hag o seiz ha hanter-kant den, holl armou etre o daouarn, o tiskenn d'an daou-lamm gant ar run; — war ar blokadig tud chouchet du hont e harz ar c'hleuz, ar mêrer, ar c'hure hag ar merc'hed; — ha war Gadiou vras o vont d'an nij, da gaout Kevareg..

Betek ma c'hellje Tinteniak stourm eur pennadig c'hoaz, abalamour da harz ar Re C'hlas da dec'hel, abalamour d'oberc'hel eno ken na vo digouezet an hanter-kant a bôtred vat a zo da heul Kevareg! E vezint neuze seiz pe eiz ha triugent ouz eur c'hant; a walc'h eo.

Kevareg en deus roet e urzou en eur redek hag e weler lod eus e dud o skei a-dreuz ar parkou, drek kein an emgannerien, da vont da droc'ha ouz ar Re C'hlas an hent bras a ya warzu Lanuon. Ar re all a zo kerkent er gann, kuit da denna; a dol fust fuzuilh ez eont, evel war eul leuriad ed. Hag evel pa gouez freilh pounner eun dornner bras war al leur, e tregern an hekleo a bell gant ar sklok, evelse e kresk ar youc'h, ar safar, ar yudadennou, ar c'hlemmou, pa gouez taol Kevareg e kreiz al laz. E bried a zo etre daouarn an dud-man! Goude bezan lazet e vamm, piou oar hag-en n'o deus ket muntret c'hoaz ar plac'h keaz! Oh! nag e karje bezan e-unan-penn da blada anezo holl dindan e daoliou! Ar re ne gouezont ket dindan e daoliou a zo laeret digantan!! Spouronnu, mantrus, estlammus eo, e kreiz an argad, gwelet eun den ar seurt-ze hag e lavarfed eman ar gurun etre e zaouarn.. Ne weler ket e daol, hag an dud a gouez endro d'ezan, brevet, mouget, gwasket, pladet gant e zaouarn, gant e dreid, gant e gorf a-bez a zo 'vel eur volod hag a ra tro an emgann en eur rei ar maro dre holl... Tan ha kurun! Nemet e vezint holl astennet aze, kement hini zo anezol!

O kastiz! pegen c'houek diskarga e gounnar war an dud milliget-man! Ar re-man ne lazfont ket ken a wragez! Ne lazfont ket ken a veleien!!

Paouez, Kevareg, ne chom ken hini ebet en e zav, hag ar bôtred all a zo manet, abaoe eur pennadig, sabatuet da zellet ouz o mestr. An Tokous hag ar re a oa ét da droc'ha hent Lanuon ouz ar Re C'hlas a zo diredet pa welont ne deu den da glask trabas outo. Mantret ivez e sel-lont ouz an dornner bras hag ouz al leuriad en deus astennet endro d'ezan... Kadiou eo kentan hini a deu ar gomz d'ezan::

— Deue d'az pinnigo, Kevareg! emezan. Piou a dostaio ma ne dorr ket d'it?-

Mouez Kadiou a reas d'heman trei e benn ha chom a-zav:

Sovetaet ez peus anezi? emezan:

— Deus ganin! eme ar mevel.

Piou a oa eno c'hoaz, barrek da gerzet, hag a redas war o lerc'h? Ar c'hloareg, e vrec'h dehou e pign outan, bet morzet gant eun tól fust furzuilh; an Tokous bras, yac'h-pesk, pa n'en doa ket eun tól da skei ha n'ouzon ped all; ar ganfarded ivez, ar Gwinver ha Penglaouig hag a oa bet krapet gant ar spont war beb a weznenn da welet ar gann. Breman, e oant prest da vale adarre.

Ar merc'hed, ar mêrer, an ôtrou kure a oa bepred en hevelep lec'h, eur c'horf maro en o c'hichen. Piou e oa? Den me oute eus ar re ar re a rede war o zul.

Kadiou a bike e galon anezan, gwasoc'h vit ne ree e kreiz ar gann, a dra zur.

Arru int, Kadiou a dosta, da gentan, gwad ha labez holl, e zilhad e mil damm. Eun tól-lagad hag e anavez e bried maro. Ne lavaraz grik, nemet koueza eus e zav-sounn, evel eun dervenn troc'het gant tól diweza ar vouc'hal. Ar Re C'hlas o doa e ziskaret, evelkent!

Ne oa ket maro, avat, ha ne varvas ket.

Eiz deiz goude, marc'heg Tinteniak a yee en hent 'tre-zek Bro-C'hall, ha ne oa ket e-unan. E oa gantan Kevareg; heman en doa goulennet pelec'h e kavje tu da laza ar muian a Re C'hlas, hag ar marc'heg en doa respontet:

— Deus ganin; me az kaso daved unan hag az lakaio war o hent ken alies hag ez pezo c'hoant.

— Piou?

— La Rochejaquelein!

— Deomp eta, eme Gevareg, rak ma renkan paouez d'o laza, e varvin!

Hag ez ejont en o roud, o-daon.

DIR-NA-DOR.

MAMM AR MARTOLOD



Ma mab a zo bet kollet war ar mor er bla-man. Bi-



ken ken ne vo kavet, ha bepred hen klaskan.

Ma mab a zo bet kollet war ar mor er bla-man;
Biken ken ne vo kavet, ha bepred hen klaskan.

Bep heure, e-tal an ôd, me ya 'vit hen kaouet
M'her goulenn ouz ar mor dou: ar mor ne respont ket.

Me ya da gorn ar vered 'lec'h eo beziet ma zud;
M'her goulenn ouz an douar: an douar a chom mud.


Nag ar mor nag an douar n'o deus d'in respontet.
O Doue! ne welin ken ar mab am eus ganet!

C'houi 'poa, Gwerc'hez truezus, korf ho mab da bokat,
Hag eur be ho poa ive 'n ho kichen d'hen lakat.

Pa vin ét deus ar bed-man, ma c'herent, me ho-ped,
Na zougít ket ma c'horf paour e-nnan d'ar vered.

O! dougít ma c'horf d'ar mor, an de ma vin maro,
O! dougít ma c'horf d'ar mor, an de ma vin maro,

DIR-NA-DOR.



Eskopti Kemper gwechall

Laret 'zo bet eur wech c'hoaz er bloá-man, 'barz Feiz ha Breiz miz Meurz, eo bet savet Kerne Breiz-Izel gant daou rummad tud deut deus Breiz-Veur. Ar re genta 'oa potred « Kornubia », eur peziad douar eus kreiz Breiz-Tra-mor, etre steriou ar Savern, an Aven, an Deg hag ar Mersey. Ar re all a veve war riblou Ster-Tyn. Eno e oa eur ger a raed Corisopitum anezi, e latin. Kemper ive, e latin, n'he deus bet ken ano nemet hennez. Wardro ar bloaveziou 470-475 e tiskennas an dud-man war ôchou Ster-Odet. E penn ar vandennad vrasa anêo e oa ar roue Gradlon Meur. Diouz ma lavar al Ievriou koz, ar brezelour-man eo an hini eo bet savet, difennet, reizet gantan Kerne an Arvor.

Potred Corisopitum evit derc'hel sonj eus o c'her a oa du-ze en tu all d'ar mor a-ramp war an diou ster, Tyn ha Korbun, a zibabas da zével o c'her neve an takad ma teu ennan Ster-Odet hag ar Steir da veska o dour. E giz-se e teuas Kemper da welét sklerijenn an dê.

D'ar mareou-ze e veve, barz koad bras Nemet (*sylvania Nemea, Nemenio*), hizio koad Nevet, eun den santel, Korantin e ano. Diouz ma lavar an doktor Picquenard deus Kemper, ar c'hoad-se 'oa bras-spountus gwechall goz. Mont a ree dre ar Meneiou Du da gaout Koad Laz, koad Toull al Laeron ha koad bras Konyô. Eus tu ar c'hreiste e teue tammou dioutan beteg ar Steir. Deus koste Plo-neve ar Porzay, Ploeven ha Ploudiern e c'helle an den mont gantan 'hed diou leo bennak. 'Benn warzu Beg ar Raz, e iee eur filadennig anean en eur strisaat ato, trezeg ar mor. Hizio an devez, ar c'hoad n'eus ken diandannan nemet 800 devez-arat. Da amzeriou Gradlon e oa dioutan eun daou vil bennak. Koad an Dug a oa neuze stag outan. Ar Roue en devoa eur blijadur 'vas kenan kenan, o vont d'ober abadennou chase dreizan. Eun devez

e tigoueas gantan hag e dud koll o hend. O troi hag o tistroi dre ar c'hoad ec'h en em gavas a benn ar fin dirag lochenmig Korantin. Ar chaseourien oa dare d'eo chel-pel gant an naom hag ar zec'hed. Goulenn a rejont digant ar zant eun draig bennak da chioki. N'en doa nemet eur pesk ebars e feunteun. Mont a reas goulskoude d'e baka, e droc'has dre an hanter; e tōlas eun tamm war ar belemn hag an tamm all e barz an dour. Setu ar pesk yac'h pesk adarre hag e lost en dro! Korantin e c'heme-ras eun eil gwech; daou damm egiz a-raok! Ne ehanas gant ar c'hoari se nemet ken n'en doe bet peb hani e walc'h. Ar Roue neuze a ginnigas seiz mil dra d'ar zant. N'en doa siouas netra mat a walc'h evitan hag e voe rêt d'ean mont kwit, dle bras warnan.

Eun devez goulskoude e kavas an tu da baea Korantin. Laket en doa en e benn kaout eun eskob da entent ouz e zujidi. Ne reas ket diou zonz. An hani oa gouest da vaga eur roue hag e zoudarded gant eur c'hoz peskig, a vije den a walc'h ive evit maga eur vroad tud gant bara ar feiz hag ar relijion. Setu digaset Korantin da Gemper kentoc'h dre heg eget dre gaer. Ar roue a anzavas outan e zonz, hag her c'hasas da gêr Tour da zigemer an eskobiaz dre zaoarn eskob bras ar ger-ze.


Sant Gwenole, abad Landevenneg, mignon bras da C'hradlon, a boanias kalz ive da skigna, dre ar Vro, Feiz Jezus-Krist. E ziskibien a reas dourn d'ean en eur zavel, eun tamm e pep lec'h, manatiou bihan stag ouz abati bras Landevenneg. Idunet, e Kastellin; Gwenegan e Beuzit, Balay ha Martin en Irvilhac ha Bannaleg, Dei e Lothey, Wigon e Tregourez, Rioc e Lanriec, Tanvoad e Korre, Rasian e Tourc'h hag e Skaer.

Landevenneg en doa Grallon da welet warni. E zouarou a iee d'an Nec'h beteg Ster-Elorn ha Menez Arre, eus tu ar Zao-heol beteg Ster-Elle, pegwir Sant Gunthiern en devoe digantan tachenn an Aourod elec'h ema hizio Kemperle. Deus an tu-se e oant-stok eta ouz Bro Weroc, eus koste an avel-vis, avat, Bro Gerne a bigne etre Ster Blavet ha Ster Oust, hag a gase he beg beteg kalonenn an Arvor.

E tu an Hanter-Noz, Keraës ha bro Poher a oa dindan eskob Kerne; ar roue, avat, n'eo ket anat, en dije o reizet nemet dre heg e vije bet.

Ne rae ket diouer al labour da Gorantin evit kas kelou mat an aviel d'eur vro ker frank. Sevel a reas perreziou ha kas a reas an ofisou enno en dro. Ar roue a felle d'ean e zigoll eus e boan; roi a reas d'ean evit bennoz Doue Kemper, traou ha tachenn hag all, an douarou a skoe war gêr hag al leve en doa 'barz Korre ha Kap-Sizun, nemet bet en defe bet kemend-man digant tudchentil ha pen-nou bras ti ar roue eun tammig amzer goude.

E amzeriou Nomenoé, roue Breiz, e oa kleuniet, klozet mat en dro d'eskohti Kerne. Ne vo laket na tennet diou-



tan ken na darzo an dispac'h. Epad ar Grenn-Amzer, e oa anean 173 parrez ha 90 treo, 8 kouent gant eun tad abad, 17 gant eun tad prior, 2 iliz gant chaloned.

Setu amañ, an eiz abati: Landevenneg, Daoulaz, Langoned, Santez Kroaz Kemperle, sant Moriz Karnoët, Lok-Maria Kemper, Koetmalaouen ha Bourepoz.

An Eskohti a bege en Nec'h gant Mor-bihan Brest, a heulhie Ster-Elorn beteg Landerne. Goudeze en eur ziskenn e tu ar Zao-heol, e iee gant al linenn a ra Dirinon,

(1) « Grenn amzer » moyen-âge, arôg ha goude ar bloavez mil eun nebeud kant vloaiou benag.

Irvilhag, Sant Allar, o trei e biou parrez vras Plouziry hag e zreved tolet e Leon. Neuze e pigne war beg Menez Arre, e kloze Braspartz, Botmeur, ar Fouilhez, Berrien, Skrignag, treo Bolazeg, Kalamhel, Kallag, Bulat, Pesti vien gant e iliz kaer hag e bardon brudet, abati Koet malaouen, e tremene dre draon (mervent) (1) Sant Brieg da dapa Ster ar Zeff ebarz penn e feunteun ha douarou Kintin. — Goude e tiskenne gant ar Ster-Oust hed-hed beteg Hemoustoir, hag e pike e veg da gaout Pontivy. Ac'hano e teue, gant Ster Blaouez da baka Mur, abati Bonrepoz, Gouareg ha Rostremen. Etre Glomel ha Plouaray, e skoe beteg penn-uhela Ster-Elle, hag e heulhie goude neuze ar ster beteg ar Mor, dre C'hourin, ar Faouet, Gwiskrif Kemperle ha Beg-al-Laita. Eur fazi zo war ar gartennig aman da heul. Rak krennet eo bet ar peziad bro a zo etre Ster Oust ha Ster Blaouez gant ker-vraz Korlay, zo hizio eun tamm anez da eskopti Sant Brieg eun tamm all da eskopti Gwened.

Ebarz Eskopti Kerne e oa nao berson bras 1) Hani ar Faou, en doa da welet war ar vro a zo e tu ar c'hez-heol eus Ster Aon (1); 2) hani ar Poher, e tu ar Zao-heol eus ar Ster Aon da gaout ar Ster Oust, gant Keraez da ger-benn; 3) hani ar Porzay, eus tron Ster Aon beteg ar Mor gant Kastellin, Kraon ha Lokornan; 4) Person bras Kap-Sizun, d'ean da welet war ar vro a ia da skoñ war ster Pont-Kroaz, gant Beuzeg da ger-benn; 5) Hani Kap-Kaval, a bae etre ster ar Pont, Ster-Odet hag ar mor, gant Pont-nabad ha Penn-marc'h: Beuzeg Kap-Kaval oa ar ger-benn; Hizio eo aet d'an traon, n'eo ken memet eur chapel eus parrez Plomeur; 6) Douar-an Eskob dindan Otrou 'N Eskob Kemper; 7) Person bras Konk gant Fouenant ha Rosporden; Beuzeg Konk ar ger-benn; 8) hani Gourin gant Gourin hag ar Faouet; ar peziad bro ze a stoke eus tu ar Zao-heol ous Ster-Elle; 9) Hag evit achui douar Kemperle etre Ster Elle hag all Laita.

En devez hizio, Eskopti Kerne eus peder lodenn en deus kollet unan. Douarou Kallag, Rostremen, Mañ Keraez, Mur (Breiz) zo bet staget ouz Sant Brieg; re Gourin hag ar Faouet zo aet gant Gwened.

An Dispac'h, e 1789, en deus bannet d'an traon an eiz abati. Landevenneg, Daoulas, Koetmalaouen ha Bonrepoz zo bet pilet holl, rac'h (1) Langonnet vez gret skól enni. Santez-Kroaz a zo enni beleien, barnerien archerien, paperiou ar gommun, peb hani en e gorn. Sant Moriz zo aet da vaner, ha Lok-Maria Kemper, da gazern. Chaloned Keraez ha Rostremen ne weler mui liou anezo pell 'zo.

Eus eun tu all, neuze, eskopti Kemper zo bet kresket

(1) Mervent, sud-ouest.
 (1) Ster Aon, la rivière l'Aulne.
 (1) Pilet holl rac'h: complètement rasé.

gant hani Leon ha douar Lanmeur ha Plouignô, stag gwechall ouz-eskopti Treger.

Skrivet em eus an traou-man evit digori ho taoulagad, pôtrede Kerne, war istor ho pro ha leve koz sant Korantin. Ne 'vo ket pell Ker Gemper a dregerno gant kleier bras an Iliz-Veur hag e vo grêt adarre gouel bras da genta eskob Kerne. Dalc'homp sonj en de-ze da bedi hor patron benniget, da gas da vat kemend tra a zo tost d'hor c'halon er bed man ha da n'em gaout er Baradoz e kichen tud koz hor bro o deus grêt abenn-breman eun treuz mat d'ar bed all.

G. M.

FEIZ HA BREIZ, gand ar bloaz nevez, a vo digaset ennan eleiz a wellaennou. — Ra deuo eta pep hini eus e lennerien da glask eul lenner nevez: **Setu, kenvroiz ker**, ar pez a c'houlennomp ouzoc'h evit hor c'halanna. **Ni labouro da gaerât hor c'hannad; labourit, eus ho tu, da gaout gwerz d'ezan muioc'h-mui.**

**KEMERET-HEP REI
 A LAK AR GARANTEZ DA DREI.**



Ar wreg. — Pegementa rooc'h d'in evit va c'roc'hen kouiin.

Ar pilhaouer. — Gortozit da genta ma wellin petra daly al lur er heure-man. Gouzout a rit ervat, talvoudegez an ar-c'hañt-paper ne vez ket daou zervez henvel.

An Aotrou. — An ti a gavan diouz va doare, met klevet a ran ez eus kalz laeron dre ar vro.

Ar vaouez. — O! an Aotrou hag an Itron a c'hell beza dienkreuz rak al laeron a zo bet dec'h hag en hent-se ez eus fred arak ma tizroint ken.

Ar mervour. — M'hen d'asur d'eoec'h, aotrou, ma ne rit ket enn tamm kompenn d'ho ti, e kouezo war hor c'hein dizale!

Ar mestr. — Neuze marteze, da vihanan, a vo gellet ho lakat da vont kuit pelloc'h. N'am bo ket kalz a genz d'eoec'h.



MIKAEL AN NOBLETZ

Mikael an Nobletz e Konk-Leon hag e Lok-Maze Penn-ar-bed

Eus Enez Vaz e teuas da Lok-Maze-Penn-ar-bed. Eno ez oa, endro d'ar manati, eur geriadenn vras awalc'h, hag eul leo eus tu an hanter-noz, Konk-Leon, a oa d'ar mare-ze eur

porz mor pinvidik meurbet. Bagou bras a gemm-werz a veze gwelet ennan, betek kant awechou. Ar bagou-ze a rae kemm-werz gant porziou Frans hag ar broiyou all, evel Bro-Zaoz hag ar Spagn. Etre Lok-Maze ha Konk edo bourc'h Lokrist, hag eno edo an iliz hag ar vered. Ar vered a zo hirio ato e Lokrist.

Eus Konk betek Lok-Maze ez oa tiez e pep lec'h, hag hervez an Tad Maner, war ar c'horn-douar-ze ez oa, e amzer Mikael an Nobletz, eun ugent mil den bennak, eun tamm mat muioc'h eget hirio.

Ar brezelion gand ar Zaozoun a rivinas Lok-Maze ha Konk, hag hirio n'int netra e kichen ar pezh m'oant gwechall.

Mikael an Nobletz a glaskas da genta anaout ar vro, anaout an dud, o doare beva, o gizioù fall pe vat. Ne voe ket pell evit gwelet oant dishenvel bras diouz tud an enezennou, Eusa, Molenez ha Baz. Ar binvidigez peurlies a zo noazus d'ar zantelez. Tud Konk a c'hounenze kalz arc'hant dre ar c'hemm-werz hag o c'halon a oa stag ouz madou ha plijadurezioù an douar.

Ar misioner, heb aon ebet, en em lakeas da brezeg d'ezo an Aviel ha da rebech d'ezo o gizioù fall. Komz a reas eneb an avaristed, ar garantez direiz evid an arc'hant, hag e tizoloe an troiou kamm, an displeaded, ha ive krisder ar re a breste arc'hant d'o breudeur war gampi o c'houlenn kalz re a interest, a zigoll. Rebech a rae d'an dud a lezenn o ijin diaoulek da lakat ar prosezou da badout, evit tenna muioc'h a arc'hant digand an dud. « Henvel oc'h, a lavare d'ar re-ze, ouz medesined a lakfe eur gouli, eur c'hlenved da badout evit kaout

brasoc'h pae. » Gourdrouz a rae an dervezerien a golle o amzer pe ne labourent ket mat. Hag an dudjentil, an duk pinvidik a gleve ive o gwirionezioù p'en em ziskouezent didruez e kenver ar re a veve dindanno. « Ma kendalc'hit da wallgas ho tud evel ma rit ez eoc'h d'an ifern: eur c'hanval a dremenfe buanoc'h dre doull eun nadoz eget n'ez eot dre zor ar baradoz. »

Ne esperne ket zoken an dud a zaremprede an iliz, met n'oant nemet hanter-gristenien, a veze gwelet o vont a bell da bardona, betek Rom ha sant Jakez a Gompostell (er Spagn), met a oa lezirek da zeski o relijion, dizentus ouz gourc'hemennoù Doue hag an Iliz, henvel ouz ar Farizianed gwechall, a dole evez ouz an traou bihan, an neuziou, an orbidou, hag a bec'he en o c'halon. Re all a lakee kalz oferennou ha servichou evid eneoù ar Purkator, met evito o-unan ne zontent ket en em ziwall diouz ar pec'hed a vir ouzomp da vont d'ar baradoz. Re all c'hoaz a veze gwelet o rei aluzennoù d'an iliz, o sevel chapelioù nevez, met ne baent ket o idle, ne roent ket o c'houmanant d'o zervicherien. Lod a yune da zadorn hag a jome hep debri kig da verc'her, met a zispenne o nesa ha zoken an dud vouestlet da Zoue. Ar misioner a lavare d'ezo oa gwelloc'h yun a galon eget a gorf, gwelloc'h dilezet ar pec'hed eget eun tamm boued.

Allia a rae ive ar veleien da labourat muioc'h evid an eneoù, da implija mat o amzer, da zistaga o c'halon diouz madou hag enorioù ar bed-man, da gelenn mat o farresioniz, da studia ar skianchou sakr.

An holl, evel a weler, a gleve ar wirionez. N'eo ket souezus en dije Mikael displejet da dud Konk. Ar re man a c'hoantae klevet komzou troet brao, nann gwirionezioù kalet. Pa bigne er gador, e veze gwelet kalz eus an dud o vont er mez gont trouz: « Setu adarre ar beleg foll, emezo. Da betra eo deuet aman? Ne oar ket pe tra eo kemm-werz, ne gompren seurt en traou-ze. Daoust hag hor beleien n'int ket ker mat hag hen? Ha goulskoude ne reont morse d'omp rebechou evel ma ra heman. Ret e vije difenn outan da brezeg. »

Evelse e veze lavaret.

Er penn kenta Mikael an Nobletz a voe digemeret e ri eun intañvez santel, Franseza Troadek, o chom e Lokrist. Houman a anaveze mat peger zantel oa ar misioner, pegen desket, pegen troet d'ober pinijen. Pa gleve an dud o lavaret n'oa nemet eur randonenn, eun hunvreer, eur penn fall, e denve gand ar boan he deze. « Eun den, emezi, ne ra nemet vad d'an holl! ne c'houlenn ket eur werennad zour evid e bae, a ya da welet ar re glanv d'o ziez, a ro gwenneien d'ar vugale a zeski mat o c'hatekiz! Penos e c'heller lavaret hevelep traou diwar e benn? »

Eun deiz an intañvez, poaniet muioc'h eget biskoaz, a lavaras da Vikael e kolle e boan hag e amzer etouez tud

ker fall, ken dianaoudek. « Ret eo kaout hiabaskded, emezan. Doue a c'hoanta e ve gret evelse d'in. »

Tud Konk a gendalc'he eta d'ober kemm-werz, da garga ha da ziskarga bagou, da c'houit arc'hant. Da zul ha da c'houel, goude beza klevet eun oferenn, hag ar verza, ez aent da bourmen, da c'hoari. Debri a raent pre-jou mat hag e lezent Mikael an Nobletz da brezeg dirag an hini a vije sod awalc'h da vont d'e zelaou.

Mikael no'a ket eun den da goll fizians ha da fall-galoni evit gwelet enebiez endro d'ezan. Konkiz ne fell ket d'ezo e glevet: hen a yelo d'o c'hask d'o ziez. Evel m'oa gouiziek war an holl skiaouchou, e komze d'ezo diwarbenn o micher, ar broiou a rae kemm-werz ganto, an doare d'en em hentcha war vor en noz dioc'h ar stered. Hag a greiz holl e kave tro da lavaret eur ger bennak diwarbenn karet ha servicha Doue.

A nebeudou unan bennak a gredas mont da di Vikael, da c'houlenn kuzul digantan. An hini a veze bet eur wech a zistroe hag a alle e vignoned da vont ive. Holl e vezent gounezet gant gouziegez ha dreist-holl gant madelez ha santelez Mikael.

Gwellat a reas an traou, ha pa welas edo an dud o trei ouz Doue, ar misioner a skrivas d'e c'hoar Mac'harit dont da Gonk d'e zikour d'ober katekiz. Senti a reas kerkerent. Edo o tont eus koll-be zad, hag e c'hellas lavaret d'he breur pebez maro santel en doa bet.

Mac'harit an Nobletz a gavas eun tiig soul etre Konk ha Lok-Maze, evit ma vije gallet aesoc'h digas d'ezi ar merched bihan da zeski katekiz. Plijout a reas buan d'an dud, a jome souezet o welet eur vaouez eus he renk o tizezel pep tra evid ober katekiz da vugale vihan. Gouzout a rae an doare da zisplega skler gwirioneziou ar relijion, d'o deski d'ar re vras kerkouls ha d'ar re vihan.

Franseza Troadek, an intañvez a roe digemer da Vikael, a zikouras Mac'harit. Eur vaouez desket bras oa; evel kalz tud eus Konk, ec'h anaveze, ousspenn ar brezoneg hag ar galleg, ar saozneg hag ar spagnoleg. Mikael an Nobletz a zeskas d'ezi eun dra kalz talvoudusoc'h: an doare da hentcha an eneo war hent ar zilvidigez. Franseza Troadek a voe e Konk, evel Franseza a Gizidik e Montroulez, mam ar re baour. Gwelet a rae an dud klanv ha beilha gand ar re a veze war o zremenvan; goude o maro, e sebelie anezo. A-unan gant Mac'harit an Nobletz e rae katekiz d'ar merched bihan, ha den ne c'helle lavaret pegement a vad a reas an diou vaouez-e.

N'e ket hepken e Konk e laboure Mikael an Nobletz, met ive er parrezioù tro war dro. A-wechou e pigne en eur vag hag ez ae betek gwelet eun tour bennak, hag e touare. Mont a rae eus eur vourgadenn d'eun all, gwech digemeret mat, gwech digemeret fall. Ar bersoned aketus gant mad an eneo fiziet enno, eme an Tad Maner, a roe

d'ezan pep frankiz da labourat en o farrez. Met re all a zarre an nor outan, a roe urz d'ezan da ziskenn eus ar gador. Pa ne c'helle ket prezeg en iliz, e vode an dud er mez, e kichen eur groaz bennak, hag eno e rae katekiz.

Distro da Gonk, ec'h en em roe d'ar bedenn evit kaout eun nerz nevez. Tremena a eure eur bloaz en eul lec'h distro, e kichen Lokrist, hag e vevas eno evel m'en doa gret gwechall e Tremenaoc'h; me gwitae nemet evit lavaret e oferenn, kovez ha prezeg. Eur potr bihan a zigaze d'ezan bemdez e voued, pourchaset gand e vignon, Guilhou Breneol.

Divezatoc'h e teuas ive alies, goude e visionou, da Lok-Maze, tost d'ar mor bras, e kichen ar manati, hag ec'h en em denne en eur c'heo tro ouz ar mor hag e chome daou ugent dervez da bedi ha d'ober pinjenn. Goudeze e veze krenvoc'h da staga adarre d'al labour ha da c'houzanv ar poaniou a bep seurt a goueze warnan.

Gwelet hon eus leziregez tud Konk. Gwelet hon eus ar veleien e meur a lec'h oc'h enebi outan. Arabat kredi e vije, abalamour da-ze, ar veleien-ze beleien fall. Mikael an Nobletz n'oa ket c'hoaz anavezet mat. Ne rae netra evel ar re all, hag ar bersoned a c'helle lavaret n'oa doa ket ezomm anezan. Meur a hini a grede ar pez a veze lavaret gand an teodou fall, oa eur beleg foll, di-boell, gouest da zireiza spered ha penn an dud.

Unan bennak a yeas pelloc'h hag a gasas da Gastel klemmou en e eneb, o lavaret oa poent difenn outan prezeg. Eus an eskopti e voe graet d'ezan rebechon.

Mikael ne glaskas ket en em zidamall. « Hor Zalver, emezan, n'en deus ket bet ezomm da veza difennet. »

Ma 'z oa tud enep d'ezan, ez oa re all troet gantan; hag eul lizer a zigouezas e Kastel da zisplega ar wirionez ha da ziskouez n'oa nemet meuleudi da rei d'ezan, oa eur beleg desket bras, santel, entanet e galon gant karantez Doue hag ar c'hoant d'ober vad d'an eneo.

Vikel vras Kastel ne dennas ket digant Mikael an aotre en doa bet da brezeg ha da govez e eskopti Leon, met lavaret a reas n'en dije mui aotre nemet evid eur barrez hepken, hag e rankfe goude eun aotre nevez pa zafe d'eur barrez all.

Ar vikel vras, war a gonter, ne zalc'he ket koun eus ar pez en deze gret, ha Mikael, o c'houzout an dra-ze, a c'houlenne aotre evid eur barrez; eur pennad goude, evid eur barrez all, hag eun all, hag e c'hellas evelse kendalc'her d'ober evel araok.

Epad tri bloaz (1611-1613) e labouras e bro Konk. Da c'houzanv en devoe, met an trec'h a jomas gantan. Araok ma teuz da Gonk, edo ar c'hiz da gommunia eur wech ar bloaz. Mikael a zeskas da dud Konk kommunia alies, mont d'an oferenn war ar zizun, ober enklask er goustians, lavaret ar pedennou en tiez, lenn, goude koan. eul

levr santel bennak. O farea a rea ive eus ar c'hiz fall o doa da doni. Pa gleve eur bugel bennak o toui, e roe urz d'e gastiza gand eur vialenn; ar bugel, goude beza kastizet, a zouge ar vialenn war e skoaz hag a rae an dro d'eur groaz vras. An dud a zirede da c'houlell petra a oa a nevez, ha Mikael a ziskoueze d'ezo peger fall oa toui, dismegansi hano santel an Aotrou Doue, hag ar gerent, evel ar vugale, en em zioualle diouz ar pec'hedze.



Doghadeth hav en Breten vygan

(trelyes dyworth brethonek en kernuak rag ow câr ha broder kelt ker: Yann ar Gall, bardh Ab-Sulio, den a le-son gans Allin-Collins, Hâl-Wyn, den a Gernow).

En mesk grig ha reden an waren mar dhefeth,
An vugel a-walv 'ga devez dhe vôs dhe 'n lyn;
An mor, en-un-cana war un dôn moroneth,
war drêth gwyn an als a-led e donow levyn.

An ruan, hy sôn mes un dôn, a-rulh hy dour gwyn-hy
Dre an helik, an rôs, an glandour, an losow glas;
An gwiben dall a-greg en jod an gâer mowesy
Hag an cronek a-gan en tol argh glastenen bras.

An heul our yû ow-tesken er murvor dôwnder;
Edhynigow; tég ow-nija entre aga clus;
A ves an park, a ves an ty, gans son an Gwesper,
Hedhough war du Dew askennans pesadow andus.

War forth ketel ha war vor, en waren po en ty,
— Ne vern en lê mayth ens — a grês agan holon trist,
Canen ny en Anjelus, tus Breten a gar pesy,
Marya, ar Werghes Wyn, màm dyner Jhesu-Crist.

Sensen stârt dhe 'n fêth gôth en down agan colonow
Ha prenen clôs 'ga daras erben telyans êrel;
Canen ny en brethonek avel ken agan mammow,
Pa deffens dh-omgama war myn agan lesk ryel.

Loundres, an unak war ugens a vys Est.
En bledhen agan arluth 1926.

HAL-WYN, den a Gernow.

Kerent kristen

D'ho pôted yaouank aet da zoudarded, en deizioù tre-men, lakit kas *FEIZ ha BREIZ*: eun dudi e vo evito e Ienn keit ha ma vezint pell diouz ar gêr. Evit ma tigouezo ganto, bep miz, epad ar bloaz, kasit 12 lur d'an A. *Georgelin*, 4, rue du Château, Brest. — C/C 44-40 Rennes.

Gant eur gartenn ruz-wenn a gavoc'h, e kement bureo-post a zo, ne gousto nemet eiz gwenneg d'eoc'h kas an arc'hant-se; met, lakit an adres fraes, avat, gand a reoc'h.



Eurpardavez hanv e Breiz vihan

(D'am c'hariad Hâl-Vyn, den a Gernow)

E mesk brug ha radenn ar waremm gouelec'hus,
Ar vesaerien a c'halv o saout da vont d'an dour;
Ar mor, en eur gana, war eun ton klemanvanus,
War draez gwenn an tornaod a led e donniou flour.

As stêr, 'n eur hiboudi, a ruilh he dour arc'hant
Dre an haleg, ar raoski, ar glandour, ar yeot glas;
Ar c'hubu (1) d'âll a grog e chod ar merc'hêd koant
Hag an touseg a gan e toull ar pittoz bras.

An heol aour a ziskenn er morveur (2) islonkus;
An evnigou bihan a dec'h 'trezek o glud;
Diouz ar park, diouz an ti; gant son an anjelus,
Goustad wardu Doue e pign pedenn an dud.

War vor ha war zouar, er warem pe en ti,
— Ne vern el lec'h em-aint-a greiz o c'halon trist,
Pa zon an Anjelus, tud Breiz a gar pedi
Mari, ar Werc'hez Wenn, matam dener Jezuz-Krist.

Dalc'homp stârt d'ar feiz koz e doun hor c'halonow
Ha prennomp kloz hop dor d'ar c'hredennou diboell;
Kanomp e brezoneg 'vel gwechall hor mammow,
Pa deunt da stoji war lezou hor c'havell.

Goueznou, 31 a viz Eost 1926.

AB-SULIO.

(1) C'hubu ou c'hwibu: *moustiques*.
(2) Morveur ou meurvor: *océan*.

KELEIER AR MIZ

An Aotrou Goff

Feiz ha Breiz, er bloaz-man, en deus bet kann war gativ! Goude Glaoda r Prat hag an A. Abgrall, setu m'hon eus gwelet kas d'ar bez an Itron Yung hag an A. Goff.

An itron Yung (Janed Malivel), a oa yaouank flamm c'hoaz, — 31 bloaz — Lan ar Goff, hen, en doa 45 bloaz; ganet e Kerlouan er bloavez 1881, beleget er bloavez 1905, e voe hanvet da gure e Mahalon hag ac'hano e Lambaol Wimiliau. Goude ar brezel e tremenas eun nebeut mizioù e Riec, ha pa n'oa ket ken evid ober e labour, ker fall e oa deuet e yec'hed da veza, e tizroas da Gerlouan; ear ar gear a grenfeas anezan; mont a c'hellas en dro eur pennadig all; rei a reas ar pezh a jome a nerz gantan da skol gristen ar bôtred e Lesneven. Meur a skrid a jom diwar e bluenn; sevel a eure peziou-c'hoari evel *Yann an Tachou koz*, pezh farsus, *an Aotrou Kerlouas*, a voe disklriet epad goueliou *Bleun-Brug* Lesneven, er bloaz 1923.

Skriva a eure c'hoaz eur marvailh leun a ijin hag a spered « *An drouiz meur Laouenan* » hag a zo bet lennet gand an holl.

Breman daou vloaz e stagas da ren Kenstrivadegou ar C'hardinal Dubourg. Berniou paper a veze digaset d'ezan gant Bugale ar C'hatekiz eus pevar c'horn Breiz-Izel; gwas pezh a zo paperou ar bloaz-man n'omp ket bet evid o c'haout c'hoaz kaer hon deus bet ober goulenn anezo, raktal goude e varo hag aoun hon eus ne vefent kollet da vat. Met brasa preder a gemere gant netra oa gant bugale e skol gristen, evit deski d'ezo kelennadurez an Iliz hag evit hentcha warzu an Aoter ar re anezo a gave danvez eur beleg enno. M'en devije bet bet yec'hed an denze en divije graet burzudou.

Doue r'e bardono.

An Aotrou Waldeck

Setu aman ar pezh a skrive d'Otrou person Penhars n'eus tamm 'zo ebet eur beleg eus eskopti Trev en Almagh.

Sarrebürg (Allemagne), 24 octobre 1926.

Monsieur le Curé et bien cher confrère,

Comme j'ai fait mon premier sermon breton dans votre église paroissiale — c'était au mois de juillet 1879 — j'ai l'honneur de vous envoyer un petit souvenir du cinquantième anniversaire de mon ordination, qui a été célébré en l'église paroissiale de Sarrebürg, diocèse de Trèves, le 19 septembre dernier.

J'ai encore un précieux souvenir de feu Monsieur l'abbé Le Guen, un de vos prédécesseurs, qui en ce temps-là était curé de Penhars.

Voici la dédicace de la première feuille de ce livre: 1879. — Al leorig ma zo roët d'an ôtrou Waldek, gant eur mignon evit ma en devezo sonj eus ar guenta preseguen en deus great e brezoneg d'ar 27 Guere en iliz Penharz en eskopti Kemper Franz (France).

Yvonic ar Guen, person.

Je n'ai pas tout à fait oublié la langue bretonne, je dis souvent encore aujourd'hui le Pater et l'Ave dans votre belle langue: Hon Tad pehini zo en Nenv. Me ho salud Mari leun a c'hrâz...

Mon séjour en France avait pour cause la persécution des prêtres de mon pays à l'ère de Bismarck. Après mon séjour à Quimperlé, où j'étais professeur à l'institution Lehir, j'ai été vicaire à Paris, à la paroisse de Saint-Germain de Charonne et, depuis l'année 1883, je suis professeur sup. à l'Ecole Normale de Sarrebürg, mais en retraite depuis quelques années.

Permettez-moi encore de me recommander à vos bonnes prières.

Veuillez agréer, Monsieur le Curé et bien cher confrère, l'expression de mes sentiments confraternels et très respectueux.

L'abbé Waldeck.

Meur a veleg eus an eskopti o deus c'hoaz anaoudegez eus an otrou Waldeck. Eur spered kaer a zen e oa. En eur ober c'houec'h pe seiz devez e oa deut a benn da n'em denn gant ar brezoneg. Divizout a rae ganoc'h, farda a rae d'oc'h eur brezegenn, hep ma vije anat e vije bec'h warnan.

Neo ket roet d'an holl beza ken gouest. Kemend-se pa weler tud estren o staga gant kemend a galon gant yez hon tud koz, o tere'hel sonj anezi du-ze c'hoaz, en o bro, goude keit all amzer, n'omp ket evit miret da gaout abeg er Vretomed-nac'h o gouenn-se, ne brijont ket tostaat ouz beg o zeod ar Brezoneg bet komzet n'ouzon pet mill bloaz-zo gant o zadou en o raok.

Ar brezoneg er skolioù

Lenn a reomp kement-man e « L'Ecole » kannad skolioù kristen eskopti Gwened :

Au récent congrès du Bleun-Brug, un rapport fut présenté sur « La situation de la langue bretonne au pays de Vannes ». A la suite de ce rapport, un vœu fut adopté, demandant que, sans négliger l'étude des matières qui constituent le programme de l'enseignement primaire, les maîtres et maîtresses de nos écoles chrétiennes participent, dans la mesure du possible, au mouvement entrepris dans notre pays pour la conservation de la langue

bretonne. Pour faire écho à ce vœu, nous avons demandé à M. le chanoine Buléon de le présenter lui-même aux intéressés. Nos maîtres et maîtresses qui enseignent dans les paroisses où la langue bretonne est en usage liront avec intérêt ces quelques lignes que M. l'archiprêtre de la cathédrale nous a fait l'honneur de rédiger dans notre modeste bulletin.

Votre école est une *école chrétienne*, — par conséquent qui a comme destination principale de préparer des chrétiens pour la vie en leur fournissant non seulement l'instruction variée qui leur sera indispensable pour leurs obligations sociales, mais aussi les outils nécessaires au point de vue religion, pour s'instruire, se défendre et persévérer.

Pour l'instruction profane vous avez les livres scolaires, et nous nous félicitons de ce qu'on ne trouve plus dans certaines écoles tel ou tel manuel justement réprouvé par les Evêques.

Pour l'instruction religieuse, l'enseignement oral ne suffit pas plus que pour l'étude des matières profanes. Elle exige, tout comme l'autre, des manuels spéciaux, et ces manuels doivent être rédigés dans la langue où se font le catéchisme et la prédication dans la paroisse.

— Vos élèves ont-ils un catéchisme et une Histoire Sainte ?

— Vos élèves (si vous êtes dans une paroisse bretonnante), sont-ils à même d'utiliser leur livre de catéchisme? savent-ils lire les textes bretons?

Chaque langue donne aux différentes voyelles différentes valeurs. La même voyelle n'a pas toujours le même son en latin, en français, en anglais, en italien, en breton. Pour qu'un enfant sache profiter d'un livre breton, le premier service à lui rendre c'est donc de lui apprendre à lire dans cette langue.

Le moment est venu d'insister particulièrement sur cette obligation scolaire.

Si l'instruction morale et religieuse de l'homme et de la femme devait se borner à ce qu'ils ont entendu et appris à l'école, s'ils n'ont pas toute facilité, sinon de développer leur instruction, du moins de conserver ce qu'ils ont acquis pendant leur séjour en classe, ils ne tarderont pas à tout oublier...; et ils continueront à ne rien comprendre à la liturgie et même, en général, aux choses religieuses. Ce qu'ils auront appris de 7 à 13 ans, ils l'oublieront de 13 à 15 ans.

C'est pour prévenir ce lamentable aboutissement de nos écoles chrétiennes, que le Diocèse, sous l'impulsion de Mgr Gouraud, vient de faire publier un « Paroissien en langue bretonne », œuvre collective qui, de l'avis de tous les connaisseurs, rivalise d'emblée avec les meilleurs ouvrages similaires publiés depuis quelques années en France et à l'étranger.

Autrefois dans chaque famille paysanne, il y avait une bibliothèque de livres de piété et d'histoire religieuse; et c'est par ces lectures pieuses bien plus que par les prédications que s'est maintenu si haut en Bretagne le niveau de l'éducation religieuse.

Mais comment nos Bretons et nos Bretonnes pourront-ils utiliser ce précieux instrument de formation chrétienne que Monseigneur leur a fait mettre entre les mains, s'ils ne savent pas en lire le texte couramment!

— « Je ne sais pas lire le breton! » C'est la réflexion que nous avons entendu formuler très souvent.

Or, si cela est vrai, c'est donc qu'on ne leur a pas appris à lire cette langue qui sera pourtant, toute leur vie, la langue de leur prière, de leurs confessions, de la prédication qu'on leur adressera, et de leur conversation journalière...

Comme conclusion pratique à un vœu si légitime et si justement motivé, nous avons pris les décisions suivantes:

1. Nous demandons à nos maîtres et maîtresses de faire à leurs élèves de langue bretonne, deux ou trois fois par semaine, et quelques minutes chaque fois, une lecture dans un texte breton: soit dans le catéchisme, soit dans l'histoire sainte de M. Buléon.

2. Dans le programme de C. E. L. qui comporte huit morceaux de récitation, quatre de ces morceaux pourront être de langue bretonne. Ainsi, pour les enfants parlant le breton, le programme de la récitation comportera à leur choix: ou bien les huit morceaux français, ou bien les quatre premiers morceaux français auxquels on ajoutera les quatre morceaux bretons dont nous commençons ci-dessous la publication.

3. Les dirigeants du Bleun-Brug nous prient d'annoncer qu'en 1927 un concours de langue bretonne sera institué dans nos écoles. Ce concours comportera des prix pour les enfants et une gratification pour les instituteurs et institutrices, dont les élèves auront obtenu le plus de succès. Le règlement et le programme seront publiés prochainement.

Eur respont vat d'ar re a lavar ne ra ar **Bleun-Brug** netra er maez eus ar goueliou a zav bep bloaz e sizuniou kenta miz Gwengolo.

Pont 'n Abad

Unan eus skoliou kristen kaera Bro Gerne, skol Pont 'Abad, daoust ma n'eo ket eur brezad eo a zo ouz he ren, a zo o paouez digeri he doriou d'ar brezoned; kement-se eo labour ar strollad brezohegerien, Léon Toulemond, René Cossec, François ar Meur, Marc ar Berr, ha Jorj Monot, a zo eno hag e kasomp d'ezo koulz ha da vistri-skol ar skol gristen hor gwella gourc'hemennon.



DIVINADENNOU MIZ KERZU

I. — Petra deu da c'henel er c'hoad, P'he devez krog he devez gwad? 20 p. ar r. Digaset gant M. Y. Guivarc'h, Penhoad, Sant Divy.

II. — E korf pep den, oun bet laket, gand ar C'hrouer; Trouc'h d'in va fenn, ma kaledin dour d'it emberr. 20 p. ar r. Digaset gant J. Patinec, Pluguen.

III. — Anaout a rit eun intronig Gwisket kaer ha gwisket flourig N'eo ket eus an dilloüsa, Hag he hent a verk dre ma 'z a. 20 p. ar r. Digaset gant M. Y. Guivarc'h, Penhoad, Sant Divy.

IV. — Atao e vez klevet Morse ne vez gwelet Buan e treuz an ear Buano'h an dour sklear. 20 p. ar r. Digaset gant J. Patinec, Pluguen.

V. — Perig a zo bet o klask kistin: « Kalz kistin ez peus kavet? » eme Viel oc'h en em gaout gantan: « O, eme Berig, m'o c'hountan a bedrou e chom 3; m'o c'hountan a deirou e chom 2; m'o c'hountan a zioüiou e chom unan ha m'o c'hountan a bempou ne jom hini ebet ken. » Ped kistinenn en devoa kavet Perig? 20 p. ar r. Digaset gant Seb. ar Bern, Skolach Pont-Kroaz.

Digas ar responchou, — re HERE, DU-HA KERZU, — gand an divinadennoù nevez a gavfed, abenn an 20 a viz Kerzu, da zivezata, da M. LE DIRECTEUR DU « FEIZ HA BREIZ », A PLOUGUERNEAU (Finistère).

FEIZ HA BREIZ ar miz a zeu a en em gavo, er parrezioù, a-benn Gouelioù Nedeleg.

Taolenn Feiz ha Breiz 1925

Table listing names and page numbers for the 'Feiz ha Breiz 1925' publication, including entries like Petra c'houlen ar Gatoliked, F.-M. Madec, and Avel Vreiz, L. an Nihuellou.

Sant Nikolas ha sant Kasian.....	305
Kuz heol e Breiz Izel. <i>J. L'Helgoualc'h</i>	306
Yann ar Marc'hadour moc'h. <i>J. L. Plogonnet</i>	308
Doue, ar Yez, ar Vro. <i>Y. an Drezenn</i>	310
Dindan Sanniel ar Vro. <i>F. Mevellec</i>	315
Ar spont er Bulgari. <i>J. U.</i>	338
War vor. <i>J. L'Helgoualc'h</i>	353
Pardon bras sant Vivant e Gwitalmeze.....	354
Adsavomp hor Breiz. <i>Ab mael</i>	357
Allocution de <i>Mgr Serrand</i>	361
Doue ha Breiz. <i>Y. V. Perrot</i>	381
D'ar skolaerien. <i>J. L'Helgoualc'h</i>	389
Perag e choman paotr yaouank. <i>Fr. Moal</i>	392
Pempvet kenstrivadeg ar c'hardinal Dubourg.....	396
Tro Breiz kannaded ar <i>Bleun-Brug</i>	402
Bez meur Keranna. <i>Y. V. Perrot</i>	404
E skolach Lesneven. <i>Renerien ar C'helc'h</i>	407
An Anaon. <i>J. L'Helgoualc'h</i>	421
Gwilhon ar Rouz. <i>G. P.</i>	422
An Diaoul en aod. <i>K. ar Boutinou</i>	429
Galvadenn ar c'hardinal Charost.....	442
Breuriez sant Korantin ha sant Paol.....	444
Breiz-Preiz. <i>E. ar Moal</i>	454
Loc-Maze Penn ar bed. <i>G. P.</i>	455
Salud Potred Plougerne. <i>Loeiz Lok-Ronan</i>	460
E Bethleem. <i>J. L'Helgoualc'h</i>	461
Prezegenn. <i>Ar Yeodet</i>	463
Nedeleg Katell goz. <i>Melegan</i>	468
Bleun-Brug T. K. G.....	472

1926

Bloavez mat. <i>J. L'Helgoualc'h</i>	2
Breiz-Preiz? <i>E. ar Moal</i>	3
Kastell Kervaon. <i>G. P.</i>	6
Gwirioneziou da rei da glevet. <i>J. U.</i>	12
Roue al Laz. <i>D. N. D.</i>	14
	-62-96-142-188-229-307
Bleun-Brug 1926.....	20
	-43-52-202-242-282-322-367
Hun ar Barz. <i>Erwan ar Gall</i>	21
Labouriou ar Merc'hed, <i>Tintin Anna</i>	24
	-92-153-194-211-269-311-338-432
E foar an Nee'h, en deiz all.....	27
Chapel koad ar Roc'h. <i>Y. B.</i>	29
Breizad yaouank. <i>Y. Kerouedan</i>	30
E Skolach Lesneven. <i>Fanch ha Jahez</i>	32
Ar Jubile. <i>Eskob Kemper ha Leon</i>	42
Ar wirionez dreist pep tra. <i>Y. V. Perrot</i>	44
Skiant prena. <i>E. ar Moal</i>	49
Fransez a Goalaudon. <i>G. P.</i>	53
Prezegenn eured. <i>J. U.</i>	59
Skeudenn garet. <i>P. Tr.</i>	61
Vl ^{er} kenstrivadeg ar c'hardinal Dubourg.....	67
Boked ar Menez uhel. <i>J. ha F.</i>	71
Ar Brezoneg er Gambr. <i>E. A. M.</i>	75
Diwarbenn an Alzas. <i>E. ar Moal</i>	82
Da gatoliked an Alzas. <i>J. U.</i>	87

Aour, paper, Iudu! <i>E. A. M.</i>	90-125
Kerne. <i>F. Mevellec</i>	99
Buhez sant Ronan.....	101
Eur skouer da Vreiz. <i>Jak Dourmap</i>	105
E Kernevez. <i>C. C. C.</i>	107
Breiz en he frankiz. <i>Anna Sevellec</i>	111
Pluguen war bez unan eus he bugale.....	116
Da zeiz a den. <i>Y. V. Perrot</i>	122
Tristidigez ar C'helt. <i>Y. P. Calloc'h</i>	128
Ar c'hlenved nevez. <i>Ar baleer</i>	129
Lik, laik. <i>J. Uguen</i>	130-177
Katekiz dizoue. <i>F. Mevellec</i>	132
An Tad Penfeunteniou. <i>G. P.</i>	133
An Tri breur. <i>Alban ar Miliner</i>	136
Da wener ar Groaz.....	141
Krouadur Athen. <i>G. C. C.</i>	146
I. V. Rumengol. <i>F. Mevellec</i>	148
Hor plas en ti. <i>A. Thomas</i>	155
Dre ar c'herreg. <i>E. ar Moal</i>	162
Kervoruz, Kuburien, Kervorvan. <i>G. P.</i>	166
Angelus an noz. <i>J. L'Helgoualc'h</i>	170
Mikael an Nobletz. <i>J. U.</i>	172

-204-253-348-427

Ar Bugel hag ar Barz. <i>Gl. ar Prat</i>	179
Landevenneg. <i>F. Mevellec</i>	181
Va dousig koant. <i>F. Madec</i>	192
Ar chadenn. <i>E. A. Moal</i>	209
Avel vor. <i>J. L'Helgoualc'h</i>	221
Ty Mamm Doue. <i>F. Mevellec</i>	222
Ar Goukou. <i>J. U.</i>	232
Penn-oc'h-penn. <i>Breizadig</i>	234
Lazerez, Laeronsi, follentez. <i>P. Queguiner</i>	237
Kerlo al Leal. <i>Gl. ar Prat</i>	258
Landevenneg-Ker-Iz. <i>F. Mevellec</i>	261
Janedig er skol. <i>Melegan</i>	273
Glaoda ar Prat. <i>Y. V. Perrot</i>	274
An A. Abgrall. <i>Y. V. Perrot</i>	278
Gouel Maria Hanter Eost. <i>J. L'Helgoualc'h</i>	285
Ar Bleun-Brug hag ar c'hevredigeziou breizek.....	287
Leve Breiz e Rom. <i>Y. V. Perrot</i>	291
A zehou hag a gleiz. <i>Ar C'hene</i>	299
Ar c'harrad foenn. <i>P. Brelivet</i>	301
Manerion ha tud koz. <i>F. Mevellec</i>	303
Etre sant Pabu ha Plougin. <i>Paotr Plougin</i>	309
Troiu kamm Leon ar Bris. <i>Mabig Breiz</i>	319-359
Alc'houez an eurusted. <i>J. Le Marechal</i>	332
Digoromp mat hon daoulagad. <i>Breizadig</i>	334
Ar Vretoned beziet e Sant Erwan. <i>G. P.</i>	341
Pardon an Teir Vari. <i>Y. M. Coadou</i>	353-414
Kalon vat eur bugel. <i>P. Brelivet</i>	357
Jezuz Krist Roue. <i>Ronan ar C'horr</i>	362
Feiz ha Breiz. <i>J. Buleon</i>	383
Laennec. <i>G. M.</i>	392-422
Paolig ha Perig. <i>Loeiz ar Floc'h</i>	396
An Anaon. <i>F. Mevellec</i>	402
A bep tu sklerijenn. <i>E. ar Moal</i>	404
Fiziit er Bleun-Brug. <i>E. A. M.</i>	412
Amzer ar bedenn. <i>Kergroaz</i>	421
Ar c'haz marlounk.....	425

A bep tu sklerijenn. E. A. M.....	442
Pelec'h emaoamp. E. A. M.....	445
Sant Fransez *Asiz. F. Mevellec.....	447
Prizioù Bleun-Brug 1926.....	452
Hadenn ar vroadelez E. A. Moal.....	454
Roue al Laz. Dir-na-Dor.....	458
Mamm ar martolod. Dir-na-Dor.....	469
Eskopti Kemper gwechall. G. M.....	461
Mikael an Nohletz. J. U.....	466
Doghadetl hav. Hal Wyn.....	470
Pardavez hanv. Absuliau.....	471
Vœu en faveur du breton. J. Buteon.....	474

Rodig a dro a ra bro

Lennerien vat ha kenvroiz ker,

Setu eul levr bras a 480 pajenn etre ho taouarn, mar ho peus miret holl niverennoù Feiz-ha-Breiz 1926, eul levr a 672 pajenn mar ho peus laket niverennoù ar C'horn-Boud da heul re Feiz-ha-Breiz; hag ho peus bet an dra-se evit 12 lur ha netra ken; marc'had mat kenan, rak ne gavoc'h ket e stalioù al levriou gallek eun hevelep levr, — o kaout koulz paper hag o kaout kement a skeudennou, — evit 24 lur; gwelet a rit eta n'emaer aman nemed o klask eun dra: mad ar Vro.

Met ar pezh hon eus graet n'eo netra e-skoaz ar pezh hon eus ezomm da ober ha setu perag, adalek ar miz a zeu, war goulenn eur bern Bretoned vat, e kaerimp c'hoaz Feiz-ha-Breiz hag e kreskimp anezan eus an hanter; daoust da-ze ne gousto nemet 4 real er miz; petra eo an dra-ze? Priz eur vi!

Digasit d'eomp holl eta, en hano Doue ha Breiz peb a lenner nevez; kreskit ivez, eus an hanter, niver hol lennerien, ma fell d'eoc'h e kendalc'hfe an traou da vont war well evel m'int bet aet betek hen gant ho Feiz-ha-Breiz.


Bretoned, roit eun draik bennak an dourn d'ar re a laka kement o deus da labourat evidoc'h.

Plougerne, d'an 28 a viz Du 1926.

Y. V. PERROT,

Rener « Feiz-ha-Breiz. »





Archives et bibliothèque diocésaine de Quimper et Léon

Document numérisé

Source : <http://catholique-quimper.cef.fr/diocese/bibliotheque-et-archives.html>

2011